

BARR HEOL



Direct.M.LE CLERC, recteur, Buhulien, 22 LANNION
N° 55, Mars 1968; Trimestriell, Prix du N°: 3 Fr

RENER: M. LE CLERC, Person Bulien, 22 LANNUON
Niv. : 55, Miz MEURZH 1968, Trimiziek

=====
KOUMANANTOÙ :

Koumanant ordinal : 10 Lur, Broioù Estren : 12 Lur
"Barr-Heol" Crec'h Avel, 22 Lannioon
K.R.P. 245 453 Roazhon

COMMENTARII IN LINGUA BRITONNICA EXARATI
=====

BARR-HEOL

War Feiz ha Breizh

TADLENN

(1 F.L.B.	p. 2)
(2 An Enepiotikoù Kentañ A.G.....	6)
(3 Ar Yezh a garan.....A.Duval.....	10)
(4 Kelennerzh ar C'hembraeg....A.Kalvez.....	11)
(5 Kembre.....	13)
(6 Al Lévrioù (Tour du Monde d'un Breton)....J.C.	15)
(7 A-hed an Deizioù... M.Barz.....	16)
(8 Krennlavaripù Kembraek.....	22)
(9 Spi, Va Huñvre ..Evnig Penn ar C'hoad.....	28)
(10 Kanaouennoù Iwerzhon e Kemper... P.Denez.....	30)
(11 Barzhonegoù A.Duval (1968, Pedenn, An Douar a Gren).....	34) 35)
(12 Son ar Pesketaer.....Yann Derrien.....	36)
(13 Pardon St Frañsez a Sal, Bulien.....	38)
(14 Keginerezh.....Soaz an Tieg.....	43)
(15 Ar Varenn(Vareenn).....F.Kervendal.....	45)
(16 Kendalc'h Keltiek Foujera (Eost 1968).....	52)
(17 Kamp Etrekeltiek Mur (1968).....	55)
(18 Ar Gordennidi e Gwened..... abEnnez.....	56)
(19 Anvioù-Lec'hioù..... Klerg.....	59)
(20 Pradig ar Stêr..... A.Duval.....	64)
(21 Kustumoù ha Gizioù kozh Treger...J.Flour.....	65)
(22 Embannadurioù (Barzhonegoù R.Hemon, Méthode Rapide de Breton, Emglev Breiz, Ar Rozenn Zu)	72)

Mouler ha Rener: M. Le Clerc, Bulien-Lannuon, Bro-Dreger
 Impr. Gér: M. Le Clerc, rect. Buhulien, 22 Lannion, C-d-N
 Teñzorerezh: Barr-Heol, Crec'h Avel, 22 Lannion
 K.R.P. 245 453 Roazhon (Rennes)

F.L.B.

Teir gwech dija ez eus bet degaset kemennadurioù da VARR-HEOL a-berzh an F.L.B. An daou gemennadur kentañ a hañvale bezañ evel un ultimatum o reiñ urzh groñs d'ober gant BARR-HEOL, AL LIAMM hag ar BED KELTIEK ur gelaouenn hepken. An trede kemennadur a oa ar gerioù-mañ ennañ hag a droomp diwar ar galleg :

" Daoust hag e •'hortozit ma vo hor paour-kaezh bro peurc'houl-londeret eus he bugale a-benn ober ho soñj da labourat a-unan. Petra'sinifi ar chapelioù-se p'emañ ar Vretoned o talpañ a dammig da damm? Hor pal ez eo an deubidigezh. Hon hent: ar stourm dre an dispac'h en unvaniezh. D'an traoñ an impalaeriezh c'hall e Breizh " (sinet) F.L.B. (1)

Ne dalvez ket ar boan tennañ evezh lennerion Varr-Heol war ar yezh implijet: ar galleg, gant an F.L.B. en e lizheroù, pe gemennadurioù. Ur strollad kuzh ez eo, hag implijout ar Yezh Vroadel a vefe en em werzhañ, en em ziskuilh tamm pe damm, hag oc'h ober gant ar galleg e pellaont ar riskl-se. E-doug ar brezel diwezhañ; ne rae paotred ar Stourmerezeh Kuzh gant yezh all ebet en o darempredoù gant ar bobl, dreist-holl pa raent diskennoù en tiez, en noz, estregat ar galleg. Gant aon da vezañ anavezet ha flatoullet. Lezenn an emzifenn ha netre-ken en implij ar galleg gant an daou rummad-se: F.L.N. ha Paotred ar Stourmerezeh.

Pa c'hourc'hemenn groñs an F.L.N. d'an teir gelaouenn emaoamp o paouez menegiñ, en em unaniñ, en em gendeuziñ, e kav dezho ez eus koll oc'h embann anezho disparti evel m'emañt. Ar pezh n'eo ket sur, tamm ebet. Ha da gentañ, daoust hag enebiezh a zo etrezo ? Pe er c'hontrol ? a neuze, ken aezet-se e vefe o unaniñ ? Ur c'holl e vefe hap mar ebet, ha ma'z eus e-touez izili an F.L.N. darn barrek a-walc'h war hor yezh e tleont hen gouzout diarvar. Ha neuze, daoust ha n'eo ket ur binvidigezh ? (gant lekaet e talvez Barr-Heol, da skouer, kement ha ma' z eus c'hoant da laverout). Ha peogwir emañ ar c'hiz gant ar Vretoned da sellout etrezek Kembre: daoust hag ar builhentez a gazetenoù, a gelaouenoù, a gannadigoù a bep seurt a zo ur merk a baourentez ? P'eo deus nevez'zo krouet ur gelaouenn nevez CAMPAN (Sportoù). (2)

Evit ma'z advleunia en-dro pep tra e Breizh, ez eo anat ez eus ezhomm cheñchamantoù eus ar brasañ, hag ar cheñchamantoù-se a c'heller ober anezho ur Reveulzi wirion: nag Ekonomiezh, na Se-venadurezh n'hellont donet da vat ma ne vez ket laoskaet pe daolet kuit zoken bazh-yev Bariz. Galvit kement-se: Digreizennañ pe Lezenn-Stur (met unan afedus) pe Adkempennadur Breizh an ur zerc'hel kont eus ar pezh a anver bremañ " He fasadenn war ar Mor ", n'hellit tec'het ac'hano. Met evit suraat ar seurt Adkempennadur, evit na vo ket un dra dibad, evit ma vo e quironnez ul labour evit mad hag interest ar Vretoned, en o c'horf, en o madoù materiel ha speredel, ez eo ret kaout un Ensavadur e-lec'h m'en em vodo ar pennoù dileuriet a-berzh ar Bobl vreizhat.

Ha war boent ar Reveulzi, an Dieubidigezh, e c'heller bezañ a-du gant an F.L.N. Ne vern penaos o fal hag o mennadoù n'emañ ket a-nep lezenn an Onestiz nag al Lezenn Naturel, rak n'eus Bro ebet a gement a c'hell krediñ ez eo stag he buhez ouzh Lezenn an Natur: traoù hag a zo frouzsh an Istor ha Labour (leal pe get) an dud ez eo ar Stadoù.

Krog ez eo an F.L.B. da c'hoari gant an nerzh. Da vihanañ e lakaer war o anv an tennoù-dinamit o deus drailhet gwer a-leizh war Brefeti Sant-Brieg ha c'hwezhet an tan er baoliadoù-mazout klenket e kavioù Prefeti Kemper. E broioù'zo, evel da skouer, Bro-Gembre (adarre) ar seurt gwalldaolioù ne dint ket diouzh grad an dud. Met e Breizh ? Boaz ez eo an dud diouzh an taolioù-nerzh ha nebeut-tre a dud o deus kavet da abegiñ en aferioù Sant-Brieg ha Kemper : " C'hoazh e vo !", setu an diskan a glevad dre-holl. Kustumañ a reer diouzh an taolioù-nerzh, kement ha ken bihan ma kaver naturel kement-se: n'eus ket a voien d'ober a-hend-all, emezol ret eo en em gemerout evel-se, ma fell dimp bezañ klevet ha sel-laouet. Piv evit gwir a zo da damall da gentañ ? Piv ez eo ar re g-blusañ ? Piv ? Nemet ar re a pennkaoz eus an dizurzh a zo e Breizh ?

Ur gudenn diaes ez eo kudenn an Taolioù-Nerzh (gwalout Barr-Heol, Kerzu 1968 paj.9). An Aotrou Mac Grath, eskob Santiago Ve-raguas, alier e Kuzul al Laiked, eil-prezidant Strollad an Eski-bion evit ar Broioù Latin-Amerikan, en ur dremen dre New-York, da vont da Roma, a zisklerie e oa ezhomm ur studiadennoù a deologiezh war an implij eus an nerzh " Bez' hon eus dija, amezhañ, Teologiezh ar Reveulzi, a drugarez d'al Lizher-Meur POPULORUM PROGRESSIO gant intent evel just ar ger Reveulzi evel an enklask eus kemmoù prim ha krenn er framadurioù ekonomikel ha kevredigezhel - Met ar pezh hon eus ezhomm bremañ ez eo un Deologiezh eus ar gwallnerzh, o verkañ ar pezh a zo reizh hag ar pezh ne dao ket. Rak gallout a

ra an implij eus an nerzh kas da get diremed madoù prizius. Ur gudenn e goustiañs ez eo."

*

Kement ha distennañ ho spered, lennerion ger, goude ur seurt strivedenn evit kompren hor yezh boulboazh, setu amañ un tamm istor hag a ziskouez ez eus hentoù dall e gwirionez ha ne vo tu da dizhout seurt dre o heuliañ. Ur c'hannad nevez-flamm eus Departamant Aodoù an Henbarnoz, hag a seblanta kaout santimantoù breizhat a-walc'h, a zo aet eta d'ar Palez Bourbon abaoe warlene. Pedet e oa bet d'ober ur gaozeadenn da skolidiur skolaj kristen eus Eskopti Sant-Brieg diwar-benn e labour ha traoù evel-se. Da echuiñ e pedas ar baotred yaouank d'ober goulennoù outañ, evel m'emañ ar c'hiz. Ha setu ar goulennoù eeun ha didouell a rejont outañ : " Daoust, Aotrou Depute, hag a gav deoc'h'hoc'h eus degaset un dra bennak nevez abaoe ma'z oc'h aet da zepute ?"

Dilavar e chomas an Aotrou Kannad yaouank-se, ar mome dig : - Mal emezañ, setu diaesañ goulennoù a zo bet graet din ! Ha ne zeus ket a-benn, daoust d'e helavarded, d'en em ziluziañ.

Ar pezh a ziskouez eplann ha diarvar n'eo ket e Pariz e vo diskoulmet ar gudenn. Ha patre eo an demokratelezh evit gwir er Frañs en deiz e hiziv ? 30.000 bennak a dud a zo o c'houarn ar Frañs (Le Cri du Monde, here 1967) ha n'eo ket ar bolitikerion : ar sistem an hini a zo da gemmañ, ar sistem eo a zo fall, ar sistem eo a zo da ziskar. Ar peurrest né deo nemet c'hoariellaj. Un depute a vez paket er sistem-se end-eeun ha dizorniet ha n'eus mui evitañ d'ober nemet heuliañ ar c'hrenn-lavar-mañ : Reiñ hag e vo roet dit, rak " Roerig, kaverig !"

a peogwir e oa bet anvet "hon depute " an hini a gomzomp diwar e benn, evit lakaat an traoù da cheñch, ha peogwir ne ra ket, ez eo-efi a vo cheñchet, kentañ mouezhiadeg a vo, ha lakaet ur c'homunist en e blas.

*

Ar Vretoned a zere outo ar gomz-mañ a lavare un dibovezh ! "Un den o vont da addimeziñ evit an deirvet gwech : " Trec'h an esper d'ar skiant-prenañ !". Ur regennad, un aridennad kerseoù ne deo ken an holl c'houlennoù ha difraeoù graet evit lakaat ar Gouarnamant da laoskañ e grog, hag aotren un tamm frankiz d'ar Vretoned. Prometiñ ha dibrometiñ, setu ar pezh e ra d'an hirañ-holl. Ha c'hoazh e vezer souezhet o welout an F.L.B. o sevel o fenn hag o teskiñ micher ar brezel hag an Dispac'h ?

Met evit donet a-benn eus o zaol e vo ret dezho gonit kalonoù an dud, karantez ha mignoniezh ar bobl.

Droug a zo er bobl. Taolioù-strap ar bloavezh tramenet evel Redon, Kemper hag all, hen diskouez hep arvar. Troet ez int bremañ da zegemer ar menozioù breizhat, met siwazh ! n'eo ket abalamour d'ar galennadurezh o deus bet : en abeg d'o c'hof an hini eo kentoc'h, en abeg d'o interest materiel. Gwan-tre ez eo un Emsav diazazet war ar c'hof, mar gallan komz evel-se, hag e c'hallfe ar Gouarnamant mar bez roet amzer dezhañ, ar pezh n'eo ket sur tamm ebet a dizar-mañ an dud dra skeiñ un tamm askorn dezho- met marteze n'an deus c'hoant ebet d'hen ober !+. Hiroc'h a se avat, e vo an amzer da stummañ ar bobl ha deskiñ dezho karout ha servijañ o Bro.

Ha da glozañ : galv an F.L.B. d'an UNVANIËZH a zo mat ne vein penaos. Keit ha ma vo, evel ma lavaront, kement-se a chapelioù etre ar Vretoned e ouezo o enabourion em em servijañ eus an dispartioù-se evit isañ an eil rumm enop egile, dougen dorn ha prometiñ kaer d'ur rumm da fontañ ur rumm all.

*

Bez'emañ ar CELIB o vont da embann ul LEVR GwENN da ginnig d'ar Gouarnamant da zisplegañ ur wech ouzhpenn ezhomm Breizh. Spi hon eus e kavimp un ispisialour da studiañ evidomp al levr-se pa vo embannet.

Bezot sklaer avat, n'eo ket kudenn Vreizh ur gudenn a Ekonomiezh. Ur gudenn vroadel an hini eo. N'hall den hen nac'h hiviziken ha daoust da gement a vo tu da damall d'an F.L.B. e sikourint en o stumm lakaat kement-se anat dirak an holl. Plijet gant Doua avat lakaat furnez, skiant vat ha poell e spered ar Pennadurezhioù da herzel ouzh ar mestaolioù, e koulz hag a kentel. (3)

KLERG

- (1) F.L.B. Front de Libération de la Bretagne
- (2) Kaer a zo lavarout : mikrolabourioù ne deo ken eus holl strivedennoù ar Vretoned. Daoust ha n'eo ket poent reiñ d' gudenn ar yezh he gwir vent, ur vent kosmik (evit ober gant ur ger-bras diouzh ar c'hiz) d'ar mare dreist-denel m'eo ar Mass-Media ?
- (3) Gwelout LE PETIT BLEU, 18.2.68 ; gant pennad ar Prezidant Pleven diwar-benn ar 750 kgr a zanvez tarzhus laeret e forest Loudieg gant stourmerion guzh (Kouverien pe F.L.B) e deroù miz C'hwevrer 68. Hep mar ebet e sell an Ao.Pleven an emsav evit dieubiñ ar Vro evel un dra sirius-tre, daoust ma waek un tamm re'm eus aon war an dia-koulm a-berzh ar C'hallaoued !

6 AN ENEPBIOTIKOÙ KENTAN

" The hope is a smiling rainbow never reached "
(Carlyle... pe unan all)

Diouzh ar cholori a glever, e seblant an Aotroù Kelenner bezañ dilaouen.

Ar sal-se graet evit labourat er sioulder, a zo trubuilhet gant trouzoù. Dont a reont, anat a-walc'h eo d'an holl eus an arnodlec'h. Ur skouarn bonner-glev hec'h-unan a glevje an tabut-se. Gwerennoù o stirlinkat dre ma vezont stoked an eil ouzh eben. Toumpi un den o pazeal. Garmadennoù digustum evel : Penn-Skafiv, diot yaouank, labour kizhier, ha traoù all ken hegarat.

Hegaset a-benn ar fin, an Aotroù Kelenner, a lakaas e viz war voutonenn ar sonerezh-tredan. Ur pennadig amzer goude, un den yaouank a skoas war an nor hag a antoas.

- Demat, Aotroù Kelenner. Sonet hoc'h eus d'am gervel ?
- Aotroù'n Iskelenner David, goulennet em boa...

En ur glevout e vestr ouzh hen gervel " Aotroù 'n Iskelenner David", ar paotr yaouank a gollas e liv. Santout a reas e c'hourlañchenn o strishaat. Un dra bennak a yae a-dreuz. Rod ar vilin a droe a-enep ar red-dour.

- Goulennet em boa, a gendalc'has ar c'helenner, hadañ war veskadurioù disheñvel, ar Staphylococcus Aureus, niverenn 6, hag hen ober gant ar brasañ evezh!
- Madet int bet, Aotroù Kelenner, evel m'ho poa kemennet.
- Ha c'hwï an hini eo hoc'h eus graet ?
- Ya, Aotroù.
- Mat! an haderezh-mañ graet diwar va Staphylococcus alaouret, a zo stlabezet, ha leun a louedennoù.
- Koulskoude, Aotroù Kelenner...
- N'eus koulskoude ebet ! Daoust ha lennet hoc'h eus Schiller ?
- Schiller ? Ne welan ket...
- Evel just, n'anavezit ket ar frazenn vrudet-mañ: " Mit der Dumheit, Kampfen die Götter selbs vergebens "

A-daol-krenn e paeuzas an Aotroù Kelenner da gaozeal. Ul luc'hedenn a dreuzas ibil e legad. E sell a zistanas. Ur min-

7
diheverz a baras war e vuzelloù. Da c'houde, e-lec'h strinkañ gant kounnar, ar meskadurioù stlabezet, ar boubelenn, e lakaas gant evez evezh, an amproutezioù en ur banerig orjalennek.

- War a-welan, skuizh oc'h, David - Mat! Ar yaou-vintin emamp hiziv. Brav ha klouar eo an amzer. Al laboused a gan lir-zhin. It da ziskuizhañ war ar maezioù gant an Itron David. Eizh devezh-ehan a raio kalz a vad deoc'h ho-taou. Mat eo. It discoursi ha laouen.

An Iskelenner David ne veze mui netra. Ken sebezet e oa ma tiskampas eus ar sal hep lavarout grik.

*
E-pad m'edo o c'hourdrouz e skoazeller, e talc'he ar c'helenner da sellout ouzh an amproutezioù. Merzet en doa en-dro d'al louedennoù a stlabeze haderezh ar Staphylococcus alaouret, kalc'hioù ledan a-walc'h, lintrus ha noazh.

Aze mikrob ebet ne oa diwanet, trevadenn Staphylococcus ebet ne weled. Hep mar ebet, un dra bennak en doa lazhet ar mikrob* hadet war ar c'helc'hioù a weled en-dro d'al louedennoù. Pizh e sellas an Aotroù Kelenner ouzh al louedenn-se. Anavezet mat e oa. Hec'h anv a oa " Penicillum Notatum ". Ul louedenn tostik a-walc'h ouzh an hini a c'holo ar fourmaj Kamebert, homañ anvet " Penicillum glaucum" anv tennet eus liv: glaucum, gwer-glas.

An Aotroù Alexander Fleming a oa o paeuz kavadenñ ar PENISILIN, tennet diwar ar Penicillum Notatum. Er bloavezh 1929 e oa bet graet ar gavadenn-se.

*
Bloavezhioù hir a dremenno. Saozon hag Amerikaned a labourro start evit studiañ, evit pourchas, hag evit arnodañ war glañ-vourion, en ospitalioù efedusted ar Penisilin.

Ha setu ma tarzhas an eil brezel-bed. A-wechoùigoù e veze klevet en ur selaou ar B.B.C. e oa ur remed burzhodus bennak oberiataet du-hont, en tu all d'ar mor. E-pad an amzer-se, amañ e Braizh, e veze graet atav gant sulfamidennnoù a bep seurt.

Ne vo anavezet ar Penisilin nemet pa zilestro an Amerikaned war zouar ar vro gozh.

Da gentañ e veze miret evit tud ar brezel, ha dreist-holl evit ar soudarded a bep liv hag a bep bro. Goude-se, e veze firiet dre nebeudoù, al louzaouen: vurzhodus, en ospitalioù, rouez ar gont anezho. Dav e veze dezho lakaat ha mirout ar Penisilin, an

* mikrob hon eus miret e-lec'h garvuhezeganed.

8
ur gambr-yenaat. Ne veze roet ar remed-se d'an ospitalioù pe d'an tiez-yezh, nemet evit ober war-dro ar c'hleñvedoù grevus. E Breizh edo an dastumlec'h en Naoned. An ospitalioù all, hag en o zouez, hini Roazhon, a ranke goulenñ o louzaer en ospital an Naoned.

Al louzaouenn, ur wech strinket e-barzh ar c'horf a veze distaolet er-maez, div pe deir eur goude gant an troazh. Va faou-kaezh keneil, rener an Apotikerezh, en ospital Roazhon, a dremene e zevezhioù hag e nozvezhioù o tennañ ar PENISILIN eus an troazh distaolet gant ar glañvourien louzaouet... Ne c'hellan ket avat, touiñ deoc'h, kaer en doa va c'heneil ober eus e wellañ evit glanaat ar Penisilin-se, na zalc'he ket houmañ ur c'hwec'h " sui generis ".

Da c'houde, gant bloavezhioù hir o tremen war-lerc'h bloavezhioù all, ez eo bet oberiataet ar Penisilin gant an ijinerezh bras.

Evit echuiñ ez eo bet prientet en un doare sintetikel. Kenhelennoù niverus a veze ataget ouzhan hini gentañ evit krouiñ ENEPBIOTIKOU nevez ha nerzhusoc'h.

Er pann-kentañ-holl ne veze roet ar Penisilin d'ar glañvourien nemet dre strinkelloù, don e kig ar feskennoù, bep teir eur.

Buan a-walc'h ez eo bet ar Penisilin-se dilezet. En he flas unan nevez a oa bet krouet, anvet Penisilin goursezus. Ne veze houmañ strinkellet nemet ur wech bemeiz. Bremañ, an enepbiotikoù a vez lonket dindan stumm moustradoù (kachedoù) " per os ", evel ma lavarar. Piv eta n'en deus ket kemeret moustradoù " Hexacilin " per os ?

*

Setu amañ dre vras, penaos e labour an enepbiotikoù, penaos e c'hobezont gant o efedusted, an trec'h war ar c'hleñvedoù.

Ar mikrobed evit bevañ, evit kreskiñ hag evit gouennañ, o deus ezhomm eus trenkennoù aminek hag eus enzimoù a bep seurt. Kavet e vez ar re-mañ ganto e korfoù ar glañvourien.

Ha setu deuet bremañ tro an enepbiotikoù da c'hoari. Pa vez an enepbiotikoù er c'horf, e pakont hag a talc'hont start evito ar boued-se ken buhezal, en un doare strizh, evit ar mikrobed.

En diwezh e varz al loenigoù fall-mañ gant an naon, pe

9
c'hoazh, goude bezañ bet gwanaet, e vezont distrujet gant gwenn-gelloù ar gwad.

*

Abaos kavadenñ an Aotrou Fleming, kant ha kant enepbiotik all a zo bet krouet. Toull-har, an enklaskoù hag ar c'havadennoù nevez deuet da heul mervadenñ ar C'helennar brudet, eo a zisplegen amañ.

Abaos ma'z eo bet krouet ar Bed kaezh-mañ, korfoù an anevaled, an holl draoù marvet ha d'o heul an holl vikrobed kiriek d'o marv a vez douaret. An Douar a-bezh eta, a zlefe bezañ bet a-benn ar fin, ur bouilhofs divent, karget a vikrobed kontammus. E gwirionez, dre c'hras Doue, a tro an traoù en ur stumm all.

An AKTINOMISETOU, hag al louedennoù, a zeu buan a-benn eus ar gisti bihan-se ken kleñvedus, kuzhet ma vezont gant an holl zierc'hiadennoù... En ur furchal an douar, ar glaskerien o deus dibabet un AKTINOMISETENN ispisial anvet " Streptomyces Griseus ". Er bloavezh 1944 ha deus roet al louedennoù-se al louzoù badezet " STREPTOMISIN ".

Implijet e vez war-dro meur e gleñved, ha dreist-holl a-enep an Dorzhellegezh (Phyllois) hag ar bazhennigoù Koch (Mycobacterium Tuberculosis Koch) pe B.K. anavezet re vat ha kiriek eus ar c'hleñved ken spontus pa oan yaouank, met aes da barañ en deiz a hiziv.

Ar remed-se pa veze implijet a gementadoù bras ha dreist-holl pa ne veze ket bet glanaet a-walc'h en a-raok, a lakae an dud louzaet gentañ, da gouezhañ bouzar pe un tammig pennfallet. Istorioù a c'hellfen kontañ deoc'h, met c'hwil'oar...

Douar Karakaz e bro Venezuela, a roas diwar ar " Streptomyces Venezuelae ", ar C'HLORAM FENIKOL anvet ivez " TIFOMISIN ", ken prizius a-enep an Tifoidoù a bep seurt. Efedus kenañ ez eo ivez a-enep ar bazhennigoù a nac'h al livadur " GRAM "

An " Aureomisin " a zo bet dibabet diwar ar " Streptomyces Aureofaciens ". Kant enepbiotik all a zo bet krouet ha studiet abaos.

Nag a draoù da skrivañ diwar o fenn!

Bremañ e vez an enepbiotikoù, koulz lavarout holl, krouet en un doare sintetikel. Ha Doue a oar pet a zo diouto.

Erfin, gant an holl ENEPBIOTIKOU-se, ken niverus e c'hellfec'h krediñ emañ deuet a-benn eus ar c'hleñvedoù. Esper hor boa e vije bet en o zouez, ur remed, ur benveg klok a-grenn, a-enep

ar C'HLEVED. Siwazh ! ar mikrobed en em voaz nebeut ha nebeut ouzh en enepbiotikou. Ret e vez klask dizehen, ha kaout atav enepbiotikou nevez.

Koulskoude - rak amañ ez eus ur c'houlskoude - un araoka-denn divent a zo bet graet war-du ar pal. Evezhiek avat e ran-komp chom atav. Ar glaskerien en o arnodlec'hioù a vez atav o stourm evit krouiñ louzeier nevez a-enep an drouk-klafvedoù.

Marteze, un deiz bennak, e vo ar c'hriagn-bev e-unan trec'het. Da c'hortoz an deiz benniget-se ec'h adlaveran ur wech c'hoazh:

" The hope is a smiling rainbow never reached ! "

O
O O

AR YEZH A GARAN

O na dous hag heson
Eo yezh ar Boudoù mut
Flouroc'h eo d'am c'halon
Eget yezh rok an dud

Pegen sioul, pegen flour
E komz ouzhin ar gwez
Ar raoskl war ribl an dour
Ar brug war ar menez

Balen ar gwaremou
'N avel o wegnnif
Mor aour al lannegi

A gont din marvailhoù
A gan din gwezennoù
Arzhur. Izold. Marzhin

Anjela DUVAL

5.2.1968

KELENNEREZH AR C'HEMBAEG ER SKOLIOÙ IZEL Alloù ar gomision "GITTINS"

Ret eo din anvez em boa bet un tamm fent p'em boa lennet war niverenn miz Genver " EMSAV " ur arroud tennet eus pennad R.Hemon diwar-benn ar gelennadurezh divyezhek e Kembre, embannet da gentañ e " BREIZ ATAO ", e 1925, ha goude en " EUR BREIZAD OC'H ADKAVOUT BREIZ ". Fent am boa bet, n'eo ket gant pennad R.Hemon, met gant an implij graet, anezhañ. Evel pa ne vefe bet c'hoarvezet netra a nevez e Kembre war an dachenn-se abaoe 1925, da lavarout eo en ur ober 40 vloaz !

Abaoe ez eus bet embannet e Kembre, div zanevell ofisiel a zo bet klasket lakeat da dalvezout, hag a zo bet lakeat da dalvezout e meur a gontelezh. E 1927, " Welsh in Education and Life ", embannet e Saozneg hepken, hag e 1953, " The Place of Welsh and English in the Schools of Wales " embannet e Saozneg hag e Kembraeg. Hervez niveradeg 1961, ez eo aet ar yezh war-gil abaoe hini 1951, met ket kement hag a-raok 1951 (" Census 1961 ", p.XII, embannet gant H.M.S.O.). Labourer ez eus bet eta en un doare efedus er skolioù.

Ha setu m'eo deuet er-maez nevez'zo un danevell all diwar-benn ar Skolioù Izel hag a zo gouestle ul lodenn vat anezhi da gelennerzh ar yezh vroadel. Ur pikol levr ez eo peogwir en deus 646 pajenn, ha koustet en deus, gant an enklask hag ar mizoù-moulet : 11 719 lur saoz ! Ar gomision a oa enni 18 den, en o fenn ar c'helenner Gittins, rener rann an deskadurezh e Skol-Veur Abertawe. E miz Eost 1963, e c'houlennas ministr an deskadurezh, Sir Edward Boyle, digant Kuzul an Deskadurezh e Kembre, sevel ur gomision, hag e miz Ebrel 1964 e krogas an enklask. Sinet eo bet an danevell gant an holl izili nemet unan, ar c'helenner Howel D.Lewis, en deus nac'het evit deou abeg : da gentañ dre ma klaska diazezañ kelennerzh ar yezh war abegoù santimental, ha dre ma ne zisklerie ket fraezh gonidoù an divyezhegezh er skolioù, ha d'an eil dre ma'z ali ober gent ar gelennadurezh relijiel un danvez da vezañ divizet gant rener ar skol. Ret eo din lavarout c'hoazh n'eo ket bet sinet ar pezh a sell ouzh kelennerzh ar yezh gant ar c'helenner David C.Marsh, nag ar pezh a sell ouzh kelennerzh ar relijion gant ar c'hoar Dominica. Ya, ul leanez, katolik moarvat, a oa ivez ezel eus ar gomision. Petra'fell deoc'h, Breizh-Veur n'eo ket Bro-C'hall !

Ar bennreolenn-mañ a zo bet kemeret evel diazez: ret eo krouiñ ur c'helennerezh diyezhek a roio tu da zeskiñ ar C'hembraeg en un doare efedus evel yezh kentañ, pe evel eil yezh ha d'e implijañ evel benveg-kelenn.

Ha da heul e ro un nebeut erbedadennoù:

- 1) Sellout evel skolioù Kembraek ar skolioù a gaver er c'hornbroioù kembraek hag ar skolioù a zo ar c'hembraeg ar yezh pennañ enno.
- 2) Digeriñ skolioù kembraek er rannvroioù saoznek.
- 3) Krouiñ ur skol-heñchañ a c'hiz nevez evit ar saoznegerion a refe da gentañ gant ar Saozneg evel yezh-kelenn ha tamm-ha-tamm gant ar C'hembraeg adalek klas ar vugaligoù.
- 4) Pennadurezhioù an Deskadurezh e pep kontelezh a zlefe termenañ resis ha publik o folitikerezh hag e lekaat da dalvezout.
- 5) Ober enklaskoù war an doareoù gwellañ da gelenn an eil yezh.
- 6) Kenderc'hel er skolioù-etre al labour embreget er skolioù izel.

An Danevell a gemer da skour ar " Skol Gembraek " krouet e 1939 hag a zo bet, emezi, " an darvoud pouezusañ e-doug an 30 vloaz diwezhañ ". Aes eo kompren kement-se. Rak, evel ma skriv pennañskrivagner Y FANER (1/2/68) " Ur c'hwitadenn spon-tus eo bet an deskadurezh diyezhek e meur a rannvro e Kembre, dre ma ne oa politikerezh kadarn ebet a-dreñv dezhi, ha dre ma ne implijed ket an doareoù ar muiañ efedus d'he ledañ. Alies e veze lezet ar gerent da zibab pa ne oa abeg ebet da zibab. Ne lezer ket ar gerent da zibab nac'h deskiñ Saozneg d'o bugale. Ha perak e vefe graet evit ar C'hembraeg, yezh vroadel Kembre hervez an istor " (31% eus ar gerent a fell dezho e vefe desket Kembraeg d'o bugale, ha nebaut a vefe e gwirionez a-enep, hervez an Danevell)

Degemeret mat eo bet an Danevell " ar skrid talvoudou - sañ embannet biskoazh diwar-benn ar skolioù izel ", eme Y FANER (1/2/68) en he rentañ-kont a zoug an titl : " A-benn ar fin, e roer tu da vugale Kembre da zeskiñ ar C'hembraeg ". Hag UNDEB CYMRU FYDD en deus embannet en e varnadenn : " U.C.F. a ra degemer mat d'an Danevell hag a sell anezhi evel ur sko-skoazell a-bouez da grouiñ ur c'henreizhadur-skoliata hag a gлот gant ezhommoù Kembre " (Y FANER 1.2.68)

Armañs ar C'HALVEZ.

N.B. Gwelout Y CYMRD 25.1.68 & Y FANER 1.2.68.

KEMBRE

...AR C'HEMBAEG ER SKOL: Arabat disoñjal he deus ar gelaouenn " SKOL " embannet ur studiadenn hir diwar-benn " Ar C'HEMBAEG ER SKOL " eozet gant an Ao.Ar. C'halvez.72 pajenn; priz: 5 lur da gas da Gont-Red REVUE SKOL, 1911 06, ROADHON. " Ar gelaouenn SKOL he deus embannet diwar-benn ar c'helennerezh diyezhek e Bro-Gembre ar studiadenn bouezusañ ". Gerald Morgan er " Welsh Nation " Kerzu 1964.

...SKOLIOÙ KEMBRAEK (Arolwg 1967) en hanterhoz Kembre. Anat eo daoust d'an diaesterioù a vez da heul ar seurt embregerezh, ez eo aet kelennerezh ar yezh vroadel e Kembre war-raok er bloavezhioù tremenet. Setu teir skol da skouer, bet savet n'eus ket pell : Ysgol Glan Clwyd: 400 skoliad, skol savet e 1956, Ysgol Maes Garmon, yr Wyddgrug : 300 skoliad, skol savet e 1961, ha neuza Skol Morgan Llwyd, e-kichen Wrexham, skol savet e 1963, tremen 400 a skolidi.

DIDALVOUDEKA ET AN ARC'HANT SAOZ. Gant Wilson o skeiñ en traoù talvoudgezh al Lur Saoz hag o tivizout krennañ war an dispignoù ez sur an dilabour da vont war-gresk, e Kembre, hep degas an disterañ arackadenn ekonomikel evel da skouer dre sevel uzinoù bihan. An trenioù bihan a vo serret, hag ivez menleuzioù-glaou. An ijina-rezh-dir a vo wazh a se ivez eus ar muzulioù kemeret gant ar Gouarnamant, hag evel e Bro-C'hall, e vo lakaet milieroù a vicherourien war ar beoz, hep na gemerje ar Gouarnamant ar boan da bourchas labour dezho arack serriñ an uzinoù: garv-tre e kaver se eus perzh ur gouarnamant socialist hag a zo sañset da sevel raktrasoù. Koazhet e vo ivez an arc'hant a roer evit ar Gwarez Kevredadel, ha pañsion ar Re Gozh. An Hentoù-Meur hephen (priffyrd) a vo dreset hag an hentoù e eil-rénk lezet war o c'hement all: an nsb a ana-vez un tamm hentoù meneziek kammigellek Kembre a gompreno ervat petra'sinifi kement-se. Oad ar vugale er skol a chomo 15 vloaz e-lac'h 16 vloaz evel m'edod e-sell. Nebeutoc'h a diez nevez a vo savet, evel just.

Divizoù ar Gouarnamant ne sellont ket hepken ouzh Kembre, se 'zo sklaer, met paz' eo marv a-walc'h dija an Ekonomiezh e Kembre ez eo hi a zo risklet da c'houzañv ar muiañ. Krefvoc'h a se avat, ez eo kaoz ar Vroadelourion a c'hell displegañ o c'helennerezh war ar Politikerezh, an Ekonomiezh ha bezañ gwell a se selaouet ha komprenet.

GWYNFOR EVANS ER VIET-NAM. A-gevret gant politikereion all en deus

A-HED AN DEIZIOÙ

29 Genver - Teir gartenn digant mamm. Unan skrivet ar 26 K/zu, eben an 28, hag an drede, ar 4 Genver 1941. Hini an 28 a zo respont d'am c'hartenn-pakadenn kaset an 3 K/zu 40.

Degemenn a reer din ivez e vo bet kaset div bakadenn din adarre e deizioù kentañ Genver 41.

30 Genver - Tri deiz'zo e chom Tangi d'ober e zidalvez, klañv. Bemdeiz goude kreisteiz ez an da dremen teir pe beder eur gantañ, hag e poadhomp ur batatezenn bennak prenet gantañ. Warc'hoazh ec'h adkrog gant e labour.

31 Genver - Hiziv, da 7 eur netañ 1/4 (beure) ez eo marvet, ar c'hlañvdi, ar c'hloareg Jozeb Karedeg. Daou, tri devezh hepken eo padet. Seizh pe eizh a varv evel-se bep sizhun. Doue d'o degemero en E varadoz, ha da frealzo o zud.
Lizher bloavezh mat digant an Ao.'n Eskob.

.....

4 C'hwevrer - N'em eus nemet peder oferenn kan eus an 30 degaset din gant an Aotrou Goualan. Hiziv emañ e-sell a lizher. Ez wir, daou lizher a zegouezh em anv. Eus Douarnenez avat, e teuont ha n'eo ket va nivarenn. N'int ket din. Ur gerseenn. Warc'hoazh marteze.

.....

18 C'hwevrer - Ur gartenn... hag ul lizher. Ar gartenn digant Léonie Thoz, skrivet ar 16 K/zu. N'em boa ket gwelet c'hoazh he skritur... Ul lizher eus ar gêr o tegemenn din ez eus er gegin war ar bufed ur bakadenn o c'hortoz bezañ kaset. A! pa soñjan o devez darn unan bemdeiz ha muoc'h alies. N'eo ket se a c'houllan, hogen perak'ta ne gasont ket hep ober van nag ouzh skrid nag ouzh lavar. Na gradont ket ha goude o do keuz!

Hiziv e skriven ur gartenn d'ar gêr, hag e kasan an drede paperenn-pakad.

22 C'hwevrer. A daol-trumm Bodadeg holl dud ar varrakenn (47 B atav). Petra'ta a nevez? Ur c'heloù plijus. Rener alaman hon ad-Kamp, sanket pennadoù ennañ gant ar jubenn tchec'hat, un hailhon, a fall dezhañ ez afemp, ni aspiranted kenkoulz hag ar re all, d'ober aner pe aner e diabarzh ar c'hamp, dreist-holl

da skrapat patatez. Kement-se a c'hoarveze dec'h. Hiziv, da 8 eur evel boaz, e teuer da bourchas ar beilherien. Den a c'hanomp ne fiñv; hor rener-ni avat.. Le Clerc, a ya devet ar Souder-führer. Hemañ a zeu betek rener an ad-Kamp hag a c'hourc'hemenn dezhañ reiñ peoc'h dimp betek dilun. Dilun e vo komzet gant an ofiser, rener bras ar C'hamp.

23 C'hwevrer - AR SUL 1 - Betek Morvan St Maloù en deus bet dec'h div bakadenn: 10 lur ha 2 lur. An hini vras gant ur paperenn-bakad.

28 C'hwevrer - Morvan hag ur bern re all o deus bet hag o devez bemdeiz o c'hartenn pe o lizher- respont (Morvan hiziv unan eus diwezhañ Genver, darn zoken eus deroù C'hwevrer). Me n'em eus ket bet c'hoazh an disterañ hini ! Abaoe hant ar diwezhañ K/zu... Gwall fall e tro an traoù ganin ! Ar pakadennoù n'on bet biskoazh sorc'hennet ha ne fellfe ket din zoken kaout re alies ! C'hwec'h lur evelkent, en ur ober tost da 9 miz, a zo skañvik ! Dreist-holl pa weler ar re all, ha p'o c'hlever o tiskleriañ emaint gant o IOO-vet pe 60-vet, pe 10-vet pakadenn d'an izelañ ! Hag hevelep tra evit al lizheroù - Doue ra vo meulet !

.....

5 Meurzh - Ur bakadenn a 10 lur pe war-dro. Ur bilbod amann, ur bern gwesped, teir varrenn chokola, 9 kub, gwestell, tri bakad butun-moged, hag 1 pakad butun-fri. Eus ar gêr e teue, an deiz avat, n'em eus ket gwelet. N'em eus ket bet ivez c'hoazh al lizher a zegemenn din ar gasadenn.

.....

9 Meurzh - Un enseller-oberstleutnant a zo tremenet hiziv. Pep tra kempenn! hag an holl er-maez a-regenn. Da c'hortoz (tremen un eur dindan ar glav) e kanomp a bep seurt sonioù ha Kanenn Massilia betek div wech !

.....

1 Ebrel - Dec'h da noz, 31 a viz Meurzh, em eus bet va c'hentañ lizher niverennet! Hogen an niverenn 2 ez eo. Un all eta, d'an nebeutañ, a zo dilerc'het... Hag en eskemm, e kasan d'ar gêr va n-enn 9 hag ur baparenn-bakad.

Un nebeut devezhioù'zo ez eus kaoz da gas an aspiranted n'ouzon da belec'h. En abeg da se, ez omp bet bodet holl, abaoe an 29 C'hwevrer, ar varrakenn 44 A. Un dilojadeg all eta, hon eus bet adarre. Ha kement-mañ da heul un dilennadeg vras, he doa roet an tu kreñv d'an aspiranted. Ur rener barrakenn aspirant an 49 B, ur rener strollad barrakennnoù aspirant, hag ur Rener Meur aspirant. Hemañ, hevelep anv dezhañ evel ar Rener alaman. (Ray-Leclerc-König). Ha setu m'emaomp war c'hortoz...

3.5 Ebrel - Dav war-raok. Holl nemet un nebeut mengleuzerien, hag ar re o deus seblantet pe gentoc'h o deus graet van da vezañ klarañ. (Layec) - (Blanchet eus Kintin: mengleuzier)

Da 6 eur 30 kuit gant hon traoùigoù war hon chouk ha tri devezh bevañ: ur bara, hag un 1/3 anduilhenn baper. An tren a depomp e Neu-Burxdorf. Pemzek ha tri-ugent emaoamp. 39 en ur c'hombod-chatal, ha 36 en un all. Plouz a roer dimp e-barzh. Da heul e venegin dre belec'h 'omp tremenet. An noz kentañ a voe pōanius. Penaos kousket, penaos zoken diskuizhañ, berniet er stumm-se. A-benn an eil nozvezh, ez en em gavemp en Trepaa poloniat. Diouzh ar beure e oa aet daou diganimp d'ar c'hombod all. An trede devezh, war-dro kreisteiz, ma ne faziñ ket, e tiskennomp holl, evel bemdeiz ur wech, pep hini d'ober e ezhommoù. Evel bep tro ivez, e voemp niveret. Hag e oamp 2 nebeutoc'h ! Fuz h ha klask ha todion. Ni a vouc'hoarzhe, ha da bep goulenn e respontemp : " N'ouzomp netra. Kousket'oamp." Unan ac'hanomp zoken a c'hoarzas, hag a dapas raktal digant un Alaman an anv flour a borc'hell. Marteze o devo tapet Le Nail ha Vuillemin tizhout Dantzig pe harzoù ar Re Ruz !

Pa zegouezhomp en 1 A (Eglau) e voemp degemeret gant pennoù fromus. Ha moc'h dimp adarre ha blejadeg !...

Un 2000 aspirant bennak emaoamp amañ. Ur bezn a gavan eus va anaoudegezh (eus ar XVII B, dreist-holl) Ha betek Amiot tapet e Bwengamp !...

6 Ebrel - Glaviadeg - dilaoquadeg - furchadeg - Amañ eo lous pep tra. Bemnoz da 8 eur nemet kard, e tleomp reiñ botoù, bragoù, porpant. Adalek 7 eur den er-maez. Kaz o deus ouzhimp rak ennomp e chom bev an etev. Amañ ivez, na taol, na skañ, na tan, yen-skias.

Peur hor bo keloù bremañ ?

7 Ebrel - Pep a baperenn-bakad, pep a gartenn, ha pep a lizher: 20 pf. rak amañ e ranke paeañ. Ne gasin da gentañ nemet pape-
rrenn ha kartenn, goude warc'hoazh.

Sede pe dre lec'h 'omp tremenet en deiz all:

Stalag IV B - 3 Ebrel da 6 eur 30 - Burxdorf war droad. Neuburxdorf: hent-houarn- Roderau - Riesa (10 eur 10) - Wülknitz - Grödisz bei Riesa - Präsen - Elsterwerda - Mückenberg - Ruhland-Senftenberg - Neu-Petreshain - Drebkau - Leuthen bei Cottbus - Cottbus (19 eur)

Hag an noz a gouezh. Ret eo da bep hini en em bakañ en e zaougronnoù. Ne walomp netra ken eta.

4 Ebrel: Schneidemühl (7 eur beure) - Flatow - Kunitz (W.Pr.)
Gziis - Czerak - Semlin (17 eur 30) - Dantzig (noz).
5 Ebrel: Bhaunsberg - Heeligenbeil - Ludwigsort - Königsberg (11 eur)
Egleü - Stalag 1 A - 1

Ha setu !

24 Ebrel - Abaoe m'emaomp amañ ez eo yen-skorn an amzer. Hiziv erc'hil Ur vro dudius-kenañ... Amañ 'omp bet degaset, o vezañ ma oamp tud risklus. N'helled ket donet a-benn ac'hanomp. Ur spered a-dreuz ez eo hon hini, rak ne stouomp ket, na diskanañ amen da bep gaou. Batat e vanont o walout e tagemeromp gant fent pep hegasiri: brageier da reiñ, touzadeg, embregerezh-korf h.a. An orjalennoù dreinek a ziwan en-dro dimp a bep tu: bihanaet a ra hon domani. Batek etre barrakennoù aspiranted !... Hag adalek 7 eur arabat lakaat ar fri er-maez pe e vo tannet ! Doue d'o flastro!...

Dec'h em eus graet ha kaset ur baperenn d'ar gêr da aotren va zad da c'houlenn va gopr a-bezh. Eus ar gêr: netra c'hoazh er miz-mañ.

....

1 Mae - Peogwir ez eo gouel e Bro-C'hall hiziv, e lidomp ivez ar gouel, ni. Oferenn da 9 eur evit ar Frañs. Ha goude c'hoariadeg a bep seurt. Un tamm stroñs : un is-ofiser a zeu da luc'hskaudenniñ. Evit mirout outañ ec'h en em laka atav hini pe hini dirazañ. Droug er paotr ken e stag da zifretañ hiniennoù, hag eñ kement hag un taol-dorn ! Klemm a raio, emezañ, en ur vont kuit. Bal n'eo ket ar wech kentañ....

Perak o lezel d'ober o reuz evel ma plij ganto. N'int ket seven a-walc'h. C'whez al loened-gouez a zo ganto. Re vozet omp da glevout porc'hell ac'han hag alese evit kemer manegier ganto.

En deiz all, un aspirant marv a zo bet archedet en nozh (!) hep enor dirak aotronez, an tan war o beg! Ganimp holl e kavint d'ober rak a-viskoazh ez omp bet kreizenn ar spered enep-germanek. Har gouzout a reont: sede perak emaoamp amañ. Truez am eus ouzh Breizh, ha koulskoude n'eo ket dleet d'ar peustailhoù brein-mañ gonit !... Diouzh an noz: c'hoariva ha kahiri e diabarzh al lojeiz.

3 Mae - Ur gwiskad erc'h er-maez! Na dudiusat bro ! Ha d'erc'hel d'ober a ra. Goude kreisteiz dour: fankigell. Gallout a reont, war o c'he-laouenn, moulañ skeudennoù nevez-amzer.

4 Mae - AR SUL, ur sulvezh glav holl. Nag e kaver hir an amzer amañ. Ne gavan en tamm frealz nemet o lenn hag adlenn al lizheroù bet eus ar gêr. Plijadur a reont din, daoust ma ouvezan ervat ne zisklerier din enno nemet un tu eus an traoù. Ne gredan ket e ve

gevier e-barzh, hogen traoù amwir, betekout... ar boan-spered evi-
don. Arabat degemenn din ur c'heloù fall bennak... Tad a zo bet
klañv, ha ranket hen oberiata, ha n'em eus bet ar c'heloù nemet
pell goude, pa oa tremenet ar bec'h. Ya! Kompren a ran. Evelto e
rafen, hag evelto e ran... ha ret din hen ober. Gaou ebet, hogen
ne lavaran ket kement a zo gwir. Anez....!

Ha diwezhañ ebet ne welan d'ar walenn-mañ, dibun ebet d'ar
gudenn.

5 Mae - Biskoazh kement all a lizhiri n'em boe bet c'hoazh kevret.
Tremen 25 war un dro! Eus warlene, siwazh! Keleier avat warno, hag a
bep seurt. Betek digant Kerverziou (Erwan Berthou). Da heul ar
gartenn eus an 9-3-41 bet dilerc'het.

.....

8 Mae - Amzer gaer ! Dispar. Nijal a ra ar malkennoù erc'h. Erc'h
a gouezh dibaouez. Ha yen... Aon am eus rak ar remm. Poan alies
em divc'har, em divskoaz... War a welan, daou lizher a ra diouer
din: 3 hag 8.

11 Mae - Dec'h em eus bet al lizher n-et 8. Degemenn a raed din
ez eus prenet gant sikour va arc'hant, un tamm dilhad da Herri.
Ur vantell: 1000 lur, ur vroz: 420 lur, ur re votoù: 225 lur, un
tog: 200 lur, ur re loeroù: 65 lur ha manegoù: 65 lur.

30 oferenn adarre digant an Ao.person. Hiziv, ar SUL,
oferenn er-maez: kaer, hini Santez Janed a Ark. Kenstrivadegoù
mell-droad. Ar Vrezhonez a drec'h bewech. C'hoariva emberr diwar-
benn Janed Ark.

13 Mae - Lizher d'ar gêr, n-enn 14. En noz tremen em eus huñvreet
e Fañch. Droug ennon o vezañ m'edo mezv, em eus e daolet er-
maez!...

... Kement-mañ a zo c'hoarvezet ganimp ivez ur wech. Da
zibenn an embregerezh-korf, e kanomp, en ur arruout, ur ganenn
amerikan, ur c'han-bala hep komzoù. Ar gompagnunezh e-kichen, ar
V-et, ha doa hiziv ur rener all, arvet Gueule d'Amour, en abeg d'e
benn ken vil ha r... ur mezhier. Ouzh o c'hlevout e savas fulor
ennañ. Hag ober d'an dud dont en-dro ha chom er-maez pelloc'h. Ni,
achu ganimp, a selle. Ar peustailh a fellas dezhañ rediañ an
holl da chom en diabarzh. Div wech e teuas d'ar red d'ober troz.
Ma neuze a yeas er-maez ivez gant un all. Ha pa zeuas ar pabor
en-dro e chomjomp hon-daou. Hag e kemeras hon niverenn hag hon
anv. Petra'vo da heul se ? Un toullad devezhioù toull-bac'h mar-
teze. Gwalet a-walc'h e vo. Dindan o zreid emamp bremañ...Ma teu
o zro, un deiz!...

Diouzh an noz e tegemener dimp ez eo difennet kanañ kan-
bala Souza o vezañ m'eo digomz. Pemp munutenn goude e oa graet ar
son evit an ton. Sede amañ ar c'homzoù savet:

Oui, oui, c'est connu, on le sait bien
Vous volez de victoire en victoire
Et les gros succès italiens
Sans cesse enrichissent l'histoire,
Bientôt vous aurez mérité,
Race élue, d'être maître de la terre
La dernière difficulté
C'est d'arriver à débarquer en Angleterre!...

Ha setu!...

14 Mae - Ar Paotr Tev a ra dimp hiziv, evel dec'h Gueule d'Amour,
d'ar re all. Gennet eo evel egile

20 Mae - Lizher d'ar gêr diouzh ar beure. Goude kreisteiz: pakadenn
diouzh ar gêr. Ur pezh hini adarre: Amann, keuz, boued-mir, butun,
gwaestall, chokola, 2 lur sukr ! Re a draoù. Ur pennad'zo ne gasan
ken a baperennoù-pakad.

22 Mae - Tremenn 250 aspirant all a zo a-nevez erru. En o zouez amañ
P.Gwareger eus Plouared, bet tapet e Gwengamp ! Ha meur a hini eus
Fontenay. Charlez Perez (Plistin) a zo amañ ivez.

... Kaoz, ur pennad'zo, eus asant Bro-C'hall da genober gant
Alamaniz ! Gant ma viro Bro-C'hall he listri-brezel !!

25 Mae - Tommder ! Gwrez ! Poazhat a reer ! E deizioù kentañ ar miz e
rae c'hoazh erc'h, ha bremañ amañ en holl koulz lavarout en nozh !
- Ur pezh goude kreisteiz er varrakenn. An oferenn-bred da eizh eur
hanter er-maez !

.....

30 Mae - A greiz holl e sav bec'h ! Bodadeg an holl aspiranted war
al leurenn vihan damdost d'al linenn hent-houarn. Hag e welomp oc'h
arruout Alamaned: pennoù-bras. Ha trouz en ti bihan. A-hervez klavout,
meur a hini oc'hanomp a vefe bet e Königberg, gant an oto-karr, mar
plij, o welout penaos... e vije gallet... lañsañ. Souezhet on rak ne
ouien netra. Darn o deus graet ouzhpenn studiañ an doareoù... Ha
gourdrouz... evel just. Ma ne vez ket gouvezet piv, ma c'hoarvez
c'hoazh kement all, ma' vel-hen, ma' vel-hont (droug er c'haronel
kuzh ken e vestaode !) e vefe graet dimp ur vuhez gwashoc'h c'hoazh
egset en devezhioù kentañ, kemeret bragoù, porpant, botoù ha me'oar.

31 Mae - Er beure-mañ e kemer un toullad all an tec'h ! Peadra da
c'hoarzhin. Goude kreisteiz, kenstrivadeg embregerezh-korf. Plijadu-
rus-dreist !

KRENNLAVARIOU KEMBRAEK

D

Dadieu wedi barn : Breutaat goude ar varn

Dangos y llo ac na dangos y llaeth: diskouez al loue ha chom hep dikouz al laezh.

Deuparth ffordd ei gwylod : Div drederenn an hent hen gouzout.

Deuparth qwaith ei ddechreu: Div drederenn al labour, e voulc'hant

Deuparth pryd ymdrwisio: Div drederenn ar gened, en em gempenn.

Deuparth taith ymbaratoi: Div drederenn ar veaj, en em brientiñ.

Dirimid e geif ddraen yn ei uwd: Den drouk a gav pikoù en e yod.

E

Edwyn hen gath lefrith: Kazh kozh a anavez laezh livrizh.

E fynnai'r gath bysgod, ond ni fynnai wlychu ei thraed:
Ar c'hezh a venne kaout pesked, met ne venne ket glebiañ e dreid dreid.

Esmwyth qwaith yw qwranda (= qwrando): Labour aes eo selaou.

F

Ffo rhaq drygdir, ac na ffo rhaq drwg arglwydd: Tec'h diouzh douar fall, met na dec'h ket dirak un aotroù drouk.

G

Gedwch le i'm modryb i neidiaw (= neidio): List plas gant va moereb da lammat.

Glân y gwyl yr afr ei myn bid ef ddu, bid ef wyn:
Koant e wel ar c'havr he menn
Bezot du pe vezet gwenn!

Gorau cydymaith ceinioq : gwellañ kompagnun, an arc'hant

Gorau qwaith diwrnod: dal dyn wrth fedydd :
Gwellañ labour an devezh: darc'hel den(bugel) ouzh badez.

Gorau llaeth, llefrith: Gwellañ laezh, laezh livrizh.

Gorau meddyq, meddyq enaid : Gwellañ mezeg, mezeg an ene.

Gorau meistr, a fu kwas: Gwellañ meistr, (neb) a voe mevel.

Gorau neges, myned â chroes: Gwellañ keloù, mont gant ur groaz
Gorau pererindod, cyrchu offeren sul: Gwellañ perc'herinded, mont d'an oferenn-sul.

Gorau un ddiod o ddŵr: gwellañ died, dour.

Gorau un mil march : Gwellañ mil (loen) ur marc'h.

Gorau un tlys, qwraig: Gwellañ bravig, ur wreg.

Gorau y celid, peth nis gwypid: Gwellañ a guzher, ar pezh n'ouzer ket.

Gwae a wyl(wêl) ei arglwdd beunydd: Gwa an hini a wel e aotroù bemdeiz.

Gwaith un blaidd clof no(= na) dau iach: Gwashoc'h ur bleiz kamm eget daou yac'h.

Gwag tŷ heb fab: Goullou un ti hep mab.

Gwaith celfydd celu rhin: Labour ampart, kuzhat kevrin.

Gwaith y nos dydd a'i ddenyys: Labour noz, an deiz hen diskouez.

Gwell ceinioq na brawd: Gwell gwenneg eget breùr.

Gwell celfydd na thrysor: Gwell micher eget teñzor.

Gwell ci a rodio na chi a eisteddo: Gwell ki a gantre eget ki a azez.

Gwell dwylo y cigydd Na dwylo y sebonydd: Gwell daouarn ar c'higer eget daouarn ar soavoner.

Gwell edrych ar ddyn yn ceghu Noc(Naq) yn cymmynu: Gwelloc'h seblant a zo gant un den'o kac'hat eget gant (unan) oc'h ober e destamant (1)

Gwell eistedd ar y gwellt noc ar y llawr: Gwell azezañ war ar geot eget war an douar(al leur)

Gwell canu hwyr na chanu bore: Gwell kanañ d'abardaez eget diouzh ar ar beure.

Gwell gwae fi na gwae ni: Gwell "gwa me" eget "gwa ni"

Gwell hanner hâd no(=na) hanner hâf: Gwell hanter had eget hanter-hañv.

Gwell hir weddwod na drwg briod: Gwell hir intañvezelezh eget pried drouk.

(1) gerioù evel-se a zo bannet eus yezh an divizoù pemdeziek e Kembra. Ar c'hrennlavar-se avat, a ziskouez a-walc'h n'eo ket bet kont evel-se a-viskoazh. Levezon oadvezh Viktoria ?

Gwell maen garw a'm attalio No maen llyfn a'm gollynno:
Gwell maen rust am dalc'ho eget maen lufn am dilaosko.

Gwell naq no(na)gau addewid : Gwell "nann" eget fals-promesa.

Gwell penloyn mewn llaw no (= naq) hwyd yn awyr
Gwell pennglaouig en dorn eget houad en aer.

Gwell pwyll noc aur = Gwell poell eget aour.

Gwell synnwyr no chyfoeth = Gwell skiant vat eget pinvidigezh.

Gwell tewi no drwg ddywedyd = Gwell tevel eget drouk-komz.

Gwell y lysk dau etawyn noc un = Gwell e losk daou etev eget unan.

Gwell y wialen a blygo na'r hon a dorro = Gwell ar wialenn a blego
eget an hini a dorro.

Gwerthu cig hwch a phrynu cig moch = Gwerzhañ kig-gwiz ha prenañ
kig-moc'h.

Gwisg orau merch vw gwylder: gwellañ gwisk ur plac'h eo en
elevez.

Gyda'r ci y cerdd ei qynffon = Gant ar c'hi e kerzh e lost.

H

Hawdd cymmod lle bo cariad = Aes unvaniñ 'lec'h ma vez karantez.

Hawdd cynny tan ar hên aelwyd = Aes kregiñ tan war un oaled kozh.

Hawc cau â bys noc â dwrn = Aesoc'h prenañ gant ur biz eget
gant un dorn.

Hawdd vw tynnu carai hir o groen un arall = Aes eo tennañ korreenn
hir eus kroc'hen un arall.

Haws dringaw (= dringo) na disqyn = Aesoc'h pignat eget diskenn.

Haws dywedvd mynydd na myned drosto = Aesoc'h lavarout menez eget
mont dreistañ.

Haws can hwyr na chan bore = Aesoc'h kan an abardaez eget kan-
beure.

Haws llenwi bol no llygad = Aesoc'h leuniañ kof eget lagad.

Haws llosqi tŷ no'i adeilad(u) = Aesoc'h leskiñ ti eget her sevel.

Haws twyllaw (twyllo) maban no thwyllaw gwrachan = Aesoc'h touel-
lañ mabig eget touellañ gwrac'hig.

Hir y byddir yn cnoi tamaid chwerw = Hir e vezer o chaokat un tamm
c'hwerv.

Hir y bydd y mud ym mhorth y byddar = Hir-amzer e vez ar mud e por-
ched ar bouzer.

Hoff gan bob edn'ei leis = Da bep labous e plij e vouezh.

Hwy clod na golud = Hiroc'h klod eget pinvidigezh.

I

I'r pant y rhed y dŵr = D'en traoñ e red an dour.

LL

Llawer o'r dŵr a â heibio hep wybod i'r melinydd = Kalz eus an dour a
ya e-biou hep gouzout d'ar meliner.

Llawer tŷq drwg ei ddefnydd = Kalz a draoù kaer a zo fall an danvez
anezho.

Llawer o waith a wna llawer o ddwyllaw = Kalz a labour a ra kalz a
zaouarnioù.

Llawer o dda a wna llawer o ddynion = Kalz a vad a ra kalz a dud war
un dro.

Llawer a siezyd llawer o wragedd = Kalz a gaozioù a zeu gant kalz a
verc'hed

Ladd yr iâr o cholli y cywion = Lazhañ ar yar ha koll an evned bihan.

Llong i longwr a melin i felinydd = Lestr da vartolod ha melin da veli-
ner (milin da viliner)

Lle craf a'r iâr e biga 'r cyw = Lec'h ma skrab ar yar e pigos an evnig.

Llygriad y peth gorau yw y llygriad gwaethaf = Breinadur ar pep gwellañ
eo ar breinadur gwashañ.

Llywelyn pob lle, weithiau cartref * Llywelyn (e) pep lac'h, a-wechoù
er gêr.

M

Mae cloch wrth bob dent iddo = Ur c'hloc'h en deus ouzh pep dent.

Mae dwy ffordd i'r coed = Bez'ez eus daou hent d'ar c'hoad.

Mae yn rhy hwyr cynnilaw (cynnilo) pan eir i din y cwd = Re ziwzhat
ez eo erbediñ pa'aer da foñs ar sac'h.

Mae'n rhaid i'r gwychaf gachu = Ret eo d'an hini koantañ kac'het.

Mae'n rhaid i'r adar man gael bwyd = Ret eo d'an evned bihan kaout boued

Mae newid gwaith qystal â gorffwysaf = Cheñch labour a zo koulz ha
diskuizhañ.

Mae modd i ladd ci heb ei grogi = Tu a zo da lazhañ ur c'hi hep hel lakaat ouzh ar groug.

Mae bran i fran a qualch i walches A thylluan i'w cymharies
Bran da vran, falc'hun da falc'hunez ha kaouenn d'he farez.

Mae modfedd yn ddiqon er dianc = Ur meutad a zo awalc'h de de-
c'hout.

Mal gwydd am quddiaw ei hwyau = 'Vel gwaz o klask kuzhat he vioù.

Mal v try v ddr ar ei cholyn, v try v diawg yn ei wely.
Vel ma tro an nor war he mudurun, e tro an dieguz en e wele.

Man vd fydd trwyn vd fydd trew = Lec'h'vez fri e vez distrevierezh.

Mehefin heulog. A wna fedel mochddwyreog = Mezheven heoliek a
lak an eost (ar mederezh) da vezañ abred.

Mi adwaen llwynog er nas qoddiweddyf = Anaout a ran ul louarn
daoust n'em eus ket e dizhet.

Mwv y twrw no'r taraw = Brasoc'h an trouz eget ar skeiñ.

Mwv y braw no'r briw = Brasoc'h ar spont eget ar c'hloaz.

Melys vw cig lledrad = Dous eo kig laeret (laeroñsi)

Mor ddiles â halen i'r iar = Ken divat hag holen d'ar yar.

Mor qlaiar â llyn llefrith = Ken klouar hag ul lennad laezh dous.

Mwyaf poen vw poen methu = Brasañ poan eo ar boan da chwitout.

Mi wn chwedl (chwedyl) vr vsqythan wrth v bi = Me'oar konta-
denn ar pichon d'ar big.

Myfi yn cael vr enw, ac ereill yn cael vr enill = Din-me an
enor, d'ar re all ar c'honidigezh.

N

Na ddeffraw (= deffro) v ci a fo 'n cysgu = Na zihun ket ar
o kousket

Na chred fyth ferch dy chwegrwn = Na gred kammed merc'h da
dad-kaer.

Na choll dy henffordd er dy ffordd newydd = Na goll ket da hent
evit da hent nevez.

Na farn ddyn nâ'th ran hyd em mhen v flwyddyn = Na varn den na da
lodenn-te ken ne vo echu ar bloaz.

Na fid dy elyn dy qymydog = Arabat e va da amezeg da enebour.

Na fid dy wraig dy qefrin = Arabat d'az kwreg bezañ da (blac'h) se-
kredoù.

Na fydd frâd fuqail i'r a'th qreto = Na vezez ket drouk-vesaer (bugul)
da neb a fizio annout.

Na fydd oreisteddgar yn ystafell = Na chom ket re bell e sal abet.

Na fydd ryfoethus lle galler dy hepgor = Arabat dit bezañ re lidour
'lec'h ma c'heller da ziouerout (tremen hepdout)

Natur yr hwch fydd yn v porchell = Natur ar wiz a vez er porc'hell
bihan. (ar goueled

Nawf maen hyd waelawd (waelod) = Neuiat e ra ar maen betek ar soll

Na werth nef er benthvq v byd = Na werzh ket an nañv da amprestañ
ar bed.

Na wreica ond yn agos = Na glask gwreg nemet eus kichen.

Na fynych dramwy lle bo mwaf dy qroesaf (qroeso) = Na dremen ket
alies 'lec'h ma'z out ar gwellañ degemeret.

Na hir ddilyn hirddrw = Na heuilh ket pell an den drouk a bell'zo.
(1)

Na ymddiried i'r qlwth am dy qiniaw (= qinio) = Na fizi ket el lon-
treg evit pezh a sell da lein (=verenn)

Na werth mo'th iâr ar v qwlaw = Arabat dit gwerzhañ da yar dindan
ar glav.

Nerth v gath yn ei chynffon = Nerzh ar c'hazh en e lost.

Nês imi fy nghrys na'm pais = Nesoc'h din va c'hrez (roched) eget
va mantell.

(da genderc'hel)

(1) Eval-se e komprenomp ar c'hrennlavar-se berr ha fetis. Gant ar
ster "daremprediañ" "hentañ" "pleustrañ" d'ar verb "heuliañ" na
petra'ta.



SPI

Manet dirak an aod, war zouar Sant Gireg
 De sellout ouzh ar mor o tornañ ar c'herreg
 Hag o ruihal pelloc'h e goumoù war an traezh,
 Me'grede din klevout, a'us d'am fenn, ur vouezh
 U lavarout : Breizhiz, petra soñjit etal
 Daoust ha na welit ket emañ holl beadra
 Holl hêrezh, ho tadoù, hag holl frankizioù Breizh
 Skubet gant avel vrein renadurioù direizh ?
 Ma ne stourmit kreñvoc'h, ene ho tud yaouank
 A-raok pell a vezo masteret gant ar fank !
 Me fell d'ar Vretoned saveteiñ o Mamm-Vro,
 Ez eo poent dezho holl sellout eun dirazo,
 Ha kerzhout dorn-ouzh-dorn, dispont war hent ar gwir
 Kalon yac'h en o c'hreiz, 'n o fen ur menoz dir...
 Rak moarvat he deus Breizh, hiziv c'hoazh gwir Vibien!

Pa zeuas da Vallon gwechall brezelourien
 E vit kabestreñ Breizh 'vel m'o doa kabestret
 Rannvroioù reuzeudik e bro ar C'halianed,
 " Paotred Nevenoe" a youc'has " Torr e benn "
 Hag an estren mezhek a reas un dro-wenn.
 Hiziv war ho touar, n'eus ket a soudarddd
 Klezeier en o dorn hag urzh dezho roet
 Da skeiñ war neb a vez klevet o komz dinec'h
 Ur yezh pe ur yezh all ! Koulskoude e pep lec'h
 Ho Prezhoneg, Breizhiz, yezh ho Pro, yezh ho Mamm,
 A wel e dachennig o koazhañ tamm ha tamm;
 Ha dizale, e vo homañ beuzet a-grenn ! "

- Birviken! emezon, en ur sevel ma fenn...
 - Eo, allas! ha prestik, Brogerour leun a spi
 Ar Breizhad a vezo un estren en e di.
 - Gaou, gevier kement-se, e lavaris me c'hoazh
 An heklever da respont: Nann! re wir eo, siwazh !
 0

Neuze, pebezh frealz, pa glevis em c'hichen,
 Ur bagad tud yaouank o kanañ a-bouez-penn :

" Arvor! o Bro ken kaer, dihun, rak ni da gar !
 Dihun ha sav ganimp! An eost a vo dispar."






* * *

Hag an heol a skrive war voger an dremmvel,
 E lizherennoù-tan : " BREIZH A ZO DIVARVEL "

Perwenan, 21 a viz Genver 1968
 EVNIG PENN-AR-C'HOAD.

E.P.A.C'H.

VA HUÑVRE ton iwerzhonat



A-hed ar stêr, dindan sklêrder al
 E kuñtuilhen bokedoù dispar (loar
 Un aelig flour em c'hichen a gane
 Allaz! ne deo nemet un huñvre.
 Nemet un huñvre! O !
 Un huñvre !

Un - huñvre (va dor
 E-kerz an hañv diwar treuzoù
 Pegen plijus kanenn ar mor !
 Kan va aelig'zo bravoc'h kouls-
 (koude
 Allaz ne deo nemet un huñvre!
 (h e)

Kanaouennoù Iwerzhon e Kemper

D'an 30 a viz Kerzu 1967 ez eus bet graet, e Ti ar Vro, e-kichen an Iliz-Veur - ar greizenn vreizhat savet gant Jakez Kornou - ur vodadeg plijus-tre. Digarez ar vodadeg-se a oa beaj Nessa Ni Thuama da Kemper. Peogwir e oa aze, e oa brav en em vodañ evit selaou kanaouennoù kaer eus Iwerzhon. Pezh a zo bet graet : e galleg gant Yann Sikard, e brezhoneg gant Pêr Denez. Kanaouennoù a zo bet kanet gant Nessa Ni Thuama. Hag arzoerien yaouank vreizhat ivez o deus degaset d'ar vodadeg ul lodenn vrezhonek eus ar plijusañ: Annaig Renault he deus lavaret, un un doare framus-kenañ, eilet gant Kochevelou, ur vrezhoneg gant Yann Sohier. Ha Kochevellou en deus kanet, en un doare modern-tre kanaouennoù kozh eus ar nevez ha Gwened, lod tennet eus Barzhaz Breizh. Un nozvezh bourrus-tre evit an holl.

Setu amañ testenn ar brazegennig a zo bet graet gant Pêr Denez:

" Diaes eo komz goude un den ken heñvar ha Yann Sikard. Diaes eo komz goude kanaouennoù ken brav. Tizhout a reont ar galon war-eeun, tra ma tle ar c'homzoù tremen dre hent ar spered. Hag ar c'homzoù a vez a-wechoù dizampart, ar spered a vez a-wechoù mouzhet. Tra ma lak ar son diouzhtu kerden tenerañ ar galon da dridal.

Koulskoude, klask a raomp komz. Perak emañ bodet amañ da selaou kanaouennoù eus Iwerzhon ? Kanaouennoù eus Breizh ? Kanaouennoù e yezhoù bihan peuzdianav ? Bez' e c'hellfemp mont e forzh peseurt ostaleri, treiñ bouton ur juke-box hag aze hor befe ar pezh a vez klevet, karet ha kanet gant an holl. Bez' e c'hellfemp mont dirak ur skinwelerez, ha klevout ur sonadeg bennak savet gant tud vrudet ha brudet gant gwir abeg. Perak neuze bezañ amañ, en ur sal vihan, o selaou kanaouennoù keltiek ? Peogwir ez eo ar re-se hon traoù-peogwir ez int ni. Peogwir ez int hon ene. Kenlodek ez omp, ha gant ur spered digor, e pinvidigezh ar bed-holl. Met hol lodenn-ni eus liorz-veur an denelezh eo an dostañ d'hor c'halon. Ganti hon eus da blediñ da gentañ hag a-raok pep tra.

Bemdez, pa zigoromp ar gelaouenn, pa lakaomp ar benveg-skin-gomz da vont en-dro, e klevomp anv eus kudennoù meur ar bed. Kudenn ar Viet-Nam, kudenn Kanol Suez. Kudenn ar politikerezh gall en Europa. Ha kudennoù ar gegin bolitikel c'hall. Beuzet e vez hon empenn ganto, evel ma vez bouzaret ganto hon divskouarn. Met n'eo ket ar re-se a zo hor c'hudannoù-ni. N'eo ket ar re-se a zo ar c'heleier bras evidomp-ni. Ar c'heleier bras evidomp-ni eo ez eus 30.000 Breizhad yaouank o vont kuit bep bloaz. Ez eo bet anvet Gwynfor Evans da gannad e Kembre. Ez eo bet anvet an Itron Winifred Ewig da gannadez e Bro-Skos. Ar c'heleier bras eo e varv hor yezh un tammig muioc'h bemdez hag emañomp-ni, Bretoned, e riskl da vont da get evel pobl hag evel kevredigezh. Nevez'zo e c'houlenne kazatennarion saoz digant an Itron Ewig petra a soñje eus kudenn Rodezia, eus kudenn al Lur Sterling, ha traoù all a seurt-se. Ha hi a respontas e oa eviti, ar gudenn vras, kudenn dieubidigezh Bro-Skos hag e oa evit diluziañ ar gudenn-se e oa bet anvet gant tud he bro.

Kement-se n'eo ket lavarout en em sparlomp ennomp hon-unan, e fell deomp bevañ buhezioù emgar, dichal ouzh ar pezh a dremen en-dro deomp... e fell deomp en em serrañ en ur bed bihan, enk, treut. Tamm abet. Biskoazh n'he deus Iwerzhon kemeret parzh e buhez ar bed kement hag abade ma'z eo dieub. Ha n'eus ket, e Breizh, a dud troet muioc'h ouzh ar bed bras, eget ar vroadelourien, dre ma n'int ket troet ouzh Pariz. An doare gwellañ, a gred deomp, da lakaat ar justis hag ar frankiz da ren e pep lec'h, eo d'o lakaat da ren da gentañ en hor bro, e-touez hon tud, e-mesk ar re a zo bet fiziet ennomp. Rak, evel ma lavare ar C'hembread kozh Pencader da Harri VIII, ar roue trec'hour: " A-benn an diwezh, ne vo den o respont evit an tamm douar-mañ dirak ar Barner-Meur nemet e vefe Kembreiz." Hor preder kentañ a zle bezañ Breizh ha Keltia, peogwir ez eo ar pezh a zo bet fiziet ennomp da wareziñ, da greskiñ ha da lakaat da vleuniañ.

Da wareziñ, n'eo ket evidomp-ni hepken, n'eo ket, ur wech c'hoazh, dre un emgarantez strizh troet war-du an tremened. Met evit mirout d'ar bed ur binvidigezh dibar, unan na c'hell bezañ krouet ha roet nemet ganeomp. Karout a ran, prizout a ran ar c'hanaouennoù pobl eus broioù all Europa - hag eus ar broioù all ar-maez eus Europa - Sonerezh klasel pe jazz a glevan gant plijadur. Met n'eus nemedomp-ni, Kelted, hag a c'hell reiñ ar pezh emañomp o paouez klevout: ur genad o tont eus un amzer kozh-kozh hag a vir pinvidigezh hag esmae ha tridoù-kalon ar remziadoù o deus graet ac'hanomp.

E-touez ar broioù keltiek, al lec'h kentañ a zo dleat da Iwer-

zhon. Al lec'h kentañ a zo dleet dezhi peogwir ez eo bet hi an hini gentañ o c'honit he frankiz. Bremañ, un dra boutin a-walc'h eo gwelout stadoù o c'honit o frankiz (la-verout a ran Stadoù he n'eo ket Poblou). Bep bloaz e teu Republikoù nevez en-dro da daolioù meur ar c'hendalc'hioù etrevroadel. Ur vouezhiadeg a zo bet, ha setu krouet ar stad. Savet ar banniel hag anvet ar gouarnamant. Ne vez ket atav ken aes-se, met morse ne vez ken diaes ha ma'z eo bet evit Iwerzhon. Setu aze ur gentel ha na zle morse bezañ disoñjet. Iwerzhon eo ar vro gentañ a zo en em zieubet hec'h-unan-penn eus krabanoù impalaeriezh c'halloudusañ ar bed. Iwerzhon he deus stourmet hec'h-unan! Ne oa ket un dachenn-douar dedennus d'ar bolitikerien vras evel ma veze kreiz Europa da skouer. Ken dilezet e oa neuze hag ar Gurded hiziv. Ha Bro-Saoz ne oa ket ar ramz o vrallañ a zo anezhañ hiziv. Nevez-varv e oa ar rouanez Viktoria, doujet e veze youl Bro-Saoz er bed a-bezh, hag an emsavadegoù, betek neuze, n'o doa saveteet nemet an emor.

A-enep d'ur seurt galloud eo o deus Iwerzhoniz en em savet, ha war ur seurt galloud eo o deus trec'het. Gant-se e lakaen dieubidigezh Iwerzhon d'unan eus darvoudoù brasañ a zo bet en istor ar frankiz en Europa. Ennañ o deus kavet broadelourien ar broioù all nerzh ha fiziañs. Arabat disoñjal da skouer, ez eo bet savet e bro-India " Strollad ar C'hendalc'h " gant un Iwerzhonad. Arabat disoñjal al levezon en deus bet emsav Iwerzhon war hon emsav-ni.

*

Ha perzh brasañ Iwerzhoniz eo o deus gallet ha gouezet gouzañv. Spontus eo ar galloud-gouzañv a zo en Iwerzhon, ur galloud gouzañv ken na c'hell bezañ ganet nemet gant ur feiz divrall, gant ur goanag divent. Gouzañvet o deus en o c'horf hag en spered. Marnaonist ha lazhadeg hag harluet ez int bet, evel na oa bet pobl all ebet d'ar mare-se en Europa - abaoe, gant ar Skiant o vont war-raok, ez eo kemmet an traoù-gouzañvet o deus ur verzhherenti hag a zo ar fromusañ skouer anezhi marv Terence Mc Swiney. Met trec'het o deus. Bez'eo bet trec'h ar gwir war nerzh dell ar galloud ponner. Bez ez eo bet, gwelloc'h, trec'h ar spered war an danvez. N'eus ket ezhomm degas da soñj darvoudoù bras istor Iwerzhon a-vremañ. E 1916 ez emsav un dornadig tud. Emsevel a reont a-enep galloud brasañ ar bed. Ar brezel eo. Ne c'hellont kaout na goryoz skoazell ebet. Trec'het e vint ha lezhet. Met an trec'h n'eo ket bet, en diwezh, warno, an trec'h a zo bet evito. An trec'h a zo bet evito dre m'o deus gouezet tizhout, a-dreuz ar mogerioù savet gant ar

skolioù, an iliz, ar c'hazetennoù hag ar galloudoù a bep seurt, dre m'o deus gouezet tizhout ene ha gwirionez ar bobl. Adal neuze e oa dihunet Iwerzhon, adal neuze e oa dieubet Iwerzhon. Rak gwir ez eo n'eus a sklaved nemet ar re a asant bezañ. Gwir ez eo e chom dieub an neb a gar - an neb a gar bezañ, dieub en e galon.

Stourm a voe goude en emsavadeg. Ur stourm hag a grogas en-dro diouzhtu goude fin ar brezel. Hag evit klozañ ar stourm-se e rankas ar Saozon kilañ. N'o deus ket kilet penn-da-benn. Ur brezel diabarzh mantrus ha gwadek a zo bet. Hag hiziv an deiz ez eus c'hoazh un tamm eus Iwerzhon dindan reperedh an estren. Met an trec'h a zewio ivez - an trec'h war galloud an diavaez hag an trec'h war aspadenoù diabarzh brezelioù an tremened.

Ne fell ket din hiziv displegañ dre ar munud hag ez-hir petra eo bet emgann Iwerzhoniz a-enep arme ar Saozon. Degaset o deus aze un doare nevez, dianav a-grenn da emsavadegoù an naontekvet kantvad. Diazezet o deus an doare-stourm a zo bet implijet goude gant Mao-Tse-Toung ha gant Algeriz. Ha fromus eo gwelout, pa seller ouzh luc'h-skeudenoù ar mare-se, soudarded o c'hasketinier a zo bet arme Iwerzhon. Labourerien-douar ha micherourien, gant un nebeut intellek-tualed o hejañ sichennoù an impalaeriezh hag he galloud arboellerezhel. Aze ne oa ket " an emsaver er bobl evel ar pesk en dour", evel m'eo bet lavaret gant un arbennegour brudet. An emsaver a oa ar bobl. Hag ar galonegezh espar - galloud ar spered, nerzh an uhelvennad - he deus graet d'an enabour plegañ.

Met politikerezh ha stourm ne dint ket ur pal enno o-unan. Ne dint nemet un doare da suraat ar pezh a ra gwirionez ar vroad: ur yezh hag ur sevenadur. Ne c'hell ket bezañ a vro hep yezh. Zoken ma c'hell bezañ ur vro hep ur stad. Ar yezh an hini a ra ar vro. Drezi, hag anni hepken e c'hell ar vro an am zisplegañ, mont war-raok. Raok hag en em ginnig d'ar bed evel un dra dioutañ e-unan. Met aze c'hoazh e c'honezo Iwerzhoniz. D'ar mare ma oa Europa aloubet gant meuriadoù ar reter, Iwerzhoniz a zo aet da brezeg an Aviel da dud ar douar-bras. O manatioù o deus savet e kornog Europa ha pelloc'h c'hoazh. Emlad ar Vikinged a zo bet un emled distrujañ manatioù ha kreizennoù a ouiziegezh. Emlad Iwerzhoniz a zo bet un emled sevel manatioù ha reiñ gouiziegezh. Ha d'ar mare-se e oa Iwerzhon gouezelek. Dre ma oa gouezelek eo he deus gallet ober kement-se. Ne adkemoero Iwerzhon he flas da vat er bed nemet goude ma vo deut da vezañ hi hec'h-unan en-dro. Pa vezo gouezelek.

Setu aze ar c'hentelioù a c'hell Iwerzhoniz reiñ da Vreizh. A-raok pep tra ur gentel a gardedd hag a galonegezh. Ur gentel a

fiziañs. Ur gentel a fealded.

Ar gentel-se eo a glevimp ar c'hanaouennoù a vo kanet
c'hoazh gant Nessa. Da glozañ e kano kanaouenn Rozenn Du Iwer-
zhon. Eviti e rofe pep hini e vuhez ha dre-se hi eo a ro ar
vuhez.

Ra vo Keltia, evit pep hini ac'hanomp, ar ROZENN DU !

Adskrivet gant Gwendal DENEZ.

1968

Paterenn nevez e chapeled an amzer
Ar betvet e chadenn ar c'hantvedoù ?
Pet ez raok ? Pet ez koude ?
Evit lod te'vo an deroù
Evit darn te vo an diwezh
Er Bed-mañ trubuilhus.

Bloaz nevez kevrinus !
Kanolioù adarre ouzh da saludiñ.
Met perak ivez'ta, ya, perak
N'out-te morse deut a-benn
Da c'henel d'an hevelep deiz
Ha Roue ar Peoc'h ?

2.1.1968

Anjela DUVAL

PEDENN

Aotroù !

Lavaz ur ger hepken ha ma'vo pare
Rak n'on ket din e teufes tre em zi...
Zoken m'az kwelfen o tremen
Ne gredfen ket deredek d'az saludiñ
Ne gredfen ket zoken stokañ va biz ouzh freñj
da vantell.

Pa vefes avat, kuzhet e pleg an hent
'N em daolfen d'an daoulin
Da boket gant daeroù da zoudoù da dreid
Chomet enlouc'het er boultrenn
Hag e kavfen ar pare...
22.1.68

AN DOUAR A GREN

... An douar a gren, a gren
A gren gant anoued ?
A gren gant kounnar ?
Pe gant aon ? Pe gant naon ?
An douar a gren, a gren
'Vel ur mezvier ! Pe unan drammet

An Douar a gren gant ar Spont
Gant spont rak an Den
Rak gouiziegezh an Den
Rak fallagriezh an Den
An Douar a gren, a gren, a gren

20.1.68

Anjela DUVAL



BARR-HEOL n'en deus gwir ebet war ar son amañ war-lerc'h, na war hini Evnig Penn-ar-C'hoad. O embann a ra hervez aotre hegarat e vignoned Tregeriat eus ar BEILHADEGOU

Son Ar Pesketaer

Un devezh ma zad-kozh a laze din-me:
Selaou ma fññ! - - 'Vel da dudou-kozh
Pa ra io ivez ur marto-lod - -
Ur marto-lod! O ya ur marto-lod - -

2
Sentet an eus gwellañ m'am eus bet gallet
Ouzh ma zad-kozh:
Aet on ivez war ar mor da luskellat
Ha deiz ha noz.
Ha deiz ha noz ? O ya ha deiz ha noz.

3
Ar goañv ' vez kriz ha kalet e-wechoù
D'ar pesketaer
Pa vez er-maez, pell du-se, gant ar bagoù
Fall an amzer.
Fall an amzer ? O ya fall an amzer.

4
Meur a vartolod d'e vag en deus laret
" Sent ouzh da stur !
Ma n'sentez ket ouzh ar varrenn, d'ar garreg
Te'raio sur!
Te raio sur ? O ya te raio sur !

5
An amzer vat. 'arruo 'vit an deizioù.
Ha me ! c'h aio
Pelloc'h er-maez bemdeiz da gas va rouedoù
Pesked a vo !
Pesked a vo ? O ya pesked a vo!
6
Redek ar mor eus an eil penn d'egile
Eo bet ma lod
Evel-se'm eus tremenet ma zamm buhez
Bemdez en aod
Bemdez en aod ? O ya bemdez en aod !
7
Diwezhatoc'h pa vin-me krog da skuizhañ
O tozhañ dour
'N em zi bihan me'dremeno c'hoazh amañ
Devezhioù flour.
Devezhioù flour ? O ya devezhioù flour
8
Hag un dervezh'teuio Karrig-an-Ankoù
'Vit ma c'herc'het
Evit ma c'has du-hont gant ar re varo
Korn ar vered.
Korn ar vered ? Du-hont'korn ar vered !
9
Gant e vouezh rust eñ din-me a lavaro
Ret eo mont kuit !
Ken dousig all dezhañ me a responto
N'in ket ganit
N'in ket ganit ? O nann n'in ket ganit
10
War vord ar mor me a fell din chom amañ
' Lec'h ma klevin
Mouezh ar morverc'hed noz ha deiz o kanañ
O kanañ din !
O kanañ din ? Noz-deiz o kanañ din !

○ — Ton ha komzoù gant YANN DERRIEN

TENNET eo ar ganaouenn-mañ eus levr KANAOUENNOU AR BEILHADEGOU, (39 ganaouenn) Al lodenn gentañ (Avel Miz Du) a zo anni kanaouennoù savet gant F.Danna war varzhonegoù Dreac Koulouarn, F.Abgrall, Filomena Kadoret hag ivez kanaouennoù savet gant Y.Derrien. An eil lodenn (War Hentoù Breizh) a zo enni sonioù savet gant Evnig Penn ar C'hoad. Diuti ez eo tennet VA HUNVRE paj.29.

Pardon sant Fransez a Sal

BULIEN

28 1 68

(Aviel St Vazhev V, 13.19, an Doktored)

C'hwi eo holer an Douar...
C'hwi eo Sklerijenn ar Bed...

HOMILIENN

Gant an Aviel hiziv ez eo bet degaset dimp da soñj adarre eus ar gentel-mañ: Ret eo d'ar Gristenien bezañ holer ha sklerijenn.

Ma taolomp pled ouzh degouezh dispar an devezh-mañ e waelomp laouen ez omp padet gant Doue da enoriñ n'eo ket un den santel hepken, met daou zen santel hag o deus diskouezet met petra eo bezañ holer ha sklerijenn.

Da gentañ emañ gouel Sant Fransez a Sal, evel just, peogwir emañ deiz ar Pardon... Met un tamm diloj a zo bet graet, ha reishoc'h 'vijs bet gortoz warc'hozh evit lidañ ar gouel-se, en e goulz (29 a viz Genver)

D'an eil neuze, emañ gouel un den santel all, hag en deus anavezet Sant Fransez marteze: 16 vloaz en devoa pa oa marvet Eskob Jenev... Hag an den-se heñvel a-walc'h e vuhez e-keñver traoù'zo ouzh buhez Sant Fransez, n'eo ket a dra sur, un estran-estranjour evit Breizhiz: an Tad Maner an hini eo (28 Genver) Re hir e vefe koulskoude, displegañ buhez an daou zen santel-se dre ar munud. A-walc'h e vo kemerout div pe dañr skouer dalvoudus e buhez Sant Fransez gant ouzhpenn, ur frazennig bennak diwar-benn an Tad Maner.

Adkrogomp neuze gant an Aviel.

1

C'hwi eo holer an douar... Al n'eo ket a-walc'h, sur, bezañ kristen e kuzh e galon. N'eo ket a-walc'h bezañ dous, bezañ jentil ha bezañ gwak... Bezañ efedus a zo ret. Cheñch blaz ar vuhez a zo d'ober. Blaz hon buhez ni hon-unan, blaz buhez an dud en-dro dimp, evel ma re an holer hag a cheñch

blaz ar meuzioù pa vez lakaet enno. Nann'vat, n'eo ket labour ar c'hristen koll e vlaz. Nann'vat, ar c'hontrol eo, ar c'hontrol-bev. Cheñch blaz ar vuhez, cheñch blaz d'ar vuhez.

Ha Sant Fransez, daoust hag holer an douar ez eo bet ? Pa vez komzet eus Sant Fransez, ne vez ket eñjret kalzen holer, peurliesañ. En eoul ne lavaran ket. Piv n'en deus ket klevet gwech pe wech, ar frazenn-mañ eus Sant Fransez a Sal :

Gant ul loaiaed eoul e vez tapet muio'h : gelien evit gant kant barrikennad gwinegr ?

Met arabat faziañ.. N'eo ket douster Sant Fransez, douster un den gwak ! Douster un den efedus an hini eo ! Douster un den bev, trec'h d'e imor, hag entanet gant ur garantez dispar... Selajuit'ha istor ar brazegenn chomet berr.

Deiz Gouel ar Werc'hez Hanter-Eost e oa, e Samoens, Bro Jenev, dirak tud kriz an eil evit 'egila, prosezou etrezo, gwarizi ha kasoni e kalonoù an holl pe dost. Ha ken ranngalonet e oa ar Sant o welout diouzh un tu gant sklerijenn ar feiz, ar Werc'hez Vari douget d'an neñv dre nerzh he c'harantez tener evit Doue, ha diouzh an tu all, dirazañ, ar paour-kaezh tud-se, koll o c'halonoù gant ar gasoni ken e krias : " O, ma Breudeur ha ma C'hoarezed kristen, c'hwi hag a geras kement, emañ Mari o vervel dre nerzh ur garantez dreist, ha ni a vev gant ar gasoni en hon c'halonoù... Ha neuze emañ Mari o pi-gnat d'an neñv... ni avat, o ti-kenn d'an ifern ". Ha ken puilh e strinke an dour eus e zanulagad, ken ne voe ket evit komz pelloc'h ken... An dud avat, devet o c'halonoù evel ur gouli gant an holer, a c'houlennas pardon digant Doue ha digant Sant Fransez hag e-pad tri devezh hep ehan e voe pec'herien c'hlac'haret o c'hortoz o zro e-tal ar gador-gofez. Hag e rejont holl ar peoc'h etrezo. Ha setu penaos ez eo bet Sant Fransez holer an douar, daoust dezhañ da vezañ dous ha jentil e zoareoù... Dous evel an eoul, met o kraigif don evel an holer...

An Tad Maner ivez a zo bet holer an douar. Ken e voe gwelet da skouer, pesketaerien Molenez o'n em skourjezañ gant karden o barnoù, dre binijenn, goude bezañ klevet anezhañ... Pesketaerien Molenez gant karden. 'r am skourjezañ... Evel Sant Jerom ha manec'h an amzer gozh ! Kompren a rit? Sur, n'eo ket sukr a oa bet roet dezho, an deiz-se... Holer marteze... Ha c'hoazh holer kraigif eus ar re grefañ-vañ... Daoust d'an Tad Maner da vezañ karantezus ha dous ivez.

2

Adkemeromp an Aviel.

C'hwi eo Sklerijenn ar Bed! A! n'eo ket aes kennebeut bezañ sklerijenn ar bed. Ken diaes ez eo zoken, a-wechoù gwelout ar sklerijenn, hep komz eus sklerijennañ ar re all.. Arabat krediñ ne oa diaester ebet evit ar Sent. Er c'hontrol marteze. Rak, a gwirionez, n'eus poan ebet e-kreiz an deñvalijenn, da nebeutañ a-raok mervel, d'an hini na fell ket dezhañ bezañ sklerijennet... D'an hini a glask ar sklerijenn avat, pegen poanuis ne deo ket teñvalijenn ar bed-mañ !... Ha pa glasker un tamm e buhez Sant Frañsez, e weler mat en deus gouzavet kriz o klask ar Wirionez, a-raok bezañ Doktor eus an Iliz ha Sklerijenn ar Bed.

Setu da skouer. Daoust dezhañ bezañ kristen mat, pa oa yaouank,oc'h ober e studioù e Pariz, e oa bet gonezet a-walc'h gant tezennoù Kalvin, mestr-kelenner brudet ar Brotestanted marv nevez'oa. Hag evel just, paogwir e oa brudet ha nevez e dezzennoù - diouzh ar c'hiz evel ma lavarer bremañ - e oa bet gonezet an holl studierien pe dost. Meur a hini hep kompren, marteze... evel bremañ gant an "Existentialisme" ar "Strukturalisme"... Sant Frañsez avat, a gomprens mat. Ha nec'het e oa. Nec'hat-bras zoken. Ha ne oa ket hep digarez. Hervez tezennoù Kalvin, ne dalv labour an den netra evit ar silvidigezh: darn a vo selvet gant Doue, pe e labouront pe ne labouront ket, darn all (an darn vrasañ) a vo kollet da viken, stlapet en ifern, pe e kemeront poan pe ne reont ket. Ha setu Sant Frañsez ankeniet gant ar menoz e vije daonet. Ha tu ebet da gaout un diskoulm.

Betek an deiz ma'z entreas en iliz Sant Stefan. Hag e taoulinas e chapel ar Werc'hez, hag e reas ar bedenn-mañ : " Aotrou Doue, ma tle bezañ difennet ouzhin ho karout er bed all da viken, er bed-mañ da vihanañ, e fell din ho karout eus a greiz ma c'halon " Ha goude bezañ lavaret ouzhpenn ur bedenn d'ar Werc'hez, ha bezañ prometet lavaret ar chapelad bemdeiz, ec'h an em gav frealzet ha sklerijennet da vat ha prest da sklerijennañ ar re all. Diskoulm ar garantez e oa, diskoulm karantez Doue ha karantez ar Werc'hez - brasaoc'h eget menezioù ha tezennoù an dud, zoken an dud skiantel-tre.

He ken don eo bet Sant Frañsez, goude-se, e skiant traoù Doue, dre nerzh ar garantez hag ar bedenn, dre nerzh ur spered lemm sklerijennet gant ar feiz, ken e teuas a-benn da sklerijennañ milieroù a dud ha da gontvrisañ protestanted a vern e Bro-Chable. Ken ez eo bet lakaet gant an Iliz e renk an Doktored, da lavaret eo, sellet evel ur mestr-kelenner war ar Feiz. H.

gwelloc'h c'hoazh, warlene eo bet dibabet gant H.T.S.ar Pab, evel ar skouer dalvoudusañ evit hon amzer-ni, ken tost evel m'eo bet e gelennadurezh hag e zoareoù ouzh ezhommoù an dud a-vremañ. Ha setu penaos ez eo bet Sant Frañsez a Sal Sklerijenn ar Bed: paour-kaezh den yaouank en anken evit kregiñ, deut da vezañ leun a beoc'h hag a santelezh, evel bannoù an heol pa vez brav-dispar an amzer.

An Tad MANER ivez a zo bet sklerijenn ar Bed. Ha ken mat ez eo bet e labour e Breizh ma chom c'hoazh roudoù anezhañ, hiziv an deiz, tri-c'hant vloaz goude. Disheñvel ez eo koulskoude diouzh Sant Frañsez a Sal... An Tad Maner n'en deus ket klesket kement-se diskoulmañ kudennoù uhel, evel m'en deus graet Sant Frañsez ret dezhañ tabutal gant teologourion. Klasket en deus kantoc'h doareoù eeun ha bev da zisplegañ an Aviel d'ar bobl. Hag evel-se ez eo deuet a-benn da dreiñ tud Vreizh war-du Doue.

*

Setu... Pesuert ali a vo mat evit klozañ ? Hemañ a gav din. Keliennadurezh an Iliz e Sened Trent, biken ne vije bet lakaet da dalvezout hep labour an dud santel a zo bet hollen ha sklerijenn evel Sant Frañsez hag an Tad Maner.

Kelennadurezh an Iliz e Sened Meur Vatikan II, biken ne vo lakaet da dalvezout kennebeut hep labour ar santelezh a zo ret. Klaskomp neuze bezañ hollen ha sklerijenn, pep hini hervez a zoare, hag e stad a vuhez, evel Sant Frañsez hag an Tad Maner.

Ha ra vo roet dimp gree an Aotrou Doue ha skoazell ar Werc'hez Vari.

F. THOMAZ.

Kantik sant Fransez a Sal

DISKAN

Gant fiziañs ha karantez, Aotrou bras Sant Frañsez
E sav a greiz o c'halon mouezhioù ho Pulianiz
C'hwi a zo Doktor ar Feiz ha Mestr war ar Furnez
Deskit dimp eta mirout ho kentelioù dreist-priz.

1

E bro gaer ar Manezioù du-hont e Bro-Savoa
A dud a lignez uhel oac'h ganet 'n ur c'hastell
Met pinvidigezh ar bed'zo gwall nebeut a dra
Lec'h n'eus ket doujañs Doue 'tal kavell ar bugel.

Evel ma c'hoarzh ar blaunioù e-kreiz ar sklerijenn
E c'hoarzh en ho kalon Madenn ar Vadeziant
Gant kentelioù fur ho mamm hag ho kelennerien
Hag abred e tiskouezjoc'h e oac'h danvez ur Sant

3

Ur wech echu Skol-ar-Gêr e oac'h aet da Bariz,
Met eno'chomas virjin ho feiz hag ho klanded
Rak kreiz ar c'hoariellaj a sach ar yaouankiz
Ho pedennoù d'ar Werc'hez a nerzhas ho spered.

4

Goude bezañ studiet 'vit bezañ alvokad
E klevjoc'h en ho kalon ur vouezh ouzh ho kervel
Ma deoust d'ho peadra bras ha deoust ivez d'ho tad
E voac'h kensakriet beleg: gopreost an Aviel

5

A-raok ma oac'h bet ganet, ho Mamm en un huñvre
Ho kwelas 'giz ur Pastor o tifenn e zeñved
' Dreuz skorn du, an erc'h gwenn ha bleizi ar Chable
E kasjoc'h ar Sklerijenn d'an dud kaezh dianket.

6

Gwashoc'h eget bleizi yud 'oa en dud 'n ho keñver:
Met petra eo kasoni 'tal karantez wirion
Sked dispar ho Santelezh, ho Feiz hag ho Touster
A reas kristenien fur gant ur Bobl digalon,

7

E penn Eskopti Jenev evel Sturier ha Tad
E c'hellas ho Madelezh 'n em ziskouez 'n e Xplannder
Ma lavare Sant Visant: " Doue, hep mar, 'zo mat
Pa'z eo ken dous ha ken mat Frañsez, e servijer.

8

Ho skouerioù, ho labourioù, e zouge frouezh e-leizh
Eneoù mat krog'n ho torn 'heulie hent ar vertuz
Ho komzoù, pe ho skridoù gant o c'hentelioù reizh
A skuilhe c'hwez vat ar C'hrist'touez an holl a bep tu

9

Meuler " Karantez Doue ", Barzh an " Devosion "
Sent nerzhus ha Sant dispont dous 'vel vouldouz ar roz
Klevit mouezh ho Pulieniz, en Nefiv, diwar ho Iron,
Ma vo pep ti, pep kalon, ur Boked-Baradoz.

Keqinerezh

KEGIN WAR ZIGAREZ KANAOENNOU - Marteze hoc'h eus lennet pennad A.
Duval diwar-benn abadenn yaouankiz

Kêr-Vreizh evit an O.R.T.F. Mat e voe o abadenn d'an dud yaouankiz
mañ, ha mat ivez, hervez ar pezh a lavarjont hag adlavarjont
a-hed an abadenn, ar pezh o doa debret da greisteiz. Ha petra 'oa
ar meuz-se ? Ar pezh a ris ar yaouvezh-se d'am zud me ivez. Bez'
ez eus degouezhioù ! Me'gred evelato ez ejont un tammig pell, o
lavarout ken eun ha tra e oa meuz breizhat. N'eus forzh, ha setu
hep mui gortoz....

Lantilhez (fer, piz-rouz) gant kig-morzhed-hoc'h.

Lakaat en derc'hent al lantilhez (pe ar far) da c'hlec'hieñ.
En ur pod bras a-walc'h, lakait dour hag ivez ar c'hig. Ar c'hig
morzhed-moc'h a vez hanter-sall. Pa verv an dour lakaat al lan-
tilhez ha lezel da boazhat dousik. War-dro un hanter-aur a-raok
servijer, lakaat e-touez un toullad avaloù-dour. Na vefe ken
nemet evit reiñ un neuz vreizhat d'ar geustereñ hag ivez da gon-
tantif ar re na blij ket dezho al lantilhez. Bez'ez eus !
Ur wech poazh, kas ar podad war an daol ha bec'h dezhi !
- Ar meuz fetis-mañ a zo mat-tre da servijañ ar goañv pa vez yen
an amzer. E galleg e reer " jambonneau aux lentilles " anezhañ.

HAG UR BARIBOLENN WAR ZIGAREZ KEGIN - En ho meureni, va mamm-guñv
he doa paket, n'on dare penaos
ur big yaouank. Damesaat e oa bet gant va zud-kozh, ha deuet e oa da
gomz un tamm e-giz d'ur peroked. Ar pezh a lavare na oa ket bepred
gwall-fraezh, hogen lavarout a rae a bep seurt traoù. Dalc'hmat e
chome en ti pe war-dro.

Un dez e oa va mamm-guñv oc'h ober soubenn evel ma tegouezhe
ganti alies. Pell'vez ar soubenn o poazhañ, evel ma ouzoc'h, ha
n'heller ket bezañ bepred en-dro d'ar pod. Pell a-raok ma oa poazh
ar soubenn e oa ar big e-kichen ar pod o lavarout " Ma joscenn "
" ma joscenn ". Mont a rae war vord ar pod hag ac'hane war an daol,
dalc'hmat o lavarout " ma joscenn ". Prest ar soubenn, an em lakaas
va mamm-guñv da lemel al legumaj hag ar c'hig er-maez. Gwashoc'h-
gwashañ e teue ar big en-dro dezhi. Dont a reas ur wech muioc'h war
vord plad ar c'hig an en ur grial " ma joscenn ". Hegaset, va mamm
e roas dezhi un takad an ur lavarout: " Petra'c'hoari gant al loen
vil-mañ ? " Neuze e welas ar big o vont d'ar pod-soubenn hag o tennañ
er-maez ... un touseg !

Heugañ a reas va mamm-guñv ha gant an droug a oa enni e lavaras

da unan eus paotred an ti, terriñ he gouzoug d'an evn. Ar pezh a voe graet diouzhtu. Petra avat, a oa c'hoarvezet ? Kavet he doa ar big un touseg hag e lakaet er soubenn, dres evel ma wela an dud oc'h ober gant ar c'hig. Soaz an TIEG

 ROLL-MEUZIOU
 0

Istr Belon
 Turbod en amann teuzet
 Yer-Indez yaouank farsset kistin
 Avaloù-douar fritet
 Saladen
 Skornenn gant Cointreau
 Krampouezh dantelezh
 Gwustellenn frammet
 Kafe - Gwin-ardant - Likurioù

M.E hag E.

29 a viz Kerzu 1967

 YEZH AR GEGIN
 0

Daou bal anat d'hol lennerien a zo d'al lodenn-mañ eus BARR-HEOL gouestlet d'ar SEKREDOU-KEGIN. Da gentañ reiñ tu da veur a hini eus ar mammoù-tiegezh a lenn BARR-HEOL da aozañ meuzioù diouzh doare ar vro ha reiñ tu dezho eta da wellaat, betek ur poent'zo, bevañs o zud. Kerkent ha ma oad krog da voulañ traoù o sellout ouzh boued, e oa bet skrivet deomp da c'houlenn moulañ ar gevrenn-sediaparti zoken diouzh ar pœur-est eus ar gelaouenn en doare ma vefe aes-tre ober fichennoù. Kement-se avat, ne oa aes-tre d'ober hag ar gwellañ eta ez eo adskrivañ war ur c'haier sekredoù-kegin BARR-HEOL.

An eil pal a oa kustumañ an dud d'ober gant gerioù mat ha reizh, e yezh ar vro, rak evel ma oar kement hini a zarem-pred ar bobl, ez eus labour d'ober war an dachenn-se, rak da galz a veuzioù e vez roet anvioù gallek, allies hep digarez ebet. Ha setu perak e voulomp ivez ROLLOU-MEUZIOU, kement ha rentiñ servij da unan bennak, pe da vihanañ da vadeziñ e brezhoneg meuzioù estren, deust ar c'hiz anezho, un tamm dre holl.

Ur gwir ouiziegezh ez eo ar GEGINOURIEZH... N'omp ket erru eno... Met da lañsañ un tammig bihan-bihan war an tu-se, perak ne glaskfec'h ket, lennerien vat, treiñ en ho yezh, gwech ha gwech all, ar sekredoù-kegin ken niverus war kement kazetenn'zo ?

AR VARENN

Da eñvor va mamm, Ploukistanez a-vihanik, gant anaoudegezh vat evit bezañ legadet din he yezh; gant doujañs evit bezañ ganet ac'hanon eus ar c'hoiz sevenadurel brezhoneger.
 F.K.

Ruz gant an avel ! Ar mor gwann-kann 'vel dindan ur ventall bluñv-elerc'h. Hag, a-benn-kaer d'al lanv, kalz re ziwzhat evit treuzañ, ur virogell o troidellikat 'kreiz ar varenn ! Sikour ebet war wel tro-war-dro, nemet hini Doue'vefe. Er Raz, ar vagig tud hag all, en argoll. War ar stur, ar mestrouer, mezu-kollat. An Ekipaj ? Un den deut un tammig war an oad, ken mezu hag o vestri ! Ar mous, ur pevarzek vloaz bennak dezhañ. Divado-kaer emañ dre auzvad. Ar spont avat, an enkreuz, peget er paourig, o kinnig e vougañ.
 - Biken mui ne welin an Enez", emezañ.

An daou lonker all, int n'o doa ket seurt soursi ! Da wiriañ e gumzoù, setu o kouezhañ er c'hanod barnioù-mor ponner ha draetus.

Lestret hor boa e deroù an endervezh, c'hwac'h maque (an am-zer ne oa na mat na fall) bugale gameomp ivez. Va mamm avat, o taerañ, o fuloriñ sac'h hag o nac'h ouzhin groñs an aotre da vont.

- Na welit ket peseurt amzer 'zo o tont war hd kain ? Fasonet eo gwall-drsit koulskoude ! Met evel just 'vit ar pezh ' anavezit c'hwil eus ar mor, nemet kantran warnañ. Ma vefec'h aet c'hoazh gant bag ho tad ! Met, mont d'an Enez gant ur seurt kanod ha draist-holl gant seurt tud ! An dibabadoù !

- Mamm, selaout. Gant Ar Meliner emeon o vont. Unan eus gwellañ martoloded Enez-Sun eo. An dud-se ' anavez ar Raz memos tra ! Bemdez-c'houlou e treuzont anezhañ !

- Ne fell ket din ez afec'h. A briz ebet, klavout e rit ? Pe ma'z it en desped din, arabat ep deoc'h distreiñ ken emañ. C'hwil ouio chom pelec'h 'vriot aet !"

*
 Lestret em eus daoust d'an difenn ha d'ar c'homzoù kriz. Pevar bloaz war-n-ugent em boa !!! Nemet... nemet... E kreiz ar mor dirollet, pa gouezha warnomp pakadoù-mor, a-blomm, pouadra d'am flastrañ, santout a raen o sevel ennon ur fromadur iskis: ar c'haez da vazañ aet kuit disentus, en ur lozel va mamm ken doaniet. Kounaet e raen va amzer bugal hag he c'homzoù gourdrauzus :

- Pa zisentez, emezi, ouzh urzhioù ar vamm pe an tad, ar c'hastiz m'emañ ket morse pell o tont". Va zad n'am gourdrouze biskoazh. Ur sell dioutañ 'oa trowalc'h din da sufañ prim.

Stlapet ha distlapet, stoket ha distoket eus an eil kostez d'egile 'vel oamp bremañ, an aval deut diskiant o c'harmiñ braouac'hus, an tonnoù divent o'n em frailhañ war ar vag gant nerzh un dourvarc'h, ya, krediñ a raen'oa deut poent ar c'hastiz! Ur glac'har melkonius a bistigas lemm va c'halon...

Ar vugale a leñve. Ar merc'hed klañv lod anezho, o doa kollet skiant eus pep tra en-dro dezho nemet monet-donet o stomok. Kuit a spouron! Pep hini en doa klasket goudorif eus e wellañ 'lec'h ma c'helle. Pe zindan ar pontig a-raok (ur c'hanod hanter-kleuz'oa) pe o'hoazh ledet a-hed-korf e gwasked an dezioù. Peogwir ouzhpenn, evit gwellaat hor stad, al lien 'oa chomet savet uhel d'al laez, c'hoariell dibar d'an avel. Hon daou vezvier 'oa ken brav kousket! Ken dous! Ar mousig kalonek o voustrañ start war e enkrez a glaske dizehan (labour aner, siwazh!) skarzhañ ar vagig diouzh an dour-beuz!

- Da betra'servij din? Ar blommenn 'zo torret. Ne gerzh ket ken, emezañ. Ha peogwir ne stago mui chab ar vag-mañ ouzh chaoser Sun, neuze... perak?" Un dizesper ken kriz en e vouezh, un dic'hoanag ken sioul dirak an tonkadur!

- Mabig, mabig, penaos e c'hellez lavarout seurt traoù? Yaouank out, nann? Leun a youl? Mat, ro din ur rumm sirachoù hag heuzoù ivez. Emaon o vont d'az sikour. Gortoz!"

En em wisket em eus. N'eo ket bat un efer vihan. Gled-dourteil'vel ma oan e-geit-all 'zo dija. Ha d'en disterañ fiñvadenn prest da vezañ lonket gant an taolioù-mor. A-ruz-korf neuze davet ar stur. Distagañ ar mestr. En em stagañ en e lec'h. Kouezhet eo nes dihaniñ zoken, 'giz d'ur sac'had dilhad fank, e strad ar vag.

- Staget mat out, va flac'h. Pa droio ar c'hanod 'vo aasoc'h dit. Buenoc'h graet, kuit da neuial!" Farsal a raen, pe klask hen ober, ouzhin va-unan.

- "War beseurt tu leviañ, peotrig?"

- War-eeun atav. Ken ac'han e welfemp Tevineg!"

Gwelbuit Tevineg? Santez Anna Venniget, nag ur burzhud! Deoust hag e oar gwelloc'h egodon, va c'huzulier kaezh, dre belec'h mont evit he c'havout? A-raok. A-dreñv. Stribourzh. Babourzh? Goude holl petra'vern mui daomp? Leviomp!

Santout a raen nerzh ramzel ha divuzul ar mor o vronduañ va daouarn war ar vaol. An avel hag ar mor aet e gouez! Stroñsadennoù marvus an tarzhioù! Kompren a ris neuze perak'oamp ni, Breizhiz, mibien ken feal an donvor. Marzet em eus, anat, ne zlee ket, d'an ampoent, gwad ruz redek em gwazhied, met dour sall hili. Hag ivez dre glask na vefe gourlonket hor'virogell a-dreuz ifern ar Rez, ec'h adveve ennon, drezon, kantvedoù stourmoù hañvel. Bugel oan hepken d'ar rummadoù moraezrion o doa, o buhez-pad, keitet gant ar mor preizh. Gant skiant, gant poell. Gourenet atav gantañ, an hini milliget-se ken karet, ken doujet dreist pep tra. Me, o merc'h reuzeudik, n'am boa na poell, na skiant, nag anaoudegezh abet dioutañ. Netra! N'am boa netra. Ne oan netra da c'hellout enabiñ. Nemet trumm ennon o sinklañ (a balec'h? Eus peseurt dondarioù dianav?) anien dispac'hel ar stourm.

- Ar c'heflusker 'zo beuzet. 'Vale ket mui eñ kennebeut, a c'harma ar mous din a-dreuz ar gorventenn. Hag ar sailh'zo bet sammet diouzh va dorn gant ur bern-mor. N'eus mui netra d'ober..."

- Eol! Ar ouel... Diskenn ar ouel... An dour. Skarzhañ! Gant da votoù. Botoù-koad. O-div... Kemer kalon. Bez'e vimp eviti. Kalon!"

Dallet-mik'oamp gant an tarzhioù o sailhañ a bep kostez. Va mouezh roget, dismeret gant an aval foll. Devet'oa va daoulagad ha va c'hroc'han gant an holen. Krediñ a ran santout c'hoazh hiziv p'emaon o skrivañ, red an dour-beuz a-hed va c'horf, oc'h intrañ va izili ha blaz c'hwerf, garz, ar fru war va dremm diswalc'het. Va "botoù-kenoù" karget a zour betek va fennoù daoulin, war neuñv va divesker enno." Peadra deoc'h da vont d'ar sont diouzhtu, chevrenn!". Daoubleget war ar stur, klasket em eus gwareziñ va daoulagad o leskiñ. Un taol ilin d'am surao, un taol sav d'am braogoù an hanter re vras, o risklañ bepred. Va daouarn alc'houezet, morailhet war ar vaol, ne c'hellen mui fiñval ur biz ha pe vefe nemet unan. Va ivinoù drailhet ha dizrailhet o tiwadañ war va heuzoù.

- "O ma merc'hig paour, on est à de perdre. Disons"maintenant" notre acte de contrition, krouadur!"

- Kontsision a-walc'h, emezon dezhi rok - unan eus ar merc'hed liv ar marv war he dremm - Me'fell din bevañ. Kjevout a rit? BEVAÑ. Labourit e-lec'h yudal. Kemerit pep a votez-koad ha sikourit ar mous. Ar marv'zo lestreet ganeomp? Gwir. Ha goude? D'ai labour!"

Div pe deir blac'h a glaskas sevel, kennezhzet. Astannet kerkent gant stroñs spouronus ar c'hanod. Stroñs, distroñs. Ur stouf-

lij o sevel uhel hag o splujañ don ! Ar wech-mañ ? War c'horre c'hoazh. Hep dale ?... Ne ra forzh. Derc'hel penn kousto pe gousto. An daou vezvier o roc'hal barn-war-vern, an eil o tom-mañ d'egile. Ar ouel en un taol o plavañ 'vel ur valstrenn pri-prad. Ar vagig a gostezias 'raz an dour. " Echu ar wech-mañ ! " Va holl nerzh em daouarn o puntañ war ar star. Va youl stignet. va spered reutaet. Dir. Sevel a raio. Ret eo dezhi sevel... Sevel... Sevel...

SEVEL ! Va bizied skalernet, goulllet-don, ar gwad o tive-rañ diouto gwashoc'h eget gouzoug ur yar dibennet. Savet he deus. Gant un tarz all. Bennozh deoc'h, va Doue.

An avel o vont gwashoc'h bepred. Glazif ha glazif atav ! Hag o kinnig kouezhañ, douget e divrec'h al latar, an noz !

Ur vouezh un tu bennak a c'harmas mantrus : " Kollet omp ! kollet omp ! ". Ar gri-forzh raktal war ar vagig. An dud o fall-galonik. An daou boch gwinn ruz o roc'hal gwashoc'h 'vit bis - koazh !

- Gant al latar, mabig, gouzout a rez an hent ?
Ur c'hoarzhadenn skiltr, skrijus :

- An hent, dimezell ? Klaskit anezhañ hoc'h-unan. C'hwi oar mat, abaoe pell dija eo echu deomp. Kollet er Raz 'gist kement araozomp.

Dimezell ? Ac'hanta'tal Seven eo hemañ 'vat ! Tres ur gwir dimezell a zlebezañ warnon, fei ya sur ! Ur vouezh ennon a gemennas dibleg : " Pedit ! ". Emaout o vont e-barzh. Da vervel er Raz 'vel da Dadoù."

Ave Maria... Santez Anna ar Palud... " Et tous ces capitaines sont morts exactement comme ils étaient partis". Itron-Varia Gerineg. " Koural " " Calme et beauté ". Gerioù a-vil-vern o treiñ, o treiñ em fenn. Traoùigoù a bep seurt mesk-ha-mesk gant galv va ene d'ar Werc'hez, d'ha Mamm !

*

Buan, buan. Ha... war ar pontig a-raok du-hont... a-dreuz al latar, aze'mañ. Ek ! Ar fas ! Ar fas euzhus ! E welout a ran... E welout a ran ! Morlivet-holl. Toulloù don an daoulegad, daou damm glaou ruz ouzh o launiañ. Ar c'hoarzh avius, faeüs ha war un dro karget a lorc'h !

Azet eo du-se, bab'h ha seder, o c'hortoz... O c'hadal. Ar vagad-tud. Preizh dezhañ. Fas viltañsus, fas risignus ar Marv. Da welat em aus, o pegen fraezh dirazon. Ennon spont ebat.

Nemet eus andon kozh koshañ ar bed, an anien hag a bunt mab-den, o sevel em c'hreiz, oc'h aloubiñ va boud, ar fulor sekr. An trec'h dezhañ ? Paz c'hoazh diouzhtu marteze...

Diskoulmet em eus ar gordann am stage ouzh ar stur. Dre be-seurt kevrin ? War va c'hrabanoù betek an daou sac'h gwinn tamolodet en o bern. Skeiñ. Skeiñ. Skeiñ a daolioù suroa ken e strinke gwed va daouarn bloñset. Dihunet em aus anezho. Lakaet ar mestr en e sav, ar mousig ha me. Staget adarre ouzh e vaol.

- Ha bremañ, kasit ac'hanomp d'ar porzh. Poent eo ma'z oc'h un'don... N'em eus ket anavezet va mouezh. Piv'ta a gomze evel-se dre va genoù din ? C'hwi, Pêrig Gloagen, kollet er Raz, ho taou veb ganeoc'h, bag nevez hag all ? C'hwi, Saig Kervendal, kaerañ marto-lod ar porzh-mañ, kollet er Raz gant hoc'h ekipaj ezhec'h yaouank-flamm ? Hag unan diouzhoc'h a oa o krozal dre va mouezh ?

Amzer dezhañ kemer peg er stur, e tihunas da vat ar mezhvier. Divadaouet a-grenn. Gwelet em eus neuze petra dalveze martolodad va bro. Ar re gentañ er bed.

Ur sell pizh a reas war e dro. Poan gollet ! Al latar ! Da droc'hañ gant ur gontell ken tev ma oa.

- Klaskit lekaet ar c'heflusker da vont en-dro" emezañ deomp gant ur vouezh raouliet.

Tizhout ar benveg en ur risklañ war gorfoù tud glec'hiet a-zoare en dour-mor : " Thalasso.." a-raok ar c'hiz. Treiñ an dornikell. Dek gwech. Ugent. Tregont. Bout ! Aner.

- Klaskit atav, a c'harme ar Meliner a-dreuz ar voger-latar. Klaskit. Ret dezhañ kerzhout, rak paneze.. "

Paneze ? Paneze ? Perak klask ? Kart gwech dija hon eus troet an dornikell vrein-se. Ne vale ket. Vale ket, ha setu ! N'an deus nemet chom mouzhet ha mat pell 'zo ! Kouskomp !

*

Souezhus eo pa beg en den, bet re skoet, re arsailhet, al lez-da-vont, al laoskentez ! N'am boa mui c'hoant ebat nemet kousket. Bremañ 'oa tro ar Meliner da stourm. Evidon-me, aet oan divi gant va hini. Peoc'h. Ar peoc'h. Kousket. Zoken e don donañ az mor. Kousket...

" Je suis le grand veilleur debout " ... Adarre ar gerioù ! Kement a c'herioù am'eus sanket em fenn paour ma teont d'ober un d'ober em spered skuizh. Gwell a se dezhañ ma'z eo " le grand veilleur". Me n'am eus ket " les filles, les fleurs " da zifenn !

Moredet. Ne oan mui nemet mored. Gwech ha gwech all, dre ma welen ha na welen ket... ur skleur gwer e seblante lintrañ. A-dreuz seurt letar, gwelout ul lugernidenn ! Va faour-kaezh plac'h, c'hwi'zo disluic'hallet!

Kanaouenn varzhus, ma'z eus unan. Ar c'heflusker divouzhnet. Ha me, trumm em sav o kanañ navet azeulgan veur ar Joa Beethoven. Ar mous o c'harmiñ, kollet e benn gantañ : " Tan Tevineg ! Tan Tevineg ! " Luc'hañ a rae bremañ a-wel deomp. Steredenn ar mesaer! Kouezhet on war un tamm fardaj e-giz d'ur maen-sont. Ha leñvañ, leñvañ, leñvañ.

- 'Gev ket deoc'h 'zo dour a-walc'h evel-se, dimezell ?" eme din ar mousig koant.
- Eo, va mab. Deus ma pokin dit. Kadsrn out, te'oar.
- C'hwi ivez, dimezell. Savetaet hoc'h eus ac'hanomp hiziv"

*

Pa dostaas ar c'hanod ouzh chaoser Sun e oamp sebezet, sabetuet-mik gant kement a dud o c'hortoz eno. Holl boblañs an Enez, bihan ha bras 'oa deredet o c'hedal. A-bign, e penn uhelañ gwern ar vag-savetaj, ar banniel zu ! Hini dramaoù ar mor. Ur vag, tud hag all, o veuziñ. Dic'hallus klask o sikour. NI.

Dilestret omp. Reuzeudik. Darn gwall-glañv. Bronduet, bloñset, hanter varv. Met BEV. Ur gwir vuzh. An trec'h avat n'eo ket bet dezhañ !

Kerkent ha kavet ganto dindan o zreid straedoù mainet o enezenn, al lonkerien a sentas o gourlañchenn o tont da baper-stoub en-dro.

Pedet o deus ac'hanon da vont ganto d'an davarn. Un enor 'oa! Hag e gomprenet em eus mat-tre. Stourmet em boa evel ur paotr. Ar merc'hed ne daent biskoazh en tavernioù, drus evel e Breizh-Veur, er " Puboù ". Nac'het em eus. Aet int holl ha kontet emichañs en dreuzadenn. An deiz war-lerc'h, er barailloù strizhik, e welen ar vugale o sellout ouzhin gant sebez, pa gave dezho 'oan tremenet." Honnezh oa ar c'habiten dec'h ".

*

Chomet on ur sizhun en Enez-Sun. Kousket em eus war ar plouz. N'eo ket gwall-vouk galc'hidi plouz tev d'ur c'horf brevet ha bronduet kement tamm kroc'hen warnañ. E dibenn va zroiad 'oa dispouezet krenn a voued an enezenn. N'he doa gallet

bag ebet loc'hañ davedomp eus an douar-bras. Bevet em eus diwar a bep seurt gouenn " bionig " " meskled " ha " birinig " 'zo tu da zastum war ar c'herreg. War yun zoken on chomet evit echuiñ va beaj.

Klevet em eus avat, 'doug an devezhioù-se, ar pezh na glevin mui emichañs em buhez. Sonerezh ramzel ha meurdeus an avelioù gwelarn-gornog o c'harmiñ, o vlejal dichadennet war an ec'honder Atlantel. Parsifal. Lohengrin. Tristan. Aze 'oac'h war chaoserioù Sun. Aze 'mañ ho Ped !

Enezenn gevrinus ar marv ! Diwallet da wirvoud ken rust ha ken garv gant ar VARENN fallakr gwall-vrudet er bed a-bezh! Enezenn estlammus ar marzh ! O vont davedout em eus kejët gantañ: ar FAS. an hini nemetañ a zo hon dazont deomp-ni holl " rak pep tra a blego dirazañ ". Seblantet en deus kilañ du-hont er Raz. Dezhañ avat, 'vo ar ger diwezhañ! Er VARENN ne oa ket c'hoazh an Eur.

F. Kervendal, 12 Genver 1968

Stagadenn

Bernioù ha tarzhioù (hervez ar brezhoneg unvan)= e Douarnenez e leverer: Barrioù ha Tarzhioù

Gerz = blaz an amann kozh, boutet

Skalerret = aet reut evel un askorn-souëen (morgadenn)

Chab = ochell, fun, korden a vez taolet war ar c'hae da stagañ ur vag kerkent hag erru er porzh.

Gwizhia = lakaet hon eus gwazhiad en destenn e-lac'h ar ger-se, hag a zo liester ar ger gwazhienn, e Douarnenez.

Varenn = pouezmouezhiet ez eo ar ger war ar silabenn ziwezhañ.

Je suis le grand veilleur: Gerioù ar barzh Kalloc'h, nemet d'ar ma-re-se ar anavezete Frañseza Kervendal hepken ar stumm gallek eus ar varzhoneg vrudet " Deit, Sperad Santél " anni end-zeun ar gwerzennoù

-mañ

(skritur hervez
mouladur DIHUNAMB
En Orient, 1935)

Me zo er Gedour bras én é saù ar er hleu
Gout e ran petra onn ha me ouër petra ran
Iné Kornog, hé douar, hé merhed hag hé bleu,
Oll kened er bed é, en noz-man, e virañ.

KENDALC'H KELTIEK FOUJERA

20-25 EOST 1968

AR C'HENDALC'H KELTIEK ETREVROADEL a vezo graet e Foujera. Kregiñ a raio d'an 20 a viz Eost, d'ar Meurzh diouzh an noz. Padout a raio e labourioù pevar devezh.

° Labourioù ar C'hendalc'h a vezo graet, evel kustum, e brezhoneg hag e saozneg. Testennoù ar prezegennoù, heuliet atav gant divizoù, a vo

- a) an darvoudoù nevez a-bouez er Broioù Keltiek
- b) an Istor hag ar Vroad.

° Koulskoude, gouzout a reer e teu kalz tud d'ar C'hendalc'h ha na ouzont ket brezhoneg, ha tud kêr ivez a zo aze. Hor mad a raïmp eus ar C'hendalc'h evit reiñ dezho un tam-mig deskadurezh vreizhat.

Peder brezegenn a vo graet evito, e galleg: 1) ar Brezhoneg, 2) Istor Breizh 3) an Divyezhegezh ha Skouer Kembre 4) Breizh hag ar Broioù Keltiek. Goude pep brezegenn e vo ur gentel vrezhonek: spi hon eus e vo degaset evel-se tud da gregiñ da vat gant studi hor yezh.

° Ar pourmenadennoù, div anezho, unan e korn-bro Roazhon hag unan e korn-bro Sant-Maloù, a vo sichennet o-div war istor ar Vro.

° D'ar Meurzh da noz e vo un abadenn degemer ha kanañ etrezomp.

° D'ar Merc'her, d'ar Yaou, d'ar Gwener ha d'ar Sadorn e vo bemnoz un Abadenn-Vras.

D'ar Merc'her da noz e vo un " Abadenn Vreizhat ". Kanaouennoù-Pobl, dañsoù, sonerezh-pobl.

D'ar Yaou e vo un abadenn " Buhez ar Poblou Kelt gwelet dre ar Sonerezh hag ar Varzhoniezh ". Aze e c'hello bezañ lennet barzhonegoù eilet gant an delenn, sonet telennoù, kanet gant ul laz-kanañ... Spi hon eus dreist-holl e vo diskouezet kanaouennoù eus Barzhaz Breizh, c'hoariet, " jestr-c'hoariet " kanet en doare kozh pe nevez. Klask a raïmp ober eus an abadenn-se un dre nevez a-walc'h. Kelted all a gemero perzh ivez.

D'ar Gwener e vo un Abadenn Hollgeltiek " speredel ". Aze ivez e vo klasket ober un dra bennak nevez. Keltiek ha brezhonek e vo.

D'ar Sadorn e vo un abadenn Kan, Sonerezh ha Koroll Keltia Tramor.

D'ar Sul vintin, servijoù relijiel hag ul lidambroug dre gêr. D'ar Sul endervezh, 25 a viz Eost, e vo un dra nevez:

GOUEL AR C'HAN KELTIEK, kozh ha nevez. Fellout a ra deomp lakaat anavezout dreist-holl ar ganerien yaouank a c'hello gwerzhañ o fladennoù hag en em ziskouez eno. Gortoz a reomp kanerien diouzh ar Broioù Keltiek all. N'eus ket fellet deomp rannañ ar c'hanaouennoù kozh diouzh ar c'hanaouennoù nevez. Karout a rafemp e rafe berzh an endervezh-se, eus ur c'hiz nevez a-grenn.

Diouzh an noz e vo ur FEST-NOZ.

*

Kement-se a zo ur raktres dre vras evit ar C'hendalc'h. Meur a vodadeg-labour a zo bet graet dija, ha re all a vo graet c'hoazh. Ur VODADeg VRAS, gant an holl genlabourerien, a vezo graet a-raok an hañv. Goulenn a reomp digant an holl an em brientiñ a-benn bremañ ha labourat start evit ma raio berzh ar C'hendalc'h. Ar C'hendalc'h a zegas kalz a vrud d'hon Emsav ha gant se ez eo MAD AN HOLL.

Diskouezadegoù a vo. Klask a reomp aozañ traoù nevez ha plijus, met re abred eo c'hoazh evit lavarout ez-sur petra a c'hello bezañ graet.

Ezhomm a vo, evit kas da benn-vat ar C'hendalc'h, eus a bep seurt skoazell. Tud a zo ezhomm evit kanañ, seniñ an delenn pe ar binioù, evit ober labour arzel a bep seurt. Ezhomm a vo tud all evit blieniñ hor mignoned eus Keltia tramor, evit komz, evit reiñ tikedoù, evit evezhiañ, ha me'oar. Ur wir gevredigezh vreizhat e vevo e Foujera evel-se a-pad un nebeut devezhoù.

*

*

Adalek bremañ e c'heller labourat evit ar C'HENDALC'H, dre :

- 1) prientiñ an abadennoù arzel.
 - 2) lakaat e anv evit kemer ur garg bennak e-pad ar C'hendalc'h
 - 3) ober bruderezh
 - 4) dastum arc'hant evit paeañ an holl frejoù.
- Setu amañ ar CHOMLEC'HIOU hoc'h eus ezhomm :
- Jord Kler, sekretour Skourr Breizh, 3 place St Pierre
44 Nantes.

Anna Le Bec, 12 Rue Astar, 29 5 Quimper (teñzorierez)
C.C.P 1420-35 Rennes.
Per Denez, le Ris, Ploaré, 29 5 Douarnenez.

Klasket a vo lojañ ha boueta ar re yaouank evit ur priz izel, e doare da reiñ tu dezho da gemer perzh er C'hendalc'h penn-da-benn. M'hoc'h eus mignoned e Keltia tramor, lavarit dezho dont. Hag evel just, grit bruderezh evit ar C'hendalc'h e-touez ar Vretoned yaouank ivez.

Gant kenskoazell ha kenlabour, e vezo graet ur C'hendalc'h kaer hag a raio enor d'hor Bro ha d'hor Pobl.

Ha na zisoñjit ket e vo degemeret gant anaoudegezh-vat, pep skoazell, pep ali, pep kuzul ha pep barnadenn.

Gant gourc'hemennoù kalonek

SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H

=====

Sklaer a-walc'h ez eo komzoù SKOURR BREIZH evit ma kompreno ervat an holl vrezhonegion pebezh pouez ha pebezh levezon a c'hell bezañ d'ar C'HENDALC'H Keltiek da zont, e Foujera, e dibenn miz Eost, er bloaz-mañ, mar keront. Pouez ha levezon vat war Vreizh a-bezh. Rak berv a zo da vat er Broioù Tramor, zoken e Kernev-Veur 'lec'h ma'z eus broadelourien hag zo tremenet nevez'zo da guzulierien-kêr e meur a lec'h. Hag evit Kembre, e klev Breizhiz (hag en o zouez lanneron Varr-Heol) trawalc'h a zoareoù diwar he fenn evit gouzout e talc'h er stourm da vont war greskiñ! Hap mar ebet, diwar zaremprediñ er Gelled Tramor e vo awenet hag antanet ar Vretoned ha skleri-jennet en o labour evit o Bro, hag he Sevenadur. Un degouezh ouzhpenn ez eo eta KENDALC'H KELTIEK Foujera d'ar Vretoned da dostaat an eil ouzh egile, dreist kalz a glouedoù, da genlabourat kenetrezo evit ul labour resis, diuntuek, ha war un dro bourrus ha talvoudus. Hag ar berzh dispar a res KENDALC'H LANDREGER 6 vloaz'zo a zle bezañ ur c'hennerzh da voutc'hañ al labour evit an holl dud a youl vat.

KASIT ETA HEP DALE HO PROF D'AN DENZOREREZ, Anna ar Beg,
d'ar chomlec'h merket a-us.

KAMP ETREKELTIEK

Ur c'heloù laouen-tre a zeu dimp dre follenn-geleier KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERIEN: 20 vloaz'zo dija ez eo krog ar Strollad-se gant e labour dalc'hus, efedus ha frouezhus, hag er bloaz-mañ e vo dalc'het ar C'HAMP e Mur eus an 29 a viz Souera d'ar 15 a viz Eost.

C'hoazh e vo lavaret n'o deus ar Vretoned a ijân ha ne ouzont ket kas o mennadoù da benn-vat. Kantadoù ha kantadoù a dud zo bet tremenet dre GAMP AR VREZHONEGERIEN abaoe ar Skol-HaV ken-tañ, e Kleder, e 1948, diouzhtu koulz lavarout war-lerc'h ar brezel: ne oa ket echu ar prosezoù a-benn neuze hag a-boan ma kreded sevel ar penn. Hor gourc'hemennoù d'an adlc'herien, d'an adluskerien ha d'ar re o deus dispagnet o roudoù: Langlez, Huon, Vefa de Bellaing, Kalvez hep menegiñ re all... Kalz a vad o deus graet ha toullet un hent hag a c'hellfe bezañ skouer da galz a vroioù all.

Kelted tramor o deus bet darempredet ar C'HAMP-se ha desket karout ha prizout ar Vretoned hag o yezh en ur vevañ en o serr. Pebezh sebez evidon (hag an Aotrou Kalvez), e Dolgellau o klevout un itron o tonet da c'houlenn diganeomp, an ar yezh eus ar yac'hañ keloù eus Breizh hag eus Xavier Langleiz. E Kleder e oa bet ha desket mat ar yezh daoust ma oa krog da ankouazh un tamm ar geriadur. He mab, paotr yaouank 20 vloaz bennak, hag he merc'h, ur goantik a blac'h yaouank, 16 vloaz marteze, broadelourion o-daou, deuet da Skol-HaV Y Blaid, ha kembraeg c'hwek Pont-ar-Dgwr en o genoù, a oa mil stad enno o kejañ gant Bretoned. Ha war dachenn an Eietezvod hor boe kejet an Aotrou Kalvez ha ma gant ur brezhoneger disi: Tecwyn Evans, hag e-pad en deiz ne oa bet nemet yezh Vreizh etrezomp. E Kamp Rostren, mar na fazian ket, en deuas kroget da gomz hor yezh!

... Merket ez eo bet war ar follenn-geleier MUR (Breizh-Uhel) Hml Breizh-Uhel? E deroù ar c'hantved-mañ e oa brezel, e MUR, e-tre ar veleien hag al leanezed abalamour d'ar c'hatekiz brezhonek! An holl anvioù-lec'hioù a zo brezhonek-rik, kement hag e Breizh... (Izel). Hag ur pennadig ec'hano, e parrez Sant-Wen (Zant-Uen) emañ chapel Sant Elouan, e-lec'h ma prezegas an Tad Maner, deiz Sul Ar Pantekost, e brezhoneg diouzh ar beure hag e galleg goude kreisteiz (1650). Abaoe n'he deus graet ar yezh nemet kilaf ha bremañ.

Digarez da studiañ Istor Mur, da studiañ an anvioù-lec'hioù adalek anv MUR e-unan ha n'hell ket bezañ dispartiet diouzh ar MUR-iau kembraek hag a zeu diwar al latin MURUS, hep vat, daoust d'ar pezh a soñj hor mignon E. Barzig, en e levr MUR-de-BRETAGNE & Sa Région (paj. 15) (Impr. Simon, Rennes, 1956). MUR gant he sternad kaer a gadoù, a stankoù, a dosennoù, unan eus br'aveñ lec'hioù Breizh I

Ar Gordennidi e Gwened

E 1260, e voe diazezet Leandi ar Gordennidi e ker-Wened, gant an dug Yann I-añ; degemeret e voe al leaned gant an eskob ALAN (1).

Lec'hiet e oa ar gouent en tu all da vuriou kêr; dre ar straed Noe- a veze anvet betek 1790 " straed Sant Frañsez - izeloc'h eget ar " Château-Gaillard " (2) - ar c'hastell m'emañ bremañ Mirdioù ar Strollad Liesouiziek - ez aed el leandi.

" Kent dezhe (ar Gordennidi) bout eno, e oa, hervez lavaret, ur chapel vihan, diazzet war douvez ha fozelloù kêr. Tud'zo a lavar e oa un Templ ha chapel an Dimplidi (pe Venec'h -Ruz); n'eus prouenn ebet avat " (Dubuisson-Aubenay, Itinéraire de Bretagne en 1636, I, 142)

Kentañ leandi Gwened e oa hemañ; diazezet e voe 50 vloaz goude savidigezh Urzh Sant Frañsez. Ar chapel anezhañ a voe konsekret d'an 31 Mae 1265, gant Gwion GONLEV (3), eskob Gwened.

" Al leandi-mañ a oa bihan, lec'hiet izel, amañ ha teñval. Brazik a-walc'h e oa an iliz, kempennet e 1385... ha karget a werennoù-livet dispar hag e vezioù... " An iliz he doa stumm un higarrez, da vent dezhi war-dro 34 m. hed war 14 led. " Daou gloastr a oa, karrezek o-daou, izel ha teñval... unan anezhe bihan-tre... " (Dubuisson-A., l.m. 1, 142)

Dre beder gwech e voe dalc'het Kuzul-Meur Kordennidi Rannvro Deurng (Tours): d'an 10 Gouere 1411, d'an 19 Gouere 1456 (da gefiver santeledigezh Visant Ferrer), d'ar 15 Eost 1520 ha d'ar 17 Gouere 1561.

" Di ez eas rag-eeun eus an Iliz-Veur an Dominigad Sant Visant Ferre, kentañ ma teuas da Wened, e 1417; ha pa voe kiniget d'ar Sant reiñ bod dezhañ e kastell ar Votenn (4), e kavas gwell lojañ e ti ar Skarp, stok ouzh dor ar gouent " (J.BULEON)

E 1395, e voe fin da randael Klizun ha Yann IV(s. Istor Breizh). D'an 19 Here 1395, en em gavjont e leandi ar Gordennidi, e Gwened, hag an " daou dabutour a reas peoc'h hep goulenñ all gant hini " ('Istoér Breizh). " Urzhiet e oa bet gant an Dug e vefe roet bod da Glizun en iliz ar Gordennidi, diazezet e-maez kêr Wened, hag eno e vefe deuet an Dug da gomz gantañ. Hag e teuas eus e gastell da gomz gant an Aotrou Olier Glizun, da di al leaned-se hag eno e tivizjont en ur gambr, serret an nor wazne... " (FROISSARD) (5)

Teir breuriez e voe diazezet en iliz ar Gordennidi; e 1592, hini ar Gemenerion; e 1591, hini ar Verserion hag hini Santez Reine.

E 1789, e voe eno un darvoud a-bouez e istor Eskopti Gwened. Evit ar wezh kentañ, ar veleion " a eil renk " a rankas dilenn kannaded d'ar " Breudoù-Meur ", er-maez eus an eskibion hag ar C'huzulioù-Chalonied. En em vodañ a reas beleion an eskopti e sal vras ar Gouent, dindan renerezh Person Sant-Pêr (an Iliz-Veur); eno, da heul ur start a guzuliadeg, d'an 2-1 ha d'an 3-e Ebrel, e voe anvet da zileuridi person Pondivi, hini Kestemberzh hag hini Redon.

E 1790, " Directoire " ar Morbihan a zibabas ar gouent da lec'h emvod.

D'ar 14 Ebrel 1793, e voe gwerzhet an iliz, al liorz ha savadurioù ar gouent, d'an aotrou Daned hemañ, evit 13 000 lur. E 1808, e voe diskaret ar chapel.

Evel ma lavar Dubuisson-Aubenay (l.m.), e oa karget iliz ar Gordennidi a vezioù. Sed amañ roll ar pennoù-bras bet beziet enni:

- e 1312: an Dug ARZHUR II (+ 27 Eost 1312), a kor an iliz; e vez hag e zelvann e marmor gwenn a voe distrujet e-pad an Dispac'h;
- e 1411: Gwion VII, Aotrou Moleg; war e vez e oa e ardamezioù: " en gul e 9 c'hroazveen en argant ";
- e 1416: YANN II Malstred, Aotrou Kaer hag ar Genkiz, beziet e chapel Sant Yann, bet savet gantañ; e ardamezioù a oa war e vez: " en gul e 10 bezantenn en aour, 4,3,2,1 " ; e zelvann hag hini e wreg, Janed Fouilhez, a voe distrujet e-pad an Dispac'h ivez;
- e 1440, YOLA ANJOU, gwreg Frañsez, kont Monforzh (± 16 Gouere 1440), beziet e kor an iliz; he delwenn e marmor gwenn a voe torret e-pad an Dispac'h;
- e 1465, Pêr Josou, aotrou ar Pont e Noaloù, beziet e chapel Sant-Kler
- e 1468, YANN IV Malstred, aotrou Kaer hag ar Genkiz, marmor bihan YANN II, meneget a-zioc'h (6);
- e 1484, CHAUVIN, kañseller Breizh, marvet e bac'hioù Kastell an Erminig, e Gwened, da heul gwall-reuzioù an arc'hantour Landais (7)
- e 1515, Yann ROPERZH, O.F.M., eskob Tiebriad ha skoazeller Gwened, beziet e kor an iliz (8)

E 1790, pa zeuas komiserion ar velestradurezh ar gouent evit atersañ pep lean, ne oa met 5 Kordenned enni; 2 anezhe a c'houlennas mont kuit.

60
bihan ma klevet un tamm dre-holl e-lec'h ma kaver an anv-se,
TOSENN AR RUN ! Hervez ar geriadurioù ar ger RUN a zo gourel, met
e gwirionez e reer ar c'hennadurioù er yezh komzet: Run Vihan, ..

Ar ger RUN, na petra'ta a sav betek diazezigedezh ar Vretoned
, en Arvorig, anat d'an holl ! Dre-se na vefe souezhus kaout an
anv-se RUNAN o talvezout TURENN, TOSENN, TORGENN VIHAN.

N'heller ket pouezañ re war stumm an dibenn AN ha lavarout e
tlefe bezañ deuet da vezañ AM, evel DINAN o tonet da Zinan e
genoù ar vrezhonegerion- rek arabat krediñ ez eo DINAM ur stumm
ijinet gant diouziegezh an dud, paogwir ez eo en em gavet an he-
velep taol gant an anv-se e Kembre e-lec'h m'eo deuet DINAN da
vezañ abaoe kantvedoù DINAM. Lazomp eta evel m'emañ kudenn an AN
o verkañ ar bihanaat, Ul labour reizh e ra eta ar SKOLAJ o keme-
rout an AN dres evel m'emañ.

Hogen ur gudenn a-bouez (d'hor meno) ez eo pouez-mouezh ar
ger: RUNAN eo a lavarer, gant ar pouez-mouezh war ar silabenn
ziwezhañ. Tu a vefe da dremen dreist kement-se, o vezañ ma'z eo
faltaziüs e-walc'h ar pouez-mouezh brezhonek. Lakomp. Met
e-kreiz ur rannvro e-lec'h m'eo miret sklaer-tre reolenn ar
pouez-mouezh en anvioù-lec'hioù: Pontrev, Pleuzal, Ploueg,
Peurid, Hengoat, Beurleudi (Brelidi), Planiel (ha Planiel
e Treger Vihan hag er Gouelou), er seurt rannvro an hini e-
maomp !

Ha setu ma kavomp ur c'hinnig all : RUN AN KANN, dista-
get moarvat abred-tre RUN AN C'HANN, ha diboan-kaer ez eo
tremenet an distagadur da RUN-ANN, ha RUNAN neuze. Ar c'henn-
madur K--C'H, a zo kozh-tre er yezh (gwel.L.FLEURIOT, LE
VIEUX BRETON, Éléments d'une Grammaire paj.203.4.5). Dre-se-
o vezañ ma eblant ar gudenn bezañ dias a-walc'h da zezarn,
daout hag ar gwellañ na vefe ket kinnig neuze an div droidi-
gezh? RUN VIHAN (bihan, mar kerer) ha RUN AR C'HANN? Mar deo
bet ankounac'haet deiziad resis an emgann-se, daout ha ken
iskis-es e vefe, gant an holl zielloù ha paperioù drailhet,
devet, aet gant ar p'rañved, kolllet moarvat da viken ?

*

Kolllet moarvat da viken ? Kavadennoù sebezus a reer a-wechoù
evelato, evel AN HENDRAOUR o sellout ouzh ROSPEZ (Barr-Heol, Ker-
zu, 1965 paj.17), hag a ziskar kement displegadur e oa boaz an dud
da reiñ d'an anv-mañ-anv. Rak anat eo, nemet ur fazi diarvar bennak
ha splann e vefe, e ranker hauliañ, pa c'heller, o fourchas an diel-

loù kozh, an testenioù kozh skrivet gant tud hag a ouie un tamm mat
muioc'h a vrezhoneg egedomp hag a gomprens gwelloc'h eget na reomp
an anvioù a roent d'an traoù, d'an tiez, d'ar c'hêriadenoù, d'ar
bourc'hioù pe d'ar c'hêrioù, hep komz eus ar parkejer hag all. Hep
bezañ touellet gant hor c'harantez evit an traoù keltiek, evel ma
c'hoarvez a-wechoù gant gouizieien vat, ha skrivagnarion n'emañ ket
o micher ganto da zeskiñ ! Adkemeromp da skouer ar pezh a zo skrivet
paj.55 eus an nivereñn-mañ, diwar-benn MUR e-lec'h ma tle KAMP AR
VREZHONEGERION bezañ graet evit ar bloaz: en Aktaoù ar bloaz 1200
e veneger PAROCHIA DE MUR. Niverus-tre ez eo restajoù ar Romaned
er Vro, gant an hentoù bras o'n em groazañ eno. Plijusoc'h, hep mar
ebet, ez eo gwelout en anv-se ar ger MEUR dre ma'z eo keltiek. Met
diskoulmet ha tout ez eo ar gudenn ! Arabat klask e-lec'h all: MURUS
eo orin an anv a vremañ. Zoken, mar deo gwir e talvez ar ger MEUR,
n'eus tu ebet d'hen prouañ, siwazh ! Despetus, kazus e c'hell bezañ,
met petra'servij ! Hon enor breizhat ha keltiat na c'hourc'hemenn
ket deomp nac'h an Istox !

MUR = lec'h kreñvaet gant Murioù ha mat pell'zo. Ar ger all, kar ha
par dezhañ MACERIA, en deus roet evel ma ouzer MAGOR, MAGOER, MANGOER,
MOGER, hervez ar rannyezhoù... Hag ar ger MUR bev bepred diouzh e dul
*

Pa na vez na diell, na testeni ebet, neuze hepken e c'heller ober
" goulakadurioù " gant kement riskl a zo da heul ha dreist-holl evit
ar " goulakaduroù " diwall da sellout e vartezeoù evel gwirionezioù
ken start ha Menez-Dre war e sichenn.

Setu perak e c'hellomp kinnig evit anvioù'zo chomet kevrinus
evit WILLIAM SMITH (Toponymie Bretonne, 1940) mehozioù da vezañ
burutellat pizh-meurbet.

Lézel a reomp a-gostez ar ger PLEHEREL, parrez war ribl ar mor,
e Bro-Benteür, daout ma vefe aes-tre lakaat keñver-ouzh-keñver
traoùigoù evel-hen:

PLEHEREL - TREMOREL, en ur zerc'hel kont
eus Sant-Merel a gaver end-seun e parrez PLEHEREL. Neuze hor befe
PLOU-MOEREL* o treiñ da PLEHEREL ha TREMOREL o tont eus TREMOEREL.
Pe mar befe c'hoant da vuretellat e dostol' h: MOE-HEREL gant ar ger
rakger MOE anavezet-mat an Onomastig keltiek. Met siwazh evit
TREMOREL n'hon eus kavet nemet marvailhoù diwar-benn orin ar barrez !

Gwelomp bremañ ar vourc'h e zo tre e-kichen Plesherel: PLEVENON,
hag amañ e vo aesoc'h c'hoari marteze ! Ha gant skoazell levr SMITH
e vo aesoc'h reiñ un diskleriadur hag a vo hervez reolennoù ar Ye-
zboniezh fur a-walc'h, hep bezañ kennebeut na sur nag asur !

* gwelout an notenn (2)

Gallout a reomp lakeat PLOUENAN ha PLEVENON en hevelep sac'h ha setu amañ penaos:

PLOUENAN = barrez BENOAN i Ploe-Benoan (1330), Ploe-benan(1467) Ploe-uenan (XVI-et kantved). Benoan, Benan a zo un amprestadenn digant al latin Benignus.

Ma! evelkent n'eo ket diaes gwelout BENOAN o treiñ da v-BENON, e-lec'h treiñ da v-Benan. Ne gav ket deoc'h? Ha neuze, Smith e-unan a gomz eus KilBENNON (Iwerzhon). PLEVENON = PLOE BENOAN perak nann ? Bremañ avat, peseurt BENIGNUS ez eo ? Deoc'h-hu, bremañ, paotred an Hagiografiezh da zibab,mar gellit, e-touez ar Sent Keltiat hag o deus douget an anv-se ken hegar ha ken klouar: Benignus ha da beurzifuilhañ ar c'houstellad. (1)

*

Peogwir ez omp krog ken brav, dav stagañ gant un anv all gouest da reiñ bec'h d'ur c'halz a ouizieien: PLEHEDEL, pe e brezhoneg, PLEUDEL.

Ur c'hant vloaz'zo bennak e oa bet klasket distroadañ Sant Pêr, patron ar barrez ha lakeat en e lec'h ur Santez: Filomena! Met allaz! ne seblant ket Roma krediñ nemeur ez eus bet hiskoazh ur seurt Santez! Met se 'zo un afer all, nemet evel just, setu tapet ar paour-kaezh person gant e bardon! SANT PER, patron ar barrez evel en holl barrezioù kozh, pe dost. Mat! Gant ur barrez kozh hon eus d'ober amañ eta, ha den ebet ne nac'h kement-se (cf Smith)

Poellek a-walc'h ez eo, pa weler D ar ger-se,soñjal e tle donet eus ur ger kozh bennak hag a oa T ennañ, e brezhoneg kozh. Chafis en deus bet zoken da virout an D-se er yezh a vremañ, pa soñjer petra eo deuet PLOE-TUTWAL da vezañ: PLU-DUAL e galleg ha neuze, va Doue benniget! PLUA (ha PLUAL) e yezh ar Vretoned. T=D?

Adsavomp ar ger, pe glaskomp hen ober: PLOE-HETEL ??? Ne welomp netra o tonet ac'hano! Dav treiñ war un tu all,ne gav ket deoc'h? Etrezek pelec'h? Etrezek ur barrez vihan all TREGIDEL, nepell ac'hano end-eeun, eus kanton Lanvalon(Lannon, eme ar vrezhonegerion).

Me'zo mat din ar pezh a lavar Smith diwar-benn TREGIDEL, - skrivet avat, e gaou gantañ: TREGWIDEL, d'hor meno, peogwir ne glevor den ebet o tistagañ evel-se - TRE GWITEL = TRE VITAL. Hogen distagadur ar rannvro a zo disheñvel: TREUGEDEL, gant ar piquez-mouezh war ar silabenn gentañ.

Gwan-tre a dra sur, ez eo drezañ e-unan un arguadur diazezet war zistagadur rannyezhezh ba trefoet tamm pe damm un anv bennak evit dizoleiñ ha displegañ gwir ster un anv all. Met pa ne vez hent all ebet, skoazell ebet, testeni all ebet, diell all ebet ? Neuze e c'haller hen ober riski-biski! Ha setu:

Diouzh TREUGEDEL daoust ha n'eo ket aes-tre adkavout un dra bennak evel-hen : PLEUGEDEL* Hogen kemmadur dre vloataet a vez war-lerc'h PLOE, PLOU, PLE: neuze diwar b-PLEU-GEUDEK hor ba diouzhtu: PLEU-EUDEL. Ma! pegeit e c'hell ur stumm evel-se padout er yezh komzet. Kerkent e welomp neuze PLEUDEL o tifoupañ, en ur virout evel just, hervez reolennoù ar pouez-mouezh, an taol-mouezh war an EU. Bremañ e vo aes-tre da bep hini diskoulmañ kudenn an anv ofisiel PLEHEDEL: an H e kreiz ar ger o talvezout hepken da zispartiañ div lavar ar c'hramadegourion. Ha neb a garo a lezomp gantañ ar blijadur da glask, diouzh skouer TREGIDEL-TREUGEDEL, hag-añ ez eus ur skoilh bennak evit pezh a sell PLE(H)EDEL ha PLEU-EUDEL.

Meneged hon eus a-ratozh-kaer ar stumm diwar varteze PLOE-HETEL*. Ur stumm faos, diwir ne c'hell bezañ ken neuze(hervez hon arguadur da vihanañ!). Lakomp neuze kuit da astenn ar gaoc PLOE-GETEL*. Mar deo reizh displegadur Smith(l.c.) eus TREGIDEL o tonet eus TRE ha VITAL. neuze ez eo dirouestlet ivez orin ar ger PLEUDEL, ne gav ket deoc'h ? PLOE-VITAL* (Plæbs Vitalis*e latin). Koulskoude, da c'hortoz dielloù disbegus a c'heller arvarañ un tamm, en-abeg d'ar V latin distaget penaos ? V ? B ? U(W)? (3)

Lakomp eta PLEBS VITALIS da c'hortoz ha pedomp un hagiografour bennak gant harp levrioù V.Duine: Memento des Sources Hagiographiques de l'Histoire de Bretagne, 94, 106-7; Loth Noms des Sts Bretons 55; Largillière: Six Saints de la Région de Plestin(Rennes, Plihon 1922) da gontañ dimp hiroc'h diwar-benn ar Sant VITAL-se pe ar SENT VITAL-VIAUD 'vit ma'z eus meur a hini, e-giz ma seblant bezañ.

*

Mar deo skort pe gann arguadur ar pennad a-us, arabat bezañ ne-c'het, un taol-esa ne deo ken, ha peogwir en deus BARR-HEOL an enor da gaout e-touez e lennerion desketañ ha gouiziekañ tud ar bed-holl war ar yezh kozh ha nevez, n'eus riskl ebet e vefe laos-ket gedo da redek pell !

KLERG

(1) Menagomp, hep c'hoant da reiñ kement-se a bouez d'ar fed, e vez kemmesket a-walc'h ar sonioù ON hag AN e rannyezhezh romanek bro-Benteür, kement ha ken bihan ma c'hellfed (lakomp!) klevout unan o tistagañ BENON e lec'h BENAN ha vice-versa! Met

evel just, e veze bubak ha lu lavarout ez eo abalamour da se ez eo bet degemeret PLEVENON kentoc'h eget PLEVENAN !!!

(2) Dre zievazhted ez eo bet meneget ar stumm PLOE-MOEREL*, pa n'hell ket bezañ bet, anez hor befe PLEVEREL* evel anv ar barrez. N'eo ket se: met kompren e c'héle (H)EREL kaout daou anv: (H)-EREL ha neuze MOE-(H)-EREL. Ne oamp ket evit disverkañ an taol-dievezh-se gant ar c'horektoz... hol lennerion d'hon digareziñ.

(3) Moarvat WITALIS* GWITAL(IS)*, Gwidel* Gweudel* Geudel* o tiskleriañ evel-se an daou stumm galleg ofisiel ha brezhoneg-pobl

DRADIG AR STER

Houidi gouez o gouzoug glas
Douryeer-lentig o mentell rous
O voueta sioul war c'hlan ar wazh
A zarnij d'an disterañ trouz.

E-touez ar raoskl e korn ar skluz
Ar yer-dour a red da'n em guzh
Un houad gouez a spluj en dour
E lamm ' vildamm er melezour

A vildorr skeudenn splann al lenn
A freuz dameuc'h ar c'hogus gwenn
Gwernioù uhel an'elo sonn

O vrallañ goustad en eazhenn
Ha damskeud ar Pont kozh roman
Etre an haleg hag an onn

Chandelour 1968

Anjela DUVAL

GWERINONIEZH KUSTOMAD HA GIZIOÙ KOZH BRO-DREGER

Bez'ez eus moarvat en notennoù amañ da heul traoù displann ha traoù da glokaet, met evel m'emaint ez int talvoudus evit teurel un tamm sklerijenn war gizioù ha kustomoù eus Bro-Dreger e-raok ar brezel all (1914-1918), gizioù ha kustomoù hag a seblant bezañ vadù ur bed all.

GWISKAMANT AR MERC'HED

Betek an oad a 8 pe 9 bloaz e veze ur plac'h ur plac'h vihan, met pa veze krog da vonet d'ar c'hatekiz, neuze e oa ur grennardenn, ha betek m'he deveze graet 3 fask, e touge evel koefurenn ur boned. Prenet e veze danvez (danvez) ha graet er gêr gant ar gemanerez. A bep seurt liv a veze i glas, brun (ruz-teñval, ruz-moug), melen. Kavet e veze ivez reoù graet ha tout, met gwelloc'h marc'had e veze prenañ danvez ha graet er gêr, kalz muioc'h difrez e veze. Met da SAL e veze ur boned gwenn gant lassoù ledan feret da dremen dre zindan ar groñj ha skoulmet en-kokardenn a-drek ar skouarn. Devezh ar PASKOU, e veze ur boned ruc'het hag a veze graet diotañ ivez, boned plat. Ar boned-se a oa ar memes danvez evel ar c'hoefoù bras bremañ, brodet ha dantelezhed. Ront ha plat e oa ar boned, staget gant spilhoù a bep a du a-us d'an divskouarn, skoulmet en-kokardenn ha da gouezhañ war ar bruched.

Pa veze graet an trivet Pask ha konfirmet (rak a-raok da se ne oa ket c'hoazh echu da vonet d'ar c'hatekiz, ha ret e veze ivez bezañ konfirmet) neuze e veze poent poent MONT EN KOEF - evel ma veze lavaret - Pa veze douget ar c'hoef-se neuze e oa PLACH YAOUANK. Lavaret e veze neuze e oa... krog ar big en he skouarn, hag all...

Ar vamm evel just, eo a lakae he c'hoef d'he merc'h da gentañ betek m'he deveze an hini yaouank tu a-walc'h d'en em goefañ hec'h unan. Mall bras he deveze da se, rak ar vamm a lakae ar c'hoef er c'hiz kozh: ar gern izel-izel hag ar pitibor klozet ha da stokañ en he goug, a-dreñv he divskouarn. Se ne blije ket d'ar plac'h yaouank, gwelloc'h 'veze ganti 'n em gempenn hec'h-unan, met ar vamm a c'hrogne hag a lavare d'he merc'h, teurel pled penos e ve-fe lakaet ar c'hoef, pe, emezi, me hen adlakaio.

Ar gwiskamant krennardenn e veze re verr da zougenn koef ha mouchouar, ha setu' veze prenet dilhad nevez: ur gotilhonenn hir betek ar botoù, daou leo'had hanvez (war-dro 80 sm al lec'hed), doublet eus traoù diouzh tu an diabarzh gant doubleür satinet du.

25 pe 30 santimetrad uhelder. Ar vandenn a veze doublet gant lien kalet ha ridet ar vrozh warni. Ur c'hodell dindan gant danvez solut en tu dehoù, hag ar vandenn da brennañ en tu kleiz gant klochedoù hag ailhedenoù (neket gant " tēkoù ") (faos-godell a raed eus se). Ar GORFENN a veze plaen gant ur c'holler uhel start ha kalet, prennet gant klochedoù hag ailhedenoù, mañchom hir betek an daouarn; an DAVANJER teir gwech evit na vezont bremañ, gant godelloù bras hag un troc'h (=pez) butunalenn a dape tost d'ar groñj. Ar CHAL ne veze ket hir plaen, da dapout tost a-drek ar penn-glin, kroazet en a-raok war ar bruched gant ur vrochenn. Ur Botoù-Lêr uhel pa veze prennet ar botoù gant boutonoù war gostez an divesker, a veze graet dioute ur botinezoù; ar reoù prennet gant lasoù a veze un tamm izeloc'h. Un DISC'HLAVIER a veze dalc'hmat da heul

WAR HENT AN DIMEZIÑ

Pa veze krog ar plac'h yaouank da vont da heul an eba-toù, asambleoù, pe da bardonañ, neuze e komañse ar baotred yaouank d'ober dezhi " serr-lagad " pe " eskell ". Devezh ur pardon, goude ar Gousperoù en em vode ar merc'hed yaouank pe war vur ar vered, pe war gostez an hent dre 'lec'h ma tremene ar " bourmenadenn ": lavaret e veze eus se: kudennif, ober al liñs, pe " baleadenn ". Neuze e teue ar paotr yaouank da gaout ar verc'h en ur sevel e dog, ha goulenn diganti an enor d'ober ur valeadenn en he c'heñver; ar plac'h pa veze ar paotr d'he grad, a veze pres a-walc'h warni da reiñ dezhañ he disc'hla-vier ha da gregiñ en e vrec'h ha d'ober an dro. Met a-wechoù pa ne blije ket dezhi an neb deuet d'he c'haout, ha pa n'ae ket gantañ, se'oa reiñ dezhañ ar c'hrabestr (kabestr); neuze ez ae ar paotr kuit pinous ha drouk-kontant.

Met p'en em blije an daou zen yaouank, e veze graet meur a dro asambles ha neuze e veze " regalet " ar plac'h yaouank: paeet e veze dezhi kraoñ. Ne veze ket diaes kargañ godelloù rak 20 kraoñenn a veze evit ur gwenneg ! Ha kraoñ da chaokat e-pad ar sizhunvezh ! Met war bord an hentoù bras e veze kalz a dud deuet da gestal kraoñ (bugale hag all) ha neuze c'hoant dezho gwelout piv 'veze kavalher homañ ha piv veze kavalheraz hennezh ! Ha lavarout traoùigoù dioute evel just, evel bremañ ! Ar plac'h yaouank avat, ha ne veze ket erru er gêr a-raok ma veze sonet an Anjelus a gleve he " Santa Maria "

*

Daoust d'ar re yaouank d'en em gerout ha d'en em glevout ne gredent ket komz eus netra ouzh ar re gozh. Met pa vezent

en oad diouzh dimeziñ, ma vezent 'en em glevet mat ha karantaz a-walc'h an eil evit egile, ma ne gredent ket komz d'o zud, e veze klasket ur " Vazh-Valan ", ur vaouez erru war an oad, lañchennet-mat, hag a yae da gomz da dud ar re yaouank o deveze graet an daou zen yaouank-mañ promesa da zimeziñ. Graet o deveze an daou zen yaouank-mañ " asinasion " d'en em gaout e ti ar vazh-valan ha da glevout evit ar re vras. En deiz-se e veze bet keloù keloù-mat. Neuze e koseurt diviz a veze bet pe veze ken ar paotr yaouank da dos-mañse an traoù da stardañ. N'en deveze ken ar paotr yaouank da do-taat da di e vestrez, da vont d'he c'herc'hat ha d'he degas d'ar gêr.

Pa'z ae mat an traoù, neuze e veze komzet eus ober GWELADENN da di ar plac'h yaouank, hag an deiz-se e veze an intent etreze: pegoulz e vije an deiz da lakaat an anvioù. DEVEZH AN DIMEZIÑ 'oa an deiz ma veze lakaet an anvioù, deiz ar PROMESAOU. An devezh Sa-dorn e oa an deiz da lakaat an anvioù evit an dud vihan, hag ar Yaou evit ar re vras. En deiz-se e veze graet un tamm pred da ZANVEZ AN OZHAC'H YAOUANK ha d'e dud ha d'en daou ZEN-A-ENOR (paotr ha plac'h) Neuze e ead war an troad (na petra'tal, d'ar bourk da gaout an Ao. Person d'ober an difraoù a oa ezhom (paperoù, oad, hag all). A-wechoù pa veze d'ober gant tud vras (a renk uhel) e teue ar PER-SON betek ti an Dimeziñ, d'en em glevout diwar-benn an EURED da ve-zañ.

Ha diwar-benn an EMBANNOU: pet gwech e vije HOPET warno, an ofereñn-bred: teir gwech evel just ! tri sulvezh diouzhtu. Ha pa veze bet an eil " HOPADENN " e veze poent ober ar pourvezansoù - nemet mont a raje an traoù da fall, rak an hini deuet keuz dezhañ e yae da zispenn ha mat a rae (rak gwell distreiñ diwar hantez-hent evit ober ur gwall veaj !), met ar 'frejoù' veze bet betek neuze a veze war e gont da baeañ.

*

Dre ma tostas deiz an EURED a veze poent d'an DANVEZ-PRIEDOU plediñ gant ar POURVEZANSOU, ar PRENAÑ DILHAD, OBER MARC'HAD EUS ar PRED-EURED, PRENAÑ GWALINIER, PEDIÑ an dud da zont d'an eured (rak dre gomz e veze graet ha n'eo ket dre lizher evel bremañ).

Ar Paotr yaouank hag ar Paotr-a-Enor diouzh e du, ar Plac'h yaouank hag he Flac'h-a-Enor diouzh hec'h hini, a veze a-pad un devezh pe zaou oc'h ober an dro war o zroad (evel just !) a di da di o c'herent hag o mignoned. Ar Plac'h-a-Enor hag e Lan-a-Enor a gaozee evit an DANVEZ-PRIEDOU: ar BEDENN e oa. Eval-hen e lavarent:

" Ni'zo deuet d'ho pediñ da zonet da ajistañ an danvez-gwreg-mañ (an danvez-ozhac'h-mañ) pehini 'vo euredet dilun gentañ, an iliz iliz-Tonkedeg da 9-eur. Ar 'red a vo servijet an ostaleri (e-lec'h ma veze). Ur pred evit paeañ e vo, mar plij ganeoc'h. Ha neuze pet a zeuio dimeus an ti-mañ ".

Ret-mat e veze gout abalamour da reiñ da c'hout d'an ostiz n' gont aon d'ober frejoù en tu-hont d'ar pezh a veze ezhomm, rak paet e veze d'an ostiz evit an niver a dud degemennet, hag ar boued a vane a veze dezhañ hag ar frejoù war gont **an DUD NEVEZ**.

AR GWALINIER a veze prenet diwezhatañ ma veze gallet (doan a veze cheñchamantoù !) Da bremañ ar gwalinier ez ea an DANVEZ-PRIEDOU, an DUD-a-ENOR (an tadoù hag ar mammoù pe blije gante) An DANVEZ-'N-OZHAC'H YAOUANK a baee ar gwalinier: div e veze da bremañ. Ne oa ket kont evel bremañ: an danvez-gwreg yaouank ne zouge gwalenn ebet ken 'veze devezh hac'h eured. Div walenn eta: un " aliañs " hag ur walenn bennet (homañ gwalenn ar bromesa) " Fleur-Drañjez " a veze prenet ivez d'ober ar boked-eured a veze staget ouzh bandenn ar wreg yaouank, hir pe hiroc'h da ziskenn tost da draoñ ar gotilhonenn (Araok ma kroge an Darn-soù diouzh an noz, e veze tennet ar c'hoef bras, ar mouchour hag an davanjer ha neuze e veze lakaet ar boked-Eured-se a-dreuz war bruched ar wreg nevez, e-giz ma vez he seizenn gant Miss-Frañs bremañ !)

An dud-a-enor hag an ozhac'h yaouank o deveze ivez ur boked bihan ouzh o c'hostez - reoù an dud-a-enor a veze bihañ noc'h. An tri boked-se a veze rost war ar marc'had gant ar marc'hadour. An danvez'n ozhac'h yaouank a vire ar gwalinier ken ma veze kistion d'o lakaet war an asied da vennigañ deiz an Eured.

AN EURED (1*)

Ar " C'HONTRAD " da lavarout eo ar SKOULMen ti-kêr a veze greet araok an EURED en Iliz, alies an deiz a-raok. Neuze deiz an Eured diouzh ar beure en em gava e ti ar plac'h yaouank, ur muziker da vezañ paet gant an dud-a-enor a veze da heul gant akordeoffs pe violoñs. Er penn a-raok an tad o konduiñ e verc'h d'an iliz, ar paotr yaouank a-dreñv gant e vamm diouzh-tu goude an tad hag e verc'h; an dud-a-enor ha goude pep hini e-lec'h ma tegouezhe

Goude ofarenn an Eured e veze da vonet d'ar sekretari da sinañ - lakaet ar gordenn 'n o goug !- Greet ar skoulm gant e deod na vo diskoulmet gant e zent.

An Eured (1*) O vezañ ma vank plas dimp en niverenn-mañ eus Barr-Heol e vo moulet war an niverenn-da-zont, ar pezh a sell ouzh GWISKAMANT AR WREG Yaouank hag ivez ROLL-MEUZIOU boutin an darnvrasañ eus ar predoù-eured.

Evit ar PRED-EURED... Araok ma veze servijet ar C'hafe e pred bras an Eured (da greistaiz) e teue an ostizez gant un asied d'ober tro an daol, an ozhac'h yaouank en he c'heñver gant ur baner vihan da zaspugn an arc'hant. Pep hini a lakae e volontez an tu-hont da 14 real (priz ar pred), an hini a oa largentezus a lakae ur pezh 20 real, pe 2 skoed. Neuze e tape an dud nevez o jeu a-benn an deiz warlerc'h (DEIZ AN ADEURED) rak deiz an adareud ne zeue ket ar plad en-dro, met an deiz-se e veze kontet goude ar pred, an arc'hant bet dispignet evit ar boued ha renket ar c'hontoù.

Deiz an ADEURED c'hoazh e veze ivez tro ar Re Varv. Servijoù e veze lakaet evel bremañ, ha goude ar servijoù e veze an Aotrou Person da baeañ ivez: Oferenn an Eured, an Embannoù hag an Oferinier. Ha setu echu ar frejoù evit an DUD NEVEZ.

Bremañ an DUD-a-ENOR o deveze frejoù ivez. Goude an ofarenn-eured o deveze gwinn gwinn da baeañ da dout an dud a veze deuet d'an eured, hag ar sonerion ivez evel m'emaomp o paduz markañ a-us, ha regalif meur a hini e zeu da SOUBENN AL LAEZH.

DA SOUBENN AL LAEZH e teue kalz a dud yaouank ha war-dro 9eur pe 10 eur noz, krog an dañgoù pell a veze, e veze klevet trouz kozh pilligoù-toull evel taboulin, boutailhoù difoñs evel kornioù hag all. Neuze e vez prenet an nor war an dud nevez hag ar re a veze war o zro e-diabarzh an ti; ha paotred soubenn-al-laezh er-maez a stage gant ar son. Setu tammoù anezhi:

Kaner	Soubenn-Al-Laezh	Kaner
Digoret dimp ho tor		Ni n'omp ket deut amañ
M'ho pez ar vadelezh(bis)		En aviz d'ober poan
Ma rin deoc'h an taffva		Deut ec'h omp da bourmen
Eus hon soubenn-al-laezh		Pa'z eo debret hon c'hoan
An Den Nevez		- id -
An nor-mañ'zo prenet		Pa zimez daou zen yaouank
Gant klochedoù arc'hant		E kêr pe war ar maez
Ha ne vo digoret		E teuomp goude koan
Ken ma vefomp kontant		Da zegas d'ê soubenn-al-laezh
C'hwil zo deuet eze		.. Neuze 'vez ar wreg yaouank
'Vel ur vandenn laeron		Kalz gwelloc'h magerez.
Mar deufe'n archerien		...
'C'h afec'h tout d'ar prison		

An oa(zh)c'h yaouank
P'en devo soubenn vat
A raio ur c'havell
Aezet da ruskellat

An Den Nevez

Te avat, ma mignon
Ac'h eus un teod mat
Lavar din penaos lakaet
Tregont houad
Da vale dre ar prad
Ha na zeufe hini da g..

*
Anat deoc'h e veze kanet ivez e-kerz ar pred-eured, ha soñj
am eus un tamm eus ar son a gane ma zad en euredoù, setu hi
amañ, avel m'am eus soñj.

SON AR BAURENTEZ

1
Fañch ar chikar 'zo dimezet
Kalz a dud a oa pedet :
Tri bilhaouer, ur c'hvak-aotro
Kokariko-Kokariko

2 2
Faro'oa Fañch deiz e Eured
Botoù-lêr toull, ur gozh roched
Ha fall-tre foñs e vragc
Kokariko-Kokariko

3
Preparet e oa evit mern
Nebeut a gig kalz a eskern
Hag ar rest a vakaro
Kokariko-Kokariko

4
Pa oa dispaket an doubier
Al laou a rede teir ha teir
Hag ar c'hwen a rae lampo(=lammoù)
Kokariko-Kokariko

5
Neuze pa oa debret ar pred
Ma deut Fañch d'ar ger gant e wreg
E roe dezhi koad-boto

(1*) Lezet hon eus ar son e-giz ma oa, gant he gwerzennoù dizam-
par ha diglok.

Ar C'haner

O ya, me 'laro dit-te
Penaos e vefe graet
Fri an eil e r..egile
Aneze've lakaet

- id -

Fri an eil e r.. egile
Adalek ar c'hentañ
Ha da fri-te'vo lakaet
En hini diwezhañ.

(1*)

6
Na pa oa aet Fañch da gousket
Troet e gein d'e baour-kaezh gwreg
Ur pezh chek-butun 'n e c'heno
Kokariko-Kokariko

7
Hag an deiz war-lerc'h ar beure
Ne oa na soubenn na kafe
Ne oa tamm 'bet an ti
rikiki-Kirikiki

8
Met'barzh nav miz goude'n eured
Ur paotrig koant a zo ganet
Ur pezh chek-butun 'n e c'heno
Kokariko-Kokariko

O O O

Goude ma veze echu da ganañ son soubenn-al-laezh e veze di-
goret an nor dezhe da antren hag an dud-nevez neuze da dañva ar
soubenn: en ur skudell e veze hag ul loa doull e-barzh, na chome ket
kalz a dra e-barzh pa veze erru e-tal ar genoù; met trawalc'h e ve-
ze rak treut ha kreffv a veze ar soubenn-se, pebr hag holen davat
enni. An neb a gare a dañvae ar soubenn. Goude-se neuze e veze dañ-
set adarre pep hini betek an eur ma kare.

An den yaouank p'en deveze konduet e wreg da di he zud, a
zistroe d'ar gêr, rak ne oa ket ar c'hiz da chom da gousket asam-
bles, ken deiz war-lerc'h devezh an Adeured. Neuze ec'h ae pep hini
d'al lec'h m'en deveze da vont pe d'o zi o-unan pe da di o zud.

Janed FLOUR, Bulien, 9.2.68

Notennoù. Miret hon eus gwellañ m'hon eus gallet doare-kon-
tañ ha displegeañ hor c'henlabourez, ha miret he yezh ivez, koulz
kavarout penn-da-benn nemet hon eus he skrivet ar yezh peurunvan
pe dost en ur virout un nebeut gerioù ha troioù tragerisk-rik.

An neb a garfe kaout diskleriadurioù war boent pe boent eus ar
studiadennig-mañ a warinoniez a c'hello skrivañ war-eeun da reher
Barr-Heol. Degemeret mat e vo ivez evezhiadennoù ha klokadurioù
an dud barrek war an danvez-se.

KLERG.

x
x x

BARZHONEGOU (R.Hemon) ~~Dastum~~ madenn glok, embannet gant al LIAMM Priz war baper boutin :16 Lur, war baper kaer Johannot niverennet: 22 Lur. Gwerzh: M-elle Queillé, 47 Rue Notred Dame. Guingamp (Gwengamp). K.R.P. 1136 82 Roazhon (Rennes)

Pep hini en devezo c'hoant da gaout en ur stobad ar barzhonegoù-se d'o studiañ e-keñver menozioù ha micher. ~~Kerse~~ eo gajimp-avat, n'eo ket bet enklozet en DASTUMADENN-mañ ar berlezenn ORFEO hag HERODIS (al Liamm, Niverenn 51 Gouere-Eost 1955); marteze abalamour n'en deus ket R.Hemon tennet danvez ar bravig-mañ dioutañ e-unan, met aes-tre e vefe ~~bêt~~ pardonñ dezhañ al laeroñsi dinoaz-se !

METHODE RAPIDE DE BRETON (R.Hemon) hevelep chomlec'h. Hor gourc'hemennoù d'al LIAMM hag a oar hep trompilhadek na taboulinadeg na sikour a-berzh-stad moalañ labourioù talvoudus. Pegoulz eta e welimp e gwerzh bandennoù-magneto fon pe bladenoù warno enskrivet COURSELEMENTAIRE DE BRETON?

EMGLEO BREIZ . Trugarez da EMGLEO BREIZ evit e hetoù da VARR-H. evit 1968. Ur stobad paperoù diwar-benn ar Mennad-Lezenn a-du gant yezhoù ar minorelezhioù e Bro-C'hall **bet moulet gant E.B.** hon eus resevet a-berzh ar c'hevredad-se. Lakaat o zroad er pal, hep spontañ tudigoù'zo, setu, anat, ar c'hinnigoù a reont. Gant gourdrozoù avat, damguzhet evit c'hoazh. Ne chom ket sekretourien E.B da ehanañ. Gwell d'hor meno, ober raktal gant OKITANEG hag OKITANIA eget gant OKSITANEG ha OKSITANIA, evel ma reer bremañ gant SKINWEL e-lec'h pellwel. Skinwel n'eo ket disi, met re strizh ez eo tachenn ar ger pellwel. Hor gourc'hemennoù da EMGLEO BREIZ evit ar boan a gemeront, hag o labour.

AR ROZENN ZU (gwelout paj.34) Goulennet hor boa digant an Itron Roisin Ua Thuana- mamm Nassa Ni Thuana - muzik ha gerioù ar ganaouenn-se Roisin Dub. Dres p'emaomp o skrivañ ar bajennad diwezhañ-mañ, setu o tegouezhout ganeomp ar ganaouenn gant un droidigezh e brezhoneg mat diwar dorn an Itron Roisin Ua Thuana. Re ziwezhat. Spi hon eus e c'hellimp he moulañ un dro bennak. Mil bennozh Doue d'an Itron Roisin.

=====

KOUMANANT BARR-HEOL: an holl goumanantoù da VARR-HEOL a grog gant hini kentañ ar bloaz (Miz Meurzh). An ARC'HANT a vez da gas d'an Teñzorer. Ar PENNADOU-SKRID d'ar pennskrivagner: Barr-Heol, Bulien 22-LANNUON. Trugarez en a-raok.

=====

Rener:M.Le CLERC, Person, Bulien 22,LANNUON, Bro-Dreger

BARR HEOL



Directeur : M. LE CLERC, recteur Buhulien 22-LANNION
N° 56, Juin 1968, Trimestriel, Prix du N° : 3 Fr 5

RENER-FENNSKRIVAGNER: M. Le Clerc, Bulien, 22-LANNION
Niverenn : 56, Miz MEZHEVEN 1968, Trimiziek

=====

KOUMANANTOÛ :

Koumamant ordinal : 10 Lur, Broioù Estren : 12 Lur

" Barr-Heol " Crec'h Avel, 22 LANNION

K.R.P. 245 453 Roazhon

COMMENTARII IN LINGUA BRITONNICA EXARATI
REVUO KVARONJARA EN LINGVO BRETONA

BARRE-HEOL

War Feiz ha Breizh

TAOLENN

(1	Ur Gouarnamant e Breizh	p.	2)
(2	Liderezh Nevez		6)
(3	Liderezh e Yezh ar Vro e div Barrez a Vreizh		8)
(4	Anvioù-lec'hioù		12)
(5	Ar Jeneral Sol de Grisolles... P. Bourdellez.....		13)
(6	Un nebeudig menozioù.....		17)
(7	Okitania.....		18)
(8	A-hed an Deizioù..... M.Barz.....		20)
(9	Me'garje bout.Abardaez-Sul,Stered ar Prad..A Duval		28)
(10	Ghazir.....Dr.A.G.....		30)
(11	Kludennoùigoù e Yezhadur Brezhonek.....		35)
(13	Keleier a Vreizh (Beilhadegoù.Kendalc'h Keltiek		38)
(Kamp ar Vrezhonegerion.Devezhioù-Studi. A.D.R.E.C))
(14	Barr-Heol.....		39)
(15	Ur Pok Kentañ..... son gant Yann Derrien.....		40)
(16	Pedenn war an Akropolis..... E.Renan.....		42)
(17	Krennlavarioù Kembraek.....		46)
(18	Keginerezh..... S. Tieg.....		51)
(19	Furchadeg e ti ar Person (Goulmig ar Gindi).....		52)
(20	Va C'hi Fido..... Anjela Duval.....		54)
(21	Soubenn al Laezh..... Herve ar Menn.....		55)
(22	Kustumoù ha Gizioù kozh Bro-Dreger...J.Flour.....		57)
(23	Parabolennoù: Ar Skolioù, ar Ministr, An Nekropo-		60)
(lis (Koulmig ar Gindi))
(25	Ul Levr (R.Lafont)..... J.C.....		68)
(26	C.B.L. (lizher)..... Yann Goulet.....		69)
(27	Merched Y Wawr..... Siani Roberts.....		70)
(28	Kuzul ar Brezhoneg.Embannadurioù.Keleier.....		71)
()

2 UR GOUARNAMANT BREIZH

C'hoarzhin a rae ar baizanted a galon vat, d'ar sul 28 a viz Ebrel, pa glevjont abred diouzh ar beure ar c'heloù e oa bet plastiket en un doare ampart-tre, gant tud-a-vicher hep mar ebet, tankaridi bras kazarn ar C.R.S-ed e St Brieg. Dreist-holl ar re o devoa bet ur mestaol bennak war o genoù pe a oa deuet kamm d'ar gêr gant kribenn o gar kignet gant un tamm houarn eus ar greundennoù-daeraouiñ, goude manifestadegoù bras Kemper ha Redon. N'eo ket mui farsal eo a ra an F.L.B.: 100 milion a frejoù, en arc'hant kozh, da sammañ war chouk an druajerion, ne vern penaos, da vihanañ mar bez lezet an destumerion-dailhoù d'ober o labour e peoc'h, rak krog e vezer ganto ivez, hag a bep ail ez a en aer tiez-an-tailhoù: Darileg, Pleiben adarre nevez'zo..

Pazenn ha pazenn an taolioù-nerzh o vont war washaat... Ha lakeet war gont an F.L.B; e gwir pe e gaou, rak techet eo an dud da grediñ en em guzh meur a strollad dindan an anv-se. Bep tro e lez paotred-an-nerzh ur merk bennak sinet F.L.B. Ha Yann Goulet, diouzh e du, oc'h embann eus Iwerzhon ez eo a gwirionez gant tud eus an F.L.B. ez eo bet kaset ar gwall-daolioù da benn. Da zebrif ha de evañ ez eus, ~~muarvat~~, en holl ziskle-riadurioù. Gout a oar marteze ar polis haroc'h eget na fell dezho lavarout hag emaint o c'hortoz evit ma vo brasoc'h ha ponneroc'h o rouedad-pesked.

Anat eo ez eo an nerzh un tu dispar da vezañ selaouet. N'eo ket bezañ a-du pe a-enep ez eo diskloriañ kement-se: un dra gwelapl ez eo. E-pad ar sizhunvezh etre ar 5 hag an 12 a viz Mae ez eus savet mesk e Pariz gant ar Studierion. Kann ha bazhad etrezo hag ar boliserien. Da gentañ e veze graet chas klafv anezho, speredoù-treuz, pennoù-foll, tud yaouank hep ski-ant-prenañ ha na ouient ket zoken petra'felle dezho. Met a-benn an diwezh, setu ar Gouarnamant, ar Parlamant, ar C'hostezennoù Politikel, ar C'hazetennoù oc'h anzav e oa traoù er Skol-Veur na oant ket mui diouzh an amzer o ren ha diouzh ezhommoù gwirion ar Studierion. Evel ma leverer, an nerzh a bae pe gentoc'h a vez paset. Kement-se n'eo ket mui Demokratelezh, met evel-se emañ kont, rak "erru ur gont vez, ez a ar paour e gouez", hervez ur c'hrennlavar a Vro-Dreger. "N'eus sant ebet ha na glev, pa vez sachet war e grev!" eme ur c'hrennlavar all, ha setu perak emeur

3
o sachañ war grev ar Gouarnamant (ne lavaran ket ez eo hemañ ur sant avat!). Bez'ez eus tud hag a zo techet da veskiñ "proesionoù ha manifestadegoù!"

N'hell bezañ nemet ur pal, hag ur pal o tellezout emaberzh a-berzh ar vrogerourion, ur pal gouest da entanañ kalonoù ar Vretoned ha da reiñ dezho nerzh ha youl a-walc'h : ur Gouarnamant Breizhat, un Demokratelezh vreizhat, ur Republik breizhat -rak ne dalvez ket ar boan esperout e savo ur Priñs bennak war drou Rouaned ha Duged Vreizh! **Ar Vretoned mestr er gêr, war o zraoù, libr a-walc'h da skoulmañ gant ar Broioù estren ar marc'hadoù, an emglevioù a vo diouzh mad ar Gumuniezh Vreizhat, libr a-walc'h da vinelliñ kevredadoù bras an arc'hant da virout outo da gabestraf ha da chaden- nañ ar Bobl hervez o c'hoant. Ur Gouarnamant o kaout dileuridi er broioù estrañjour, hag er c'hevredadoù bras etrevroadel evel m'he deus da skouer Bro-Iwerzhon. Ur Gouarnamant o ren Ekonomiezh ar Vro, ya, gant sikour ar C'horfoù bev etre, hervez kelennadurezh ar Pibien. Heñvel a c'heller lavarout e-keñver AR SKOLIOU.**

Geriou evel "rannvro, rannvroel, rannvroelezh" n'o deus ster ebet. Keit ha ma vo Breizh ur "rannvro" eus Bro-C'hall e vo urzhiet pep tra diouzh raktresoù Pariz, ha n'eo ket un dornad kannaded ha dileuridi vretan e vo gallet enebañ ouzh youl kannaded ha dileuridi all 10 gwech niverusoc'h egeto. Lezenn ar muiañ-niver, ar vajorelezh eo a chomo ganti ar ger diwezhañ. Tammoù adkempennadurioù d'ar raktresoù savet gant teknokrated Pariz a c'hello marteze bezañ graet, met palastr ar wrac'h war ur c'har-goad ne vint ken. Dav kaout gerioù nerzhusoc'h da verkañ petra eo Breizh ha petra'fell dimp ti-zhout : Bro-MammVro-Broadelzh-Stad-i-Gouarnamant. Lavaromp sklaer eta e fell dimp kaout n'eo ket ur Gouarnamant Rannvroel met ur Gouarnamant Broadel.

Hogen arabat ankouazh ger-stur Staline: "Ober ur pennad-hent gant an hini a c'hell ho sikour keit ha ma c'hell-efñ mont ha goude kemerout ur c'henveajour all evit derc'hel da vont keit ha ma vo kontant da vont!" Setu perak ez eo dav dimp diwall da gondaoniñ tud a-du gant menzioù hag e seblant gwan d'ar vroadelourien. Ober hent ganto keit ha ma c'heller, setu ur reolenn-aour. Gwir eo o devozo poan ar "rannvroelerion" oc'h asantiñ kenlabourat gant "ekstramis-ted" gouez dezho; met eo chom ivez hep "sevel en e avalann" pa skoer ar ger ekstremist -se e-kreiz ar vizaj. Dav sellout ar "gunjenn-se" evel un enor, ober mar galler ur c'hruz d'an divskoaz ha derc'hel gant al labour-dieubiñ; ha c'hoazh un dra dispar e vefe respont gant ur fentigell hegarat da glask gont grasoù-mat an hini na wel ket an traoù gant daoulagad ur broadelour.

Evel just, bep tro ma ra an F.L.B. un taol-trafalgar bennak e sav ar Breveded (estañjourion e Breizh, n'eus forzh penaos hag e servij o bro o-unan!) o mouezh; hag ivez ar Barlamentourion o tonia^{gant} Hogen dever pep broadelour a zo klask an tu pozitivel e kement-se e-lec'h kondaonif ha sevel e vouezh a-du gant servijerion Bariz: digareziñ paotred an taolioù-nerzh ha displegañ an abegoù don eus o jestroù. Rak ne vern penaos na c'hwia na me n'hellimp mirout an emsaverion guzh da c'hoari gant an nerzh, mar o deus dibabet an hent-se. Rak a-benn ar fin ar re a zo da demell ez eo ar re a zo kiriek d'an dizurzh a zo e Breizh dre faot o folitikerezh. Hag un den evel an Ao. Foll, depute-maer St Brieg a zeuas end-eeun komzoù fur-tre gantañ goude taol Sant-Brieg o tiskleriañ e oa poent ober un dra bennak a-du gant Ekonomiezh ha Sevenadur Breizh, hag o tiouganiñ e oa gwashoc'h da c'hoarvezout na ne vije graet netra e koulz. Dav teurel evezh ouzh komzoù an Aotrou Foll-se, hag eñ P.S.U. pa gomz ivez eus SEVENADUR, eus KULTUR.

Rak c'hoazh ur wech arabat lezel an dud da grediñ ez eus d'ober gant ur gudenn a EKONOMIEZH hepken, pa gomzer eus stad fall an traoù e Breizh. Na c'hell den ebet, evel just, nac'h peger pouezus ez eo kudenn an Ekonomiezh e Breizh, pa soñjer e talc'her da zivroañ, pa ouzer penaos diwar an holl dud dilabour a zo e Breizh : 31 % a zo tud yaouank. Gobarriet fall-tre ez eo an traoù. Hogen ne vo yac'h an EKONOMIEZH nemet pa vo yac'h Spered ar Vretoned, da lavarout eo pa vo kin-niget ur pal a dalvoudegezh d'o buhez, ur pal ken kaer ma raint a galon laouen ar sakrifisoù a vo ezhomm da adsevel o bro. Anez ur Gouarnamant ne vo tizhet na diazezet netra badus; anez an enor hag al lorc'h boadel - en ur ster reizh hag onest, e chomo ar Bobl vreizhat da louediñ pa da zizeriañ evel kozhidí en un ospital.

*

Ur gammed vras a zo bet graet war-raok abaoe un nebeut bloavezhioù : sellit da skouer gant pebezh hardizhiegezh e skriv L'AVENIR DE LA BRETAGNE diwar-benn ar Stad Vreizhat. Sellit ouzh AR STUDIER (Genver-c'hwevrer 68) hag an DISKLE-RIADUR o talvezout da bennad-stur: o c'houlenn ur PARLAMANT - rannvroel, gouez dezho, met evelkent ur PARLAMANT. Menozioù evel-se a zo sur da doullañ o hent betek speredoù ar Bobl. Ret eo d'ar BOBL o degemer, rak hep ar BOBL e vo diaes c'hoari. Evel just pa oa krog Iwerzhoniz d'en em sevel a-enep Bro-Saoz e oa ar BOBL a-enep an " ekstremisted ", ha deuet int a-benn evelato da c'honit an trec'h, met e gwirionez diwar goust rendaeoù gwadek

a vije bet gwelloc'h tremen hepto.

Ur Reveulzi a zo d'ober e Breizh ha n'eo ket hep poan e vo graet, gant ar c'hontammet ma'z eo ar speredoù. Met bezomp war e-vezh dalc'hmat da reiñ ur ster, un dalvoudegezh breizhek d'an holl zarvoudoù evit deoc'hel dihun hor Pobl hag he dizampoezonif.

*

Evit ober gant ur frazenn lavaret gant de Gaulle " Breizh a zo evel ul lestr sanket an aroz anezhañ e koumoù ar mor Atlan-tel ! " Ya ul lestr hag a vo dambrest sturiet gant ar Vretoned o-unan hep emell ebet a-berzh ar C'hallaoued nemet e kement ha ma ka-ro ar Bobl Vreizhat hag ar Gouarnamant Breizhat.

X...

Goude-skriz : Peurskrivet e oa bet an niverenn-mañ dres goude em-savadeg ar studierion e Pariz, a-raok ma tirollje ar Reveulzi war an tachennoù all eus ar Gervredigezh. Ne oa tu ebet da adober holl labour, ha c'hoazh hor boa daleet un tamm kent tennañ ar stensil-mañ, da welout penaos e troje an traoù goude diskleriadur de Gaul-le er Skinwel hag er Radio: 24 a viz Mae 1968... Hogen e-giz m'emañ ar stal gwelloc'h peurvuolañ BARR-MEOL. Un testeni e vo hepted I FAZI: reizhañ pajenn 4, linenn 8: mirout OUZH an emsaverion guzh

=====

Pajenn 42 AR BEDENN WAR AN AKROPOLIS

Titl leun : Ar Bedenn a ris war an Akropolis goude ma oan deuet a-benn da anaout ar Gened Peurvat
lenn pajenn 44, linenn 8 : Te hag a zo ez tad unanet-klok gant e anien.

+++++

TITLOU HA TRESADENNOU GANT ERWAN GERVILLA EUS A LANNON

LIDEREZH NEVEZ

Anet eo ez eus darn, draist-holl, e-touez an dud yaouank hag a gav diaes gwelout pegen gorrek ez a war-raok al labour a reer evit brezhonkaat Pedennoù al Liderezh. Trawalc'h e vo d'hol lennerion ober ur sell war al lizher moulet pajenn 71 eus ar B-H -mañ bet kaset da Eskibion St Brieg, Kemper, Gwened, an Naoned, Roazhon, hag Eskob-skoazeller Kemper, hag ivez da Gannad ar Pab e Pariz (an Aotrou Bertoli) evit hen santout muioc'h ha gwelloc'h a se. A-benn bremañ o daus embannet ar C'hallaoued levrioù ken bras ha ken kaer hag ar **Misaliou** Latinek kaer a veze gwelet betek nevez'zo war aoterioù ilizoù ha chapelioù Breizh-Izel. Ar re c'hallak o deus bet distroadet ar re latin. Kaer ha devoa bet Komision al Liderezh degas da soñj e oa mouladurioù gallek eus an ofisoù hag ar c'hantikoù gant ur stagadenn vrezhonek: ur vouezh o youc'haj er gouelec'h setu petra eo bet evezhiadenn ar Gomision; ha ma ne gredit ket, grit eta ur sell war al levrioù a vez roet d'an dud evit an ofisoù hag a gavot e traof an ilizoù pe o ruihal war ar c'heñder. Trist a-walc'h, ez eo ivez resev a-greiz ho labour hag ho trevell pemdeziek S.O.S-où digant tud yaouank war zimeziñ pe zoken personed bet goulennet brezhoneg diganto evit euredoù pe vadeziantoù. Trist ha kazus-meurbet Nag ur c'holl-skiant hag ur c'holl-amzer, Santez Anna venniget!

*

Ret eo evel just d'ar re a gav diaes seurt traoù kompren pebezh samm, pebezh karg ez eo kas da benn troidigezh an Ofisoù! Dav ez eo bezañ gwelet gweñhañ strobadoù-paperoù a zo bet aozet gant ar sekretour e-unan evit esa lakaat war he rez troidigezh ar **BE DENN EUKARISTIEL**. Dav e oa deskif labourat war un dro, kenlabourat war un dro, ha meur a wech e deo an abadennoù-labour a veze muioc'h hañval ar c'henlabour ouzh tournamantoù ar Grennamzer eget ouzh mann ebet all!

Fazioù avat a zo bet graet, sklaer eo, hag ar brasañ fazi ez eo bet lezel a-gostez paotred Gwened. Ha setu penaos goude ma oa bet aozet un droidigezh dereat eus ar **BE DENN EUKARISTIEL**, pa'z eus bet goulennet o ali digant Gwenediz, e oa bet ret ad-kempenn meur a dra. Hogen arabat kredif ez eo abalamour d'ar yezh e c'houlenne Gwenediz ar c'hemmoù a gavent e oa dleet o ober, met dreist-holl dre n'o devoa ket labourat hervez reolennoù-labour ar Gomision Etre-eskoptiek, enni beleion a Gemper hag Sant-Brieg.

Gant ar c'hoant d'ober un droidigezh disiñ (ar pezh a oa reizh-meurbet, na petra) ha diouzh grad an holl (ar pezh a zo ur

gont all !) ez eo bet adlakaet war ar stern hag adgraet a-blaenfont an droidigezh kavet mat e koulzioù an Nedeleg, kement ha ken bihan ken n'eus ket bet gallet ober emvod-labour ebet e-pad 5 miz, war zigarez kaout alioù ur bern kuzulierion ha poanial d'o segalif holl gwitibunan! Hag hini ebet oc'h ober gant ar brezhoneg pe dost!!

Bez'ez eus 2 veleg hepken (marteze 1 hepken) hag o deus implijet an droidigezh niv.6 bemdeiz, ha paogwir ez on-me unan anezho e c'hellan lavarout e c'helle tremen brav-met. Seulvui m'emañ Roma o paouez embann 3 Bedenn Eukaristial nevez. N'eo ket ar choaz a vank, ha dre-se ne oa ket dav, tamm ebet, d'hor meno, chom da galfichat kement-se al labour: anez en-em gavo ganimp ar pezh a oa en em gavet gant bazh ribot Mari-Job hag a oa aet taut e kalfichadur.

*

Pa soñjer n'hon eus c'hoazh troidigezh **OFISIEL** eus ar Beter Noster (gwir eo e c'heller ober gant ar stummoù anavezet gant ar bobl), hag evel just **TON OFISIEL EBET** kennebeut, rak stag ez eo an eil tra ouzh gile! Spi a zo e vo' graet kalz bravoc'h eget ar pezh o deus graet ar Frañsizion gant o Fater Noster hag a zo gouest da lakaat ar reveulzi e stripoù an nen, mann nemet ouzh he c'hlavet pa vez kanet, nemet e kavfe gwall tortañ gant ar fent d'an em zigompleksiñ!

*

Anat eo ez eus daou emzalc'h dre vras e-keñver ar Yezh: evit darn ez eo ar Yezh un dra eus an amzer dremenet, ha dre-se arabat degas gerioù nevez evel **PROFADENN, PEURBADEL, KEVREDIGEZH** he me'bar! Setu zoken ur c'henskriver o lavarout penaos un dro-lavar evel homañ **PEURBADEL GANEOC'H EN HO KLOAR** ne deo ket brezhoneg. Ma! evelkent! N'ouzon ket piv en deus savet(?) an dro-lavar-se, met n'eo ket me eo hag e kavan anezhi brezhoneg 100%. Touellet ez eo bet ar c'henskriver gant ar ger **PEURBADEL** implijet evit ar muiañ gant tud evel M. Glanndour, met ur ger da zegemer ne vern penaos ma'z implijer ar ger **PEURBADELEZH** evel da skouer e kantikoù **St BRIEG** ! ur ger degeret gant an Ao. Falc'hun, ezel ivez eus ar Gomision, ha kelenner war ar yezhoù keltiek e Skol-Veur Roazhon.

Evit darn all, **en e zouez tud ar GOMISION**, deuet a-benn goude tastornat un tamm d'en em glevout war ar yezh da implijañ, n'heller ober troc'h ebet etre ar yezh-pobl ha yezh al Liderezh. Hogen ar wirionez a dremen a-raok ar faltazi, ha lec'h ma vez ezhomm, hag ezhomm diremed koulz lavarout, neuze arabat kilaf rak ar gerioù ret ha rekis. Pe neuze e kemeromp horz pobl evel ur bagad bajanelen divarrek da uhelaat, divarrek da zeskiñ mann.

A-benn an diwezh n'eus nemet ur gudenn hag ur goulenn: daoust hag e fell d'an Iliz ober ma vo yezh vroadel Vreizh yezh al Liderezh, yezh ar Vuhez Spereidel evit pobl ar Vretoned ? Pe marteze, evit lavarout an traoù en ur stumm all, daoust hag e fell d'ar Vrezhonegerion ober ma vo o yezh vroadel yezh al Liderezh, yezh o Buhez Spereidel ? En deiz m'o devezo divizet grons ez eo kement-se a fell dezho, ma! neuze e vo diskaset an hent a-grenn d'ar re **karget** da brientiñ testennoù al Liderezh hag aezzaet en un doare **mezhas**.

Ar pezh a skrivan amañ ne deo tamm ebet mouezh ofisiel Komision al Liderezh; menozioù personel ez int; koulskoude ma **venher** ober labour badus ha n'eo ket ul labour a zalc'her hep paouez da ober ha da adober evel ma'z eus bet graet betek-hen, e vo dav kaout er GOMISION tud eus Breizh a-bezh, zoken liked, hag a ziviza, dindan renerzh an Eskibion, en un doare sklaer ha grons ar pezh a vo da lakaat en implij. Poent eo, rak krog eo an dud yaouank da skuizhañ.

Klerg.

=====

Un Testeni LIDEREZH E YEZH AR VRO E DIV BARREZ A VREIZH

Pep person a zo un tamm bihan mestr da ingaliñ an traoù en e iliz, evit an OFISOU. Kalz muioc'h a frankiz a zo bremañ eget a-raok, ha tamm ha tamm e franka, e ledana koustiañs an dud-a-iliz, hag e kredont ober traoù n'o devije ket kredet biken ober un 10 vloaz bennak. Daoust ma oa krog darn a-benn neuze d'en em zigabestrañ!!

Setu perak, ad experimentum evel ma lavarar, ez eus bet klasket e Bullien hag e Kaoueneg, skoazellañ an dud d'ober anaoudegezh muioc'h gant ar Skritur-Sakr, da lavarout eo, ar pennadoù a vez implijet evit an OFISOU. Ha graet ez eo bet kement-se adalek Sul ar Septujezim betek Noz-Fask. Troet eo bet an holl destennoù en doare da vezañ kanet a bep eil, evel Salmoù, mar kirit. Hag ur baperenn etre daouarn an holl, na petra 'ta!

Un tamm mat a labour aozañ ar paperennoù da reiñ d'an dud: treiñ, kempenn an droidigezh en doare da vezañ kanet a bep eil (ar person a ranke ober ul lodenn, evit abegoù'zo). O vezañ n'omp ket muzikerion dreist-ordinal, e Bullien, ez eo bet implijet un top anavezet gant an dud, daoust ma'z eo un ton bras ha hir un tamm.

Pelloc'h e pade ar ofisoù avat; ha dav e vije bet d'ar person berraat e brezegenoù e-lec'h en em ankouazh, evel ma ra a-wechoù; met gant an trevell a oa da brientiñ an ofisoù (liesskrivañ) a oa diaes kaout amzer da rageozañ sarmonioù berr ha fetis.

Petra'soñje an dud ? N'ouzon ket. Lenn a raent war o follinier ha kanañ a raent, goude un ali barr-tre (5 ger!) diwar-benn ster ar pezh ez aent da ganañ. Evel just, n'eo ket en ur ganañ ur wech an amzer, lodennoù eus Salmoù David, e c'heller kompren ha tañva barzhoniezh an Hebraed, barzhoniezh ken disheñvel diouzh hini an amzer a vremañ. Met se'zo ur gont all !

Hir-tre ez eo darn eus ar GRAZUALO ha TRAKTUZO, evel re Sul kentañ ar C'horreiz ha Sul ar Beuz. Kanet ez int bet war o hed. Na veze ger diaes ebet en droidigezhioù; gerioù evel BIR ha GWAREG avat, a zo'maez geriadur ar bobl, dre amañ. Petra'm boa graet? goulenn digant Erwan Gervella tresañ din ur BIR hag ur WAREG gant o anv en o c'hichen: kuit da goll amzer!

Ha peogwir am boa graet un droidigezh eus ar Salm 90 (91) a-benn sul kentañ ar C'horreiz, Salm hag a vez implijet ar C'HOMPLIDOU, petra'm boa graet? Adtremen war an droidigezh hag aozañ neuze (e lec'h ar re a gaver E SKOL, 1960, Kanaouennoù Santal ha Komplidoù ar Sul, ha na blijent ket din) un droidigezh eus ar Salmoù (4 & 133), hag abaoe e vez kanet ar C'HOMPLIDOU war o hed e brezhoneg.

E-sell edon abaoe pell'zo da ganañ ivez ar GOUSSPEROU e yezh ar vro, rak gouperoñioù a vez e Bullien a-wechoù! Met gant kement-se a labour ne oa ket aezet din **donet** a-benn. A-benn Sul ar C'hazimodo hor boa kanet ar 5 Salm war o hed hag ivez ar MAGNIFICAT. Un tamm gwigour a veze gwec'h ha gwec'h all, met n'eus forzh, kontant e oa an nebaudig tud a oa eno.

O paouez menegiñ ar MAGNIFICAT emañ. Hiviziken moarvat e vo kanet e brezhoneg, bep tro ma vo gallet da vihanañ. Rak kempennet e oa bet a-benn NOZ-FASK da vezañ kanet e-kerz ar GOMUNION. Hag ur paotr figus evel an Tad Kalvez, a lavare da c'houde, ne oa ket re zivalav...

Ur c'hwitadenn ez eo bet dre vras Lidoù Nevez NOZ-FASK dre ar vro a-bezh. Lidoù bet gourc'hemennet gant Roma goude bezañ klevet renaoù-kont re veulus, met lidoù re hir ha na lavaront ket kalz a dra d'ar bobl. War vezañ kement emaint, hervez a leverer. Ha m'am befe un ali bennak da reiñ war ar poent-se, e c'houlennfen ma vije aezet

lidoù berr a-walc'h hag a vije tu d'ober DEIZ SUL FASK, e pep oferenñ-bred, evel gant Sul ar BEUZ. Risklet-bras ez eo NOZVEILH-FASK, zoken ma vez aotreet hec'h ober deiz Sadorn-Fask da 9 eur -noz d'ober chat.

Kement-se am boa c'hoant da lavarout evit diskleriañ e oan bet kerseet o welout pegen nêbeut a dud a oa deuet d'an Ofis. Deuet e oa darn eus Breuriezh Sant-Erwan, met ar bobl ne oa ket deuet. En tu-hont d'al lennadennoù (2 hepken a oa bet lennet) e oa bet benniget an Dour-Meur e yezh ar Vro, kanet al Litanioù ivez, ar Salm 142 goude an Alleluia, ar Magnificat neuze evit ar Gomunion, hag ar Benedictus. Hag evel just ar Salm CLX. Met peogwir e oa paperoù da reiñ d'an dud, e oant bet implijet adarre a-benn an oferenñ-bred. Ha kanet ez int bet abaoe. Ha pa gomp en enor d'an Aotrou Doue :

Meulit anezhañ gant an taboulin hag an dañsoù !
e ran un tamm minc'hoarzh etrezek va zud yaouank!

Heuliañ a ra an droidigezh ^{dre vras} e-stenn ar C'hardinal Bea, ha moarvat e vefe mat he feurreizhañ. Kilet em boa dirak ar ger " fleüt " ha lezet OGRADU, da skouer. Daoust d'an doujañs vras em eus evit an destenn sakr, e soñj din penaos, ma vije bet ur Breizhad o hiboudiñ ur ger bennak e skouarn ar Barzh Yuzev, en dije asantet hemañ skrivañ :

Meulit anezhañ gant ar vombard hag ar binioù !

Met allaz! n'en deus ket graet ! Dre-se, da c'hortoz un droidigezh ofisiel...!!!

Da glozañ ar SALMOU e ser amañ gant ar pezh a oa bet kinnet da gentañ gant Maodez Glanndour: "Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'ar Spered-Santel * Evel ma oa er penn-kentañ ha bremañ ha da viken, a gantvedoù da gantvedoù. Amen." Alies e-lec'h KLDD e reomp gant GLOAR, met kudenn ebet amañ war ar poent-se. Ar stumm a gantvedoù da gantvedoù. Amen a zeu brav-tre gant an dud, bras ha bihan. Daoust ha n'eo ket Heuleitios mar na fazian ket, paotr ar Penta rhei, hag a zikoueze ez eus fiñv en traoù en ur gerzhet ? Mal e gwirionez, ez eus kudennoù hag a spont tudigoù'zo, hep abeg mat ebet.

*


Frank ez eo an dachenn ma venner e gwirionez diazezañ buhez speredel hon tud war ar Yezh: RITUAL gant ar pedennoù hag ar bennozhioù a zo ennañ, Ar Sakramantoù, Tonioù an Ofisoù ha na vint ket traoù pompadus evel an darn vrasañ eus ar pezh a glever bremañ evel pa vefe c'hoant da reiñ muioc'h a bouez hag a varzho-

niezh d'ur yezh plat evel ar galleg war-bouez stagañ outi tonioù brizh-veurdeus. Mat eo merkañ amañ n'eus bet embannet seurt ebet pe dost diwar-benn Ofisoù ar Sent hag ar Gouelioù abaoe m'eo bet embannet OFERENNOU AR C'HORAIZ, OFISOU PASK hag OFISOU AR PANTEKOST gant Barr-Heol (1965) tost da 350 pajenn. Anez, e oan evel ar re all, en hevelep pal hag ar re all, ha meur a hini ganin.

Embannet ez eusbet ivez gant Komision al Lidou-Sakr, e Bro-C'hall levrioù LENNADENNOU EVIT AN OFERENN WAR AR PEMDEIZ. Embannet evel kalz a draoù ad experimentum. Dervezhiennoù'vez e c'heller lenn ar pezh a zo merket el levrioù-se e-lec'h an hevelep ABOSTOLOU hag AVIELOU boutin merket evit gouelioù ar Sent, abalamour da lenn en un doare dalc'hus ha didroc'h a bep eil holl levrioù ar Bibl. E gwirionez ne gaver ket holl levrioù ar Bibl er mouladurioù a gomzen diwar o fenn. E-pad amzer-Bask evelato e lenner OBEROU AN EBESTEL hag AVIEL SANT YANN, ha neuze evit ar sizhunvezhioù goude ar Pantekost e lenner a bep eil pennadoù diwar LEVRIOU AN TESTAMANT KOZH ha diwar LIZHERI AN EBESTEL (Per, Yann, Jakez...).

Gant aotre vikel-vras St Brieg e ran gant an droidigezh prientet ganin evit tud va farrezioù hag ispisial al leanezed. Ad experimentum, na petra'ta! P'am bo ur sekretour a youl-vat e c'houlennin digantañ aozañ stensiloù evit BARR-HEOL ma c'hello ur belag brezhene-gour bennak en em servijañ eus va labour, hag ivez ar goumananterion a blij dezho lenn ar Skritur-Sakr. N'haller ket derc'hel da jezuzal, ret ober ur jeu bennak.

Klêrg.



ANVIOU LEC'HIOÙ

Evel ma oar an holl ez eo aes-tre faziñ pa studier hep dielloù an anvou-lec'hioù. Bet en deus hor mignon E. Barzig degaset dimp an notennoù-mañ a-zivout RUNAN. Anv parrez RUNAN a zo bet skrivet RUNARGAN ha RUNARGANT, evel m'am eus gallet lenn war baperoù kozh Kastell Leztrezeg hag evel ma lavar:

- S. Ropartz " Notice sur Runan " in Annuaire des C. du N. (1854)
- Abbé Louis Monnier " L'Eglise de Runan, ses origines, son histoire " in Revue de Bretagne, Vendée et Anjou (1900-1901). An Aotrou Monnier a lavar: " Runargant dans Charte donnée aux Templiers 1182 " pezh a gavas, emezañ, e " Mémoire sur les Commanderies de Malte, présenté au congrès de l'Association Bretonne à Quimper, en 1895, par le chanoine Guillotin de Corson ".

E-barzh unan eus paperoù Leztrezeg eus 1598: RUNARGAN. En XVIII-et kantved, ha kazi sur, er XVII-et e veze skrivet RUNAN. *

Ne oa displegadur BARR-HEOL nemet displegadur ar veleion gozh evel an Aotrou LEC'HVIEN (Doue d'e bardono !), klevet ganin e 1938: RUN AR GANN.

Evit ar pezh a sell ouzh MUR, eme E. Barzig, heuliet em eus: Ogée (Marteville et Varin), Jozeb Loth..., d'Arbois de Jubainville, Marcel Gautier, Abeozen, an Ao. Falc'hun. Me'gav din ez eo tostoc'h MUR ouzh Maros, mawr, Lanneur, barth mur, Breten Vur eget Magoar, Magoro, Magoarou, Mangoer. *

Evit bezañ klok ivez, ret lavarout, an devoa meneget E. Barzig va anv, en e levr war VUR, evel unan ha na oa ket a-du gant e ziskleriadur-mañ (paj. 87 sq. MUR DE BRETAGNE et sa région eil mouladur kresket da vat, 1956). Derc'hel a ran d'am diskleriadur evelkent peogwir emañ an dielloù a-du ganin ! *

Derc'hel a ra ar SKOLAJ VREIZHAT da voulañ rolloù anvou-lec'hioù, war ar c'hazetennoù - trugarez ha mauleudi dezho - nemet ez eus hep mar fichenoù ganto ha ne dint ket klok, rak bep tro pe dost e c'heller kaout un anv bennak da abegiñ. Evel da skouer KADJENEG lakaet da Vro ar C'haouenned ! Pa ne deo nemet un eil stumm diwar Kawan. Trev Kawan e oa gwechall Kaoueneg ha da verkañ kement-se emañ skeudenn St Garan hag hini ar Wer-c'hez* war bag an touelloù a zo a bep tu da dour an iliz-parrez. Evit HAMBOT, HAMBOUT a-lec'h kinnig KAMPOU ? em befe kinniget HANVOD, HANVOUD cf kembraeg HAFOD: ti, "leti" -hanv. *

Klerg

* Patron Kawan, hag Itron-Varia-Gawan. Moarvat en askont ma oa Kaoueneg un drev eus KAWAN (Kaouan) ez eo bet lakaet ivez iliz Kaoueneg dindan baeroniezh an Itron-Varia (15 Eost)

AR JENERAL DE SOL DE GRISOLLES rakskrid

Er bloaz 1936 e varvas e Kêr-Vourdel, pell diouzh e vro, hep ur mignon da skeiñ dour benniget war e arched, ur Breizhad kozh 75 vloaz dezhañ.

Divrud ha dianav e varvas, ha neazh, abalamour d'an ofisour kozh-se e oa bet diskaret e Waterloo, galloud ha lorc'h Napoleon kentañ. Rak eñ hag a Vretoned a drec'has, e Breizh, war arme ar Brezelour Meur, a-raok m'hen greas Wellington ha Blucher e Bro-Vel-gia.

Pell diouzh Breizh e varvas. Koulskoude e Breizh, ha dreist-holl war ar maezioù, edo dek-miliadoù a wazed hag o doa stourmet kalonek dindanañ e-pad 20 vloaz (1795-1915) enep Paotred ar Gilhotin da gentañ, enep ar " gwir Vreizh a Vrezel " goude. Gwasket, muntret, tromplet, flastret an dud... tan ar c'halonoù avat, a chomas birvidik hag a adflamine bep gwech ma veze tu.

A drugarez dezhañ ivez, korfoù-marv kalz a baotred yaouank, e-lec'h breinañ ha bezañ dispennet gant ar brini war blaennoù Rusia, a voe douaret e douar benniget ar vered, douget o eneoù d'ar Baradoz gant Ofis an Aneon, ha santelaet o sakrifis gant deroù sakr o mammoù.

An hini a fell dezhañ gouzout petra eo bet Brezel ar Chouanted (ha daoust pe ruz pe wenn e vefe e gostezenn, dever pep Breizhad eo o anaout a-raok o meuliñ pe o zamall), a ranko studiañ buhez tri zen: ar Roueri, Jord Kadoudal, - hag an hini a c'honezas ar brasañ trec'h, a c'houzafivas ar gwashañ poan, hag a zoujas d'ar gwashañ dismegañs : Sol de Grisolles.

Goude bezañ bet mignon ha kenvezelour Jord Kadoudal, goude bezañ bet prizoniet ha bourrevist a-hed an holl amzer m'edo Napoleon o ren, Sol de Grisolles, kerkeret ha ma tistroas Napoleon eus Enez-Elba, a vodas adarre e Vreizhiz evit en em zifenn. Komz a reas al levrioù hag ar skolioù eus doujañs an Arme Veur e-keñver o Impalaer, gonezet ma oant brud e drec'hioù, ar galoñsoù, ar c'hroazioù-enor hag ar pañsionoù a roe. Met ne lavarer ger ebet eus doujañs dek-miliadoù a Vreizhiz evit Jord Kadoudal ha Sol de Grisolles, ha koulskoude n'o doa an daou-mañ netra da ginnig nemet: gouzañv asambles, pedif asambles ha mervel asambles. *

E-pad ar C'hant-Devezhiad a voe trec'het Vandeiz. Plegañ a rejont da Napoleon. Breizhiz avat ne voent na trec'het na demesast.

Da stourm oute, e rankas Napoleon lezel e Breizh un armead hag he dije bet, e Waterloo, troet penn d'ar vazh... Hogen mar en dije bet trec'het Napoleon e Waterloo, e pe stad e vije frankiz pobloù Europa bremañ ? Gant Sol de Grisollès ha kouerion Vreizh ez eo bet salvet frankiz Europa... Frankiz Breizh, avat, n'eo ket.

A-hed ar bloavezhioù e weljod emsav ar Chouanted evit frankiz Breizh o tonet da vezañ un emsav evit adtroniñ ar Roue gall. Ar Roueri en doa bet kemeret perzh e politikerezh Amerika enep roue Bro-Saoz, hag en hini Breizh enep roue Bro-C'hall a-raok an Dispac'h. Ar Roueri a oa ur politiker ampert. Lakaat a reas ar Briñsed tec'het da Vro-Saoz (daou vreur Loeiz XVI, ar re a vo diwezhatoc'h Loeiz XVIII ha Charlez X) da sinañ e toujfont da wirioù Breizh... Siwazh ! Ar Roueri a varvas a-raok ma tirol-las an emgann.

Dibaot an dud a c'hellfe bezañ war un dro politikerion ha tud-a-vrezel; dreist-holl pa rank an den-a-vrezel sevel e arme, pourveziñ boued, argant hag armoù, ober pep tra e-unan. Arabet tamall da Jord Kadoudal na da Sol de Grisollès e vefe bet re verr o menozioù politikel. Ret e vije bet azeñ, evel ma reas ar Spagnoled - hag evel ma en deus desket ober, abaoe, pep emsav - ur gouarnamant kuzh... Ar politikerezh a zo ur vicher diaes ha luziet : fealded divrall ha dall e-keñver ur Roue gall ne oa ket un diazez fiziüs da salviañ Pobl Vreizh.

*
Gwi eo o doa sinet Loeiz XVIII ha Charlez X d'ar Roueri e toujfont da frankiz Breizh. Met maget druz ha lojet dizeñjer e Bro-Saoz, ha diduet gant itronezed flour, ne rejont ket ur fiñv evit skoazellañ ar Chouanted. Er bloaz 1799, p'edo Bro-C'hall heuged gant dek vloavezhad lazhadeg ha dizurzh, o klask ur mestr, ne zeas roue ebet d'en em ginnig. Ar C'horsikad eo a azezas war an tron diberc'henn.

E-pad ar C'hant-Devezhiad, e-lec'h klask repu e-touez ar Chouanted, e tec'has Loeiz XVIII da c'h-Gent, e Bro-Velgia... ken e oa fée gant ofisour Chouanted rannvro Lannuon, Penn-ar-Stêr, munt d'en em gannañ ken evit havelep tec'hour...

E 1815, Loeiz XVIII, adtronet a drugarez da Chouanted Breizh hag o doa trec'het en e anv, ne voe ket chalet na gant ar sinadurioù roet d'ar Roueri na gant an anaoudegezh vat dleet d'ar re a oa marvet evitañ. Fouché eo a gemeras da ministr ! Fouché ! An hini en doa votet a-du gant marv Loeiz XVI, an hini en doa prizoniet ha bourreviet Sol de Grisollès; Fouché, ministr gant

ar Roue !

Chouanted Breizh a voe neuze pedet brav ha brav da vont diwar-hent, da vont d'ar gêr da labourat sioul ha didrouz. Nac'het e voe oute pep enor ha pep digoll. Difannourien Breizh, ha Sol de Grisollès ar c'hentañ anezhe, a voe diaprized, dizorniet tamm ha temm a hec'h setu perak e varvas Jeneral ar Chouanted e Bourdel, divroet, dizemez, - hep na gwreg na bugel, ma mignon na kar na per war e dro en e gozhni, en e gleñved, en e dremen-van...

E Breizh avat, a-benn neuze, e oa deuet kozh ar Chouanted, hag e kontent d'o bugale vihan penaos o doa trec'het a bep eil war an Dispac'hourien ha war an Impalaer. Abaoe 1830, ur rummad nevez a Chouanted a oa kuzhet dre ar vro hag ar jañdarded a furche adarre er maezioù... Met e kêr-Wened, Prefed Pariz, ha Skolaj " Universi-té " Pariz, ijinat o-daou gant Napoleon a rene bepred war ar spere-doù...

Hag e Pariz zoken, e oa bet diskaret diwar e dron breur Loeiz XVI, ar Priñs dianaoudek e-keñver ar gwad skuilhet, Charlez X - ha roet ar gurunenn da vignon bras Fouché : Loeiz-Fulup.

*
Setu kentel griz an istor eval m'am eus-hi desket al levr-mañ. Hogen perzh gwellañ al levr evidon-me eo e kavan ennañ ivez tud ar bobl, tud va fobl... gant o anken, o c'halonegezh, o delc'hustad, o lealded.

Gant tud ar bobl eo koll emzer chom da zirouestiañ kudennoù luziet ar politikerezh: adalek an deiz kentañ ez int en em savet evit difenn frankiz ar parrezioù " eeun ha didro". Ne felle ket dezhe e teuje bourc'hizion gant o Gwardoù Nasionnal da harluñ o ferson, na da lakaat ur beleg intru e penn ar barrez. Ne felle ket dezhe bezañ da renet, e-lec'h " Jeneral ar Barrez ", gant politikerion kriz ha dizez. Ne felle ket dezhe e vije kaset o frotred yaouank da lazhañ war dachennoù Bro an Ankoù, evit difenn ar re a zibenne ar vabien, nag an hini e brizonie ar Pab.

Amañ emaint, an dud-se ha na vezont ket kavet nemeur al levrioù. Amañ emañ ar paour-kaszh jolori diboell a yeas da zaoublegeñ dirak ar Re C'hlas, troet e gain dezhe ha gwintet e benn a-dreñ gantañ uhelañ ma c'helle " Tennit " amezañ, " ne fiñvin ket ! "...hag e gouezhas war an douar en ur skrijal gant ar boan, aet an tenn e toull e r...,gant resped deoc'h.

Amañ emañ an ofisourien deuet darn eus ar maner ha darn all eus an ti-soul, breudeur ha mignoned holl anezhe, holl o vevañ e-pad keit amzer " hep ti nag aoz, na gwele da gousket en noz."

Amañ emañ kanaouennoù ar varzhed, e galleg hag e brezhoneg, gwerzioù ar bobl ha barzhonegoù ar re zasket.

Amañ emañ-an tommañ d'ar galon skolidi Skolaj Sant Erwan a Gêr-Wened, en em silet eus ar skolaj d'ar merc'her da noz goude ar skol, paotred taer en emgann, bugale dener pa wulent o mignoned o kouezhañ marv... Ha pa veze gonezet an trec'h, e-keit ha ma tañse ar re all, e seblent ar re varv, e stankent ar gwad hag e lienent ar goulloù war gorfoù ar Re-C'hlas o deveze tizhet.

Abalamour d'ar re-se dreist-holl ez on eürus e trec'has Sol de Griso lles hag e C'huanted, rak evel-se e c'hellas ar skolidi distreiñ e kreiz an enor da Gêr Wened ha d'o skolaj. Abalamour d'ar re-se - c'hoarzhed neb a garo - n'am eus biskoazh gwalet un den yaouank a Vro-Wened hep santout evitañ em c'halon doujañs ha mignoniezh, hag hep soñjal e oa pep Gwenedour un den a ouenn vat.

P. Bourdellaz

Rakskrid d'al levr LE GENERAL Louis-Charles-René de SOL de GRISOLLES (1761-1836) frère d'armes et successeur de GEORGES CADODAL, gant Erlennig, Gwaskoù Breizh, St Brieuc 1966
Priz al levr (410 pajenn moulet brav) 45 Lur. Dre ar Post: 47 Goulenn Levraoueg St Herve, Kestemberzh (Questembert) 56-Morbihan.

Gant aotre an oberour ez eo bet advoulet amañ war VARR-HEOL ar rakskrid.



UN NEBEUDIG MENOZIOÙ

"E-pad pell amzer ez eo bet difennet ^{kaer} an divyezhegerh er skolioù evit abegoù a bedagogiezh: mont eus ar pezh a anavezet d'ar pezh na anavezet ket, eus ar yezh anavezet d'ar yezh dianav, da lavaret eo eus ar brezhoneg d'ar galleg. En deiz a hiziv ar seurt abegoù ne dalvezont ket kalz a dra ken, evit kêrioù bihan Breizh-Izel ha zoken ar bourc'hioù. Faos e oa evit Breizh-Uhel a-bezh. Abegoù all sklaeroc'h ha donoc'h a zo da glask evit kaout ar gwir da galenn ar yezh er skolioù. Abegoù istorel ha broadel hepken a c'hell bezañ diazez da c'houlennoù ar Vro-Wened. War dachenn an ober ez eo mat koulskoude an abegoù a bedagogiezh, met en ur stumm all: penaos kreñvaat ar yezh vroadel e-lec'h m'emañ o ren, ha penaos adlekaat ar yezh: Kêrioù Breizh-Izel a-bezh, war an dachenn e-lec'h m'eo bet distroadet, hag he gwirizennañ e Breizh-Uhel. Na kaerret labour!"

"Ur Reveulzi a zo d'ober er Skolioù. Da adaozañ penn-dachenn emañ ar programmoù evit diorren ar skolidi evit brasañ mad ar Vro. Gouarnamant ebet ne raio biken kement-se nemet ur Gouarnamant Breizhat. Kement-se a zo sklaer evel lagad un naer."

"Sellout ar yezh evel tra ur gevredigezh paizanted a zo ken diskiant ha klask mont d'al loar gant branelloù ha n'eo ket gant fuzeenoù. Ar gwir ho po pe da gemerout fent pe marteze da dreziañ ma lennit, evel ma lenned n'eus ket gwerso, pa ma klevit a kemerer poan da sikour en dud diwar ar maez da virout ha da garout o yezh. Ar gwir ho po da gemerout fent evel Person Iliz-Vaur Kemper un nebeudig bloavezhioù'zo pa oa bet goulennet digantañ aotre da lidañ Oferenn ar Pellgent en e iliz: en amzer ar Radio hag ar Skinwel? Mezeañ. Ar wirionez a oa gantañ, peogwir ne gomprens netra er gudenn.... Lavaromp sklaer ar pezh a fell dimp, pe gwazh a se dîmp, mar bezomp kemeret evit tud eus an XIX-^{vet} kantved."

"Diaesoc'h tennañ seurt ebet digant ur Gouarnamant Estren, e Breizh, eget amann eus gouzoug ur c'hi. Ur Gouarnamant breizhat hepken a c'hell reizhañ servijoù-ar-C'helaouañ: Gwask, Radio, Skinwel n'eo ket dre o ferc'hennañ, met dre reiñ dezho lusk ha lañs da stummañ, da ziorren ur Bobl diouzh amzer ar Mass Media hag ar binvioù elektronek."

"Unan a zaou hep Gouarnamant breizhat: donet da vezañ hendraourion, istorourion o tiduiñ o amzer gant an Tremened evel krokanted'zo, pe bezañ gronnet el limsel-limestra e-lec'h ma kousk an doueed varv. Gant ur Gouarnamant breizhat, unan hepken: AR VUHEZ!"

"Gwashoc'h ez eo ar Menoz Breizhat eget ur vombezann atomek, nemet n'eo ket evit distrujañ, evit ADSEVEL ne lavaran ket."

OKITANIA

Savet ez eus bet ur gevredigezh evit embann levrioù en OKITANEG : Lo Libre Occitan, B.P.1, 82-LAVIT. Da vezañ embannet dindan an titl meur LA SANTA BIBLIA e teuo dambrest eus a-zindan ar wask LO LIBRE DE RUT (Levr Rut), troet diwar an hebreeg hag ar gresianeg gant ur strollad kenlabourerion katolik ha protestant. E-lec'h ober evel ar Saozon hag an Alamaned da lavarout eo treiñ en o yezh diwar galleg BIBL JERUZALEM ar skridoù sêr, e fell d'ar re-mañ labourat diwar an testennoù-orin. Dilezel a ra ar Brotestanted o heggoun hag a oa embann ar BIBL hep notennoù, na diskleriadurioù; dres evel m'o devoa asantet ober pa oa bet embannet evel troidigezh Ekumenek AL LIZHER D'AR ROMANED.

Al levr 70 pajenn dezhañ, gant ur golo skeudennaouet. mouladur boutin : 8 Lur, mouladur niverennet war Ofset Navarra: 12 Lur. ((K.R.P. 1192-08 Toulouse, Pellgomz 55)

- PICHON DICCIONARI FRANCES-OCCITAN per Jacme TAUPIAC , da vezañ embannet a-benn fin miz Mezheven 1968, ment 12 X 19 war-dro 220 pajenn, gant ur bladenn d'e heul:

GERIADUR e-unan : 15 Lur, + 0,70 evit ar frejoù-post

Pladenn hec'h-unan : 8,50 + - id -

0-daou war un dro : 23,50 dre ar Post.

Ar GERIADUR-se a zo en Okitaneg peurunvan diouzh skouer Geriadur bras Loeiz ALIBERT (Okitaneg-Galleg).15.000 ger bennek ennañ, o reiñ en un doare spis ster ar galleg en okitaneg. Da skouer evit ar ger BOIS (koad) e kaver Bòsc = koad, lec'h plantet a wez, Fusta = koad-prenn, koad-labour Lenha = koad-tan, keuneud, Banas = Kerniel (ar c'harv) Evit ar ger TEMPS (amzer) e kaver da skouer troioù-lavar : kaout amzer = Aver léser. Mall eo, Poent eo = Es ora de E-pad an amzer-se, e-pad ar c'heit-se = Entre temps.

Da heul ar GERIADUR e c'heller prenañ eta UR BLADENN Erv-munut, da ziskouez penaos e tleer distagañ an OKITANEG PEURUNVAN... Daoust ma n'endeus bet c'hoant da gouchañ ur bern gerioù nevez ha teknikel en e labour, e ro an oberour an droidigezh eus gerioù nevez evel " Aotenn-dredan ", Skinwel ", Pellgomz , Radar, Psikanaliz , Kachediñ (un timbr, lakaat keched ar Post warnañ).

- " Los PICHONS CLASSICS OCCITANS " Levrioù klasel bihan graet dreist-holl evit skolidi al liseoù hag ar studierion da

reiñ tu dezho da ober anaoudegezh gant ar pep gwellañ eus oberennoù ar skrivagnerion okitanek. Pep levr a vez gwerzhet 5+0,70 evit ar frejoù-kas. Embannet ez eo an Destumad dindan renerezh an Ao. Paol FABRE, skolveuriad, adkelanner e Kevrenn al Lizheri hag ar Skiantoù Danel, e Montpeilhaer.

- Niv.1 - Francès de Corteta - Pennadoù dibabet gant ur rakskrid ha notennoù gant Robert LAFONT, Doktor war al Lizheri, ha kelenner ivez e Skol-Veur Montpeilhaer. Francès de Corteta, skrivagner ha barzh ajenat eus ar XVII-et kantved, a eaves meur a oberenn dreist-holl ar re-mañ: tri bezh-c'hoari, daou anezho c'hoari-meserion, LA MIRAMONDA ha ROMANET pe LO PAISAN AGENES TORNAT DE LA GUERRA , ha neuze ur pezh-c'hoari farrezeh SANCHO PANCA AL PALAIS DEL DUC

- An neb a zo troet gant al lennegezh Okitaniat a c'hellfe goulenñ ROLL AN EMBANNADURIOÙ : Lo Libre Occitan, B.P.1,82- LAVIT.

- Nebeut a-walc'h a Vretoned hep mar a oar an Okitaneg. Talvoudoc'h a dra sur, ez eo anaout ervat Hor Yezh Vroadel hag ar Yezhoù Keltiek.

Mat eo evelkent merkañ amañ chomlec'h Skolaj Okitania hag a zo kentelioù dre-lizher: COLEGI D'OCCITANIA, 19 Rue de la Fondation Toulouse (Toulouse)

.....
DICCIONARI DE LA LENGA D'OC LEMOZINA (Diccounari de lo lingo limousino) gant Leon Dheralde. Ar geriadur-mañ savet e 1885 a oa chomet diembann, ha nevez'eo ez eo bet adkavet; ennañ e kaver 25.000 a c'herioù hag ar Gevredigezh-a-Etnografiezh eus Bro-Limouzin hag ar Marcha he deus divizet embann anezhañ e deou levr, 250 pajenn da bep hini.

D'ar 24,25 ha 26 a viz Mae 1968, perc'herinded Okitania da Lourda, dindan renerezh Monsignor Gaston, vikel-vras Toulouse. D'ar Sadorn 25, diouzh ar mintin, oferenn er Vougev-Santel gant an Aotrou Theas, eskob. D'ar sul, prazegen en oferenn-bred gant an Ao. Maoris Vidal aus Karkasona. Ar ger diwezhañ kent kimiadiñ, e bearneg, gant an Aotrou Theas, eskob. Hent ar Groez war ar menez gant daouzek prezeger dieheñvel o rannyezhoù. Homañ eo an XI-et " ROMAVAGE "OCCITANIA "

Voulem demourà lou que som e qund som (Lo Cobreto, niv.45) Mennout a reomp chom ar pezh ez omp hag e-lec'h m'emsomp !

a-hed an deizioù

- 1 Mezheven (1941) Sul ar Pantekost! Oferann er-maez. Me avieler Kenstrivadeg c'hoariva, kanadeg, rugby.
- 2 Mezheven : Er beure-mañ e pad pelloc'h ar vodadeg. Ne gaver ket an niver resis... Advodadeg evit an holl, niveradeg dre anv. En hor barrakenn-ni, tri a zo dianket! En holl: daouzek. Trouz! Kement a oa prometet dimp a zo tennet diganimp: bihan ar c'holl! Hag arabat kuitaat ar varrakenn, zoken war an deiz. O vezañ m'eo gouel, n'emañ ket an ofiserien uhel aze. Warc'hoazh e streko ar c'hurun... Ur wech muioc'h....
- 8.VI : Furchadeg vras. Va mantell a daper diganin. Furch diavaez ha diabarzh:
- 13.VI: Er sizhun: tri aspirant marvet. Hiziv an holl er-maez gant an holl stal, hag e naetaer an diabarzh. Tre m'emaomp er-maez furchadeg adarre.
- 14.VI : Pikadenn!..Me a zo gwall dizhet. Un nozvezh spontus; poan ha terzhienn.
15. War an deiz, mil vec'h o fiñval, ha zoken o tennañ va anal.
- 22.6: Dihunet fenoz gant ur bagad-nijerezed o tremen 'trezek. Ur pennad'zo e tremene soudarded ha binvioù-brezel. Daoust ha bec'h a vafe?... Ya! hen degemenn a reer dimp abred diouzh ar beure. Daoust da se, p'eo brav an amzer, e reomp un ambrougadeg dispar d'ar Sakramant: teir aoter gaer. Ul laz-kanañ dispar.
- 27.6 : War evezh deiz ha noz. Ni ne reomp van ebet, hogen an deiz e rankomp mont en diabarzh... Bodadeg Breizhiz (digor ur pennad'zo er voger-orjal)
- 28.6. Kenstrivadeg embregerezh-korf: redadegoù a bep hirder, kerzhadeg, redadeg pebeilañ, stlapadeg ar pouez, lammdeg, c'hoariva ha soniri (binvioù-sonerezh arru, ha c'hoazh e vo re all)
-
- 2.7: Ur bakadenn vras eus ar gêr. Gwesped mel - boued-mir-Amenn - Kig-Sall - anduilhenn- butun- sukr- gwesped- Kabell - Chaosonoù.
- 11.7 : Fivskudennerezh, an eil gwech. An dro gentañ, tremen divalav: den alta Fritz. Ar wech-mañ, kalz gwelloc'h, ha komzer, mar plij! Holl diwar-benn an darvoudoù a-vremañ. Daou e galleg(?) war divout Bro-C'hall. Daou en alamaneg war divout Brezel ar Sav-Haol.

- 12.7 : Gouel Sportel evit deraouidi. Kaer-kenan - Ur pennad'zo ivez hon eus ur c'hoariva dreist, dreist! pa lavar an... Kelaier fall hor bez kazi bemdez diwar-benn stad-bevañ Bro-C'hall, sunet betek ar gwad. Siwazh!
- 24.7 : Ur c'habiten a c'hortozemp, ur jeneral eo a zo deut, mar plij, da ren rummad an aspiranted. Ne welomp ken an Alamaneg koulz lavarout. E kiriegezh Didelet emaeomp bremañ, nemet evit ar pezh a sell en em laerezh.
- C'hoariva hon eus ivez en deiz all: " Les Jours heureux ". Dispar adarre... Peder barrakenn all a roer dimp en tu-hont d'an 8 hon eus. Koulskoude ne blij ket kaer din dilojañ.
- 26.7 : Santez Anna. Oferann. Kantikoù brezhonek, dirak ar jeneral. Abardeez : fivskudennerezh: 2 ganellad e galleg ha div en alamaneg.
- 28.7 : An Ao. Scapini, kannad Bro-C'hall, a zo deuet d'ober gwala-denn dimp.
- 29.7 : Ur pikol pakadenn eus ar gêr: ur voestad sukr-maen, ur voestad amann, un anduilhenn, ur voestad gwesped krazet, chokola, ur voestad-ton, banan, 4 boestad pastez, 2 voestad sardined, 1 kaotigell, kub ha butun-poultr, ha 2 luc'hskeudenn: tintined frans. ha Roz.
- 3.8 : Gouel sportel dispar, dirak ar jeneral. Ar 6-et trec'h evel bep tro, korolladennoù ha kanaouennoù breizhek da glozañ. Displegadennoù gant Inizan.
- 5.8: Pell'zo ne oamp ket bet hegaset. Hiziv e rankomp reiñ dezho hon holl c'holoennoù-gwela, ma'z int alamaneg. Mat! Prest avat goude e teu kemenn dimp holl d'en em vadañ er-maez gant hor goloennoù-ni. Hag e tennont diganimp ar re anezho o deus an disterañ doare da vezañ " militar " Kalz guzh o re. Me a ya er-maez gant va hini, unan soudard evel just, a zo ganin abaoe an 19.6.40 (kavet en douvez) nemet e ran diouzh tremen hep " tremen " dirak daoulagad an ensellerien (2 ofiser). Charnoù laer evel an dour.
- 17 Eost: An amzer a ver... Buhez pemdeziek atav hañvel. Tremenet ar 15, Gouel ar Werc'hez da Hantar-Eost. En deiz-se, warlene, e voent touzet, furchet. h.a. pa zegouezhis en Krems. Gneixendorf. Ar wech-mañ gwalc'hadeg er gambr... Oferenn-bred evelato, rak ur chapel hon eus bremañ, trugarez d'ar jeneral....
- En deiz all, ur gartenn eus an Dosenn. Bremañ e c'hortozan unan digant Fañchig. A-hend-all, netra a nevez.
- 2 a Wengolo : Ur pennadig'zo ez on chomet tavdek. Netra a nevez da zisplegañ. Ur bern tud a zo bet klafv, ur stalad a zo c'hoazh, ha moarvat e vo re all goude: ar red-korf betek c'hwitout. Ar pavarvat aspirant a zo marvet bremañ 'z eus tri deiz.

29 a Wengolo: Div bakadenn all adarre abaoe. Ur bern traoù e-barzh, betek gwinegr hag hini kreñv e-barzh an amann... Ne skrivan mui nemeur a dra. Sioul e tremen an deizioù, leun a bep seurt kaozioù. E bodva ar Rused e varv, a-hervez klevet, tremen trogont dan bemdeiz. Ha ker bras neon o deus ken e tebront mo-gerioù-paper o barrakennoù, ha marteze... o re varv. Ret eo gwe-lout o luc'hskeudennoù!... Euzhus!

28 Here: Ur miz eta goude!... Netra a nevez, nemet ez eus arc'h hiziv, kouzhet dec'h, ha skorn!! Gwenn pep tra. Trede goañvezh brezel... Un dec'hadenn all, an deirvet abaoe m'emañ ar jeneral amañ.

29 Here: Hag ar bedervet... nebeut goude. Daou all a zo en em laeret raktal goude ar c'halvadeg-noz.

12 Du: Pell'zo ez eo yen an amzer hag arc'h a zo kouzhet meur a wech. Biskoazh avat, ne oa bet ken yen all. Skornañ a ra reut, hag ar c'halvadeg a vez graet atav er-maez, peder gwech bemdeiz... ha pa ranker gortoz ur pennad... Skrivet da Delorme an 18 Eost. Keloù ebet anezhañ c'hoazh abaoe. Na oar ket - n'hell ket gouzout - petra eo gortoz amañ... goude seitek miz harlu.

17 Du: Ar c'habiten Reynaud, " hon hini ", n'avez arru, a zo bet hiziv o lavarout un nebeut garioennoù leun a furnez dirak pep bara-kennad eus an 2-vet bataillon fiziet ennañ.

...

24 Kerzu: Noz an Nedeleg. Bennozh Doue war va zud: Bev ha Marv. Va zeir oferenn a vo fenoz evit ar Re Vev, ar Re Varv, evidon. An amzer, peuz-dierc'h betek-hen, a zo dirollet. Un arnev-arc'h a gouezh. Nedeleg gwenn, ha laouen daoust da bep tra. Doue eo a dre-c'ho!

Ur morad pakadennoù a ziruilh ivez, daou, tri devezh'zo. Ur bakadenn, div pe deir da bep hini, peder ha pemp a-wechoù. Hini ebet evidon. Kement-se muioc'h goude. Jezuz a oa paour ha mat, va c'herent a zo paour ha mat. Na c'hellan ete bezañ nemet evurus. Rak honnezh eo ar vrasañ levenez.

25 KERZU: Peder oferenn hanter-noz. O feder leun-chouk. Me a ro da gomuniañ en unan anezho betek diwezh an eil oferenn. A-benn 3 eur 30 em eus lavaret va re, hag ez on deuet en-dro da gousket. Ar re all a chom d'ober fest: gwestell ha kig eus ar gêr, a bep seurt. Todion spontus. N'on ket evit kousket an disterañ. Poan-benn.

26 Kerzu: En noz-mañ ivez eo chomet an dud war vale, d'ober friko ha trouz. Skuizhus eo o c'hlevout ha rankout tremen hep kousket. Yan garv an amzer. Dilhad a lakaen er-maez d'o dilaoua. Reut e vezont kerkent. Daoust d'am botoù-koad em eus riv d'am zraid. Ur bakadenn vras hiziv digant Vaugarni (22 Du) 3 boestad boued-

mir - 1 lurchokola - 2 lur eukr - gwestell Gringoire - gwested ha levrioù - Kentañ hini eo am eus a-berzh beleien, en diavaez eus ar gêr. Ret'vo din skrivañ ur gartenn dezhañ warc'hoazh: Abab Vaugarni, Comité d'Aide aux prêtres prisonniers - 18 rue des Forges - St Brieuc.

31 Kerzu: Da beurechuiñ brav ar bloavezh ez eomp d'an dilaouadeg fenoz, war-dro hanter-noz endeeun! N'ouzom pet nozvezh'zo ne c'hellan ket kousket gant ur bern kanfarded o todionañ war zigarez predoù ha gouelioù-noz. Ar c'houlz hag al lec'h, ez-wir, da forañ boud degaset war-boue piv'oar pegement a boan hag a yun marteze, da huchal ha da sodiñ p'emañ buhez o bro en arvar, hag ar bed-holl war vrasañ. Ne deurvez lagad an den arvestiñ, en diavaez dezhañ, nemet ouzh skeudennoù- strobinnell stipet gantañ e-unan, ha tennet eus e zigbarzh. An dud 'z eus anezho tropelladoù diniver, diskiant ha skoemp, bleniet gant o youloù-fall, hep zoken gouzout dezho; darn all hag a oar, nerzh ebet dezho da zistreiñ diwar an hent kalemar-c'het gant al lodenn vrasañ; hag un nebeut hiniennoù hepken, trec'h a-walc'h dezho o-unan evit ober fae... ha kerzhout hep kenail dre er gwenedennoù digenvez pleustret gwech ha gwech all gant un diskiant bennak evelto.

Estraget pobl Vreizh, R. Hemon, a zo " chatalast "....

1942

1 Genver: An nozvezh (31-1) war he hed hon eus tremenet war vale en askont d'an dilaouadeg. Setu ar pezh a c'hoarvezas. Un droad-atera a zo bet graet nevez'zo, avel gwech ha gwech all. Ha pa zo bet gouvezet a oa un toullad tud klañv gant ar vrec'h-zu (degaset gant ar Rused) e zo savet trouz ha kroz war-lerc'h ar mezeg schleuh. Hemañ, ur c'horfad droug ennañ, a reas diozh lakat an aspiranted da dremen an dilaouadeg e nozvezh end-eeun an deiz kentañ eus ar bloaz, goañeg dezhañ e nac'hfemp... hag e c'hallfe en doare-se en em zidamall diwar hor c'houst. Ni avat, a voe fur, war ali an Ao. Didellet. Hogen un noz-vezh wenn... (Teir er sizhun, en abeg d'ar Gouelioù). Garros e-kerz an noz-se a zeuas da vezañ sot. Pa voe erru en-dro e klaskas tro-c'hañ e garzailhenn gant e aotann...

6 Genver: C'hwit e daol gantañ, ar mezeg evit hon hekinañ, hor c'has hiziv da noz adarre d'an dilaouadeg. War-dro hanter-noz, avel en deiz all... Keloù ebet eus ar gêr abaoe an 13 K/zu.

7 Genver: En askont d'un tamm dilerc'h, n'omp tremenet nemet da 5 eur er beure-mañ. Daoust da se, goude va oferenn, ez on set d'am gwele hag em eus kousket betek kreisteiz. Un devezh kaer. Er broioù-mañ, da vare an yenien vrasañ zoken, e par a-wechoù un heol-heñv. Skleradennoù sked-diskid ar bannoù a-dreuz an dent-skorn a-istribilh ouzh an toennoù a zo un dudi d'al lagad. N'eus bro ebet hep he dudi.

12 Genver : An daou furcher-pakadennoù, d'emesaet buan ha buan (an hevelep re evidump abaoe deroù ar vrec'h-zu) ne raent ken nemeur a van. Un ofiser a zo kouezhet a-greiz-holl warno. Q fater o deus klevet, hervez !... Daoust hag arruout'ray ur bakadenn ganin a-benn va gouel ?...

14 Genver : N'eo ket a-walc'h unan, hogen div, ha div bikol hini. Unan dec'h, 20 lur enni, un all hiziv. Gant " GWALARN "-ioù ha va albom-luc'hskeudennoù. Hemañ a zo roet din rektal. Niverennoù Gwalarn a zo miret d'o atersañ... Bennozh Doue d'am zud ken mat evidon.

15 Genver : Baleadenn dre vetaillon. Bremañ emañ ar c'hiz-se, tru-garez d'ar jeneral. Bet on ivez. Hentoù skorn. Div gemmed war-raok, unan war-dreñv. Kalz a lammoù. Ar c'habiten Reynaud a dorr e vrec'h... Ur pennad'zo e tremen bendeiz un ofiser alaman da glask tra pe dra da rebech: tammoù-yoù-paper h.a... Ha ma c'hoarvezfe gantañ evel gant Keyter Machin.

16 Genver : St Marsel. Oferenn evit va zud ha mignoned. Fiftskeudennerzh: Ar Galon divarvel. Koan : Gwareger, Morvan ha me.

23 Genver : Ur post-pakadennoù hon eus bet e-pad ar miz, en abeg d'ar vrec'h-zu. Abaoe dec'h da noz pa oa erru demaozet, graet esta-jerennoù ha taolioù, ez eo bet tannet digenimp.

Ur c'halz a aspiranted o deus goulennet mont da labourat, en o zouez Charlez Perès. A-hend-all netra nevez nemet ez eo yen. War-dro 20 ha 30 dindan dalc'hmat. A-wechoù e tihunan gant ar boan em divc'har, er melloù-glin, hag en divgroazell peurlvuiañ. Adalek hiziv, evelkent, e reer ar c'halvadeg e diabarzh ar vara-kenn.

24 Genver : Hiziv da noz: 27 dindan an o-gwan.

25 Genver : Betek 36 derez 'omp diskennet. Ken e skrij an arc'h dindan ar solioù.

...

1 C'hwevrer : Evit ar wech kentañ abaoe daou viz e c'hall Y. Ar Pab dont d'am gwelout. Keloù nevez ebet gantañ. Plijadur en deus bet gant va luc'hskeudennoù... Noz eo anezhi, ha leun-chouk eo ar varrakenn a voged, evel boaz..

...

11 C'hwevrer : Gouel Itron Varia Lourda - Bangor er chapel gant laz-kanañ ar Stalag ha laz-seniñ-pevar. Dudijs-kenañ: Vittoria, Palestrina, Bach, Mozart, Haendel... Dec'h e oa ebatoù adarre er 6A. A-bep seurt da welout ha da glevout... Div gartenn hiziv (Kartennoù Petain) eus Toulon : Fañch ha Luk... An amzer a zo gwellaet un tammik. Reudiñ'ra evelkent c'hoazh ar c'houz ar-maez.

13 C'hwevrer : Gant an amzer o tic'harvaat e zo deut barradoù-arc'h. Er beure-mañ ez oa ur metrad arc'h ouzh toull hon dor...

N'em boa ket eveshaet c'hoazh, ken na oa dec'h da noz, e oa poazh ar bichad kig-sall deut em fakadenn ziwezhañ. Gwell a se. Goude'vat n'eo ket dises e rouzañ, a dammoù bihan, bep ma vez ezhomm, gant ur begad margo. Un dra hag a ra vad-dreist din eo Dour-Karvez, rak va c'halon a zo sempleat kalz.

- Daoust ha soñjet he devo Lusiana mirout ur gartenn Petain da zes-ges din, kerkent ha ganet he bugel ? Souezhet 'ven !... En doare ma ne ouezin nag anv, na keloù, ac'han da zaou viz pe ouzhpenn goude an darvoud.

15 Meurzh : N'ouzon ket penaos em eus gallet dont a-benn dec'h da skrivañ ul lizher d'ar gêr... Poan-benn am boa spontus. Biskoazh, a gredan, n'on bet ken klañv hag en nozvezh-mañ. Un derzhienn-varc'h, da heul ha gant poan-benn. Ar c'hwezenn a zivare, hag e krenen gant ar riv, ken e strake va dent. N'em eus ket kousket an distroñ, ha kement-se war zigarez ur bikadenn enep terzhienn ar vrec'h. Arru eo aet hon holl nerzh da hesk: n'omp ken evit stourm.

2 Ebrel : A greiz-holl bodadeg er-maez, diouzh an noz... ha galvadeg. Ne c'halver nemet tud bet en em laeret, un 50 bennak (55).

22 Ebrel : An abadenn-se n'eo ket padet re bell... Kaset int bet d'ur varakenn all, evel ma oant, hep gallout distroiñ d'o hini da gemerout o zraoù; d'an 29-vet, gronnet a orjal: arabat mont er-maez... Ur sizhunvezh goude a oant distro, nemet ar re bet en em laeret a-c'han end-eeun...

Abaoe... a bep seurt! Met da betra e talv dezrevelliñ seurt diste-rachoù ? Skuizh on hepken. Div vammenn frealzidigezh: unan yaus " Omnia cooperantur in bonum..." - unan nac'hus: pep tra c'hoantaet a gaera, pep tra piaouet a zistera. An diouer anezhañ eta eo a ra al lodenn vres eus talvoudegezh un dra. Va enkreuz a vihana, o veizañ: pa vin em bro, ne vo ket ken bras-se va levenez.

26 Gwengolo: Tremen pemp miz'zo n'em eus skrivet ger amañ: na kaerat prezegenn! Un dra am eus koulskoude da venegiñ: adalek an 11 a viz Eost betek ar 7 a Wenogolo ez on bet koulz lavarout e " gopreost"! nepell diouzh Wartenbürg, e Daünen, Bezvik Allenstein - E ti an Ao. Fünke. Re nebeut a amzer da bleal gantañ e-unan. A-hend-all, al labour en devoa graet vad din sur a-walc'h.

Va fenn-ahel a zo er gêr: va Zud, va Breizh. A-ziavaez da se: netra nemet gweledigezhioù amsklaer, prederiadennoù tanav, dife-tis. Dibao a wech e tro ar vag he fri a-ziwar hec'h eor. Va eor eo va c'halon, ha gouzout a ran raizh-mat ne zistago ket. N'ouzon ket parek e skrivan seurt gerioù! Penaos en em zisrannfe ar pezh a zo unan ?

22 Here: Gwer diabarzh ar prenestroù a zo krog da ouelañ, ur pennad 'zo. Bendeiz e teu an douar dindan sol ar boteier sklintinoc'h-sklintin. Goude un reuziad devezhioù ha nozvezhioù dour-beuz, ez oa

rav ha skorn er beure-mañ. Bet 2 dindan 0°.

....

9 Du : Hñvra divalav: unan bennak marv du-mañ. Graet Doue ma ne vo ket gwir. Ur pennad'zo, digeloù.. An amzer'zo war c'hlav hag erc'h. Yen gant se, mare ar c'hailhar.

Hiziv e klaver lavarout emañ Bro-C'hall e stad a vrezel gant Bro-Saoz hag Amerika.

Rann-vloavezh fall - Kelaier fall -- Stad-ene teñval... Arnev an Hollc'halloudeg a ziroll war ar bed. Daoulinomp he pedomp: " In virge ferrea..."

Glücklich allein

Ist die Seele die liebt ... (Goethe)

" Come to the windows, sweet is the night-air

Where the sea meets the moon blanch'd land ..." (Shelley)

Kerzu: Un dantennet

Genver 43: Daou zant all tennet

Meurzh 17: Hag un all adarre. Gwashoc'h eo bet en dro-mañ. Rak 1943 gor a oa er munsun. Ar bikadenn n'he deus graet netra nemet kizidikaat an dant. Daoust da se, Charniac en deus e dennet hep dament: " N'ho po ket amzer da gaut poan, emezañ, gant ar buan ma vo tennet!" N'ouzon ket penaos n'on ket aet en tu all. Sadaouet on chomet war en taol. Hag ur bern gwad am eus kollet adarre. Ne vez termen ebet war an douar da esot ar boan. Doue da reif ar c'hvas dimp d'ober hor mad a gement-se.

5 Mae : An I B en deus ezhomm a aluzenerion. Ne gaver nemet pemp troet da vont (4 aspirant hepken). Hiziv da noz e tiloijan da vont da varakenn ar o'henavo.

6 Mae : Setu bremañ kuitaet ganin Werlop, Pengwern, Lafforest, Abiven. Ne vin ket chomet pell ganto. Da 4 eur, war sav, hag en hent. War-dro 4 eur e Nohenstein. Ar pezh a zougomp, daoust dimp bezañ lezet ur bern traoù war hol lerc'h, a zo ponner spontus. 3 viltir betek ar c'hamp. Yost-marv pa erruomp. (Bier degaset dimp gant ur glazerd evit un tamm chokola) Y. Ar Pab em eus kavet en ur zont.

7 Mae: Dilaouadeg abred. Ar Ruzed a werzh a bep seurt da neb a gar. Ur Breizhad keginer a gavan emañ, un den start hag hegarat: Bourven. Gantañ e tebran keit ha ma chomin emañ.

20 Mae : Pemzek deiz en I B- Hiziv e kemeran penn va hent etrezek Mohrungen va farrouz nevez: ma ha Lombard, ofiser-ali.

23 Mae : Hiziv e krogan em eil bloaz ha tregont! Oferenn e Mohrungen, e kamb ar re glañv, kazi goull d'ar c'houlz-mañ.....

.....

7 Gouere: N'ouzon ket gwell vat petra'sañ darn eus an Alamaned

diwar-benn ar C'hallaoued. Hogen bez'ez eus en o zouez un **du** he na soñjont ket nemeur a zroug, harvez gwelout. Hiziv 'on bet e Saalfeld. En ur vont, en tren, em **sue** kemeret ur vutunenn, hag he miret ur pennadig em dorn, en ur sellout er-maez. Raktal, un Alaman a zo dereadet gant e danennoù, betegout na vije ket bet ganin.

A-hand-all, ar merc'hed, evel just, ar re yaouank dreist-holl n'emaint tamm ebet anep; meur a hini a ya betek ar pal pellañ a-du, end-eeun. En ur zistreiñ eus Saafeld (eno'z eus bet trouz gant plac'hed) em eus bet 2 eur da c'hortoz e Lichemühl. Da dremen an amzer ez on aet da azezañ er sal, da evañ ur banne "limonade". Ur plac'h yaouank a oa eno, koant ha deread en he gwiskamant, gant un tog gwenn a-zoare. Va lakaet he deus diaes, rak bep gwech ma troen va selloù, e veze he re o parañ warnon, ha mousc'hoarzhin tener... Pa on savet en tren, ez int deut (div oent, unan dimezet a greden) en hevelep kombod ganin. Hep gouzout pe a-ratozh ? N'ouzon ket. Ur vaouez all a oa c'hoazh e-barzh. Abadenn heñvel-tre m'eo bet honnezh aze. Ha pa'z eo diskennet, ur pennadig goude, n'o deus graet an traoù nemet gwashaat. Gwilchadennoù dedennus. War zigarez sellout er-maez dre va frenestr, hi a oa koulskoude e-kichen unan, (ne oamp nemet hon tri ken, ha me am boa kemeret an tu anep va-unan) eo deut em c'hichen, stok-ha-stok ur pennad. Ma'zo en em lakaet da lenn ul levr germanek: Der grosse Geiger. Neuze eq aet kuit. Ur pennadig hepken. R k kazi raktal, ez eo deut da gemer va levr diganin, ha d'he flas gantañ, goude un tammig kaoz. Neubeut goude, hi o lavarout din : " Deut emañ da azezañ !" N'on ket aet, 'vel just. Neuze eo deut adarre da zegas va levr din ha da gaozeal. Pa'z on degouezhet e Mohrungen, ez eo deut da gemer va fakadenn a netra diwar ar roued evidon avel pa vijen bet ur bugelig. Ur stard-dorn a felle dezhi ivez. Muioc'h moarvat. Ha betek pa oan diskennet, e skoe war ar werenn, din da sellout, ha dezhi d'ober: Kenavo din: Auf wiedersehen.

N'he deus ket koulskoude goulenn^{at} nag anv na chomlec'h. Ha sede an Alamaned yaouank a-zoare !

(da echuiñ)



ME GARJE BOUT

Pa welan me skornet ar stêr
 Me garje bout an Nevez-Hañv
 Pa welan **suilhet** ar peurvan
 Me'garje bout ur barrad-glizh
 Pa welan ur rozenn digor
 Me 'garje bout ur valafenn
 Pa welan lili-dour al lenn
 Me'garje bout un alarc'h gwenn !

Pa welan 'n Heol o vont da guzh
 Me garje bout ul Livour
 Pa welan'r c'hlañvour o c'houzañv
 Me garje bout ur Pereoar
 Pa glevan 'n Arzour o kanañ
 Me 'garje bout ar genaouenn
 Pa glevan 'n avel o c'hwezhañ
 Me garje bout un delenn !

Pa glevan'r bugel o c'hoarzhin
 Me'garje bout e vamm dezhañ
 Pa gavan un neizh pennglaouig
 Me'garje bout ar vioù glas
 Pa welan'r vacuez kenedus
 Me'garje bout he melezour.

Pa zeuy en-dro NEVENDE
 Me'garje bout ar MENEZ-BRE

Anjela DUVAL
 19.2.1968.

ABARDAEZ SUL

Selaou 'rajen gant dudi " Roazhon-Breizh "
 Goude'lakjen urzh em c'hontoù
 Lenn a rajen neuze " BARZHONEGOU "
 Mont a rajen end-eeun da welout ar prad
 Ha bouatañ'ra ar geot nevez...
 Marteze e ti-kennjen bete'l Leger
 Ha sevel dre ar C'hoad.
 Serrin'rajen ur mell brec'hiad
 Bisigoù mareñv. Gant ul levezeg vugel
 O lakejen da vrallañ didrouz
 Mil badeziant....

Tud a zo deut. Tud ha tud bepred
 A-hed an abardaez-sul
 O deus debret va amzer.

Manet ar bisigoù war o skourroù !
 Emaint-i d'an eur-mañ o tintal
 Sioul ha laouen, anjeluzoù d'ar sul da noz !

... Ha bremañ kenavo d'an Hufivreoù
 Emañ c'hoazh ar saout da c'horo....

12.2.68

STERED AR PRAD

- Da biv ho mousc'hoarzhoù seder
 Stered kouezhet eus an Neñvoù
 E tirienn glas ar pradeier
- Da biv ho mousc'hoarzhoù seder
 Fleur-amann ha tommheoligoù ?
 D'ar valafenn ? D'an tremener ?
- Da biv ho mousc'hoarzhoù seder
 Stered kouezhet eus an Neñvoù

Nevez-Hañv 1968

Anjela DUVAL

GHAZIR

Sic transit gloria mundi

(komzoù a levezet d'ar Pibien-Nevez en ur zeviñ stoub dirazo)

Du-h.ont war-du ar sav-heol, damruz ha lintrus, war riblennoù alaouret ar Mor Kreizdouarek, er Reter Nesañ, ez eus ur vro vihan, brudet er bed a-bezh. Douar santel ar vro-se a zo bet krouet diwar ludu un Hent Istorel.

An orin anezhi en em goll e noz an amzerioù kozh. Anavezet e voe gwechall dindan an anv a FENIKIA, douar karget a istorioù bamus, met bevennet gant harzoù dispis. Hiziv an deiz ez eo al Liban, Bro-Liban, tostik a-walc'h, he deus kemeret he lec'h. Bet eo Bro-Fenikia ha chom a ra atav ur c'hroazhent evit sevenadurioù disheñvel. Douar graet evit eskemmoù a bep seurt, graet evit an darempredoù etre impalaeriezhoù divent, Bro-Fenikia a zo bet an teuzlestr evit sevenadurioù diniver e-lec'h m'eo bet en em gemmesket gouennoù-tud difiñv o stumm.

He morioù glas-teñval, gant houlennoù don, a zo bet roget a-viskoazh gant strolladoù-listri dreist-niver, abaoe ganedigezh ar bed. He forzhioù-mor war an arvor fenikiat: Bublos, Berute, Sidon, Tîr, Tripoli, a vestronio en douaroù tro-dro d'ar bed kreizdouarek. Moraerion Dir, a oa deuet da vezañ tud-a-voor ijinus ha dispart. En em daurel a raint etrezek ar Mor Atlantel, en tu all da Gadiz ha da Gibraltar, evit klask digor d'o c'henwerzh. Bet eo Karthada hag a oa bet krouet ganto, un drevadenn e-pad hir-amzer evit Tîr. Biblos en he splannder eo a roas, a lavarer, arouezioù al lizherennoù d'ar Bed. A-drugarez d'o skiant eus ar verdeadurezh, e c'hellio bagioù Uliissos dispakañ o lien d'an avel evit mont da glask er Morioù Dianav, an Inizi Gwennidik!

Hittitiz, Ejiptiz, Hebreiz, pep hini d'o zro, a vo mestr war ar c'hornioù-bro souezhus-se. Ar roue Salomon e-unan en em gevredo gant Hiram, roue Tîr, evit kenwerzhañ gant Bro-Dfir, bro vuzhudas ma voe unan; Asiriiz a vuzhuno an holl rouantelezhioù. Darius a unano ar Reter-Nesañ a-bezh. Dizale, er bloavezh 333 kent J.K. unan eus an dud seurt n'eus ket bet ganet nemeur eveltañ: Aleksander Veur, a roio lamm dezhañ - en emgann Issos - Diwar neuze e vo hellenekaet ar Reter-Nesañ. Aleksander-Veur avat, a steuzio e-kreiz sabranegi ar gouelec'h, ha war e lerc'h e lodenn a jeneraled etrezo e hêrezh. Tostik goude, er bloaz 64 kent J.K. e tegaso ar soudarded roman ganto mastroni Roma!

Paouezomp bremañ gant an dezrevelladur eus splannderioù tremenet ar vro-se - pep korn, pep poultronn zoken he deus hec'h istor - Laoskomp Didon, Roksana, Atalia, Zenobia, Bereniz, kerkoulz ha maouzet all evel Ester Stanhope o c'hoari gant o zrubuilhoù gwregel. Laoskomp argadennoù, brezelioù: re santel ha re all, reveulzioù o tremen a-hed ar c'hantvedoù. Greomp ur bourmenadenn war gae Beirout, ar Berute kozh, e deizioù diwezhañ miz Here 1860.

Aze e tremenimp e-biou da Ernest RENAN, d'e c'hoar Merried, hag un nebeudig tud all. Bet en devoa Ernest Renan digant an Impalaer, ha dre c'hras an Itron Hortensa Cornu, ul lizher o reif galloud dezhañ d'ober anklaskoù e broioù ar Sav-Heol, dreist-holl en Douar Santel. Da heul ar breur hag ar c'hoar e oa un etrouñ anvet Lockroy, ar komiser ar veaj, hag a vo diwezhatoc'h ministr an Arzoù-Kaer.

E-doug ar goañv ne baouezas ket Renan hag e c'hoar da riboulet war-varc'h, a-hed ar gwenodennoù hag an hentoù war vordig ar mor. War-dro Biblos dreist-holl e rejont furchadennoù. Pa vezent brevet gant o labour e pignent war ar menezioù, menezioù al Liban, da ziskuizhañ, e kêriadennoù bihan anvet Ghazir hag Amschitt - e-vec'h 'had ur varc'hekadenn diouzh Biblos, ha marteze un tammig pelloc'h diouzh Rouad, Oum ha Tîr, e-lec'h m'edo o zachannoù-labour.

Ober a ras Amschitt ha Ghazir a-gevret gant ar c'hêriadennoù all, gant ar manatioù hag ar pennkêrioù, marcelladurioù bras gwenn ha glas-pers, ouzh pantennoù glazvezus al Liban. Sklentin ha lizhina diouzh an ilizoù ha diouzh ar manatioù e nije dibaouez davet an oabl damruz ha damc'hlas soniri ar c'hleierigoù. Eus an ti feurmet ganto e Ghazir o devoa Renan hag e c'hoar un dremmweliad skedus ha dispar gant riblenn fenikiat Bae Djounie.

Ar furchadennoù war-nes echuiñ, ez eas an daou Renan war-dro Pask 1861 da weladennañ an Douar Santel. Gwelcut e rejont evel-se an douaroù hag a zalc'h soñj atav eus kamedoù Jezuz. Tremen a rejont eno un nevez-amzer heñvel-mik ouzh an hini bevet gant Hor Salvar en deizioù ma voe staget ouzh ar groaz. Ergerzhet o deus ar breur hag ar c'hoar an Douaroù Santel: anvet ez int bet gant Renan e-unan ar Pempvet Aviell! Biken ne baouezo ar Spered Glan da c'hwezhañ warno betek fin ar bed.

Neuze e tistrojont da C'haazir da ziskuizhañ diouzh o beajoù.

O! na dudius ez eo Bae Djounie! A-hed ar ribloù fenikiat, ar gwagennoù, a-wechoù berr, narzhus, teñval, evel ma vezont ar goañv war aodoù Mor-Breizh, met peurliesañ lezirek, dinerzh ha glas-teñval

a zeu da vervel war ar reier, didammet en eonenoù skañv! Ha bannoù diwezhañ an heol o vervel a led war o liv gwenn-erc'h ur ouel ruz-flamm. Diwar lez ar mor doueel-se, liorzhadoù gwez-orañjez, gwez-banaez, gwez-mouar, gwez-sitroñs, gwez-olivez, a bign, a grep stank ha druz, da aloubiñ kostezioù menezioù al Liban.

"Kaerañ gwaledva ar bed, a skribo Renan, en em lede dirak va daoulagad!" Hag e novezhioù dreist-kenedus Ghazir, dirak ar pleg-mor hep e bar, e-mesk ar frondoù mezvus a save diouzh al liorzhoù leun a c'hwez-vat betek enno, en em stumme, en em groue goustadik an Oberenn hervez kalon Herried: BUHEZ JEZUZ. Dindan an oabl glas-du, ennañ evel tachoù acour, ar stered, bras ha skeodus evel ma vezont e broioù ar Reter, e save Ernest al Lev, hag Herried e adskrive gant hec'h holl garantez.

*

Youl vat a lakae Renan hag e c'hoar evit mirout da feukañ kredennoù ar Varonited a veze ken dereat en o c'heñver. Heuliañ a reent dievezoù ar relijion. Gwellet e vezent alies, ur chapelled en o dorn, oc'h ober o brizh-pedennoù da Sant Erwan. A-wechoùigoù, d'ar sul, tud ar gêriadennig o ambrouge d'an o-ferenn.

Darempredoù an devoa Renan gant ar Jezuisted a oa o chom er gêriadennig. Evit gallout skrivañ hag adskrivañ ul labour ken fonnus all, e oa bihan ar barnioù paper hag al liv e stalioù ar vjorc'hig. Gant madelezh hag hep disfiziañs e roe an Tadoù d'an den meur ar benvioù en devoa ezhomm evit peurechuiñ al labour. Moarvat, a grade an Tadoù, evit skrivañ an notennoù ken puilh, ken fonnus, ken niverus, diwar-benn ar furchadegoù graet abaoe ur pennad-amzer a-hed an eod. Hag un devezh (O! Bascal! Ho " Provinciales"!) e tarzhas evel un taol-kurun trouzus, en oabl stergannek Ghazir: " BUHEZ JEZUZ " gant Ernest Renan, skrivet gant liv ha war baper Tadoù Jezuisted Ghazir!

*

Ar c'hornad-bro hag a gomz ar muiañ eus Renan, hep doutañs ebet, ez eo Ghazir, rak eno ez eo bet aozet BUHEZ JEZUZ. Met dedennet e vez ar spered kalz muioù, en deiz a hiziv, gant Amschitt, teir lev bennak pelloc'h. Eno ennañ Herried o repoziñ da viken.

En ur zistreiñ eus ul labour graet evit klokaat o notennoù en em gavas Ernest hag Herried d'ar 16-vet a viz Gwengolo 1861, en Amschitt. Tapet o devoa o-daou, ya da vat, ar gwall-derzhienn. Herried a varvo. Renan, goude bezañ bet gwall-glañv, en em denno.

Un nebeut bloavezhioù kent, Lamartine, glozet en e galon, ha mantret, en devoa degaset gantañ d'ar vro, korf e verc'h yaouank marvet el Liban. Herried, c'hoar Renan, hi, a voe diskennet he c'horf, d'ar 24 a viz Gwengolo, e bez Mikael Tobia - e ti hemañ e vezent o lojañ - er vered, e-kreiz ar gêriadenn, tost d'an iliz. Diwezhatoc'h e tistroje korf he c'hoar d'ar vro. Diwezhatoc'h e kasje ar breur un enskrivadur war un daolenn-varmor.

N'en deus ket graet! Na kaset netra.

Un enskrivadur, unan hepken, a weler war ar monumant o sterniañ ar groaz, war bez familh Tobia; kemant-mañ a lenner en arabeg:

" Dre an nor-mañ e ranko pep den tremen. Nag ar c'hloar, nag ar binvidigezh ne bleg ar marv - Didalvez ez eo an holl aspedennoù "

Herried n'ennañ ket hec'h anv war ar maen. Dilezet ez eo bet evit ar beurbadolezh e bered Amschitt... Eval-se, ar Vreizhadez vihan-se hag a seblante hervez he flanedenn, graet evit bezañ douaret e bered Landreger, tost d'ar C'hloastr, a ziskuizh e douar pell.

Ret eo din bezañ onest. Gwechall en devoa Heinrich Heine skrivet " Aus meinen grossen Schmerzen... ". Ernest Renan diwar e c'hlaer-har bras en deus bet skrivet " Va C'hoar Herried ".

Danust hag e c'hellomp krediñ ez eo bet dilezet korf Herried er Reter, gant he breur, dre leziregezh? Rak erfin, Renan hag e wreg a zistroio da Amschitt er bloavezh 1865. Er bloavezh 1885 ez eo bet tremenet Ary Renan, mab Ernest, er gêriadenn.

Ne garfen ket ober un evezhiadenn boanius war ar breur-se. Rak evitañ marteze eo he deus Herried - ken start evel ma kare anezhañ - kollet he buhez hag hec'h ene. Fiziañs am eus en deus Renan c'hoantaet, dre izelegezh, e chomje ludu e c'hoar du-hont, pell, evit en em gemmeskiñ diwezhatoc'h gant hinñ an holl dud-se, gloriüs pe get, a ra er vro heoliet-se danvez an douar.

*

Bezomp fiziañs e kredenn an Iliz war Gumuniezh ar Sent. Erbedenn mab bihan Renan, Ernest Psichari he deus marteze teneaset Krouer an holl draoù, an hini a zo ennañ ar Galloud hag ar C'hloar.

Ernest Renan er Pantheon teñval, Herried e bez degemerus Tobia, du-hont war un heoliet Amschitt, a zle marteze silvidigezh o ene da Ernest Psichari. Hemañ ivez en deus graet an sberzh eus a vuhez.

" C'hwi a lavar, a skrive Barres en ur gomz diwar-benn " kili-er gerioù " e vez digristenet an dud gant Renan? Ma! amezañ,

ni e zo bet kristenaet gantañ!" Marteze e soñje Barres en dud distroet da Zoue evel Charlez ar Govig, Charlez Peguy, Jakez Mari - tain, Herri Massis, J.Lotte; e distro mab bihan Ernest Renan, en e hini e-unan.

Fellout a rae dezhañ marteze gouverkañ penaos dindan flemmadennoù Renan, diskibl Stroué, o deus ar Gatoliked imbourc'het, hervez ezhommoù ar burutellerezh hag ar soñjegezh, ar Bibl, Poblou ar Bibl, Broioù ar Bibl, evit en em gaout dirak an dra diarvar-mañ a-benn ar fin: "Ar Bibl Santel a zo ar wirionez gantañ".

Daoust hag e c'hellomp klozañ, evel Pius IX, pe c'houlenned digantañ e soñj diwar-benn Renan, goude ma oa bet embannet BUHEZ JEZUZ: "Renan a zo ur gaer a steredenn, met allaz! kouezhet eus an Qabl."

... Gant e stumm-skrivañ emañ c'hoazh an dudi, kozhik hag aet maez a c'hiz, stag ouzh traoù tremenet ha dislivet a weler a-wechoùigoù e salofoù fin ar c'hantved diwezhañ. Adlennet e vez atav gant plijadur e "BEDENN WAR AN AKROPOLIS" hag e "ENVORENNOU YADUANKIZ". Met traoù all...

Aleksander Veur, kent treuziñ an Hellsfont, evit risklañ e c'hafis hag e vuhez en Azia, en devoa lodennet e vadoù, e holl vadoù: "Ne zalc'hez netra evidout, Aleksander?" - Eo, a respontas an den meur: ar Goanag!

Pehini eo bet lodenn ar GOANAG en huñvreoù peuznozozel Renan, e kêriadenn Louaneg? Piv e oar peseurt divizoù a-ziabarzh a voe etrezañ hag Itron-Varia ar Marv-Met, e-pad e berc'herinded da Iliz Runan?...

Du-hont, war ribloù iskis Bro-Fenikia, ez eo bet azeulet an doue Adonis e-pad kantvedoù. Hiziv e pad an eñvor anezhañ en anv ur vleunienn ruz anvet: Adonis Vernalis:

"Memor an dud, a skrivo diwezhañoc'h, Renan, n'eo nemet ul linenn diverzus laosket gant pep hini ac'hanomp en askre ar beurbadelezh."

Piv ha petre, a-benn un nebeut kantvedoù a zalc'ho soñj eus an den meur ERNEST RENAN... Bleunienn ebet, ken distarik bennek ma vezo.

"Sic transit gloria mundi"

Dr A.G.

Lennet: Chateaubriand, Lamartine-Renan- Barrès-G.de Nerval- Lelong D.P. - Revue Benoit - Lasserre - Benmate - R. d'Ys - Dubreuil - Psicheri. h.s.
FAZI: lenn paj.33(en traoñ) Bezomp fiziañs... e Kumuniezh ar Sent

E Lovr-Yezhadur Kloareg-ar-Wern, eil mouldadur 1911, pajenn 191, e lenner (reolenn 205 bis) E yezh ar bobl, war-lerc'h ul lavarenn dizalc'h, dreist-holl ma vez graet gant ar verb-skoazell BER ec'h adlavarer a-wechoù ar verb e-unan pe ar verb-skoazell, da bouezañ muioc'h; hogen en e raok e lakaer HAG A: GLAV A GOUE(zh), HAG A GOUE(zh) - KOUEAN (kouezhañ) A REI, HAG A REI.

Hag e traoñ ar bajenn 191-se e lenner an notenn-mañ: an HAG A a vez distaget a-wechoù SAG A; lavaret e vez ivez e-lec'h all EZ A.

Anat eo diwar se en devoa damwelat Kloareg-ar-Wern e oa un dra bennak iskis er c'heñver-se er yezh-pobl, hep donet a-benn da sklaer- raat an traoù.

Setu eta penaos, a gav dimp, e tleer displegañ an dra-se: SAG A EZ A a zo gerioù faos. Dav gwelout eno ar verb EUS ha treiñ neuze EUS HAG hag EUS A.

Adkemeromp ar frazennoù a-us: GLAV A GOUEZH, EUS HAG A GOUEZH ha neuze KOUEZHAN A RAY, EUS A RAY.

Troioù-lavar evel-se e glevot bemdez e Treger, mar kirit selaou. Meneger ez eo bet kement-se dija meur a wech war VARR-HEDL. Da verkañ ervat, da bouezañ evel ma skriv Kloareg-ar-Wern e vez graet gant an dro-lavar-se. Gant troioù all evel EUS MA N'EO, EUS EC'H EO gant distagadur an EO en ê. Neuze Euzmane, Euzec'he.

Ret eo gwelout amañ ar stumm EUS eus ar verb BEZAN, o klotañ gant ar c'hembrag YS, distaget EUS hag a implijer alies e penn ar frazennoù: YS GWIR = Ez eo gwir. Ur restad eus un displegadur-verb kozh-meurbet ez eo eta SAG, EZ A, EUS MA, EUS EC'H EO. Ur stumm poblek-tra ez eo, nemet moarvat n'eo ket aezet da dapout evel-se ha da lakaat e yezh an unan. Mat eo, a gav dimp, gouzout ez eus anezhañ. Gallout a reer tremen heptañ. Ha neuze GLAV A GOUEZH, HAG A GOUEZH, da skouer, a zo brezhoneg leizh e neudenn ivez, na petra'ta!

E-keñver ar stumm dic'hour, e klevet ivez e Treger ul lavar ha na seblant ket bezañ bet notennet gant ar yezhadurourien. Ne gomzomp ket eus traoù evel AN DEN, AN NEN, AN UNAN, EUN: petra'lavarfe eun e-lec'h petra lavarfed, da skouer. Muioc'h personel, tostoc'h d'an hini a gomz ez eo an dro-lavar PETRA'LARFE EUN (lavarfe unan) e- get petra'lavarfed (implijet nebeut a-walc'h, gwir eo).

Ur stumm all an hini a fell dimp menegiñ: DEZHAN, implijet evel-se gant ar baotred hag ar merc'hed; da skouer: evel-se e tamm DEZHAN; se'ra poan DEZHAN e-lec'h se'ra poan DIN, evel-se e TOMM DIN. DEZHAN a zo muioc'h dibersonel

AR



GROAZ KELTIK

Ar maezioù 'oa didrouz ! Dindan heol miç Gouere
 Parkadoù ed melen goustad a wagenne,
 Lusket gant avel flour an hañv war an aodoù!...
 Kant seurt bleuñv a live gwrimenn ar brouskoadoù
 Hag he marelle splann 'vel ur ganevedenn !
 An evned a gane, pep hini e froudenn...
 Ar GINDI en tu-mañ, ar YEODI en tu all,
 E skeud o iliz-veur a bede Sant Tudwal
 Da wareziñ bezioù Dug Breizh ha Sant Erwan,
 Difennourien ar Vro hag ar Paour, hep ehan.

*

Em yaouankiz, em eus baleet gant dudi
 E disheol ar gwez bras, e " KOAD-AN-ESKOPTI "
 Ha goude an harlu, un deiz, me chom eno,
 Frealzet, evurus o lenn un ano
 Kizellet en ur maen tennet eus kalon Vreizh,
 Ano ur Barzh brudet hag a vege 'n e greiz,
 Evit Bro e gavell ur garantez wiriek :
 AR BRAZ ! Ma daoulagad ouzh ar Groaz Keltiek
 A stag dedennet-holl gant un huñvre varzhus !
 Gwalout a ran ar Groaz kreeket ha lugeznus,
 War he c'helc'h engravet " AR GWIR ENEP D'AR BED "
 Dirazi lore glas kempennet kaer-meurbet,
 E koun eus Drouized ha Barzhed Breizh-Tramor,
 Hag hor re, adalek Marzhin betek Bleimor !

*

Arsa! Petra'welan aze ' kreiz an dachenn ?
 Banniel Breizh didroadet, ul levr bras 'n e gichen

O-daou ezeeet start gant ur pezh chadenn hir,
 A-dreuz dezho sanket ur pikol kleze dir !
 Me'lenn war dal al levr: " SETU YEZH KAER BREIZHIZ "
 Ha piv eo an dud-se, o minc'hoarzh ken iskis,
 A zo gant pep a horzh, kluchet a-dreñv, du-hont,
 O skeiñ war an delwenn, ken feuls ha ma c'hallont ?

*

Met kerkent, e tregern ar " BRO GOZH MA ZADOU ",
 Ha dre bep gwenodenn, e tared strolladoù,
 Gwazed yaouank nerzhus, paotred-kozh kalonek,
 Merc'hedha bugale, pinvidig ezhommeg !
 Emgann ebet !... Hogen kenteliusat gonid !...
 Al lamoned trubard, dre-laer, a zo aet kuit.
 Ar WIRIONEZ 'zo trec'h, d'er gevier milliget.
 Levr dispar Yezh Vreizhiz a zo dichadennet;
 Dindan heol ar Frankiz emañ bremañ digor !
 Ur pennsoner a grog er c'hleze hag hen torr,
 'N un taol, war benn e c'hlin, hag a stlap an tammoù
 Davet an diaoul, evit peurrest ar c'hantvedoù !

Kleier bras Landreger a vrall war lein ar c'hrañ !
 Hor banniel " GWENN-H-DU " a drid, sonn en e sav !

Perwenan, 7 a viz Meurzh 1968

EVNIG PENN AR C'HOAD.



KELEIER a VREIZH

STROLLAD BEILHADEGOU TREGER. D'ar sadorn 23 a viz Meurzh 1968 er Sal Omnisport, e Lannuon o deus bet roet c'hoarierion Strollad ar Beilhadegoù, o 129-et abadenn. Tud ez int ha na zamantont ket d'o foan, anat deoc'h; hag o zouez ez eus c'hoarierion hag o deus desket o micher : deskiñ diwar ober, a leverer, ha gwir eo evit paotred ha merc'hed ar Strollad-se o vont en-dro abaoe un dek vloaz bennak. Tu a vafe moarvat da uhelaat danvez pezhioù ha karnouennoù 'zo, evel ma vez koat e pep lec'h gant ar seurt traoù; hogen pa zeu a-benn ar STROLLAD en amzer ar Skinwel da zedennañ selaouerion niverus ez eo dav lavarout e reont labour vray.

KENDALC'H KELTIEK FOJERA (20-25 Eost 1968) .Gobariet mat ez eo dija ar C'HENDALC'H ha spi a zo e ray berzh dispar. Merkañ mat ar chomlec'hioù-mañ: Sekretourva: J.Kler, 3 Place St Pierre, 44, Nantes (an Naoned)

Tefizorezh: Anna Le Bec, 12 Rue Astor, 29 S - Qimper (Kemper) K.R.P. 1420-35 Roazhon.

Pennqarqiad: Per Denez, Le Ris, Ploaré, 29 S - Douarnenez

KAMP ETRKELTIEK MUR (29 Gouere - 15 a viz Eost 1968): Skri-vañ d'ar Sekretourez : an Itron Vefa de Bellaing evit kaout an doareoù resis ha rekis : 28 Ru an 3 Breur Le Goff, St-Brieg.

DEVEZHIOU STUDI EOST 1968. War a glevomp e vo 16 Devezh studi aozet gant Skourr an Deskadurezh Vroadel (S.A.D.E.D.) e Gou- rin etre an 10 hag ar 25. Degemenn ebet m'hon eus bet ha dre- se, skrivañ da M.G. Cherel, 30 Plasenn al Lisoù, 35 Roazhon, da glevout hiroc'h. Dibabet fall a-walc'h, a gredomp, ez eo bet ar c'houlz en askont d'ar C'HENDALC'H ETRKELTIEK ha d'ar C'HAMP ETRKELTIEK.

A.D.R.E.C. (Association des Amis du Centre de Documentation Et de Recherche Celtiques de Brest). Savet eo bet ar C'he- vredad Nevez-se da reiñ ta d'ar studierion d'ober studioù hag enkleskoù war an Danvez Keltiek. Digor ez eo ivez d'an holl glaskerion, ha dindan Baeroniezh a Enor an Aotrou Moal, Rector Skol-Veur Roazhon emañ. Savet ez eus bet ur burev : Prezidant: an Aotrou Falc'hun, kelenner 1-af & eil Bes-Prezidant: Ar Mezeg Jeneral Laurent, an Ao.Gallo Sekretourion: M.Ar Barr ha Fañch Broudig.

Gant aval an emrenezh o c'hwezhañ war SKOL-VEUR BRQ-C'HALL e tauio marteze gwellaenn ivez e SKOL-VEUR Roazhon. Ur goulenn : perak un anv gallek d'ar C'hevredad Nevez ? Se'zo a c'hiz kozh. A.D.R.E.C. K.R.P. 1675 76 Roazhon.

BARR-HEOL

* En em gaout a ray lennerion Varr-Heol estonet o wslout pegen tev ez eo ar gelaouenn en-dro-mañ. Dre fañ an hini eo, siwazh! rak prientet e oa bet ar stensiloù en doare da embann ar gelaouenn iwerzhonat vrudet: AR ROZENN DU, lakaet e yezh ar Vretoned gant ar berzh bapred fresk ha yaouank e awen: Evnig Penn-ar-C'hoad. Hogen ne oa tu ebet d'hec'h embann en un doare dereat. Dre Offset an hini e vo tennet ha lakaet da heul BARR-HEOL.

* Ur skrid hir ha kaer diwar-benn DISKOUZADEG ETRVROADEL Krec'h-ar-Roue (Montreal) diwar blenn Jakez Konan, a zo degoue- zhet ganimp, dre p'emaomp oc'h ober beskelloù ar gelaouenn. Re ziwezhat eta. Met gortoz pell, gortoz well, gouez da Dregeriz!

* Hiviziken e vo gallet embann pajennoù'zo dre OFFSET, hag ivez luc'hskeudennoù. A dammoù da dammoù e oa gret e gof da Yannoù; dres ar pezh a c'hoarvez gant Barr-Heol.

* N'emañ ket hor c'helaouenn o klask sevel tazennoù kaer na zo- ken studiadennoù pervezh o tereout ouzh kelaouennoù all. Gallout a ra kement da c'her-stur ar werzad-mañ eus al Lizher DA FILIPIZ " Gant kement a zo gwir, gant kement a zo onest, gant kement a zo leal, gant kement a zo glan, gant kement a zo karadek, gant kement a zo a vrud vat, gant kement a zo annañ vertuz hag a zellez me- leudi, setu gant petra e tle bezañ ho spered " (Filp.IV.8)

* Bez'ez eus tachennoù gwerc'h ha fraost e park hor Yezh, tachen- noù miret d'ar c'helaouennoù qallek, e Breizh. N'aus kelaouenn ebet o komz eus Sportoù ar Yezh Vroadel, nag eus Skinwel, nag eus Sinema, nag eus Kanerion ha Kanerezed brudet ar bed; nag eus Skiantoù ar Bed a Vremañ, nemet tammoù bihan amañ hag ahont : ar BED KELTIEK da skouer gant pennadoù-studi A.Heusseff. Gallout a ra koulskoude un den bennak pa vez mestr war e dachenn sevel skridoù plijus ha talvoudus evel da skouer : AN ENEPBIOTIKOU KENTAN war Varr-Heol Meurzh 1968. Gwir eo, keit ha ma vo gwan hor buhez vroadel, keit ha na vimp ket mestr war benvioù ar c'helaouañ hag ar skolioù e vo diaes plediñ gant holl dachennoù ar vuhez, ar yec'hed, ar Skiant, ar Sport, an Diduamant; en ur ger gant kement a zo soursi ha preder Mab-Den, e soursi hag e breder en amzer-o-ren, na petra'ta.

* Na gontit ket war ar re all, grit ar pezh ez oc'h gouest da ober ha kalz a c'hellit, mar kirit. Ar Feiz ennoc'h hag en ho Pro eo ho tieubo.


* Tapit krog en ho pluenn, pe it en ho koazez kentoc'h dirak ho mekanikoù-da-skrivañ ha kasit frouezh ho Feiz da renerion ar c'he- laouennoù skrivet ar Yezh Vroadel. Time is money !

Savet
ton ha son
gant Yann Derrien


Ur Pok Kentañ




Dou zen yaouank vel an holl yaouan-
ur pok Kentañ bet ro-et mesk ar



Ki-zou War vord ar mor un devezh o va-
c'her-reg A zo chomet tomm war o muzel-



le - Dou zen yaouank o deus graet pro me
lou - Si wazh ar vuhez'zo leun a boan



se-ou Timezjent an eil d'e gi - le
spered E vit an holl yaouanki-zou



Timezjent an eil d'e gi - le
E vit an holl yaouanki-zou

1
Dou zen yaouank 'vel an holl yaouankizou
War vord ar mor un devezh o vale
Dou zen yaouank o deus graet promesaou
Timezjent an eil d'egile

Ur pok kentañ bet roet mesk ar c'herreg*
A zo chomet tomm war o muzelloù
Siwazh! ar vuhez'zo leun a boan-spered
E vit an holl yaouankizou (2 w.)

2

Marivonig un deiz a zo partiet
Kuitet he deus he zi 'kichen an aod
Da gostez Pariz eo aet da labourat
Ankouët he deus he martolod ! (2 w)
Ur pok kentañ bet roet mesk ar c'herreg
'Zo tremenet 'vel tremen ar blañioù !
Siwazh! ar vuhez'zo leun a boan-spered
E vit an holl yaouankizou (2 wech)

3

Yannig aboe an deiz-se'zo glac'haret
Pelloc'h 'c'h aio bemdez da besketa
N'hello biken ankouët e vuiañ-karat
He deus dilezet anezhañ (2 wech)
Ur pok kentañ bet roet mesk ar c'herreg
A zo chomet tomm war e vuzelloù,
Ha krediñ'ra dezhañ un devezh, gwelet
Marivonig o tont en-dro (2 wech)

4

Marivonig un deiz'zo deut war he c'hiz
Distroet eo davet bro he c'havell
Skuizh eo bet gant buhez trouzus Pariz
Deut eo en-dro da Vreizh-Izel (2 w)
Ur pok kentañ bet roet mesk ar c'herreg
Na deo biskoazh yevet war he divjod.
'Vit an deizioù ni glevio kleier eured
Marivonig d'he martolod (2 wech)

Yann DERRIEN

* Ar c'herreg: e gwirionez e Treger e leverer ar gerred,
stumm implijet gant Yann Derrien en e son. Reizhet hon aus evit
abegoù anat d'hol lennerion, evel un nebeudig traoùigoù amañ
hag ahont.

DISKLERIADUR

Sinañ a ran, Jean Derrien o chom e Louaneg, e roan d'an Ao-
trou Le Clerc, person en Bulien, an aotre da embann War BARR-
HEOL ha war gement kazetenn a blijjo gantañ, an holl ganaouennoù
bet savet ganin.

Graet en Louaneg an 29 e viz Meurzh 1968.

Y. Derrien.

FEDENN WAR AN AKROPOLIS

O nobled ! o kened eeun ha gwirion ! doueez hag a zo da relijion poell ha furnez, te hag a zo da dempl ur gentel beur-bedus a goustiañs hag a wirionded, gwall ziwezhat emeon o te-gouezhout war dreuzoù da gevriñoù; degas a ran war da aoter kalz a vorc'hed. Evit da gavout em eus ranket ober enklaskoù diniver. An deskoni hag a roes gant ur mouc'hoarzh d'an Atenead o c'hanel, he gonezet am eus dre forzh prederiañ ha diwar goust striva-dennoù hir.

Me'zo ganet, doueez da zaoulagad c'hlas, a dud varbar e-touez Kimmeriz, tud vat ha vertuzus, a zo o chom war c'hlann ur mor teñval, kribellaouet a gerreg ha kannel bepred gant ar barriou-amzer. A-vec'h ma'z anavezet eno an heol; ar bleunioù ez eo ar c'hinvi-mor, ar bezhinoù hag ar c'hregin lisliv a gaver e goueled ar baeoù digenvez. Disliv e hañval bezañ ar c'houmoul, ha tristidik ez eo al levenez hec'h-unan, hogen faunteunioù dour yen a strink eno eus ar roc'h, ha daoulagad ar merc'hed yaouank eno a zo evel ar feunteunioù glas-gwer a sell enno an oabl outañ e-unan war veleadoù limous lostennek.

" Va zadoù, keit ha ma c'heller monet en amzer dremaet a oa o lod ober merdeadennoù hir war voriou dianav d'az Argonaoted. Pa oan yaouank e klevis kanaouennoù war ar beajoù da vroioù pell an hanternoz; luskallet e voen em c'havell ouzh an effvor eus skornegi war-neuñv, eus morioù letarek hañvel ouzh laezh, eus inizi annezet gant laboused a gan d'o eurioù hag a lak an oabl da deñvalaat pa gemeront o nij a-gevret.

" Beleion ur relijion estren deuet digant Siriiz a Bales-tina a bledas gant aked d'am sevel. Fur ha santel e oa ar veleion-se. Deskiñ a rejont din istorioù hir Kronoz, an hini en deus krouet ar bed, hag istor e vab bet, war a leverer, oc'h ober un dro war an douar. Teir gwech uheloc'h eget da hini-te, o Eurythmia, ez eo o zemploù, hag hañval ouzh forestoù; nemet ne dint ket ferv, kouezhañ en o foull a reont a-benn pemp pe c'hwec'h kant vloaz; faltaziennoù ez int a-berzh Barbared hag a soñj ganto e c'heller ober un dra bennak a vad a-zlavaz d'ar reolennoù ac'h eus merket d'az tud awenet, o Poell ! Hogen plijout a rae din-me an temploù-se; n'em boa ket studiet da arz doueel; enno e kaven Doue. Eno e kened kantikoù hag am eus soñj anezho c'hoazh : " Ni ho salud, Steredenn-Vor... rouanez ar re a zo o hirvoudiñ en draoñienn-mañ a zastroù." pe c'hoazh " Rozenn

gevriñus, Tour Olifant, Ti aour, Steredenn ar Mintin". Sell, doueez, pa'z effvoran ar c'hanennoù-se, e teuz va c'halon em c'hreiz hag e teuan war-bouez nebeut da vezañ ur renaviad. Pardon din an taol lu-se: n'hellez ket kompren an dudi o deus lakaet an achantourion varbar er gwerzennoù-se, ha pegen start e kavan mont da heul ar poell noazh-blouc'h.

" Ha neuze me oufes pegen diaes ez eo deuet da vezañ servijañ ac'hanout. Steuziet ez eo pep nobled. Ar Skuted o deus aloubet ar bed-holl. N'eus mui a republikoù tud diaub, n'eus mui nemet rouaned savet diwar ur gwad ponner, meurdedoù hag a rafe dit gwenn-c'hoarzhin. Huperboreidi duzum hag a ra tud skañv benn eus ar re a servij ac'hanout. Ur b-PAMBEOTIA da spontañ dirazi, ur genseurtiezh eus an holl sotinabezoù, e led war ar bed ur golo-plom a vouger dindanañ. Zoken ar re az kehel, nag e tleont ober dit trueziñ !

" Ha soñj ac'h eus eus ar C'haledoniad-se, bez'ez eus 50 vloaz 'zo, a vruzhunaz da dempl a daolioù-morzhol evit e gas da d-Tule ? E-giz'e reont holl. Skrivet em eus, hervez unan bennak eus ar reolennoù a gerez, o Theonos, buhez an doue yaouank a servijis em bugaleaj; va lesanvet o deus un eil Evhemeros; skrivañ a reont din da c'houlenn peseurt pal a felle din tizhout, ne brizont nemet ar pezh a laka o zaolioù-trapezourioù da amplediñ. Ha perak a skriver buhez an doueed, o va enel, mar ne deo ket evit lakaet an doueal a voe enno da vezañ karet, ha da ziskouez ez eo bev atav an doueal-se hag a chomo bev da viken e kalon mab-den ?

" Ha soñj ac'h eus eus an deiz-se, p'edo Dionuzioz arc'hontoz, ma'z pruas amañ ur yuzev bihan disneuz hag a gouez gresianeg 'giz tud Siria, a valeas dre da leurennoù-sakr hap meizañ man ebet ennout, a lennas da enskrivadurioù a-dreuz penn-da-benn, hag a soñjas gantañ bezañ kavet e diabarzh da gelañ-mogarioù an aoter dediet d'un doue hag a vije bet an Doue Dianav ? Ac'hantal ket eo an trac'h gant ar yuzev bihan-se; e-pad mil bloaz ez out bet anvet idolenn, o Gwirionez; e-pad mil bloaz ez eo bet ar bed ur gouelec'h e-lec'h na ziwane bleunienn ebet. E-pad ar c'heit-se e taves, o Sal-pinks, trompil ar reiz. Doueez an urzh, skeudenn eus divrallded an neuñv, pec'hed e oa da garout, ha bremañ m'hon eus war-bouez seveniñ ul labour koustiañs tostet dit, e rebecher dimp bezañ graet un torfed a-enep spered an den, en ur derrañ chadennoù a dre-mene Platon hepto.

" Te hepken a zo yaouank, o Kora; te hepken a zo glan, o Gwerc'hez; te hepken a zo yec'h, o Hugie; te hepken a zo krañv, o Trec'h. Ar c'hêriqù, o diwall a rez, o Promac'hoz; digant Maurzh az pezh kemant a voe ezhomm; o Areia; ar peoc'h eo da bal, o Peoc'h-areez. Lezennoerez, mamman ar pennlezennoezurioù reizh; Demokratia

te hag a zo homañ da greñenn veur: e teu pep tra eus ar bobl, ha lec'h n'eus ket a bobl evit maeñ hag awenañ an ijin. n'eus netra - te, desk dimp tennañ an diament eus an engroezioù dic'hlan. Ravezh Jupiter, micherourez doueel, mamm pep ijinerezh, gwara-zourez al labour, o Ergane, te hag a zo noblañs ar micherour se-venaet hag hen laka keit a-us d'ar Skutiad diegus; furnez, te bet ganet gant Zeuz goude plegañ warnañ e-unan, ha goude bezañ dizanet don; te hag a zo e' t'ad u'banet-klok jan' e anien. te hag a zo e gompagnonez hag e emskiant; Nerzh Zeuz, fulenn a enaou hag a vag an tan en harozed hag en dud-veur, gra ganimp speredelourion beure'hraet. En deiz ma stourmas Ateneiz ha Rodeneziz evit an aberzh, e tibajout ober da annez gant Ateneiz evel tud furoc'h. Nemet da dad koulskoude a reas da Blutoz diskenn en ur goabrennaour war gêr Rodeneziz, dre m'o devoa ivez rentet enor d'e verc'h. Pinvidik e voe Rodeneziz; met spered o devoe Ateneiz, da lavarout eo, ar gwir levez, an drantiz peurbadus, bugeliezh doueel ar galon.

Ne vo salvet ar bed nemet war-bouez distreiñ ouzhit, en ur zistorel kuit e liammoù barberek. Redomp, deomp a-vagadoù. Na kaerat deiz, an deiz ma teuo an holl gêrioù hag o deus kaset ganto darn eus dismantrou da dempl: Venezia, Pariz, Londrez, Kopenhagen, da resteurel o laeroñsioù, a raio ambragadegoù-sakr evit degas en-dro an tammoù en o c'herz, en ur lavarout: " Pardon dimp, o doueez, evit o diframmañ digant arc'houereed fall an noz an hini'oa! " ha da adsevel da vurioù ouzh son ar fleüt, da zi-c'haouiñ torfed an den droukvudet Lisandroz. Ha neuze ez aint da Sparta da villigañ an douar e-lec'h ma save ar vestrez-se a zroukfazioù teñval, ha d'he c'hunujenniñ dre n'eus mui anezhi.

" Start ennout e talc'hin penn ouzh va c'huzulierezed didec'hus; va arvarouriezh hag a ra din kaout diskred war ar bobl; va nec'hamant-spered hag a ra din derc'hel da glask ar gwir goude ma vez bet kavet; va faltazi hag a vir ouzhin da chom er peoc'h, goude m'he devez ar Rezon douget he disentez. O Arc'hegetez, uhelvennad ankorfet gant an den-a-ijin en e bennoberoù, gwell ganin bezañ an diwezhañ ez ti, eget ar c'hentañ e lec'h all. Ya, en em stagañ a rin ouzh stilobat da dempl; pep kelennadurezh a ankounac'hain nemet da hini; en em ober a rin stilit war da bilieroù; va c'hell a vezo war da c'hourzreust.* Tra diaesoc'h! Evidout e teuin da vezañ, mar gallan, dic'houzañvent, untuek. Ne ganin nemedout-te. Emaon o vont da zeskiñ da yezh, ha dizeskiñ ar peurrest. Amjust e vin evit kement na sell ket ouzhit; en em ober servijer an hini izelañ eus da vibion. An dud hag a ra o annez war an douar az poe roet da Erec'hthee, o c'hammeuliñ a rin, o loviñ. Klask a rin karout o sioù fall zoken; reiñ a rin da grediñ din va-unan, o Hippia, ez int diskennidi ar varc'heien

a lid a-hont war varmor da rizenn, o gouel peurbadus. Diframmañ a rin eus va c'halon kement neudenn ha n'eo ket poell nag arz pur. Paouez a rin da garout va c'hlevedoù ha d'en em blijout em zezhienn. Souten va mennad start, o Yac'haus; ro skoazell din-me, o te hag a salv!

" Nag a ziaesterioù evit gwir a rakvelan, nag a voazioù-spered am bezo da gemmañ, nag a efforenoù dudius am bezo da dennañ kuit eus va c'halon! Esa a rin; met ne don ket sur diouzhin va-unan. Diwezhat em eus da anavezet, kened peurvut. Degouezhout a ray ganin distreiñ diwar va soñj, kaout falladennoù. Ur filozofiezh drouktamzet hep mar, he deus va douget da grediñ penaos an droug hag ar mad, ar blijadur hag ar boan, ar c'haer hag ar vil, ar poell hag ar follentez, a dro an eil en egile dre arlvioù ken diheverz ha re gouzaug ur goulm. Chom hep karout netra, hep kasaat netra a-grenn, a zeu da vezañ furnez. Ma vije bet ur gevredigezh bennak, ur brederouriezh bennak, ur relijion bennak hag a vije bet ganti ar wirionez paurglok, ar gevredigezh-se, ar brederouriezh-se, ar relijion-se he dije tre-c'het war ar re all, hag hi hameti a vije bav, en deiz a hiziv. Ar re holl hag o deus kredet betek-hen edo ar wirionez ganto a zo bet faziet, hen gwelout fraezh a reomp. Daoust hag e c'hellomp hep emc'hloar diskiant krediñ n'hor barno ket an dazoned evel ma varnomp-ni an tremened? Setu al levarioù disakr a vousken din va spered breinet-don. Ul lennegezh hag a vije, evel da hini, yac'h a boent da boent, na rafe nemet lakaat enoe da sevel bremañ.

" Mousc'hoarabin a rez ouzh va didroidellerezh. Ya! an enoe... Brein ez omp: petra da ober a-enep da se? Pelloc'h ez in, o doueez reizhkredenn; dispakañ a rin dit ar fallentez eus va c'halon en he don-donañ. Poell he skiant-vat n'int a-walc'h drezo o-unan. Bez'ez eus barzhoniezh er Strimon skornet, hag e mezventi an Trakiad. Donet a raio kantvedoù ma tremeno da ziskibion evit diskibion an enoe. Brasoc'h ez eo ar bed eget na gredez. M'az pijs gwalet arc'hegi penn-ahel-ar-bed, ha kevriñoù oabl bed-ar-c'hreistaiz, da dal, o doueez kalmek bepred, ne vefe ket ken seder; da benn, ledanoc'h, a bakfe seurtoù disheñvel a gened.

" Te'zo gwir, glan, peurvut; divestez ez eo da varmor; met templ Hagia-Sophia hag a zo e Buzantion, a ra ivez un efed doueel gant he brikennoù hag he flestraj. Bez'ez eo ar skeudenn eus bolz an neñv. En e boull e kouezho; hogen ma vafe da gella-te ledan a-walc'h evit dastum, klozañ un engroez, e kouezhe ivez en he foull.

(gwelout an dibenn Pajenn 67.)

* Gourzreust, penn dreust, arkitrav

KRENNLAVARIOÙ

(kendalc'h)

Ni baidd llwfr lam ehelaeth = Ne grad ket an den laosk (ober) ul lamm bres

Ni bu Arthur ond tra fu = Ne voe Arzhur nemet keit ha ma voe.

Ni bu ddrwg i un na bai dda i arall = Ne voe droug ebet evit unan a gement na oa ur mad evit un all.

Ni bydd ehofn noeth yn vsgall = Ne vez ket dizaon an hini noazh e-touez an askol.

Ni cheir afal pèr ar bren sur = Ne gaver ket a aval c'hwak war goad put (trenk)

Ni cheir gan y llwynog ond ei groen = Ne gaver el louarn nemet e groc'hen.

Ni cheir gwlan rhywiaq(rhywioq) ar glyn gafr = Ne gaver ket a c'hlaen tener war gain ur c'havr.

Ni cheir y melyn heb y chwerw = Ne gaver ket an dous hep ar c'hwerv.

Ni chël drygdir ei eqin = Ne guzh ket an douar fall e egin (had)

Nichêl grudd gystudd calon = Ne guzh ket ar jod nec'h ar galon.

Ni chël ynfyd ei feddwl = Ne guzh ket an diskiant e venoz.

Ni chlyw madyn ei ddrysawr ei hun = Ne glev ket al louarn e c'hwez fall e-unan.

Ni choelir y moel oni welir ei ymenydd = Ne greder ket ar moel anez gwelout e ompenn.

Ni chofia chweqr pan fu gwaudd = N'he devez ket ar vamm-gaer soñj e voe gouhez hec'h-unan.

Ni chwsq gwaq foly (= bol) = Kof goullto ne gousk ket.

Ni chwyn ci er ei daraw ag asqwrn = Ne glemm ket ar c'hi daoust ma skoer gantañ gant un askorn.

Ni chwyn yr iar fod y gwalch yn glaf = Ne glemm ket ar yar war zigarez ez eo kleñv ar falc'hun.

Ni chyll yr iâr ei hirnos = Ne goll ket ar yar he noz hir.

KEMBRAEK

Ni ddaw doe byth = Ne zeuio dec'h biken (en-dro)

Ni ddeil yr erwr ednogvn = Ne bak ket an erer evn bihan

Ni ellir coed o unpren = N'eo ket ur wezenn a ra ur c'hoad.

Ni ddichon gwan ond qweiddi = Ne c'hell ar gwan (ober) nemet krial.

Ni ddiffyg esqus ar wraig = Ne vank ket a zigarez(ioù) d'ur vaouez.

Ni diffyg ffon ar ynfyd = Ne vank ket a vizhier(a vazh) war (gain) ur sod.

Ni eill barnu ni wrandawo = Neb na selaouo ket ne c'hell barn.

Ni eill dyn ochel tynged = Ne c'hell den tec'hout rak e blanedenn

Ni eill neb namyn ei allu = Ne c'hell den (ober) nemet e c'helloud.

Ni heuir ni fedir = Anez hadañ ne veder ket

Ni thynnafddraen o droed yr un-A'i ddpdi yn fy nhroed fy hun = Ne dennin ket un draenenn eus troad den Evit he lakaat em zroad va-unan.

Ni wna y llvgoden ei nyth yn llosgwrn y gâth = Ne ra ket al logodenn he neizh e lost ar c'hazh (= ar gazh, e rannyezhoù'zo)

Ni wyddis eisio y ffynnon onid êl yn hesp = N'anavezet an ezhomm eus ar fauntuen nemet pa vez aet da hesp (pe hesk)

Ni wyr ond a wrandawo = Ne oar nemet neb a selaou.

Ni wyr neb pa esqid ddiweddef a wisq = Ne oar neb peseurt botez a wisko da ziwezhañ (= pe votez diwezhañ a wiko)

Ni wyr yn llwyr namyn llyfr = N'eus nemet al levr a gement e oar penn-da-benn.

Nid ar redeq y mae aredig = N'eo ket diwar red e (tleer) hadañ.

Nid chwareu chwareu â thân = N'eo ket c'hoari c'hoar gant tan.

Nid da rhy o ddim = Re eus mann ne dal mann.

Nid edrychir vn llygad march rhodd = Ne seller ket e lagad ur marc'h bet e prof.

Nid hawdd blingaw(blingo) ag elastren = N'eo ket aes digroc'heniñ gant un elastrenn.

Nid hawdd lladrata oddi ar lleidr = N'eo ket aes laerezh ul laer.

Nid hawdd tynu mâr o bost = N'eo ket aes tennañ mel (askern) eus ur post (koad)

Nid oes ganddo'r ewinedd i ymgrafu = N'en deus ket ivinoù d'en en skrabat.

Nid oad neb heb ei fai = N'eus den hep e si.

Nid oes neb can (=cyn) ddalled -A'r neb ni fynno weled.
N'eus ket gwashoc'h dall eget an hini n'houll ket gwelet.

Nid prophwyd neb yn ei wlad ei hun = N'eus den profed en e vro.

Nid rhaid doddi cloch am fwnwgl yr ynfyd = N'eo ket ret lakaat ur c'hloc'h en-dro da c'houzoug n den sot.

Nid sant neb yn ei fater ei hun = Sant ebet war e dachenn e-unan (n'hell den ebet en em varn e-unan, gout e dalvoudegezh e-unan.)

Nid trymach y blewyn llwyd no'r (= na'r) gwyn =
N'eo ket ponneroc'h ar vlevenn louet eget an hini wenn.

Nid wrth ei big y mae prynu cyffwlog =
N'eo ket diouzh e bigos e vez pronet ur c'hafelag.

Nid y borau y mae canmawl (canmoli) diwrnod têt =
N'eo ket diouzh ar beure e tleer maullif un devezh kaer.

Nid ymqêl cariad lle y bo = Ar garantez, pa vez, n'en em guzh ket.

Nid ymqêl drwg lle y bo = An draug n'en em guzh ket pa vez. (el lec'h ma vez)

Nid ar undydd yr adeilwyd Rhyfain = N'eo ket en un devezh e voe savet Roma.

Noswyl iâr gwac a'i car = Nozveilh yar, gwa neb he c'har.

Nid tloidi ond clefyd = N'eus paoureux nemet ar c'hlefyd.

Nid cyfoeth ond iechyd = Pinvidigezh ebet estreget yec'hed.

Nid llawenydd ond nêf = Levenez ebet nemet an nêf.

Nid glan ond pyag = Netra naet nemet ar pesk.

Nid esmwyth ond pathew = Netra aezet (en e aes) nemet an hunegan.

Nid balch ond alarch = Netra balc'h, nemet alarc'h.

Ni wyr y qêq ond yr un gainc = Ne oar ar goukoug nemet ur sonenn.

Ni bu lanw na bai drai = Lanv ebet hep trec'h (tre) chal ebet hep dichal.

Ni ddelir hen adar âq us = Na daper ket evned kozh gant usmol.

Ni wna geiriau têtq hau v tir = N'eo ket gerioù brav a had an douar.

Ni waeth ganddo o ba du i'r têt yr heuer y cywarch =
Ingal eo dezhañ eus pe du d'an ti e hader ar c'hoarc'h.

Ni chyll cybydd mo'i lêe er ei gwilydd = Ne goll ket an den pizh e c'honidegezh daoust d'ar vezh (= d'e vezh)

Ni châr hen fuwch ddyniawed = Ne gar ket ur vuoc'h kozh ur c'hojen*

Nid â rhinwedd i'r bedd byth = Ne da morse ar vertuz c'ar bez.

Ni wnâ na byw na marw = Ne ra na van na seblant (= na bev na marv)

Ni waeth tewi na siarad = Ingal eo pe devel pe gomz.

Ni cheier gan ddrwg dalwr ond drwg dafod =
Ne gaver gant fall baer nemet fall deod (drouk-komzoù)

Nid pob dyn cryf a fedr ganu telyn = N'hell ket pep den kreñv seni an delenn.

Ni wiw i'r llygoden ymrson piso â chaseq
Ne zere ket ouzh al logodenn kevezañ gant ur gazeg da bisat.

Ni adnabo ammaid yf iâr bid heb wy i'w swpper
Neb na anavez ket meneg (sin) ar yar, bezet hep vi d'e goan.

Nid eglur y drych yn y tywyllawch
N'eo ket sklaer ar melezour en deñvalded.

Nis gwyr pa elini'w gosi = Ne oar ket pe ilin skrapat

Ni ddaw hensaint ei hunan = Ne zeu ket kozhni hec'h-unan.

Ni thyf qwellt ar ffordd fawr = Ne sav ket geot war hent bras.

Ni ddelir hen qeffyl âq us = Ne daper ket ur mac'h kozh gant usmol.

Ni fu erioed ddiqon na byddai beth yn ôl = Ne voe biskoazh trawalc'h a gement na chomas mann war-lerc'h.

Ni bu ddrwg erioed o hirymaros = Ne voe biskoazh droug diwar hir-c'harqtoz (pe= na voe biskoazh keuz)

Ni cheir y dyn ond fel y bo = Ne gaver an den nemet evel m'emañ
Gwnewch iddo'r tro a fynno Kaer ho po ober dezhañ ar pezh a garo.

Nid rhaid doddi cloch wrth fursen
N'eo ket ret lakaat ur c'hloc'h d'ur strakall.

* Wilyawed = onner bloaz, daou vloaz, buoc'h yaouank, hag ivez krennejen, kojen. Ar stêr muiañ naturel a gav dimp en degouezh-mañ ez eo an hini hon eus merket.

Nôz a vr brain adref = An noz a gas ar brini d'ar gêr.

Nofio fel v qarreg = neuial evel ar maen

0

O cheif vr afr fyned i'r eglwys, hi a â i'r allor
Ma tegouezh gant ar c'havr monet d'an iliz, **ez** a betek an aoter.

Odid a gatwa ei wyneb o eisiwed

Dibaot hini a ziwall e zremm diouzh an ezewed.

Odid archoll heb waed = Dibaot gouli hep gwad.

Dâd dyn têg dianaf = Dibaot den kaer disi.

O flewn i flewn vr a'r pen yn foel = Blevenn ha blevenn ez a ar penn da voal.

Odni ei qvsqawd (qvsqod) = Kaout aon rak e skeud.

O gwirdeb y galon - Y dywaid y gwirion

Eus lealded e galon - E komz an den gwirion. (pe dizrouk)

Oni byddi cryf bydd qvfrwys = Ma n'out ket kreñv bez gwidreüs (fin)

Oni cheffi qennin, dwy fresych = Ma na gevez pour, degas kaol.

Oni cheir ni fedir = Anez hadañ ne veder ket

Ond march ys caseq = Ma n'eo ket marc'h ez eo kazeg (bihanañ)

O ddeudrwaq qoreu y lleiaf = Eus daou zroug, ar gwellañ ar

O'r aeron qoreu vw yr eirin = Eus ar frouezh gwellañ re'zo' eo n'irin.

Os qwr mawr cawr, os qwr bychan cor

Mar deo un den bras (ez eo) ur Ramz, mar deo bihan, ur c'horr.

P

Pam y pige'r iâr y badell ? Eisiau tafawd (tafod) i'w llyfu

Perak e pigos ar yar ar billig ? Pa n'he deus teod ebet d'he lipat. (pa vank un teod dezhi d'he lipat !)

Paham y llyf y ci y maen ? Am nes gall ei vsu ?

Perak e lip ar c'hi ar maen ? Dre n'hell ket ha c'hignat.

Pan bwysor arnad, tyn dy droed attad = Pa waeker warnout (pa bouezer warnout, sach da droad ganit !

Pan dywiso y dall ddall arall, y ddau a ddygwidd i'r pwll

Pa vlegn an den un dall arall, o-daou e kouezhont er poull.

Piso i'r mor = Pisat er mor.

(da genderc'hel)

KEGINEREZH

HOUD GANT MUSKADIG : - un houd yaouank
- tammoù kig-sall; chalotez; togoù-touseged
- rezin; avaloù (frouezh); krampouezh sall;
- sitroñs (un diveradenn); koaven fresk;
- ur werannad vras a vuskadig.

Troc'hañ an houd e tammoù. Lakaat an tammoù-se da boazhañ en amann er billig. Ur wech tost da vezañ poazh, tennañ an tammoù - houd hag o lakaat a-gostez; lakaat neuze chalotez da rouzañ er billig hag ivez an tammoù kig-sall gant ur werannad vras a vuskadig. Lakaat ivez ar c'hoaven en hilienn-se. Neuze'vez adlakaat an tammoù -houd da beurechuiñ da boazhañ er billig. Arabat disoñjal ar pebr hag an holen.

Gallout a reer servijiñ hervez ar c'houlz gant piz bihan pe gant kabelloù-touseged poazhet en amann gant un diveradenn sitroñs evit ma chomfent gwenn. War un dro gant an houd e c'heller reiñ rezin diblusket, avaloù diblusket ha war ar plad en-dro d'an houd e c'heller lakaat tammoù krampouezh sall.
(war-dro un dek vloaz'zo bennak hepken ep deuet an ijinadenn-gegin -se da vezañ brudet)

VIOD GANT BLEUD ED-DU : --un hanter (½) tasad bleud ed-du
- teir gwerannad laezh
- un dornad tammoùigoù kig-sall
- pevar vi; holen, pebr; ognonetaz

Meskañ ar bleud gant al laezh evit ober toaz tav a-walc'h. Lakaat pebr hag holen. Meskañ ar viod evel evit un alumenn. Lakaat an tammoù kig-sall.

Lakaat da boazhañ en ur billig evel un grampouezhenn dev ha rouzañ war an deou du. Troc'hañ a dammoù. Reiñ da bep hini un asied tomm.

GWASTELL DEIZ HA BLOAZ: Ur c'hartouron amann: kement all a vleud hag a sukr; daou vi; un dornad rezin sec'h lakaat da c'hlec'hiañ en div loaiaid rom; un tamm goell chimik (Baking Powder); ur varenn pe ziv a chokolad.

Meskañ mat an amann hag ar viod. Lakaat ar sukr ha pa vez deuet skañv a-walc'h en doazenn, lakaat ar bleud tamm bihan ha tamm bihan. Ar goell a vo mesket gant ar bleud. Erfin lakaat ar rezin. Lakaat en ur moull amannennet ha poazhañ dousik a-pad un hantar-eur. Ur wech yen, skrivañ gant chokolad teuzet anv an hini eo e ouel pe e vloavezh (deiz ha bloaz e c'hanedigezh)

ANNAIG HA MARK
17 a viz Eost 1963

ROLL-MEU ZIOÙ

Digor-kaon
Dimezelled eus Belon
Rouanez ar Mor Bras
Turbodenn gant hilienn Holland
Teod bevin gant hilienn " Madera "
Kilheien rostet
Avaloù-douar fritet
Saladen
Bombezen skornet
Krampouezh - Dantelezh
Gwestell
Frouezh a bep saurt
Kafe-Likorioù

GWIN

muskaded
gros-plant
St Rooy Hôtel
Champagn

=====
Soubenn ar Yar
Avaloù-sukrin gant " Porto "
Morzhed-hoc'h mimoza
Saladen frouezh
Gwestell eus ar vro
Kafe

FURCHADEG E TI AR PERSON

Komzet o deus ar journalioù * eus ar weladenn o deus graet polised eus Roazhon (P.J.) da berson Bulien (5.3.68). En abeg d'an tennoù dinamit bet e Kemper hag e Sant-Brieg e ti ar brefeded. An taolioù-se, a-hervez, a zo bet graet gant an F.L.B. Ret furchal dre-holl da zizoleiñ an dinamiterien-se. Deuet eo ar bolised eta da welout hag-efñ ne gavjent ket ur roudenn ben-nak anezho e presbital Bulien ! Daou bolis e sivil e oant, ul lizher ganto sinet F.L.B* hag a lavarent bezañ bet tremenet dre zaouarn ar person, met pa ne oant ket evit gout hag-efñ e oa gwir, neuze e rejont furchadeg, hervez un urzh roet dezho gant barnar-enklasker Kemper. Unan eus ar bolised ne ouie ger brezhonek ebet, ha kouezhet mat e oa evel just, e-mesk ar stalied paperioù ha lizheroù brezhonek berniet e kement kouign'zo er presbital. Ur Breizhad e oa koulskoude, met n'eo ket er Skol n'eus forzh penaos en dije gallet deskiñ brezhoneg, evel ouzoc'h ! Ha neuze ne sell ket ar Gouarnamant ouzh ar Yezh, hag ar re a zo e karg dindanañ, zoken an dud uhel evel Prefeded hag Isprefa-

ded hag all, a c'hell bezañ eus lec'h a garfet, ha bezañ hap gout yezh ar Vretoned, daoust ma'z eo kement-se un dra krenn a-enep ar Justis, ha droedoù er Bobl vretien.

Ne oa ket bet pell an daou-mañ o welout o devoa graet ur gammed c'houll o tont da furchal er presbital. Met ret e oa dezho tremen o amzer, rak ur furchadeg n'eo ket sañset da vezañ graet ken buan ha lavarout " chou " d'ur yar: unan anezho (paotr ar galleg) a zibabe d'egile, hag hemañ en devoa kalz muioc'h a blijadur oc'h esa lenn al lizheroù...latin eget ar re e brezhoneg. Goude bezañ furchet en div sal en traoñ hag huanadet n'ouzon ket pet gwech : Ma! a-benn hanternoz e vefomp amañ c'hoazh ! " (E gwirionez en ur ober eizh deiz ne vijent ket deuet a-benn da zispakañ pep tra!), e voent kaset da gambr ar person, ha d'ar gambr all e-lec'h m'emañ ar mekanik-da-skrivañ, an hini e servij d'ober ar GOULMIG, hag enni ivez lizheroù ha paperioù forzh pegement. Hag evit ma vijent bet sur na oa ket a zinamit e TI AR PERSON, e voent ambrouget d'ar solier d'en em luziañ adarre e-mesk ar paperoù, hag e rankas unan anezho mont en e zaublegoù da sellout er c'houign eus ar solier e-lec'h na vez nemet razhed ha logod (pa ne vezont ket bet ampoezo-net gant Anne-Marie !) o c'hoari las.

Evit ober plijadur dezho hag evit n'ajent ket en-goullo d'ar gêr e sinas ar person n'en devoa mann da welout gant an drqz bet e Sant-Brieg hag e Kemper ! Ha ken kontant e oant ma'z asant-jont evañ ur bannec'h-gwin gant ar person, daoust ma oant bet teir eur war e chouk ! Ret eo krediñ ez eus tud hag o deus kollet o fann. An QUEST-FRANCE (13.3.68) a voul ur glemmadenn a-barzh E.Ollivro, maer Gwengamp bet harzet gant ar polis 'kostez Kernev. Propoc'h e vefe d'ar GOUARNAMANT ren gwelloc'h Breizh, hag heuliañ kalennadurezh ar PIBIEN, rak an hini a had an avel a zastum an TEMPEST. N'eo ket mat gailhañ an dud, gwelloc'h bezañ JUST en o c'heñver

(tennet ger evit ger eus KOULMIG AR GINDI 17.3.1968 Niv.6)

Notennoù evit lannerien Barr-Heol:*An TELEGRAMME (8.3.68):ls F.L. B. écrit au recteur de Buhulien. Bet e oa ar bolised er presbital a-dalek 4 eur betek 7 eur 20 d'abardeez, nemet e oant bet 12 eur war gein an Aotroù KALVEZ eus a Lannuon ha c'hoazh en devoa ranket hemañ mont gant an 9 folis deuet d'ober furchadeg en e di ivez, da di er c'homiser-polis, e Lannuon. E-touez ar c'hazetannoù hag o deus komzet eus an afer menegomp Y FANER, 28.3.68 dindan bluenn hor mignon J.H.Roberts eus Poullheli (trugarez dezhañ evit e zanevell tra hervez ar wirionez!)... E val just tra m'edo ar boliserion oc'h evañ o bannec'h gwin e oa bet ur gantel serzh a gatekiz dezho, na petra'te! Daoust n'eus netra dreist-ordinal e-keñver stumm-dispagañ, e oa skrab war ar GOULMIG er sizhunvezh ma voe embannet ar pennad a-us !

VA C'HI FIDO

Al va c'hi Doue'oar pegeit'zo etrezomp.
 'Zo 'tre da anien hag Ene da vestrez
 Ek nemetken a oar ha perak ha penaos
 E vevez diouzh he sell, e varvez diouzh he mar
 Ha dre besurt truez'vit hor c'halon az ro
 Da garout c'hoazh d'ar re n'int mui karet gant den!

Rak-se loenig uvel kousket e-harz va zreid
 Biskoazh gant ur ger rust ne boagnis da galon
 'N ur bellaat diouzh va dorn da deod karantezus.
 Met dalc'hmat ha bepred ennout em eus doujet
 Madelezh ar C'hrouer da Vestr ha va Hini.
 'N holl Voudoù 'zo breudeur hag holl din a zoujañs.

Pa vez va c'hi FIDO! da selloù war va re
 Ar sioulded nemeti a vez hon diviz mut
 Pa rankan azezañ. Pa rankan pennglinañ
 Da lagad'zigor trumm; te'zilamm d'am c'hwesa
 Te'lenn va ankenioù e don va deoulagad,
 E roufennoù va zal, te'lenn va nec'hamant
 Evit va diduiñ ha klask louzoù d'am doan
 Te'grog dousik em dorn, dousik hep ober poan

Anjela DUVAL 23.2.68

Gouel ar Werc'hez miz Meurzh 10 eur noz

Aotrou Person

An nebeut gerioù-mañ da lavarout deoc'h pegement
 eo plijet din Barr-Heol miz Meurzh.

Danavell F. Kervendal " Ar VARENN " 'zo unan, d'am
 soñj, eus kaerañ pennadoù bet biskoazh embannet e Brezhoneg.
 Ken fromus eo ma rankan distreiñ sav-taol d'e edlenn. Kalz a
 gentelioù a zo da dennañ eus ar pennad-skrid kaer-se ha
 dreist-holl unan galonekaus. Rak n'eus ket da goll kalon tra
 ma vo kavet e Breizh maouezed eus an tremp-se... Skeudenn Breizh
 o stourm er gwashañ degpuzhioù, o stourm hag o trec'hik!

Ar pennad all " Gizioù kozh Tregar " a zo dedennus ivez
 ha pouezus evit ar re yaouank. Barzhoneg kaer Evnig Penn-ar-
 C'hoad " SPI " a zo danvez enni, awen hag ijin hor Barzhed kozh
 n'int ket prest da vont c'hoazh da hesk. Evit pezh a sell ar
 pennad-digeriñ diwar-benn an F.L.B. n'am eus ket ezhomm da lava-
 rout pegement eo plijet din ar gaoz....

A.D.

soubenn al laezh

Plijadur em eus bet o lenn " ar gizioù kozh " war an diwezhañ
 Barr-Heol, e-touez ar gizioù-se, son " Soubenn al Laezh ".
 A-bouez bras e oa gwechall lid " Soubenn al Laezh " goude an eure-
 doù. Un niver bras a ganaouennoù, gant tonioù disheñvel a-wechoù,
 a zo bet savet a-ratozh evit al lid-se. Seblantout a ra divereñ eus
 ur son goshoc'h, bet kamm a-nebeudoù, dre ma koazhe ster an hen-
 goun e-touez an dud.

Anet eo e oa kollat, a bell'zo, ster al lid-se gant Bulianiz,
 p'emedo da ziwezhañ, etra farouellerezh ha meurlarjez, rez izelañ
 ur c'hiz o vont da goll.

Diwezhañ gwech ma welis servijañ ha kanañ soubenn al laezh e
 oa da eured va c'hoer yaouankañ; e 1924 e oa. N'eo ket da lavarout
 eo bet ar wech diwezhañ er barrez: aet e oan me da bell bro. Dam-
 dost war don Bourgault-Ducoudray eo e kaned ar son-se dumañ; ar
 c'homzoù a gemme tamm pa damm, harvez ar ganerien. Ur c'haner bru-
 det a veze pedet a-ratozh da zont da ganañ soubenn-al-laezh, an
 engroez a ziskane a-unvouezh, peurliesañ, nemet un diskaner mat e
 vefe da eilañ.

Dalc'het em eus soñj eus ur son wenedek, an ton anezhi digo-
 roc'h eget ganimp-ni, ar c'homzoù heñvel a-walc'h ouzh hini Bulien,
 evit ur poz hepken; setu eñ hanter droet genin:

Ni n'omp ket deit aman
 D'ober ar jalp oc'h den (!)
 Rak kent dont d'ar gêr-man
 Hon eus debret hor c'hoen.

Gwalet em eus gwezhañ kanaouennoù soubenn-al-laezh, war fol-
 lennoù distag, er foarioù ha pardonioù. War-dro Karaez e veze kanañ
 " ar Boked-eured " e-pad pred, ha " Bonsoir Madame la Mariée " e
 rannvro Loudieg, div ganaouenn barrek da lakaat an daeroù e daou-
 lagad holl dud ar friko.

Ur c'haer a lid e oa soubenn-al-laezh, ennañ meurded, arvez
 ha kentel. Dagnius eo m'eo aet er-maez a c'hiz hag e pep lec'h d'am
 meno. Pal soubenn-al-laezh a oa taolennañ d'an dud nevez, hag o
 c'halenn war ar vuhez nevez o têraouiñ evito. Al laezh tomm, dre e
 goaven, kalz a sukr ennañ, daoust ha n'eo ket arouez karantez an daou
 gariad. Al lozioù toull karget er bodezad ha goull o c'h errucut
 gant ar genoù, setu evit ar c'herse hag an touellerezh en em gavo
 ganto alies. An tammoù bara ha legumej (hanter-boazh evit harzel)
 ereet etrezo, gant ur poell gwenn diwelus el laezh, setu e ze kentel
 evit an habaskted hag holl ziaesterioù ar vuhez. Goloet ez eo pep

Goloet ha kuzhet eo pep tra er bodez gant al laezh, arouez ar garantez - ma pad - trec'h da bep trubuilh ar vuhez.

Lennerien VARR-HEOL a oar mat e teue gwechall, ar beleg da vennigeñ an dud nevez da goulz soubenn-al-laezh. Daoust ha n'eo ket abaoe ma ne zeu ken ar beleg, ez eo aet lid soubenn-al-laezh war ziskar ?

Herve ar MENN

(1) Jalp, ger skrivet fall evit jabl

Mil drugarez da Herve ar Menn evit e notennoù dudiuz war SOUBENN AL LAEZH. A dra sur ez eus e-touez hol lennerien tud barrek war " Foklorelezh an Euredoù " hag a c'hellfe aozañ ur studienn war ar gizioù stag ouzh an Euredoù, dreist-holl, evit pezh a sell ouzh SOUBENN-AL-LAEZH anavezet estreget e Breizh-Izel, evel just, ha pa ve ken e Breizh-Uhel !

En ur gemer evel m'emaint war VARR-HEOL (Meurzh 68) komzoù son " Soubenn-al-Laezh " ez eo anat hon eus d'ober gant ul lid-frouezhusaat. Ar pep sklaerañ er c'heñver ez eo al linennoù-mañ:

.. Neuze 'vez ar wreg yaouank

Kalz gwelloc'h magerez

Aes-tre ez eo tostaat ar gerioù LAEZH ha Magerez. Ha neuze al linennoù-mañ o sellout ouzh an ozhac'h nevez:

An oac'h yaouank

P'en devo soubenn vat

A raio ur c'havell

Aezet da ruskellat (= luskellat, e Treger a-bezh e reer gant ar stumm RUSKELLAT e-lec'h ar stumm LUSKELLAT). Da lavarout eo, barrek e vo an den yaouank da grouiñ bugale yac'h o sevel mat, o sevel... 'vel ar raden, e-giz ma leverer !

Evit pezh a sell ouzh emell ar beleg e soubenn-al-laezh, ne seblant bezañ testeni ebet a-du gant-se e Treger. Den ebet n'en deus soñj a gement-se da vihanañ. Evel just ez eus pedennoù da vennigeñ tiez ha kambroù, er Ritual Roman, hag e ra hemañ gant ur ger souezhus a-walc'h : THALAMUS e-lec'h CUBICULUM evit KAMBR. E gwirionez, e kement ha ma ouzon, THALAMUS (diwar ar gresianeg) = Kambr ar Briedelezh, ha CUBICULUM = kambri-dagousket. Met pa n'eus nemet THALAMUS e levz-al-lidoù ez eo gant ar ger-se e raed (gwechall gozh pa raed c'hoazh gant al latin!) da vennigeñ " kement seurt kambri " a zo. Daoust hag un orin ispisial a zo d'ar vennigadenn-se gant ul liamm bennak ouzh gizioù folkloriel an euredoù ? Dav e vefe kaout ali un ispisialour bennak.

KUSTOMOU ha GIZIOU KOZH BRO-DREGER

kendalc'h

Evit an euredoù e veze gwisket an dud farañ ma c'hellent, evel just ! Pep hini an e gaerañ 'vel Yann o vont da graoual Bremañ e vez kont evel-se bepred, nemet ez eus dauet cheñchamant er c'hiz d'en em wiskañ. Setu eta penaos e veze gwisket ar wreg yaouank.

AR WREG YAOUANK a veze an du. Korfenn ha kotilhonenn graet gant danvez merinoz pe Gachemir; ne oa ket a gotilhonennoù minik * evel bremañ; hir ar vroz : a-boan ma veze gwalet un tamm eus begoù ar botoù. Botoù-lêr uhel, da bremañ gant lasoù pe voutonoù pe vezent gant boutonnoù; pa vezent gant boutonnoù e vezent da bremañ war ar c'hostez; talonoù hag a veze aezet chom a-sav warne, ul ledander vat o deveze; un hanter-loar houarn dindan ar beg, hag unan all dindan an talonoù; ul loeroù glan nezet er gêr, gloan-deñved; ne veze ket riv d'an treid. Evit ar gorfenn e oa gwerniset ar c'holier anezhi gant ur vevonn voan, du pe gwenn, perlezennet, pe dantelezh; a-wechoù e-lec'h perlez e veze ur ruc'henn-dantelezh; kolier ha begoù ar mañchoù e veze gwerniset er memes tra.

Ar VROZH gant kalz a dro, hir tro-zro, ouzh traoñ ur vlañsonenn-skubelenn pe skuberez (tres balaieuz, ur ger gallek moarvat, a raemp-ni diouti evit gwir), bandennet en ridoù pe blegoù plat. An DAVANCHER er memes danvez gant ar robenn, 'veze gwerniset gant biezoù seiz du; ar godelloù ivez; hag ar vutunalenn (bremañ n'eus butunalenn ebet ken; pell'zo ne vez na gwalet na klevet komz : diouti). Ar MANEGOU, ne veze ket gwalet ivez, na kennebeut ar chedenn-vontr (se'oa deuet war-lerc'h) gant ar mouchouer brodet hag ar c'hoefoù bras (robe à cloche), disc'hlevier-seiz troad-houarn moan e-lec'h a-raok, un troad-koad tev. A-wechoù e veze, gant ar re vras e-lec'h ur mouchouer du brodet, ur chal-tapi(z); ne gollis ket e anv, peogwir e veze lakaet da servijif da depis-taol, war en deul ront er sal, 'lec'h ma veze unan...

"Fleur-orañjez" ar wreg yaouank a veze lakaet en ur glob gwer gant ar Werc'hez, hag a veze er penn kentañ war vantell ar siminal, pe en ur plas a enor all. Ne vez ket gwalet se a kalz a diaz ken; kentoc'h e vez gwalet ur "jilouad" bennak, pe ur "steradenn" bennak hanter-noezh oc'h ober jestroù fall gant kement ezel he deus tout.

AN OZHAC'H YAOUANK a veze ivez en e gaerañ, se'zo sklaer. En DU e veze gwisket ivez. Evel kravaten e veze ul las-seiz moan skoulmet en kokardenn, da guz boutonenn ar c'holier. Graet e veze ar ROCHED gant lien gros a-walc'h; nemet evit ar c'holier hag ar pognezoù e veze prenet un hanter metrad kotoñs gwenn tanav; ha brav e

veze ar roched. Start e veze ar VRAGEZENN dre ar c'hof-ger, ha ledanoc'h diouzh traoñ, ur vragezenn talbenn-karr, gant un tog du; an hini veze pinvidik en deveze un tog kroc'hen-goz hag ur jiletenn fleuriet, ur montr hag ur chadenn staget ouzh toull boutonenn ar jiletenn ha kuzhet ar c'hodell. Uheloc'h e veze ur c'hodell vihan da lakaat ar paper sigaretenn, rak en deiz-se ne veze ket brav butunet gant ar c'horn.

*

Pa veze prenet ar gwalinier ha prest tout an traoù all, e veze ivez ar marc'had d'ober eus ar PRED-EURED, 'vit pa veze ar pred en ostaleri. Pevarzek real e oa ar briz kumun en deiz kentañ, ha c'hwec'h deiz an adeured, dre benn. Lavaret e veze pe-seurt meuzioù a vije servijet en deiz kentañ hag en deiz war-lerc'h.

SOUBENN VAT gant KIG BUOC'H pe ejen, ha KIG SALL gant kalz a legumaj. Servijet e veze un asiedad mat a soub-bara. Ne veze ger a vleudaj. Tremenet e veze al LEGUMAJ war ur plad bras, pep hini da gemer ovel ma plije dezhañ. Ar c'hig a veze troc'het evel bremañ: ur troc'h mat a gig-sall hag un troc'h kig-bevin. Graet e veze anezhañ: KIG BERV, pe KIG-SCUBENN (2). Bara, pebr, moutard, holen gwenn, a veze da zebriñ ganto; a-wechoù e veze lakaet al legumaj e-kreiz ar plad hag an tammoù kig a bep eil tamm:kig-sall ha bevin, tro ar plad, da bep hini da gemer e lod. Goude-se e veze RAGUOD KIG-LOUE gant pruneoz, karotez..hag all.. Peotramant e veze anduilh gant yod-petatez, ha da ziwezhañ ROST-LOUE, pe YER gant PIZ BIHAN, kuit a c'hlazur all. Ur PLAD DOUS (fars-vioù) ur gachenn-savao, kafe-laezh, mikamo pe gafe koefet.

AR BOESON a oa JISTR, GWIN. Da gomañs ur bannac'h-gwin gwenn, ha jistr goude; gwin ruz gant ar gachenn (4);ne veze ket a aperitifnoù, met da ziwezhañ ur bannac'h hini dous d'ar merc'hed, ha gwin-ardant d'ar wazed.

KANET e veze ivez pa veze unan bennak hag a ouie kanañ. Ma zad (Doue d'e bardono !) a gene en euredoù. Bet en dije bremañ m'en dije bevet 135 bloez. Plijout a rae d'an dud ober dezhañ kanañ SON AR BAURENTEZ (5)

Ne veze ket servijet KOAN evel bremañ en-bras. Pa veze erru tro 11 eur pe 11 eur^{1/2}, e veze servijet un tamm bara ha gwin, hag ur bannac'h kafe; a-loddennoù ez ee en dud a veze diouzh an eured: 4 pe 5 asamblez...

A-raok ma veze ar c'hafe e pred bras an eured e teue an ostizez gant un asied d'ober tro an daol, an ozhac'h yanuank en

he c'heñver gant ur baner vihan da zaspugn an arc'hant : pep hini a lakae e volontez en tu-hont da 14 real.

J. FLOUR

Gwelout BARR-HEOL niv.55, Meurzh 1968

(1) brozh ha kotilhonenn a zo memes tra e Treger, nemet e seblant ar ger kotilhonenn, hervez testeni an dud, aloubiñ ar vro diwar goust ar vrozh! Ne glever gant an holl nemet "mini-jupe" na petral ar ger lostennoù-minik a vez komprenet gant an holl, nemet e talvez e Treger er ger lostenn : gouledenn (ger anavezet ivez), brozh-dindan. Fall ez eo GERIADUR R. HEMON e-keñver ar gerioù-se, da vihanañ e Treger. Tu a zo ivez da implijout ar ger LOSTENN evit robennoù hir ha neuze kamzioù ar golistad da skouer (ar gurusted) ha kamzioù bugale ar Paskoù, hag implijet e vez, nemet e klever kentoc'h " obennoù!"

(2) Soubenn ha Soub e zo daou c'her disheñvel o ster e Treger. Soubenn a zo bouilhofs, da lavaret eo an DOUR; SOUB = ar MEUZ e-unan, dour ha bara. Ha neuze SOUBENENN (-Vara) = tamm bihan a vara; diaes gouzout hag ur ger deveret eus soubenn ez eo, rak evit ar bara a droc'her d'ober soub e leverer: soub-troc'het. Soubenn-ar-c'hig h.a. a leverer a-hend-all, evel just.

(3) Fars-vioù. E gwirionez ne glever nemet flañdeuf! pe a-wechoù ur flañ-uoù (=vioù). Meur a Soaz-an-Tieg hon eus ezhomm da advadeziñ ar meuzioù.

(4) Gachenn, gachenn e-lec'h gwastell(enn) ger anavezet mat koulskoude : tapit un tamm gachenn ! kemerit un tamm gachenn! Tapit ur wastellenn (pe ur vorbonenn !!)

ADNOTENN

Daoust da Ernod bezañ gouezet un tamm an diforc'h etre SOUB, SOUBENN gwelout GLOSSAIRE paj.635 n'en devoa ket dalc'het a gement-se en e c'heriadurig. Sklaeroc'h ez eo F.Vallee war ar poent-se gwel.Ger.Bras E GERIADURIOU R.Hemon ne weler roud ebet eus ar gudenn-se.

D A G L O Z A Ñ

Da beurechuiñ al labour boulc'het amañ diwar-benn gizioù ha kustumoù BRO-DREGER e vije ret ober kement all evit ar rannvioù all.Neuze e c'hellfe ur gweroniour bennak sevel ur studiadenñ glok ha gouiziek; kavet e vefe traoù moarvat e dastumadeg MELUSINE hag embanadurioù hor C'hevredadoù-a-Hendoursiezh d'e sikour en e labour. Met da c'hortoz e-keñver GERIADUR, e vefe mat sklaerast sterioù geriennoù'zo evel EURED(enn), FEST, FRIKO; rak e kornadoù'zo evel e-ki-chen Gwened: Euredenn = al lid en Iliz, hag ar FEST(fiaschtll)= Pred-eured. Goulenn a reomp digant hol lennerien degas deomp eta ar gerioù anavezet ganto o sellout ouzh an Danvez-Priedoù, ar Priedoù Nevez h.a..

PARABOLENNOU

PARABOLENN AR SKOLIOU

War echuiñ e oa Kuzul ar Vinistred e Pariz, hag e oa ar Prezidant o tennañ ar c'hentelioù diwezhañ: "Mat-tre, Aotrou Ministr an Deskadurezh, kentañ vo d'ober ha gwellañ-tout e vo sevel skolioù d'ar Vretoned, dresañ ar re aet un tamm dirapar, sevel skolioù teknikel nevez bras-spontus ha modern-tre gant kement aezamant a zo da c'hoantaat evit pezh a sell ar studioù hag ar sportoù. Mat-tre e oa ho komzoù, Aotrou Ministr an Deskadurezh. Arc'hant a vo puurchaset deoc'h forzh pegement. Arabat deoc'h damantiñ da yalc'h ar Gouarnamant: diskoulmet e vo al lasoù anezhi evidoc'h.

- Trugarez, Aotrou Prezidant, a respontas ar ministr... Evel just, kaer o deus ar Vretoned bezañ genaouien eus ar c'hentel-klas-uhelañ, ne voe Biskleriet dezho petra emañ e-sell d'ober. Ur wech graet hol labour e vo re ziwzhat dezho klemm, ha ni hor bo peoc'h gant Breizh hag ar Vretoned hag e c'hellimp aozañ ar Vro e-giz ma plijo deomp "

*

Degemeret e voe lezennoù ha dekredoù nevez ar Gouarnamant gant kalz a levnez gant ar Vretoned: SKOLIOU ! Ya! skolioù da lakaat etre o daouarn alc'hwezioù an amzer-da-zont. SKOLIOU o reiñ Deskamant evit netra koulz lavarout. Hent ar Frankiz! Hent ar Plasoù Mat ! Hent an Arc'hant hag ar vuhez diboañ hag aezet ! Ya! e-benn ar fin, rak n'eo ket dija e oa!

Evel just, war ar programmoù e oa traoù a dalvoudegezh vras: Istor, Douaroniezh, Galleg, Alameneg, Saozneg, Spagno - leg, Italianeg, Rusianeg, Tchekeg, Arabeg, Malgacheg, Javaneg, en ur ger kement yezh'zo dindan an oabl, nemet ger ebet d'ar Vretoned yaouank diwar-benn o bro, o yezh, o spored, labour hag istor o zud-kozh. D'ober petra, va Doue ! Digor e oa hent an Deskamant, ha barrak e oant da vevañ, hep Breizh, na Brezhon-eg, na netra eus ar pezh en devoa harzet ouzh ar Vretoned da vezañ gwellañ ha desketañ pobl ar Bed a-bezh ! Krog e oa zoken an tadoù ha dreist-holl ar mammoù da lavarout e oa poent echuiñ gant Yezh ar Vro evit aezataat labour ar SKOLIOU.

E-touez ar SKOLIOU hag a rae berzh (da lavarout eo bleu-nius ha darempredet ha klasket muioc'h eget ar re all) e oa ar

SKOLIOU-MICHER, TEKNIKEL evel ma lavare an dud. Hag e gwirionez do-net a rae diouto Bachelourion, Teknikourion, " Sternourion " a-leizh. Ya! Digor-frank e oa dor an evitusted ! Enor d'ar Ministr ha d'e SKOLIOU, ha d'ar re a gelenne ken mat enno !

*

Met ma kaved aes a-walc'h labour d'ar re gentañ a zevas eus ar SKOLIOU, tamm ha tamm ez ae diaesoc'h-diaesañ keout plas d'ar re all. Hag ar re finañ eus an dud a zimeze bepred o merc'hed yaouank kentañ ma c'hellent evit bezañ sur d'o flasañ ervat... Met krog e oa an dud da c'hrozmolat ha da lavarout e oant bet tromplet, pa ne oa ket a labour... Rak krog e oa ar beotred da guitaat ar Vro evit mont da lec'h all da glask labour... A drugarez Doue, e zevas ur soñj dispar e penn ar Gouarnamant ! Kavet en devoa an diskoulm ha kerkent e vrudas ar pezh a felle dezhañ ober.

(Koulmig ar Gindi, 14 a viz Ebrel 68)

PARABOLENN AR MINISTR

Gavet e oa bet eta da Bariz ar Vretoned pa ne gava ket dezho ez ae mat a-walc'h an traoù en o Bro. Ha kentañ reoù a savas o mouezh e voe an tadoù hag ar Mammoù : " Ni"soñje dimp e vije chomet hor bugale en hor c'hichen hag hor bijs bet ar joa da welañ hor hor bugale vihan, met setu ma'z int nijet kuit, zoken betek en Amerik.

- Moarvat ne oac'h ket e-sell, va zud vat, d'o gwelout o chom e Breizh da louediñ gant an deskamant kaer o deus bet. Kriz e kavet kement-se, met a-benn 50 pe 100 vloaz emañ, pa vimp aet holl d'ar bed all, e voe ankouset kement-se !

(Cholori ha trouz a savas avat o klavout komzoù digor ar Ministr hag e huchas an holl) : " N'omp ket aet o'hoazh war BEDENN-AR-SUL, Aotrou Ministr, hag e fell dimp gwelout a dost hor bugale hag hor bugale vihan. (Ha trouz adarre) : LABOUR D'AR VRETONED ER GER" a lavarent holl.

Ar ministr avat, en devoa troet kein dezho evit selsoù ar skolaerion hag ar skolaerezed, en o zouez beleion ha leanezed: " Meulsa-di deoc'h, Aotrouez hag Itronezed, e lavare ar Ministr, evit al labour eus ar c'haerañ graet geneoc'h ! Evit diskouez ervat en ho keñver anaoudegezh ar Fraña e vefe rat reiñ pep a Grouz-e-Enor deoc'h !

- N'eo ket gant Krouzoù-e-Enor emañ hor penn hiziv, Aotrou Ministr... Ya! graet hon eus hon dover eus hor gwellañ, hervez hor c'houstiañ. Poaniet hon eus gent c'nestiz da silañ e spored hag e

kalon ar sitoianed vihan a oa etre hon daouarn Deskamant ha Furnez, hervez ar programmoù roet dimp. Met e gwirionez, labour ur vilin-wenterez hon eus graet !! Hag evel ur bagad laboused bihan ez eo nijet **kuit** an dud yaouank bet stummet ganimp gant kement a boan, a aked hag a garantez! Pep tra goull en-dro dimp, pa oamp o klask stummañ tud da chom tost da vro o c'havell da labourat, da vevañ, ha neuze pa oamp en-gortoz da welout bepred an **tiez**-skol gant bugale en o leizh enno !

- Petra'ra se ! Gant ma skedo uhel ha kaer anv ar Frañs dre bevar c'horn ar Bed, kaeroc'h zoken eget biskoazh a drugarez d'ar vugale bet stummet ken mat ganeoc'h ! Marv eo ho Pro - evel ma livirit - Kondaonet e oa d'ar Marv hervez Lezenn ar Vuhez ! Perak bezañ trechalet gant se ?

(Diouzh tu ur strollad bihan a-walc'h a dud yaouank hag a oa war ar plas ivez e savas trouz neuze !)

- Ur vezh ez eo deoc'h komz evel-se, Aotrou, Ministr! Ni' fell dimp chom da labourat ha da vevañ er gêr, evel gwir Vretoned. Desket hoc'h eus d'hon tud ha d'hor c'helennerion bezañ "debrerion-vro", graet hoc'h eus un torfed anvet Ladh-Pobll Mezh deoc'h !... " (an hini en devoa lavaret se n'hallas ket komz hiroc'h : ar C.R.S.-ed a oa warnañ !)

- Ma! eme ar Ministr, kavet'zo labour d'ar Vretoned ! C'hwi'zo bet a-viskoazh troet da enoriñ ar Re Varv, an Anaon ! Sofjet hon eus ober gant Breizh un NEKROPOLIS. Ya! Nekropolis Europa. Pa n'eus mui plas da graskiñ ar BEREDOU en-dro d'ar c'hêrioù bras e kaset du-se, ar C'horfoù Marv. Urzhioù a zo bet roet dija evit se! NEKROPOLIS VEUR EUROPA ! Evel-se e vo labour, ya labour forzh pegement, ha pae eus an uhelañ.

- Neuze e teuimp da vezañ holl Intererion-Dud ? Implijidi al Lidoù-Kañv. " Des croque-morts" avel ma livirit en ho kalleg eveak ?

- Arabat deoc'h klemm, eme ar Ministr krak-ha-berr, ar cheñs vras ez eo deoc'h hor bije sofjet e kement-se. Kenavo!

(Koulmig ar GINDI 28.IV.68)

PARABOLENN AN NEKROPOLIS

Gant promesa ar Gouarnement da reiñ labour dezho en ur ober gant Breizh NEKROPOLIS VEUR EUROPA e oa distroet ar Vretoned d'ar gêr. Ne oant ket kontant tamm ebet, kuit da lavarout gwashoc'h (kendalc'h pajenn 72)

AR MARTIR KOZH

Anaout ar werin a fell dimp dre m'he deus miret an ene hon eus kollet, dre m'eo kalon hor gouenn, kig hor c'hig, spered hor spered. Anaout ar werin a fell dâmp dre m'he deus ur gentel evidomp....

Roparz Hemon.

Gantañ eo am eus desket brezhoneg. Pa tastoc'h ouzh ar wirionez e vefe laret ez eo, en ur vont gantañ dre an dorn bendez, betek bankoù ar re gozh da heolikañ ! Azezet e vezent eno o perchañ-tiñ c'hoazh ouzh maneadedeg virvidik ar porzh ! Ar bigi war ar mor mont-dont! Ar vartoloded gwall afaret, primoc'h eget merion o kas d'al labouradegoù o faneroù ront leun a besked.

Trouz.Safar.Buhez... Pell, pell-tre war-gil e ranken dont, ha dibuniñ hir pellenn va eñvor da glask adkavout pegoulz am eus maret e komprenen va yezh. Ne gavan ket. Intret va spered, va boud ganti a-viskoazh moarvat. Gwall vihan koulskoude, peogwir eo an hevelep skeudenn a welen bepred: ur c'horrig blev malen, kollet stre daou ramz barvek, melloù tokaier plouz ganto war o fennoù. O daouarn ledan (golvezhioù) kaledet dre forzh labourioù tenn, juntret war o bazh sennet dirazo en douar. Stur pe roeñv o c'hozhni ! Pa dremene pe o bugale, pe vignoned, diouzhtu e save birvilh er gaoz war ar bank.

- Neuze, mab, peskerezh vat 'zo bet hiziv ?

- Ar ouenn'zo, Tad."

Ha diviz an dud kozh da advevañ ur pennadig, troc'het bep'r mare gant ur poz; omzer lakaat ur chek! Unan eus va c'heneiled kozh kentañ er vuhez, a zouge atav ar boned bras Sigovi. Goudor dibar d'an " tabok karot ". Sellout e raen outañ spontet o tigeriñ e gontell hag o troc'hañ gant jestroù parvezh ar chek euzhus-se ! Donjeret bras ouzh e welout, goude, o " cheunañ " seurt loustani. Un dan bras mistr. Un dremm lemm. Kuzhet e zoulagad bepred dindan lunedoù di, souezhus ar gwer anezho. Da grediñ 'oa bet ganet ganto, staget 'val ma oant war doull al lagad. Daou c'holo ront klozet aketus! Dougan a rae ivez " pantoreilhoù ". Div walenn aour moan: evit krañvaat ar gwel, emezañ din. N'a garen tamm. Re iskis. Er c'hontrol bev, pe vezen azezet etre va zad-kozh ha tonton Gwanole. Neuze 'vezen laouen. Ken ledan'oa daou dok plouz (gwir zisc'hlaferien) ken ne veze mui tu din spurmantif nemet an div varvenn wenn o finval e-zindano. Sioul e choment. Me ivez. Va daouarn juntret dres evel o re dezho

war va fennoù daoulin. Me avat n'am boa ket a vazh!

Betek dec'h e krede din ne oa mui seurt bankeier. Na mui kennebeut seurt martoloded kozh o c'hedal dirak ar mor. Eo. Atav emaint aze. Ur rummad goude unan all ha setu holl. Ken pell'zo abaoe koulskoude. Ken kemmet pep tra. Ur bed eilpennet!

*

Ar " Martir kozh " 'oa leserv tad va mamm. " Ar Beleg du " hini va zad, ar gward touet a harluas ar person Duk. N'am eus ket anavezet anezhañ, marvet eo bet ha din daou vloaz a-boan. Met ar " martir kozh " eñ, tomm a ra d'am c'halon ouzh e gounaat. Un den medelezhus bras. C'hwec'h a vugale e tiegezh e dud pa chomas emzivaded e gendirvi, pevar anezho. Va zad-kuñv a gemeras e nized. Leuniet an ti diouzhtu. Dek bugel da vagon eus an eil devezh d'egile. Ar " Martir ", mab henañ, kaset da vous kerkent. Eizh vloaz en doa. Kadarn an dud d'an ampoent. Brokus danoust d'ar baourentez, marteze en abeg dezhi. " Va zad din'oa ar bara mat ", a vousc'hoarzhe va mamm, teneraet he dremm o komz diou-tañ. Un den nerzhak ha kreñv souezhus. Ne vez mui gwelet seurt korfoù-tud en deiz a hiziv. Bruchedoù digor a dregerne enno ar vouezh evel son an ograou !

Ganet 'oa e 1648. Bremañ'zo kant vloaz e oa galvet d'ober e goñje. Toulon. Nes intent ger gallek ebet. Nag eñ nag e gen-seurted, an ugent paotr yaouank kaset a-stroll davet ar porzh a-vrezel du-hont. Kreñvañ paotred, kasrañ tud a oa tu da gavout, anvioù brezhonek dezho : Kolaz Kervareg, Loëiz Belbeoc'h (ar martir), Herle Pengalet (distaget e vez " Peñ Kale ", an anv-se er skolioù hiziv, evel pa vefe ar galleg " Pain Cailé "), Lomig Pendezeg, Gwenole Flechant, Nore Gwilhoù; ugent erfin ! Kerkent erru, gwisket ! Tokeat ivez, melloù seizennoù a-istribilh, livet unan anv ar vag-amiral, mar plij : " Ar C'holbert ". Ha setu... an amzer da dremen, ar vuhez da vont ... Pell diouzh o bro. Bevañ bemdez mut ha bouzar pa na vezent ket a-gevret. Alies e klevan divizoù skiantel war an doareoù nevesañ da zeskiñ ur yezh estren hep skoazell ar yezh -vamm. Paotred ar C'holbert ! Kant vloaz'zo eo bet aprouet warno hep goulenn o asant an taol-arnod-se. Aze eo e kemeras Tad-kozh ar boaz da echuiñ pep frzenn gant " O martir ! " Ya! martir paour ! Lesanvet raktal gant e gamaleded. Ster ar gerioù-se 'zo splann evidon. An torr spontus deut en o buhez. Ur gloaz pemdeziek. Hag an dristidigezh marvus sammet ken kriz warno goude an divroañ. Mil gwech aesoc'h forzh penaos, martoloded war vourzh (o micher), eget bout soudarded. Renerien ar bigi 'veze ivez Bretoned aliezik a-walc'h. Hag ouzhpenn-se, ar mor o doa,

dieub dirazo da vagon o fiziañs. Met, gant peseurt gerioù e vo gallet morse liveañ reveulzi vut ar paour-kaezh " Plouz.Foenn.Plouz.Foenn." taolet peurvuiañ e-unan-penn glan ha leal, dre ret bouzar ha mut, ha na pegen sot, na soñjit'ta, taolet Dianav pep tra en-dro dezhañ er c'hazarn-se ha betek ar bevañs. Dianav dezhañ dreist-holl, o va breur Ploukistan, spered godiser drouk ar bobl amezek. O va Doue, na skrijus, na spontus eo bet. O va zad din, na gouzafvet hoc'h eus. Desket gantañ marc'hañ war an anken, war ar glac'har. Pa ne glevec'h eus laez ar c'hadorioù-prezeg nemet mouezh Jehovah o kinnig deoc'h an ifern yen! Ha c'hwi mer - c'hed, aet divi gant re a baourentez ha faezhet gant tiadoù bugale (Piv'ta a gonto deomp o merzherenti en amzer ar bilulann !) pa veze nac'het ouzhoc'h groñs an absolvenn en anv an DLEAD.

Pa glevan bremañ ar c'hunujennoù stlepet ouzh fas va fobl o trevezañ gwashañ lorc'h an estren, dispriiz euzhusañ an estren, en em gavan gloazet betek don dondañ va c'halon. Nemet, evit sentout ken kriz-se ar gouli e ranker emichañs, bezañ graet kig ha gwad anezhi " Ar Bobl chatalet ". Ganet diouti. Kenlodek on-me ganti, va fobl mac'hagnet e-bev ! A-walc'h evel-se a zispriiz. A-walc'h a gomzoù divergant. Sin an Estren eo. Klevout a rit. Sin an Estren. Netra muoc'h.

Ar " Martir Paour " peogwir 'oan gantañ, a zougas nav bloaz tog plouz ar verdeadurezh-vrezel. Ya! nav bloavezh nes kaloù, nes dont ur wech d'ar gêr ! Lakast da ganolierion diouzhtu dre ma oant ken nerzhak. Gwir dirvi. Rak, hervez, ne oa ket ur c'hoari-dimezell ober war-dro kanolioù ar mare. Redet o deus a bep seurt broioù. Deut e oant en dibenn da gompren galleg madik a-walc'h. " Ar Martir " ne rannas biskoazh ger ebet. Nag a bep seurt istorioù sebezus em aus klevet anezhañ o tibuniñ deomp ! Va fenn war skoaz va mamm, hanter gousket e damskl'ur tan an oaled, e selaouen tad-kozh oc'h eñvoriñ an amzer-se pa rede holl borzhioù Europa.

*

Deomp betek Solferino a-gevret ma fell deoc'h. Noz anezhi. Tremenet oa an hoper pell dija o seniñ e gloc'h - hini nav eur hanter - hag o kemenn d'an dud lazhañ ar gouleier. Ar vandennad vartoloded vreizhat en em gave en devarn, tro-dro d'un daol, o c'hoari domino. Meur a voutailhad " dour vineraer " warni ivez eivazh. Tad-kozh oa chomet mignon d'ar seurt alkool-se mui pe vui o tennañ d'an huelenn-c'hwezv. " Koulskoude, paotred, poant eo mont. " An nor damzigor. Kement ha plantañ ar penn er-maez. Den ebet. Na kiz na kazh. " Deomp dezhi prestik ! "

Div vandennad dre ar vrec'h, div glouedenn vev en hentoù

strizh. A-viskoazh emic'hañs o deus kerzhet evel-se ar vartoloded. Dezh an hent, ken frank hag ar mor, da vale warnañ. Kreston en deus lezet tresadennoù kaer-kenañ, leun a vuhez, eus ar vartolo-ded-se!

O tiskornañ war ar c'hae, setu trumm dirazo daou archer war varc'h. Chou ! Dispartiet prim. Ha redek pep hini en e avel. Kolaz Kervareg hag ar " Martir " an daou ramz, o chom a-dreñv da wareziñ nijadenn ar re all ! Un archer a dennas en aer.

- Dit-te, Martir " a gemannas Kolaz...Treiñ. Kemer peg e penn ar marc'h ha gant ur palved - unan hepken - en em gavas an archer ' kreiz ar mor. Archer Kolaz, eñ a chomas ledet a-dreuz war ar stradaed. An daou varc'h pennfollet o c'hwirinat par ma ouient! Pakañ ar c'hanod ha bec'h da roeñviñ, an holl war vourzh!

Savetaet ! Betek antronoz vintin. Galv war ar pont bras. An holl renket. An amiral o tremen, un archer a bep tu. Mor paotred sonn ha difiñv.

- Setu anezho ! An daou-se du-hont..."
- Penaos, eme an amiral, an daou-se ? Faziñ a rit. Eus gward 'oa va c'hanolierion dec'h da noz.
- Ne fazien ket, Aotrou'n Amiral. Savet em eus va letarn evit gellout lenn anv ar vatimant war an tokoù. Int eo."
- Eo, eme an amiral, reut ha sklaset, faziñ a rit. An daou zen-se 'oa war vourzh dec'h. Bez' e c'hellit distreiñ. Ho tud n'emaint ket war al lestr-mañ."

Kounnar ruz en daou archer o vont kuit hep " kolberad " ebet d'o heul.
- Kanolierion er maez 'ar renk." An ugent kazel ha kazel - Mat! Bremañ an daou!"
"Martir " ha Kolaz a dostaas.
- C'hwil adarre, eme an amiral. Sur'oañ e vije c'hwil; ne c'helle bezañ nemedoc'h ! Pennoù kalzoc'h eget kerreg ar vro. Difennet groñs em eus ouzhoc'h mont dre nerzh d'an dud: o lazhañ a rafec'h hep gouzout deoc'h zoken. Petra hoc'h eus da lavarout evit en em zifenn ?.. Met ivez, e peseurt yezh en em zifennec'h, paoured ! Daou-ugent devezh chadennet e foñs al lestr! Kit !"

Breizhad e oa an amiral. Gwarezet int bet holl gantañ e-doug o amzer-servij. Truez en doa outo. Pennoù kalet. Bugale di-hentenn kaset d'an harlu.

*

Un deiz memes tra, e teuas d'ar " Martir " ar gwir da ad-

kavout e vro. Brest. Aze e klevas keloù eus dimeziñ e chevrann 'benn ar sizhun da heul. Setu ar paotr o troc'hañ hent d'ar gêr, kerkent, war droad. E votoù toullet en e dreid... Lezel a reas anezho war gos-tez an hent ha kenderc'hel diarc'han. Harpañ a reas dirak lenn vras Plomarc'h ha soublañ e draid gouliet en dour-sav sklaset. Ur vaouez a oa eno o kannañ dilhad.

Fistilh neuze. Kelsier ar vro. " Dimeziñ merc'h Pêr Gloagen ? Nann! hounnezh " zo prometet da Loeiz Belbeoc'h ". Na pegan fresket 'oa spered" Ar Martir ". Distanet an treid ha skañvaet ar galon.

Dimezet int bet. Nav bloaz he deus gortozet Mamm-gozh anezhañ. Amzer dezhi stammañ ur pallenn kaer, evel Penelope hec'h Uliassez!

Amzer o doa d'ar mare-se. Ha Feiz start ivez.

F. KERVENDAL

3 Ebril 1968

FAZI: Evit kontadenn F.K. war niv. diwezhañ BARR-HEOL, lenn evel titl: AR VAREENN distaget AR VAREENN

KLUKAAT paj. 65,5-et linenn :... na soñjit' ta, taolet war vil ar vro. Un Tregeriad a lavarfe " lakaet war ar beoz ", da lavarout eo bezañ hep ti nag aoz, na gweneg na liard er chakod.

PEDENN WAR AN AKROPOLIS
(kendalc'h ar b.45)

*

Ur stêr divent a ankounac'h h : c'has ganti etrezek un islonk dizanv. O puñs distrad, te eo an Doue nemetañ. Gwir zaeroù ez eo daeroù an holl bobloù; huñvreoù an holl furion a zo enno ul lodenn a wirionez. Ne deo pep tra-mañ nemet arouez ha reze. Tremen a ra an doueed evel an dud, ha ne vefe ket mat e vefent peurbadus. Ar feiz en deus bet an-unan ne zle morse bezañ ur chadenn. Kuitze a vez ad-unan en he c'heñver, p'en devez he gronnet gant evezh el liñsal-limestra a gousk enni an doueed marv.

(troidigezh gant Klerg)

* kinvi-mor: ar ger reizh e Treger " ragn " nemet ne glote ket kaer ur seurt ger gant galleg flour Renan. Peogwir ez eo ar wach kentañ d'ar Bedenn war an Akropolis da vezañ trest e yezh c'henidik Renan e vo tu da bardoniñ meur a si d'al labour-mañ moarvat. Gerioù evel Peurgened, Peurwirionez a vefe bet tu d'ober ganto. Ne vein penaos pell emañ yezh an droidigezh war-lerc'h hini Renan. He g'omp bet sur kennebeut da vezañ intentet mat an holl c'herioù !

UL LEVR

Robert LAFONT : Sur la France .Gallimard 1968:264 p. 15 L.

Ul levr o pledif gant ar menozioù politikel. E-touez al le-
vrioù a seurt-se, e komz darn anezho diwar-benn an darvoudoù en
ur vrudañ a-bouez-penn koulz lavarout ar gwirionezioù bet kuzhet
pe davet warno e-pad hir amzer, hag en em gemer darn all ouzh ar
pennreolennoù o sturiañ ar Stad hag ar vro e Bro-C'hall. Eus ar
rummad-mañ ez eo levr R.LAFONT.

An dezenn: a-hed hec'h istor ha deus Bro-C'hall lazhet
buhez ar rannvroioù skrapet ganti; hag ar rannvro gwallet dreist
ar re-all ez eo Bro-Okitania. Okitaniad ez eo R.Lafont !... Eve-
lato n'enkounac'haer ket, en oberenn-se, ar broadelezhioù bihan
all eus ar " C'hwec'hkogeg " : Breizh, Bro-Elzas, Korsika...nag
an trevadennoù, dreist-holl Bro-Aljeria. El levr e kaver istor,
darvoudoù dec'h hag hiziv, kevrededouriezh, prederouriezh,
politikerezh : forzh traoù eta! Ha setu perak n'eo ket ken aes
na plijus da lenn. Gant nerzh-kalon avat, e tibun ar skrivagner
e venozioù penn-da-benn. Ha n'eo ket kaeraet Bro-C'hall a-hed
ar pajennoù-se, daoust pe roueel, pe impalaerel, pe republikel.
Tamallet garv ez eo brizh-vroadelouriezh hag impalaeriezh ar
C'hallaoued.

Gant ampartiz hag ijin ez eo taolennet emzalc'h an dud-
se eus ar rannvroioù gwasket hag a genlabour gant an aloube-
rion, troet o spered ha kollet o emskiant vroadel ganto: evel-
se e vez kont gant an holl bobloù sujet! Dav e vefe d'al lenner
dihuniñ, en em c'houlenn daoust hag-efñ, ha prederiañ ha kompren
tra pe dra eus ar wirionez. Siwazh! ne vezo ket lennet al levr
gant ar re a vefe an talvoudusañ dezho, met gant ar re a zo di-
ja a-du en a-raok. Koulskoude ne vezo ket kollet labour ar skri-
vagner evit an holl: sklaer ez eo kement-se evit an hini a lenn
ar rekskriz dedennus-tre savet gant Jakez Madaule, hag evit ar
re o deus lennet ar pennadoùigoù savet diwar-benn al levr er
c'hazetennoù, evel LA CROIX pe LE MONDE, o veuliñ ar skrivagner
hag e labour.

Reizh eo avat, lavarout ez eo R.Lafont un " den a-gleiz "
hag anavezet evit-se; ha setu perak e vez selaouet gant grad-
vat gant meur a hini e Bro-C'hall. Gzemañ dreist-holl emañ diouzh ar
c'hiz mont gant an tu-kleiz, hag astat ez eo ar pleg-ae gant kaze-
tennoù zo hag a zo dinden renerzh tud-a-iliz : " an digor war
an tu kleiz "; ha trawalc'h ez eo kement-se d'ur skrivagner bennak
evit kaout... " pasaj libr" evel ma lavar ar bobl, pe evit bezañ

disamm a bep gwir-maltouterezh, hervez ul lavar diouzh ar c'hiz !
Gwazh a se evit ar wirionez! Rak mar deo reizh dre vras tezenn R.
Lafont, ez eus meur a varnedigezh hag a zo tu da abegiñ, evel pa
gomz diwar-benn ar vourc'hizion, dellezek a-priori a zismegañs, pe
evel just diwar-benn tud eus an tu dehoù, ar chouanted vreizhat
da skouer. Diaes e kav ar skrivagner rankout tamall ar Jakobined-
Hag evitañ emañ plas ar Jirondined er memes kevre, er memes sac'h;
ha mat eo, rak fals-tre e oa o menozioù diwar-benn ar federaliezh
meizet evel un doare da unaniñ, da beurunaniñ (Cf. Savadur ar
Federalourion e Pondi) ha n'eo ket da saveteiñ gwirioù ar rann-
vroioù...

D'al lenner da glask e vad er pejannoù-se: n'eo ket bihan an
danvez ! J.C.

=====
ul lizher

C. B. L.
KUZUL BROADEL BREIZH DISHUAL
COMITE NATIONAL DE LA BRETAGNE LIBRE
NATIONAL COUNCIL FOR A FREE BRITANNY

Netra na Den na vir ouzhimp kerzhout war-du ar Pal. Rier ni personne
ne nous empêchera d'atteindre notre but. No man, no force can stay
our destiny

the 17.4.68

Yann Goulet
" Koatkeo"
Eire

Aotrou'n Abad

Ne ouzon ket piv an deus skrivet deoc'h diwar-benn unvani-
ezh Al Liamm, Barr-Heol, ABK, met me a zo sur a-walc'h n'eo ket en
F.L.B.

War-lerc'h an enklask am eus graet, me 'gav din (penseo) al
lizher hoc'h eus degemeret ne oa ket kaset gant an F.L.B.
Spi am eus e kredot n'eo ket echu an afer-se evidon-me.

a wir galon: Yann Goulet.

Notenn: Al lizher a-us skrivet e brezhoneg gant ur Breizh-Uhaliad
hon eus reizhet ar yezh anezhañ hep kemmañ natra avat er garioù.
Pep meuleudi dezhañ da vezañ teurvezet impliñ ar yezh vroadel.
Arabat avat bezañ nec'het kement-se gant al lizheroù sinet F.L.B ha
degaset da VARR-HEOL, rak a-skeud-se ez eus bet un tamm sinema gant
ar boliserion, gant an archerion, un tamm stafuilh e prefeti St Bri-
eg hag ur weladenn eus ar plijusañ a-berzh deou zileuriad eus Paris-
MATCH !

MERCHED Y WAWR.

Notenn: Goulennet hor boa digant an Itron J.Roberts eus Poullheli, e Kembre, kaout ar vadelezh da reiñ da lenneion VARR-HEOL un distrap eus an Emsav Nevez: MERCHED Y WAWR (Merc'hed Gouloù-Deiz) hag a vod, dindan rezerzh Miss Gwyneth Evans, prezidantez, ha gant skoazell oberiant-neurbet an Itron Zonia Bowen, sekretourez vroadel, ar merc'hed o deus c'hoant d'en em gelenn kenetrezo war labourioù ha dleadoù an tiegezh. Pep tra a vez graet er yezh vroadel, ha diazezet e oa bet ar gevredigezh nevez evit mat warlene e-kerz Eistevod Y Bala (Eost 1968). Berzh souezhus ha deus graet ar gevredigezh nevez dre bevar c'horn ar Vro hag ur c'haonadig liesskrivet a embannomp da reiñ keleier diarbenn buhez ar gevredigezh hag ar skourroù anezhi. An Itron J.Roberts eo a zo bet anvet da brezidantez SKOURR POULLHELI (Cangen Pwllheli): hor gourc'hemenoù dezhi.

*

Un emsav nevez evit merc'hed Kembre ez eo MERCHED Y WAWR, ha digoret e voe gant un nabeudig merc'hed en ur vourc'h vihan anvet Y PARC, tost d'ar Bala, en hanternoz Bro-Gembre e miz Mae 1964.

Kent se, e da ar merc'hed-mañ izili eus Kevredad ar Merc'hed (Women's Institute), anezhañ un Emsav saoznek daoust ma'z eo e Llanfair P.G., Kontelezh Vona, e Kembre, e oa bet savet da gentañ-holl.

Met Skourr y Parc eus ar Women's Institute a zalc'he groñs d'an implij eus ar c'hembraeg en o holl labourioù, hag en abeg da se e vennas kargidi FEDERATION OF THE WOMEN'S INSTITUTE evit ar gontelezh, kemerout perzh en o bodadeg vloaziek. Hag ar gargidi-se a gemeras penn ar vodadeg, hag e lavarent e oa ar Women's Institute un Emsav saoznek renet eus ar "penn-garter" e Londrez. E saozneg e oa bet skrivet ar pennreolennoù-diazeze, a lavarent, hag e tiskoueze anat kement-se ez eo ar Saozneg a oa yezh ofisiel ar W.Institute. Hag e tiaklerient en devoa Y Parc degemeret ar reoliadur-se p'o devoa sinet d'ar mare ma oa bet diazezet eno ar Skourr el lec'h kentañ-holl. Dav e vije d'ar Parc plegañ da zegemerout kement-se pe baouez da vezañ ezel eus an " National Federation of Women's Institutes.

*

Divizout a eure Y Parc terriñ al liammoù gant an N.F.W.I, hag a-barzh nemeur goude ec'h embannas merc'hed Y Parc e oa savet ur gevredigezh nevez evit merc'hed Kembre, da lavarout eo MERCHED Y WAWR.

A-benn eizh deiz goude e oa bet savet ur skourr all, an eil, er Gaullwyd e-kichen Dolgellau. An daou Skourr-se eo a gemeras war-nañ ar garg da reiñ lusk d'un emsav broadel, war dachenn an Eistevod, er Bala, e miz Eost 1967.

Sebezus e voe respont merc'hed Kembre d'an taol-bruderezh. War benn miz Meurzh 1968 e oa bet diazezet 33 a Skourroù, hag emeur e gortoz e vo war-dro 50 kent diwezh ar bloaz 1968.

War a seblant, MERCHED Y WAWR eo an emsav da Merc'hed Kembre en-gostez anezhañ abaoe pell amzer'zo. Hiviziken o deus un emsav kevredigezhel hag emgleñ dezho o-unan, gant ar c'hembraeg da yezh ofisiel. Bez'ez eus ur C'huzul-Kreiz hag a urzh al labour war an da-fisiel. Bez'ez eus ur C'huzul-Kreiz hag a urzh al labour war an da-fisiel. Bez'ez eus ur C'huzul-Kreiz hag a urzh al labour war an da-fisiel. Bez'ez eus ur C'huzul-Kreiz hag a urzh al labour war an da-fisiel. Bez'ez eus ur C'huzul-Kreiz hag a urzh al labour war an da-fisiel. Bez'ez eus ur C'huzul-Kreiz hag a urzh al labour war an da-fisiel.

Ar sekretourez evit ar vro a-bezh ez eo an Itron Zonia Bowen, y Parc, y Bala, ur Groez anezhi hag he deus desket ar yezh kembraek.

Unan eus ar Skourroù bet savet da ziwec'h euz eo Skourr Poullheli, hag ennañ ez eus ouzhpenn 100 a izili. En em vodañ a reont ur wech ar miz hag a-benn bremañ o deus aozet ur rollad labourioù a bep seurt: plediñ a reer gant danvezioù disheñvel evel Lennegezh, Muzik, Filmoù-beaj, Keginañ, Kempenn-blev hag all. Santet e vez en emvodoù evel ur wrez, ur gred kembraek gwirion ha naturel.

Siani Roberts

(diwar ar c'hembraeg)

=====
Lizher KUZUL AR BREZHONEG
=====

Sant Brieg, 2.5.68

Aotrou'n Eskob

Kerseet eo ar vrezhonegerion o welout pegit e c'hortozet da zont er-maez testennoù an oferenn pa'z eus kement azhomm anezho.

E kalz e ilizoù ne glever ken na kanañ, na prezeg, na pediñ e Brezhoneg. Ar Vreroned a gar o bro hag a fell dezho hec'h adsevel e c'houlenn doujus diganeoc'h, Aotrou'n Eskob, pouezañ ma vo implijet ar yezh en ilizoù.

Degerit, Aotrou'n Eskob, hor gourc'hemenoù hag hon doujañs Kadoriad KUZUL AR BREZHONEG: Yann Talbot, kelennet e Sant-Charlez, Sant Brieg.
- Lizher kaset da Aotrou'n Eskob Sant-Brieg, Kemper, Gwened, Roazhon, Naoned, da Ao.'n Eskob skoazeller Kemper ha da Gannad ar Pab, e Pariz.

Setu amañ berr-ha-berr ar pezh a vije graet. Da gentañ evit pezh a sell ouzh ar BEREDOU bras da ober. Beredoù kaer, un tamm bihan distro diouzh an heñchoù bras, gant heñchoù kaer da vont di evelkent, heñchoù godronet-brav. Labour eta d'ar gantonierien; met gant ar bullozerien, ar mekanikoù da blanaat an traoù hag ar re all da ledañ ar godron, ne rae ket se ur bern labour da galz a dud. Labour a vije evit paotred-ar-poullou, evit ar varc'hadou-rien-vleunioù, d'ar varbrerien ha d'ar bikerien-vein, da baotred-ar-c'hamionoù karget da gas ar c'horfoù eus ar garioù d'ar beredoù. Gwir eo, prest e oa dija Paotred vras al Lidoù-Kaiv (Pomp funebr!) da gemerout al labour-se war o c'hont. Neuze otelioù da sevel evit degemerout ha lojañ tud-ar-c'heñvoù, reiñ boued ha lojeiz dezho, pa zeujent da heul ar c'horfoù ha dreist-holl da geñver GOUELIOU AN ANAON. Rak o vezañ ma vije diwezhat ha diaes ober GOUEL AN HOLLESENT ha GOUEL AN ANAON evel ma vez graet bremañ, dre ma vez fall an amzer a-wechoù, ha neuze o vezañ ma vije bet re a dud war un dro da voueta ha de lojañ, e oad e-sell da c'houlenn digant an Eskibion a Vreizh, ober teir gwech ar bloaz GOUEL AN ANAON: ur wech e miz Mezheven, ur wech all e miz Gouere, ha neuze e miz Eost.

*

Gant an holl baperoù da ober, an taolioù-telefon hag an difraeoù a bep seurt e vije labour evit " dimezelled-ar-post " kollet o labour ganto abaoe ma raed er P.T.T. gant mekanikoù elektronek. Labour e-pad ur pennad da c'hortoz ma vije lakaet ivez en implij, en NEKROPOLIS, mekanikoù elektronek.

Ar veleion a vije diboañ a-walc'h o labour: ne vije diaes dezho ober dour benniget ar pezh a vije ezhomm, rak n'eo dour a vank e Breizh.

Ha peogwir e komzen eus DOUR ! Ma! un dra all a oa e soñj ar Gouarnamant. Gwazhioù-dour, stêrioù (hep kontañ ar Mor evel just) a zo e Breizh: neuze stankañ ouzh an dour d'ober stankoù gant pesked a-leizh enno da zedennañ touristed, hag ober plas da ebatal d'ar re a blij dezho ar sportoù-war-an-dour ha dindan-an-dour. Rak ne oad ket nec'het ken gant ar baizanted; ne oa mui ezhomm anezho hag e c'halled kemerout parkeier d'ober beredoù ha pradeier d'ober stankoù...

En ur ger: lakaet e oa da Vreizh dont da vezañ war un dro un NEKROPOLIS hag un DOURISTOPOLIS

*

Allaz! n'eo ket evel-se e c'hoarvezas. Rak ar chiminaoued en em glevas etrezo evit astenn, hep gout da zen ebet, linenn an


hent-houarn pell en tu all da Vrest, hag an treniad Korfoù Marv kentañ a reas ul lamm spontus er Mor...

*

Sebezet e chomas tud EUROPA ! Fuloret e voe ar Gouarnamant. Met en deiz war-lec'h ma oa bet skoet an treniad Relegoù er Mor: komunisted, sosialisted, demokrated, tud an tu-dehoù zoken, e Breizh, a lavaras e oa un dra bennak a-dreuz. An Eskibion a yeas a-du ganto: zoken arc'heskob Roazhon, un estrañjour koulskoude. An Eskibion evel ken arc'heskob Brieg, a gasas en-dro o Lejion-a-Enor. Hag holl: tud-ahini Sant-Brieg, a gasas en-dro o Lejion-a-Enor. Hag holl: tud-ahiliz, parlamantourien, tud a-karg a savas o mouezh da zifenn ar WIRIONEZ ar JUSTIS hag an ISTOR. Biskoazh n'o devoa taolet pied ar Vretoned e veze ken kaer an haol pa save diouzh ar beure, evel en deiz-se. Met en deiz-se e welent anezhañ gant daoulagad an ESPERANS.

(Koulmig ar GINDI, 12 a viz MAE 1968, pennad skrivet an 8 a viz Mae deiz ar PROSESIONDU BRAS, lesanvet MANIFESTADEGOU an DILABOUR !)

FIN AR PARABOLENNOU



(gwelout paj.55 ha 57 eus BARR-HEOL)

Goude bezañ skriverezet pennadoù H.ar Menn ha Janed Flour, setu o tegouezhout ganeomp notennoù a werinoniezh a-berzh Anjela DUVAL (bennozh Doue dezhi). O vezañ ma vez savet BARR-HEOL etre keuz ha reuz e vo aes moarvat d'hol lennerien hon digareziñ, ma lakomp amañ traoù Anjela.

" Talvoudus-tre e kañver Gwerinoniezh am eus kavet pennad Janed Flour e B.H. Meurzh 68. Hogen war ar seurt danvez e vez kavet atav tra pe dra da astenn ar gaoz. Da skouer rann-bennad an EURED.

- Araok kuitaat ti he zud da vont da eurediñ e poke ar wreg yaouank d'he mamm gant doujañs hag alies e veze daeroù en o doulagad o-div; ha zoken meur a hini e-touez an dud prezant a ranke moustrañ war o zrivli evit mirout da ober kement all! Skuilh un daeraouenn a from.

- War hent ar bourk e kave tud an eured meur a skoilh. Drezennoù a veze stignet a-dreuz an hent, drezennoù hir klasket a-ratozh ha dalc'het gant bugale (tud vras ivez zoken), unan krog e pep penn eus an drezenn. Ret e veze profañ gwenneien a-benn tremen. Peorien' veze stank ivez war vord an hent oc'h astenn o doarn 'n ur hetif chañs vat d'an dud nevez. Ret e veze kaout soñj d'ober pouvezañs moneiz evit tennañ peoc'h eus an holl, rak arabat drouk-kontantif den ebet en deiz-se !

- Ar walenn-eured pe an aliañs. Ne oa ket mat hervez ar re gozh, d'ar wreg yaouank lezel he friklañ dezhi he gwalenn dreist ar juntr: se' veze lezel anezhañ da gaout re a veli warni. Ma felle ganti lakat he zroad er pal ha bezañ ar vestrez, hi hec'h-unan a zlee riklañ hec'h aliañs dreist ar juntr

- Ar pred-eured. An dud a-renk a rae atav ar pred-eured er gêr; ar peurliesañ e ti ar wreg yaouank. N'eo ket friko a veze en deiz-se, a-hevrez; ur gwir foeltr-bouzelloù, ya. Klevet em eus alies va zud o kontañ: seizh plad kig'oa ar gont gant an dud a aez, ha ken lies all a blad diservijoù, hep kontañ ar strakerezed !... Soñj am eus eus ar strakerezed: madigoù-~~aukz~~ paket hini da hini gant paper'bepe seurt liv, frañjennet ar pennoù outo, hag un amorsenn kuzhet er paper. Tarzhañ'rae gant moged hag ur strakadenn, pa veze sachet war zaou benn ar paper, evit brasañ plijadur ar vugale hag an dud yaouank.

- Al lizher-Eured. Kerzent ha degouezhet al lizhiri-eured en em lakae ar yaouankiz da bourchas kavalier pe gavalierrez. Evit

aezstaat ar jeu e veze lakaet al lizher-eured 'n e sav harp ouzh gwerenn izelañ ar prenestr (etre ar rideoz hag ar werenn). Neb a dremene - ha kavet e veze digarez da dramen! - a ouie dra-se e veze unan bennak da vont eus an ti d'an eured. Alies eta o dije ar yaouankiz dibabet o c'havalier pe gavalierrez a-benn an deiz; da vihanañ pa zegouezhe bezañ war-hanter paotred ha merc'hed, e-touez ar gouvidi. Ar c'havalier a zlee mont da gas e gavalierrez d'ar gêr goude ar pred ma veze eus an amezaien.

- Ur stal madigoù en em gawe war ar plas a-benn ma save an dud diouzh taol. Ar c'havalier oa sañset da beañ un dra bennak d'e gavalierrez. Kraoñ pe vedigoù "

NOTENNOU.

* Deiz Lun-Fask, ar 15 a viz Ebrel, hevlene, (en ur vont da Skignag war vez an Aotrou Perrot) e oa un eured o kuitaat Logivi-Plougraz da vont d'o lein da Werliskin hag etre Logivi ha Plougraz, war vevenn an div barrez e oa bugale gant ur pezh garlantezenn bleunioù ha glan-zur o herzel ar gweturioù. Lezet e oa bet da dremen hep goulenn ne- tra digante ar gweturioù na oant ket eus an eured. Ar re all a ranke a bep eil reiñ ur profig. Dre-se n'eo ket marv c'hoazh ar c'hiz a gomz A. Duval anezhi.

- Komz a ra A. Duval eus chañs vat. Mat e vefe menegiñ ar brizh-kredennoù diwar-benn an euredoù. E lec'hioù'zo ne veze kammed div eured war un dro: lakomp div c'hoar oc'h eurediñ en havelep deiz, dra ma lavared ez ae tout ar chañs gant unan anezho. Ma vefe dastu-met war un dro ar pezh o deus bet klevet ar beroned, e vefe tu da chom sebezet o welout pegen bajanek e vez tud'zo. Evel an evezh a daolad, hag a daolad marteze c'hoazh bremañ, ouzh an div gantol-c'houloù enaouet dirak ar priedoù nevez e-kerz an ofereñn-eured!

- Menegomp avat, ur c'hiz kristen-tre a gaved ivez evit an obidoù: reiñ kalite d'ar beorien. Kalite o talvezout " aluzon" moarvat ar ger " karitez ". E Plouôber da skouer e veze ur regennad pe ziv a dud (na vezent ket holl peorien-dul) o c'houlenn kalite evel-se; ha c'hoazh e vezent divergont a-walc'h a-wechoù pa gavent re zister profoù tud-añn-eured, evit direzonif an dud. Kement ha ken bihan ma rankas an Aotrou Penanster hag a oa maer d'ar c'houlz-se difenn doaret ken da glask kalite.



EMBANNADURIOÙ

" UN INTIME DU LORRAIN LYAUTEY, LE GENERAL COMTE YVES DE BOISBOIS-SEL, Barde de Bretagne " a zo ul levrig savet gant Ernest ar Barzig-Roh Vur evit enoriñ e genvreur eus ar C'horsedd, marv e 1960.

A ouenn vretien, mar deo bet ar jeneral-se ur brezelour dispont, ez eo bet atav ken dispont all evit difenn Breizh. Ya, Breizhad e oa da gentañ. Dre e levrioù niverus en deus diskouezet ivez pegement e plije e vro dezhañ, ha poenial a reas evit deskiñ ar Yezh. Pep tra a zo menaget en oberenn ar Barzig.

Evel ma lavar Aldrig Russon en e rakskrid e fell d'ar C'horsed enoriñ hec'h izili feal : " Kaset eo bet, emezañ, hor c'hefridi da benn a-zivout ar barzh " Mab ar Pelem " a drugarez da Roh-Vur a oar ken mat ha ken brav enoriñ hor c'henvroiz vru-detañ ". Pezh a zo gwir, peogwir en deus ar Barzig skrivet ivez buhezioù Abherve ha Yann Choleau.

Priz al levr: 5 Lur + ar mizoù-kas e ti an Oberour:
26, av. du Cimetière de l'Est, Roazhon, K.R.P. 1025-85 Roazhon.

R. Pradig.

AR BED KELTIEK, 24 ru Poull ar Bachet, 29 N -BREST K.R.P. Roazhon, 1907-07 - Meurzh-Ebrel-Mae 1968.

Pennadoù liesseurt evel boaz. Hep mar ebet, ar pep plijusañ hag ar pep aesañ da lenn ez eo pennadoù R.Hemon, peurvuiñ A. Heussaff hag a zo deuet da vezañ pennañ kenlabourer ar ge-laouenn a zeu studiadennoù gouizieki diwar e bluenn, o tiskouez ez eus deuet kemm da vat er yezh; mat e vefe dezhañ gwech ha gwech all reiñ un diskleriadur evit geriennoù'zo hag a zo bepred digomprenus evit un darn vat eus ar vrezhonegerion desket, o vezañ ma'z int termenioù nevez-krouet pe nevez adlaket en implij; ne blij da zen ebet rankout ober chiboudig dirak gerioù 'zo pa c'heller war-bouez un notennig o diskleriañ; ma talc'h Alan da sevel pennadoù evel ma ra e teuo da vezañ un toullerehent war dachenn ar ouiziegezh e brezhoneg avat! E-kichen Alan menegomp emziskouez sabezus ar stourmer kozh Herve ar Menn, fresk-bev e vemor evit kontañ dimp e ennoù-yaouankiz hag e ennoù diwezh ar brezel. Moarvat oz eus meur a genlabourer o tougen dorn da brientiñ an notennoù war an darvoudoù hag evel-se diaes komz eus hini pe hini anezho; notennoù savet gant aked ez int da vihanañ. Pec'hed e vefe avat, tremen hep ober anv eus AR GERIADUR hag a zo d'hor meno, ur bennoberenn a ouiziegezh; o tigeriñ reñvelloù ar yezh emañ R.Hemon da aloubiñ pep tra, hag o tigompleksiñ ar vrezhonegerion en ur zegemrout dinet'h ha dichi-pot gerioù evel Protektorad, Protonoter, Psikologiezh, Psikia-

triezh, ha neuze gerioù all evel psikoz, pterodaktil hag all, hag all.

Prosesion e T. a zo gourel. Ur prosesion a lavarer hep kenmadur. ha neuze daou brosesion.

Puch: Sul ar Puch (Septuajezim a leverer dre-holl bremañ). Hogen ar ger-se a gaver da skouer en AVIEL KATOLIK dindan ar stumm AR PUZ -LARD = Seksajezim. Ur fazi a zo un tu bennak neuze.

Pudask : evit an deskarded merkomp ar ger PITEOZ(ed) e yezh Treger.

Pupli : Efl a zo ur seurt disheñvel: pupli gant delioù gwenn.

Put : ur blantenn but, da lavarout eo, n'eo ket bet imboudet.

Putenn : id, liester putennoù. gg.

Rac'hañ: moarvat an hevelep ger ha Razhañ diwar al latin Radere

E-keñver anvoù-tud'zo e vefe gwelloc'h marvat reiñ dezho o gwir stumm brezhonek evel PASWETEN ha skrivañ PASKWEZEN, pe neuze e brezhoneg kozh Pascwethen. Cf Morvezen.

AL LIAMM Gaver-C'hwervier 126 Koumaman-bloaz:25 L. war baper . 30 war baper kaer, K.R.P. Mme Cherol"Al Liamm" 2184-34 Roazhon.

Barzhonegoù brev o tigeriñ an niverenn: Tan ha Ludu gant M. Glanndour(marteze un tam bihan re filozofel e-keñver geriadur), Evnig, allas!.. gant Jakez Konan. Re ziaes evidon avat, geriadur G. Pennad evit lenn ha kompren ervat, ha dreist-holl tañva, barzhoneg Miguel Angel Asturias: Si, pero no magia. Gwelout a ran a-walc'h ez on krog da ankouezh ar c'hemmadurioù pe lannan linennoù evel: e'r gwez-stoub meur a c'hotoñs gurun...? Petra ar foaltr ez eo ar ger gotofis ? Merteze e felle d'ar skrivagner skrivañ kotofis? hag izelloc'h e welan c'hoazh " o zaoulagad kaouenn.. " Re dechet ez eo Pennad, d'hor meno, da ober gant gerioù kozh-Noe ha stummoù kozh ha da ankouezh evel eo areadur ar Yezh en amzer-mañ. Diags oz eo temall komz-se dezhañ o vezañ n'emañ re ball diouzh Breizh o vezañ. Pennadoù all da lenn hor Barz Pemdeziek gant Jaussat(ennoù-karc'har) Breizh Bendeiz Doue gant Benead (un tamm garv an dro-lavar avat) gant he zro-bluenn fresk ha bev; hogen 'm eus eon he deus Benead ur galloud bras-meurbet p'eo deuet a-benn da zimeziñ an Itron St Pêr gant Parzhier-Meur ar Baradoz: rak deuet eo an Itron Sant Per da vezañ, a-hervez, Itron St Pêr! Ur vaouez dezhi un tamz speread gourel dezhi e oa an Itron St Per, unan ha na das ket a-drek kein en dud da lavarout o gwirionezi! (Doue d'he fardono .) An Troc'hañ-bali war aodoù Bro-Leon: kalz re verr evit ur skriva-gner eus an troc'h kentañ evel Loaziz Bihanig. Merkomp gant plijadur galv P.Denez a-du gant ar yezh-pobl. Anna diouzh e du a gomz diwar-benn Tezenn Vrezhonek P.Kermeal: mat e vefe avat, diskleriañ spis ha fraezh pehini eo reoliadur ar Skol-Veur e-keñver an Tezennoù Brezhonek, un digarez e vefe da ziskouez ur wech ouzhpenn pegen

strizh-speredet ez eo ar Frañsizian ha pegen diaes ez eo d'ar re
weillañ eus ar Skol-Veur ober ar pezh a garfent. Unan a zaou neu-
ze pe gemmañ ar reoliadur pe gemer hent Abanna ha P.Kermoal. Iskis
ez eo troioù-lavar evel " rhomet e fri ar gloued c'hall ": chomet
e fri war ar gloued an hini a leverer... Bez'ez eus darn eus ken-
labourerien al LIAMM ha n'ouzon ket peseurt diforc'h a zo etre
" harzhal " hag " herzel " !

BLEUN-BRUG (Meurzh-Ebrel 1968). Dedennet ez omp bet dreist-holl
gant lizher gallek an Aotrou J.Lec'hvien hag a skriv pezh a soñj
an holl, zoken ar re na fell ket dezho, evit abegoù a bep seurt,
hen anvav. E-keñver Istor ivez ez eo diglok pennad F.M. diwar-
benn FEIZ HA BREIZ: BARR-HEOL a oa da gentañ kazetenn ar BLEUN-
BRUG evit Bro-Dreger ha Kernev-Uhel (1953-1955) nemet pa savas
bec'h en askont d'ar skritur dreist-holl, a voe lezet da goue-
zhañ hag an Aotrou Klerg a roas e zilez eus ar Bleun-Brug. Mut
e chomas BARR-HEOL neuze betek hanter 1956 ha neuze e voe adke-
meret war e gont gant an Aotrou Klerg, distag-krenn diouzh ar
Bleun-Brug, daoust da lavarioù pennrenerion ar BLEUN-BRUG hag a
damalle da " Baotred Tregar " bezañ o c'hoari dre zindan en o
enep. A bep eil e voe skoet ar Baotred-mañ er-maez eus ar Bleun-
Brug da c'houde, met kement-se a zo un istor all ha n'en deus
mann da welaout gant ar gelaouenn hec'h-unan ! Betek difenn zoken
ouzh an Aotrou Bourdellez, beleg, prezeg ha kofferañsiñ war
zouar Eskopti Kemper ha Leon !!! Difenn sinet gant Eskob Kem-
per ha Leon.

Mat a ra ar BLEUN-BRUG o tannañ evezh e lennerion war an
Aotrou Perrot hag e labourioù, rak a-benn an 12 a viz KERZU da
zonet e vo 25 bloaz abaoe ma voe drouklazhat. E-lec'h monet da
sunañ skridoù e brezhoneg dinatur evel meur a hini eus ar re
a embanner, e c'hellfe ar vrezhonegerion nevez evañ dour fresk
eus stivell ar gwir yezh, mar lennfen ha ma studifent gant
preder BUHEZ AR SENT, forzh pegen koshaet ma c'hell bezañ e
meur a geñver.

MOUEZH SAINT ERWAN : 12 Lur ar 4 nivefenn: K.R.P. Revue Skol,
Krec'h-Avel, Lannuon, Roazhon 1911 06. Kennadig Breuriez St
Erwan ez eo ar gelaouenn-mañ, o reiñ keleier diwar he fenn, he
labourioù, he c'hampoù (Lanvazeg, Pleuveur-Bodoù) gant un
heuliad skridoù diwar-benn broioù kreiz Afrika a-ziwar bluenn
ur c'helennner war an Istor: Yann Talbot. Daoust d'un nebeudig
eioù a-keñver ar yezh hag ar moulañ, sed aze pennadoù bev, sozet
gant ur gwir skrivagner, ul lip-e-bav. Gwelout a rrez ivez KOUL-
MIG AR GINDI o tonet da greskiñ ar bern...

AR STUDIER - L'ETUDIANT BRETON : Koumanant 10 Lur da vihanaf, 2 Ru
Lafayette, Roazhon; K.R.P. F.A.J.E.B. 1452-72 Roazhon.

Ur gelaouenn oc'h ober meneg gant mignoniezh eus BARR-HEOL.
Anat eo ez eo nec'het, diouzh an niverennoù deuet er-maez er bloaz-
mañ, ar studierien gant o amzer-da-zont. O diskleriadur a-du gant
Anat eo deus graet ar Menoz Breizhek er bloavezhioù-mañ. En tu-hont
da gudannoù o sellout ouzh Breizh e tigor ar STUDIER e brenestri war
vroioù all: Katalounia ha Bro-Gembre (ar pennad-mañ, war e seblant,
gant ur c'hembread studier-kelennner e Skol-Veur Brest)

EMGLEO BREIZ (B.P.17 Brest) : Ur strobard dielloù diwar-benn an tabut
etre ministr an Deskadurezh, Peyrefitte, hag an deputeed vreston war
sujed ar Brezhoneg er Skol. Anat eo bolontez-fall ar C'hallaoued, met
kement-se n'eo na nevez na souezhus, ha n'eo ket an tazoù e vint gwe-
let o kemmañ menoz. Hep un urzhiadur politikel nevez, penaos e vefe
tu da gemmañ urzhiadur ar Skol-Veur hag an Deskadurezh, e Breizh? Fur
eo a dra sur, kinnigoù EMGLEO BREIZ hag ar Strolladoù all, re Okita-
nia da skouer, a-zivout un aozadur nevez eus kelennerezh ar yezhoù
" rannvroel ", ha ne vefe ket fall kaout kement-se da gregiñ, met
kinnigoù evit ur bed all ez int, n'eo ket evit ar bed kriaz a hiziv.
Dre Ret ha dre Lezenn : ar yezh krec'h-traoù en holl Skolioù Breizh,
setu ar gwir bal ha d'hor mano, ez eo war an tu-se e tleer labourat
da ragaozañ ar speredoù, er gwel eus ar Mannad-Meur-se.

Mat e vefe ivez da EMGLEO BREIZ embann er yezh ma vezont bet
distaget er Radio, ar pennadoù sozet evit selaouerion RADIO KIMERC'H.
Tu a vefe da advouelañ meur a hini anezho war gelaouennoù evel BARR-
HEOL, al LIAMM, BLEUN-BRUG hag all, rak den ebet n'eo da dreiñ ane-
zho en-dro diwar ar galleg, se'zo sklaer.

=====

NEVENTIZ E Keltia

En holl vroioù keltiek ez eus bet ha tan. Betek e Kernev-Veur
e-lec'h ma'z eus un EMSAV POLITIKEL BROADEL: Mibion Kernow (Mibion
Kernev) : 3000 a izili ennañ. Deiz Gouel Sant Peran, patron Kernev, ar
6 a viz Meurzh e voe dispaket Banniel Kernev er c'hêrioù, ha lakaet
e voe un torkad-bleunioù, a Londrez, tost d'al lec'h ma voe krouget
An Gof (= ar Gov.) ha Falmank, daou eus renerion an dispac'h a-enep
ar Saozon, e 1496. Moullet ez eus bet ivez goloioù-lizher o tougen
arouez Mibion Kernev gant ar gerioù-mañ " Perak ne vefe ket timbroù
-post evit Kernev-Veur ? " ; timbroù a-ziavaez d'al lezenn a zo bet
implijet gant an anv KERNOW warno, ha skeudenn ur Groaz Keltiek hag
ur Vran Du (hervez ar marvailhoù-pobl emañ ar Roue Arzhur o veilhañ
war Kernev dindan furn ur vran du). Goulennet en deus ivez unan

80
eus parlamantourion Gernev, e ti ar Gumun, e Londrez, an Aotrou
John Nott eus Porzh Ia (St Ives) digant Rener-Meur ar Post
hag-efñ edo e sell da embann un timbr ispisial evit Kernev-Veur.
Hag ar respont a zo bet: " Naren! "

BRO-SKOS. Ul lammgresk souezhus he deus graet ar GOSTEZENN VROA-
DELOUR e Bro-Skos : 350.000 mouezh evit ar vouezhiadeg diwezhañ
da zibab kuzulierion, ha gonezet evel-se 100 plas-kuzulier. Er
c'huzulioù lec'hel he deus hiviziken ar Gostezenn Vroadel, 150 a
guzulierion. Un diskar spontus a zo bet war al Labour Party,
ha Gouarnamant Wilson. A-benn 1971 emañ ar vroadelourion e soñj
kaout ur Gouarnamant dishual evit Bro-Skos. Erru-fall ez eo ar
Gouarnamant a zo e Londrez bremañ hag emañ evel-se an avel a-du
gant ar Virourion, met ivez gant ar Vroadelourion e Bro-Skos
evel e Kembre.

=====

TRISTIDIGEZH

Fañch Souffès-Despré, 16 vloaz, eus Brest, mab-henañ an Aotrou
Souffès-Despré, da heul ul lamm e miñs an ti, en deus divellet
e c'houzoug. Bez'e oa Fañch eus BREURIEZH SANT ERWAN ha deuet
e oa warlene e-kerz Pask da labourat war-dro iliz Lanvezeg,
hag e weler anezhañ war al luc'hskeudenn embannet gant MOUEZH
ST ERWAN. Diaes ez eo gant gerioù diskleriañ gwashañ glac'har
ez eo bet ar gwall-zarvoud-se evit tud Frañsez hag ivez evit
o mignoned (Doue d'e bardono, ha plijet gantañ konfortiñ gant
nerzh e c'hras e dud en o anken!)

=====

UN ESKOB NEVEZ

Anvet eo bet an Aotrou Fransis Barbu, pennrener Kloerdi
bras St Brieg, da eskob Kemper: ur Breizhad evit Breizhiz, setu
, anat eo, youl ar Pab. Evitañ da vezañ Breizhuhaliad hag hep
gouzout ar yezh vroadel, e vo troet sur-mat, muioc'h zoken eget
a-raok, da deurel evezh euzh ezhommoù Breizh . D'an 12 a viz
Mae 1968 ez eo bet sakret Eskob, en Iliz-Veur Gemper (Ad mul-
tos annos !)

=====

Mignoced VARR-HEOL, na zisoñjit ket ober bruderezh evit ho kelaou-
enn. Daoust d'he stumm dister e kredit ez eus ezhomm anezhi da
sklêriañ an hent d'ar Vretoned etrezek ar Frankiz. N'eo ket mat
deoc'h kennebeut mirout evidoc'h ar menozioù kaer a zo en ho
penn, tapit ho pluenn da rannañ pinvidigezh ho spered hag ho ka-
lon gant ho kenvroiz.

BARR HEOL



Directeur: M. LE CLERC, recteur Buhulien 22-LANNION
N° 57, Septembre 1968, Trimestriel, Prix du N° 3. Fr 5

RENER-PENNSKRIVAGNER: M. Le Clerc, Bulien, 22-LANNUON
Niverenn: 57, Miz SWENGOLO 1968, trimiziek

KOUMANANTOÛ

Koumanant ordinal: 10 Lur, Broioù Estren : 12 Lur
" Barr-Heol" Crec'h Avel, 22 LANNION
K.R.P. 245 453 Roazhon (Rennes)

COMMENTARII IN LINGUA BRITONNICA EXARATI
REVUO KVARONJARA EN LINGVO BRETONA

BARR-HEOL

War Feiz ha Breizh

T A C L E N N

(1. Ar venec'h e Breizh (Klerg).....	paj. 2)
(2. Imn d'ar Werc'hez Kurunet en Neñvoù(M.Eflam)...	7)
(3. Kapitalouriezh ha Sosialouriezh (Y.Talbot)	8)
(4. Gwinizh (barzhoneg gant A.Duval).....	18)
(5. Notennoùigoù (Barr-Heol).....	19)
(6. Diskouezadeg Etrevroadel Krec'h-ar-Roue(J.Konan)	20)
(7. Krennlavarioù Kembraek (Klerg).....	32)
(8. Er C'hoad. Bannwel Noz (A.Duval).....	37)
(9. Setu echu ar Goañv (son gant Y.Derrien).....	38)
(10. Da Heloiza (A. Duval).....	40)
(11. Levrioù :L'Europe aux 100 Drapeaux, Révolte des)
(Tracteurs, Les Grandes Heures de la Bretagne,..	41')
(12. Notennoù war an Tregerieg(Glaz,Gloaz) (Klerg)...	44)
(13. Sav Breizh.....	46)
(14. Bopig (F.Kervendal).....	49)
(15. Breizhiz e-ouenn; Mark ar Berr,T.Jeusset.....	54)
(16. Kendalc'h Keltiek Foujera (A. Ar C'halvez)....	58)
(17. Keginerezh.Rolloù-Meuzioù.....	65)
(18. Loeiz Lezongar (Koupaia Koadlann).....	66)
(19. Prezegenn-Gañv an Ao.Arthur Goasdoué (Klerg)..	67)
(20. Ogell (R.D. ha Klerg).....	73)
(21. Kelapuennoù (Bed Keltiek,Liamm,Bleun-Brug).....	74)
()

Mouler ha Rener: M.Le Clerc, Bulien-Lannuon, Bro-Dreger
 Impr.Gér: M.Le Clerc, rect. Buhulien 22 Lannion C-d-N
 Teñzorerezh : Barr-Heol, Crec'h Avel, 22 Lannion
 K.R.P. 245 453 Roazhon (Rennes)

Ar Venec'h e Breizh

Ar gelaouennig LUMIERE DU MONDE, chwevrer 1968 paj.14-18 a gaver enni ur pennadig diwar-benn menec'h nevez e Madagaskar, diouzh tu Reter an enezenn, e bro ar rummad Antomoro. En ur vro e-lec'h ma'z eus c'hoazh un 50.000 den ha n'int ket badezet emañ ar gouent: pevar manac'h enni, an hini a zo er penn, an Tad Loeiz, bet misioner e-pad hir-amzer e Madagaskar hag oc'h anaout ervat spored ha yezh ha gizioù ar vro, ha gentañ tri den yaouank deuet da zeskiñ gentañ ar vuhez-a-venac'h, tud yaouank eus ar vro. Meur a rumm menec'h bet stummet en Europa a zo deuet dija da Vadagaskar d'en em ziazezañ, met menec'h stummet hervez hengoun Europat ar manatioù ha poan a-walc'h dezho en em ober diouzh gizioù ha boazioù ar bobl valgach. An Tad Loeiz avat, n'en deus ket heuliet an hent-se: bevañ ar vuhez-a-venac'h met hervez gizioù ha boazioù ar bobl valgach, setu e vennad. Kemm ebet neuze a-ziavaez etre buhez menec'h Tanjomcha (hennezh eo anv ar gouent, un $\frac{1}{2}$ lev diouzh Vohipeno) ha buhez an dud diwar-drot heñvel al lojeiz, heñvel ar gwiskamant, heñvel ar bevañs, riz dreist-holl, heñvel zoken an deskamant kuit da glask choukañ galleg e penn an danvez-meneg'h da skouer, labour heñvel, binvioù-labour heñvel.

An daou zanvez-meneg'h deuet davet an Tad Loeiz da gentañ, evel an hini nevez-deuet abaoe n'o deus ket bet da vezañ prederiet o klask anavezout peseurt gizioù da heuliañ, penaos debriñ, penaos saludiñ, penaos en em zerc'hel en degouezh-mañ-degouezh: n'o devoa tra d'ober nemet kenderc'hel d'ober evel ma raent er gêr, en o c'hêriadenoù. Ha koulskoude e renont evel just buhez ar venec'h : savet alies da bedor eur diouzh ar mintin, evit kanañ meuleudioù an Aotroù Doue. Lennadenoù santel, kan ar Salmoù - e malgac'h na petra'ta, ha goude an teir eurvezh, pedennoù-se e vez lavaret an oferenn. Neuze ez aer d'al labour evel an holl dud all gant un nebeudig Salmoù gwech ha gwech all da verkañ eurioù pennañ an devezh, ha war-dro 5 eur d'abardaez e kanomp ar Gousperoù hag e reont ul lennadenn santel da vegañ buhez o ene. Anat eo emañ Doue gento. Hag unan anezho bet goulennet digantañ hag eñ na vefe ket gwelloc'h dezhañ mont da zeskiñ katekiz da dud ur geriadennig, 6 km ac'hano, hag o deus c'hoant da vezañ badezet, a respontas " Marteze n'o dija ket goulennet bezañ badezet ma ne vijen ket bet chomet emañ! "

Ma vevomp emañ istor an TAD LOEIZ hag e venec'h yaouank

ez eo abalamour ma'z eo an TAD LOEIZ-se un diskibl da Zom Aleksiz Presse, abad BOKEN (Doue d'e bardono!). Dedaunnet e oa bet an Tad Loeiz gant taol-esaec Dom Aleksiz, e Boken, ha kuitaet en devoa e visionoù e Madagaskar, evit donet da glask goudor an Abati Boken. Dom Aleksiz avat, goude bezañ e stummet, en devoa e gaset en-dro da Vadagaskar da ober du-hont ar pezh a venne e-unan ober e Breizh.

*

Setu eta perak e kav dimp hon eus digarez brav da zigeriñ ur gaoc'h a-wel d'an holl ha da glask teurel un tamm sklerijenn war unan eus ezhommoù ar Vretoned: kaoz ar venec'h e Breizh hag o labour. Dav avat, strishaat hon tachenn ha lezel a-gostez Abatioù ha Kouentoù anavezet ha brudet: Trapisted Timadeug da skouer, Abati Kergonan, e Bro-Wened, dav tevel war labour menec'h stag ouzh un urzh bannak evel an Tadoù Jezuitad, an Tadoù Kabusined (ar re-mañ gant o labour dalvoudus e-keñver ar yezh hag an embannadurioù brezhonek), evit komz hepken diwar-benn BOKEN HA LANDEVENNEG, dreist-holl dre ma'z eo an daou abati-mañ ar re anavezet ar gwellañ gant ar Vretoned yaouank a zo bet dedennet gant an Deooc'h anezho en hon amzer. Dom Aleksiz a oa ur brogarour, den ebet ne c'hell lemel an snor-se digantañ; tost e oa d'ar bobl ken tost ma ne oa ket deuet a-benn d'en em zizober zoken diouzh o stumm-parlant ha betek diwazh e vuhez ez eo chomet gentañ taol-mouezh paizanted Breizh-Uhel; fal-lout a rae dezhañ bezañ ur skouer e-touez ar bobl ha ren e gwirionez, hervez ur c'halvedigezh anavezet hag aprouet gant an Iliz katolik, ar vuhez a bedenn, a binijenn hag a emziouer m'eo ar vuhez venac'h. Evel ur goloenn-wenan e tlee bezañ BOKEN o " teurel " gwech ha gwech all ! Hag e c'heller sellout an TAD LOEIZ evel e c'henhed, evel ma lavar gwenanerion'zo.

Un adtaol ez eo bet an tri manac'h deuet da gemerout lec'h Breudeur bihan Foucaud (Foucault) o deus bet dilezet enez St Wal-taz, nepell diouzh ar Porzh Gwunn-Setu ma'z int deuet d'en em ziazezañ (da ober un taol-esaec kentoc'h) an enezenn-se. Un degouezh kaer da seveniñ huñvre an Tad Aleksiz pa venre bezañ Breizhad penn-kil ha troad. An am eus avat, ne vo an ti nevez nemet un ti gall hag un ti gallek ouzhpenn e Breizh-Izel, da lavarout eo pell diouzh ar skouer a ro an TAD LOEIZ e Madagaskar, ha pell diouzh c'hoant ar gwir Vretoned.

Gant va talc'ho an Ti-Meur, abati Boken da stummañ leaned hag a vo gouest da en em ober Yuzevion gant ar Yuzevion, Gresiened gant ar C'hresianed, Malgachad gant ar Valgachad ha Bretained gant ar Vretoned. Setu hep mar ebet, ar pezh emañ Breizh o c'hortoz, en doare ma vo Boken evel ar goell en toaz hag o reiñ skouer, lañs ha lusk d'ar c'houentoù hag abatioù all eus Breizh. Ne oa manad

4
all ebet nemet hennezh oc'h awenañ an Den Meur ma oa Dom Aleksiz
addiaezour Boken. Re a diez gall a zo e Breizh!

*

Ur manati all hag a zo aet ar vrud anezhañ dre bevar c'horn
ar bed, un abati o tougen un anv ken kozh ha Breizh: LANDEVENNEG
en deus tennet evezh ar Vretoned goude ar brezel-mañ ivez.
A dra sur, e oa ur menoz meur oc'h awenañ ar venec'h a zo deuet
a-benn da adkrouiñ ar Bedenn, al Labour hag ar Studi war da-
chenn Sant Wenole! Gallout a reer levarout e oa bet degemeret
ar menoz-se gant ur virvidigezh-spered dreist-ordinal : unan
eus lec'hioù-meur hor Bro o tasorc'hiñ !

E gwirionez petra edo ar Vretoned o c'hortoz pa oa savet
kaoz e vije adsavet Landevenneg ? Daoust ha menozioù resis ha
sklaer o devoa war ar poent-se? Petra a soñje pennoù-bras an
Iliz e Breizh ? Petra a soñje ar re a roe brokus o aluzenod ?
Petra a soñje ar re a roe sikour o divrac'h da zirc'hubiñ an
dismantroù ? Petra a soñje e gwirionez ar venec'h o-unan hag
e zlee sammañ war o chouk ar garg da reiñ buhez en-dro d'an
dismantroù ?

Meur a bajennad kaer a c'heller da lenn e Kronikoù an
Abati: Kronikoù Kerbenead ha Kronikoù Landevenneg (Pax). Un
ali a roomp d'hol lennerion da lenn pe da adlenn dreist-holl
levrennig Kerbenead " CHRONIQUE DE L'ABBAYE DE KERBENEAT "
(Gouere 1953, niv.15) o tanevelañ lidoù-diazezañ ar Maen
Kentañ, 10 a viz Mae 1953 . Tud a-leizh o teredek, gant Kardi-
nal Roazhon e penn ar Gouel, eskibion, Tadoù-Abaded, pennoù po-
litikel, vikeled-vras, chaloniad, personed-kanton, hag all.

Landevenneg, Tour-Tan d'hor feiz

A skub an noz, a strink an deiz

Te'vo warc'hoazh, Baradoz Breizh

a gane Laouenanig Breizh, diouzh e du, hag an Aotrou chaloni
Fave, person bras Kastell Pacl, a zibabe ar pozioù gallek tom-
mañ a c'helle da gavout da ziskleriañ e lavenez ivez hag e
c'hoanag.

*

Deou vloaz kentoc'h, houlskoude, a oa bet embannet ul liz-
zherig e brezhoneg, war al LIAMM (Mae -Mezheven 1951, paj.77,
ul lizherig ha n'eo ket sinet, ul lizherig skrivet, evel ma vez
lavaret " ab irato ". Setu amañ en istor berr-ha-berr. Aet e oa
unan eus Tadoù Kerbenead (d'ar c'houlz-se) d'ur barrez vras
a greiz Kernev, da brezeg a-du gant Landevenneg ha da c'houlenn

5

an aluzen digant an dud. Mat e oa tremenet an traoù en iliz, gant
an Tad o sarmon " Soñjit, va Braudeur, el labour graet e Breizh,
kantvedoù'zo, gant menec'h Sant Wenole! Ganto eo bet difraostet an
douar breizhat, ar spered breizhat, an ene breizhat...Bretoned
kristen, setu (emañ prest) Landevenneg da advevañ...Bretoned
kristen, komprenit ho tever ".

Ouzh taol avat, ar c'hure a c'houlennas diskleriadurioù di-
gant an Tad, hag hemañ ne voe ket seizhdaleet evit ober un di-
forc'h etre e gomzoù publik hag ar wirionez, rak, emezañ, nil'zo
Politeknisianed ha Parizianed ganeomp, en hon abati. Penaos e
c'hellit soñjal e Breizh hag er Vreizhiz..."

Ken displijus, ken feukus, ken diwir e oa voe kavet al li-
zher-se gant Bretoned vat a heuilh kentoc'h o c'halonod eget ar
fedoù ma torrjont o c'houmamant d'al LIAMM!

*

Petra e oa eta " paotr-al-lizher " ha Bretoned all o c'hor-
toz? Livirit din, mar plij ? Gwelout tachenn santel Wenole aloubet
gant ur bagad menec'h broadelourion oc'h ober gant yezh ar Vro noz-
ha-deiz, oc'h implijañ Yezh ar Vro en o ofisoù, o skignañ en-dro
dezha war un dro gant skridoù relijiel skridoù brogar e Yezh ar
Vro, ouzh en em servijañ eus Yezh ar Vro en o darempredoù pemdeziek?
Un tiad brogarourion, un neizhiad broadelourion ? Ur greizenn efe-
dus a sevenadur breizhat ha kristen o ledañ he levezon war Vreizh
a-bezh, o krouiñ amañ hag ahont Abatioù nevez ? Ha bremañ dreist-
holl, da heul ar reolennoù nevez war al liderezh, o tonet da ve-
zañ evel ur vilin vras oc'h aprouiñ doareoù-pediñ nevez, o vleri-
mañ Salmoù ha Kanennoù Santal, oc'h ober ^{gant} Yezh ar Vro penn-da-
benn evit ar Matinezoù, al Laodez, an Eurioù bihan, ar Gousperoù
hag ar C'homplidoù ? O lenn ar BIBL e Yezh ar Vro ?

*

Me'gav din ez eo un dra bennak evel-se edo ar Vretoned o
c'hortoz. Gwir eo e vez diaes a-wechoù sevenañ ar mennadoù gwellañ
rak etre bed-ar-menoziad ha bed-ar-gwirvoud ez eus un diforc'h bras,
met amañ, evit pezh a sell ouzh Landevenneg, ouzh Abati Sant Wenole,
n'eo ket sklaer tamm ebet nag an eil nag egile! Adsavet eo bet
d'ar mare m'edo o vont da vezañ kollet moarvat da viken, hep bezañ
darevet a-walc'h petra'dalveze an adsavidigezh-se, hag hep kaout
amzer d'en em soñjal pell a-walc'h. Setu perak ez eus drouklaouene-
digezh ha zoken c'hwervoni e kalonoù darn, hag ivez didemall ha di-
garez gant darn all... Hogen...

Un diheñchadenn dister en deroù a zeu gant an amzer da vezañ ur gwall ziheñchadenn! Ur greizenn-studi, setu petra ez eo Landevenneg evit Bretoned ha na vuzuliont ket priz ha gwerzh ar bedenn. Hogen pa vo sellet ar selledoù n'eo ket se edo Breizh engortoz da gaout ha risklet e vo Landevenneg da gaout nebeut a bouez en Istor ar Vro, dre ma teuo mui-ouzh-mui da vezañ evel ur C'horf Estren.

Hep kaout c'hoant da ober kentañ da zer, e kav dimp e rafe vat Abati Landevenneg o prederiañ war skouer an TAD LOEIZ hon eus meneget e deroù ar pennad-mañ.

*

E pep keñver ez eus diaesterioù e Breizh, zoken (ha marteze dreist-holl !) e-keñver ar feiz. Ezhomm ez eus hep mar ebet - rak lod ez eo ar vanac'hiezh eus ar Relijion gristen-eus menec'h e Breizh. Met pa ne gav ket darn eus Vretoned yaouank e ra ar re all ar pezh emaint o c'hortoz, perak e chomont da glemm ha da zaoubenniñ ? Perak na rafe ket ar re a gav dezho bezañ galvet gant Doue, diouzh skouer an TAD LOEIZ ? Met tud distabil, berrboellik, froudennus ne zeuint ket a-benn a gement-se. Dav kaout tud kreñv o menerezh, soupl o spered, leun a vuhez speredel hag a garantez Doue hag a garantez evit o c'henvroiz; tud hag a vo prest da c'houzañv ha da stoum, ha n'eo ket bourc'hizion, na klemmicherion. Hag evit se n'eus ket ezhomm da vont er-maez eus an Iliz-Katolik.

KLERG

DIT HO
PAS GAC
VAP LIS

C. An Timeur

FROAZ S. GONERI-PLougoustant (1)

(1) Diaes a-walc'h ez eo entant an enskrivadur-se. Gant-se e rafemp anaoudek e-keñver an hini eus hol lennerion a ze-gaso sklerijenn dimp.

himm d'ar Werc'hez kuzunet en Neñv

Bannoù skodus an heol a ra deoc'h ur sae gran
Gant daouzek steredenn ho tal 'zo kuzunet
Al loar en he splannder 'zo skabell ho treid glan
A c'hloar c'hwi'zo karget.

Trec'het'c'h eus an Ifern, kerkoulz hag ar Maro
'Tal er C'hrist ezezet, c'hwi'selaou gant evazh
An Neñv hag an Douar ananet war un dro
Da veulif o Mestrez

Hogen an aerouant 'zalc'h da stignañ pechoù
D'ar vugale fiziet ennoc'h 'vit o difenn
Dre dreez, o Mamm vat, dispennit e ardoù
Torrit dezhañ e benn

Harpit ar gristenion a stoum evit ar Feiz
An deñved dianket o degasit d'o Bro
Destumit ar Bobloù gourvezet c'hoazh hep reizh
E skeud du ar Maro

Goulennit, o Gwerc'hez, pardon d'ar bec'herien
D'ar paour roit frealz, ha d'ar poaniour didorr
'Kreiz ar c'herreg treitour, bezit hor sklerijenn
O gwir Steredenn-Vor

Meuleudi hep ehan, meuleudi d'an Dreinded
A gurunas, Mari, ho tal kuñv ha dinamm
Hag a brovidas deomp, ennoc'h, Itron garet
Ur Rouanez, ur Vamm

Mabig EFLAMM

troet diwar Imm Laodez Gouel ar Werc'hez savet d'an Neñv:
"Solis, o Virgo, radiis amicta"
An imm-se a zo bet savet gant Vittorio Genovesi (1887-1967) S.I.
evel an daou imm all: Gousperoù kentañ ha Matinezoù.



Kapitalouriezh ha Sosialouriezh

1 BROIOU DIORREET HA BROIOU ISDIORREET

Daoust ma ra poblañs an Trede-Bed an div dredereenn eus poblañs an douar, ha daoust m'eo deuet ar Broioù isdiorreet, dreist-holl ebaoc ar brezel diwezhañ, da gaout pouez ha levezon war an dachenn bolitikel etrevroadel, e chom bepred Ekonomiezh ar bed dindan vali un nebeudig Stadoù galloudus na sav o poblañs nemet d'ar c'hard eus poblans an douar a-bezh. Ar broioù diorreet eo a ren war vuhez ekonomikel ar bed, ha dezho ez eo dleour an holl vroioù eus kement gwellaenn pe dost bet degaset war dachenn an deknikelezh. An Izelvroioù da skouer, pe Velgia, hag int poblet pep hini gant un 10 milion bennak a dud hepken a zo ganto nerzhioù ekonomikel hag ul levezon bolitikel dreist da re broioù isdiorreet dek gwech pobletoc'h eget evel Brazil pe Indonezia.

Abalamour d'o finvidigezhioù ha dre ma'z int frammet start meurbet o deus ar broioù emzispieget ul levezon dreist-muzul en ekonomiezh ar Bed. Met abegoù all a zo: en Europa ez eo bet diwanet ha krouet an Ekonomiezh hag ar Sevenadurezh a-vremañ hag ac'hano ez int bet en em ledet war ar peurrest eus ar Bed. Aet e oa al lañs e pep stumm gant ar broioù poblet gant Europiz war ar pobloù all, ha dre-se o deus bet gallet donet da vezañ mestr warno e-pad ur maread eus ar pouezusañ hag aozañ Ekonomiezh ar Bed diouzh o mad hag o interest o-unan.

Disheñvel-rik ez eo evelato frammedurioù ekonomikel ha kevredigezhel ar broioù diorreet: diouzh un tu emañ ar Stadoù Kapitalist, ha diouzh an tu all ar Stadoù Sosialist, ha kontrol a grenn ez eo o frammedur ekonomikel hag o folitikezh etrevroadel. Hogen ma seller ouzh ar pezh a dremen dre ar Bed a-bezh e verzer n'eo ket an enebiezh a zo etre ar broioù kapitalist hag ar broioù sosialist ar gudenn washañ ha grevusañ a eo, met an diforc'h krenn a zo etre ar Broioù Diorreet hag ar Broioù isdiorreet. Un Indezad marnaeoniek a laka en hevelep sac'h ar Stadoù-Unanet hag Unvaniezh ar Soviedoù, rak evitañ ez int o-div broioù pinvidik. Nebeut a dra ez eo e gwirionez ar renadur politikel ha kevredigezhel e-kichen an islonk a zo etre ar pobloù a vev hag ar re na c'hellont ket bevañ.

*

PERAK EMañ AN HOLL BINVIDIGEZHIOU DIOUZH UN TU HEPKEN ?

Ar broioù pinvidik a ya o stal war wellaat tra m'emañ hini ar broioù paour e riskl da washaat. Perak eta seurt aezamantoù diouzh un tu ha seurt diaesterioù diouzh an tu all ?

1) Abegoù Istorel : N'eo ket gwelloc'h dre vras ar perzhioù naturel ar broioù emzispieget eget er peurrest eus ar Bed. Gwan a-walc'h zoken ez eo darn anezho war ar poent-se evel Helvetia, an Izelvroioù, Norvegia. Mankout a ra dezho al lodenn vrasañ eus an danvezioù-diazez. Deuet int a-benn evelkent da sevel ur vuhez ekonomikel kreñv ha kempouez.

E tachennad an amzer digriz emañ an holl vroioù diorreet. Aes a-walc'h ez eo an douaroù eno da labourat; n'eus ket a gudennoù gant al laterit evel en Afrika. Gallout a ra bezañ memes tra disezamantoù pa vez re hir ar rannamzer yen evel e Kariada, ha pa vez re skeñv pe re zifrouezh an douar evel e Norz-Europa. Met tu a zo bet, n'eus forzh penaos, da ziskoulmañ ar c'hudenoù-se gant arao-kadenoù an ijinerezh ebaoc deroù an XIX-et kantved.

(Un nebeut broioù, hag int evelato e tachennad an temz-amzer digriz, evel Sina-an-Hanternoz n'int ket bet well eus an arao-kadenoù-se e-keñver an Ekonomiezh, hag a zo deuet da vezañ isdiorreet - ar pezh a vez kiriek da ziazamantoù niverus el Labour-Douar hag an Ijinerezh, ha dav ez eo stourm kalet d'o dizarbenn.)

Ar pinvidigezhioù naturel fonnus, dreist-holl ar glaou, an houarn, an eoul-meen, ar c'hoevr, an alumin o deus roet lañs d'an ijinerezh er broioù pinvidik; met kaout a reer ivez ar seurt pinvidigezhioù naturel, hag alies stankoc'h ha fonnusoc'h, er broioù paour evel Brazil pe Sina. Diskouez a ra kement-se ez eo ISTOREL ha n'eo ket DOUARONIEL abeg an diforc'h. Er broioù digriz o zanz-amzer ez eo bet lekaet an douaroù, ar menglaudioù, nerzh an douarioù, da dalvezout kalz abretoc'h hag en un doare gwelloc'h urzhiet hag efedusoc'h, eget en tachennadoù all.

Daoust hag e c'hellfe an diforc'h ekonomikel tennañ d'ar gouenoù-tud disheñvel ?

Mar lakaer Japan a gastez - isdiorreet eo e meur a geñver daoust d'e ijinerezh galloudus - e verzer ez eo poblet an holl vroioù diorreet gant Europiz! Tud'zo o deus lawaret eta e oa gwelloc'h Europiz evit labourat, krouiñ, ijinañ, kas an traoù en-dro, ren, eget ar gouenoù all. Met faos ez eo kement-se, rak broioù isdiorreet a zo ivez en Europa : Portugal, Spagn, Su-Italia, Breizh, Iwerzhon, Albania, Gres, pe e Su-Amerika wenn: Chili, Arc'hantina.

Quzhpenn-se a zo: mar bije bet barregezh-dreist Europiz en abeg kentañ eus an displegadur, an diorredur a-vremañ, e vije bet kroget an diforc'h kalz abretoc'h: adalek kantvedoù kentañ an Istor. E Broioù ar Retar avat, eo bet ganet ar sevenadurioù kentañ ha n'eo ket en Europa hag e oa gouez betek an X-et kantved kent H.S. Na grogas dreist-veli Europiz war dachenn an Ekonomiezh nemet er XVI-et kantved, ha dreist-holl en XIX-et. Sina, Indez, ar Broioù Muzulman eo a oa er penn evit pezh a sell an teknikoù hag an Ekonomiezh ken na oa bet dizoloet Amerika. Añ broioù hag a enver bremañ Broioù Isdiorrest o deus bet - ha darn anezho n'eus ket pell c'hoazh - mareadoù a sevenaderezh uhel ha tizhet o deus ur bazenn dreist da hini Europa e-keñver micherioù, stad ar gevredigezh, ha buhez ekonomikel.

An dilerc'hiadur a vremañ n'en deus mann ebet da welout eta gant un dizingalder bennak etre ar gouennoù. Ret klask en Istor abegou an diforc'h etre Broioù diorrest ha broioù isdiorrest.

2) Labour ar Vourc'hizien, na oa anezhe nemet en Europa

E Bro-Saoz e krogas e diwezh an XVIII-vet kantved ar c'hresk ekonomikel hag a zo hini an holl vroioù diorrest. Perak eo bet ganet e Bro-Saoz REVEULZI VRAS AN IJINEREZH ? Al labour-douar ne oa ket dreist hini ar broioù all. Ne oa ket Bro-Saoz ar vro gentañ nag ar vro nemeti o tennañ glaou eus kondounioù an douar. Nann, met e Bro-Saoz, evel diwezhatoc'h e Kornog-Europa ha Norz-Amerika, e oa ur bagad-tud troet o spered etrezek an traoù navez. Paotred-araok e oant! Fellout a rae dezho tennañ ar muiañ ar gwellañ a c'honid eus ar c'hoazh vadennoù hag an ijinadennoù teknikel evit rozellat arc'hant. Ar baotred kas war-raok-se a oa o youl produiñ madoù muioù-h-mui ha gwelloc'h-gwellañ, krouiñ ur bed ekonomikel dizalc'h, er-meez eus al lezennoù kozh, en em binvidikast dizehan, rak hervez o menozioù relijiel protestant e oa ar binvidigezh ur merk eus bennozh Doue war o labour ! Ar vourc'hizien-se eo o deus roet al lusk kentañ d'ar Reveulzi war dachenn an Ijinererezh ha digoret an hent d'ar kapitalouriezh a-vremañ.

Ha petra'zo bet tremenet er broioù dilerc'hiet ? N'eus bet biskoazh enno a wir vourc'hizien dre ma chomas reut ha difiñv frammadurioù ar gevredigezh kozh, frammadurioù hag a oa dishefvel war ar marc'had diouzh reoù Europa. Kement-se koulskoude ne vizes ket ouzh an Impalaeriezh vuzulmat da skouer, da gas en-dro ur c'henwerzh strevroadel galloudus, met ar varc'hadourion vras-se a yeas d'en em veskiñ, d'en em goll a-

touez en noblañsoù, ar vrientinion e-lec'h sevel tamm-ha-tamm etre-ze ur renkad bourc'hizien binvidik oberiant ha bev-buhezek. Ret eo lavarout ivez ne oar ket mat an istorourion evit pe abegoù don n'o deus ket gallet Broioù an Trede-Bed lakaat da dalvezout ar galloudegezhioù a oa kuzhet enno, tra ma toud bann pobloù ar C'hornog da dennañ ampled buan-ha-buan eus o finvidigezhioù o-unan.

An diouer-se a renkad-etre a harzas ouzh kalz a bobloù da vont war-raok, daoust d'o sevenadur hengounel uhel. Kouezheñ a reas ar broioù-se, al lodenn vrasañ anezho, etre krabanoù Europiz pa 'z eas bourc'hizien hardizh ha youlek ar C'hornog da sevel trevadennoù en Amerika **tetin**, en Azia hag en Afrika, en ur astenn evel-se o c'hapitalistiezh dre ar bed a-bezh.

II

KAPITALOURIEZH HA SOSIALOURIEZH OC'H EMDREIÑ, O KEMMAÑ

Abaoe hanter-kant vloaz, abaoe ar c'houlz ma voe savet an doare-gouarn socialist evit ar wech kentañ e 1917, en ur vro hepken da c'hortoz ma vije savet en un dek bennak a zemkratalezhioù -pobl goude 1945, ez eo bet kemmet da vat ar politikerezh strevroadel. Er Stadoù kapitalist emañ ar binviji-produiñ (douaroù, men-gleuzioù, labouradegoù, ardivinkoù, bankoù, arc'hant) etre daouarn tud prevez: perc'henniezh prevez. Er Stadoù socialist emaint etre daouarn ar gouarnamant: perc'henniezh kumun. Renet e vez an Ekonomiezh er sistem kapitalist gant intrudu hag emziberezh an dud prevez; ar re-mañ a glask dreist-holl an doareoù gwellañ da c'honit arc'hant ha da gargañ o yalc'h o-unan. Gant ar Stad, ar Gouarnamant eo e vez renet an Ekonomiezh er sistem socialist, diouzh ezhommoù ar bobl a-bezh, sañset, met alies evit gwir, hervez ezhommoù ar Stad tra ma'z ankounac'haer ezhommoù ar bobl! Setu emañ evit ma vo aesoc'h keñveriañ an daou sistem-se un toullad munudoù.

BROIOÙ KAPITALOUR :

- a) Prevez eo an Ekonomiezh b) Perc'hennet ez eo an darnvuiañ eus ar binviji-produiñ gant tud pe gevredadoù prevez (douaroù, ardivinkoù, tiez-bank, men-gleuzioù, labouradegoù hag all)
- k) al lodenn vrasañ eus ar c'hapital a zo perc'hennet gant tud pe gevredadoù prevez, hag implijet hervez o divizoù hag o interez dezho o-unan.
- d) kevezerezh dishual hag embregerezh dieub eo a zo lusk d'an Ekonomiezh.
- e) N'eo ket gant ar Gouarnamant pe ministrerezh ar raktresoù eo a vez urzhiet an Ekonomiezh, met gant tud prevez, pep den pe bep kom-

pagnuneh o tivizout ar pezh a gavont argwellañ evit interrest o labour hag o c'hoñvers, hep derc'hel kont nemeur eus interest ar re all, kement ha ken bihan ma ne glet ket atav etrezo an divizadurioù ha ma sav heligentañ-helibini. Ha kement-se eo a zo sañset da gas an Ekonomiezh war-raok.

f) Pep embregerezh eta a zo sañset dizalc'h; gallout a ra aozañ e labour hag e frammadur hervez e c'hoant, produiñ ar pezh a gar, d'ar c'houlz ma kar, el lec'h ma kar, hag hervez e zoareoù dezhañ e-unan.

g) Setu perak e produer ar marc'hadourezhioù a vez ar muiañ a glask warno, ar re a zegas ar gonidoù bresañ. N'eo ket dalc'hmat ar re dalvoudusañ, ar re a servij ar muiañ eo a broder, met ar re a blij d'ar brenerien (ha gant ar bruderezh ec'h ouzer livañ an traoù ha lakaat an dud d'o c'hoantaat !); hag an dibab graet gant ar brenerien, an arvalien o-unan a ziskouez a-walc'h petra da broduiñ ar muiañ ha petra paouez da broduiñ; diouzh ar goulenn emañ ar c'hoñvers-marc'hadourezh.

h) troioù-distroioù ar marc'had eo a ra ar c'hempouez etre ar c'hinaig hag ar goulenn. Diaes-tre ez eo tizhout ar c'hempouez-se: alies-kenañ e c'hoarvez gwall-varradoù is-produiñ.

i) Gwellaet e vez ar produadurioù, hag izelaet o frizioù gant efed ar c'heveziñ. Hemañ eo a zo sañset da skarzhañ kuiñ an embregerezhioù na vezont ket barrek da zerc'hel penn.

j) Pa ne da ket mat an traoù gant un embregerezh bennak e ra freuzh-stal hag e steuz kuit. Ur " c'hastiz " ekonomikel ez eo eta, hag a ra tu neuze da renkañ an embregerezhioù hervez o zalvoudegezh.

1) Ur perzh bras o deus an obererezhioù-a-gofvers er sistem-se diazezet war an donemoneañ eus kinnigoù a bep seurt hag eus goulennnoù niverueoc'h c'hoazh. Kas-degas ar produadurioù, o lodennañ, o gwerzhañ setu labour evit un niver bras a dud hag a gompagnunehioù.

2) ER BROIOU SOSIALIS: a) Kenberc'hennet ez eo an Ekonomiezh hogozik en he fezh b) An holl vinvi-ji-produiñ pe dost a zo d'ar Stad, en he c'harg, sañset, merrañ madoù ar Bobl ha difenn hec'h interestoù k) D'ar Stad ivez ez eo ar bankoù, ar gonid diwar an holl embregerezhioù, hag hi hepken a ziviz pelec'h ha penaos lakaat an arc'hant da dalvezout d) Raktreset eo an Ekonomiezh. N'eus ket a gevezerezh nag a embregerezh dishual. e) Kreizannet ez eo an Ekonomiezh; un nabeut aozadurioù a-berzh-stad hepken a zo karget da zivizout diwar-benn ar palioù da dizhout.

f) savet e vez ur raktres gant an ensavadurioù-stad, evit reiñ ur garg, un dachenn resis da bep embregerezh. Merkañ a ra ar raktres ar pezh a rank bezañ produet, pelec'h, pegoulz ha penaos.

g) Lakañ a ra ar Stad d'ar produadurioù a seblant dezhi bezañ ar re dalvoudusañ, ar re muiañ-preset, ar re a zo ar muiañ ezhomm anezho evit ar Bobl a-bezh hag hec'h amzer-da-zont. Met evit pezh a sell ouzh madoù 'zo c'hoantaet gant ar boblañs e chom ar produerezh izelloc'h eget ar goulenn. Alese gwall-varradoù is-produiñ.

h) Troioù-distroioù ar raktresadur eo a ra ar c'hempouez etre holl lodennoù ar vuhez ekonomikel. Diaes-tre avat, ez eo tizhout ar c'hempouez-se: alies-kenañ e c'hoarvez gwall-varradoù is-produiñ; alies ivez e vez dilerc'h gant ar produerezh.

i) N'eus ket a gevezerezh. Ar Stad eo a verk reolennoù ar produerezh, derez parzhioù ar produadurioù (na vez ket tizhet dalc'hmat) priz ar marc'hadourezhioù, kementad ar produerezh, ha goprou al labourerion.

j) Pa'z a fall an traoù war un dachenn bennak eus an Ekonomiezh ne c'hell ket c'hoarvezout a freuzh-stal peogwir ez eo kenberc'hennet an Ekonomiezh a-bezh. Alese avat, diaesterioù grevus er veradurezh. Pa ne c'hell ket en em gaout " kastizoù " ekonomikel evit renkañ an embregerezhioù hervez o zalvoudegezh, e renker implijout " kastizoù " politikel.

1) Dister a-walc'h ez eo lod an oberioù-a-gofvers. Kaset-degaset, lodennet ha gwerzhet e vez ul lodenn vat eus ar produadurioù en un niver bihan a c'houstaloù-stad.

Bras-tre eo eta an disheñvelled etre an daou sistem ekonomikel-se. Met bras ez int dreist-holl evit pezh a sell ar gelennadurezh ez int diazezet warni. Rak ma seller ouzh ar pezh a zo bet sevenet e weler ez eo bet luziet a-walc'h emziaslegadur an daou sistem-se hag heñvel an eil hag egile. E-pad ur mare e voe tu da gredif e ree ar broioù socialist, daoust d'o disheñvalderioù, ur gumuniezh start hag o diforc'he diouzh ar peurrest eus ar bed. Met bremañ emañ an traoù o kemmañ. An enebiezh etre Sina ha Rusia ha deus torret ar c'hevre. An Demokratelzhioù-pobl a glask gonit o earenezh a-keñver Rusia: sellit ouzh Roumania, Yougoslavia, hag e miz Eost 1968, er bloaz-mañ eta, afer Tchekoslovakia: Tchekoslovakia o klask krouiñ ur socialistiezh d'he grad, hogen minellet gant tankoù Rusia. Anet eo ez eus er bed a-vremañ meur a stumm socialistiezh ken disheñvel an eil diouzh ar re all ha ma'z eo ar renadurioù kapitalist etrezo. N'eus nemet nemegun daoue-sosialistiezh ar Sovia-

hini Pekin, hini Castro, hini Nasser, nihi ar Senagal(!!), hini Kongo-Brazza, hini Skandinavia evit gwelout pegen dispis ez eo deuet da vezañ an ideologiezh-se.

E-touez ar broioù socialist e kavomp broioù diorreet ha broioù isdiorreet. E-touez ar re-mañ ez eus darn hag a heuilh sosialouriezh Mark ha Lenin: n'o deus ket gallet en em dennañ eus o stad a isdiorreter. Darn all a ra gant ur sosialouriezh denel, hep lakaat an hollzanvezouriezh da ziazéz: Genegal, Tan- ganika h.a.. En hevelep enkadenn emaint.

A-benn ar fin an disheñvelled a zo etre framadurioù ar gapitalouriezh ha re ar sosialouriezh ne vez merzet fraezh er fedoù, nemet er broioù isdiorreter. Er broioù all emañ an doareoù-labour, an doareoù-bevañ hag an ensavadurioù o tostaat an eil ouzh eben. Enebiezh ha kontroliezh a zo etre an div dezenn etre an div ideologiezh, met er vuhez wirion, war dachenn an Ekonomiezh ez eus kalz nebeutoc'h. Rak er broioù socialist evel er broioù kapitalist e renker c'hoari gant an teknikoù nevez, heñvel e pep lec'h, en holl Stadoù. Luzietoc'h-luzietañ emañ an emroadurioù enno hag e kasont etrezek an hevelep pal.

AR PEZH A DREMEN E GWIRIONEZ EN DAOU SISTEM

En URSS ne seblant ket ar raktresadur mont en-dro en un doare reizh ha kempñezet-mat. El labour-douar n'eo ket fram-met-mat nag urzhiet-mat pep tra: un tamm brav eus ar produerezh a zeu eus an atantoù prevez hag ul lodenn vat eus an eostoù a vez gwerzhet war ur marc'had dieub gant ar broduerien d'ar brenerien, anezho tud prevez pe strolladoù-kenoberiañ koulz produerien evel prenerien. Ouzhpenn-se, war zigreizennañ ez ar vuhez ekonomikel. Savet ez eus bet en URSS 106 rannvro ekonomikel anvet " sovnarkhoz-où ". Komzet ez eus bet eus sevel sozadurioù-merañ da gas ar marc'had en-dro un tamm-vel ma vez en Ekonomiezh kapitalist, evit rediañ an embregerezhioù da wellaat o doareoù-labourat ha kreskiñ ar gonidoù. E labouradegoù'zo emeur krog bremañ da lodennañ etre ar vicherourien un tamm eus gonidoù an uzin, en tu honn d'o gopr miziek; ha ma kar ar re-mañ e c'hellont fiziout an arc'hant-se el labouradeg evit kreskiñ o bern. Kement-se a zo doareoù kapitalist-rik, evel ma ra FORD er Stadoù-Unanet, hag evel ma klaskfe ober de Gaulle, a-hervez, e Bro-C'hall.

E framadurioù ar broioù kapitalour diorreter ez eo bet graet avat ar c'hemadennoù donañ hag aroueziusañ. Strishaet

da vat ez eo bet tachenn an embregerezh dishual hag ar c'hevezerezh frank, o vezañ ma teu ar Gouarnamant da astenn e vali muioc'h-mui war dachenn an Ekonomiezh ha buhez ar Gevredigezh. Ar Stad eo a verk ul lodenn vat eus prizioù an traoù, eus ar goprioù; ha dre an traoù hag an taosoù e pouez war ar marc'hadoù e diabarzh ar vro. Ren a ra war an sozadurioù o sellout ouzh ar yec'hed hag ouzh an deskadurezh. Sevel a ra raktresoù - gweñnoc'h ha souploc'h evit er broioù socialist - evit heñcheañ an Ekonomiezh. Reñ a ra arc'hant, war-eeun pe dre hanterouriezh, evit tachennañ'zo eus ar vuhez ekonomikel. Laka a ra da rannvroioù'zo da ziorren; paou-raat ha diboblañ a ra re all, hervez choaz ha dibab he raktresourien. Abaoe pell'zo ez eo mestr war ar c'hanwarzh diaveez, hag an eskemmoù-arc'hant strevroadel. Perc'henn ez eo zoken a-wechoù war embregerezhioù galloudus: e Bro-C'hall ez eo bet kemeret gant ar gouarnamant ar mengleuzioù-glaou, an trenioù, al labouradegoù-gaz, an tredan, an uzinoù Renault, an uzinoù atomek, un nebeut tiez-bank. E Breizh-Veur ar vedesined a zo tud e-karg dindan ar gouarnamant.

Ouzh ar Stad ec'h aparchant ivez bremañ ober war-dro an dispignoù evit an isframañ (infrastrukturiù): hentoù, porzhioù-mor; sikour a ra an embregerezhioù a vez e riskl da vont d'an traoù, betek o fremañ zoken war he c'hont. Unan eus ar broduerien gentañ eo, hag ar praktik kentañ evit an embregerezhioù prevez, zoken er Stadoù-Unanet. N'eo ken reolenn ar c'hinnig hag ar goulenn eo a ro lusk d'an oberiañ ekonomikel, met divizoù ar Stad, he fre-nadennoù (armoù, ardivinkoù a bep seurt), produerezh ha labouradegoù, ha palioù he raktresoù.

Setu perak n'eus ket bet a wall-varrad bras a re-brodiñ abaoe tregont vloaz'zo. E lec'h ar gwall-varradoù re-brodiñ hag a rae o reuz bep ar mare a-raok 1939 en holl vroioù kapitalour, ne c'houzañver ken bremañ nemet mareadoù-argilañ kalz dic'hrevusoc'h, ha na waskont nebeut un nebeut kevrennoù eus an Ekonomiezh, e Stadoù'zo, ha c'hoazh e-pad un taolad berr a-walc'h.

DISEÑVELDER ETRE KAPITALOURIEZH HA SOSIALOURIEZH E-KENVER LEVEZON

Ranket o deus eta ar broioù kapitalour koulz hag ar broioù sosialour en em ober diouzh gwirvoudoù ha na glotont ket gant o c'halennadurezh. Diskouez a ra an emroadurioù-se n'eus ket a gontroliezh klok ha laun etre an daou sistem ekonomikel-se. Heñvelderioù bras a gaver zoken etrezo, dreist-holl pe geñverier o stal ouzh hini ar broioù dilerc'hiet hag isdiorreter.

War ur poent koude-koude ez eus un diforc'h bras etrezo: evit pezh a sell ouzh o levezon an Ekonomiezh etrevroadel. Ur renk kalz distroc'h eget hini ar broioù kapitalour diorreet a zalc'h ar broioù sosialour diorreet, daoust d'o galloud teknikel ha d'o levezon bolitikel. Echu eo amzer an trevadennoù gant broioù ar C'hornog pe dost, ha n'eo ket eno neuze e ranker pelloc'h klask an abeg eus o galloud; nann, met war ar marc'hallac'h etrevroadel, war ar broioù paour emañ ar c'hevredadoù bras oc'h ober o renkoù : mestr ez int war an tachennoù-se ha setu end-eeun ar pezh a anver an " trevadenniñ giz nevez " :

Emañ ar C'hompagnuezhioù Meur o ren war ar C'henwerzh etrevroadel !

Abaoe deroù an XX-et kantved e teu tamm ha tamm an Ekonomiezh da vezañ kreiznet ha da vont dindan darn un toulladig kompagnuezhioù bras. Betek 1919 n'o devoa ket ar re-mañ astennet o levezon en diavaez eus herzoù o bro. Bremañ avat e ren an trustoù meur war broduadurioù zo an un niver vat a vroioù, ha war ar n'henwerzh etrevroadel. Ar " C'hartelioù " a zo emglevioù skoulmet etre trustoù bras evit mirout dezho o-unan e pennañ kevrennoù eus Ekonomiezh ar bed ar produiñ hag ar gwerzhañ.

Kalz a zanvezennoù a zo kontrollet ar werzh anezho gant ur gompagnuezh vras, pe gant ur c'hartel etre kevredadoù galloudus. Dreist-holl an danvezioù pennañ pe traoù-ar-bevañs hag a vez graet gante kenwerzh etrevroadel. Renet e vez marc'had ar c'houevr, ar plom, ar zink, an aluminiou, an nikel ha metaloù all gant un nebeut kevredadoù bras, an darn-vuiañ anezhe amerikan.

Hervez ar gwazhennadoù hag an doareoù-produiñ e c'hellfe priz ar metal-mañ-metal produet-ha-tout bezañ disheñvel-bras. Setu perak en em glev etreze ar c'hevredadoù evit chom hep kevezañ war-eeun an eil ouzh egile, dre lodennañ etreze ar werzhadeg, ha dre verkañ ur priz-gwerzhañ kumun hervez priz klok uhelañ ar produiñ. En doare-se ne c'hell kompagnuezh ebet labourer war goll, hag ar re o deus ar c'hafes da vezañ perc'henn war ar gwazhennadoù sezetañ ha digoustusañ a ra gonidoù ramzel.

Unan eus ar skouerioù gwellañ eo hini " Kartel Etrevroadel an Tirezoul " hag a vod an 8 kompagnuezh kreñvañ : 5 Amerikan (Standard Oil of New-Jersey anvet ESSO, perc'hennet gant Rockefeller; Standard Oil of California; Socony Vacuum Oil Company MOBILIL; Gulf Oil Company; Texas Oil Company), 2 zenet gant Saozon (Royal Dutch SHELL, ha British Petroleum anvet BP)

hag an hini vihanañ renet gant Galloued (Compagnie Française des Petroles anvet CFP pe " TOTAL ").

lakaat
En em glevet ez int holl evit priz-gwerzhañ an tireoul hervez priz-produiñ klok ar petrol e Teksas. Eno ne vez tannet eus pep puñs nemet 600 tonennad ar bloaz. Met e broioù ar Retar (Arabia, Irak, Iran) e vez tannet etre 700 hag 800 tonennad bedeiz. Da lavarout eo e paomp-ni an tireoul 400 gwech ar pezh a dalvez e gwirionez, hep kontañ an telloù a laka ar Gouarnamant gall war-benn! N'eo ket diaes kompren pebezh gonidoù ramzel a c'hell ober ar c'hevredadoù-se, daoust dezho da ruif an hanter da c'houarnamantoù ar broioù e-lec'h ma tennont o eoul-maen.

Tu a zo da venegiñ ivez an trust Saoz-Hollandat INILEVER (anavezet dindan ar merkoù PERSIL, SUNIL, ASTRA, EOL CALVE h.a.) hag a zo trust hollvedel an danvezioù druz (skouerioù trovanel) hag a ren ivez war ul lodenn vras eus marc'had ar c'hakad. Mene-gomp ivez trust kreñvañ an Dir er Stadoù-Unanet, UNITED STEEL COMPANY, hag a brodu e-unan bep bloaz, 23 Milion a donennadoù-dir - da lavarout eo muioc'h eget Bro-C'hall a-bezh- hag a zo perc'henn war vengleuzioù-houarn en Amerika, Azia hag Afrika. An div gompagnuezh kreñvañ evit ar sevel kirri-tan, GENERAL MOTORS ha FORD (an 3/4 eus ar c'hirri-tan amerikan etreze o-diva zo perc'henn en diavaez eus ar Stadoù-Unanet, war adetalioù galloudus, dreist-holl e Kanada, Breizh-Veur, Alamagn ar C'hornog ha Bro-C'hall. Arc'hantroll pe wdjed bloaziek ar GENERAL MOTORS a zo ken uhel hag hini ar Stad C'hall !

* * *

Kompren e reer aes-tre pegement a c'haou a c'hall ober penn-aotronezh ar Stadoù hag hini ar C'hevredadoù Bras ouzh porsow-lazh an dud, ouzh gwirioù-den hag ouzh o gwirioù-pobl, ouzh o ezhommoù a gorf hag a spared. Pa gomzer eus mac'homerezh hon eus aze ur skouer anezhañ. An den a soñj gantañ bezañ en e frankiz goude n'eus nemet gwaskerezh. Heñvel ez eo ivez evit ar broioù bihan evel hon hini, fontet gant ar renadur gall. War ar poent-se e c'hellomp lakaat er memes kevre ur wach c'hoazh ar broioù kapitalour hag ar broioù sosialour.

Yann XXIII a skrive e PACEM IN TERRIS : " Ar mad kumun a c'houlenn digant ar gouarnamantoù ren ur politikerezh deraet, o terc'hel kont eus skeulid ar madoù gwellañ, hag o tiwall gant preder da lezel ar c'horf hag an ens hep ar bevañs o deus ezhomm " "...Mar degouezh d'ar gouarnamantoù dianzav gwirioù mab-den, pe mont a-enep dezho, na reont ket dever o c'harg - ha muioc'h'zo - n'o devez o urzhioù neuze gwir dalvoudagezh ebet ".

Yann TALBOT.

GWINIZH

Da guzhet em boa, da Gala-Goañv
 E gwasked an Euz
 En douar-se prientet evidout
 Gant kement a breder.
 N'out ket bet trubard d'am Spi
 Tro-pad nav miz ac'h eus poaniet !
 Glec'hiañ. Kellideañ. Diwan.
 Kefiañ. Garenniañ. Koeñviañ.
 Disac'hañ. Bleuniañ.
 Bouediañ. Dareviañ.
 'Vit dont da vezañ
 Ar pezh m'eo tonket dit bezañ
 Promesa bara !

Emarut aze ledet war leurenn ar c'hriognol
 E klod da noazhded alaouret
 Digoc'hennet eus da bell ha da blouz
 Gant tizh ar rodoù-dir didruez,
 E-kreiz tourni ha poultrenn

Ha n'eo ket echu da galvar!
 Emañ brasoù ar vilin ouzh da c'hortoz
 Emañ gwrez ar forn ouzh da c'hortoz
 Pa vezi dimezet d'an dour
 ha d'an holen.

GWINIZHENN aour,
 he flanedenn kaer ha kriz
 Magerez Mah-Den
 Ha danvez Ostiv,
 Salud dit ha klod da viken !

Amen.

9.9.1968.
 A. DUVAL



Notennoùigoù

1. BARR-HEOL a zo ennañ en dro-mañ un toulladig pennadoù hirik, met o vezañ n'emañ ar c'hustum gantañ d'hen ober e vo hep mar ebet digarezet gant e lennerion. Darn eus ar pennadoù-se avat, a vo ret o lenn marteze gant ur blenn en dorn, ispisial studiadenn Yann Talbot war ar Gopitalouriezh hag ar Sosialouriezh: diazez evit displegadennoù all e vo avat ar studiadenn-mañ hag a vo embannet gant MOUEZH-SANT ERWAN.
2. An TITLOU hag an TRESADENNOU a zo bet graet gant Tonig an Timeur, bennozh Doue dezhañ.
3. Prezegenn an Aotrou F.Thomas en Oferenn ar C'HENDALC'H KELTIEK hag a oa da vezañ moulet amañ, hñ eus ranket he lezel a-gostez dre ziouer a lec'h.
4. Spi hon eus da embann dizale Eñvorennoù Bugaleaj ha Yaouankiz hor c'henañ Ernest Barzig hag ivez Eñvorennoù-Brezel (mar plij) Anjela I vall
5. An dibenn eus "A-hed en deizioù" eñvorennoù-prizoniad an Ao. M.Barz a zo manet en dro-mañ, dre ma da re ziaes lenn un toullad anvioù-lec'hioù germanek. Lakaet e vo kerkent ha vo bet kavet un den krak e sell da adskriveñ evidomp an div pe deir bajenn a zo c'hoazh da embann.
6. Un nebeudig skouerennoù eus OFERENN AR C'HENDALC'H KELTIEK a zo e gwerzh e "Krec'h-Avel, Barr-Heol, Lannuon" Priz 1,50. An iliz hag a zo he skeudenn war ar golo ez eo hini Vartallod (Bro-Dreger)
7. Re nebeut a lizhiri a resevomp o venegañ alioù ha kinnigoù hol lennerion. Tu a vefe koulskoude da skignañ keleier ha menozioù nevez. Pep tra avat (ur reolenn-dir e vo hiviziken) a vo moulet er yezh peurunvan. N'hon eus tamm aon ebet da glevout rebechoù gant ma vint pozitivel ha konstruktivel.
8. Kement tra a sell ouzh mererezh BARR-HEOL: koumanantoù ha profoù, ha kement a sell ouzh Embennadurioù Barr-Heol: Otello, Seurez Kerwenan, Ofisoù, a zo da vezañ kaset war-eeun da Lannuon: Krec'h-Avel. Gwez: a. Jec'hma ne vezit ket servijet er vat oc'h ober a-hend-all ! Barr-Heol, Krec'h Avel, 22 Lannuon, K.R.P. 245 453 Roazhon.
9. Ur c'helvedenn d'ar re yaouank: an hini yaouankañ eus kenlabourerion V.H. a zo tremen 25 bloaz. Deuit eta, tud yaouank da greskiñ skouadenn ho kelaouenn. Degemer mat a vo graet deoc'h ha skoazellet e vout da beurzeskiñ ho yezh, deoc'h da gemerout an dorn diwezhatoc'h !

An Diskouezadeg Etre- vroadel e Krec'h-ar-Roue (Kanada) ebrel-herc 1967

D'an eizhvet warn-ugent a viz Here 1967 e serras dorioù an Diskouezadeg Etrevroadel dalc'het e Krec'h-ar-Roue, Bro-Gebek, Kanada. Niveret ez eus bet tremen hanter-kant milion a antreadennoù e-doug ar c'hwec'h mizvezh ma'z eo padet. Deizioù a veze, en em gave war al lec'h pemp kant mil a weladennerion war un dro.

OC'H AUZAÑ AL LEC'H

Lec'hist-dispar e oa an diskouezadeg-se war ziv enezenn e-kreiz ar Stêr Sant-Laorañs. Eno ne oa kent nemet un hanter enezenn, an daou damm anezhi anvet unan " Enez Santez-Elena ", egile an " Enez-Krenn ". En ur ober dek miz e voe diframmet ha ravenellet diouzh naoz ar stêr vras c'hwec'h milion eizh kant pemp mil warn-ugent a donennadoù douar, bili ha reier. Gante e voe graet tro-dro d'an enezennoù mogerioù-kreñv eizh mil daou c'hant metrad hed dezhe, hag en o diabarzh mogerioù all c'hwec'h kilometrad hed dezhe. Goude-se e voe peurgaret an enezennoù nevez gant tremen eizh milion a donennadoù mein ha douar degaset noz-deiz e-pad dek miz, gant kirri-samm ha tumporelloù-dre-dan. E dibenn miz Mezheven 1964 e oa peurc'hraet al labour divent-se: un dachenn a vil devezh-arat, war vete nebeut, ran- net etre div enezenn nevez. Unan anezhe a viras an anv kozh a " Santez-Elena ", eben nevez-difluket holl eus an dour a voe badezet " Enez en Itron-Variaa ".

D VONT D'AN DACHENN NEVEZ

Unan eus ar pontoù hirañ a zo er bed, Pont Jakez-Karter, a dreuz ar Sant-Laorañs. Tremen a rae a-us da Enez Santez-Elena gozh. Diwar ar c'hreiz anezhañ un hent-diskenn a yae d'an enezig-se. Re nebeut e oa anezhañ avat evit kas al labourioù da benn, ha dreist-holl evit an darempred da zonet. Rak-se e voe savet ur

pont nevez da esaat monet eus kêr da enezennoù an " Expo 1967 " evel ma raed eus an Diskouezadeg. Triwec'h miz e voed o c'horren dreist da zourioù ar stêr, ar pont nevez-se hag a zo dezhañ seizh kant metrad hed hag eizh metrad warn-ugent a led.

Ouzhpenn-se, touillet e voe garanoù, ul lav hanter a hirder dezhe, dindan ar Sant-Laorañs, evit an traen isdouarat (lesanvet " metro " diwar skouer hini Pariz), d'an dud da dizhout diboan-kaer an enezennoù nevez-krouet diwar zaou ribl ar stêr vras.

Aozet e voe e beg-reter an Enez-Krenn ur pozh evit degemer bagoù-pourmen lorc'hek an dud pinvidik a oa gwell gante ober o hent war-da Krec'h-ar-Roue dre al Lennoù-Meur pe dre vor. En e kevont dek kae da stagañ o bos hag a bep seurt aesterioù evel linannoù - tredan ha pellgomz a veze koublet war vinvioù o bourzh. Ha setu ma ve- vent war an dour a-gevret gant o ziegezhioù, tost d'o flijadur. Pa vanke tra pe dra dezhe e pellgomzent hag e veze degaset eus kêr kement pourvezadur o devoa c'hoant da gacut. En o zouez e oa tud hag a rene o stalioù-labour pe o c'hompagnunezhioù dre ballgomzer diwar vourzh o listri.

*

E-kreiz o enezennoù o-unan e oa bet lezet lennoù bihan ha ka- nolioù ma neuñv dreize skafioù-poumen a bep seurt stumm, tost pe zisto: gondolennoù, drakkarioù-Vikinged, kandoù Indianed hag all. An hini en devoa c'hoant da vageal, e c'helle bezañ disorc'hennet evit un toullad gwenneien. Bageal a raed ivez war ar Sant-Laorañs, a-hed an Diskouezadeg, war vourzh un " Hovercraft ", un doare bag kaset war-raok evel un dournijerez gant un droellenn hag he lakae da sevel a-rez da c'horre an dour pan he devez e kemeret herr a-walc'h.

Aes e oa eta monet da dachenn an Diskouezadeg peneogwir ho poa da zibab etre monet :

- Dre zour gant ho pag pe war vourzh listri-boutin hag ho treuzporzhic war ribl-kreistsiz ar Sant-Laorañs d'ar pozh aozet e beg an " Enez-Krenn ".
- Dre ar metro pe dre daksi, betek Enez Santez-Elena.
- Dre girri-boutin kêr.
- Gant ho karr-dre-dan.

Evit an daou zoare-beajañ diwezhañ-mañ e oa bet prientet meur a baouezva-kirri e kêr ha dreist-holl div dachenn-girri bras-easton, unan war ribl-Su ar Stêr Sant-Laorañs, plas warni da eizh mil seizh kant karr prevez, eben war ar ribl-hanternoz, plas warni da unnek mil c'hwec'h kant karr prevez ha da c'hwec'h kant karr-boutin !

Nepell diouzh an dachenn-mañ edo brasañ antre an Diskouezadeg.

Eno en em gavec'h war ur pezh leur anvet " Al Laurenn-degemer ", frankiz warni da dri c'hant mil a dud. Ur wech degouezhet eno, n'eo poa ken neuze nemet kemer an " Expo-Express ", un traen dre dreden hag ho kaset da greiz an " Expo ". Hañval e oa bagoniou an traen-mañ ouzh re ar metro, hogen ne oa den ouzh e vleniañ. Ur mekanik elektronek eo hen lakae da vonet war-raok pe da bouez a-hed kasoù an " harpoù " (gouez da Gerneviz). E c'hellit krediñ, ober a rae berzh an " Expo-Express ", rak, en tu-hont ma oa aezet, ne gouate netra monet ennañ.

Ha c'hwil erruet el lec'h ho poa dibabet, mar felle dehc'h ober ar sell-tro war al lodenn-mañ-lodenn eus an Diskouezadeg e pignec'h en un traenig bihan all e raed ar " minirail " anezhañ. Ruilhal a rae hemañ war ur roudenn hepken douget, un dek metrad bennak a-us d'an douar, gant pikoloù peulioù-dir. D'an dud vac'hagnet pe gabac'h e oa kinniget ivez un traenig war rodoù hañval ouzh re ar c'hirri-dre-dan ha sachet gant ur stlejezig-dre-dan a-hed hentoù an enezennoù.

Ar re a felle dezhe gwelout tachenn an Diskouezadeg a-bezh an ur sellad, a veze pourmenet en oabl gant un askell-dro a-us d'an tinelloù hag a-us d'ar stêr.

AN AEZAMANTOÙ

Ne oa ket bet ankouset aezamant ar weladennerien. Gouest e oa ar salioù-debrif " broadel " hag an tiz-debrif strewet dre an enezennoù da reiñ o fred da dri mil den warn-ugent war un dro. Ouzhpenn-se, ur bern " snack-barioù " a werzhe berr-bredoù (Lunches) giz amerikan. Amañ hag a-hont e oa bet renket pevez c'hant ingalerezh evajoù aozhennek (limonadez, koka-kola, h.a.)

Lakaet e oa bet tri c'hant c'hwec'h pellgomzlec'h ha tregont e servij an dud el lec'hioù ar muiañ darempredet. Bez'e oa ivez pemp ti-bank ha tri zi-post. Digoret e oa bet pevar z-louzaouif evit ar re a c'helle en em gaout klañv pe ziaes. Dre ma'z aec'h e tegouezhec'h gant ur bern stalioù bihan, ouzhpenn daou c'hant anezhe, o werzhe a bep seurt marc'hadourezhioù adalek an traoù-efvor betek ar " c'hoaven skornet " (ice cream) ken brudet en Amerika.

Liorzhoù a oa bet kempañnet, deoc'h da ziskuilhañ pe da bourmen. Taolioù ha skinviser a oa lakaet war ar glazennoù evit an dud a falveze dezhe chom da zebriñ er-maez ar boued a oa deuet gante eus ar gêr.

TINELLOU AR BROIOÙ

Renket, prientet ha pennegat e oa bet an holl draoù-se da aesaat d'ar bourmenerien ober tro ar palezioù savet gant an dak broad ha tri-ugent a genstrive da zispakañ dirak o selloù bamet, frouezh-labour o ijinerezh, dudi o stumm-bevañ, ampartiz o doare-soñjal, kaerder o c'hêrioù pe daolennoù dispar o maezioù

Lorc'h a oa er broadoù-se o tisplegañ pegen brudet e oa bet o hendadoù pe pebezh poanioù o devoa renket diwaskañ, pe c'hoazh pebezh nerzh-kalon e oa bet o hini a-hed ar c'hantvedoù a-benn gelout reiñ d'o diskennidi an hêrezh e reont o mad anezhañ bremañ.

Pep broad a boueze war he ferzhioù gwellañ ha war hec'h oberoù heverkañ, o heuliañ er stumm-se ger-stur an Diskouezadeg : Douar an Dud. E-touez an tinelloù brasañ e oa hini ar C'hanada, hag, evel ma c'hellit krediñ, re an U.R.S.S. hag ar Stadoù-Unanet, ur genol ledan ouzh o dispartiañ, re Vro-Saoz ha Bro-C'hall, div gmmvro gozh Kanadiz, lakaet kichen-ha-kichen war ribl ul lennig.

Ur pikol savadur hirgarrezek e oa tinell Rusia, graet a zir hag a wer, goloet gant un doenn hañval ouzh ur follenn, krommet-kleuz ar c'hreiz ha troñset an daou benn moanañ anezhi, unan a-us d'an tu-diadrefiv hag egile, uheloc'h en aer, a-us d'an talbenn diaraog.

Ken bras all e oa hini ar Stadoù-Unanet, hogen e stumm ur voull-douar treuzwelus ha pevar-ugent metrad treuz dezhi. Gwisket e oa ar voull gant un danvez " akrilek " hag a cheñche liv gant bannoù an heol. Diouzh an noz e skede penn-krec'h an dinell evel an aour.

Meurdezus e oa tinell Vro-Saoz, ur pezh ti gwenn astennet e krec'h derezioù-maen hag un tour uhel bantet a-us dezhañ. Dek metrad ha tri-ugent a oa d'an tour-se. Troc'het e oa ar beg anezhañ a-vekkell hag en troc'h e oa livet an " Union Jack ", banniel Breizh-Veur.

Evit hini Vro-C'hall e oa anezhi ur frammat a zir hag a simant tro-dro dezhañ, en tu-diavaez, ur speurannad laonennoù-dishoolier en aluminiom, staget a-serzh. Eizh leur-diskouez a oa enni, o sevel bete dapu vetrad ha tregont a uhelder.

*

E tinelloù Rusia ha Bro-C'hall e pouezed greist-holl ha mar-taze re war an dec'hnikelzh, unan o tiskouez he bannadelloù, he loarennoù, he c'hêrioù-da-vezañ, eben o tispakañ frouezh hec'h ijinerezh tredanek ha tredanennek (elektronek), an arz hag ar savadur o tonet an eil renk. Falvezout a rae dezhe o-div diskleriañ edont e penn-an azaeket, er bed-holl.

E tinell ar Stadoù-Unanet e weled, evel just, ur vannadell bennak, hogen e tispleged buhez ar boblañs hiziv hag an ijinadennoù tautin e rae he mad anezhe: skiant ha micher, arzoù-kaer, film-veudennerezh. Taolenniñ a raed, dre skeudennoù ha dre verc'hodennoù, gizioù ha kustumoù an dud. Kalz a gavas se dister. N'heller ket lavarout e klaske ar Stadoù-Unanet en o zinell trelañ daoulagad an arvester gant o finvidigezh hag o lorc'h.

Pouezañ e rae Bro-Saoz ivez muioù-h war he fobl eget war he zec'hnikerezh. Displegañ a rae, gant mousfent brudet Yann Saoz, doare he zud. Un daolenn, da skouer, a rae da c'houzout e oa c'hwec'h gwech niverusoc'h ar peruchenned eget ar vugale e Breizh Veur.

Nag e tinell Vro-C'hall hag en hini Vro-Saoz ne oa graet an disterañ meneg eus ar poblom kelt damvouget dindan o beli.

En holl savadurioù bras evel ar re-se e oa skalieroù-red da bignañ eus an traoù d'al laez. Bez' e oa ivez enne, evel en darn-vuiañ eus an tinelloù, ur sal-filmoù, un ti-debriñ, ur sal-gelaouiñ h.a.

E-touez an tiez a zedennas ar muiañ niver a weladennerien e oa re Tchekoslovakia, an Alamagn, Japan, an Indez, Mec'hiko, Maroko, Aljeria, Skandinavia, an Izelvroioù, Aostralia, Italia ha Yougoslavia. Re Iran, Tailand ha Birmania a oa gwir vrevigoù hag e rejont berzh, souezhus.

TINELLOÙ AR C'HEVREDIGEZHIOÙ BRAS

En tu-hont d'an diskouezlec'hioù broadel e oa c'hoazh un niver a dinelloù bras, savet gant ar c'hompagnunezhioù brudet.

Da gentañ e oa bet kempennet gant Kevredigezh-Aozañ an Diskouezadeg Etrevroadel, melloù tinelloù e dir o taolennañ en o diabarzh oberoù pouezusañ Mab-den war an douar. Pep a c'her-ardamez o devoa:

MAB-DEN DIZOLDER: rannet etre kevrennoù o tiskouez " An Den hag ar Vuhez ", " An den, hor planedenn hag an Ec'honder ", " An den hag ar morioù-bras ", " An den ha daou bennahel ar Bed ", " An den hag ar yec'hed ".

MAB-DEN OBEROUR: " An den hag e ijin ", An den oc'h araokaat " "An den oc'h enklask hag o'n em ren ".

MAB-DEN KROUER: " An Arzoù-Kaer ", " Al Luc'hskeudennerezh " " Ar C'hizellerezh ", " Ar Raktresoù ha Roll-Labour an Ijinerezh ".

MAB-DEN ER GEVREDIGEZH: " An darempredoù etre an dud ", " " Ar C'hêrioù ", " Ar Bevañ a-gevret ", " Al lojeiz bremañ hag en amzer-da-ren ", " Ar Mererezh "

MAB-DEN POURVEZER: " Al Labour-douar hag an Araokaat anezhañ "

*

Bez' e oa ivez ur Greizenn Etrevroadel a Skinwelerezh hag a Skinerezh, Tinell ar Songarourien Yaouank, Tinell an Domemat, paet homañ gant ar c'hompagnunezhioù aezhenn-leskiñ hag enni ur sal gae-tre da reiñ herberc'h d'ar gwraez ha d'o ziegezhioù, hag ur sal vras da zegemer ar pennadurezhioù, da zispakañ dilhad a c'hiz nevez, oberannoù-c'hoariva, labourioù-dorn hag all, pe da servijout da lec'h-emgav da gevredigezhioù merc'hed eus ar bed-holl.

Kazus e vefe reiñ ar roll penn-da-benn eus an tinelloù-se. Menegomp evelato en o zouez hini greantioù Bro-Gebek, hini an Tiez-bier, hini Aer-Ganada, hini ar Skoutalezh Etrevroadel, hini ar Stadoù-Unanet, hini g-Kodak, hini ar C'henvarc'had, hini al Labour-radegoù-paper, hini an Dir, hini an Hentoù-houarn, ha nouspet hini all.

Un dinell ha na oa ket e-touez ar re vrasañ hag a zedennas kalz a weladennerien e voe hini Indianed ar C'hanada. Strujet e oa e dir, goloet a goad, e stumm un deltenn a dregont metrad uhelder. Degemeret e vezed enni gant Indianezed yaouank eus ar pobloù amerindiat o vevañ ar vro. Kinklet e oa an diabarzh gant skeudennoù, delwenoù ha dornlabourioù graet gant arzoerien" ruz ". Skritelloù a zisklerie menozioù ha prederadennoù an Indianed diwar-benn talvoudegezh ar pennreolennoù-buhez : dezhe gant o zadoù.

Un dinell souezhus all e oa hini ar Gristenien. D'he sevel e oa en em glevet renerien eus a eizh Iliz: Katolik, Unanet, Anglikan, Presbiteriat, Lutheriat, Badezour, Reizhkredennour gresian ha Reizhkredennour oukraniat. Taolennet e oa enni, dre harp al luc'hskeudenn, ar film, ar son, ar goloù hag ar spas, penaos, en ur bed alies hep spi na karantez, ez eo ar C'hrist ur vammenn a c'hoanag peurbad hag ur feunteun a levenez da viken.

N'oufed klozañ ar roll-se hep menegiñ ivez tinelloù Rannvroioù ar C'hanada: re Gebek hag Ontario a oa e-touez ar re vrasañ hag ar re zedennusañ en Diskouezadeg a-bezh.

C'HOARIELLOÙ HA DIDUELLOÙ

Er penn-reter eus an evezenn vrasañ e oa bet aozet un dachenn-didueliñ, dindani tragont devezh-arat, el lec'h anvet kent an "Enez-Krenn ". Eno, ur bern stalioù a werzhe traoù oberiet er broioù o

Kemer perzh er gendisplegaded. Fent ho pije bet avat, o welout an dud o'n em ziduiñ er " Fort-Edmonton ", ur savadur o'tegas eus ar C'hornog-Pellañ (Far-West) ha ken bras hag ur bourk a Vro-Dreger, pe c'hoazh en " Aquarium ", er sirk-mor, o sellout ouzh ar morthoc'hed doñv oc'h'ebatal, e " Bed ar Vugale ", e tinell ar yaouankiz enni salioù aozet evit ar c'hoariva, ar filmerezh, ar c'horoll, ar sonerezh, h.a. Diwar ribl Lenn an Delfined e oa brav d'an den, kement ha diskuizhañ, estlammañ ouzh troioù ouesk sturiorien genodoù-dre-dan ha re ar rederien war ski-dour, ha, diouzh an noz, ouzh^{an} tan-arvest pe ouzh ar stivelloù sklerijennet o flistradennoù gant goloùioù cheñch-dicheñch.

En ur c'horn all en em astenne tachenn ar c'hezeg-mezevenn. A bep doare e oa anezhe, adalek ar c'hezeg-koad anavezet-mat dre-holl betek ar " Gyrotron " elektronek. Hemañ ho kaset da ved marzhus an Ec'honder evel pa vijec'h bet en ur vannadell, pell-pell en oabl, hag a rae deoc'h skrijañ gant ar spont ouzh ho la-kaat da dremen a-rez da c'henoù ur menez-tan o tisonkañ mein ha flammoù an ifern a-raok teurvezout hoc'h adlakaat war an douar, dic'hloaz ha dibistig.

Adsavet e oa bet ur gêriadenn ganadat a-wechall e-kichen Lenn an Delfined, ha war ar blasenn anezhi e veze graet dañsoù-pobl. An davarn " Chez Rose Latulipe " a ginnige d'an dud evajoù ar vro, an Ti-Kaniri sonioù a bep seurt hag ar stalioù-giz-kozh frouezh-labour an dornvicherourien gebekat.

En Enez-Krenn e c'hellec'h ivez krapat war-du an oabl bete kent metrad uhelder en ur c'hombod lec'h da dri-ugent a dud ennañ hag a bigne en-dro d'ur pezh peul-dir anvet an " Droellenn "

Evel ma weler, hir eo roll an tinelloù hag an arvestlec'hioù e oa tu da weladenniñ, re hir e gwirionez evit ma vefe dezrevellet amañ doareoù kement hini a oa anezhe. Ar pezh hon eus displeget betek-hen ne oa nemet un tañva eus ar c'haerderioù dispaket dirak daoulagad an arvester. Anavezet hon eus tud hag a zo aet da dachenn an Diskouezadeg bete tregont gwech ha n'o deus ket gallet gwelout kement tra o devoa c'hoant da welout ! Ha koulskoude ne felle ket dezhe sellout ouzh an holl draoù !

AN ARVESTOÙ BRAS

E-kerz an Diskouezadeg e oa bet aozet un heuliad-gouelioù a raed anezhañ " Kendalc'h Arvestererzh ar Bed-holl ", war e roll e kaved abadennoù arzel a bep seurt: pezhioù-c'hoari, sonadegoù sumfoniek, c'hoariadegoù soenerezh-kambr, c'hoariganoù, arzkorolloù

fentc'hoariva war gan, kenstrivadegoù finvskudennererzh hag ur steudad displegadedoù rams gant un distalac'h bras a arzourien hag a ginkladurioù.

Dalc'het e veze an abadennoù-se, hervez o doare, e salioù-c'hoariva-kêr, e c'hoaridi an Diskouezadeg pe en " Autostade " (Sportlec'h ar C'harr-dre-Dan). Hemañ a oa un dachenn-sport paest gant American L Motors, Chrysler, Ford, General Motor Products, Volvo, oberourien girri-dre-dan anavezet dre ar bed. En-dro d'an dachenn-se e oa plas da bemp mil warn-ugent a dud en o c'hoazez.

Setu ma voe tro da welout ha da glevout ar " Scala di Milano ", strolladoù-c'hoarigan Wien (Aostria), Bolshoi (Moskva), Hamburg, Stockholm, Londrez, strollad-c'hoarigan broadel ar C'hanada, Laz-Koroll ab Ugentvet Kentved a Velgia, hini Aostralia, hini " Opéra " Pariz, an " New-York City Ballet ", korollerien Varta Graham, Laz-koroll roueel Winnipeg, korollerien Jamaika, Laz-koroll broadel ar C'hanada, hag all, hag all.

Evit ar pezh a sell ouzh ar c'hoariva e teuas da Grek'h-ar-Roue strolladoù brudet a Vreizh-Veur (gant Laurence Olivier), a Vro-C'hall, a Velgia, a Israel, a Vro-C'hrez, a Italia, a Swis, eus ar Stadoù-Unanet, a Vro-Indez...

Lazoù-seniñ brudet a zegemerjod ivez: hini ar c'h-" Concertgebouw " eus Amsterdam, hini ar " Philharmonic " eus New-York, re Vel-bourne, Toronto, Krec'h-ar-Roue, Swis c'hall, an O.R.T.F., Tchekoslovakia, Aostria...

E-kreiz an enezenn vrasañ, Santez-Elena, war ul leurenn hag a veze graet " Leurenn ar Broadoù " anezhi, e veze lidet gouelioù mui-oc'h " kefrediel " o doare: an " Devezhioù Broadel ". Kement bro hag a gemere perzh en Diskouezadeg he devoa hec'h hini. Devezhioù a oa bet miret a-ratoz- ivez evit Rannvroioù ar C'hanada, ar Stadoù ameri-kan, ar Groaz Ruz Etrevroadel, ar C'henvarc'had (mar plij!), an Unvaniezh Kristen....

War Leurenn ar Broadoù e oa lec'h da seizh mil a dud, leurioù-c'hoari, uhelvankoù a enor ha meur a sal-degemer.

E-kerz un Devezh Broadel e veze graet ur gouel kefrediel da lidañ dondigezh penn-bras ar Stad e oa dediet an deiz-se dazhi. Goude ar prezegennoù, an dibunadegoù hag an drompillhadegoù e veze abaden- noù folklor, kaniri pe c'hoariva broadel.

Ur wir blijadur e voe gwel ut o tremen dre eno strolladoù koroll-pobl pe lazoù-kenañ eus ar bed-holl, koulz lavarout, en o

zouez dañserien vrudet Dukraina, Sina, Japan, hag eus broioù nevez Afrika, Kanerien an Arme Ruz, re all eus Mec'hiko, eus ar C'hanada, eus an Alamagn, h.a.

E-touez ar pennadurezhioù a zeuas da ren Devezh Broadel o gouarnamant ez eo rat-mat envel Elesbed II, rouanez Vro-Saoz, hag ha fried, ar priñs Fulup, Haile Selassie, impalaer Etiopia, L.B. Johnson, pennsezer ar Stadoù-Unanet, Mohammed Reza Pahlevi, impalaer Iran, Heinrich Luebke, pennsezer Alamagn ar C'hornog, priñsed ha priñsezed, renerien-vro pe vinistred eus Danmark, v Norvegia, Tchecoslovakia, Japan, Indez, Italia, Rusia, Bro-Finn, h.a.

UN DRO HAG A REAS TROUZ

Evit ar pezh a sell ouzhimp, gouzout mat a ra pep hini perak - an Devezh Broadel e voe komzet ar muiañ anezhañ e voe hini Bro-C'hall abalamour da zonedigezh Charlez de Gaulle d'ar C'hebek.

Komzet ez eus bet kalz eus an degemer entanet a rejod dezhañ hag eus ar pezh a c'hoarvezas goude-se. War hon menno e oa pennegeñ dre ar munud n'eo ket hepken roll ar gouel hogen ivez emzisplegadeg an emsav-pobl a zlee da darzhañ.

Kregiñ a reas ar "choa" etre gouarnamant Pariz ha hini Ottawa a-raok ma tilestras ar pennrener uhel e vent war zouar ar C'hanada. En e raok e oa bet dileuret eus kêr-bann Bro-C'hall da Gebek un toullad kargidi ha pennoù-bras - ur ministr en o mek, mar ne faziomp ket - dezhe da gefridi peurgempenn an traoù a-benn beaj o aotroù dre hentoù kontre^{ar} Sant-Laorañs.

Ac'hanta, an dileuridi-se e oa daou rummad pennadurezhioù kanadat ouzh o gortoz: unan a-berzh ar gouarnamant-kreiz (Ottawa) hag egile a-berzh gouarnamant Kebek. Gwashañ'voe avat, n'edont ket o-daou en hevelep lec'h o c'hedal an nijerez da zegouezhout eus Europa. Betek ar vunutenn diwezhañ e oa lezet tud Ottawa da grediñ e tlee douarañ el lec'h m'edont-i o klask en oabl, gant o daoulagadoù digor-frank an " Evn o tonet a Vro-C'hall!" (ton anavezet). An"evn" avat, a oa aet da ober e ziskenn war an dachenn e-lec'h ma'z oa paotred Bro-Gebek prest d'o degemer. Un digarez bras e voe se da Gebekiz d'c'hoarzhin a-leizh o c'horzailhenn, ha d'ar " Saozon " ha d'o mignoned da skrignal o dent. Dre-se e c'heller kompren gant pe-bezh tro-spered e teraouas ar " veaj istorel ".

Dilestrañ a reas ar jeneral diwar ar morreder " Colbert "

e kêr Gebek d'an eil warn-ugent a viz Gouere mil nav c'hant seizh ha tri-ugent. Eno eo e krogas da gomz, en e brezegenn gentañ, eus karantez-vro, eus kendadoù hag eus an doug-kalon o devoa an div bobl (gall-kanadat ha gall-europat) an eil evit eben. Antronoz e kemas penn an hent, a-hed ar stêr St-Laorañs, war-du Krec'h-ar-Roue dre garr-dre-dan, diaraoget ha heuliet gant kirri-dre-dan all, holl oberiet e Bro-C'hall avel just, ha karget a boli-sed hag a c'horilhed. Diwar lez ar straed e huchet hag e youc'he tud ar vro dezhañ en ur hijal bannieloù bihan a oa bet roet dezhe.

Chom a rejod hanter-hent etre Kebek ha Krec'h-ar-Roue da ziskuizhañ ha da dremen an noz. En deiz war-lerc'h, d'ar sul eta, e klevjod an oferenn en iliz Kab-ar-Vadalen, ul lec'h-perc'herinañ brudet en enor d'ar Werc'hez, nes da gêr Teir-Stêr (Trois Rivières, Three Rivers), ha Karl de Gaulle er penn-uhelañ tost d'ar c'heux. Goude kreisteiz e reas, e Teir-Stêr, ur brezegenn entanet gant menozioù broadelour gouest da vroudeñ gred Kanadiz-C'hall. Goude un nozvezhiad diskuizh all, d'al lun ar beure, ez adkrogas ar veaj war-zu ar gêr vras, Krec'h-ar-Roue. Penn-da-benn ar pemzek kilome-trad ha kant, tud a vil-vern o c'hortoz an ambrogadeg da dremen dre " Hent ar Roue ". Lod a oa krapet war doennoù an tiez, lod all er gwez, evit gwelout gwelloc'h a se mestr Gallaoued an " Tu All". War an tar-du e oa bet livet lerc'h-ouzh-lerc'h flourdilizennoù gwann. Nepell diouzh ar gêr vras, e Repentigny, un den en devoa lakaet ober ur skritell ken uhel hag e di, merket warni " Donemat da Charlez-Veur II " ! Ken bras toumact'h ha gant an Dieubidigezh e Bro-C'hall e 1944.

Goude an degemer berv-se e vervas ivez gwad ar jeneral en e wazhied, ma ne voe ket mestr d'e galon (a-hervez). Neuze eo e klozas ar brezegenn a reas dirak ur boblad tud diwar bondalez Ti-Kêr Krec'h-ar-Roue, dre ar c'homzoù a lakaas kement a strafuilh e meur a c'houarnamant, en hini Ottawa er penn-kentañ: " Bevet Bro-Gebek dishual " !

Ar pezh nan ouzer ket marteze (hag a ziskouez koulskoude petore tro-spered e oa o ren ar veaj vrudet-se) eo e teuas ar c'h-Colbert da gasañ e porzh Krec'h-ar-Roue, hogen ne voe gwintet benniel kanadat ebet ouzh e warn e-pad e chomadenn eno.

Goude ar seurt dismegañsoù ez eo aes soñjal ne oa ket dinac'h ar pennadurezhioù gall a oa o roudal en-dro da Charlez-Veur II. Lakaet e oa e kouskja hemañ e ti pennrener Kevrenn C'hall an Diskouezadeg. Ambrouget e voe de Gaulle, en kefrediel, da di an den-se diouzh an noz. Nebeut amzer goude-se, hervez klavout, e vije deuet er-maez dre un nor a-dreñv, en ur wetur-dre-dan mouchet ha

frenestroù, hag aet d'ober ur pennad kousket en ul lec'h all tostik a-walc'h d'ar c'hae ma'z oa ar c'h-Colbert stag outañ!

HA BREMAÑ ?

Diaes eo lavarout pe ez eo De Gaulle o taolenniñ Bro-C'hall en e bersonelezh, pe ez eo De Gaulle anavet evel stourmer ouzh galloud ha mac'homerezh ar "Saozon" an hini a entanas ar Vroad Kanadat-gall. Bet e oa teir gwech c'hoazh e Bro-Gebek ha n'en devoa bet bep taol nemet un degemer seven ha yen a-walc'h.

En dro-mañ avat, ez eo erruet d'ur c'houlz ma'n em gann Gallaoued Kebek a-enep ar Gouarnamant-Kreiz evit ma vo adkempennet pennreizhadur ar C'hanad en doare ma tapfont kaout muioc'h e wirioù.

Donedigezh De Gaulle en o zouez a hañvale dezhe bezañ evel an degouezh merket da ziframmañ diouzh o c'halonoù daou gantvedad c'hwervoni ha-mezhekadennoù. Dizoloet he deus ar bobl ganadat-gall (gwell eget he fennoù bras ha kalz eus he c'hrak-aotronez marteze) a-greiz-holl, ur Vro-C'hall prest d'he harpañ ha d'he skoazellañ ha dishañval-mik diouzh an hini he devoa o dilezet hag o ankouaet e-pad tremen daou c'hant vloaz.

Tro De Gaulle a roe tu da Ganadiz c'hall da zispakañ o menozioù hag an digarez da reif da intent d'o mistri ganadat-saoz, ez oa echu amzer o beli warnezhe.

Dre vouezh o rener e lavare tud Pariz kenlabourat hiviziken gant re Gebek war ar c'helenn, an emzeskiñ, an enklask skiantel hag an Esperouriezh. Pegen c'hwec'h ne oa ket ar seurt komzoù ha pegen flour da zivskouarn ur bobl a gave dezhi e oa flastret dindan dreid didruez. En desped d'ar c'hantvedoù ma'z oa bet dilezet hag ankouaet gant ar re a veze graet anezhe " Ar Fransizien villiget " en deizioù all c'hoazh, setu enta pobl ar C'hebek trellet gant gweladenn Paotr-a-rack ar Bempvet Republik war ribl ar Sant-Laorañs. Ken entanet ha ken trelatet e voe e gwirionez ma voe gwelet tud ha n'o dije ket kredet en ur c'houlz all diskouez o menozioù, oc'h embann a-ouez d'an holl, o youl da ergas diouzh o bro pep roud eus an amzer dremenet ha d'he dishu-aliñ diouzh kement ers he stage c'hoazh ouzh framm ar mac'homerezh saoz, berr ha berr: da vonet eus a vevelien da vistri.

Daoust ha dre zegouezh hepken eo e c'hoarvezas an tabut dres er bloavezh o verkañ Kantet Deiz-ha-Bloaz krouidigezh ar C'han-gevredad kanadat ? Ha n'eo ket kentoc'h un emsav eozet a-ratozh

da ziskouez n'eo bet renadurezh Ottawa, diazezet war Bennreizhadur ar C'hanada evel m'emañ bremañ, netra nemet ur c'hwitadenn. Dindan al lezenn "saoz" n'o deus gallet ar c'hallegerien ober barzh nemet ha nac'hañ a rajent o gouenn. Gant se ez eo aes kompren e vijant aet da glask harp e diavaez-bro ha pan eo troet Bro-C'hall gante en deizioù-mañ ez eo diganti e c'houlennont skoazell. Gouzout a reont penaos, ouzh hen ober, e feukont ar saoznegerien paneogwir ez eo rener-meur Pariz sellat gant ar re-mañ evel o gwashañ enebour. Hogen fellout a ra da Ganadiz-C'hall kaout gwirioù hag o lekaf da vezañ par d'ar "Saozon", da lavarout eo bezañ izili eus ar C'hanada rannet etre div bobl kevatal. M r n'houl ket ar renerien saoz asantiñ, neuze ne vo ken hent evit ar C'hallaoued nemet an disparti. Evel just, mar c'hoarvez se ez eo ar "Saozon" e vo kiriek d'ar gwall-zisoc'h.

Diouzh an tu all n'eo ket chomet ar saoznegerien diflach dirak an darvoudoù. En em lekaet int da zantañ ha startaat o difennoù e sell da stourm ouzh emsavadeg ar " Fransizien ganadat ". Diaes e vez da aotronez gwelout o mevelien o nac'hañ plegañ d'o urzhioù, dreist-holl pe c'houvezont a-walc'h e vezont bet iset gant fals-vignoned. Bete vremañ, ar gounnar o c'horif e Toronto hag en Ottawa n'he deus kemmet netra er gudenn. Anet eo avat, e klaske ar gouarnamant-kreiz hadañ pailhast-bananez war an hent etre Kebek ha Pariz.

Gortozomp c'hoazh kent kaout an alberz eus an diskoulm. Ne vern penaos, e vo kentelius an dael.

*
* *

A-rack echuñ, ur c'heloù evit ar re a c'hoantefe ober ur veaj d'ar C'hanada: addigoret eo Tachenn an Diskouezadeg Etrevroadel war inizi ar Sant-Laorañs. Tu a vo da weladenniñ an darn-vuiañ eus an tinelloù. Ne vanko nemet pemp pe c'hwec'h anezhe, met re all a voe en o lec'h.

Jakez KONAN



KREMLAVARJOÙ PEMBRASEP (ar bezh)

P

- Pan fo culach vr vch, gorau fydd vn y waith
Pa vo en ejen en e dreutañ, e voe en e wellañ da labourat.
- Pan fo ingaf gan ddy, ehangaf fydd gan Dduw
Pa vo. ar startañ (enkañ) war en den, e vo ar frankañ gant Doue.
- Pan fo'qâth oddicartref ceif y llygod le i chware
Pa vez ar c'hazh 'maez ar gêr, o devez al logod lec'h da c'hoari.
- Pan fo v bel vn llawn, v myn vr esgyrn orphwys
Pa vez leun ar c'hof e fell d'an eskern diskuizhañ.
- Pan wpo dyn ladd ci, cynddaradd a vr arno =
Pa glasko un den lazhañ ur c'hi, e lavar ez eo klañv (e tamall dezhañ bezañ "kounnaret")
- Pan vrer Gwyddel allan, vnyvd ydd haerir ei fod = Pa daoler ur Gouezel er-maez e lavarer ez eo sot.
- Pilio vr wy cyn ei bobl = Dibluskañ ar vi kent e boazhat.
- Pob edn a edwyn ei cymhar = Pep evn a anavez e bar.
- Peb peth vn ei amser = Pep tra en e amzer, d'e goulz.
- Po tynnaf fo v llinyn cyntaf y tyr = Seul dennoc'h al linenn, ken kentoc'h a se e torr.
- Po dyfnaf v môr, diogelach fydd i'r llong = Seul donoc'h ar mor suroc'h (diogeloc'h) a se e vo d'al lestr.
- Pvsqota vn mlaen v rhwyd = Pesketa a-raok ar roued.

R

- Rhaqnythed iâr cyn dodwy = Ra savo ar yar he neizh kent dozviñ
- Rhaid i'r fowch wrth ei llosgwrn = Ret d'ar vuoc'h kaout he lost.
- Rhaid cōf da i ddweud (ddywedyd) calwydd = Ret kaout koun mat da lavarout gevier.
- Rhaid vw cropian cyn cerdded = Ret mont war ar parlochoù kent kerzhet
- Rhîn tri dyn canlyn a'i clyw = Kevrin (sekred) tri den, kant den e glev.
- Rhōdd ac adrodd rhōdd bachgen = Donezon (prof) ha diskleriadur, donezon bugel.

Rhoi v car o flaen v march = Lakaat ar n'harr a-raok ar marc'h
Rhwng v ddwy ystol vr â 'r din i lawr = Etre an div skebell ez ar penn a-dreñv d'an traoñ

Rhy dyn a dyr = Re denn a dorr
Rhy lawn a qyll = Re leun a skuilh (a goll)
Rhy uchel a syrth = Re uhel a gouezh

Rhyw i fab iwrch lamu = Naturel da vab-yourc'h lammat.
(da vennig-yourc'h)

S

- Sadla'r mur po garwa'r qared = Startoc'h a se ez eo ar vur pa vez disneuz ar mein. (ouzh hec'h ober)
- Sef vw'r blaidd v bugail = Da lavaret eo ez eo ar bleiz ar bugul.
- Siarad cymmaint â mab Saith Gvdyn = Komz l kement ha mab Seizh Kuden.
- Siarad cymmaint â Myrddin ar bawl = Komz kement ha Marzhin war benn e beul.
- Siefrai biau v troed, Siefrai biau v fwyal =
Jafrez a biau an troed, Jafrez a biau ar vouc'hal.
- Soniwch am ddiawl, ac fe ymddengys = Komzit eus an diaoul, hag en em ziskouez a ra (= Pa gomzer eus ar bleiz e weler e lost pe dost)

T

- Tafod aur vn mhen dedwydd = Teod aur e penn an den eürus
- Tafl â'th unllaw, cais â'th ddwyllaw = Taol gant un dorn, klask gant da zaou zorn
- Têg pob dianaf = Brav pep tra disi
Têg pob hardd = Brav pep tra gear
Têg tan pob tymp = Brav an tan e pep amzer.
- Teml qlwth ei qegin = Templ al lontrog e gegin
- Tinddu, ebei'r frân wrth v wylan = Revr du a lavare ar vran d'ar d'ar ouelanenn.
- Toll fawr a wnâ doll fechan = Truaj bras a ra truaj bihan
(toll, gwir, kustum)
- Tra fo'r borfa vn tyfu bydd marv y march =
tra ma vez ar peuriñ o kreskiñ e varv ar marc'h.
- Tra fo'r ci yn maesa ydd â'r vsqyfarnog i'r coed =
Tra ma vez ar c'hi o kac'hat ez a ar c'had d'ar c'hoed.
- Tlws pob peth bychan = Koant pep tra vihan.
- Trafêrth yr ŷch hyd echwydd = Poanial a ra an ejen betek an ac'hoaz.

Trehoeth y dygwyl : Antronoz an deiz-gouel

Trech y byn mæth na rhâf = Startoc'h e sach plac'h eget fun

Trech anian noc addysq = Trech an anien (natur) d'an deskamant.

Treigl maen hyd wastad = Ruilhal a ra ar maen betek ar blaenenn

Treinqid golud, ni threing molud = Na pa dremenfe pinvidigezh
ne dremen ket ar veuleudi

Trydydd troed i hên ei ffon = Trede troad d'ar c'hoziad, e vazh.

Twymo'r dŵr a'i fwrw allan = Tommañ an dour hag hen skeif'maez!

Trwv bwyl y mae dirwyn y bellen = Dre ar poell e tibuner ar

gudenn
(poell = poell, skiant, ha skoulm ar gudenn, ar c'houstell)

U

Uchenaid qwrâch ar ôl ei huwd = Huanadiñ 'ra gwrac'h war-lerc'h
he yod.

Unllygeidiog fydd brenin yn gwlad y deilliad

Ar born a vez roue e bro an dalled.

Un wennol ni wnâ wanwyn = Ur wennili ne ra ket an nevez-hañv

Unwaith vr aeth vr arqlwyddes i nofio, hi a foddod

Ur wech ez eas an itron da neuñ, beuzet e voe.

Utqorn vw cwrw da = Trompilh ez eo bier mat

Uwch pen no (na) dwy vsqwidd = Uheloc'h ar penn eget an divskoaz.

Y

Y car cywir yn yr ing a welir = Ar gwir vignon a weler en dru-
builh.

Ychydig laeth ac hynny yn snwyn = Nebeut a laezh ha c'hoazh ez
eo laezh ribot

Y ci a fynnir ei grogi a ddywedir ei fod yn lladd defaid

Ar c'hi a venner lazhañ a lavarar e lazhañ defaid.

Y cŵn a qerrdo a vrir = Ar c'henn a labouro a vo sanket.

Y cyntaf a ddelo i'r felin mæth iddo yn qyntaf

Kentañ hini a zeu d'ar vilin a vez malet e draou dezhañ

Y dafn a dyll y garreg, nid o gryfder ond mynvh syrthio

An dakenn a dnull ar maen, n'eo ket dre nerzh, met diwar-bouez
kouezhañ alies

Y felin a fal a fyn dwfr = Ar vilin a val a c'houl(venn) dour.

Y gath a fo da ei chroen a flinger = Ar c'hazh mat e groc'hen a vo
vo kignet.

Y gŵr yn ceisio ei qaseq, a'i qaseq dano =

An den o klask e gazeg, hag a gazeg dindanañ (hag eñ warni)

Yn mhob daioni y mae qobrwv = E pep madelezh emañ he gopr (ez eus
gopr)

Yn mhob drygioni y mae pechod = E pep drougiezh ez eus pec'hed

Yn mhob crefft y mae ffalsder = E pep micher ez eus falsentez

Yn mhob dewis y mae cyfyngder = E pep choaz ez eus diaester

Yn mhob clywf y mae perygl = E pep gouli ez eus riakl

Yn mhob gwlad y megir glew = E pep bro a vager tud kalonek

Yn mhob dyn y mae enaid = E pep den ez eus un ene

Yn mhob deall y mae meddwl = E pep maiz ez eus prederenn

Yn mhob meddwl y mae naill ei ddrwg a'i dda

E pep prederenn ez eus pa he droug pe he mad.

Yn mhob rhith y daw angau = E kement stumm'zo e teu an ankoù (Marv)

Yn mhob rhyfel y mae qofal = E pep brazel ez eus evezh (eoursi)

Yn mhob pechawd y mae ffoledd = E pep pec'hed ez eus follezh

Ymryson â'r qof yn ei efail = Tabutal gant ar gov en e c'hovell.

Y mud a ddyweid y gwir = Ar mud a lavar ar wirionez.

Y naill flwyddyn a fydd fam i ddyd, a'r llall ei alldrewyn
Ur bloavezh a vo mamm d'an den, hag an eil e lezvam.

Yn ceislaw (ceisio) y blewyn glas y boddoed (boddwyd) y qaseq
O klask ar c'heotenn c'hlas e voe beuzet ar gazeg

Y neb a saetho ar adrybedd a qvll ei saeth

An neb a denn en avañtur a goll e denn (e saezh, e vir)

Yr oen yn dysqu i'r ddafad bori = An oan o taskiñ d'an danvad peuriñ.

DA GLOKAAT

Setu amañ da echuiñ gant ar c'hzennlavariou-se un nebeudig re all.

Anhawdd dwyn dyn oddiar ei dylwyth = Diaes distagañ un den diouzh e
lignez (= ar gwad ne c'hwit ket, gouez da Dregeriz)

A dywaid y peth a fynno. A Glwv y peth nis mynno

An nab a lar'pezh a gar, A glev pezh ne gar ket.

Aml ddyrnod a dyr v gateg = Meur a daol a dorr ar maen

Amlwg tom ar farch gwyn = Anat an teil war varc'h gwenn

Anhawdd tynnu henfarch o rygvng = Diaes divozañ ur marc'h kozh eus ar paz-hinkane.

A brvn dir a brvn qeryg = A bren douar, a bren mein

A brvn flwad a brvn esin = A bren bleud, a bren brenn

A brvn qig a brvn esqvin = A bren kig, a bren eskern.

Ar ôl rhodio pob lle, hawddfyd i gartref

Goude bale e pep lec'h, brav eo ar gêr.

*

Tennet eo ar c'hrennlavarioù-se e " The Myfyrian Archaiology Of Wales " ha n'int bet dibabet ganin nemet dre m'o c'homprenen gwell eget ar re all, ha tamm ebet dre ma'z int kaeroc'h pe dalvoudusoc'h. Ur c'hoari kentoc'h eget ul labour a ouiziegezh, anat deoc'h. Evel ma leverer e kembraeg " Ym mhob pen y mae piniwn " e pep penn ez eus ur meno bennak, da lavarout eo e soñj pep hini a pezh a garj ha dre-se e varno al lenne- rion al labour-mañ, evel ma plijo dezho.

Prestet e oa bet dimp ar MYFYRIAN ARCHAIOLOGY gant Abeozen (Doue d'her pardono !) ha daskoret ez eo bet al levr pell hag amzer'zo; dre-se n'hon eus ket gallet keffveriañ an destenn skrivet en ur c'haier gant testenn ar MYFYRIAN: moarvat ez eus chomet meur a fazi.

Peurvuiañ hon eus miret ar skritur kozh e-loc'h modernaat anezhañ ha skrivañ hervez ar reolennoù a-vremañ.

Ne vern penaos, ul labour da adober penn-da-benn ez eo. Hogen dudi o deus kavet meur a hini eus lenne- rion VARR-HEOL o lenn ar C'HRENNLAVARIOU KEMBRAEK-mañ, ha digoll bras a-walc'h ez eo kement -se d'an eozet.

Bulien 8 a viz EOST 1959 - 22 a viz Eost 1968



er c'hoad

War ballenn vlot ar c'hoad
Mont a bazioù voulouz
Azezañ ouzh ho troad
Er brizh-heol, en didrouz
Pell diouzh tabut an dud
Selaou sarac'h ho teil...
Ha flourañ a bep eil
Gant va dorn ha va sell...
A vouezh dous ho kervel
A-bouez hoc'h anvioù-hud :
Derv-gwenn. Koad-kren
Skav-gwrac'h. Fav-put
Evor. Aoziñh. Bezv gwenn

Va mil mignonez vat !

A.D.

bannvel noz

Ra vi benniget Eur ma' n em deuz
Ennout pep trouz ha pep reuz :
Tifs ar c'hloc'h ha paz an dud
Nij ar goulm davet he c'hud
Froñj ar fubu, fraoñv an deil
Begeil an oan, blej an annez
Stroñs an tren ha froum ar c'harr
Kroz ar skañz ha tourni ar veilh

Eur espar

A.D.



Yann Derrien SETU ECHU AR GOAÑV

Se-tu e-chu ar go-añv Me'wel ar bo-ke-doù hañv o vleu-

niañ a-hed ar c'hleu-zioù Tra lalaleno la la la lala la

An holl laboused bi-han hag an durzhu-nell a gan

war ar gwez e-kreiz ar c'hoadoù Tra lala le--no la

la la la-la lenno la la la la la la

1
 Setu echu ar goañv
 Me'wel ar bokedoù-hañv
 O vleuniañ a-hed ar c'hleuzioù
 Tra lalaleno, la la la la la la,
 An holl laboused bihan
 Hag an durzhunell a gan
 War ar gwez e-kreiz ar c'hoadoù
 Tra lalaleno la la la la laleno
 La la la la la la

LES REVUES

Skol, Wanig ha Wenig, Barr heol

Crec'h Avel, BP 70, LANNION, 22, Brittany

vous proposent : *****

- * DES ETUDES SUR L'ENSEIGNEMENT BILINGUE :
 - au Pays de Galles : Ar C'hembraeg e skolioù Kembre : 3 F
 - Ar C'hembraeg hag ar Skol : 5 F
 - au Schleswig, Allemagne, Danemark :
 - Kudennoù ar skolioù er Slesvig : 3 F
- * DES OUVRAGES POUR L'ENSEIGNEMENT DE LA LANGUE
 - Kontadennoù kozh ha nevez (enfants du Cours Moyen)
 - par Ar.Ar C'halvez : 7 F
 - Evezhiadennoù war c'heriadur R. Hemon, de F.Kervella
 - 2 volumes : 16 F
 - Penaos niveriñ, kontañ, ha muzuliañ, par les professeurs
 - de Skol Ober : 3 F
 - Levr an Amprevaned : 1 F
 - Marvailhoù ar Vretoned : 3 F
 - Notennoù diwar-benn ar Gelted kozh : 10 F
- * DES LIVRES ILLUSTRÉS POUR LES ENFANTS :
 - Albums WANIG HA WENIG, 1959 et 1960 : 3 F
 - 1961 à 1965 : 4 F, 1966 et 1967 : 5 F, la collection: 25 F
 - Buhez Lommig (imprimé) : 4 F
 - Marvailhoù loened (imprimé) : 2,50 F
 - Alanig an tri roue, de R.Hemon (imprimé): 4 F
 - Istor Breiz Touttoug (imprimé) : 10 F

La collection "Levrioù ar vugale" : Istor Meudig, Ar Goantenn e koad ar c'houk, ar c'hazh gant e heuzoù ler, Loduennig, Kabellig ruz, Gwenn-Erc'h, Kistinenn, Gwennigha Gwenola Mojennoù, Kroc'henn azen, ar c'havr hag ar givri, Istor ar Mabig Jezuz. Le volume (imprimé) : 2 F

DES TEXTES LITTERAIRES :

Al Lennegezh vrezhonek dre an testennoù, par F. Elies
 Abeozen premier volume, jusqu'à 1918, 160 p. 10 F
 deuxième volume, l'école de Gwalarn, 160 p. 10 F
 Prizoniad ar C'haokaz, de Tolstoi 3 F
 Breizh hag ar Bed, courts essais de H. Konan 4 F
 Seurez Kerwenan, de Dom Duchaux, traduit par Klerg 4 F
 An ti sataned, de Jakez Riou (imprimé) 4 F
 Labous ar wirionez (impr) Troude-Milin 4 F
 Ar pevar Mab Emon, modernisé par P. Bourdellès 15 F
 Otello, de Shakespeare, traduit par Klerg 5 F
 Mervel da vevañ, par JF Ar Gow 5 F

DES PIÈCES DE THEATRE :

Nedeleg en Breizh, quatre pièces de Jarl Priel (jeunes) 5 F
 Dek pezh c'hoari evit ar skolioù 4 F
 Tri Fezh c'hoari, gant Konstansius ha Prad 4 F
 Pezhioù c'hoari, gant Dir na dor 4 F
 C'hoariva brezhonek, 5 pièces de Langleiz, Perrot, Jarl Priel, Marlowe, H. Ghéon (impr) 4 F
 Rimadelloù hag unangomzoù (comptines et monologues) 3 F

DES LIVRES DE DANSES, CHANTS, PROVERBES, etc...

300 divinadell (devinettes) nouvelle édition 3 F
 Rimadelloù hag unangomzoù (comptines et monologues) 3 F
 Krennlavarioù (proverbes) de F. Kervella 6 F
 GWIR VRETONED, format poche, 74 chants (impr) 1,50 F
 idem édition notée 6 F
 La Danse Bretonne de E. Galbrun, 3^e édition (imp.offset) 12 F

DES OUVRAGES RELIGIEUX :

Kanaouennoù Santel, de Maodez Glandour 4 F
 Aviel Sant Lukas, traduit par Klerg 5 F
 Oferennoù ar C'horaz hag ar Basion 5 F
 Ofisoù Pask ha Gouelioù ar Sent 5 F
 Ofisoù ar Pantekost ha Gouelioù ar Sent 5 F
 (ces trois derniers volumes, traduits par Klerg, ont pour but de compléter le Missel de Uguen)
 Ordinal an Oferenn, l'unité 0,30 F
 à partir de 10 exemplaires 0,20 F

DES LIVRES EN FRANCAIS

Face au problème de la culture en Bretagne 4 F
 La langue bretonne et ses combats, R. Hemon (impr) 4 F
 L'abbé PM Lec'hvien, par H. Poisson (impr) 5 F
 La vie de Salaun, le conte de l'âme qui a faim de Tanguy Malmanche (imprimé) 5 F



Conditions d'expédition :

1° Expédition immédiate dès réception du titre de paiement chèque postal ou bancaire
 2° Ajouter 10% pour les frais.
 C.C.P. Revue SKOL, RENNES 1911 06

Adhérez à

BREURIEZH SANT ERWAN, mouvement de jeunes Bretons chrétiens; participez à ses camps de travail
 Lisez son bulletin MOUEZ SANT ERWAN édité par Skol ;
 Abonnement à 4 numéros : 12 F.
 demi-tarif pour les étudiants.

Adresse : B.S.E. Crec'h Avel, BP 70, Lannion, 22.


ABONNEZ-VOUS A

Revue SKOL, enseignement, éducation, culture
Conditions : 12 F les 4 numéros
CCP : Revue Skol, RENNES 1911 06
(Skol édite MOUEZH SANT ERWAN)

Journal WANIG HA WENIG, pour enfants
abondamment illustré, tirage offset
Abonnement annuel : 5 F
CCP : Journal Wanig ha Wenig 1705 96

Revue BARR HEOL, magazine culturel et religieux
Abonnement annuel : 10 F (étranger: 12 F)

Revue STUDI HAG OBER, théologie, écriture sainte,
Liturgie. Abonnement à 4 numéros : 15 F
CCC Mlle Saint Gal de Pons, 22 Louannec
Rennes 519 40



ACHETEZ LES ANCIENS NUMEROS POUR COMPLETER VOS COLLECTIONS

SKOL: n° 5, 12, 21, 27, 30, 34, 35, 39.

MOUEZH SANT ERWAN : n° 1, 2, 3, 4, 5. Les 5 derniers
n° de Skol correspondent aux 5 n° de MSE
Le numéro : 3 F

BARR HEOL à partir du n° 10; le n° : 3 F

WANIG HA WENIG : albums de 1959 à 1967 (cf. page préc.)
Le numéro isolé : 0,50 F.

2. C'hwez vat a zo er spenn gwenn,
Keer eo ar bleunioù melen
El lannaier hag er Pradoù
Tra lalaleno lalalala lala
Evnedigoù Breizh-Izel a zigo
A zigor o divaskell
Da nijal e-maez o neizhioù
Tra lalaleno lala lala laleno
La lalala lala.

3. Ha d'ar sul goude kreisteiz
Du-hont e traoñ ar menez
Me a glev son ar biniou...
Hag en holl baotred yaouank
'Ya da glask o doumig koant.
Krog eo adarre ar pardonioù...

4. Me a raio gant ma dous
Meur a dro war ar pouspous
Ken alies ha ma karo...
'Vit an deizioù e gouel Yann
War ar gazeq-vezevenn (*)
Eomp adarre d'ar pardonioù...

5. Me a glev ives du-hont
An akordeoñs o son
Deomp hon-dabu ivez d'an dafsoù...
Ar vuhez a zo re verr,
Na gollomp ket hon amzer,
Deomp da skrivañ an embannoù!...

6. Du-hont war vord ar nor glas
E-kichen al lanneg vras
Un ti nevez ni a savo
Tra lalaleno lala lala lala
E-lec'h ma welimp ar mor
O c'hlebiañ duar Arvor
Eurusoc'h ni a gano
Tra lalaleno lala lala laleno
La lalala la.

Ton ha son gant Yann DERIEN

(*) distagañ abalamour d'ar glotenn: mezevann pe
hervez giz Yann Derrien e-unan "mezewann"

da heloiza

Mantret c'hoazh va c'halon
Gant keloù da varv, Heloiza
Trec'h eo bet an Tonkadur
War da hirstourmad kalonek

Da c'hedal e raen bep noz
Va lagad war dor an trepas
Enlouc'het don eo bepred em empenn
Trolinenn da sae-gambr ruz-glaou
Az kwiske ken meurdezus.

Azezañ 'raes war ar gador nemeti
- Atav az peze madigoù 'n ur bravig a voest
Hag e komzemp.

Eus red hor c'hleñved
Eus ar gêr. Eus da Abalard
Eus da deir rozenn wenn.
Komz a raemp eus an douar
Douar sakr hon zudoù kozh.
An trevadoù. Al loened.
Atav war an hevellep hetad gwagennoù

Daoust d'an oad ha d'an derez disheñvel
Te yaouank ha me kozh
- Ha kozheñ'ra ar c'halonoù ? -
Te pinvidik, me dibourvez
(Pep den en deus e deñzor kuzh)

Pokat az poa doujus din
D'an Eur ma kuitais palez-ar-boan.
Ugent miz a dremenas...
Skrivañ'rajen. Bemdez o vont da warc'hoazh.
Ha setu: Marv va Rozenn ruz !
Mantret va c'halon az poa aloubet
Hep guwzout dit

Hogen fenoz ur steredenn divoaz
Am eus merzet o lintrañ
Du-hont 'us d'ar gêr a gares
Na flamm he sklaerded en oabl glas-du
Ken flamm ha da sae-gambr seiz ruz.

Levrionù

Yann Fouéré : L'EUROPE AUX CENTS DRAPEAUX (Presses d'Europe:
6 r.de Trévisse, 9^ePariz: 15,00 - 16,10 Fco)

Engortoz e oad e tauje al levr-mañ ~~es-maez e-benn fin miz~~
Genvez, ha deuet eo ~~er-maez e~~ gwirionez e deroù miz Gouere, er pezh
a ziskouez pegen diaes ez eo embann un oberenn bennak. An embanne-
rion ne fell ket dezho en em lakaat en arvar da goll arc'hant; ha
goulenn groñs a reont war-dro pemp kant pe zoken mil a rakprene -
rien a-raok stagañ gant al labour-moulañ. Eval ma ouzer ez eo bet
embannet dija gant Yann Fouere, ur seizh vloaz'zo bennak " LA BRE-
TAGNE ECARTELEE ", o tibunañ darvoudoù ha buhez an Emsav adalek
1938 betek 1948, anezhi un oberenn a dalvoudegezh skrivet hep
c'hwervoni. A drugarez d'al levr-se he deus ar bobl vretan komprenet
gwelloc'h labour an emsaverien e-hed ar bloavezhioù-se. Hiziv e
kinniger dimp kentoc'h un oberenn a breder hag a studi. E penn-
kentañ e labour e taolenn Y.F. an " Europa gentañ ", hini ar "Grist-
eniezh " hag a vleunie da vare ar C'hladalc'helezh. Goude-se
e studi an " Eil Europa " hini ar Stadoù-Broadoù evit merkañ ar
sioù anezhi. Ha de echuiñ e komz eus an " Deirvet Europa " (an Eu-
ropa gevredel), hini ar Rannvroioù. Eval just, e voa ret diskar ar
ar Stadoù a-vremañ, anvet mammvroioù a-dreuz hag a-hed, e gwir hag...
e gaou alies. Savet e vo ar rannvroioù nevez diouzh an Istor, an
Douaroniezh, an Arboellerezh hag all.. Mat e vezo an traoù ma ne
vez hini kreñv a-walc'h da waskañ ha da vac'homañ ar re all. Martez
ez eo kement-se ur weladigezh-a-spered; met dav ez eo kinnig
traoù konstruktivel ha klask an tu da lakaat un ~~termañ~~ d'ar reuz
a zec'h hag a hiziv, hag echuiñ gant ar brezelioù mantrus tarzhet
en Europa e-kerz an daou gantved diwezhañ. Eval-se hepken e vo gwa-
rezet gwirioù ha buhez ar pobloù bihan skignet amañ hag ahont ha
dalc'het dindan krabanoù ar Stadoù bras mac'hom.

Pennad diwezhañ an oberenn a glask diskleriañ ar falskreden-
noù o deus roet tu d'ar Stadoù a-vremañ d'en em ziazezañ. Marteze
e vo tamallet da Y.F. klask lakaat ar Stad en argoll; hag ezhomm
ez eus da gaout nerzh-kalon evit krial ar wirionez da vistri Bro-
C'hall (an Titl: an Torfed da gas da benn !). Ne bled ket al levr
gant ar Gudenn Vreizhat eviti hec'h-unan: pleustriañ a ra war gudenn
Europa. Hogen ne goll netra eus e dalvoudegezh evit-se! Rak ne vo
diskoulmet kudenn Vreizh nemet e kenlabour gant ar re a zo en heve-
lep enkadenn, ken e Bro-C'hall, ken en Europa.

N'eo ket disi al labour marteze: un tammig re hir gant e fra-
zennoù lavaret hag adlavaret; hogen kempouezet ez eo ar perzhioù-

42
fall-se gant ar stumm-displegañ start, strizh ha kendrec'hus, ha gant ar pellweladennoù dispar hag hoalus war amzer-da-zonet Europa. D'am meno e vefe frouezhus-kenan d'ar re a gomz en deiz a hiziv eus disteurel hor sevenadur a-vremañ hag eus diskar ar gevredigezh, prederiañ war ar pajadennadoù-se evit anavezout ar pezh a vefe da sevel goude skubañ an traoù kozh. N'helle ket al levr bezañ embannet e gwelloc'h degouezh. Trugarez da Yann Fouere.

Yann Brekilien: LA REVOLTE DES TRACTEURS: ed. la Table Ronde, 254 paj. 15,00 L.

Tri miz'zo eo bet embannet al levr-se, ha gant un embanner bres eus Pariz, mar plij ! Un tammig touellus avat, ez eo an titl, rak gant faltazi ur romantour ez eo kontet el levr darvoudoù Kemper, Montroulez hag all. Krediñ a ran evelkent ez eo pouezus an oberenn-se evit an emgann breizhek. Eeun ez eo danvez al levr: ur c'houer yaouank desket a fell dezhañ a wir galon labourat douaroù e atant hervez menozioù an amzer-a-vremañ, menozioù brudet gant ar Sindikad, ar c'helaouennoù-a-vicher, pe tud ar Gouarnamant. Hogen ne da ket ken mat-se an traoù, ha setu perak e sav c'hwevoni e kalon an den yaouank hag e sav droug el labourerion-douar. Setu ar framm.

Hag e-skeud-se dre gomzoù nec'het ha fur an tad, dre gomzoù goapeus an amezeg, ha dre ar vuhez pemdeziek e vo degaset kudennoù ar gonit-douar e Breizh en amzer-mañ: ar maezioù dilezet, ar merc'hed o tec'hout holl diouzh an douar, ar c'hleuzioù diskaret gant ar bulldozer, an tourter, ar c'hezeg o vont er-maez a c'hiz, ar chatal savet hervez doareoù skiantel, ar Stad o ren gonidoù ar Vro, diouzh he frouden, ar vêrourion dindan o bec'h a zleoù! En ur ger dezrevellet e vez kement a ro da intent penaos ez eo bet trenket ene **Fañoh** Kouer ha troet e soñj war-du an Dispac'h. Strewet ez eo an holl venozioù-se amañ hag ahont e pajennoù al levr; hogen n'eo na pounnerast na moredu an danevell. Den a vicher ez eo ar skrivagner; gwelout hag anaout mat a ra ene an dud diwar ar maez. Marteze avat, ez eo re lipet an daolenn a ra eus ar maezioù, marteze ivez en deus klasket drevezañ betek re doareoù-komz an dud en ur **drañ** rik-ha-rik o brezhoneg e galleg ken e teu da vezañ skuizhus; gwech pe wech e kever komzoù re ouiziekl war vuzelloù hini pe hini eus personajoù ar romant. Tammoù sioù ne dint ken avat ha digollet war an ampl gant ar spered breizhat oc'h **swen**añ al levr: donet a ra tamm ha tamm kudenn an douar da vezañ gwelet evel ur gudenn o sellout ouzh Breizh, hag anat e vez ne raio tud ar Stad c'hall netra a galon vat evit Breizh...

43
Na gwashat marc'h-labour ez eo Yann Brekilien o terc'hel da bourchas danvez-lenn a bep seurt: romantoù, levrioù-istor, penna-
doù-stur pe skridvarnoù er c'hazetennoù pe er c'helc'hgelaouennoù,
- o ren ur gazetenn viziak; ha gant se labour a vicher ouzhpenn,
e zleadoù a benn un tjegezh niverus! Padal, prizet ez eo e oberenn
noù degemeret ma vezont gant an embannerien vras. En ur labourat
en doare ma ra, e ra Yann Brekilien labour vat evit Breizh.

Y.M.Rudel: LES GRANDES HEURES DE LA BRETAGNE: Un titl o seniñ avel
un taol-kloron. Un titl avat, tromplu un tammig, o c'helañ, evel
pa lavarfen, darvoudoù dibabet en Istor Breizh, diwar frouden an
oberour. Tri bloaz¹ zo e oa bet embannet gant ar memes ti, ul levr
all diwar bluenn Rudel: "HISTOIRES DE BRETAGNE", o plediñ dre
vras gant an hevelap danvez: meur a wech eta e vez adlavaret tra
pe dra. Neuze perak ul levr nevez? Tachet eo an nen da grediñ ez
eo bet skrivet ar pajennoù-mañ diwar c'houlenn un embanner bennak,
evit abegoù a arc'hant! Rak pa vez anaezet ur skrivagner, e vez
dav dezhañ reiñ d'al lennerion ul levr nevez bep bloaz pe da vitanañ
bep eil bloaz.

Ul labour diwar-c'horre ne deo ken an dro-mañ, ul labour dreist
penn-biz; ha kerse e vo gant al lenner evezhiekl. Fazioùigoù istoral
diouzh an druilh; amañ hag ahont fazioù grevusoc'h, siwazh!
Kloada a Frañs, marc'h da Anna Vreizh, ne lavar grik e 1532 pe oa
bet sinet ar Feur: evel just, marvet e oa eizh vloaz a oa!
E-pad an Dispac'h bras e voe distrujet an "armead katolik ha roueal"
e Savenay ha n'eo ket en Alre - Afer Kiberen a badas meur a zevzh
ha n'eo ket meur z vizezh - Bamet e chom al lenner o welout an
titl-mañ "Mur de France" e-lec'h "Mur-de-Bretagne"; sebedennet
c'hoazh o welout da heul skeudenn an ti "GALERIES" Magdelaine
La Fayette" (e Roazhon) an enskrivadur-mañ "Ti Parlamant Breizh"
... Hag amañ Y.M.Rudel o vevañ e Roazhon! Se'zo ober goap eus al
lenner, hep mar ebet! Neuze, perak e fin an oberenn, div bajennad
o reiñ ur roll hir eus levrioù diwar-benn Breizh pe Istor
Breizh, evel ma vez roet el levrioù-studi? Hep mar ebet n'int ket
bet lennet gant evezh gant saver al levr!

Gwazh a se! Rak meur a dra e dalvoudegezh a zo el labour!
Plijus ez eo tro-bluenn Rudel, aes da lenn. Gwech pe wech e wanter
ene breizhat ar skrivagner o tiskleriañ pegen nozus e voe evit
Breizh bezañ staget ouzh Bro-C'hall, ha penaos o deus klasket ar
Vretoned meur a wech bezañ mestr er gêr adarre. Laouen a-walc'h e
vefe unan o veuliñ al labour penn-da-benn, met anat eo d'an holl ez
eo Y.M.Rudel gwelloc'h romantour eget gwelloc'h istorour; hag 'an
hini a gar Breizh, a zo ret dezhañ bezañ leun a evezh hag a zoujante
evit skrivañ diwar-benn BREIZH!
J.C.

War al LIAMM niv.128 paj.203 en deus F.Kervella dichetet ur c'had p'en deus digoret ar gaoz diwar-benn ar ger GLOAZ ha GLAZ. Ne aparchant ket ouzh ur skrivagner evel don-me diskoul mañ ar gudann, nemet degas testiñ an Tregerieg ma c'hello ar ouizieion sklêrijennañ an traoù. Ha c'hoazh an testiñ a zegasin ne vo ket marteze na klok na difazi.

N'eo ket studiañ ster ar ger GLAZ a fell din ober amañ, evel ma reas da skouer F.Kervella evit ar ger BAS (Gwalarn 158, Meurzh -Here 1943) hag ar ger BEUZ (id.148-149 paj.322), rak evel ma oar an holl hon eus GLAZ (soniri-gañv ar c'hleier) GLAZ(tapa-denn) ha GLAS (liv) distaget o-zri en hevelep stumm, ha neuze GLAZ (elvaj marc'het) abaget ivez gant F.Kervella evel ur ger faos.

Da gentañ GLAZ ha GLOAZ a zo an hevelep ger, distaget dis-heñvel: GLAZ, Treger-Vihan, Bro-Landreger, ha GLOAZ, Bro-Lannuon Perroz, Plistin. Ur ger gwregel ez eo: ar C'hiaz, ar C'hloaz. Ur verb a zo : glazañ, gloazañ, dezhañ ur stumm-emober: en em c'hlezañ, en em c'hloazañ.

E-keñver distagadur avat e klevet GLAJAÑ ha GLOAZAÑ hepken, e kement ha ma ouzon.

Ur ger savet diwar GLAZ ha GLOAZ hag a vez implijet kalz ez eo ar ger GLAZADENN(Glajadenn) ha GLOAZADENN.

*

Ha ster ar ger ? Ma! estonet-kaer e vo. hep mar ebet meur a hini o klevout ne dalvez ket e gwirionez evit ar pezh ma vez implijet: GOULIAÑ, ober ur "gouli". Glozañ a zo ober poan betek mont tost da c'houliañ. Setu end-æun unan eus ar stêrioù roet gant Gregor a Rostren en e C'heriadur, paj.98, dindan ar ger BLESSER. E gwirionez ne seblant bezañ, n'eo ket e Tregerieg hepken, met zoken en hini ebet eus ar rannyezhoù brezhonek, ger ebet o treiñ ar galleg BLESSER, BLESSURE. Gerioù evel PISTIGAN, IVERIN a dostafe a-walc'h, met setu holl, a gav din; met ne dint ket gerioù tregeriek.

E Tregerieg e lavarer: blesañ, en em vlesañ, ha neuze evit ar " gouli " : blesadenn. Troioù all a zo evel just: tapout, bezañ tapet, en em dapout, tapadenn (dreist-holl an daou c'her diwezhañ-mañ), hag ivez e Treger-Vihan (Kempar-Gwezenneg, da skouer) tïout(= tizhout) tïet, tiadenn. Met c'hoazh ur wech ar ger resis a zo BLESAN, BLESADENN.

*

'M eus aon ez omp bet holl touellet gant Geriadurioù Ernod

Ha Vallée ha na venagont ket zoken ar ger BLESAN, BLESADENN, dre ma kavent moarvat e oa ur ger gallek diezhomm, pa oa GLOAZAÑ ha GLOAZADENN o kaout an hevelep ster, gant gerioù all dezeret diouto: Gloaziad, gloazidi, h.a. Ha me va-unan, pell ez o bet o kustumif ouzh ar goulenn-mañ hag ar respont d'ar goulenn, e Katakiz Sant Brieg :

G. Petra zifenn Doue ouzimp dre ar bempvet gourc'hemenn: " Muntret na vi e nep feson nag a efed nag a galon "

R/ Difenn ra ouzimp lac'hañ ha blesañ den ebet, pe en e gorf pe en e ene, ha kaout c'hoant d'hen ober.

*

Mat eo moarvat stagañ bremañ ouzh an diskleriadurioù-se un nebeudig notennoù. E gwirionez ar ger blesañ n'eo ket navez ar yezh na tost da vezañ. Sellit ouzh GERIADUR ISTOREL Roparz Hemon, paj.106 hag e welot menegit ar C'hatolikon, hep komz eus ar gerioù all Bles (où), blesadur.

Evit ar ger BLES e kaver anezhañ e Kernev hag e Bro-Wanod, da vihanañ! Dre-se e kav din e c'heller diskurpul-kaer "broadelañ" an holl c'herioù-mañ: BLES, BLESAN, BLESADUR, BLESADENN, EN EM VLESAÑ hag all.

Ha neuze eus a belec'h e teu ar galleg e-unan ? (1)

*

Ur ger hag a vefe mat da studiañ da heul ar ger BLESAN e vefe ar ger MUNTRAÑ ha MUNTRE. Sebedennet ez on: bet chomet o klevout ur vaouez kozh eus Bulien o c'houlenn diganin petra'oa ar ger MUNTRE-se bet implijet en ur pennad war ar GOULMIG. Ha bezañ ar ger e gourc'hemennoù Doue I (cf a-us). Hag ur vaouez kozh all, tremen 80 vloaz o tiskleriañ " Me'ouie a-walc'h e oa kement-se ober poan da vat, gwaskañ da vat unan bennak ! " (2)

KLERG

(I) Adkrivañ a ran amañ evit ar re o devozo c'hoant da studiañ perveshoc'h ar ger BLES ar pezh a lavar ERNOD an e c'h-Gloseaire paj.70 :

Blec, péché, D,129; bleczaff, blesser, Cb, v.gor, blessa Cat. imp.56 part.bleczet H 45; BLECZADUR action de blesser 50. B Van.Blesse, m. blessure, plaie, Choës 68, au fig.17, pl. blesseu 181, Voir REV. Celt.XI,354.

O vezañ n'emañ ket ganin ar REVUE CELTIQUE n'hallan ket lavarout petra eo ar studiaden menegit amañ.

(2) Evit GLOAZ id. Paj.261 ha Dict.Etymologique paj.295.

Sav Breizh

Perroz d'ar 1^{añ} a viz Eost 1968

Kenvroad ker

Ho teurvezet kavout amañ a-gevret testenn vrezhonek "Kemennadur Dispac'h Breizh" a zo diazez kelennadurezh ar strollad "SAV BREIZH". Plijet e vefemp mar befe embannet en ho kelaouenn, ha pa ve gant un notenn o tisplegañ hag abeg a gavit ennañ pe get Hoc'h ali diwar e benn a vo deut mat ha studiet pizh ganeomp. Ganeoc'h a greiz kalon evit Breizh

Evit ar C'huzul Kreiz
Ar Pennsekretour. Y.J.

KEMENNADUR DISPAC'H BREIZH (1)

Emañ Breizh o vont da goll. Ar gouerien evit dezho bezañ graet strivoù dispar d'en em vodernaat 'zo war-nes bezañ rivinet, al labouradegoù a vez serret an eil war-lerc'h eben, an embregerezhioù breton diwezhañ a zeu da vezañ mestroniet gant an trustoù, ar Brezhoneg argaset diouzh ar vuhez foran a ya bemdeiz war-gil, POBL VREIZH, RET DEZHI DIVROAÑ A VILIADOÙ 'ZO WAR VAR HE BUHEZ.

Poblañs Vreizh hag a zo deut da gompren an dañjer-se a stourm en un doare taer, feuls a-wechoù. Aze emañ orin displegadegoù ar gouerien hag ar vicherourien, koulz hag hini taolioù-tarzh ar mizioù tremenet. Emañ Breizh hiziv en ur stad rakdispac'hel, ha da gredañ eo e tevio a-benn nebeut ur marevezh tousemac'h eviti.

An tousemac'h-se n'hell bezañ dezhañ ken frouezh nemet gwa-shaat c'hoazh diaesterioù ar Vretoned ma ne vez ket kaset youl-vevañ Pobl Vreizh war an dachenn bolitikel, ha ma na vez ket displeget ha bleniet gant un aozadur politikel gwirion

(1) Ar gostezenn vroadelour nevez-se SAV-BREIZH a ra gant an div yezh galleg ha brezhoneg en he c'hemennadurioù. Ar yezh peur-unvan, na petra'ta, he deus dibabet. Ar c'hemennadur a voulomp amañ a ziskouez ez eus tud barrak war ar Geriadur, daoust ma c'hellfed abegañ ur ger bennak amañ hag ahont; met 7 pe 8 'fazi bras e-keñver ar yezhadur hon eus ranket reizhañ en destenn. Mat e vefe sellout eta a-dost ouzh an testennoù, rak a bouez bras hep mar ebet e c'hell donet da vezañ strivoù Sav-Breizh zoken e keñver ar yezh politikel da zont.

x x

Un drevadenn eus an impalaerelezh c'hall eo Breizh. Ar stad trevadennel-se a gas, DRE NATUR, d'an isdiorreadur ha d'an arallekadur: isdiorreadur armerzhel, isdiorreadur armerzhel(a vez), pa vez renet un armerzh evit mad unan estren ha neket evit e hini-efñ; arallekadur kevredigezhel, pa vez lakaet an dud da blegañ d'an darvoudoù armerzhel, e-lec'h lakaat an darvoudoù armerzhel da blegañ d'an dud; arallekadur sevenadural, pa vez aloubet tachenn ur sevenadur gant ur sevandur estren (2)

Disteurel a reomp pep seurt politikerezh kempennadur, a-seurt gant an hini a anver "Aménagement du Territoire" a gav a-walc'h lakaat ur ouel war stad an traoù, en ur stourm ouzh efedoù an isdiorreadur, e-lec'h tennañ kuit ar gwiriziennoù anezhañ. Embann a reomp n'eus ken diskoulm d'ar gudenn vreton nemet kas an drevadennellezh da get ha LAKAAT TONKAD BREIZH ETRA DAOUARN AR VRETONED.

x

PEZH A FELL DEOMP EO DISKAR AN URZH C'HALL E BREIZH HA LAKAAT EN HE LEC'H UN URZH VRETON HAG EUROPAT. Ar revelzui hollek-se a c'houlenn ma vo diazezet ur GALLOUD BRETON a gavo e ster e savidigezh ur Stad Vreton Demokratek ha Sokial.

Nac'h a reomp bezañ touellet gant seblantoù dister ha furmoù goullou. N'eus talvoudegezh ebet d'ar savadurioù politikel nemet diouzh an doare ma reer ganto. Pezh a zo a-bouez eo ma vo barrak ar Galloud Breton da gas Breizh d'an diorreadur klok.

Evit-se e vo ret urzhiañ:

- beli ar Stad Vreton war bep kevrenn isdiorreet, dreist-holl dre vroadelaet ar binvioù armerzhel ha sevenadurel piaouet gant nerzhioù an drevadennellezh koulz ha kevrennoù-diazez buhez Vreizh, dre aozañ evezherezh ar postañ-arc'hant ha savidigezh ur raktres demokratek

- Gwarez armerzh ha sevenadur Breizh, rak efed ar c'hevazerezh diharz etre unan kreñv hag un all gwanoc'h 'zo lakaat an dibarder da greskiñ etrezo. Ar gwarez-se a chomo ken na vimp trac'h d'an isdiorreadur.

Enebiñ a reomp ouzh an nevez-frankizouriezh kapitalour avel ouzh nep seurt gwaskerezh pe sunerezh ur rann eus ar poblañs gant un all. Fellout a ra deomp kempenn buhez Vreizh hervez reolennoù unvanidigezh an stantoù e kevredadoù-labour, amrenerezh an embregerezhioù hag ar skolioù.

Embann a reomp eo ar Brezhoneg kentañ yezh vroadel Breizh, hêrezh dizilezus an holl Vretoned.

(2) reizhet un temmig ganeomp.

Spi hon eus e c'hello Breizh kemer he lec'h en ur C'hevredad Sokial eus ar Bobloù Europat, nemet enebañ groñs a reomp ouzh ur C'henvarc'had diazezet war ar Roen, nevez-frankizour hag impalaerezhour.

Diskleriañ a reomp hor breudeuriez gant pobloù an Trede Bed, gant an holl gevredigezhioù broadel, gouennel, relijiel gwasket dre ar bed, rak an hevelep stourm a renomp holl.

x

Gervel a reomp an holl Vretoned a gav dezho evel deomp-ni n'eus spi ebet e wellaenn evit Breizh nemet gant ar Reveulzi a ginnigomp, da vont a-du gant ar c'hemennadur-mañ ha :

-1) da skoulmañ darempredoù gant Kuzul-da-C'hortoz SAV BREIZH,

-2) d'en em vodañ, lec'h m'emañ, e Kuzulioù Dispac'h Breizh e sell da zivizout aozadur ha stumm an ober da gas war-raok. (3)

HAG ASAMBLES E SAVIMP BREIZH DA ZONT

Kuzul-da-C'hortoz Sav Breizh
Pennsekretour: E.Jezekel

(3) Kuzulioù Dispac'h ? Pe Strokladoù Dispac'h ??

Kement ha reiñ anarudegezh eus ar pezh a dremen e Breizh eo hon eus embannet ar c'hemennadur a-us. En ur seurt kemen- nadur ez eo diges evel just, merkañ spis ha sklaer pep tra.

An dilinennadoù : Beli ar Stad Vreton h.a. a zo da vezañ fraeshaet, na petra'ta. Ar frazenn : Fellout a ra deomp kempenn buhez Vreizh hervez reolennoù unvanidigezh an atantoù e kevredadoù-labour, n'eo ket splann-splann kennebeut, nemet e c'hell ar yezh bezañ kaoz d'an displannder-se. O vezañ n'e-mañ ar galleg ganimp n'emaomp ket evit keñveriañ; moarvat e vinner lavarout : Fellout... hervez pennreolennoù'zo (??) : unvanidigezh an atantoù h.a. Tra pe dra, ne vern penaos, a zo a-dreuz eno.

Ne domp ket sot-piññ kennebeut gant kement-se a c'herioù difetis, met da bleal gant ar seurt menozioù e ranker degemer meur a hini moarvat... Hogen ar pezh a zo sur, awenet ez eo ar c'hemennadur gant ur spered yac'h o tiouganef berzh-mat d'ar Gostezenn nevez.

bopig

Rouz lufus evel ur gistinenn. Tammiket a dakonoù blev erc'hant. Un disterig lost. Div skouarn hir o fiñval a bep tu d'ar penn fin ha speredek. Daoulaged acur-teuz karget a vadelezh. Setu va c'hi kentañ. Ur Spagnol Breizhat a ouenn c'hlan.

Graet (1) oa bet deomp kreñnig dija. Amezeien va mamm, tud pizh ha skrag, n'houlent ket magañ ur c'hi na servije da netra. Int eo o doa dezhañ un anv ken droch. Klasket hon eus lakaat un tamm liv brezhonek war ar " Bobi "-se. Met, brezhonekaet pe get, ne oa ket gwall vrav e-skoaz kaerder dibar al loen.

Bevañ'raemp d'ar c'houlz-se, e ti va mamm. Ur rannidi, e-kreiz ur geriadenn hep an distarik liorz dezhi. N'eo ket aes sevel seurt chas hag o mirout sioul en ur rannidi! Gant an amzer, ober a rae hor c'hi e gresk. Ma peogwir e kase dent (2), an nebeutañ tra dezhañ 'oa ober taolioù esae ganto! Va mamm o tistreiñ eus an ofe- renn ur wech, a glaskas pell hanter all he chasona- uenn. Gallet he doa dastum ar brzhonoù en trepas. Ha me! Tost din bezañ paket un taol-gwad pa gavis rideoz tul broudet ar sal vras, an dantele- zhenn gaer graet gant an dorn, aet da chelpi ! Kouannaret' oan war e lerc'h en deiz-se. Gourdrouz! Azezet war e dalbok dirazon, e benn stouet a gostez, sellout e rae ouzhin, ar souezh, ar sebez bras an e zaoulagad sklaer. Santout a rae en doa graet un dra falloc'h eget ar boaz pemdeziek, met evitañ, dantelezh pe votoù, peseurt diforc'h ?

Va mam, mouezh ar furnez, da samon din :

" An dra-se, emichañs, a zesko deoc'h diwar ho koust! Ma ker memes, dastum kement loen saveteet gant an Tad Noe en ho til Propoc'h 've deoc'h klask an dizober eus ar c'hi-se, a-raok ma vo drailhet kement tra vat hoc'h eus!"

An dizober eus Bopig ? Aes'oa da lavarout. Re ziwezhat! Keme- ret en doa e lec'h em c'halon. Bez'e e c'hellfe debriñ holl zante- lezhioù an ti pa ne vefan ket war soñj. Petra eo se e-keñver migno- niesz ur gwir geneil feal ? Fealañ n'am eus bet biskoazh em buhez.

*

Kouezhas'reas mamm klañv da vat. Klañv da vervel. War washaat bemdez e-pad daou viiz.

- Emaon o vont da vervel hopdale! emezi din un noz. Komz a

raemp kenetrezomp eus ar marv 'doug an novezhioù-beilh a dre-
menen ganti. Perak ar spont dirazañ deut hiziv war ar Vretoned?
Levezon sec'h ar spered latin ? Daoust hag ez eus er bed ur bobl
hag he deus savet d'ar marv kement a gaerderioù? " Mojenn an
Ankoù "gant ar Braz! Hag en hor beredoù gronnet tro-dro d'an ili-
zoù (ar bev hag ar marv stag ha stag bepred), ar c'harnelioù
kizallet er graunvaen! Bremañ avat, arabat komz ken anezhañ,
arabat, arabat! An tec'h !

"- Gouzout a rit perak e lavaran ne vin mui pell geneoc'h?
Ar c'hi!... Tri devezh'zo'mañ dindan va gwele nes an disterañ
boued gantañ. Ek ivez a oar!"

Gant kement a labour, gant kement a drubuilhoù hag a rann-
galon, penaos soursial aketus eus Bopig ? Penaos ober bremañ
avat, da dennañ anezhañ a-zindan ar gwele ha d'e gas d'am heul
d'ar gegin ? Amzer ha poar gollat. Klasket em eus neuze e vagon
eno. Dindan ar gwele. Ha mamm, ar marv etre he dent. Tra d'ober.
War yun eo chomet ur sizhun rik-ha-rik. Difluket eo kerkent ha
serret gant mamm he daoulagad da vikan. E peseurt stad truezus!
Ur spes. Ar blev hir, lous, staget kenetrezo!

Goude al labour en ti war-dro mamm ha war-dro va bugaligoù,
p'am eus gallet azezañ e kornig ar prenestr (e kador-vrec'h
va mamm, dres), ar boan moustrat a geit all a gemeras he digoll.
Leñvañ. Difronkañ. Kriz eo, kriz-tre kuitaat ur vamm.

Un taolig trumm war va daoulin. Un eil kreñvoc'h. Un trede
gant ivinoù stignet. Sevel a ris va fenn. An daeroù puilh o
ruilhal war va dremm. Ar c'hi, e zeou bav harpet war ar gador,
e sec'he an daeroù a daolioù-taod munut. Chomet eo ganin d'am
frealziñ, e benn war va skoaz. Va c'heneil! Goude distro va
gwaz - ha ni kemeret hon amzer gant ar mortuaj, - en deus graet
war-dro va bugale, aketus d'o diwall

*

Kuitaat em eus ti mamm. Va bugaleaj, va yaouankiz. Troet
ur bajenn eus levr va buhez. Aet da vale bro. Ar c'hi d'hon
heul.

Spont hag enkrez Bopig gant ar beajoù en tren! Paeñ'rae
hanter plas evit gallout beajiñ geneomp er c'hombod. Ur bugel
ouzhpenn!

*

E Sant-Bened-ar-Mor eo e santis e wed chaseour o kemer
lañs. Ar c'higer a gontas din en doa Bopig lazhet daou gonikl en
deiz a-raok:

- Met, emezon, ar c'hi-se n'eo ket bet embreget! Se ne c'hell

bezañ."

- Ur vezh, un torfed chom (3) ur seurt loen nes chaseall! Gwelat
em eus anezhañ o redek dec'h. Gwerzhet din anezhañ, Itron."
- Me! Gwerzhañ Bopig ? O paour-kaezh den, n'oc'h ket tre ho kwad
mat, er mintin-mañ ? Perak neuze chom hep gwerzhañ deoc'h va bugale
ivez ! "

Gwerzhañ Bopig! D, gwashañ ! Hag adarre hon eus dilojet. Na
chas na bugale n'int gwall blijet gant seurt degouezh. Merzhet em
eus o deus ezhomm bras eus areoù, boazioù, gwiadet start eus an eil
devezh d'egile.

Aet omp un deiz betek kêr, Bopig ha me. Ul lev bale. Treiñ,
distreiñ war ar blasenn. Ar c'hi, fri-furch, en em silañ dizehan
etre an teltennoù. Marc'had bras'oa. Gouezet em eus diouzhtu pa
n'eo mui deut em c'hichen goude pemp munutenn. Disub oa atav
geneomp. N'on bet morse evit gouzañve vefa staget ur c'hi a penn ur
chadenn. Karout a ran re ar frankiz, zoken evit ar chas! Un tach
ouzhpenn, neketa ? Neuze gervel. Klask ha diglask war leurenn ar
marc'had. Diskleriañ e ti an archerien. Ha dont d'ar gêr ponner va
c'halon. Kollet Bopig. Kollet ? Nann. Laeret. Setu ar pezh em boa
komprenet.

Daou zevezh. Tri, pevar. Pemp. Keloù ebet. Koulskoude, gou-
zout mat a raen ne oa ket marv. Gouzout a ouien e stourme, ha
sikour anezhañ gant holl nerzh va spered a felle din. Mont betek
kêr ur wech ouzhpenn. Aze em eus kavet anezhañ o paouez degouezhout
e ti ur vignonez. Ledet penn de benn ag e gorf (4) war ar pañchod.

Betek an ti du-mañ n'en dije ket gallet...Re ball. Ken faezhet
ha ma oa ar paour. Sevel a reas e benn kaer. Aet divi d'am saludiñ.
Hag astennet kerkent. Douget hon eus anezhañ d'ar gêr goude m'eo
chomet daou zevezh difiñv e ti hor c'heneilez. Ur bannig dour
sklaer a lonke. Setu holl.

"- Va Bopig karet, petra'zo bet graet dit'ta, va Doue ?"

Ouzh unan eus e bivier arc'hantet e stleje atav an tamm kordenn
dev malet gantañ etre e skilfoù evit en em e zieubiñ. Eus pelac'h
e tec'he gant kement a zrez luziet en e vlev hir ? An divskouarn
roget, ar pivier goulliet don, ar c'horf a-bezh diroget gant drain
orjal. Kalzik a hent en doa troc'het evit tizhout ar gêr. Ha kalzik
poan evit gallout erruout !

Komz a raen dezhañ bemdez eus ar veaj spontus. Kement ger a
c'hoarie warnañ. Marteze em bije dleet lezel anezhañ da zisoñjal..
Marteze.

"- Bopig, va mignon, lavar din pelac'h out bet sparlet ha

52
bazhataet ken kriz. Piv'ta ez int, an dud digalon o deus staget ac'hanout 'vel ur sklav, te boazet d'ar vuhez dieub ? Læret out bet, neketa ?... Kaset pell ? En ur c'harr?... Tec'het out, va c'hi !... Distro out ganeomp. Echu eo, Bopig. Distro out d'az ti! Echu eo...Echu..."

Leñvañ'rae goustad o klask respont d'am goulennoù.
"- Bopig, o Bopig, perak ne c'hellez ket respont din...Perak ne gomzez ket evel don."

Gwelet em eus neuze an daeroù e daoulagad va c'hi. O risklañ war va daouarn. O va Doue, perak n'hoc'h eus ket graet (1) ar gomz d'ar chas! Lealoc'h int eget an dud.

Morse n'hon eus gouezet piv'oa an den fallakr a-walc'h evit ober da Bopig gouzañv kement. Eñ, ken leal ha ken madelezhus, n'eo bet mui heñvel goude. E zaoulagad aour en em garge alies a velkoni hag a spont. Kollet en doa fiziañs...Desket gantañ, siwazh, anavezout ar gasoni, an droukrañs, eñ ivez! Kalz haug a stleje en e sell... Kalz enkrez en e galon moarvat. Abeg e varv...

*

Aet oamp d'ur pask kentañ e maez a gêr. E ti mignonned deomp, disoursi keer eus loened. Distroet diwezhat tre en noz. Ar wech kentañ'oa da Bopig chom evel-se e-unan-penn en ti. Sparlet.

Pa glevas va mouezh a drefiv dor ar c'harri, va Doue nag a choloni! Ne oan ket evit digeriñ an nor-se, gant ar c'hirri chomet a-sav dirak. Klask ar perc'henn... Dale. Bopig o penn-follañ. Met, pa gavas an digor... Ewel un tenn er-maez, me war e lerc'h. En aner, rak redek a ouie! Heuliet en doa hor c'harr ur wech 'doug ul lev hanter. 70 km. an eur !

Quzhpenn redek, en degouezh-mañ, va c'hi n'anaveze mui netra na den, ne wels na ne gleve! Tec'hout. Tec'hout goude ar sparlet. Advevañ a rae an devezhioù kent, chomet ennañ 'vel ur gouli poanius. Tec'hout...

Adarre klask ha diglask e pevar c'horn va bed hag a hini. Fiziout e anv droch d'ar pevar avel mut...Kerzhout, en noz du-pod, dre hentoù skrap-diskrap euc'h (5) an tornaod. Respont ebet! Aze 'oa koulskoude. Hag en santout a raen e don va c'halon. Gervel adarre, gervel ha gervel bepred. Netra na fiñve. E nep lec'h. Da gaout an ti. Gant va glac'har. Echu! Ne zistroje biken! Gwir. N'am eus mui e welet. Se ivez a ouien.

Douaret eo e liorz an ti-se e-bign war an tornaod. Nec'het

an dud o kavout d'ar mintin, ar c'hi kaer marv war o douar. Kontammet gant boued da zistrujañ lern. Kousket eo en ul lec'h meurdeus. Luskellet e relegoù noz-deiz gant mouezh ar mor divent. E peoc'h !

*
*
*

Pell war e lerc'h hon eus bet ur c'hi all. Ken kaer ha Bopig. Disheñvel. Ur c'hi-bleiz malinad! Lazhet gant ur c'harr dirak hon ti. Stourmet hor boa evit e bareal, taget spontus'vel ma oa gant " kleñved Carré ", dibardon peurliesañ. Chomet e oa dall pe dost! Ha drouk ivez. N'eus ket pell e skrive deomp ur mignon skosat. Komz a rae dioutañ war e lizher... Debret en doa ar c'hi unan eus e ziv votez! Soñjit! Botez ur skosad! A feiz!!!

Beziet eo hemañ en hon liorzbig deomp. Hag ewel just, doan ha daeroù daoust d'ar gredenn 'zo er vro-mañ " eo fall yudal d'ar chas; pec'hed eo. Ne leñver nemet d'an dud". Piv a zisplego din peseurt levezon drank a zo gant seurt kredenn ? Ur restad spered jansenisted ? Pec'hed... Pec'hed... Pep tra 'zo pec'hed'ta, va Doue ?

Prennañ start ar galon ouzh ar chas ? Mil gwech uheloc'h e kavan deskiñ d'ar vugale karout al loened, o doujañ, o gwareziñ. Daoust ha n'eo ket ar c'hi gwellañ mignon an den ?

Rak ar c'hi, eñ, ne vez morse trubard.

24/6/68

F.KERVENDAL

- (1) Graet : roet, e rannyezh Douarnenez
- (2) e kase dent : kaout dent; donet da vezañ brasoc'h o komz eus ur bugel
- (3) chom : lezel, e rannyezh Douarnenez
- (4) Penn da benn ag e qorf: id. D'ar yezhourion da studiañ an drolavar-se, da welout a reizh eo.
- (5) Euc'h : a-us, cf a-zioc'h h.a.

EVEZHIADENN

Per Denez en deus kinniget un dezenn a Zoktorelezh da SKOL-VEUR Roazhon, diwar-benn rannyezh Douarnenez. Degemeret eo bet gant ar meneg mat-tre (Hor gourc'hemennoù c'hwekañ dezheñ) Pa vo embannet e labour e vo diskleriet ar c'hudennoù a zamvegegomp en notennoù a-us, gant kudennoù all niveruzik !

breizhiz a-Ouenn

MARK AR BERR

D'an 2 a viz Eost 1968 da vare serr-noz edo Mark ar Berr o tistreiñ d'ar gêr; en ur pleg e traofi ar c'hrao, setu ar wetur o tere'hel gant he hent hag o kouezhañ er mor dres d'ar c'houlz ma oa hemañ o tonet d'al laez. **Gwreg Mark** hag a oa gantañ a zeuas a-benn d'en em dennañ kuit dre lost ar wetur. Mark avat, pa voe tennet er-maez eus ar c'harr-tan a oa marv, met o vezañ ma oa fall e galon un tamm'oa e tamaller e varv d'ur fallaenn kentoc'h eget d'ar mor.

Aet eo kuit diouzhimp eta hor c'heneil Mark ar Berr. An Emsav breizhat a zo o paouez koll ur stourmer kalonek, un den a feiz kristen gwirion. Anavezet e oa Mark dre Vreizh a-bezh gant holl dud an Emsav a zo ken liesseurt hiziv; c'hoant bras en doa e vije deuet an Emsav ouzhpenn ur strollad kamaladed vat ur gwir diegezh breizhat, liammet start etrezo an izili anezhañ. **Mark** ne oa ket evit degemer, mod ebet, an dizunvaniezh a ra he reuz el lodenn vrasañ eus an Emsav.

Bet eo bet ur rannvroeler a-raok ar brezel-bed diwezhañ, doare U.R.B. ha d'ar c'houlz-se a soñje dezhañ e oa re daer tud Breizh Atav, hag e vije frouezhusoc'h evit Breizh chom hep feukañ re ur bobl bet lakaet dindan gezelgê gant Bro-C'hall war-lerc'h meur a gentved a faezhidigezh hag a sklavelezh. Hogen unan eus izili oberiantañ ar Bleun-Brug e oa ivez: anat eo en deus bet Y.V. Perrot ul levezon dibar warnañ evel m'en deus bet war veur a Vreizhad all. Dre-se p'eo deuet ar brezel, n'eo ket gant plijadur ez eo aet da soudard e-pad un nebeut mizioù. Da heul ar brezel, o vezañ ma oa ali n'eus ket ur mare da stourm evit Breizh, hogen e ranker stourm bepred eviti, Mark, evel un toullad mat a vroadelourien all, en deus gouzafvet trubuilhoù a bep doare: toullbac'h, dizenor " broadel ", e vadoù lamet digantañ.

Bepred laouen hag hegarat, daoust d'an trubuilhoù-se ha d'an digesterioù diniver en deus anavezet a-hed e vuhez, e veze Mark degemerus d'an holl, ha brokus-kenañ e roe skodennoù da veur a gevrenn eus an Emsav.

Yaouank a spered e vourre kalz en em wiskañ gant dilhad sklaer, doare tweed, ha gant e zremm damruz, e vlev gwenn hag e galabousenn lakaet a-blad war e benn, e oa dezhañ tres ur c'hembread kozh, a lavare e vignoned - se ne oa ket evit

displijout dezhañ, evel just.

Eñ eo en doa savet " Unavniezh Koad-Kev " hag ar pirc'hirinaj bloaziek en enor da Y.V. Perrot, leun ma oa azaouez evitañ. Ha pa veze goulennet gantañ ober muioc'h a vruderezh en-dro d'ar pirc'hirinaj e responte ne oa ket ret ober! Da bep brogarour da c'houlzout e vez bep bloaz, da lun Fask, un emvod e parrez Skrignag e-lec'h ma vez unanet e-tal ar Groaz Ruz ha war vez Y.V. Perrot eñvor ar Breizhad meur-mañ gant eñvor an harozed a zo marvet evit Iwerzhon ha Breizh.

Ha pignet war ar c'hleuz, tostit d'ar Groaz Ruz, gant pegement a drivliad, ken na grene, e lenne roll hor c'henvroiz o doa gouzafvet o stourm evit o bro hag a oa marvet abaoe ar brezel-bed diwezhañ.

Ar groaz-se en doa lakaet sevel e-lec'h ma oa bet drouklazhet Y.V. Perrot, war un dechennig-douar en doa prenet e-unan. Ur mennad dispar e oa bet hag a ziskouez a-berzh Mark war un dro ijin ha tro-spered kristen ha breizhat-taer.

Er-maez eus e vicher m'en doa diskuliet enni un ampartiz vras evel gwiaer, ne oa ket Mark e skiant hag a ouiziegezh uhel. Ur stourmer e oa dreist pep tra. Pezh a gonte evitañ, kuit a ren-deleoù didermen ha didalvez, a oa bezañ efedus. Ne c'helle ket kompren perak ne oa ket a skol vrezhonek e Kemper, ker-benn Kernev, pa na veze ket kavet ur c'helenner. Ha setu Mark oc'h en em lakaat da galenner brezhonek e " Ti ar Vro " d'e 68 vloaz hag oc'h ober berzh, ken bev e oa e gomz : " N'emaomp ket en ur gwir skol, a lavare. Etre mignoned emamp amañ, kuit a ardoù ".

Mignoniezh, karantez Doue, Breizh hag an nesañ: sed aze perzhioù-mat Mark ar Berr a zalc'himp don en hor c'halon ar soñj anezhañ. Un niver bras a vignoned a oa deuet d'e obidoù en iliz kaer Lomaria, e Kemper; fellout a rae dezho reiñ ur brouenn aus ar bri, eus an istim, a zougant d'o c'henvroad. Daoust ma ranker an-zav e oa graet un tamm strivadenn evit reiñ un ofis o tereoù ouz ar Breizhad glan ma oa Mark, dav eo lavarout ne oa ket gwell blijus, na gwall-vourrus, na gwell-seven m'eus aon, reiñ dimp da glevout Prefas, Pedenn Eukaristiel, Pater Noster zoken, en ur yezh ha na oa ket hini Breizh-Izel. Evel un digoll eta e oa bet a lid diwezhañ en-dro da serj Mark er vered, gant ar c'henvroiz lavaret dezhañ gant Per Denez, ur bedennig gant Klêrg da Itron Varia Koad-Kev, ha salud ar " Gwenn-ha-Du ".

Plijet gant an Aotrou Doue degemer hor mignon Mark en e varadoz,

Yann Ar BEG.

En abeg d'an darvoudoù o devoa lakaet mesk ha strafuilh e Bro-C'hall hag e Breizh, e miz Mae hag e miz Mezheven hevlene ez eus bet gouezet gant dilerc'h e oa aet Teofil Jeusset da Anaon. Gallout a reer lavarout ez eo unan eus merzherion ar Vro, hag e efforenoù-prizon embannet war al LIAMM a zougo testeni a-du gantañ eus e vrogarantez. Un den kizidik-meurbet oa, dreist-holl e bloavezhioù diwezhañ e vuhez, anoazus zoken, met kement en devoa gouzavet, kement a drubuilhoù en deus bet a-raok mervel gant e yec'hed o wanaat, e weled o tisteraat ha diseblanted tudigoù'zo en e gefver ma n'eus ket pealec'h da vezañ souzhet gant se.

Eus Breizh-Uhel e oa ha gouzavet en deus a-~~vehoù~~ e-berzh Breizh-Uheliz, met moarvat muioc'h a-berzh Breizh-Izeliz. Bro-garour taer e oa, poaniet en devoa da zeskif ar yezh ha deuet madik a-walc'h a-benn d'hen ober, ha klasket zoken diwar ali Meven Mordiern adreñ da anvioù-lec'hioù Breizh-Uhel displeberet e-kerz ar c'hantvedoù ar furm a vije bet o hini ma vije chomet bev ar yezh er warlaezioù. Embann a reas e labour war SAV (niv. 27,28,29,30,31, bloavezhioù 1943-194) dinden an titl ESAF BREFZHONEKAAT ANVIOU-LEC'HIOU BREIZH-UHEL. Kement ha diskoazez war un dro pall an oberour en e labour hag e onestiz setu amañ ar raskridig lakaet gantañ e penn e labour (Sav.Nevéz-Amzer 1943, niv.27 paj 63):

" Roll an anvioù-lec'hioù a vo kavet amañ a zo brezhonekaet evit ar wech kentañ. N'eo ket bet aes evidon reiñ o furm-orin evit al lod anezho a oa brezhon. Tennoc'h c'hoazh eo bet al labour evit ar re c'hallek.

Staget em eus ouzh ar reizhskrivadur nevez an anvioù-lec'hioù henvrezhonek. Troet em eus pe kenaozet, kentoc'h, e brezhoneg an anvioù roman.

Stummet em eus ar brasañ niver a anvioù-parrez a c'hellis (hag evidon-me bezañ micherour e-pad an devezh).

Furchet em eus en dielloù kozh, en teskadoù-skridoù, el levrioù a bep seurt - dreist-holl en Istor.

Ne gredañ ket ez eo difazi va labour.Gouzout a ran e oa diaes-trê da ober.

Spi em eus e vo barnet a c'hrad-vat gant ar varatallourien a sello outañ.

Rak fiziañe em eus da gregiñ en ul labour talvoudus evit Dazont Breizh. Ha gant aked em eus labourer. N'em eus ket kavet ar genskroazell em eus goulennet digant ar re varrek war an da-

war an dachenn-se. Mil bennozh avat, d'ar vignoned o deus ken-labouret ganin, - dreist-holl da Wilhelm Berthou-Kerverzioù, ur paotr a gompren gallegerien Vreizh-Uhel."

Pa lenner a-raok ar c'hentskrid-se paj.60.61-62 (op.Cit.) el levrioù en devoa ranket lenn evit sevel e labour, e weler pebezh koustiañs en devoa evel skrivganer: D'Arbois de Jubainville,J. Loth, Aurelian Corson, Arzhur de la Borderie,Longnon, Dottin, Abad Guilletin de Corson, Herri Kilgarz (Quilgars),Roszansweig, Geslin de Bourgogne.

Barnet digar ha goapaet zoken en anv an " Istor " dre ma venne raskañ koulz lavarout ar c'hantvedoù-se ma oa bet Breizh-Uhel o tigeltiekaet pe o tivrezhonekaet tamm ha tamm. Dibouez-tre ez eo an abegadenn-se dirak selloù ar Vretoned nevez a fell dezho neket bezañ sachet da heul an istor, met sturiañ en Istor-se evit sevel en-dro Breizh en he splenner.

E-kefver ar stummoù roet d'an anvioù-lec'hioù a Vreizh-Uhel ez eus, hep mar ebet, darn hag a vo diaes da zegemerout. Rak n'ouzer ket bep tro orin ar gerioù nag o stummoù en amzer gozh. Dre-se e chom labour d'ober c'hoazh, ha dav e vo furchal el levraouegoù, en dielloù kozh en ur ziwall diouzh martezeadennoù diziazez. Met e gwirionez, euzh en devoa Teofil Jeusset ouzh an ijinadennoù, rak setu ar pezh a skrive d'an 23 a vizMere 63 :

" Diwar-benn an anvioù-lec'hioù: em eus c'hoast d'ho lezel holl da bledif ganto. P'am eus kroget d'o studiañ, nikun n'an deus asantet va skoazellañ. Me bremañ pep hini en deus e soñj...Grit, Aotronez, ar pezh a gerot. Hogen n'ankounac'hait ket e oa daou ouizieg hag a bleustre war an dachenn-se arazon: Loth ha Meven Mordiern. Marv e oa Loth; Meven Mordiern avat, en deus lennet penn-da-benn va labour embannet gant SAV..."

Ha diwar an hevelep lizher " Kludet war ur gwel, e skriven deoc'h. Abaoe an 30 a viz Gwengolo emaan amañ. Teir gostazenn dorret - unan he deus toullt ar skevent - ;pleg ar vorzhed a zo bet roget ha n'hellan ken jilgemmat zoken... Gwashat tra: ar gwallzarvoud a zo c'hoarvezet e Fontevraud. Aet e oan di gant Paol ar Rest, ha petra 'fell deoc'h?... Ken fromet e oan en ur welout adarre an abati-se bet saotre gant galeourion wizion, ha glanaet (?) gant ar paourkaezh reuzeudion kondaonet e 1944-46 ma' z on kouezhet en ur foz don ha meinak..."

Unan e geras Breizh hag a c'houzañvas poanioù garv eviti, setu Teofil Jeusset. Trawalc'h evit gonit istim ha kerantez ar Vro-garourion, ha kacut ar gwir da gaut ur bedennig
(Doue d'e bardono 1)

Kendalc'h Keltiek Foujeka (20-25 a viz EOST 1968.)

A-walc'h eo ober ur sell war roll-labour ar C'HENDALC'H hag ouzh ar c'helaouennoù evit kompren e oa diaes danevelloù klok. Lod ne welont nemet an tu diavaez ha folkloriel - koefoù ha kiltoù - hag ar re all a skriv diwar-benn an nabeudig preze-gennoù hepken. Klasket em eus heuliañ ha gwelout pep tra met di-c'hallus e oa din bezañ a dapu lec'h war un dro ha chom war droad betek 3 eur diouzh ar beure ! Ne gomzin en danevell-mañ nemet eus ar pezh am eus klevet ha gwelet hag evel m'eo bet klevet pe walet ganin.

STAD AN TRAOU ER BROIOU KELTIEK

Ar rumad kentañ eus ar prezegennoù a oa diwar-benn " Stad an Traoù er Broioù Keltiek ". N'em eus klevet nemet 4 dre ma oa bet ret din kuitaat ar sel evit aozañ an droidigezh. An hini gentañ, hini Jac L. Williams, kelennar war an Deskadurezh e Skol-Veur Aberystwyth a oa bet an hini dalvoudusañ. Displegañ a reas emañ ar C'hembraeg bremañ war hent an trec'h, evel m'hen diskouez ar berzh a re al Levrioù Kembraek a-drugarez da labour ar skolioù ha d'ar c'hentelioù roet dre c'henoù pe dre Radio ha Skinwel d'an dud vras. Na pell emamp emañ diouzh fals-venozioù tud yaouank eus Skol-Veur Brest na welont er Brezhoneg nemet danvez-studi evit ar quiziñon.

Ar C'hontrol O'Neill, kadoriad Kuzul an Iwerzhoneg, ne oa ket sur-mat a-du ganto hag a-du gant o mestr: " Al labour da seveniñ, emezañ, a zo diaes met ne oa ket bet divizet dasorc'hiñ ar yezh dre ma oa aes, met dre ma oa ret " En Iwerzhon ivez emeur war hent an trec'h^{en} idesped da zroukkozoù enebourion ar yezh hag ar vro. 700.000 a dud a vefe barrek da gomz ar yezh - 27% eus ar boblañs - tra ne deus nemet 656.000 barrek da gomz kembraeg: 12,6 % (Niveradeg 1961, tud a-us da 3 bloaz) Er goañv tremenet 250.000 den o deus heuliet kentelioù iwerzhoneg ar Skinwel, roet 5 mn bemdeiz. Klub al Levrioù evit an dud vras hag hini an dud yaouank o deus pep hini 2 000 ezel. 12.000 krennard etre 12 ha 18 vloaz a vefe kaset bep bloaz d'an em varrekaat war ar yezh er Gaeltacht pe ar Gouezelegva. Setu petra a c'heller ober pa vezer dieub.

N'eo ket ken frealzus an doareoù er broioù keltiek all e-keñver ar yezh. Gorrek e kresk niver an dud dedennet gant ar yezh e MANAV - hag a fell dezhi muioc'h-mui bezañ dizalc'h diouzh Bro-Saoz -, hag e KERNEV-VEUR. War vihanaat ez niver ar ouezelagerieb e BRO-SKOS ha n'eo ket sur ouzhpenn e vefe diskoulmet ar gudenn pa vo ar gouarnamant etre daouarn ar Vroadelourion. Dam anezho ne dint ket chalet gant ar yezh evel m'hen diskouez an istorig-mañ : Pa voe aet an Itron Winifred Ewing da gannedez da Londrez, he doa resevet ur pellskrud en ur yezh ne gomprens ket: " Se'zo kembraeg", emezi. Siwazh eviti! ar pellskrud a oa e Gouezeleg Bro-Skos !

Hor mignon Yann TALBOT, rener Kuzul ar Brezhoneg, a zisplegas da gentañ stad an traoù e BREIZH e-keñver an ekonomiezh, ar politikerezh hag ar sevenadurezh ha d'an eil labour an Emsav war an holl dachennoù-se. Un danevell sklaser, resis, leal, hag ivez, daoust d'ar c'hwitadennoù, kalonekaus pa soñjer e niver ar strolladoù, en emroüsted an dud hag en emdroadur hon amzer.

AN ISTOR HAG AR VRO.

N'eus forzh penaos, an eil rumad prezegennoù diwar-benn an " Istor hag ar Vro " a bourveze danvez-diaez evit ar stourm broadel, pep hini en he stumm. Prezegenn an Aotrou BOURDELLEZ eo a blijas ar muiañ moarvat d'ar Vretoned dre ma tisplegas penaos e c'hell an istor sklerijennañ hor stourm ouzh hor skoazellañ da respont d'un nebeut goulennoù evel ar re-mañ : " Petra eo ar Vro, an Istor ? Pelec'h emañ harzoù ar Vro ? Ha bez'ez eo Braizh ur Vro, ur Bobl ? Ha bez' he deus Breizh un Istor c'hoazh ? Pessurt implij ober eus an Istor ? "

An Ao.Hywel D.ROBERTS, kelennar e Skol Normal Kêrdiz, a gemeras e skouerioù en istor e vro hag a bouezas dreist-holl war ar gwir hag an ezhomm he deus da gaout ur gouarnamant dezhi evit kenderc'hel da vevañ. an Tad O'LAOGHAIRE, S.I. eus Dulenn, nevez degemeret da Zoktor war al Lizhiri, a gomzas e Brezhoneg hag en Iwerzhoneg eus talvoudgezh anaoudegezh hec'h istor evit ur bobl, rak evel ma lavar ar c'hrennlavar kembraek :

" Tyf yr hyn sydd o'r hyn a fu " (Ar pezh a zo a gresk diwar ar pezh a voe).

An Aotrou Hugh TRINERS eus Kernev-Veur a roas un diverradur eus istor e vro. D'e veno e vefe bet savetaat ar yezh marteze m'ha defe degemeret ar bobl er XVI-vet kantved an droidigezh eus ar Prayer Book a ginniget dezhi.

Ne oa ket bet tu din da glevout prezegennoù dileuridi Bro-Skos ha Manav. D'ar mare-se, d'ar gwener beure etre 9 hag 11 eur, e oan va-unan en ti-kêr o komz diwar-benn Kelennerzh ar C'hembraeg. Pemp prezegenn c'hallek a oa bet prientet e galleg: unan gant Ronan Huan diwar-benn Istor hol Lennegezh, unan gant an Ao. Bourdellez diwar-benn an Arboellerezh, unan gant an Tad Chardronnet diwar-benn an Istor, unan gant Arzel Even diwar-benn ar broioù keltiek, ha va hini. Aozet e oant bet eta gant tud hag a anavez mat o danvez. Siwazh! n'hellan komz nemet diwar-benn va hini ! Kalz a dud, en o zouez mistri-skol, dedennet gant an destenn. Anat eo ne fell ket d'ar Vretoned ober gant o yezh un danvez-studi mat hepken evit ar Skolioù-Meur!

BALEADENNOU

Goude bezañ chouket er penn kement a zeskamant, e oa deut mat gant an holl baleadennoù an abardaevzh. E St Maloù e oamp bet holl sebezet-mik n'eo ket hepken gant ar rampazioù kinklet gant bannieloù ar broioù keltiek, met gant komzoù tomm ar Jeneral Vallérie. Eñ ivez a zeuas, d'ar gwener war-lerc'h, da Sant Albin an Hiliber, da zisplegañ eeun ha sklaer doare an emgann. Bagad bradet Lann-Doue eus ar 41^{vet} R.I. a oa deuet da enoriñ gant o banniel gwenn ha du hag o sec'hier-binioù, ar soudarded marvet eno: 6000 a soudarded kouzhet eno!o tifenn frankizioù Breizh. An dour a oa em daoulagad e-doug an ambrougdeg ha kan er Bro Gozh. Anat eo e kemm an traoù buan e Breizh. Un nebeut mizvezhioù'zo hepken e vefe bet kaset ur bagad poliserien gant karnedoù ha binvioù-luc'hskeudenniñ. Evel ma lavare din ur reporter eus Radio-Eireann" Breizh a zo deut da vezañ bro ar paradoksoù "

An Aotroù Fréville, maer Roazhon, eñ e-unan, a verze kement-se pa lavaras nebeut goude, n'en dije soñjet biñen e vefe bet degouezhet dezhañ degemer ar gendalc'hidi ha kinnig dezho Champagn! Re bell e oa an Naoned, anez, e vefemp bet aet ivez da dañva ar Muskaded ha da blantañ ar " Gwenn-ha-Du " war gestall an Duged: an Aotroù Mörice, ar Maer, a gasas ur pellskrud gourc'hemennoù d'ar C'hendalc'h, ouzh e bediñ da zont di kentañ tro. Anat eo ne fell ket dezhañ e vefe distaget e gêr hag e zepartement diouzh Breizh.

Ret eo din anzav em boa heuliet fall a-walc'h ar valeadenn heñhet dre gêr Foujera. Tomm e oa an amzer ha re ouizieik e oa an displeger evidon hag evit al lodenn vrasañ eus an dud, hag ouzhpenn skuizhus e kaven selaou e gentelioù e teir yezh: Galleg,

Saozneg ha Brezhoneg ! Chomet e oan da varvailhet war letonenn ar C'hastell gant ur c'helenner yaouank eus Bro-Flandrez hag a zo ezel eus un emsav heñvel ouzh B.S.E. O vezañ m'eo diazezet-mat amzer-da-zont e vro, e fell dezhañ lakaat ar re yaouank da bledif gant ar broioù gwasket. Seizh gwec'h eo bet e Breizh-Izel o labourat gant ur strollad tud yaouank. Beajif a reont dre ober aotostop, ha c'hoazh e paeont a-wechoù lod eus o boued. Int kennebest ne fell ket dezho ober gant Breizh ur mirdi.

AN ABADENNOU

An abadennoù kennebest ne oant ket folkloerik hepken. Pedet e oa bet kanerien voden evel Glenmor ha Dafydd Iwan hag e vignon Edward eus Kembre. Ar Vretoned marteze n'o deus ket prizet a-walc'h an darn-mañ. Dafydd Iwan en deus savet e ganaouennoù evit e gevroid hag evit displegañ dezho war besurt tachennoù o deus da stourm. Ezel eo eus " Kevredigezh ar Yezh " hag eus " Plaid Cymru " ha bevañ a ra diwar e vicher a disavour. Un den engouestlet penn-da-benn.

Glenmor a vev evel ur barzh-baleer, donezonet-kaer, gouest da skrivañ traoù padus. Gouest eo da entañ an dud yaouank hag ivez d'o fennfolliñ. Arabat dezho avat, kredif ez eo a-walc'h huchal ur werzenn bennak evel houmañ:

" Le Sous-préfet a été vu
Avec un B Z H eu c... "

Kement-se a zo bugaleaj. Ret eo studiañ start ha labourat gant urzh. Anat eo ivez az eo bet er skol gant ar C'hallaoued ha ne ra nemet o drevezañ gant lod eus e ganaouennoù. Ar Gelted hag ar Vretoned o deus bet a-viskozh muoc'h a zoujañs evit ar plac'h.

Setu perak moarvat e plij din kalz doareoù eeun Andrea ar Gouilh, Soazig an Noblet hag Eliana Kabiten da ganañ hor c'hanaouennoù kozh. N'on ket bet ken plijet gant ar Gabalerien a seblant din artifiñsiel. Bugale an Aotroù Trefor Selway, Kanerien Morgannwg, ha Strollad Dañserien Galed Urdd Gobaith Cymru eus Kêrdiz, a ziskouezas pezh a c'heller ober pa vez ar Skol a-du gant ar yezh... Arabat din memes tra, bezañ dallet gant Kembre hag ankounac'haat kanerien, biniaouerien ha talennerzed BBLEIMOR.

Warlene e oan bet bamet gant e c'horoller yaouank eus Iwerzhon a zafas ouzh son an " uileann-pipe (binioù-ilin), an doare binioù a vez c'hwezhet ennañ gant ar vrec'h. Er bloaz-mañ e oa 3 c'horoller, 2 baotr hag ur plac'h. Displeget eo bet din e teus ganto

korolloù nevez-ijinet a vez desket er skolioù-dañs. Ul lodenn vat eus an abadennoù, e gwirionez, a oa bet dalc'het gant Iwerzhoniz, darn anavezet mat e Breizh evel Roisin hag he merc'h Nessa hag an D-ell Neamhneit de Paor.

Abadenn ar Gwener da noz, en iliz Sant Sulpis, a oa gouestlet, sañset, d'ar sonerezh relijiel. Sañset a lavaran, rak meur a dra a oa bet kanet, gant ar Vretoned da vihanañ, ha na oa ket relijiel tamm ebet. Ar pep plijusañ moarvat a oa bet klevout an Ao. Grand, ograouez en iliz-veur Roazhon, o c'hoari sonerezh Jef Penwenn (Doue d'e bardono !)

En Iliz-se ivez e oa bet kenlidet an OFERENN gant seizh beleg, ha n'eo ket gant nav evel ma skrive en deiz war-lerc'h " Ouest-france " : moarvat en doa kontet en o zouez, an Aotrou Tomaz, rener ar c'han ha prezeger, ha Yann Talbot, an displeger, pe marteze, an Ao. Timothy Morgan, ur beleg englikan hag en doa lennet an Aviel e kembraeg.

Evit ober plijadur d'hor breudeur tramor e oa bet lennet an Abostol en iwerzhoneg hag an Aviel er pemp yezh keltiek all. Pezh a oa bet un tammig re hir, ret eo anzav. An iliz avat, a oa leun-kouch, hag an holl a gane a-drugarez d'al levrioù bet prientet gant BARR-HEOL.

*

A-benn ar sul d'enderv, ne selaoue ket an dud kement ken ar c'han, nemet pa voe tro bugale Trefor Selway. Bravoc'h e kavent mont da evañ bannac'hoù pa da zebriñ silzig paket gant galetez, giz Breizh-Uhel, en ur varvailhat. An abadennoù gwellañ a oa bet d'am soñj hini ar yaou da noz hag hini ar sadorn er c'hastell. N'em boa ket klevet hini ar merc'her: skuizh e oan hag e oan aet da gousket; n'em boa ket kousket kalz en noz e-raok gant jolori ar re yaouank en hunva.

Dav eo moarvat menegiñ un darvoudig a c'hoarvezas e-pad ar c'hoari " Sonerezh ha Sklerijenn " diwar-benn istor kastell Foujera. O klevout an displeger o venegiñ unanidigezh Breizh ha Bro-C'hall, un nebeudig selaouerien a youc'has : " Traitouriezh ! Ar C'hallaoued er-maez ! " Kannad U.D.R Foujera, ur gall, a c'houlennas an droidigezh digant ar Jeneral Vallérie! Moarvat ne oa ket bet gwell blijet. Gwir eo, e noz kentañ ar C'hendalc'h, e-doug an degemeridigezh ofisiel en ti-kêr, e oa deut c'hacut ur beleg en ur lavarout " C'hwi, da vihanañ, hoc'h eus ur penn gall ! " Ha me da respont : " Ur penn breizhat kentoc'h ! " N'ouzon ket peseurt penn o dije graet lod eus an Aotronez m'o dije klevet Glenmor o kanañ " Les Nations " evel ma oa bet goulenet digantañ da sadorn da noz.

An dud-se ne zarempredent ket ar " Celtic Cabaret ", dalc'het gant Bagad Foujera e kev bras ar C'hoc'hu. Eno e c'helle an holl kanañ evel ma karent betek div eur diouzh ar beure. Ur manoz mat e oa sur-mat a-berzh aozerien ar Gouel, met bep noz a oa aliezik! Diouzh ar beure e veze skuizh ar re yaouank ha poan o deveze o sevel diouzh o gwela, pe o heuliañ ar prezegennoù.

AN DIVIZOÙ

Gwir eo, talvoudgezh ar C'hendalc'h Keltiek n'emañ ket hepken er prezegennoù, met ivez en darempredoù skoulmet hag en divizoù a bep seurt. Tregerniñ a ras ar div skol ma oamp lojet enno, gant ur bern yezhoù - na oant ket holl keltiek - pezh a sebeze holl dud Foujera. Me a zo bet laouen oc'h adkavout mignoned kozh hag oc'h ober anaoudegezh gant reoù nevez. Goulennataet ez oa bet diwar-benn emzalc'h an Iliz e Breizh, ha ret eo din gouzav taolioù garv a-berzh Kembreiz ha Breizhiz. Tamallet ez eus bet d'an eskibien chom mut dirak stad ar yezh, nac'h embann en un doare deureat ar Bibl ha testennoù al Lidoù-Sakr, ha kement-se daoust d'ar gelennadurezh displeget e " Pacem in terris " ha skridoù ar Sened-Meur. Ret eo bet din anzav e oa aet Landevnenneg war ar galleg hag e oa sorc'hennet Boken gant an Ekumeniezh, pa'z eus traoù all muioc'h preset d'ober e Breizh.

Meulet eo bet din labour an div pe deir iliz nevez keltiek pe ortodoksat a zo bet krouet nevez'zo, e Breizh, evel ar gouent nevez-digoret er Seizh-Sant, e parrez ar C'hozh-Varc'had, e-kichen Plouared, hag a zedenn, a-hervez, kalz eus tud ar c'hornad... Anat eo, e seurt degouezhioù n'eo ket kelennadurezh an Iliz eo a gont, met emzalc'h hon renerien-ni hag ar fedoù. Ar C'hardinal Léger ivez a sante kement-se ha setu perak ez eo aet da Afrika d'obet war-dro an dud lor (1)

Met a drugarez Doue, em eus komzet ivez diwar-benn traoù all, ha tu am eus bet da c'houlennata ar brezegenerien peogwir ne oa ket tu d'hen ober e-doug an abadennoù-studi. Paotred Radio-Eireann hag ar gelaouennerien a glemme dre ma oa hogoz dic'hallus dezho kendivizout gant an dud. Bretoned'zo a zo bet nac'het outo, dre ziouer a amzer kinnig mennadoù o doa aozet e Breizh-neg hag e Saoz-neg evit gouarnament Pariz ha renerien an Iliz Katolik... Gwir eo e oa bet tabutet pell diwar-benn ar mennad a-zivout Bro-Nañned war

(1) Gwelout SKOL, niv.39 (Mouezh Sant Erwan, niv.5) etagadenn c'hallek.

zigarez ma oa un afer bolitikel, evel pa ne vefe ket politikel emzalc'h Pariz !

Ar re yaouank ne vezant en o aez peurvuiañ nemet etrezo, ouzh taolioù ar sal-debriñ pe er Celtic Cabaret. Marteze e vefe mat aozañ emvodoù a-ratozh evito, pe da vihanañ reiñ tu dezho da zisplegañ o soñjoù dirak an holl.

TRUGAREZIOÙ

Daoust d'an tamalloù pe gentoc'h an evezhiadennoù-se, ez eo bet Kendalc'h Foujers, ur C'hendalc'h bras, dre niver an dud, etre 400 ha 500, dre dalvoudegezh ar prezegennoù evit an amzer-a-vremañ, dre al liammoù krouet etre an izili hag ar Broioù Keltiek. Naoned ha Sant-Maloù da skouer, o deus pedet ar C'hen - dalc'h da zonet daveto ha goulennet bezañ koublet gant kêrioù keltiek tramor.

Hag evit ar barzh-se, meuleudi ha trugarez a zo dleet da Bêr Denez, hag en deus labourer a-hed ar bloaz, hag a veze gwelet dre-holl (nemet ouzh taol !) ha d'ar re a labourer e-kuzh evel Anna ar Beg ha Yann Desbordes, hep ankounac'haat strollad-labour Foujers, ha dreist-holl hor mignon mat Albert Bourgeois.

Azmañs AR C'HALVEZ.



kegnerezh

Bremañ emañ tomatez ar vro o tarevif. Setu daou veuz gant avaloù-sour !

TOMATEZ FARSET : Lakaat prest an tomatez da gentañ. Ober neuze peadra d'o c'hargañ. Evit-se lakait en ur billig eoul pe amann. Fritañ enni ognon ha chalotez drailhet munut. Lakait ivez ar pezh a zo bet tennet eus an tomatez da heul kig drailhet pe restachoù-kig, mesket gant perisilh, minvig, pebr hag holen. Poazhañ e-pad dek munutenn. Tennañ diwar an tan ha lakaat ur melen-vi er fars-se. Kargañ (leuniañ) pep tomatezenn da gentañ gant ul loaiad riz kriz, ha goude gant ar fars. Ar riz a zegemero an dourenn a zeu eus an tomatez. Lakaat war-benn an tomatez, bruzhun krazennoù, ha poazhañ er forn.

TOMATEZ HAG AVALOU-DOUAR : Lakaat en eoul pe en amann ognon pe chalotez troc'het munut. En ur plad-forn lakait un darn eus an ognon; ur gwiskad tomatez troc'het a dammoù tev da c'houde. Holen ha pebr. Darn eus an ognon adarre ha neuze ur gwiskad avaloù-douar poazh ha troc'het a dammoù ront. Ur gwiskad ognon c'hoazh, ha mar kerer fourmaj gruyère. Kenderc'hel evel-se hag echuiñ gant tomatez hag ognon. Lakaat er forn e-pad un hanter-our.

Bremañ evit cheñch ur MEUZ EUS AN TIROL bet desket din gant tud eus ar vro-se deuet da vro-Dreger da zeskiñ brezhoneg.

Troc'hañ bara kozh a dammoù bihan karrezek. An hanter eus ar bara a vo fritet er billig; an hanter all a vo mesket en ur plad. En ur plad all'vo lakaat laezh, vioù, holen, ognon fritet. An dre-se a vo ledet war ar bara. Gellout a reer meskiñ gant kig-moc'h sall. Meskiñ gant bleud evit gellout ober boullou bras evel an dorn. Lakaat perisilh. Poazhañ ar boullou en ur gastolodennad dour bervet. Pa chom restachoù, a c'haller en ur pred all fritañ gant ur vi war-benn. S.T.

ROLLOÙ-MEUZIOÙ

Aval sukriñ gant Porto	Koan
Eog fresk giz Iwerzhon	Soubenn ar c'hig fresk
Deñvad rostet	Kigi rostet
Fav gwenn ha fav glas	Piz bihan liorzhañ Tad-kozh
Pladad fourmaj	Saladen
Skorn ha Gwestell.	
Gwin gwenn ha gwin ruz eus ar gwellañ	Kefe
Chistr aleouret Traoñ-Bre	Likorioù.
Digor-kalon Likorioù-Champagn	

LOEIZ LEZONGAR gant Roh-Vur, Brud niv.28/29

Ur romant eo. Ha krediñ a ran ees a-walc'h an oberour pa lavar eo diazezet al levr-mañ war un istor gwir. Al lodenn gentañ a gaven ar romantelañ hag ivez ar bravañ, ar pep plijusañ, rak lizhiri an eil lodenn n'int ket kaer diouzh va goud, rak heñvel ez int kentoc'h ouzh plede un alvokad eget ouzh ur romant. Dre vras eo istor ur familh ha dreist-holl buhez mab un tiegezh ganet goude ar brezel all, evel meur a hini ac'hanomp. Gant an oberour ec'h advever un amzer set e-biou evit mat, a-raok ha goude en eil brezel-bed.

N'eo ket un istor frealzus, pell ac'hane. N'eo ket alies e lenner romantoù kalonekaus en hor yezh. Itron Varia Garmez, Hervéline Geraouell a zo taolennet ane ivez c'hwitadennoù. an dud pennañ. Evit Loeiz Lezongar eo heñvel, ha marteze gwasnoc'h c'hoazh, rak goude c'hwitadenn e dud, setu c'hwitadenn ar mab. Ha koulskoude L.L. a oa speredek, met ne gas netra da benn. Mont a ra d'ar c'hloerdi pa gav dezhañ n'en deus ket ar c'halvedigezh ez a da soudard, rak krediñ a ra eo e zevel servijañ Bro-C'hall gwasket. Distreiñ a ra. Mont a ra er polis. Ac'hane ez a kuit er milis, dre ma kav eo e zevel bepred. Da vare an Dieubidigezh eo paket ha barnet d'ar marv. Penaos ne wefe ket e daoust dezhañ da vezañ digablus sañset - rak penaos gwelout sklaer el luzietez eo bet e vuhez ? Kalz a zo bet barnet d'ar marv hag a oa eeun-tre o buhez hag o soñjoù. L.L. hag e dud a welomp ouzh en em zifreñ evit lakaat war wel e zigablusted, met en aner.

Evit echuiñ ha kaeraat buhez ar paour-kaezh den, e laka an oberour L.L. da gejañ en toull-bac'h gant ur breizhad mat kondaonet evit e venozioù. Ha setu hon L.L. o tonet da vezañ brogerour ha da vervel a-benn ar fin evit Breizh en ivez.

Oc'h echuiñ al levr-mañ n'on ket evit en em virout da soñjal kement-mañ: ma en defe bet L.L. an eurvad d'en em dennañ eus krabanoù ar justis, ac'hantalpoan an eus o krediñ en defe an den-mañ miret start a gredennoù breizhat. Kemmet en defe c'hoazh. Krediñ a ran en istor al levr, rak siwazh! re wir eo alies.

Skrivet eo al levr e Tregerieg gwisket e skolveurieg. Plijout a ra kalz din lenn tregerieg, met evelato e teukan pa welan gerioù gant ar gwiskamant roet dezho. Re dregeriek eo al levr memes tra evit bezañ ul levr lennegel evit Breizh. Kouchet ez eus bet el levr ur bern lavarennoù ha doareoù-komz eus Treger; ar pezh n'eo ket re fall holl marteze evit bremañ p'emañ ar yezh o kemmañ zoken war ar maezioù. KOUPAIA KOADLANN

Prezegenn-gañv an Do. Arthur Goasdoue 31-8-1908

D'ar 14 a viz Kerzu 1907 e teue er bed-mañ Arthur GOASDOUE, mab da Yves-Marie ha da Anne-Marie BARBE, ha daou zevezh goude, ar 16, e resevas Sakramant ar Vuhez kristen digant an Aotrou Gwilhoù, person, ha da baeron en devoa François-Marie Barbe ha da vaeronez Marie-Louise Goasdoue, e pontr hag e voerab. Diriaou diwezhañ da 4 eur 1/2 diouzh ar mintin ez ae an Aotrou Artur GWAZDOUE da rentiñ kont eus e vuhez d'e Grouer ha Salver, hag hiziv, en endervezh-mañ, setu ni, e dud, e vignoned ha beleien ar barrez-mañ o tonet gant hor c'halon gwasket, da rentiñ dezhañ testiñ hor c'harantez, hon istim ha da bediñ evitañ. Treman tri-ugent vloaz en deus bevet er bed-mañ. Taolomp eta holl war un dro ur sell war ar vuhez-se evit kaout digarez da drugarekaat an Aotrou Doue evit ar vad en deus graet dre an hini a zo bet e veleg, ha lakaat e balañsoù ar Justis ar vad-se hag hor pedennoù.

Pa lavar in e oa gwriizennet don e familh an Aotrou GWAZDOUE ar feiz hag ar vertuzioù kristen, ne vo den ebet souezhet, rak peurluviañ ez eo e-touez ar familhoù kristen e tibab Doue e valeien. Gwir eo e touge ar familh-mañ un anv ha n'eus ket kalz a dud hag a c'halle en em veuliñ da gaout: GWAZ DOUE, servijer Doue. Un anv evel just, ne deo netra ma na ne vez mann ebet da heul. ARTUR GWAZDOUE a oa da vezañ a-grenn servijer Doue, rak dorn Doue a oa warnañ. D'ar mare-se e oa kalz nebeutoc'h a skoilhoù war hent ar velegiezh eget bremañ, hag adalek en-bihan ne wefe ARTUR GWAZDOUE netra o te-dennañ, o sachañ anezhañ, nemet ar VELEGIEZH, ha fent a-walc'h o deveze tud Artur pa sellent dre ur faout bennak eus an nor pe doull an alc'hwez, outañ o lavarout e oferenn en e stumm, e menaj ar REST, etre hent Rospez ha Gwengamp, hag en gwisket gant tapisoù ha n'o devoa ket kalz a dra da welout gant dilhad-oferennañ an Iliz. Skouer e donton, an Aotrou Jean-Marie GWAZDOUE (Jean-Marie eus du-mañ!) hag a oa kure e Kemper-Gwezenneg d'ar c'houlz, a zo bet ivez e-unan gant gras Doue, kaoz dezhañ moarvat da vezañ troet abred gant servije santel an Aotrou Doue.

Stok e Bulien e oa ar Skolaj anvet gant an holl d'ar c'houlz-se, ar SEMINER, Seminer Sant Josef, o tegemer danvez-beleien. Di ez eas Artur hag ac'hano da St-Brieg, ha setu d'an 19 a viz Kerzu 1930, e voe beleget gant an Aotrou Serrand, pa oa an Aotrou Derrien, mervet person Lannuon, person mañ. Ur pennadig amzer a dremenas e Bear, met dambrest e voe galvet da St Josef da gelennet, hag e

chomas eno betek ar brezel diwezhañ. Met evel kalz a re all, e sac'has e-pad 5 bloaz en Alamagn, e-lec'h ma lezas, siwazh, un tamm brav eus e yec'hed, a-raok adkregiñ gent e labour a gelenner, e St Josef; met gant an oad o tonet e c'houlennas bezañ diskarget eus e labour hag anvet e voe e Landreger e ti Leanezed ar Groaz. Met pegen diaes ez eo d'un den bet kustum da vezañ e-touez paotred yaouank bev ha seder, adkustumiñ e-lec'h all! N'hellas ket e gwirionez en em ober diouzh e labour nevez, ha setu, pa seblante bezañ serzh ha yac'h - framm evel ma oa - e voe roet dezhañ div barrez a bep tu d'ar Stêr al Leñv: Goanac'h ha Trevereg. E penn-kentañ 1966, a-boan daou vloaz'zo, e kemeras e garg; un tammig muioc'h eget ur bloavezh war e hed e tlee chom da berson; rak ur c'hleñved kuzh, dizanv dezhañ, hag en deus e sourprenet evel m'en deus sourprenet e holl vignoned: ar arterioskleroz, a gouezhas warnañ evel ur freilh, o lemel digantañ un tamm brav eus ar gweled, ar bale pe dost, o virout outañ da oferenañ ha da lavarout e vrevial zoken: ne oa mui evit e dud hag e vignoned nemet digarez a galonad hag a boan-spered, pa welent kement a berzhioù-mat, kement a zonezonoù kollet diromed - da vihanañ ma seller ouzh an traoù, hervez doareoù-soñjal ar bed-mañ. Kement ha ken bihan - evel ma leverer - en deus graet an Aotrou Doue evitañ, ouzh e dennañ eus a douez an dud bev. (2)

*

Evit komz eus e zonezonoù-den e vefe ret bezañ unan eus e vignoned nesañ, rak an Aotrou Gwazdoue ne glaske ket kofvers kement-se gant ar re all. E stumm-spered, e abofter, piv'oar? Ur galon dener en devoa, met ne blije ket dezhañ diokoubz an teñzor-se, ha ret e veze kaout degouezhioù dreist-ordinal evit sentout ar galon-se: evel p'en em gave e-touez e dud, da gefver gouelioù pe euredoù; hag e-touez ar re en devoa doujañs ha karantez evito, ret menegiñ, an Aotrou Jean-Marie Gwazdoue, e eontr, person Tregonnev, Lannveleg hag aluzener e Landreger, ha derc'hel a rae e stad vet bez ar beleg kozh, hep soñjal moarvat e oa e-unan o vont da ziskenn prestik annañ.

*

Beleg e oa, ha koulskoude, d'an hini ne sell ket pizh ouzh an traoù, e seblant darn eus e labour bezañ un tamm er-maez eus karg ha labour ha galvedigezh ar beleg: kelenner eo bet e-pad e holl vuhez a veleg pe dost... N'eo ket din-ne difenn ar gelennerien-se hon eus holl anavezet en hor skolaioù kristen, pe er skolioù bihan, ha na gavent tamm abet e oant

er-maez eus o zachenn pa zeskent - zoken skiantoù ar bed - d'o diskibled yaouank, d'ar vugale fiziet enno! Gant ar mank a veleien bremañ evel just, ez eo ret kreizenniñ labour ar Valsien war an tachennoù a zo muioc'h diouzh ezhommoù an eneoù marteze, met kilañ a zo kilañ, kaer a vo lavarout, ha pec'hed e vefe barn un amzer hag a vo dambrest un amzer baourdremenet en ur zerc'hel kont hepken eus ezhommoù ha doareoù-soñjal an amzer nevez o ren.

Spi am eus ez eus bet e-touez ar studierien, ar skolidi, bet tramenet dre skol ha klas an Aotrou Gwazdoue hag e genvreudeur, kalz hag o deus kavet an Aotrou Doue hag hent ar Velegiezh zoken!

*

Brudet e oa-ha gant jwir abeg - an Aotrou Gwazdoue, evel muziker, ha soñj am eus ar c'homzoù a lavare an Aotrou Paol ar Flemm e Breun-Brug Gwened, e 1954: an hini gwellañ, emezañ, eus Breizh a-bezh da stummañ kanerion yaouank!

Ar re a zo e penn ar strolladoù-kanañ, dreist-holl ar skolaioù, a oar a-walc'h pegen hag ha pegen kazus ez eo stummañ kanerion, rak bep bloaz pe dost, e ranker nevesaat ar bagad, bep ma kuita ar baotred yaouank ar skolaioù... Ne veze ket an Aotrou Gwazdoue e-unan oc'h ober al labour-se, hag e genlabourerien a-wechall o deus ivez " douget samm ha tomder an deiz" hervez an Aviel, a-unan gantañ.

Soñj hoc'h eus eus an oferenn-se er Radio, skignet eus Seminer St Jozef - gant an Tad Avril e-unan o tisplegañ an oferenn hag o prezeg, ha da echuiñ ar boked-se ken dudius eiltoniet gant an Aotrou Gwazdoue: ENOR HA GLOAR DA VIRVIKEN ?

Ha soñj hoc'h eus c'hoazh moarvat eus Gouelioù bras LANDREGER, e 1947, da gefver ar 6-vet kantved goude ma oa bet lakaet St Erwan war roll ar Sant, hag an Aotrou Roncalli (an danvez-pab), kannad ar Pab e Pariz, e penn ar Gouelioù, ha tud veur all, kardinalek hag eskibion, ha ministred ha prefeded ? Dorn ur mestr, kalon hag ijin ur muziker bras o devoa gwisket KANTIK KOZH SANT ERWAN : gant tonioù nevez, fresk skañv, evel ar mouezhioù yaouank a lakae Iliz-Veur Landreger da dridal, an tonioù-se o strinkañ eus tour bihan ar Vinic'hi e-pad ma oa ar proeseiñ war zouar ar Sant ?

Evel ma lavar kantik an Aotrou Pons, Eostig Sant Erwan:

" Pa zeu miz-Mae da vlsuniañ holl liorzhoù ar Vro "

da heul an heol, e kouezhe a bep tu evel bleunioù Nevez-Amzer, douster ha sklerijenn an tonioù breizhek hep o far hag a oa ar Vammenn anezho e kalon hag e spered an Aotrou GWAZDOUE !

... Daoust hag e talvez ar boan ober roll ar c'hantikoù en deus savet, ar c'hanaouennoù eiltoniet gantañ? Dre natur, hep bezañ e skol ebet o teskiñ muzik ar Vro, muzik Breizh, en devoa adkavet

ar wazhienn yac'h ha pur: AWEN AR MUZIK KELTIEK, evel ma le-
rer e brezhoneg uhel, a oa ennañ. Ha kerse eo n'en deus ket lakaet
war bladennoù da vezañ miret ha c'hoariet ha kemeret da skouer
an tonioù-se ijinet gantañ; rak e-unan ne adkave ket e spered
hag e vuzik pa veze c'hoariet ha kanet gant tud all.

Dudi e eiltonioù da varzhoneg Y.B Kalloc'h (gant sikour
Jef Pennwen, Doue d'e bardono!): Me'zo ganet e kreiz ar mor!
Spi hon eus avet, ne vo ket kollet pep tra hag e vo adkavet
e-touez e baperoù ar pezh n'en deus ket enrollet e-unan (3)

Tud all barrekoc'h egedon-me a gomzo eus e labour,
evit ar BLEUN-BRUG da skouer. Evidon-me am-eus keuz d'un dra:
n'eo ket ket lakaet trawalc'h en implij evit al Lidoù-Sakr, evit
an Ofisoù e yezh ar Vro, an talentoù, an donezonoù an devoa, ha
sur-mat en dije gouezet tennañ eus e greiz tonioù nevez breizhat
da wiskañ komzoù santel al Liderezh gant liv Breizh-Izel. Ur
wech hepken, e kement ha ma ouzon, ez eo bet e Montroulez evit
bodadegoù ar pezh a anver KOMISION AL LIDEREZH EVIT ESKOPTIOU
BREIZH-IZEL. Se'oa warlene, e penn kentañ miz Mezheven, a gav
din: un nebeud devezhioù goude e tisec'h e da viken ennañ ar vam-
menn aet da heak en un taol, da heul ar c'hleñved. (4)

An hini en devoa kemeret evit plegañ d'ar c'hiz ha d'e
sorc'hennig e-unan un tamm, al lesanv a ABARZUR ne skrivje mui
tamm muzik ebet !

Arabat ankouazh e oa an Aotroù GWAZDOUE, beleg, den an o-
ferenn, den ar Sakramentoù, den ar Bedenn - ha Doue hepken ha
Feiz an Iliz a oar petra a zo dindan ar gerioù-se. En deiz a
hiziv, bezañ e fedus, setu ar pezh a gont dreist-holl, ha n'eo
ket mui ar Santelezh hag ar Bedenn, pa zle an eil tra hag egile
: pedenn hag abostolerezh bezañ unanet hag evel skoulmet. Klevet
hon eus bremañ an Aotroù Krist o tegemenn dimp adarre: ME EO
AR BARA DISKENNET EUS AN NEÑV, an neb. a zebr eus ar Bara-se ne
varvo ket da viken "(5) Setu unan eus labourioù ar Beleg: reiñ
ar Bara d'an dud, ha sur-mat - m'en deus gallet an Aotroù Gwaz-
doue kompren ar pezh en em gave gantañ pa oa bet kouezhet klev
- ez eo bet Bloavezh e Basion, Bloavezh e Galvar, bloavezh diwe-
zhañ e vuhez: ur galonad vras evitañ pa ne c'helle mui hag ofe-
rennañ na lavarout e ofis!

Evel m'hon eus klevet an Abostol Paol o kelenn e ziskibl
Timozeoz (5) "Prezeg e koulz vat hag e koulz fell.. donet a ray
un amzer ma na c'houzañvo mui an dud ar galennadurezh yac'h, met
krog an debron en o divskouarn, e tastumint en-dro dezho dokto-

red e-vernioù da vezañ kelennet ganto, hervez o c'hoantoù o-unan
ha stoufañ a raint o divskouarn ouzh ar wirionez evit selaou kon-
tadennoù!"

Gout a ouzomp ez eo bet gwir e-viskoazh ar c'homzoù-se, met marteze
muioc'h en deiz a hiziv. Setu perak en ur drugarekaat an Aotroù
Doue eus kement vad, eus kement kental vat, eus kement skouer vat
en deus roet an Aotroù Artur GWAZDOUE, e c'houlannimp ma savo be-
leien nevez hag a vo diouz an amzer a ren, beleien o kompren ervat
ezhommoù ar bed, ur bed ha n'eo ket mui hini ar velaien aet un
tamm war an oad.

*

Setu, difiñv ez eo an treid-se a ouie redok prim ha mibin
war bedalenoù ponner an ograoù, reut ar bizied-se a nije war an
an notennoù, bouzar an divskouarn-se hag a ouie merzout ha santout
kement liv koulz lavarout a zo er muzik; yen e chom ar galon-se
a dride pa zeue burzhud ar Muzik d'hec'h harlinkat ha d'he dihunif!
Met gout a ouzomp, krediñ a reomp ez eus ur bed all - hag ar bed
all-se evit ar gristenion a zo gwelloc'h eget n'eus forzh petra
a c'hellomp da huñvreal ha da soñjal : "Lagad an den n'en deus ket
gwelet, skouarn an den n'en deus ket klevet, kalon an den n'hell
ket kompren ar pezh a vir an Aotroù Doue evit ar re e gar!". Ken
kaer ez eo ar bed-se, ken splann, ken avurus ma c'hellomp lavarout
ez eo MUZIK PEURBADUS: Muzik ar Joa, Muzik ar Sklerijenn, Muzik
ar Garantez, kement ha ken bihan ma teu ar Sent da vezañ Muzik o-
unan ha kanaouennoù bev o-unan, hervez lavar ar barzh italian an
Dante. Setu ar pezh a esperomp holl da gaout ha da vezañ pa vo
echu hor reuz war an douar. Setu ar pezh a esperomp en deus a-benn
bremañ tañvaet an Aotroù ARTUR GWAZDOUE, trec'h hep muzul ebet
d'ar Muzik a verve hag a veve en e greiz, hag emañ oc'h evel hag
oazh en em vageñ gant ar Muzik bev-se hag o tridal ennañ...

Met o vezañ n'anavezomp ket sekredoù ar c'halonoù - nemet an
HINI a oar pep tra- met o vezañ ma c'hell ar c'halonoù gwellañ en
em stagañ re ouzh ar bed-mañ ha tennañ dle eval-se, ni a bedo an
Doue a bep Madelezh, a bep Truez, Doue ar C'halvar hag ar Baleg-
Bras da gaout soñj eus e veleag ARTUR GWAZDOUE, d'e bardoniñ ha
d'e zegas d'e wir Vro, an hini douasañ ha kaerañ'zo ha n'eus war
he lerc'h nemet Breizh evit ur galon vreizhat

Plijet ganec'h, o va Doue, reiñ d'ho peleg an diskuizh peurba-
del, e kreiz splannder dous-meurbet, e kreiz MUZIK hep e bar ho
paradoz. Amen

Notennoù

(1) Prezegenn lennet evit interamant an Aotroù Goasdoué, beleg.
E-kerz an destenn ez eo bet implijet kentoc'h ar fuzm "Gwazdoue "

72
distaget "Gwastoue" hervez soniadurezh ar yezh, pe dost. Anavezet ha brudet-kaer evel muziker ha sonaozour.

(2) skoet klañv e miz Mezheven 1967 e voe kaset da St-Brieg ha goude da Roazhon, da ospital Pontchallou, met stad e wazhied moarvat a viras ouzh ar surjianed d'e drepaniñ eus an tromboz (3) Implijet ez eo bet e eiltoniadurioù evit sevel pladennoù, gant muzikerion, met ne blijed ket dezhañ labour ar re-mañ hag ur wech em boa graet ar rebechig-mañ: Perak n'hoc'h eus ket graet hoc'h unan an enrolladurioù? ... E-pad ur pennad en devoa bet c'hoant d'ober pladennoù kan gregoriat; met e eiler gwellañ a oa bet anvet a-benn neuze da gelenner en Institut Gregoriat Pariz. Ha n'eus forzh penaos, c'hwitet e oa bet an enrolladurioù gant an teknikour deuet eus a Bariz. Ha neuze evitañ da vezañ eus an akuitañ war ar C'han Gregoriat ne oa ket koulskoude an Aotrou Gwazdoue un ispisialour war ar poent-se.

(4) Moarvat ne oa ket aet keloù marv an Aotrou Gwazdoue betek pennoù ar Bleun-Brug, rak ne oa den ebet en anv ar Bleun-Brug en obidoù. Sikour a rae an Aotrou Gwazdoue evit ar genstrivadegoù h.a.

(5) An oferenn a oa bet kanet e latin hag e brezhoneg. E yezh ar Vro e oa bet ar C'hempedennoù, an Abostol (2 Tim. IV.1.8), an Aviel (Yn VI.51.54), ar Bedenn evit ezhommoù an Iliz, ar Prefas. Un oferenn eus ar c'haerañ e oa bet pa oa eno an dibab eus kanerion ha muzikerion an Eskopti.



KLERG.

KROAZ SOBIVET
e-kichen Chapel.
KARO.

Ogell

Lennet em eus gant dudi, e Barr-Heol niv.52, pennad Anjela Duval diwar-benn an anvioù-parkeier. Emaon a-du ganti evit lavarout e c'heller kreskiñ ment ar parkeier (ar pezh a zo ret e meur a lec'h) hep distrujañ an holl gleuzioù ken talvoudus e Breizh, hag hep ober eus hor bro ur blaenenn noazh ha mut.

Ma skrivan ez eo dreist-holl evit reiñ deoc'h va ali diwar-benn ar ger " OGELL " studiet en notenn diwezhañ gant "BaMe". Ne gav ket din e vefe an anv OGELL un distresadur eus Logell. Kredañ a-walc'h a rafen er c'hontrol en deus ar ger-se da ober gant labour al lin hag ar c'hanab a oa ken stank e Breizh gwechall.

Lakaet e veze al lin pe ar c'houarc'h da " eogif " en dour, ar pezh a anved " dourañ lin ", " dourañ kanab ", " lakaat lin pe : : : gouarc'h da eogif pe da ogañ " (hervez ar rannyezhoù).

Eogenn, poull-lin, poull-kanab, aogenn, ogenn, ogenn a veze graet hervez an Tad Gregor eus ar poull e-lec'h ma veze lakaet ar c'houarc'h pe al lin da eogif (lakaet a ran ar skrivadur a-vremañ)

D'am meno, e tile OGELL bezañ stumm ar ger-se e lod eus Bro-! Dreger, hag evel just anv ar poull a veze graet eus an dachenn-zouar a-bezh, ul lec'h hag a veze tost a-walc'h d'an ti.

R.D.

Trugarez da R.D. evit e evazhiadennoù. E Treger-vras e klever kentoc'h Stank-ogerezh. Ar ger LOGELL e-unan a zo bet studiet gant Ernod : GLOSSAIRE MOYEN-BRETON paj.371-2; hervezañ e taufe eus al latin LOCELLUS (lec'h bihan) Hervez geriadur latin-gallec Feliz Gaffiot : locellus e latin klasek a dalvez : boest, skrin. Mont re bell e vefe en em harpañ war ar ster-mañ evit displegañ an dro-lavar dregeriek Digeriñ e (L) Ogell, digeriñ... e voest, e c'henoù ! Ne-met ez eo ur c'hendegouezh fentus. Koulskoude a vefe mat sellout a dost ouzh diskleriadurioù Ernod hag ar skouerioù a zo evit pezh a sell ar brezhoneg, ar c'hernaveg-meur, hag ar c'hembraeg ivez, evel ar pezh a lavar paj.381 diwar-benn Musquellat ha luskallat (= luskellat)...kent esae reiñ un displegadenn klañ eus kudenn ar ger LOGELL, OGELL.

Daoust hag ur c'hemmesk bennak a zo bet etre " eogenn h.a. " hag hor ger LOGELL, OGELL ? Disae e vefe lavarout an undoare asur-gwell ez eo o sellout evel gerioù disheñvel, moarvat, hag estren an eil d'egile.

Evit EOG, OG sellout ouzh Ernod id.paj.200 EMUGUI: eno e kavet kement a zo ezhomm da c'houzout

kelaoennoù

AR BED KELTIEK (24 Rue Poull ar Bachet, 29N-Brest, kour. 15 Lur)

Kentañ tra a lennan war ar BED KELTIEK ez eo ar roll-gerioù, da lavarout eo an danvez-geriadur. Gout a oar dastum R.Hemon a bep eil ur bern gerioù dizanav pe nebeut implijet en deiz a hiziv. Gerioù ar c'hantikou kozh hag ar prezegerezh a zeu da adkemerout o renk e-touez ar gerioù " brezhonek-rik ". evel "redimañ" da skouer. Diaes ez eo avat gouzout peseurt reolenn a heuilh an oberour en e labour, daoust ma ra mil vad d'ar yezh o tigoimpleksañ ar vrezhonegerion, evel m'en deus skrivet Barr-Heol dija, rak betek re (betek ober ur seurt relijion!) e tiwaller diouzh gerioù sellet evel galleg. Setu amañ koulskoude un nebeut gerioù (rannyezhezh darn anezho) ha na welan ket er GERIADUR Pis (staot, stroazh, troazh), hag ar verb pisat. Ne welan ket perak n'emañ ket er geriadurioù cf. Kembraeg Piso. Setu amañ e-keñver dereadegezh urzh ar gerioù-se e Yezh Treger : staot(añ), pis(at) troazhañ (stroazhañ), ar ger kentañ eo an hini grosañ hag an trede eo ar ger dereat, ger seven, ger ar vedesined

Pivoen: E Treger peurvuiañ Boked(fleur) St Erwan
Redenn: ar boutadennoù a sav diwar ar sivi da skouer hag a red war an douar. Ger eus an implijetañ, na petra'ta! e Plougastell-Daoulez.
Relegouer: ger tremenet da heul ar ger Releg. Ar voest ma virer enni Relegoù ar Sent.
Remm: Boutin-tre ez eo ar ger Droug-izili evit remm. Hemañ a zo dizanav e Treger (nemet e Plistin) hag e klevet peurvuiañ Rumatisoù!
Ren: bevañ ivez, evel da skouer en dro-lavar-mañ : Ne reno ket ar bugel (ur bugelig klañvidik) Bro-Lannuon.
Renk a zo g. alies
Reoriad (pe Revriad)= ivez picherad, podad, kofad, pifad o komz eus un den mezv.
Resped: an Esped eus ar brezhoneg-krenn: prantad-amzer, pennad-amzer: v.g. Lizher-Feurm, amzer tremenet gant un den bennak en ur garg bennak. Ger boutin e Treger.
Restañ: kontañ (cf Brezhoneg-krenn) Restañ un dra bennak warlerc'h unan bennak
Reuz: o talvezout ivez reuziad (pennad-amzer)
Rev : liester e Treger-Vras Reveier (reweier) ha neket revejer)

War niverenn GWENGLO 1968 emañ R.Hemon war e atoud evit burutellet " NOTENNOU YEZH " F.Kervella (Liamm niv.128) ha gant ar studi don en deus graet war ar yezh e oar R.Hemon difenn brav tre e venozioù. R.Hemon a zo evel pa lavarfen er-maez hag a-us

d'ar rannyezhoù, ha barrekoc'h a se da groueriañ ar gerioù hag an troioù-lavar; setu perak ne zle ket ar re n'int ket aet ken don hag eñ e studi ar Yezh péllaat re diouzh o rannyezhoù o-unan, gant eon da faziañ. E Treger da skouer e klevet: bezañ war e studi ha bezañ war ar studi, ha war ar poent-se eta emañ ar wirionez gant Roparz Hemon.

Evit TUDENN avat, en em c'houlennan ha dibabet mat en deus R.Hemon e skouer : Hinienn(où). Gwell e vefe tostaat ar ger TUDENN a gav din, ouzh GWEZENN, rak hini, hinienn a zo unanderioù. GWEZ avat, evel TUD a c'hell bezañ sellet evel anvioù-stroll. Neuze e vefe aes keñveriañ GWEZ-enn ha TUD-enn. Gwezennou (un nabeut gwez, un toullad gwez) ha Tudennoù (un toullad-tud). Klevet e vez marteze Tudennoù un tu bennak, se n'ouzon ket. Al liester Tudo(ù) avat a zo boutin-tre e Treger: " Ale! tudo! o'vont 'ver ? " Ar re n'o deus ket c'hoant da derrañ o revr (gant respet deoc'h!) a c'hello bepred ober gant ar ger-mañ (m'hen argarzh!) personaj(où) !

A ZO, A VEZ; Luziet a-walc'h ez eo displegadur ar verb BEZAÑ, ha n'eo ket souezhus e vez kalz o faziañ. Ur wech ouzhpenn en deus R.Hemon diguzhet ar reolenn hag a zle bezañ heuliet gant ar re a fell dezho skrivañ ur yezh reizh : " Dre vras, emezañ, e c'heller spurmetañ ur reolenn : bez a verk ar boaz; krediñ a ran ivez e tleer ober gant zo pa gomzer eus un dra na c'hoarvez nemet ur wech " Tu a vefe da lavarout ouzhpenn kement-mañ : zo a zle bezañ implijet pe gomzer eus un dra stag ouzh an Datur. Keñveriañ : an den dre natur, a zo kondaonet d'ar marv (marvel); an dorfe-dourion vras a vez kondaonet d'ar marv. Skouerioù a-leizh a vefe da dennañ eus ar " c'hrennlavarioù " a zisplag peurvuiañ ur wirionez anat.

Dre-se ez eo diaes dezvarn ar gistion : daoust pe e tleer lavarout " ar martolod a zo gloazet gant ar gorventenn " pe " ar martolod a vez gloazet gant ar gorventenn ". Peogwir ez eo disheñvel ster ar frazennoùigoù-se!

MAR DIBAB AR MEZEG LEVENEZ. N'ouzon ket hag e talvez e ar boan difenn ur seurt frazennig ha ne deo na brav na mistr! Met me'gav din e c'heller abegañ ar gerioù-mañ eus R.Hemon pa skriv peneos " mar deo " a vefe reizhoc'h eget " mar bez dibabet ". Un diforc'h resis-tre a zo etre " Mar deo dibabet " ha " Mar bez dibabet " Mar deo dibabet da lavarout eo, ma'z eo bet graet dija an dibab, ar choaz " tra ma talvez " Mar bez dibabet " = ma ticheñs, ma te-gouezh dezhi (pe ganti) bezañ dibabet; hag ar stumm-mañ a sell ouzh an amzer-da-zont. Amañ neuze " Mar bez dibabet "

Ar gerioù ha troioù-lavar all - pezh a sell! - a denn d'am mena d'am implijoù rannyezhezh anezho, evit ul lodenn vat, ha ken

aezet ez eo poazhat e viz o klask kelenn ar re all war sujed ar yezh ma renker teurel evezh da vat! N'eus ket pell, ur brezhoneger eus ar c'hwekaf a gave abeg en dro-lavar-mañ: fas-ouzh-fas hag a wele enni un dro-lavar c'hallek (?!!) pe da vihanañ levezonet gant ar galleg. Marteze, met, kit d'hen proufiñ! Ha taolit pled n'eo ket ar ger fas eo a abege, met an dro-lavar-se gant OUZH! Ma!

*

N'hon eus kazetenn ebet en hor yezh o kontañ an darvoudoù, hag evel ma lavare ABERHEL, e c'hellfe ar bed-holl kouezhañ en e boull hep na vefe meneget an taol gant ar c'hazatennoù brezhonek! AR BED KELTIEK da vitanañ a gaver warnañ un diverrañ eus degouezhioù pennañ ar bed, ha n'eus ali ebet da reiñ da lenne-
rion VARR-HEOL nemet hemañ: koumanantit (mar ne doc'h ket) d'ar BED KELTIEK, rak ne dalvez ket ar boan lakaat amañ ar pezh a zo aes da gaout e lec'h all!

Klerg

=====

AL LIAMM (niv.128) Lenn an testeni a-berzh Teofil Jeusset diwar-benn poanioù ar Vretoned kondaonet abalamour m'o devoa stourmet evit ar Vro: fromus ez eo lenn e emweladenn gant e wreg (Doue d'e bardono!). War zoonat ez an disparti etre ar yezh-pobl hag ar yezh skiantel evel m'hen diskouez burutelladenn levr Jackson gant G.P.ha traoù iskis a-walc'h a lenner evel " gouzañv a ra (al levr) dreist-holl a vezañ savet un tamm war ar prim " (=gwazh a se ez eo bet al levr.), pep hini a renas un enklask e-lec'h "kement hini ! Ugent bloaziad e-lec'h ugent vloaziad "...(paj.209)

=====

BLEUN-BRUG (Juillet-Aout 1968, Mezeven(sic!)-Eost).Daoust da strivadennoù ar rener e chom bepred, kaer'zo lavaret,blaz ha ton ar folklor gant ar pennadoù-skrid.Plijus ez eo evelkent ar pezh a lavar diwar-benn ar VRETONED DIVROET d'ar C'hanada pe d'an Amerik. Diaes ez eo avat, asantiñ d'ar pezh a lavar an Aotroù Gloagen, vikel-vras St Brieg pa lavar " Nous ne prétendons l'imposer(ar yezh) à personne, pas même à tous les fils de Bretagne, mais nous regrettons etc.." Se ne sinifi netra. Rak ar pezh a zo d'ober ez eo REIÑ TU da gement Breizhad a zo da c'houzout ervat ar Yezh, ha d'he ~~peñ~~ er Skol, d'he lenn war ar c'hazatennoù, d'he c'hlevet er Radio hag er Skinwel. Ar peurrest ne deo nemet flabaterezh hag un digarez da veur a hini da gaout ur goustiañs vat !

Rener: M. Le Clerc, Person Bulien, 22 LANNUON, Bro-Dreger.

BARR HEOL



Directeur : M. LE CLERC, recteur Buhulien
Directeur: M.LE CLERC, recteur Buhulien 22-LANNION
N° 57, Décembre 1968, Trimestriel, Prix du N°: 3Fr 5

RENER-PENNSKRIVAGNER: M. Le Clerc, Bulien 22-LANNUON
Niverenn: 57, Miz KERZU 1968, Trimiziek

KOUMANANTOÙ :

Koumanant ordinal: 10 Lr, Broioù estren: 12 Lur

" Barr-Heol " Crec'h Avel, 22 Lannion
K.R.P. 245 453 Roazhon

COMMENTARII IN LINGUA BRITANNICA EXARATI
REVUO KVARONJARA EN LINGVO BRETONA

BARR-HEOL

War Feiz ha Breizh

T A O L E N N

(1	An Aotroù PERROT	pajenn	2)
(2	Eñvorennoù (E.Barzig).....		20)
(3	Lizher an Ao.Perrot d'an Ao.G.person skrignag en		31)
(e raog)
(4	En-dro d'an Homeopatiezh (A.G.).....		32)
(5	Enskrivadurioù kozh e Bro-Dreger (T.an Timeur)		37)
(6	Nedeleg ar C'helenner kozh (E.Barzig).....		41)
(7	Ar C'helc'hgelaouennoù ha Breizh (J.C.).....		49)
(8	Digomprenusted (A.Duval).....		50)
(9	Pikernioù Denelezh -id-.....		51)
(10	Taolennoù Buhez (I.D.).....		52)
(11	Breuriezh Sant Erwan (Y.E. Ar C'horr).....		60)
(12	Kaoz ar Venec'h Gwenn (testenioù).....		63)
(13	Notennoù Ekonomikel (A L.).....		70)
(14	Sportoù.....		72)
(15	Keginerezh (S.T.). Roll-Meuzioù.....		73)
(16	Keleier		74)
(17	Adeste, Fideles (Mabig Eflamm ha Klerg).....		76)
(-----)
(TITLOU HA TRESADENNOU gant Tonig an Timeur)
(.AL LUC'HSKEUDENNOU war GOAD-KEV HAG AN AOTROU PERROT)
(A ZO PERC'HENNET GANT AR BREUDEUR CAOUISSIN)
()

Mouler ha Rener : M. Le Clerc, Buhulien-Lannuon, Bro-Dreger
 Impr.Gér. : M. Le Clerc, Buhulien 22 LANNION C-d-N
 copyright e-keñver ar skritur.

AN AOTROÙ PERROT

D'an 12 a viz Kerzu 1943, ur sulvezh, p'edo o tistreiñ eus chapel Sant Kaourintin e-lec'h ma oa bet oc'h oferennañ evit ur seizh bennak a vaouezed kozh, e kouezhe an Aotrou Perrot war an hent, un tenn gantañ en e benn, hag a-benn an noz e varve hep bezañ adkavet e anaoudegezh. Diskaret gant ar sotoni, hag ar gasoni, met bev bepred en effvor ar Vrogarourien ha skouer evit ar Vretoned yaouank n'o deus biskoazh e welet en-bev met a ya da bediñ war e vez evel d'ur stivell a wirionez, a emrousted hag a garantez-vro. Mat e vo d'an holl Vretoned a galon kaout soñj a-hed ar bloavezh-mañ: ar 25-vet abaoe drouklazh ar beleg meur, eus Rener "Feiz ha Breiz", eus "Diazeour ar Bleun-Brug", eus ar Pastor a roas e vuhez evit e zefved, ha gwellañ ali a oufed da reiñ ez eo lenn pe adlenn e-kerz ar goañv-mañ levr kaer an Aotrou Poirson "L'ABBE JEAN-MARIE PERROT, Fondateur du BLEUN-BRUG (1877-1943)" (Skrivañ 22 Ru Brizeux 35-Roazhon). Ar ge-laouenn gatolik divyezhek "BLEUN-BRUG" (La Salette-Montroulez) he deus embannet dija meur a dra diwar-benn an Aotrou Perrot hag a zo e sell da genderc'hel a-hed ar bloaz a zeu.

Bet hon eus diouzh hon tu digant hor c'henderv ha keneil, H. Kaouissin un toulladig dielloù - darn diembann - hag emamp e sell da implijañ amañ war VARR-HEOL. Hervez ur boaz iskis ha n'eo ket aet da goll c'hoazh; ez eo e galleg e vez darempredoù an dud-a-iliz kenetrezo, ispisial etre Léz-an-Eskibion hag ar veleion, ha setu perak emañ al lodenn vrasañ eus al lizheroù kaset pe resevet gant an Aotrou Perrot e galleg. Dav ez eo bet dimp treiñ eta ar galleg-se e yezh ar Vro, da c'hortoz ma moulet pe embannet en o yezh-orin an dielloù. Da c'hortoz e lavaromp mil bennozh da Herri Kaouissin evit e hegarated.

UN DIVERRAÑ EUS BUHEZ AN AOTROU PERROT (*)

"An danevell-vuhez-mañ, a zo bet skrivet gant an Aotrou Perrot e-unan. Evit unan bennak e oa, a gredan, hag a c'houlennas an dra-se digantañ

1) Yann-Vari PERROT a zeuas er bed e Kerarmaze, e Plouarzel, d'an 3 a viz Gwengolo 1877; e dad, Yann-Vari, a oa mab eus a Gervenog,

(*) Tennet eus dielloù H.K. brezhoneg ha tout, betek ar gerioù "e sil hag e ber o kempenn skridoù ar re all, paj. 4



Herve

e Plougonvelen, hag e vamm, Loeiza an Eskob, merc'h eus ar Vourc'h Vras, e Treouergad. Labourerien-douar e oant o-daou. D'e eizh miz e kollas e vamm; kaset e voe kerKent da sevel da vamm kozh Ker-brieg, e Lanriouare, e serr bugale - daou vab ha peder merc'h - Ivon Krogeneg, hag Ivona Gouzien; homañ e oa c'hoar da vamm-gozh ar mi-nor ha ginidik evelti, eus ar Vourc'h Vras; war he barlenn ne glevas nemet brezhoneg, brezhoneg flour ha yac'h, evel ma oa brezhoneg Goueled-Leon bremañ ez eus tri-ugent vloaz.

2) E blijadur er goañv, oa klevout marvailhoù ar bilhaouerien hag ar beorien, a gawe stav, pa dremenent, boued, tan ha lojeiz, hag en hañv, da sulioù-Mae, e blijadur 'oa mont da dremen e abaradeez gant bugale all e oad, da Goad-Houarne, e virer ennañ c'hoazh, lochenn ha feunteun Sant Herve.

3) D'e seizh vloaz ez eas d'ar skol gant an dimezelled Janed Ivona ha Mari ar Sann, da Dreouergad a oa tostoc'hik da Gerbrieg eget Lanriouare. D'e unnek vloaz e reas e bask-kentañ, e Lanriouare, ha dem goude ez eas gant an dud vat her save da chom da Vrendege, e Lokmaria-Plouzane.

Goude bezañ bet daou vloaz er skol, e Gwengamp, c'hwec'h vloaz, e Pntekroez, bloaz soudard e XIX-et Rejimant al Linenn, e Brest, ez eas da Gloardi Kemper - e-lec'h ma renas Kenvreuriezh ar Brezhoneg e-pad daou vloaz - hag e voe beleget d'ar 25 a viz Gouere 1903.

4) Er bloaz war-lerc'h e oa kure e Sant-Nouga, e-lec'h ma savas ur strollad c'hoarierien; e 1905 e krouas ar Bleun-Brug e Kastell Ker-yann, hag er bloaz 1911 e kemeras stur " FEIZ HA BREIZ "

E miz Meurzh 1914 e voe anvet da gure e Sant-Tegonneg; da viz Eost war-lerc'h e streke ar brezel; pevar bloaz hanter a dremenas war laezioù; e miz Meurzh 1920 e voe anvet da gure e Plougernev hag e miz Du 1930 da berson e Skrignag.

5) Ar fae a raed er skolioù gall war yezh ar re o devoa graet ar muiañ vad din hag e garen ar muiañ war an douar-mañ, eo en deus graet graet din treñ a-grenn war ar brezhoneg.

6) Va levr hirañ eo BUHEZ AR SENT, skrivet ha moulet er bloaz 1910. A-hend-all evit c'hoazh n'em eus savet nemet pezhioù-c'hoari:

- 1. Alanaig al Louarn 1905
- 2. Dragon Sant Pol 1907
- 3. An Ao. Kerlaban 1922
- 4. Distro an Itron Varia da Goatkeo 1933
- 5. Ar Basion
- Troet diwar ar Gwenedeg
- o. Ar c'hornandoned

- 4.
7. Moez ar Gwad
8. Nikolazik
9. Salaun ar Fol

Troet diwar galleg an Aotroù Cornou

9. (sic) Yann Landevennec
10. War roudou hon Tadou (Danio)

Troet diwar ar c'hembraeg

11. Eun nozveziad reo gwenn
12. En o eil bugaleach
13. An divroad
14. Ar Vamm

Pezhioù ha n'int ket bet embannet

1. Silvidigez
2. Ar blogorn
3. Ar gasoni
4. Eun tad en devoa daou vab
5. Ar melen hag ar gwenn (embannet abaoe)
6. Jili Breiz
7. Pasion hor Zalver
8. Ar c'hemenec
9. Ar re c'hlan a galon.

Abaoe m'emaon e penn Feiz ha Breiz ez a ar pep brasañ eus va emzer e sil hag e ber o kempenn skridoù ar re all "

*

Ne gamz ket an Aotroù Perrot amañ eus al labour en devoa aozet a-hend-all evit ober un advouladur d'e VUHEZ AR SENT, daoust m'en devoa dastumet peadra evit se. Met an heskinerezh nay a zalc'he an Aotroù Yonkour, vikel-vras Kemper d'an ampoent, her dezhañ war zigarez yezh-pobl ha deare-skrivañ ha kac'hajoù evel-se, hep komz eus gwashoc'h evel ma welimp bremaik, a viras outañ da gas e vennad da benn.... Ne ra meneg ebet kennebeut an Aotroù Perrot eus e genlabour bras gant Loeiz Gwenneg hag a c'heller gwelout e FEIZ HA BREIZ rak alieñ ez eo unanet an div lizherenn-mañ: G. (wenneg) P. (errot). Giskoazh n'eus bet graet ur studiadenn a-zevri, e kement ha ma ouzomp, war yezh an Aotroù Perrot. Satu amañ ar pezh a skrive Loeiz Herrieu (DIHUNAMB, Genver 1944) " Brezhoneg an Aotroù P. a zo splann, leun a droiennoù bev. Keneve d'a labour pemdeziek e vefe bet unan a vrudetañ skrivagnerezhion hor Bro." Diaes ez eo bezañ person, rener kevredigezh, rener ha pennskrivagner ur galsouenn ha bezañ skrivagner bras. Ha koulskoude n'eo ket an traoù a vank da bennaouiñ en e skridoù!

Menoziou-stur an Ao. Perrot

El lizher amañ da heul hag a zo ur respont kaet gant an Ao. Perrot d'an Tad An Helgouarc'h, Oblad ar Werc'hez o chom e Jerze, d'an 10 a viz Meurzh 1928 e kavomp, a gav dimp, menozioù-stur Y.V. Perrot

Va mignon ker,

Diwar emstok ar menozioù e tarzh ar sklerijenn ! Klasket ac'h eus proufiñ din-me penaos evit pezh a sell ouzh Religion, Istor, Yezh ha Politikerezh, n'heller e stumm ebet difenn hon emzalc'h er BLEUN-BRUG, hag e tleer plediñ gant ar Brezhoneg evel gant ur relegenn a wechall-gozh-gozh, mat hepken da ziduiñ un toulladig oristaled kozh e-pad o amzerioù vak. N'emaon tamm ebet a-du ganit war ar poent-se rak n'eo ket kaes va c'houstiañs da blegañ hag hini kalz eus va c'henvreudeur.

1) En anv Doue, arabat da Eskibien Vreizh tra ma prezegont dimp an doujañs e-keñver ar pennadurezhioù e-kerz, hor rediañ da gemerout skouer diwar o spered a servelezh. Ra vint un tamm muioc'h tud-a-iliz hag un tamm bihan nebeutoc'h tostennerien. Bretoned katolik ez omp. Goulenn a reomp digant hon Eskibien ober dimp evel ma' z omp, ha diwall d'ober ganimp pa da esa ober ganimp tud psurhefiveleket. Ne fell ket dimp a briz ebet : ar gwir-se hon eus. Pec'hed eo klask rediañ ur bobl da zilezel ar pep gwellañ eus he gizioù kozh.

2) Evit pezh a sell ouzh an Istor. Un dra a zo sur hag asur: Den ebet - nemet an Aotroù Baudrillard a vefe - ne nac'ho kement-mañ : Bevet he deus Breizh evurus ha dishual e-pad kaetvedoù hir. Bez'ez eus ivez un dra hag a zo ken sur all: an Dispac'h Gall eo en deus rasket hon holl frankizioù.

Lavarout a rez din " Stag ez eo Breizh ha Bro-C'hall gant liammoù didorrus " Mañ bez'ez eus unvaniezhoù strishoc'h un tamm brav ha kalz santeloc'h ha n'o deller ket evel didorrus koulskoude. Perak n'he defe Breizh nemet deverioù hag ar Frañs gwirioù hepken ? Etrezomp-ni ha Galianed Bro-C'hall amañ an hevelep karentiezh hag ar gerantiezh a zo etre al Latined eus Italia hag al Latined eus Bro-Spagn. Hag an dishevelled-a zo etre div bobl hag a zo chomet unan anezho feal d'he gizioù pennañ, tra ma haste eben divorc'hed kaer ekeiñ anezho er blotoù.

Hag e leverez c'hoazh ne c'heller ket mont a-enep red an dour ? Petra'sokjez eta eus Bohemia, eus Iwerzhon, eus Polonia hag eus kement all a bobloù kouezhet izeloc'h eget hon hini ? Daoust ha ne zaskez ket d'ar re a zo ganit er skol ez eo an Istor un adober dizehon ? Statac'h a se e vo dieubiñ Breizh - komz a ran eus al labour da

adgonit dezhi hec'h emrenezh - ma pad he sklavelezh abaoe kantvedoù. Met seniñ a raio an eur eviti. Doue n'en deus ket taolet e vallozh warni, ha Santez Anna, Mater Patriae, he diwallo. Nann! Breizh n'he deus ket lavaret he ger diwezhañ.

3) Evit pezh a sell ar YEZH... Ar galleg, emezout, a zo trec'h, hap mar na marteze, d'ar brezhoneg. Pelec'h emañ ar prouennoù ? Ne deo ket ar santimant un arguzunn. Didronet ez eo bet ar galleg dija gant ar saozneg. Hag un tañva n'eo ken eus an di-chekadennoù da zont. A-benn 100 vloaz amañ, ar gouenn c'hall, daoust hag a vo anezhi c'hoazh ? Strujus avat, dre c'hraes Doue, ez eo gouenn ar Vretoned. N'eo ket ken tañval amzer-da-zont ar brezhoneg ha ma soñj darn. N'eus forzh penaos, evit hor gouenn-ni ez eo trec'h ar brezhoneg d'an holl yezhoù all. Dont a ray ar galleg a-benn eus ar brezhoneg, marteze...met n'eo ket sur... Etre daouarn an Aotrou Doue emañ an amzer-da-zont. Hogen, bezet pe vezet, reiñ dorn d'ar galleg evit ma trec'ho:

Mar her grafemp

Quzhpenn ar vezh hon defe pec'hed.

4) Evit pezh a sell ar POLITIKEREZH. Biskoazh n'hon eus graet er BLEUN-BRUG muioc'h a bolitikerezh eget na ra an UNVANIEZH KATOLIK, an DRAC pe ar GROAZ WENN. Fallout a ra dimp diskar lezennoù enep-breizhat'zo. Daoust ha n'hon eus ket ar gwir?

N'emaomp ket e-sell da lakaat hor menozioù da drec'hiñ gant bombezennoù ha tennoù-mindrailherez! Ha koulskoude plijet eo bet gant Aotrou'n Eskob Kemper hor c'hondaoniñ evit tremen diouzh X,Y,Z (1)

Ma karje beleien Kemper diwall da gomz a dreuz hag e-hed diwar-benn traoù ha n'anavezont ket, e harzfent evel-se ouzh emweladennoù ha divizoù didalvoud hag e sikourfent kreskiñ tachenn ar Furnez.

Arabat deomp eta selaou ar re a zo dre natur enebourien hor gouenn hag hor mammvro, ha labouromp a-gevrat, hep kasoni ouzh an nesañ, evit silvidigezh korf ha spered tud hor Gouenn. Un huñvreour ne don ket. Harpet ez eo va arguzennoù neket war goumoul met war fedoù.

Ta'garfe va gwelout o labourat evit ur vammvro varv ? Biken! Me'venn labourat war ur vammvro gwall-glañv met pareüs

Dit kalonek.

(1) Ret eo merkañ amañ e klaske Elzasiz d'ar mare-se kaout o emrenezh. Ur prosez meur a voe graet e Pariz. Hag ar Vretoned, tud an Emsav, koulz ar BLEUN-BRUG ha BREIZ ATAO a ziskouezas o

c'heneilezh d'an emrenezhion Elzasat. Strolladoù breizhek all a yeas a-du gant ar BLEUN-BRUG evit sevel ur roll-labour da zifenn frankizioù ar Rannvroioù " Programme du Bleun-Brug de Morlaix " Kement-se avat, a zisplijas a-grenn da eskopti Kemper hag an Aotrou Dupark, a zifennas ouzh e veleien bezañ izili hiviziken eus ar BLEUN-BRUG, ma kendalc'hje kevredigezh an Aotrou Perrot gant an hevelep hent. Ret e voe soublañ ar penn.

An Aotrou Perrot a skrivas kement-mañ d'e eskob " Hep gred emeur o prientiñ Gouelioù ar Bleun-Brug e Lezneven. Daoust d'an truzioù hoc'h eus kemeret-hag e fell din ho trugarekaat evit se, o deus ho notennoù diwar-benn ar stourmerien vreizhat nozet da vat ouzh FEIZ HA BREIZ hag ez eus kalz a veleien na gredint ken harpañ anezhi hiviziken tra ma'z eus meur a hini oc'h ober brezel dezhi a-wel d'an holl. N'em eus ket ar gwir d'en em glemm, met mat eo deoc'h gouzout betek pelec'h e c'hell timhout ho komzoù a eskob, ha pebezh tristidigezh-dirak ar pezh a dremen, a wesk kalon ur beleg a labour hep paouez abaoe 25 bloaz evit silvidigezh korfoù hag eneoù tad eus a ouenn."

Er bloaz-se e teuas an Aotrou Dupark da brezeg da Lezneven, evit ar BLEUN-BRUG (Gwelout FEIZ HA BREIZ Here 1928), met er bloaz -se ivez e resevas digant Gouarnamant gall Poincaré kroaz al " Légion d'honneur " (*)

ur vjkel-vpas el lñs

En noz etre ar 14 hag ar 15 a viz Mae 1938, e Sant-Brieg, e oa bet skrivet sloganioù war diez ar Gouarnamant gant 6 Breizhad: Laine, Jaffre (Andreu) Jervez, Perez, Kouer hag Ivon Kastered. Traoù evel " Breizh da Vreizhiz ". Bountet hon tud en taullbac'h, na petra'ta. E Roazhon e oa bet kraouiet daou all, Ronan Kaouisin ha Per Landez. Ha trouz ar c'hazetennoù, evel just, ha lesanvioù diouzh se d'ar baotred " Vandaled, mastererien, pennoù diboell, huñvreerien, c'hoari-o-dispac'herien!" Hag e skrive an Aotrou Perrot ar c'homzoù fur ha poellek-mañ " Pep den a dle difenn e wir; an Aotrou Doue e-unan, her gourc'hemenn; met, ni kristenien, a dle difenn hon hini dre gaer kentoc'h eget dre hag. N'hellomp ket eta meuliñ ar stourmerien nevez bac'het, met n'eo ket ret deomp kennebeut, o lakast war renk an dorfetourien evel ma ra darn (FEIZ HA BREIZ, Mezheven

(*) Kement a zo diwar bluenn an Aotrou Perrot a oa e galleg. Ar skrid e roomp amañ ne deo evel just, nemet un droidigezh. Ar pezh a zo islinennet avat, a oa islinennet ivez el lizher.

8
1938). Ma! poallek ha fur a lavaran me ivez! Kerkent avat, setu en dislavar a-berzh eskopti Kemper, dre blienn ar vikel-vras an Aotrou Chaloni Yonkour.

Eskopti Kemper & Leon B.VI.1938

Aotrou Person ker.

Despad am eus o vezañ m'hoc'h eus embannet war FEIZ HA BREIZ ar pennad-skrid o sellout ouzh afer St-Brieg-Roazhon. Diaes en deus an Aotrou 'n Eskob kavet kement-se, ha va c'harget en deus da lavarout deoc'h hen dianzave a-grann. Ne gomprenan ket penaos goude an alioù am eus renket reiñ deoc'h dija a-berzh an Aotrou 'n Eskob, ne deolit ket evazh ken. Ne wellit ket neuze, penaos hep gout deoc'h marteze, e rit politikerezh peogwir e tifennit kaoz an emrenerzh hag an emrenerien e zo en em gomporet evel bügale hag en un doare na zere ouzh den poellek ebet. Tevel war se, setu pelc'h e oa ho tever en degouezh-mañ, hep komz eus tud hag o deus displijet da vat, e Plougastell, d'an darvoudoù eus ar re a oa deuet d'ar C'hendalc'h, tud hag o devoa graet ken vil d'ar Banniel gall.

Pennadoù-skrid evel an daou ziwezhañ am boa tennet hoc'h azezh warno, a zo risklet d'ober gaou ouzh ar bruderezh a vijomp bet kontant d'ober, met war an diviz e chomje ar gelaouenn en hent am boa merket en emvod Kemper. N'ouzon ket petra a vo lavaret diwar-benn pennad niverenn ziwezhañ Feiz ha Breiz, e St Brieg. Bezet a vezo, arabat deoc'h evelato ankounac'haat ez oc'h eus eskopti Kemper hag ez eo ho tever derec'hel kont eus an urzhioù roet deoc'h gant hoc'h eskob. (*)

Ho tigerez a c'houlennañ pe jasan deoc'h ul lizher ken rast met ne ran nemet diskleriañ santimantoù va eskob.

P. YONKOUR V-V.

Skrignag 16 Mezheven 38

Respont an Aotrou Perrot

Aotrou Vikel-Vras

Klask a ran heñchañ va holl labour war dachenn Vreizh, diouzh Lizheri-Meur splann ar Pab, diouzh ar reolennoù nevez embannet gant Emvod Kardinalek hag Eskibien ar Frañs, diouzh diskleria-
durioù meur an Aotrou Dupark ha kelennadurezh ofisiel skolaer
Pariz.

(*) Emvod Kemper: bet d'an 10 a viz Meurzh 1938 dindan renerezh an Aotrou Yonkour e-unan. Gwelout un draig bennek diwar e benn FEIZ HA BREIZ, Mae 38 paj.144). E Plougastell (1937) e oa bet joget un tamm an drapo gall, met dreist-holl, dispaket e oa bet ar GWENN-ha-DU.

9
Rak ma tlean evel beleg difenn gwirioù ha frankizioù an Iliz, evel breizhad e tlean bezañ ken taer all da zifenn gwirioù ha franki-
zioù Breizh.

Rak-se ez eo tamm va c'halon e-keñver kement den a labour da saveteiñ Breizh. Ha m'am eus, em anv-me, dianzavet an doare m'en em gemer an emrenerien, em eus klasket evelato pennabegoù o skañvaat o bec'h. Moulet em eus keleier a gaver zoken war " LA CROIX DE PA-
PARIS " ha d'o heul em eus lakaet diskleriadurioù hegarat a-walc'h
e-giz ar AN NOUVELLISTE ha " LA CROIX DES C. du N. N'emaon ket evit
krediñ am befe graet ur gwall bec'hed ha poan am eus o kompren perak
ez oc'h ken strafuilhet. N'o dije ket va lennerien komprenet perak
e vijen chomet hep rannañ ger diwar-benn ur prosez a reer neket da
dorfetourien, met da vroadelourien, tud hag a vefed prest, diouzh
ret, da vougañ er gwad o goulennoù reishañ. Bez'ez eus er strollad
-stourmerien-se tud kontant d'ober kement sakrifis'zo. Gallet o dije
ren ur vuhez 'giz bourc'hizien pell diouzh an holl reuzioù, evel ma
ra kalz a re all: gwel eo bet ganto stourm; o sakrifis a verit
ar resped a-berzh an dud.

Lavarout a rit din e ran politikerezh pa gomzan diwar-benn o
prosez. Evit pezh a sell ouzhin-me, hen anzav a ran, e kav din e ple-
dan gant un afer a reizhder. Met piv a lavaro biken pelc'h e krog
ha pelc'h ec'h echu ar politikerezh? Lakomp e rafin; met krediñ a
ran e ran mil gwech nebutoc'h, en ur gomz diwar-benn an emrenerien
dalc'het er prizon hep lealded, eget beleien'zo (e beg va fluenn
emañ o anv) hag a ra van da vezañ hep anavezout Lizher-Meur ar
Pab Pius XI eus an 29 a viz Mezheven 1923, Lizher Breuriez-Sakr
ar C'hloerdiou d'an Aotrouez Eskibien, n 8 a viz Gwengolo 1926,
ar Reolennoù 1329-1333, ha na fell mui dezho kelenn ar Relijion
d'ar bobl vreizhat en o yezh c'hanidik.

Ar re a ra al labour-se hag a zo kreñn a-enep mad an eneoù ha
mad Breizh, ne vez ket klasket trabas outo, war a seblant, met ker-
kent hag ma'z embannan-me un disterañ " Ar Gwir a-enep ar Bed ",
emeur prest d'am minellañ. Al nag a oberennoù katolik hag a dleje
bezañ bet adaozet diouzh ezhommoù Breizh, hag o vezañ n'int ket
bet adkompennet, ne dint nemet oberennoù galvet da lazhañ hor yezh
vroadel.

Nag a gatoliked yaouank abaoe Brizeug hag o deus kollet o
feiz o welout ez eus beleien hag a zo deuet da vezañ bruderien di-
vezh ar spered gall.

Ma ne welfen ket sklaer-meurbet gwashañ bec'h emañ ar valeien
war-nes sachañ war o chouk gant o labour seneb-breizhat re alies,
n'am befe ket skrivet deoc'h gant an hardizhiegezh e santan em

em c'hreiz; plijet ganeoc'h va digareziñ met gant ar riskl a zo evit va bro hag he feiz e krenan.

Y.V.Perrot.

Komzoù evel-se ha traoù all evel just, a reas d'an Aotrou Yonkour (ha na wele ket an traoù tamm ebet evel an Aotrou Perrot) soñjal e oa poent mirout ouzh person Skrignag da implijañ FEIZ HA BREIZ da vrudañ e venozioù broadel, hag e kavas dezhañ e oa erru ar c'houlz d'e tizorniañ ha da fiziout karg ar gelaouenn e tud all suroc'h ha sentusoc'h. Eñ-un-tre e oa an traoù evel ma tiskouez al lizher-kelc'h-mañ.

Eskopti KEMPER ha LEON (*)

FEIZ HA BREIZ

Hervez ar c'hoant diskleriet gant an Aotrou'n Eskob a Gemper ez eus bet savet ur strollad evit adrenkañ ar gelaouenn vrezhonek FEIZ HA BREIZ.

Ar strollad-se hag a zo ennañ tud eus lodennoù disheñvel an eskopti, a zo bet en em vodet d'ar yaou 29 a viz Kerzu, e Landernev ha goude bezañ studiet don ar gudenn, en deus diskleriet penaos:

1° FEIZ HA BREIZ a c'helle hag oa da vezañ miret hervez c'hoant an Aotrou Dupark, eskob, gant ur roll-labour a adrofe dezhi ar stumm he devoa gwechall hag a rafe dezhi chom en dia-vaez eus pep menoz politikal pe untuek.

2° E oa ezhomm da gentañ-holl da c'houzout peseurt degemer a vije graet d'ar gelaouenn yaouankaet hag adkempennet. Setu perak e reer an enklask-mañ.

War ar roll-labour hag a zo e soñj ar Strollad ez eus pen- nadoù poblek da zifenn ar relijion, skridoù all hag a glasko brudañ darvoudoù hag istorioù pennañ an Testamant Kozh ha Nevez. Studiadennoù war an darvoudoù relijiel en amzer o reh, Gouelioù ar Bloavezh kristen, ar misionoù, ar skolioù, an tiegezh, ar c'ha- zetannoù mat, an Oberouriezh katolik gant he c'hevrennoù ispisial.

Breiz he devo he flas ivez gant hec'h istor, he gizioù-kozh, e santualioù, he gwiskamantoù, he yezh hag ar plas a zle kaout

(*) N'eo ket deiziadet al lizher, nemet eus deroù 1939 emañ, anat deoc'h.

er skolioù, he barzhoniezh hag he sonioù awenet gant ar spered kristen evit ar yaouankiz, kontadennoù ha kaozioù eus an amzer gozh.

Gant ur seurt roll-labour ken liesdoare, FEIZ HA BREIZ gant ur bajennad pe ziv evit ar c'horn-broioù, daoust ha n'hellfe ket be- zañ degemeret tamm ha tamm evel Kannadig-Parrez gant kalz a barre- zioù?

Evit ar Strollad

P. YONKOUR, vikel-vras

Diaes e oa lavarout sklaeroc'h petra'soñje Eskopti Kemper, d'ar mare-se diwar-benn ar Yezh ha Breizh: gizioù-kozh, kontadennoù kozh daoust d'an traoù all meneget gant al lizher-enklask hon eus troet

*

Adlakaet FEIZ HA BREIZ en hent mat, gant seizh person-kanton en he fenn. Betek miz Ebrel e tlas an Aotrou Perrot chom e penn ar gelaouenn ha neuze e rankje leuskel an dorn gant ar strollad nevez. Met ne c'hortozas ket keit-se kent kas un Danevell-Skrid, ya, unan c'hwek d'an Aotrou Yonkour, met siwazh, kalz-kalz re hir evit bezañ lakaet emañ. D'an 19 a viz Genver e tegase eta da soñj d'e vikel-vras e oa FEIZ HA BREIZ kelaouenn Kevredigezh ar Blaun-Brug ha n'eo ket peadra an Eskopti: ur Gelaouenn Getrik a Oberouriezh vreizhat ha n'eo ket ur Gelaouenn vreizhat a Oberouriezh Katolik(*)

Da c'hortoz ken na vo embannet ar skrid-emzifenn-se war e heb e c'hellomp da vihanañ adskrivañ emañ al lizher a skrivas an Ao. Perrot da Vikel-Vras Kemper, deiz Gwener ar Groaz, 7 a viz Ebrel 1939.

Skrignag deiz Gwener ar Groaz
7 a viz Ebrel 1939

Aotrou Vikel-Vras

FEIZ HA BREIZ Ebrel a zo o paouez donet er-maez. He lannet em eus er mintin-mañ. Warni emañ va sinatur diwezhañ. Lezel a ran ganeoc'h bremañ ar garg da reiñ da anout d'am lennerien o rener nevez.

En ur guitaat gant ur yaloned aes da gompren, ur plas e-lec'h ma oa bet douget gant mignonéd ar Brezhoneg, e 1907 - evel ma oan bet galvet e 1901 gant mouezhioù va c'hevrennoù, ar c'hloardi.

(*) Gant aon na vije ket meizet ar javaneg-se, setu gerioù an Ao. Perrot evel m'emañ " Le FEIZ HA BREIZ a été fondé en 1900 non pour être un revue bretonne d'action catholique mais pour être une Revue catholique d'action bretonne ".

Kenveuriezh ar Brezhoneg - n'hellan ket tremen hep sevel va mouezh gant doujañs met gant nerzh a-enep an dismegañs a reer din hag a-dreuz din-me, denig dister, d'an holl Emsav Breizhat Katolik.

Bez'ez eo FEIZ HA BREIZ kalaouenn ar Gevredigezh savet da zifenn ha da skignañ ar Brezhoneg e Landerneve d'ar 25 a viz Mae 1899. Un emglev a oa bet etre an Ao.de Kerangall, perc'henn FEIZ HA BREIZ, kazetenn, hag an Tad Kapurintin Gwenn, diwar-benn an titl " Feiz ha Breiz " a c'hoantaed prenañ.

Kerkent ha ma voe savet ar Gevredigezh e voe divizet penaos rener (ar gelaouenn) n'helle bazañ anvet nemet gant izili ar Gevredigezh; da lavarout eo gant an dud koumanantet d'ar gelaouenn ha ma vije anvet ur beleg ec'h aperc'hante ouzh an Eskob kadarnaat ar choaz-se (*)

En ur reiñ va dilez dre va lizher all, e c'houlenn digar-neoc'h hag-efñ na vije ket mat ober ur Vodadeg-Veur e Landerneve, d'ar 25 a viz Mae, da geñver 40-vet deiz-ha-bloaz krouidigezh ar Gevredigezh; neuze e vije bet dibabet an hini a gemerje va c'harg : ne oa nemet ar stumm-ober-se a gement a oa reizh hervez al lezenn, evel ma oa bet graet betek-hen.

FEIZ HA BREIZ a zo brav-mat perc'hennet gant ar Gevredigezh savet da zifenn ar Yezh, kement ha ken bihan, pa rankis, d'ar 15 a viz Meurzh 1933 reiñ da c'houzout d'an Eskopti ar c'hevezerezh displeal a rae an Tadoù Kabusuned, e respontas an Aotrou Kogno n'helle ober seurt ebet rak na oa ket hor c'helaouenn ur gelaouenn eskoptiek. Setu end-eeun ar pezh a soñjen va-unan, met e 1907 hor boa laosket an hanter anezhi gant an Oberoù katolik, hep dilezel hor gwir a berc'henn. Kaout a rae deomp hor boa ar gwir da gaout un tamm doujañs a-berzh renerien an Eskopti.

Va diskar ne deo nemet an disoc'h eus ar brudoù leun a gasoni, eus ar seurt brudoù a oar ar gloer devot lakaat da redek.

Difennet em eus " Paotred an Enskrivadurioù ", e Roazhon (**) war dachenn ar sevenadurezh ha neket war dachenn ar politike-
rezh. N'em eus ket difennet sponterien:ha pa zeufe va brasañ enebour da c'houlenn sikour diganin n'henn nac'hfen ket outañ. Plijet eo bet gant Hor Salver difenn ar wreg avoultreuz ha gant Pius XI

(*) N'eo ket sklaer na fraezh komzoù Y.V.P. amañ, rak n'ouzer ket pe eus rener ar gelaouenn pe eus rener ar Gevredigezh e Landerneve.
(**) Bet e oa an Aotrou Perrot, e Roazhon, gant prosez ar re tapet o livañ mogerioù : digarez da damall dezhañ bezañ a-du gant an " otomistad!"

difenn ar Yuzevien: e serr tud a feson emañ!

Ha neuze pa oa degaset din esplad an hucher daou zevezh a-raok ar prosez, daoust hag e c'hallen lavarout nann ?

Kaeroc'h'zo, Aotrou Vikel-Vras! Da gentañ e vefe BREIZ ATAD o hetañ na rajen tamm politikerezh ebet, hag e lakfent a galon vet en o reolennoù-diazez ar pezh a laka Euskariz katolik eus departemantoù Bro-C'hall: " Ne vo ket degemeret en hor strolladoù an Aotrounez Beleien nag evel skodennerien nag evel izili oberiant. Gallout a reint reiñ skoazell deomp gant o alioù hag ol levezon, hogen dereatoc'h e vo outo cham hep komandiñ hag hep bezañ komandat, en hor c'hostezenn."

A-barzh ar fin, n'eo ket dre m'am eus graet politikerezh eo am diskarer, met dre m'am eus bet c'hoant, evel ma oa va dlead, da stourm a-enep an direol war dachenn an doare-skrivañ hag al lennegezh, disoc'h hag a zo kement da c'hrad an dud-a-iliz e Breizh.

Bez'ez eus 100 vloaz en doa bet an Aotrou HERRI da c'hbuzañ eus penzh e genvreudeur ar pezh am eus-me da c'houzañv eus pezh va re-me; hag ar Vikeled-Vras d'ar mare-se, a droas a-du gant ar c'hlabouserien ha neket a-du gant an oberourien, dres evel m'emañ ar stal gant ar Vikeled-Vras a-vremañ em c'heñver, p'emaint a-du gant va enebourien : nil novi sub sole !"

Tamall a rit din, Aotrou Vikel-Vras, reizhañ skridoù va c'henlabourerien; lennit eta, me ho ped, an alioù a roe an Aotrou Ugen (personkanton Plougastell) d'an 21 a viz Mae 1919. Graet em eus diouto, ha keuz n'em eus ket.

Lezet em eus ar " c'henaouien da chaokat d genoù " met a-benn an diwez ar " c'henaouien-se " a zo aet ar maout ganto hag a ye da skeiñ en-traoù tregont vloavezhiaed labour dizehan.

Ampart-tre ez eo war ar muzik an Aotrou Boteraou, ar renez nevez, met evit pezh a sell ouzh an traoù breizhek ne dalvez netra. Lezel a ran gantañ avat, dre c'hras Doue, un ugent bennak a genlabourerien, rak n'eo ket kenlabourerien eo a rae diouer din ha gwach n'em eus ebet diskalonekaet ur skrivagner brezhonek. Ma'z eus bet kenlabourerien hag a zo paouezet da genlabourat, n'eo ket dre m'o devoa un digarez bennak da glemm eus ar rener, met dre ma kavent aesoc'h tremen hep skrivañ eget skrivañ.

Ma'z eo bet kouezhet FEIZ HA BREIZ eus ar 7000 a danned e 1923 da 1616 e miz Ebrel 1939, ez eo aes d'an dud ha n'eo ket kammet o spered gwelout n'eus nemet un abeg da gement-se: ar mank a urzhiadur war dachenn ar Wask katolik, kaer em eus bet goulenn alies. Arabat deoc'h, tamall an diskar-se d'am menozioù-a-amrener na d'ar

" yezh re c'hlan "; hogen lakit kementse war gont ar geraouez
 heb eus ranket gouzafv dek pe 12 gwec'h, ha war gont ar c'heveze-
 rezh a-berzh kalaouennoù a vez brudet e-kerz misionoù troet e
 sizhunvezhioù kenwerzhel, anezho kalaouennoù a zevosion ha
 koumanantif dezho evit 10 lur a zo ur gwarant da chom fidel hag
 a ro droed ouzhpenn da gaout lod e 365 oferenn (*)

Tamallit c'hoazh an diskenn-se d'ar c'hannadigoù-parrez o
 kreskiñ alies hep digarez mat a-walc'h, hag erfin d'an taolioù
 a-berzh stourmerien bilpous na ouzont skeiñ nemet en amc'houloù
 hag a-drek kein an dud.

D'ar 25 a viz Eost 1929 e skrive an Aotrou Buleon din-me
 e oa-erf "ur stourmer eus eil rummad difennerien Vreizh" hag e la-
 vare ouzhpenn " ar rummad-kentañ a voe hini Kervarker; an eil hon
 hini; hoc'h hini eo an trede hag hennezh eo an hini mat." Allaz!
 ne zivine ket neuze pegen kreñv ez eo konpartiaebù ar
 walc'h a Kemper.

Hogen garvañ tra a gavan en hoc'h emell ez eo an difenn a
 rit ouzh ar Bleun-Brug da gaout ur gelaouenn dezhañ e-unan hivi-
 ziken. Evit gwir n'eo ket ken garv-se justis ar vro; ne undaon
 den ebet hep testenioù, ha dreist-holl ha pa lam ur mad bennak
 ne zifenn ket ouzh an hini diberc'hennet da adsevel e di e
 lec'h all.

Ne c'houlennan ket e gwirionez, e doare ebet, bezañ rener
 ar gelaouenn nevez-se ha dije talvezet da liamm etre holl izili
 ar Bleun-Brug.

An emglev a damallit din diwar-benn " Ar Brezoneg er C'hen-
 werz " ne deo nemet un emglev diouzh tro ha ket unan war dachenn
 ar menozioù. Ne c'hall ar brezhoneg bezañ salvet nemet dre an
 unavniezh etre holl vugale Vreizh. (**)

Plijet ganeoc'h, Aotrou Vikel-Vras, va gourc'hemennoù ken
 doujus ha ma'z int leun a dristidigezh.

Y.V. PERROT

(*) Dindan ar gerioù-se intent: ar VUHEZ KRISTEN, hep mar ebet.
 Ne varnomp ket, met anat e roje nebeutoc'h a zarbar ur seurt ke-
 leouenn gouestlet d'ar vuhez speredel hepken eget ur gelaouenn
 evel FEIZ HA BREIZ da bennadurezhioù an Eskoptil Dre-se...

(**) War SAV (12, Diskar amzer) e oa bet ur pennad sinet gant Yann
 M. MAB KOIK o kinnig sevel ur Strollad da stourm a-du gant ar yezh
 war dachenn ar c'henwerzh: un dra er-maez a bep politikerezh hag
 e ideologiezh. Dav e vefe gwelout lizher(?) an Aotrou Yonkour o
 k'evout e abegadennoù, rek a-hend-all e kredfe a-walc'h an nen e
 oa mat ar vikel-vras da vont da gaout ur mezeg politikerezh.

Diskar hag Adsav

Al lizher d'ar vikel-vras a oa bet skrivet d'ar 7 a viz Ebrel
 1939, hag a-benn neuze e oa deuet er-maez niverenn Ebrel FEIZ HA
 BREIZ gant KIMIAD AN AOTROU PERROT en dibenn anezhi bet skrivet
 d'an 30 a viz Meurzh, e Skrignag. Markomp hepken amañ ar pouez a
 ro d'an baore-skrivañ: " Gwell-a-se ma teu ar Rener nevez a-benn da
 zegas war dachenn ar yezh skrivet an emglev n'am eus ket getlet
 degas va-unan; graet em eus, en un amzer eus ar re ziaesañ, gant an
 harpoù am eus kavet, ar vad em eus getlet ha ne c'houlennan nemet
 un dra: gwelet re all oc'h ober gwelloc'h "(*)...

... N'eo ket a-walc'h diskar, dav ivez bezañ barrak da adsevel
 ha setu, goude bezañ lakaet an Aotrou Perrot er-maez eus FEIZ HA
 BREIZ ne voe kavet den ebet barrek da gemerout ar stur en e lec'h!
 Un taol farsus ha trist war un dro, anat deoc'h, rak goude bezañ
 gailhet an Aotrou Perrot e oa dav hen pediñ da adkemerout ar penn
 " GWELOMP C'HOAZH ", eme an Aotrou Perrot e penn niverenn Mae-Mezhe-
 ven 1939; " daoust d'an holl digarezhioù mat am boa d'en em dennañ
 evit atav er-maez eus FEIZ HA BREIZ- evit gellout kaout un tamm am-
 zer da labourat war dachennoù all talvoudek bras evit ar vro - e
 choman ennañ c'hoazh, dre ma'z eus bet e-leizh a lennerien ouzh va
 fedif da chom ha dreist-holl dre ma teurvezer reiñ da anaout em bezo
 hiviziken muioc'h a harp eget n'am eus bet betek-hen; muioc'h a harp
 d'her skrivañ ha muioc'h a harp d'her skignañ.


An Aotrou Dupark hag en deus roet abaoe m'emañ eskob e Kemper
 testenioù splann eus e youl da welet spered Breizh o vleuniañ, dre
 holl, en e gaer, an deus dibabet c'hwec'h person-kanton, unan e pep
 rann eus e eskopti, evit harpañ a-zevri, hiviziken, FEIZ HA BREIZ
 hag ar BLEUN-BRUG, ar Brezhoneg er Skol hag Istor Breizh er Skol."

Er bloaz-se e tlee ar BLEUN-BRUG bezañ graet e Kemper, d'an
 2,3,4 ha 5 a viz Gwengolo. Dres d'ar mare ma tigoras ar brezel di-
 wezhañ: Bleun-Brug ebet, evel just.

Al Lizher-Meur kaset gant ar Pab Pius XII, eus Castel Gandol-
 fo, d'an 20 a viz Here 1939, d'ar bed kristen a oa ennañ an diskle-
 riadurioù-mañ: " Ar pobloù o deus pep hini he zroadurezh ha pa vez
 gwirizid an droadurezh-se sanket betek bouedenn zonanñ kef ar ouenn,
 pa ne nac'her nag e teur eus a Zoue nag e tleer distreiñ da Zoue,
 an Iliz a wel gant dudi hag a harp gant he daouarn a vamm kement.

(*) Arroudad skrivet er skritur a-vremañ, evel an arroudadoù a-is.

tra a venner ober, hervez ar reizh hag ar furnez evit e lakaat da greskiñ ha da vleuniañ... Ar re a zeu en Iliz eta, ne vern eus pe ouenn e tauont ha ne vern pe yezh a gomzont a zle gouzout o deus o gwirioù-a-vab koulz hag ar re all e ti an Aotrou Doue... Evit diskouez, sklaer hag anat d'an holl, e klaskomp reiñ da bep pobl beleien ganet en he zouez ha barrek da ober evel m'eo dleet ar "gefridi fiziet enno..." Hag e traoñ lizher ar Pab e skrive an Ao. Perrot "Goude ar gerioù a zoujañs en deus ar Pab evit holl yezhoù ar bed, daoust ha kavet e vezo c'hoazh kristenien e Breizh-Izel hag e lec'h bale ouzh sklaerder ar steredenn lugerbus a sked a-us kador sant Per a gerzh ouzh skleur ur c'houlaoenn vogedus da ober ul labour milliget gant an Aotrou Doue ha gant an dud ?



Arabat krediñ avat, e oa krog ar Vikel-Vras da zigeriñ e zaoulagad. N'eus forzh penaos ne oa ket graet ar brezel evit diluziñ traoù bet luziet gant ar sotonni hag ar gasoni. Setu perak e kavomp al lizher-mañ e-touez paperoù an Ao. Perrot

Skrignag d'ar 27 Genver 1941

Aotrou Vikel-Vras

Kerkent ha distro diouzh Kemper em eus skrivet d'an Aotrou Koadou evit ma tegasje din ar c'hentañ ar gwellañ e bennad-skrid. Diouzhtu avat, en deus respontet din: "Mar deo prest ho niverenn GENVER-C'HWEVRER " na chomit ket da c'hortoz va fennad, rak gant va gwellañ bolontez vat n'hellfen ket hen kas deoc'h a-raok un toullad deizioù amañ. Skrivañ div pe deir bajennad vrezhonek a goust din-me meur a eurvezh-labour". Dirak an nac'hadenn-se ez on lammet rektal war va amprovennoù d'o adkempenn diouzh hoc'h alioù.

Va fennad-stur a zo lamet kuit hag en e blas e lakaan ur ger diwar-benn marv an Aotrou'n eskob Trehiou. E "NOZ-VEUR BETH-LEEM "e lakan bep tro Josef ha Mari e-lec'h Jozeb ha Meir. E-lec'h E-lec'h an anv-gwan " digrannenezus " nebeut implijet e lakan " digrannenezus " (1) hag a tennan kuit an notennoù dezho ur stumm re skiantel. Er pezh-barzhoniezh " DIRAK KRAOU AR MABIG-JEZUZ " savet gant ur c'houerriad yaouank a Gervé, er fozioù-brezel, ha bremañ prizoniad, e raskan ar pevar foz diwezhañ. Er bajenn 15 e laman

(1) Digrannenezus (?) moarvat ur fazi evit " Digevannezus " ster o klotañ mat-tre gant en destenn " nepell diouzh ar gêr digrannenezus "

kuit komzoù an Aotrou Paquet rektor Skol-Veur Laval (Kebek) hag e stoufañ an toull gant un dornad kelseier hag a blijo moarvat d'am lennerien. Me'gev din penaos ur wech adkempennet evel-se e kavot mat ar strobard-amprovennoù nevez a vo kaset deoc'h emberr.

N'ouzon ket ha meizañ a rit pebezh gaou a rit, ne lavarant ket ouzh va labour, ar pezh a zo **diavart**, mat zoken e-keñver arc'hant, o tilerc'hañ evel-se eus 6 sizhun da nebeutañ, embannadur hon niverenn gentañ a 1941 - Niverenn a vruderezh eta - hogen ar pezh a ouzon-me ez eo penaos an tennañ kuit pajennoù zo hag an aozañ reoù nevez en o lec'h, a gresko an dispign **etre** 350 ha 400 lur.

Setu perak ez on distroet diouzh Kemper tristidigezh vras em c'halon. Kaer am eus bet lavarout deoc'h n'hellen ket en em rediñ da redek straedoù Plougastell e-pad 4 devezh ar C'hendalc'h da herzel na vije tennet kuit drapioù, ar pezh ne oa den en-gortoz da welaout.

(1) - em boa e Lannuon pronet **doareoù** **ruderezh** dre gser e-lec'h an doareoù dre nerzh gant Breiz Atao (2)

- edo va studiadennoù war GUDENN BRO-EUSKADI un diverrañ ha netra ken eus skridoù gant Jakez Maritain, kelenner er Skol-Veur gatolik, ha gant an Ao. Fur, kelenner e Skol-Veur Bariz, anezho an daou gatolik uhelañ a Frañs. (3)

- e Skrignag, muioc'h eget e lec'h all e ranke diwall d'ober gant ar gador a wirionez ul leurenn-brezeg politikel; ha ne oa ket bet lennet e Plougernev nag e meur a barrez all lizher ar 14 a viz Gouere (4), hag e reas ar person, e Kastell-Paol, hen lenn " buan evit na gomprenje den ebet netra ". Pessurt gonid a oa o pouezañ war war afer an " otonomist " en ur barrez e-lec'h ma'z oa dianev ar ger " otonomism " (emrenerezh) zoken ?

- ha penaos diwar-benn Sant-Aogustin ne soñjen ket e oa dav diwall da feukañ ar spredoù janseniat a c'helle bezañ c'hoazh en eskopti e-kreiz an XX-vet kantved (5)

Kerse eo ganin gwelout penaos va **disklariadurioù** n'ant ket denet a-benn d'ho tougen d'am didamall a toto (a-grenn) na zoken d'am didamell un tamm (a tanto), peogwir en ur gompren a-dreuz unan eus va c'homzoù hoc'h eus diskleriet edon o paouez lavarout di-razoc'h e heten ma trec'hje an Alamagn a-benn an diwezh.

(1) gwel. **Barthe** paj. 8. (2) gwel. id. paj. 3

(3) gwel. **Feiz ha Breiz**, Genver 1938 da skouer: Euskadi, mor a gen pajenn 45, gant pennad H.C. paj. Tud Vras ur bobl e gwek paj. 17 id.

(4) Lizher a-berzh an Eskob diwar-benn an Emrenerezh, pa oa degouezhet an Alamagn, e Breizh, 1940.

(5) Ar Peoc'h e-kreiz ar brezel " gwel. **Feiz ha Breiz** Du-Kerzu 1940

SETU AMAÑ ETA AR PENNADDO TROC'HET DRE URZH AN ESKOPTI:

" Arabat eo d'ar bloaz unan ha daou-ugent emeomp o vont da vevañ bezañ heñvel ouzh ar bloaz 1341: er bloavezh-se, hon Duk Yann III a varvas e Caen, d'an 30 a viz Ebrel ha raktal, war zigarez gouzout p'IV a zougje ar gurunenn, Breizhiz a en em rannas e div gostezenn kounnaret an eil ouzh eben hag ar brezel strezo a badas tri bloaz war-n-ugent.

Ra vezo kentoc'h hor bloaz nevez heñvel ouzh ar bloaz 1441: Yann V, neuze, a rene kaer hor bro; dindan bannoù heol ar peoc'h, pep tra a vleunis; neuze a saved iliz veur Kemper hag iliz veur Kastell-Paol; chapel ar Werc'hez er Follgoad ha chapel Sant Yann-ar-Biz, e Traoñ Meriadeg; an dud a en em gleve, ar binvidigezh a oa dre holl; n'oa ti ebet e Breizh ha na vije ket a listri ar-c'hant ennañ ha d'ar 14 a viz Eost 1441, e Redon, ar Pab Eujen IV a lake e siell war an Emglev etre an Iliz hag hor Breizh.

Pemp kent vloaz dres a zo abade. Ar pezh a zo bet, daoust ma n'emañ ket c'hoazh, a c'hell bezañ adarre.

Ra zeuy an Aotrou Doue en e drugarez da lakaat an holl vroioù kristen distrob diouzh pep enebour, d'en em glevout war bedenn an hini a zalc'h e lec'h war an douar. Evel-se bezet graet." Y.V.PERROT

" Diaes ez eo kaout kaeroc'h da welout ha fromusoc'h eget ur bobl fouge enni gant hec'h amzer dremenet hag o poaniañ daoust d'ar skoilhoù hag a-dreuz kontroliezh da ganderc'hel he buhez. Ar stourm-se a denn warni istim ar bed-holl. Meritout a ra doujañs ha kengarantez a-berzh an iliz.

Kaout ur vuhez vroadel a zo ur gwir naturel. Ha zoken e-lec'h ma'z eus gwirioù uheloc'h, pe abegoù istorel ha lezennel krañvoc'h o lemel digant ur vro pe ur ouenn bennak he stad politikel a-ziagent hag he frankiz, ez eo un ezhom naturel hag ivez ur c'hoant reizh-meurbet, evit ar vro pe ar ouenn-se, d'en em virout hec'h unan ha d'en em stagañ gant ur youl nerzhus ouzh hec'h hengounioù pennañ." (*)

Monsignor Adolf Paquet,
eus Skol-Veur ar C'hebek.

War FEIZ HA BREIZ Mae-Mezheven 1941 e oa ur pennad diwar-benn Jos-Per ar Bras (Dirlemm 1889-1915) bet lazhet er brezel 1914, e voe dav d'an Ao. Perrot tennañ kuit ar c'homzoù-mañ diwar bluenn

(*) Troet diwar ar galleg. Boas e oa Y.V. Perrot da lezel e galleg ar pennadoù uhel o yezh, hag o danvez.

J.P. Bras e-unan:

" E Breizh-Izel ez eus tud digalon ha treitour evel Judez o deus gwerzhet o c'horf hag o ene d'ar Gall milliget enebour touet hor bro gaer. Ya, stank int memes en hon touez, ar seurt tud-se koulz kouerieded diwar ar maez evel bourc'hizien kofoù tev eus ar c'hêrioù.

Gwelet a raer bemdez en-dro deomp tud aes da douellañ, o treiñ gant an anebour, abalamour ma'z eo ar gostezenn grañvañ. Ar seurt tud a zo krenerien. Da zeiz ar voterezh e werzhont o c'houstiañs evit ur banne gwin-ardent. Kerkulz e roint o mouezh da washañ enebourien o bro; na glaskont nemet diskar e kement mod, evel da dud leal a glask he difenn a-enep al lakipoted o deus diskleriat brezel a varv da Vreizh.

Evel 'ouzoc'h, Gouarnamant Bro-C'hall a zo etre daouarn ur seurt tud a anver Frañmasoned. Ar re-mañ a zo en em vodet evit diskar kement tra vat a zo er bed, da gentañ ar relijion. Gouzout met a reont ne zeuint ket a-benn eus o menozioù fallakr, en hor bro vihan, keit ha ma chomo an dud da gaozeal o yezh brezhonek, gant ar brezhoneg eo deuet ar feiz, gant ar galleg ez ay kuit eus Breizh.

Ar C'halleoued her goar ervat, setu perak en em gemaront da gentañ ouzh hor yezh. Met ni, Barzhod, a zo oc'h ober ar ged hag a youc'ho warno: harz ar Bleiz! Evit bezañ krañvoc'h da stourm e rann-komp ivez dihuniñ hor c'henvroiz, kennerzhañ o c'halonoù da vont d'ar vrezel da zifenn hor yezh.

J.P. AR BRAS " AR VRO "
miz Ebrel 1907.

Mal evit spontañ rak ur seurt diskleriadur a feiz, ez eo dav bezañ krener dre natur ha techet da welout spontailhoù e pep lec'h. Poellekoc'h ha gervoc'h a gaved d'ar mare ma n'ed aotren embann ar pennad a-us, war STUDI HAG OBER, da skouer, pe DIHUNAMB ! Alato!

Suroc'h avat e oa difenn embann kement-mañ da geñver Jubile ar Pab Pius XII " Ni, Bretoned, hag a zo bet hor buhez ur varzherenti e-doug ar c'hant hant ar kant vloaz diwezhañ-mañ, a c'hell bezañ lorc'h ennomp o klevet Hon Tad Santel o lavaret dirak ar bad a-bezh " Pa vo c'hoant da adsevel ar broioù war un diazoz fur, ne vo ket gallet gouzañv e vefe gwasket ken a-wel pe a-guzh, yezh ha lennegezh ur bobl war zigarez ma'z eo bihan; ar pobloù bihan koulz hag ar pobloù bras o deus gwir da vevañ ha da vale war roudoù o zud kozh !"

(KENDALC'H : GWELOUT PAJENN 31-30)

ENVORENNOÙ E BARZG...

Bugaleaj pep hini ac'hanomp a zo evitañ ar bravañ levr barzhoniezh, ul levr leun a gened, skeudennet kaer ha skrivet disi ha na skuizher ket o treiñ e bajennoù hag o vemorif gantañ. Setu ar pezh en em lakaen me d'ober adarre hirie.

Evel m'em eus kontat deoc'h dija, savet on bet e bourk bihan Kaoueneg, met alies ez aen d'ar Roc'h e-lec'h ma oa ma zad-kozh Barzig o chom gant e varc'h henañ dizemez, tintin Mari. Mont da welet anezhe a oa unan eus va brasañ plijadurioù. Adalek ma veze erry ma zad e permission, e veze komzet eus mont. D'ar c'houz ma n'em boa nemet seizh pe eizh vloaz ha ma oa ma c'hoar ur poupig, ez ae ma zad - Doue d'hen pardono ! - gant e varc'h-houarn prenet gantañ a-raok ar Brezel, ur pezh traouilh gant ar merk "Lusifer", an hini nemetañ am eus gwelet eus ar ouenn-se. Un dibr-koad gant un dorchennig en devoa biñset war-benn evidon. Ha me a veze lorc'h em foñs, me 'lar deoc'h. Quzh ar varrenn-stur e oa stag ur c'hloc'hig-kolist a lakaen da dintal aliesoc'h eget na veze ret, evel just.

Ur wech divabouzet un tammig ma c'hoar vihan, e c'helle mamm hag hi bezañ eus ar veaj. Ur wech an amzer, ma eontr Loeiz Marjou, menajer e Kostilouri-Vihan, a zeua ganimp gant e charbañ. Evel n'en devoa nemet daou a gezeg e veze staget ordinel ar memes kazeg kozh, Rozed, dous evel un oan, ha na oa bet biskoazh gailhet na boufonet, rak ma zonton ne oa ket kap d'ober poan d'ur fubuenn. Ne ziskrogen ket diouzh ar rañjennoù 'vel just. Da vihanañ evit mont, rak evit retorn da serr-noz e plije din kluchañ e foñs ar wetur, serriñ ma daoulagad ha klask divinout gwech ha gwech all pelec'h e vezemp erry - pezh ne veze ket aes etre daou gleuz uhel hag o lann teñval. Goulaouennoù-koar an daou letern na roent ket kalz a sklerijenn, met ma zonton Loeiz hag e gazeg a anaveze dre'n eñvor an hent strizh-se a gildro hep ehan etre Langoad ha Kaoueneg dre Gemperven ha Lanvezeg. Gant va faltazi e welen neuze amañ hag e-hont leeron, seblantoù ha loened mut iskis kontadennoù Mamm-me, mamm-gozh Kaoueneg, ha tintin Mari. Peadra da lakaat da vlejtal ma c'henderv Yannig Trividig, a veze alies ganin, hag a oa doanik eston; gwir eo em boa daou vloaz warnañ.

Met mont a raemp aliesoc'h c'hoazh d'ar Roc'h war droad. Ma c'hoar a veze lakaat en he gwetur vihan boutet gant mamm ha breoc'h dir ma zad. Me a gemere "Lusifer" ha setu penaos en em

zibaben gantañ... Digompez evel m'eo ar vro, an hent emañ o paouez komz dioutañ a zo sav-disav penn-da-benn. Erry e kroec'h ur c'hraev, e lakaen va zroad dehoù war ar bedalenn gleiz hag ar velo a gase ac'hanon sonn evel-ur pipi betek an traoñ. Aze harpet ganin ar marc'h ouzh ur c'hleuz, e c'hortozen ma zud, azezet war ar yeot, dedennet gant an disterañ tra diwar-dro, an evnig a gane "kig hag u", re all a gleven o wikal, o filipat hag o c'hwistal-lat, lammoù ar gleskered, bangor un dornerez ha me'oar. Ne lezer den da dremen hep lavaret seven "Ver'vont ?" Merzet em boa abred e veze respontet din: "Ya, paotrig" betek Kemperven, met "Ya, mabig" goude.

Ma zad a gemere neuze e "Lusifer" gant un dorn evit graiañ e-keit ha ma raen me un toulladig ardoù hag un tammig cher d'an hini vihan o sachañ war he chutig. Erry e penn uhelañ an diribin, me war droañ adarre 'vat! E-kichen dismantrou chapel Sant-Maodez eo e plije din ar muiañ diskuizhañ ha mont a rae ma spered war-raok... Bet e oa sur-mat ur chapel eus ar c'haerañ, diouzh gwelet ar mogerioù bepred en o sav hag ar bornioù mein ha koad damvrein, hanter-c'holoet gant drez, a oa bern-war-vern etreze. Plijout a rae din aston hantergelañ mein-gruenek an nor-dal. E-kichen en em lede ur seurt plasnennig gant ur groaz kozh a zegese soñj din lavaret ar bedennig desket ganin er c'hatekiz gant me "zonton", an Aotrou Barzig, person K oueneg:

"Me ho salud, Kroaz vinniget
Kement kroaz a zo dre ar bed
Blamour d'hon Salver binniget
'Zo bet warni kruisfiet"

Gant daoulagad ma faltazi e welen ar pardon a veze lidet gwec'hall aze. Pegoulz ? Ne ouien ket hag iskis eo n'em eus ket klas-ket abaoe. (1)

Ur chapel all a gaven c'hoazh war ma hent, ur chapelig modern dindan baeroniezh Sant Daouridi. Ur bater hag un aVe ez aen da lavarout anni. Nep lec'h na gant dent n'em eus klevet anv ar Sant-se abaoe.

Ar pep rustañ eus an hent a oa grav Milin Gambled (pe Gammled) goude bezañ tremenet Kroazioù Kemperven. N'eus ket sonnec'h na startoc'h a Bro-Dreger. Ma zad a anzave ne oa ket barrek d'he savel war he hed gant e "Lusifer" ha n'en devoa gwelet den all ebet

(1) Ne chom mui netra eus ar Chapel-se en hent a hiziv (1968) rak un hent a zo bet digoret e-lec'h m'edo ar chapelig. Un nebeudig mein-benezh ha Kroaz Vaodez. Ar pardon a veze graet da Veuzh ar Pante-kost, an deiz war-lec'h hini Lanvezeg (stok emañ St Vaodez)

ouzh hen ober. Pa ziskennen anezhi gant tonton Loeiz, ez ae da gregiñ e brid Rozed.

Ur wech krapet ar greg'hann-se, em beze poan o chom da c'hortoz ma zud, hast din degouezhout e kroec'h bourk bras Lann-goad, rak alese e c'heller ruilhal betek pont ar Roc'h. Aze em beze plijadur, harpet ouzh an aspledou, o sellet ouzh an dour-mor o sevel pe o tiskenn, ha pa veze war-dro unan eus ar besketar-rien, Jarloig, Iv-Mari pe Ujenig Moñforz, gant e vag hag e roued ledan; neuze'vat e chomet digor-frank ma genoù ha ne gaven ket hir an amzer, me'lar deoc'h ! Hogen, adalek ma veze erru ma zad da gregiñ en e varc'h-houarn, e karzhen a-dizh hag a-dag etrezek kêr, daoust ma ne oan ket ur gwall reder, poan-gostez din diouzh-tu. E kroec'h grav Sant-Yann e troen a-zehoù en ur c'hardenn dall a echuet etre daou bark dirak un tammig ti kozh-kozh. Prenestr ebet war an diaraog, met ur pikol dor bolzennek evel hini chapel Iruéz. Ul lab a bep kostez, an hini a-gleiz evit klenkañ ar c'hoad-tan, an hini a-zehoù a oa ti-labour un amunuzer, hag an amunuzer-se a oa ma zad-kozh ha paeron, Pier ar Barzig.

*

Sourpren a raen anezhañ ouzh e daol-labour, ur benveg ben-nak en e zorn, e lunedoù houarn-gwenn war beg e fri, e korf e roched, gant ur bragoù-voulouz ledan a yae war strishaat en trañ, ur c'hodell vihan dezhañ war ar vorzhed gant ur metr e-barzh. Uhel-vent ha rollet-mat e oa ar c'hozhiad, sonn c'hoazh war e gilhorou. Lammat a raen da boket d'ar paotr-kozh a veze e barr al levez... Soñjit'!ta! En tu-hont da beder merc'h di-zemez (en o zouez ul leanez) ne oa chomet bev dezhañ nemet ur mab, ma zad, ha breur ebet n'em boa. Ur roue e oan. Tud a lavare: " Na posubl e kac'hfe hemañ e genoù e dad-kozh!...Hag-efñ ne roe ket Pier droed d'e vugale da lavaret e oa o revr dezhe" Kaezhigoù a rae ar paour-kaezh kozh din...Me a oa sot gantañ ivez... Soñj am eus c'hoazh eus ar c'hwez vat a veze gantañ, met ivez eus pikoù lemm e varv gwenn a rae din diskregiñ buan a-walc'h ha mont da lammat war varlenn tintin Mari:

" Erru eo ma zamm kreñnard, ma bugel kaezh, ma Nestig!" Sot-nay, dall zoken e oa tintin Mari ganin; roet he defe din gwenoù he daoulagad

Diouzhtu e lavaren dezhi, arak ma veze erru ma zud: " Chom a rin ganit, hañ ?" - " Ya, mar kerez'vat, mabig, met amañ n'eo ket ken druz ar geusteurenn ha du-se; n'hellan ket prenañ kig-leue bemdeiz, kalonig!" - " Ba! me'chomo ganit !"

Harpet ma vezen gant ma zad-kozh ma moereb, ne roan ken peoc'h d'am zud ac'han m'o deveze divizet lezel ac'hanon er Roc'h, pa veze skol pe ne veze ket. Skolaer Kaoueneg, an Aotrou ar Roue, a veze pell diouzh bezañ a-du pa zistroe tad ha mamm hepdon (stok-ha-stok edomp o chom). Gwir eo, ma faeron am lakae da lenn pennadoù gwech ha gwech all. Un deiz e oan azezet dirak ma levr-istor kentañ gant Lavisse, pa azezas em c'hichen. Un daolenn a oa dirazon: Loeiz XVI-et o kimiadif diouzh e wreg, e c'hoar hag e vugale karc'hariet gantañ. Ar paotr-kozh da gantañ din, e brezhoneg evel just, buhez reu-zeudik ar roue-se. Biskoazh n'eus bet graet din ur gentel muioc'h skrijus. D'e veno, ar paour-kaezh Loeiz XVI-vet a oa bet ur marzher gwirion hag ar Frañs he devoa kaset da benn un torfed spontus, mezhus, heugus, a vefe ret dezhi paeañ ker marteze a-hed kantvedoù. Kentel ar chouant kozh a chomas garanet em spered hag he deus bet kalz a levezon warnon.

*

" Taeo'zo, ma zad-kozh a oa un den desket-brav. Bet e oa pell e skol ar Frered *, tostik d'an iliz, e-lec'h amañ an ti-ker bremañ, ha war ar mame^e tro e teske latin er presbital. M'en doa nac'het derc'hel war ar studioù-beleg evit mont war ar vicher kalvez-amunuzer, dalc'het en doa da sikour ar vebien evel chantr ha muziker; son a rae eus ar c'hentañ an...ofikle a veze implijet neuze an iliz-zañ a don bras. Meur a bajennad muzik ha kantikoù am eus c'hoazh, bet eilskrivet gantañ, gant un dorn-skritur ken brav ha ma'z eo posubl kavout. Servijet en doa evel-se an iliz e vuhez-pad. Al lesanv " Boum-boum " a oa bet roet dezhañ abalamour d'e ofikle - met piv n'en doa ket e lesanv er " Villaj " ? - met ne veze diskli-pet nemet pell dioutañ, rak feulz e oa ha kreñv evel ur marc'h.

Goude marv e wreg kentañ, mamm tintin Mari, e oa bet goulennet gant iliz-veur Sant-Brieg ha gant fabrik Landi, he kinniget dezhañ ur pae dereat-tre. Gwelloc'h e vefe bet e jeu ha gant kalz nebeutoc'h a boan. Evit harz outañ da vont kuit, an Aotrou Parker, paerson ar Roc'h, a daolas etre e zivrec'h unan eus e zanvez-leanezed (tredeadez a Urzh Sant-Frañsez e oa dija): Jan-Mari Krec'hriou, ken paour hag efñ, daoust dezhi da vezañ eus un tiad noblañsoù kozh-tiar** a roas dezhañ daouzek a vugale hag a zo bet va mamm-gozh.

Daoust dezhi da geout kement a vugale, e kave ar wreg yaouank amzer da vont da feriñ e ti ar vouc'hizien ha d'ober muioc'h eget nebeutoc'h a zevosionoù. Mont a reas war he zreid da Santez-Anna-

(*) Va levr " La Roche-Derrien et ses environs "

(**) Va studiadennig " Sur les traces d'une vieille Maison bretonne " (Soc.D'Emulation des C.d.N, 1962)

Wened, en ur bediñ penn-da-benn hag emichañs o klask he bara. Evit gouzout petre e oa buhez ar berc'herined paour a-hed tregont lev an hent kozh : Lannuon Wened, deuet da vezañ ar 167, n'eus, evel em eus lavaret end-ee em levr, war ar ROC'H, nemet lenn danevell fromus Narsis Kelian " Pèlerin de Ste-Anne " en e oberenn " Bretons de Paris ". Un deiz, un toullad bloavezhioù zo, en em gave ma zad ha me hon-unan o weladenniñ chapel Santez Suzanna e Mur. Dour a zeuas war e zaoulagad hag eñ da lavaret din: " Emaon o soñjal em mamm a zo deut amañ kazi sur, skuizh, brevet, he zread o wadañ, da bediñ patronnez ar gwragez direbech ha feal d'o gwazed. Evel ma ouzout, Mur a zo hanter-hent etre Bro-Dreger ha Santez-Anna-Wened."

Ret e oa bet da Bier 'r Barzig lardañ spontus evit gonit bara d'e holl vugale. Implijad e oa e ti Jelard, ul labouradeg vras evit ar mare, e-lec'h ma veze aozet ha frammet holl vanejoù pe mikinikoù-da-zorneañ Bro-Dreger a-bezh, ha diwezhatoc'h, an dornerezed pe koufroù modern a veze gwerzhet betek er penn pellañ eus Bro-Leon e-lec'h ez eo degouezhet ganin en em gavout, gant kalz a virvilh, dirak unan anezhe. Kent bezañ anvet mestr-miche-rour, labour pennañ ma zad-kozh a oa bet, a-hed meur a vloavezh, mont da lakaat en o flas ar manejoù er mersurioù. War droad ez ee, se'zo sklaer, gant e vinvioù war e chouk, betek tro-war-droioù Pempoull pe Lanon ha keit all war-du ar c'hreisteiz pe ar c'huzh-heol. Ret e veze, evel just, kuitaat ar gêr pell 'raok an deiz, ha soñj mat am eus da glevet anezhañ o komz eus ar beajoù hir graet gantañ e-kreiz an noz evit distreiñ d'ar gêr. Skuizh-divi ha morgousket evel ma c'hoarveze dezhañ bezañ war-lerc'h e zvezh-labour, e kollas ouzhpenn ur wech e hent, ha traoù iskis a-walc'h a soñje dezhañ bezañ gwelet neuze. Un noz-vezh, ez eo mamm-you-gozh, marv pell'oa, a gavas harpet ouzh ur c'hleuz o nezañ. Goude bezañ truzzet ouzh e skuizhder, e lakaas adlakaas anezhañ war an hent mat: " N'eo ket dre aze e tleez mont, mabig, treiñ kein a rez..." Ur wech all, kollet-lip en un hent-treuz don, en em lakaas ur c'hi bihan gwenn da biltrotat dirazañ hag eñ d'e heul betek bered ar Roc'h. Pa erruas er gêr, e voe evit klevet he doa lakaet e wreg un ael bihan war an douar douar, mat adnijet e oa diouzhtu d'ar beradoz.

Aet da gozh, hag intañv adarre pell'oa, goude bezañ degeret ur vedalenn digant ar gouarnamant evit e zaou-ugent vloaz e ti Jelard, en em lakaas war e gont. Pa c'houlennas un tamm pafision er maerdi, e voe graet ur c'hinnig ken dister dezhañ, dre m'o doa darn eus e vugale " plasoù mat ", ken e nac'has hag e kavas ar maer ruz, an doktor Rolland, gant ar mil mallozh ma Doue, rak un den balc'h e oa, ret eo lavaret, ha zoken uhel ha grontek

marteze. Biskoazh n'houlas bezañ gouzilh na skabell dindan troad den, ha setu perak, da-laras ma zad, n'en doa bet nag ar " Bene Merenti ", evel I-M.Morvan, ar " chantr kozh ", na zoken ar veda-lenn sukoptial.

An artizan-koad-se a oa troet da blijadurioù ar spered. Bennoz goude e labour, e welen anezhañ o lenn; war gorn daol e veze bepred ul levr bennak en tu-hont d'an Aviel " Les quatre évangiles en un seul ", ar c'hazetannoù " La Croix " hag ar Pèlerin ". Pep tra kloz dindan un tamm koad derv ponner a zo bet kollet, siwazh. Met pa lavarin deoc'h bremañ un dra souezhusoc'h, ar c'hozh tamm ti-se a oa leun a levrioù, pe evit chom tostoc'h evkent d'ar wirio-nez rik, lod kroec'h ur pezh kanastell-armel a oa karget gante. Keit ha ma voe yac'h ma zad-kozh, den n'helle boutañ e fri aze, na me zoken. Met pa gouezhas seizet, e teuas daou pe dri benn laer da emprestañ levrioù war zigarez gweladenniñ ar c'hleavour.

Tintin Mari, ret dezhi chom da sikour sevel ar re vihan, n'he doa ket kalz a zeskament, ha ken kalon vat e oa ken ne selle ket a-dost: " D'ez! emezi, keloù ar c'hozh traoù poultrennek-se!" Hi ne lenne nemet " Bernadette " (evel-se e voe dedennet ma ivez gant ar gazetennig-se). An holl levrioù pe dost a nijas diouzh ar ganastell. Hervez ma zad, e oa en o zouez un dornskrid eus amzer ar Reveulzi. D'ar mare-se, e oa tiad mamm ma zad-kozh, Brezidañ an Taleg, tud a galz a beadra, ha div dintin dezhi a oa bet darbet dezhe bezañ dic'houget dre m'o doa nac'het mont d'an iliz da enoriñ an " Dimezell Rezon ". N'eus manet ganin nemet seizh levr, en o zouez, an aviel am eus komzet dioutañ uheloc'h, unan eus levrennoù douaroniezh an departamant gant Benjamin Jollivet, prenet gant e berc'henn e Sant-Brieg en ur zistreiñ diouzh e goñje e Sant-Servan; levrig kantikoù brezhonek an eskopti eus dibenn ar c'hantved diwezhañ. Ret eo menegiñ ivez " Le presbytère de Plouguern, récits bretons par Ch.Perint "(1863) am eus bet kalz a blijadur ouzh o lenn pa oan paotrig yaouank hag a droin e brezhoneg ur wach bennak pe ne gavin ken netra da zibunañ, deuet ma spered da vezañ sec'h-korn.

A-hend-all, ne oa ket diaes Barzig kozh da gontantif: gwech ha gwech all ur pred kramprouezh graet gant e vanc'h, rak ne oa ket par da dintin Mari pa gemere he c'hleuc'h, he skliñsenn hag he rozell. Evit lakaat ar paotr-kozh war e du mat, n'he doa nemet lavaret dezhañ: " Ma zad, torloet 'vo un " dornad "? " Raktal ez ee da derrañ bleñchoù el lab. Ur bannac'h chistr war-benn, hag ur vrif-senn-vutun ha setu sart ar paotr-kozh evel pemp gwenneg. Ar butun-fri a veze gantañ en devezhioù pemdeiz en ur voestig-korn voutin, met pa zeue da Goueneg, da skouer, war e droad, ur penn-bazh staget gant ul lerenn ouzh e arzorn, neuze e lakae en e c'hodell ur voestig

arc'hantet keer, prenet dezhañ gant e vab en Turki, a gav din. E-pad ma skrivan al linennoù-mañ emañ ar voest-se dirazon; enni, a galon zeol, em eus klenket poltred ma zad ha ma mab - Doue d'eo fardono - ha ma hini-me ivez, ha setu unanet diwezhañ Barzigien ar Roc'h.

Va faeron a oa devot, n'ae gwech ebet da gousket hep lenn an Aviel, kemer dour benniget ha lavaret e bedennoù war e bennoù-daoulin dirak ur pikol kroaz hanter gochet gant rideozioù e wele, n'eus forzh piv a veze en ti. Unan eus personed ar " Villaj ", an Aotrou Jul Le Cocq, ur prezeger ampart-bras, a blije kalz ma zad-kôzh dezhañ; dont a rae alies da glakenniñ gantañ en e di-labour, azezet war ur pilgos. Poltred ar beleg-se em eus gwelet ordinal ouzh moget an ti kozh.

* * *

Mezhek on un tammig - met pas re !- da vevañ komzet deoc'h ken pell all eus un den kozh aet da anaon pell'zo, n'ho peus ket c'hwil anavezet ha na oa na kar na par deoc'h. Moarvat, ho po kavet divalav ma zemmoù kaozioù. Na'vit se! hep disterniñ eo ret din dere'hel gant ma evorennoù, evel-se on troet hirie, petra' faot deoc'h !

Tintin Mari a oa kannerez diouzh he micher...Ac'hanta! ar gannerez dizesk-se ha deus desket din kalz, peogwir ez eo o selaou anezhi emeus raknatet ar varzhoniezh a zo en ur gontadenn-bobl, peogwir he deus sikouret digeriñ ma spered ha ma c'halon d'ar brezhoneg a gomze ken mat, ha d'al lennegezh dre vras. Biken n'akouain an survezhioù dous tremenet en ti-se, pa var met klet ha klouer, harp ouzh bank-tosel ur gwela-kloz toull bras, azezet war ur skaoñv bihan, ma divrec'h war davarñjer ma moereb ha ma, daoulagad, diskouarn ha tout o sunañ holl ar pezh a zibune. Ur gonterez eus an dibab e oa, klasket em eus reiñ deoc'h un taff-va gant " Kaozioù tintin Mari " (Brud 16)

Daoust dezhi da gaout ur vuhez rust ha dic'hoarzh a-walc'h, e kemere ordinal ma zintin an traoù dre ar penn-mat, laouen hag ampartik e veze bepred ha prest da farsal gant an holl, hep tam. abofter ebet dirak ar " ruped ", ar re binvidik: Sot e oa an holl ganti. Met ma lavarin deoc'h bremañ he zemmoù sioù: toull e oa he daouarn, ken toull ken ne oant graet evit mirout gwenneien; ne servije ket, kouezhañ a raent a-dre he bizied. Kement hini a zegouezhe da eur ar pred, a veze pedet da sikour debrif ar pezh a veze war an daol. Ne vanke ket a bratikou, 'vel

just, dreist pa voe aet an hini kozh da anaon: " Me'gred din, a lavare unan e toull an nor, e ver oc'h ober letez (krampouezh) emañ! " E giz-se em eus anavezet tud kozh liv an XIX-^{vet} kantved warno, pampez darn anezhe, met ken souffil darn all, ar Wrac'h-Amiegez, Merc'h-an-Heol, Lagadig, lez-vamm Narsis Kelien, hag all. Un tamm brav a Roc'hhardenn e oa tintin Mari : n'he defe ket miret ur gwen-neg toull kavet e godelloù an dilhad a lenne, met frouezh an douar a oa hervezi d'an holl. P'he deveze ezhom un irvinenn pe ur gaolenn da vevañ soubenn fresk, pezh a zeue ganti ken brav ha ken mat hag he c'hrampouezh, ne veze ket pell o vont diskurpul d'ur park bennak en ur zistreiñ diouzh skaoñv he c'houez, pe e-kreiz hor beleadennoù, ha kement-se hep an em guzh an disterañ; zoken pa veze an " ostand " en dachenn, e huche warnañ : " Iv-Mari, te 't eus legumaj kaer 'vat, damañ din, paour, peadra da voueta ar " poud-fer " !

-Ya, ya, Mañ, kas ganit ur c'houblad irvin ha daou benn-kaol, n'eo ket gant dour sklaer e vez savet moc'h lart.

-Tav, poezon, oc'holla'vat, n'eus moc'h nemet du-se, met paotr mat 'c'h out, memes tra."

Ur wech all e tihope*: " Tro da gain, misoner, ma spoefsin dit un toulladig karotez, peadra da lakaat em zrotaj."

Pa ne veze ket ar menajer war-wel, ec'h anzave dezhañ he lea-roñsi, hep tamm mez, ar wech kentañ dezhi da gejañ gantañ " palam populo ", hag evelkent hep boutinded an dud c'hros. Erru mat e oa gant an holl, pa lavaran deoc'h, rak bez'e oa ar gwellañ plac'h a zebre bara.

Ur wech ar bloaz, ur goude-kreistevazh, ez ae d'ur vereuri bennak gant ur vignonez, pep a garrigell gante, ha ma charreat gant an eil gant eben, da adkargañ ar golc'hedoù gant pell fresk. Ne gouste nemet ar boan da gargañ anezhañ ha c'hoazh e veze roet hon advazhioù dimp. Ne skuizhen ket o selaou ar merc'hed o pilat o genadioù - na vezit ket souezhet ez on deuet ken klakenn.

Troc'het an eost, e plije din mont da heul Soaz, un amezeger kozh, hag he mab-bihan, tri pe bevar bloaz dezhañ warno hag a zo bremañ person en ur barrez diwar-dro, da dafvouezeta atre ar savadelloù-ed; met ma a lavare " teskaoua ", evel e Kaoueneg, ha goapaet e vezen un tammig, met dambrest e voe daaket ganin penaos komz ar Roc'h, ha penaos, pa vezen distro d'ar gêr.

Ur wech pe ziv ez on bet ivez o kas God Koc'hu, a oa deut da vezañ dall, ar baourkaezh kozh, da vaner Kerverzod e-lac'h ma veze roet dezhi ur podad laezh-ribod hag un aluzen all bennak.

* pe:Tiope, eus Tiopal evit Hopal.

Nag a blijadurioù plaen ha didro am eus taffvaet evel-se er Roc'h !

Ret e vefe din komz c'hoazh eus an "tiez bihan" a saven a-hed gardenn tintin Mari gant restajoù koad tad-kozh a zeue a-wechoù d'am sikour. Ha pebezh joa pa zeue glav hag e c'hellen chom ul lajadig em loj hep bezañ gleb !

Alies ez aen ivez da stank Milin-Saezh da gannañ gant tintin Mari. Ne chomen ket war hent. Tremene a raen ma amzer o tarc'ha-viñ " batimañchoù " - tammoù koad a bep seurt - en dour pe oc'h esa pakañ silioù yaouank an ur ruzelenn. Met pa dremene pourmenadenn bourc'hizien vihan ar Roc'h o vont da c'hoari da Goad Boujed dindan ranerezh Mari-Von, e save merien d'am zreid ha me d'o heul. Mari-Von a oa unan vihan gozh, dizemez, un tamm deskamant dezhi, un asez seurez pil-pavez, a dremene hec'h amzer oc'h ober katekiz d'ar vugale pe o tiwall anezhe " Rup ar Villaj " a oa met eviti. Gout'ouie honnezh gozh ar stek da ober ouzh ar grennarded evel ouzh o c'hoarezed ha gouelet ez eus bet dezhi p'eo marvet. Dont a ris da vezañ kamarad gant daou pe dri baotrig kenod ganin, ha chomet omp abaoe mignoned diouzh an dibeb. Ur wech bennak ez on bet ganta o " spoñsañ zer " (laerezh avaloù) e kloc " Madam Krak " (Krec'hriou) pe o pesketa kranked - hag o foazhañ goude e Koad-al-Louarn. Pegen lous, met pegen mat e veze ar geusteurenn-se !

Met ar peurliesañ e chomen ma-unanik ha ne gaven ket hir an amzer. Nag a survezh am eus tremenet, da skouer, em gwezenn ! Ya ! ur wezenn, iliav-tout, boutet war vord ar c'hardenn. N'he doa ket ouzhpenn ur metrad uhelder met stummet ken brav ha pa vefe bet diwar vazh-hud un achantour bennak. N'hoc'h eus nemet soñjal an ur seurt disglavier pe gabell-touseg troet war an tu-gin. P'len em laosken da gouezhañ em gourvez ar c'haveall glazvez, e vraselle evel ur gwele-martolod. Hag e gwirionez, ur martolod e oan me neuze o kuitaat revier (stêr) ar Roc'h evit redek da verdeiñ war ar morioù estren evel ma zad. N'em boa d'ober nemet heuilh ar goumoulenn vihan a dremene a-us din hag he devoa dispa- ket hec'h holl lien evit skarzhañ dirak ul lestr divant a glaske pakañ anezhi... Met dilikat e oa ma bag. A-wechoù e c'hoarveze ganti evelkent mont da stekiñ ouzh ur pikol batimant morlaeron. Neuze'vat e heje ma gwezenn, rak en em zifenn a raen evel un diaoul. Ha pa veze fall ar mor'ta!!! Degouezhout a ras din ivez menel sorennet gant ar sonioù flour a saven evidon ma-unan, ha kestell al loar, 'raok mont da Gêzhun!... Souden e vezeñ dihunet gent lammoù direizh ma bag..." Alo, mabig, poent eo dit dont.

d'az koan, pedet omp goude da evañ ur bannañ'h "piz" (kafe) da Draoñ-ar-Pont e ti tintin Mañ-Von " eme dintin Mari. Ha me en traoñ, drantik ma c'halon, rak aze e plije din mont: honnezh gozh a oa douget din ivez, goude ma ne oa nemet ur genitervez d'am faeron.

N'em eus morse ruflet abaoe c'hwez an iliaev hep soñjal em gwezennig karet.

*

Un abardaevezh e oan aet gant tintin Mari da gas ur bakadenn traoù kannet, landrammus a-walc'h, da Vari-Sentig ar Gag, en tu all d'ar stêr. Uhel e oa ar mor, klouar an amzer, lezel a ris ma ma moereb da vont en ti hec'h-unan. Me a azezas war ar geot a-rez an dour; ha petra a c'hoarvezas prestik goude ? Daoust hag-ef e vanis morgouasket pe betra ? Koulskoude ne gav ket din, nann, nann, me c'houlenn bezañ maout, m'am eus huffvreet! 'Taoe'zo, bouedoù bihan a oa en em lakaet da redek warnon. Petra'oant ? Marmouzed bihan pe zoken kornandoned munut, evesk, koant, ken e oa un drugar. Mont ha dont a raent ha foulet e seblantent bezañ. Ur blijadur dreist am boa ouzh o gwelet o pignat warnon gwashañ ma c'hellent ! 'Michaëls e oant o vont da gaozeal ganin a-rez ma diskouarn... Met setu tintin Mari o c'hervel ac'hanon diwar an hent " Hast buan dont, mabig, manet on da glakenniñ ha poent eo dimp mont bremañ" Echu d'an achanterezh !

Hep doustañ ebet, gwelet em boa un dra bennak, met petra ? Gleskered ? Skrilhed ? Kranked bihan evel ma'z eus a-vil-vern er Yeodi ? Kammed n'em eus gallet kaout diskleriadur ebet war an de- hevel gouezh-mañ; na glesker, na skrilh, na krank n'eo tost da vezañ ouzh ar pezh am boa gwelet pe, da vihanañ, mar kirit, a oa bet gwelet gant ma faltazi. Aet e oan moarvat, da heul Swift da vro Lliput 'raok bezañ lennet e levr " Guilliver ".

Biken n'em eus gallet abaoe krediñ ar c'henaouaien a lavar n'eo ket gwir ez eus korriganed, war zigarez n'o deus-i ket gwelet anezhe.

*

* *

Ma hag a zo bet o verdeiñ war veur a vatimant, a zo bet o pes- keta a-hed pemzeakteiz diouzhtu etre Eusa hag aodoù Iwerzhon, biken n'ankouain ar valeadenn gentañ graet ganin e bag Ujenig Moñforz etre ar Pont-Nevez ha Koad-al-Louarn. Klakenn a-walc'h a vafen evit adkontañ an droiad verr-se, bet dibunet ganin endeo war ur gelaouenn bennak, met ne rin ket laouen memes tra! rak evel m'en deus rannet dichek Boileau gozh d'ar skrivagnerien :

"Ur verenn adtommet na dalvezas jamez netra"

An hini a zeuio dour en e c'henoù gant kennebeut-se a dra,
a lavaro din.....

Evit klozañ, un dra all a blije din er Roc'h ha n'eo ket an
disterañ: an iliz-parrez. Leun a esmae e veze ma c'halon enni.
Bennozh d'am skolaer, d'am zad-kozh ha d'am zad, gout'ouien dija
e oa bet ur seurt kastell-kreñv hag a rede dindani riboulioù a
yae betek dindan ar stêr. Desket e oa bet din ivez piv e oa Char-
lez Bleiz ha n'hellen ken distagañ ma daoulagad diouzh e zelwenn.
Pa voe lakaet en he flas ar werenn vras:livet kaer emañ warni an
dug trec'het, e dibenn emgann ar Roc'h e 1347, o rentañ e gleze
da Robert du Châtel, ne chomas den ken pell all, sur-mat, da
c'henaouiñ dirazi. Ha setu, marteze, perak em eus klasket diwe-
zhatoc'h skrivañ tammoù traoù war Istar ar Vro

Mouezh kenedus hag ec'hon an ograoù, a gave ivez em c'halon
heklevioù don. Ur misi ! Evidon e oa mouezh ma hendadoù a santen
o eneoù evel stag kozh ar mogerioù hag ar pileroù kozh meurde-
zus. Aze em eus komprenet ar chadenn wirion a zo etrezomp ha
remziadoù tremenet hor gourdadoù.

Ha setu, emichañs, perak em eus c'hoantaet skrivañ an
effvorennoù-mañ ha komz deoc'h eus ar re anezhe am eus anavezet
mat, o deus sikouret pourchas din ur vugaleaj evurus hag a zo
chomet ken tost d'am c'halon.

Ernest AR BARZIG. Roh-Vur.

=====

(gwel.paj.31) Hag ar youl c'hroñs-se d'am sellout evel unan
eus izili ar Gostezenn Vroadel (Breiz Atao), pa ne don bet
biskoazh en hini ebet eus o c'hendalc'hioù nag aprquet hini
ebet eus o oberoù !

Hag e 1939 ar menoz da lakaat e penn FEIZ HA BREIZ un
euzhvil seizhpennek! Hag ar boikoterezh e 1941 ha 1942
eus va mignon Herri Kaquisin, pronet e kreiz retred ar veleien!
N'eo ket diaes: n'em eus bet eus perzh ar Vikel-vras Yonkour
abaoc 10 vloaz'zo trabserezh war drabaserezh! A-benn andiwozh
em eus bet lavaret dezhañ d'ar 27 a viz Kerzu tremenet" Ur beleg
a volontez vat ez on, ha ne c'houlennan nemet un dra: ar peoc'h!"
Ha kompren a ray ? Hen hetañ a ran. Gwelout a rit ez eo va stad
ur stad ispisial ha n'eus nemet va lezel da vervel war an dachenn
Kenavo ha bennoz Doue d'eoc'h evelato eus ar vad ho pije bet
c'hoant da ober evidon (*)

(*) Frazenn nemeti e brezhoneg.

Y.V. Perrot.



LE KOAD KEV, gant Mark ar Berr, lun Fask 1968



POLISED O KAEAT HENT KOAD-KEV, lun Fask 1957

D'an Ao. G. person Skrignag arpad' an Ao. PERROT

31

Skrignag 8.1.1943

Aotrou G. va c'henvreur ker

Mar degouezh ganeoc'h mont da Kemper, er sizhun a zeu, arabat deoc'h, me ho ped, klask reiñ sikour din, rak va stad-me a n'eo ket evel hini ar re all.

Abaos an Ao. Bernard hag a varvas d'an oad a 70 vloaz, er prison, bez'e vo 150 vloaz a-benn ar 17 a viz Mezheven da zont, n'eus bet biskoazh, a dra sur, person ebet e Skrignag d'an oad m'emaon-me. Hogen unan ankuunac'haet ne don ket. M'emaon amañ ez eo dre ma Venner va c'hastizañ evit va c'harantez evit Breizh. An Ao. Yonkour (va enabour niverenn 1) en deus bet hen diskleriet din endegun, e-unan.

Gwelet em eus o kuitaat ar menez kenvraudeur en em gavet war va lerc'h: an Aotronez Boteraou, Call, Prigent, Acquitte, Sp... N'em eus ket avi ouzh o eurvad ...hag hiviziken emeon re gozh evit dilojañ. Soñj hoc'h eus eus an Aotrou Kerouanton o kuitaat Plouigno hag eus evezhiadenn drouk an QUEST-ECLAIR" 65 bloaz ne deo ken !" He me am bo 66 vloaz prestik!

He neuze gout a ouzon, ma vefe kinniget un dra bennak din e vefe ur plas e aluzener en un tu bennak. Met pa'z on bet ganet e-touez brezhonegerien e fell din mervel e-touez brezhonegerien.

Hogen un dra a fell din diskleriañ deoc'h: m'am bije gallet divinout em bije kavet em superioed tud strizh a spered hag atahinerien evel an Ao. Yonkour, biken ne vijen bet beleg, e eskopti Kemper! E 1935 e gondaonidigezh eus an deñsoù a reas tro ar bed! E 1937 e gondaonidigezh eus ar strolladoù-c'hoarierien poadred ha merc'hed, a veze anduzot er Bleun-Brug, abaos 30 vloaz, a seba-sae sañs-vuioù a se ar speredoù ma oa an daou eskob, daou zevezh goude, e penn ur c'hoariadeg c'hallek gemesk, e Kastell-Paol! Barnedigezh an Ao. Yonkour war va frezegenn-yeo'hedoù e 1938, e Lannuon, a vennas ober dezhañ ruilhal gant ar vezh dindan an daol" pa oa diazezet penn-da-benn war gomzoù ar Pab Pius XI, a voe ur yudazerezh hep e bar. (*)

He neuze dre urzh ar gouarnamantoù gall, ar gwallgaserezh kasonius-se eus en emrenerien vreton, kondaonet garvoc'h, e Kemper, eget ar gomunisted pe an dud dizoue, daoust ma n'o deus bet biskoazh ha n'o dije bet biken rebech ebet digant ar Pab.

(Kendalc'h pajenn 30)

(1) Gwel. Feiz ha B. Here 1938 paj. 218 sq.

en-dro d'an homeopatezh

" Come on eel "

DA ZIGERIN AR GAOZ

Gouere 192... Duf! Setu me erfin war gae ar Porzh-houarn, e Roazhon, morzet va divesker, va malizenn vihan em dorn. Un tamm skuizh rak bec'huis e oa an tommder en tren

- Andrev! A-benn ar fin ez out en em gavet. Edon ouzh da c'horthoz pell hag amzer'zo

- Te an hini eo, Mikael! Nag eürus ez on ouzh da welout. Ne oa ket dav dit kemerout kement a boan.

- Ya, ta, ta! Deomp er-maez. Mixet em eus ur gambr dit, e straed Sant-Melani. Da c'houde ez aimp da goaniañ d'an " Hermi-nig "

Evel-se eo a ris anaoudegezh gant kerbenn Vreizh pa'z is da dromen va bachelouriech...

Goude koan ez ejomp hon-daou Mikael ha me d'ober un tamm tro dre gêr. Dudiüs e oa an nozvezh. Un aezhenn skaffv a c'hwezhe a-hed ar Wilun ha freskik e oa an amzer. Diskenn a rejomp betek hall an QUEST ECLAIR.. Hag e welis ur beleg o tonet er-maez eus an ti-moulerezh gant ur bagad tud yaouank ouzh e ambroug studierien moarvat. Mikael a roas un teol-ilin din: " An Abad Trochu, emezañ. Paotred ar "Sillon" ez eo an dud yaouank a zo en-dro dezhañ. Amañ e reont o babadegoù pe ahont e straed ar C'harmeziazed.

- An Abad Trochu ? Piv eo hennezh ?

-Ma! n'anavez ket an Abad Trochu ? Pennrener an QUEST-ECLAIR, ha gentañ zoken ez eo savet ar gazetenn! Ha c'hoazh emañ e penn un toullad mat a aferioù all. Un afer gennerezh morued, e Sant-Maloù. Emañ ivez o paouez krouiñ ul labouradeg-paper " Paperaerezhioù Breizh ", emañ e Roazhon, hag un toullad korversoù all...Ha d'an ampoent ez eus tabut etrezañ hag an " Action Française " journal Leon Daudet. Skrivet en-deus he-mañ en e gelaouenn " Trochu, amzer-dremenet ar verb gallek " trop choir "(re-gouezhañ)...Me a lavar dit ez eus safronezh en ti-mañ, er solieradur kentañ, hiziv an deiz.

- Va Doue! ur beleg en em deurel evel-se er c'hanwerzh hag en tabut.

- Arabat dit spontañ, Andrev gaszh! Orietaled a zo amañ e-touez ar veleien, en arc'heskopti Roazhon! Darn avat a ra labour

evel an Aotrou Bridel, e Foujera. Krouet en deus ul labouradeg gwer-strink, un ti-bank, un ispiserezh evit sikour an dud dilabour "

Ma! tonket e oa din ober anaoudegezh, da vihanañ diwar wel, gant un trede " oristal " a-douez beleien Roazhon. Rak an deiz war-lerc'h war-dre an euz hanter, va bachelouriezh em godall, tapet ivez va lein ganimp, edomp hon-daou Mikael ha me oc'h evañ ur bannac'h kafe war liorzhoù ar Wilun " Kafedi ar Peoc'h "

- Sell, Andrev, a hopas a daol-trumm Mikael. Setu aze an tredel

- An trede? Peseurt trede ? Ne vezan ket.

- Ne welez ket ar beleg-se a zo o tremen dirazomp? En toull-bac'h eo bet.

- Santez Anna-Wened, emezon, en toull-bac'h? 'M eus son out trelatet en dro-mañ. Ha perak e vefe bet toullbac'h et.

*

Hag e klevis an istor-mañ: " Kaset eo bet direk ar barner gant medesined Roazhon abalamour m'en deus graet madisinerzh ha gwerzhet louzeier, daoust ne deo ne vezeg nag apotikar! "

Chom a ris sabatuet: " En dro-mañ, Mikael, amañ oc'h ober goap ouzhin, hep mar ne marteze! " Kae da gontañ flugez da lec'h all, rak evidon-me, ne gredan ket an disterañ ger eus ar pezh a lavarez din!

- Selaou evelato, eme Vikael. Gwelout e ri. Bremañ emañ o lenn e vrevial. Bremañ p'en devezo tapet Koc'hu al Liene-kichen Levr di Malbrand, e treuz ar Wilun war bont Yann-Jaarez. Goude-se e tiskennno a-hed kaoù Lamartine ha Dugy-Trouin. Treuziñ a raio edarre ar stêr war bont ar Mision evit mont betek straed Dom Lobineau: hag en e di e kavo un toullad klafvourion ouzh hen gortoz evel o selvez!

- Neuze ez aio edarre d'an toull-bac'h ?

- Arabat dit en em chalañ evitañ. Ul louarn eo deuet da vezañ. Ur mezeg a sikour an Aotrou CHAUPITRE, rak hennezh eo an Aotrou Chaupitre, beleg : an Doktor P. de la M. a zegas e skrid-testeni, hag e ra an abad war-dro ar glafvourion. Evel-se e vez heuliet al Lezenn!

- Ya, met peseurt louzeier a implij ar beleg-se?

- Gwelout a ran n'ouzout ket kalz a dra war ar sujed-se, Andrev! Ha koulskoude me'gave din e oa brudet dre holl a-benn bremañ " TAKEN-NOU an Aotrou CHAUPITRE ". Takennou homeopatek.

...Me ne oa ket kaer va fenn gant takennoù an Aotrou Chaupitre p'edon o tistreiñ etrezek Breizh-Izel, lorc'h annon gent va arnodenn a roe din da gredif e oan deuet da vezañ un den, hag o hufvreal en dudi a veze o tiwall ar chatal e foenneier gwasket Kerguzh, e-kreiz c'hwez vat ar foenn nevez-troc'h et hag hini Rouanez ar Pradeier "

GOVERE 192... Setu me hiziv an deiz, o kaout va zeste-ni-gouiziegezh war an Apotikerezh. Rak da Roazhon e oan distroet goude va bachelouriezh da genderc'hel gant va studioù. Morse e-pad ar bloavezhioù tremenet o studioñ amañ, n'em eus klevet kelennerion ar Skol-Veur o kaozal diwar-benn an HOMEOPATIEZH, nemet evit c'hoarzhin e vefe bet.

Evel-hen a glevet gant teodoù flemmus ha binimus pa gomzent diwar-benn an Aotrou CHAUPITRE. An Aotrou'n abad Chapitre a sko e louzeier diwar c'horre pont Sant-Jord er stêr, ha da c'houde, en ur lenn e vrevial, e tiskenn war-du Pont ar Mision, hag eno e kemer litredoù-dour eus ar stêr. Gant an dour-se, ennañ distrem-padurioù eus e louzeier, e leugn an holl vuredoù bihan e vez gwerz-zhet gantañ d'ar glañvourien...

HERÉ 1953 Goude bezañ tremenet ur pennad-amzer, en ur gê-rig, war harzoù Breizh, e Normandi, setu me adarre e Roazhon, prenet ganin un apotikerezh, e-kreiz kêr ! Kentañ souezhadenn: TAKEN-NOU AN AOTROU CHAUPITRE a zo e gwerzh er stal. Pep hini eus ar buredoù bihan-se a vez enni pemp mililitrad alkoool homeopatek, aozet gant ar beleg, pe gant unan all bennak... Rak evel m'en devoa kavet ur mezeg evit hen skoazellañ gant e ordrenasoù, en deus kavet un apotiker da brestañ e anv dezhañ: rak war ar boutailhouigoù munut ez eo merket anv un apotiker... Pep boutailhig a zo anavezet dindan un niverenn disheñvel. Ur c'hant bennak a zo anezho. Pep niverenn a zo evit ur c'hleñved resis.

Bac'h! Gwerzhañ an dra-se pe draoù all...! Ar vedesined, mignoned din, a lavar: "An Takennoù-se ne reont na droug va ved, evel palastr ar wrac'h war ur c'har-goad. Heñvel ouzh ar reolenn "Coué", pe ar boullouigoù "Mica Panis" pe c'hoazh ur "Placebo"...

Mignoniezh vras a zo savet etra ur mezeg homeopatek anvet an Doktor Moris ha me. Ur c'heneil hon eus, hemañ mezeg-chatal. Ar "Veto" a reomp anezhañ.

HERE 1934 Hanter-divezhad chase, e Sant Armel. Teir lev diouzh Roazhon. Ar "Veto" a ya d'ober war-dro al loened en ur vîreuri. "Mat eo, Aotrou, a lavar al labourer-douar dezhañ, koulz eo din ober un toull em fark, rak gwashoc'h-gwashañ ez a va leue gant ar red-korf, en desped d'al louzeier.

- Ro dezhañ "Croton Tiglium 6 X, bep div eur, a lavar va mignon, an Doktor Moris.

- Ma! eme ar Veto. Kollet evit kollet, roomp d'al leue

"Croton Tiglium 6 X" Met e gwirionez, e lavaran dit, Moris, n'em eus ket fiziañe ez takennoù bihan! "

Nebeut amzer goude e teuas keloù din: saveteet e oa bet al leue, en ur ober a-vec'h daou zevehiad! Sebezet e chomas ar Veto ! Sebez-zet gant an efed, he me ivez.

GENVER 1935 : N'eus arvar ebet: efadus ez eo an homeopatiezh. Met evel ne bare ket an allopatiezh an holl gleñvedoù, e vez ivez c'hwitadennoù gant an homeopatiezh. Setu amañ war-lerc'h, pareañsoù mer-zet ganin en un doare resis.

An doktor Moris ne doull morse an taboulinig pa vez ar vugale gant skouarniadoù: atav e ra gant boullouigoù pe dakennoù homeopatek. Efed vat bep taol... Ur skoliad eus Lise Roazhon am eus gwet, goloet e zaouarn a wenaennoù; bet o kaout nouspet medisîn, efed ebet. En ur ober ur sizhun o deus an takennoù bihan skubet kuit al loustoni... Ur c'hleñvour mac'hagnet gant ar remm a zo disammet diouzh e boan... Ur surjien en doa lamet meur a wech gant e skejer ur wenaonn diwanet dindan droad e c'hoar-gaer. En aner, derc'hel a rae da ziwan en-dro. Deuet an takennoù bihan a-benn anezhi....

Dav eo din neuze studiañ an homeopatiezh. Prenet em eus da gentañ an "ORGANO" savet gant Hahneman, hemañ Tad an Homeopatiezh a-vremañ. Da c'houde levrioù an doktor Gilbert Charette eus an Naoz, ha reoù Leon Vannier eus Pariz ha levrioù all...

PETRA EO AN HOMEOPATIEZH ?

Ur stumm yac'hadurezh diazezet war ar bennwirionez-mañ: "An heñvelded a vez paret gant an Heñvelded " Similia similibus curantur". Skouer : ar pezh a zegas dislonkadenn (Ipeka) a bara an dislonkadenn - Ar pezh a zegas lounezhad (cantharus) a bara al lounezhad. Ar c'hafe (coffea) hag a ro digousk a zegas kousk.

An ALLOPATIEZH, e-giz da vourc'hiz-denjentil ar pezh-c'hoari, a ra a-wechoù hep gouzout dezhi... HOMEOPATIEZH !

Ar vrec'hidigezh, ar vaksinañ, n'eo nemet bezañ louzaouet a-enep ur c'hleñved bennak gant mikrobed lazhet pe vinim gwanaet. Ar re-mañ lonket dra ar genoù pe lekaet er c'hoar gant ur strinkell ha barrek ez-vev da reiñ an hevelep kleñved... Ar c'hinin a ro ter-zhienn pa vez roet d'un den yac'h; mat, al louzaou-se a vez impli-jet gant an Allopatiezh ouzh an derzhienn.

Al louzoù homeopatek a gemerer dindan stumm takennoù, boullouigoù pe c'hreun bihan.

Er penn-kentañ e kaver ar Mammoù-Teuzajurioù aozet gant ur

bouezadenn-louzoù lakaet eno n'ev fouzadenn alkool (60°pe 90°) da skouer: mamm-deuzadur Arnika- mamm-deuzadur Belladonna, - Dre-sara - Aconitum h.a.

Ar RUMM KENTAÑ a vez kinniget gant distrempadurioù dre zekvedoù: al lizherenn X latin a dalvez evit = 10 ha dekvedenn.

1 mililitrad mamm-deuzadur + 9 mililitrad alkool 50° = 1 X pe kentañ distrempadur dre zekvedoù.

1 mililitrad 1 X + 9 mililitrad alkool 50° = 2 X, pe eil distrempadur dre zekvedoù.

1 mililitrad 2 X + 9 mililitrad alkool 50° = 3 X pe drede distrempadur.... hag all.

An EIL RUMMAD a vez savet diwar an distrempadurioù dre gantvedennoù: Teurel evezh ouz

1 mililitrad mamm-deuzadur + 99 mililitrad alkool 50° = 1 C.H pe gentañ distrempadur kantvedennek.

Teurel evezh amañ ouz an div lizherenn C. hag H. An hini gentañ eo al lizherenn latin C = 100 (dekvedenn) hag an eil lizherenn hini an doktor Hahneman (tad an Homeopatiezh nevez)

1 mililitrad 1 C.H + 99 mililitrad alkool 50° = 2.C.H. pe eil distrempadur kantvedennek.... hag all.

Er memes mod e reer evit ober poultrennoù homeopatek. E lec'h alkool e vez implijet sukr-laezh.

Ar GREUN BIHAN a vez graet diwar sukr-laezh implijet gant an distrempadur c'hoantaet :dre zekvedennoù pe gantvedennoù. Evit implijañ ar re-mañ e vezont kemeret er genoù (o lakaat da riklañ er genoù) hag o lezel da deuziñ ken na vezont sunet gant glaoursañ ar genoù pe gant ar mezennoù: arabat eo lonkañ.

N'emañ ket al lec'h amañ da zisplegañ an bozadurioù all tennet eus an traozh, ar gwad, an diskargadurioù gludennek ha traoù all distailet gant ar c'hlañavour. Met kent mont hiroc'h adskrivomp darn eus al lizherennoù a lenner war ar c'horzen-nadoùigoù louzvier homeopatek: n'ho po tamm poan ebet ouz o c'hompren gant an diskleriadurioù emeomp o paouez reiñ: CHINA 4^e Cent. H, (Arsenii anhydridem) ARSENIC ALB, 5^e Cent. H. Lycopodium 5^e CH, Sulfur 5^e Cent. H. BRYONIA ALBA 5 C H, NUX VOMICA 5 CH hag all... (*)

Bec'h! e lezave va c'hensiled: ar c'helenner Pelle eus Skol-Veur ar medisinerezh, e Roazhon, hag ar c'helenner Harvier, ezel eus Akademiezh ar medisinerezh, e Pariz : " Sotonioù! da zistrem- (Kendalc'h pajenn : 48)

Enskrivadurioù kozh e brezhoneg

Anr. enskrivadurioù a gaver war ar bajenn 38 ha 39 eus an niverenn-mañ a zo bet treset gant Tonig an TIMEUR diwar enskrivadurioù kozh kizellet er veñ. Darn anezho a zo diaes-tre o intent met o moulañ a reomp amañ gant ar spi e vo kavet unan bennak ampart-tre e-touez lennerion Varr-Heol hag a zeuio a - benn da reiñ dimp ar sklerijenn a vank dimp.

1* Kentañ Enskrivadur eo hini PLOUBER, ouz korn ar vered pa zeuio eus a Lannuon, e penn-hont Keriell-Koadfreg. Studiet eo bet dija meur a wech, hag ispisial war al LIAMM niverenn 19, Meurzh-Ebrel 1950. Da reizhañ er pennad-se ar ger-mall EN hag a zo hep mar ebet AN. Setu amañ eta an enskrivadur evel m'emañ :

tut mat ho pater leueret o tremen ploberz an berzet
Pe (o vezeñ m'hon eus d'ober gant div werzenn grannvrezhonek)
Tud Mat Ho Pater Leueret
O tremen Ploberz an Berzet

Da heul ar enskrivadur-se h'ho eus laketa ar ger SICOUR kizellet a bep tu da antre ar vered gant ar bloaz 1554 hag an div lizherenn D.Y

Ouzh mogar ar vered e lenner : A ? (pe G) : Y.BEUC R:1694
I H S

2) An eil enskrivadur a gaver en Iliz-Veur Landreger, war ur pifsin dour benniget :

A(ve) M (aria ?) Y. PILVEN P 1581

3) E diabarzh Iliz Tredrez amañ an trede enskrivadur hag a lenner evel-hen : En bloaz mil pemp cant an - dat an ti ma Arno-velat.

D'ur brezhoneger hag a oar un tamm istor e yezh n'eo ket diaes kompren an enskrivadur-se dreist-holl ar ger diwezhañ RENOVELAT hag a zo stumm dic'hour an amzer-dremenet strizh : A NEVEZJOD An A hag a zo e-raok RENOVELAT a zo disheñvel un tammig diouzh ar re all, met n'eus arvar ebet da gaout: ret lenn A.

Dinden berenn an doenn avat ez eus un enskrivadur all hag a lezomp war gont hol lennerion d'he diluziñ:

Jonhaff (?) . ha .ntic IHS M (aria ?)

(kendalc'h pajenn 40)

1a.

tutuat hopatru lemeret otrereng ploebere an berzet

sicour d 2 1554 sicour

1b.

Q:Y:BEU
1C R:1694 1k.
IHS.

2.

AMVPILVENP/1581

3a.

En bloaz milpe
mp Santandstan
fina arenouelat

3b.

Jonhaff-hann n'ar H m^a

- ENSKRIVADURIOU DASTUMET 1) Ploubêr, ouzh korn ar vered, ouzh ar pillerob en antre ar vered heg ouzh mager ar vered
 2) Landreger, en Iliz-Veur, war ur piksin dour-benniget
 3) En Iliz-parrez Tredrez
 4) E Chapel Sant Samson, e Pleuvuer-Bodoù
 5) E Kevreneg, Kroz Roud-Vin
 6) En Iliz Berlawenez : piksin dour-benniget.
 7) En Iliz Kawan.

4.

En bloaz milvsc
srlsoss daniel gor
vner rebe-rapelle



5.

6.



Deo q
cias

7. an 21meur 68.

7

4) E CHAPEL SAMSON, PLEUVEUR-BODOU.

Er bloaz-mañ ez eo bet kavet an enskrivadur-mañ, hag a oa kuzhet dinan un aoter-goad. Pa'z eo bet tennet kuit an aoter-goad ez eus bet kavet dindan un aoter-vein gant an enskrivadur-mañ:

EN BLOAZ. MIL . V. C.XL.V. Y.DANIEL GOUARNER CESTE CAPELLE.
An diskleriadur dre ar munud eus an enskrivadur-se a gaver war 1'ECHO DE LANNION, 21 a viz Gwengolo 1968 dindan an titl :
"Chapel Samson e Pleuveur-Bodoù". Evit lennerion Varr-Heol e romp hepken ar pep retañ, pa'z int barrek d'en em zibab o-unan:
Al lizherennoù bras a zo sifroù latinek. Kompren eta:
V.C = M x 100 = 500, ha neuze XLV = 45. Ar pezh a laka deziazad an enskrivadur da vezañ 1545.

Ar ger iskis GOUARNER n'hell bezañ nemet GOUARNER, gant an R diblaset. Souezhus eo ne oa ket deuet a-benn paotr-e-gizall da skrivañ penn-da-benn e labour e brezhoneg, pa oa ken aezet all skrivañ AN CAPEL MAN e-lec'h CESTI CAPELLE !

Evel-hen eta e komprenomp an enskrivadur:

ER BLOAZ 1545. Y(vo) DANIEL GOUARNER AR CHAPEL - MAÑ.

5) An enskrivadur-mañ a zo eus an diaesañ da lenn, rak gallout a reer tabutal war an teir lizherenn diwezhañ. En-dro d'an toull e-lec'h ma oa troad ar Groaz emañ an enskrivadur-se. Pell hag amzer'zo hep mar ebet ez eo dianket ar Groaz hac'h-unan, hag ar sichenn anezhi hag a zo ur pezh maen ponner-meurbet he deus ur furm iskis a-walc'h, ma vefed techet da gredañ ez eo ur maen bet kristonaet. Den ebat n'en deus soñj da vezañ gwalet ar Groaz (fust ar Groaz) eno, ha moarvat emañ er poulled fank don a zo stok enni. An atant e-kichen a zo nevez, rak adsavet ez eo bet goude ar brezel, pa oa bet tangwallet gant an Alamaned. An dosenn stok eno a vez graet anezhi MUN AR GROAZ, war harzoù Kawan, met war douar Kapueneg emañ ar Groaz-se, war hent Prad, e krouz-hent Roud-Vin. Bez'e oa marteze lizherennoù all, met torret ez eo un tamm kuzunenn ar sichenn en-dro d'an toull.

6) En Iliz BERLAWENEZ war ur piñsin dour-benniget emañ er skritur-se. Setu amañ al lizherennoù-se en ur stumm all:
D. Y. N. P (?)

7) E traoñ iliz-parrez Kawan: kompren DEO GRATIAS



Nedeleg ar C'helenner kozh



gant doujañs d'an Aotrou Prezidant Corbes " Telenn Goelo "

" An Aotrou Loeiz a Runbaol ! Du-hont, Aotrou, e penn an deol vras ! "

Se e oa e Ti-Dielloù departamantel Roazhon, d'ar c'houlz a oant stok ouzh ar Prefeti. Edon o labourat war va levr " MUR HAG AN TROWARDROIOU " ha kuzuliket e oa bet din en doa an aotrou a Runbaol un diskleriadur bennak da ginnig din. Ataoe'zo, ar Runbaol e oa eus ar vro, peogwir o devoa perc'hennet, er c'hantved diwezhañ, mengleuzioù mein-glas Sant-Jelven ha Keorel. Met c'hw'ioar petra a c'horavezet war-dro 1900: an tren, daoust dezhañ da vezañ divalav a-walc'h ha ruzer-e-revr, en doa graet noaz ouzh al labouradegoù-se. Ar marc'h-ten a zegese gantañ en e vagonioù mein-skilnt tanavoc'h ha gwalloc'h-marc'had. Er vro, ar renerien n'o doa ket gouvezet adneveziñ buan a-walc'h o daoreoù-labour a oa chomet warlerc'hiet spontus; ar vicherourien oc'h ober pep tra gant an eun ar wirionez, ne oant mat nemet da dapout korfadoù, da hopal en ostalerioù ha d'en em gannañ. Gwir eo, kalz diavaezidi a oa en o zouez, ha ket eus ar re wellañ 'vel just. Ar re-se a vos ar re gentañ o sachañ o skasoù gante etrezek kêr ha kalz a re all a zivroas d'o heul. Echu e oa da vengleuzioù mein-to Bro-Vur. Ar Runbaolad a gouezhas o flu war o botoù, ne lavarin ket hiroc'h, propoc'h eo din. Unan eus ar vibien, Loeiz, bet skoliataet eus ar c'hentañ, a oa aet da gelenner er skolaioù kristen. Ur c'hoardzhañ a yeas da hanter-diegezh gentañ ha chom a rejont dizemez o-daou.

Loeiz a oa un istorour anezhañ, ur furcher dielloù eus en dibab, e holl amzer vak a dremene o krignat kozh paperoù. Deut e oa da vezañ re gozh evit ober skol ha ne oa ket druz e dammig pañsion, treut-treut eo an hini e oa, hag evit lakaat un dailhenn gig-sall pe da vihanañ ur begad bloneg, da boazhañ gant e bato, e kemeras en tu d'ober enklaskoù en Dielloù evit pennoù-bras, kalannerien vaur, pezh ne harza ket outañ da eilskrivañ notennoù evitañ o-unan. Daou levr en doa skrivet d'an nebeutañ.

Ur c'hozhied seven - ur savoned eus a-raok ar Brezel Pevarzek-gwisket en du, a savas da zont davedon, ur penn hael dezhañ gant e

vlev hag e varv gwenn, mourrou o tiskenn an-dro d'e c'henoù betek e c'hroñj kreouchennet, ma feiz, heñvel a-walc'h ouzh Poañ kare gozh. Ne oa ket divalav an div pe deir diskleriadenn a roas din ha dont a rejomp da vezañ mignoned. Pa voen deuet da gelenner da Roazhon, e kejen gantañ allies a-walc'h en Dielloù, dirak ar stalioù-levrioù, en alezioù an Tabor e-lec'h ma vales ul lajad bemdez, harpet war e zisglavier, hag un tammig kaoz a veze ordinal etrezomp.

Ur wech e kavis anezhañ trist, met trist, ken trist ha Doue Pleuveur: kollet en doa ar paour-kaezh kozh e c'hoar. Penaos e raje bremañ ? Ret e vefe dezhañ klask plas en ospital an dud war-an-oad. Graet en doa ur goulenn evit hini Roazhon, met leun-kouch e oa d'ar mare. Degemennet e vefe dezhañ pa vefe tu d'e zegemer. Ur "boned-bras" hag a rae enklaskoù evitañ, a rafe e seizh posubl. Da c'hortoz, ret e oa dezhañ en em harluiñ pell diouzh an Dielloù Departamantal...

Dre c'hañs e c'hellas mont da di Re-Gozh Gwitreg- unan uhel bennak en doa graet evitañ, moarvat... Aze e kavas er c'hastell, bernioù paperoù bet urzhiet gant Yann Choleo ha fiziet en un den hegarat, an Aotrou Forjed. Ur panned hent diouzh kêr edo Ti ar Re-Gozh, met lec'hiet-brav, a-grap e revr war an dosennig koadek, ha neuze plijout a rae dezhañ kerzhet... Siwazh! evel ma oa Roazhonad, n'helle kot kêr-Witreg e virout, hag adalek ma savas ar Gêrbenn un ti nevez evit he re gozh, e Keryann (Villejean) e voe dav da Loeiz a Runbaol kuitaat ar gerig koant e oa en em blijat enni... Ya, met ma'z eus un andrad vil, met vil, ma Doue, ez eo ar c'harter nevez a zeue e-barzh da lojeñ, leun a studierien drouzus, tost da ospital Pontchaillou. Kouezhet fall-daonet e ar c'helennet kozh ha keuz dezhañ da Witreg.

*

Edon erru e kofje em zi bihan Mur, e deroù miz Gouere, pa resevis ul lizher digant an Aotrou a Runbaol. Aet e oa og ha tremen og gant karter diblijus Keryann, og gant ar staoterien-winegr gozh a oa en-dro dezhañ, og gant aergelc'h an ospital, e "falanter" trist, evel ma lavare. Dastumet en doa un toullad gwenneien, emezañ, ha c'hoant en doa da zont da dremen pemzekteiz kentañ miz Gwengolo da Vur d'ar c'houlz ma vez koazhet an douristed ha brav an amzer c'hoazh. Goulenn a rae diganin klask dezhañ un ostaleri vihan e-lec'h ma tebrfe a-leizh e gof d'ur priz dere-et: "Evel-se, emezañ, e c'hellin ivez ober un toulladig baleadennoù ganeoc'h-c'hwil hag a anavez ken mat ar vro gaez-se."

Prim-ha-prim e kavis repu evitañ, e ti intañvez ur menajer

Soaz Pensi, a anavezen mat, he doa digoret un davarn war vord lenn Gwerledan. Me o vont da dafva he jistr ha da gomz dezhi diwar-benn Loeiz a Runbaol: "Ya, ya, Aotrou, n'en deus ket nemet dont d'am bete, ma n'eus ket re a diekoù gantañ. Ur gambr vihan nevez-wennet gant raz a zo emañ evitañ hag aer vat en doa da vihanañ. Evit e verenn ne n'houllin nemet pemp lur digantañ ha pemp lur all evit e goan. An traoù all... gwelet 'vo, na vin ket direzon, peogwir e chomo pemzek deiz... Ha bennozh Doue deoc'h-hu, Aotrou."

Raktal e tegemennis d'ar paotr-kozh skrivañ da Soaz d'en em glavout klokoc'h ganti. Me am boa graet ma c'hefridi, lakada, ha ne soñjis ken en afer-se. Pa erruo Runbaol, e vo gwelet, emezon-me.

*

Un tamm brav a c'henaoueg, "lopagn" evel ma vez lavaret er vro, ne oan ken... E deroù miz Gwengolo e teuas va mignon kozh Pradig hag e diegezh d'hor gweladenniñ e Mur. Evit mac'hellfe ar gwraezh klakenniñ e-leizh o genolioù, dijen, kuit a labour, e kasis an holl da verennañ da di Soaz.

Ha me o c'houlenn diganti: "Pegoulz 'erruo ho kamarad Roazhon da welet ac'hanoc'h?"... Setu an davarnourez o ruziñ gwall-nac'het "Digarezit ac'hanon, emezi, skrivet a-walc'h en deus din, met kollet em eus e lizher, kement a douristed am eus bet er miz tremenet!"

Evel un taol horzh war ma c'hokenn e oa bet ar respont-se, rak soñjal a ris kerkent er paour-kaezh kozh bemdez o c'hortoz keloù hep gouzout hag-eñ e c'hellfe donet da adwelet bro e gavell, da avelin e benn, da bourmen ganin ha da zispign e dammoù gwenneien. En em santout a ris kablus un tamm: dleat e vefe bet din soñjal e oa empartoc'h ar gozh venajerez-se da c'horz saout eget da skrivañ da dud desket. Ret e oa din bezañ bet nay evit fiziout enni: ar c'heuz da vezañ bet ken berboellik am lakae diaes evel pa vefe bet paket va c'horf en ur roched reun! Ur ger a gasis raktal d'an Aotrou a Runbaol ha ken prim all e resevis ur respont digantañ.

Eñ, ken savet mat, a oa pennfollet un tammig dirak disablanted Soaz, met glac'haret muioc'h c'hoazh: a-hed ur mizvezh diouzhtu an doa gedet ul lizher, leun e spi da gentañ, ken leun all a zesped goude hirc'hortoz. Bremañ e oa re ziwezhat evit tanzen skarzhañ un tu bannak! Bal evel-se e oa bet kont gantañ ordinal, emezañ, marse n'an doa bet nemet droukchañs. War ar memes tro, va c'henvreuer kozh a zibune din, ur wech ouzhpenn, un diverrañ eus e vuhez, ur wall-blanedenn e pep keñver, zoken evit e labourioù a helennegezh. Deuet e oa da vezañ un den nac'het, ankenist, enkrezet ha zoken gwall-enkrezet, emezañ, dreist-holl dre vezañ ordinal e-unan, na kar na par kammed an-dro dezhañ: "N'ouzou ket, mignon ker, hag-eñ n'emañ ket va foell war sin da wintañ!"

En ur ger, lizher un den digalonekaet a-grenn, ul lizher spontus, ha spontet e voen e gwirionez. Petra a zo tristoc'h eget ur c'hristen dic'hoanaget ?

Skrivañ a ris war an tomm d'ar c'helenner kozh. Ya, re ziwezhat e oa bremañ evit dont da Vur ha me e oa o tanzen distreiñ da Roazhon, met goulenn a raen digantañ chom hep ober gwad fall: edon oc'h aozañ un dra bennak a-benn Nedeleg. Ar veaj a rafe ganin em gwetur ha ne vefe ket kaset da di ar gozh liboudenn Soaz Pensivi, kalz gwelloc'h em befe evitañ: "A-benn un toulladig deizioù ec'h erruin d'ho kwelet" emezon.

Setu aze a-walc'h evit degas un tamm spi d'ar paour-kaezh, met ret e oa din bremañ kavout a-bann an Nedeleg un dra bennak "gourd", da laras Roc'hiz, ha n'eo ket moarvat "koc'h-ye!"

C'hwi, a ouzon a-walc'h, a lavaro e kemeran ur bern tro evit tostaat d'am c'haoz, met ne servije ket, ret e oa din mont pell diouzh va c'hozeg, peotramant n'ho pefe komprenet seurt en taol kaer graet ganin, rak lorc'h a zo ennon gant an taol-se. Pep hini a gemer e blijadur e-lec'h ma kav, lakeda...

Me eta da glask ur pennadig, ma spered o plavañ evel un evn en e blomm war e iskilli. Souden, ul luc'hedenn... M'aner ar Runbaled, Pennc'hoed, du-hont war vevenn koadier Kenec'hkamm, a oa bet prenet gant ar baron a Janze, perc'henn d'ar peurrest eus forest divent-se. Ti bras an dud rivinet a oa bet feurmet, ha piv e oa e-barzh d'ar mare ? Ac'hantal ur genitervez d'am gwreg, hag he fried.

Douar a oa gante hag ouzhpenn, un tamm kenwerzh a bep seurt evel ma vez alies er c'heriadennoù distro, gant div pe deir zaol vihan e-lec'h ma veze diskennet da evañ d'an dremenidi: "Ma c'hendirvi, a soñjis, n'eus ket gwelloc'h tud egete, ma'zo sur e vint kontant da gemer ar paotr kozh e-pad kofjeoù Nedeleg. Ul lam em c'harr ha me d'ober ur weladenn dezhe..."

A-us d'ar blaouezh ha da abati dismantret I.V. an Diskuizh-Mat (Bon-Repos, mar deo gwelloc'h geneoc'h) e vez sellet gant dudi ouzh ur grec'henn uhel-uhel ha sunn goloet a wez-pin, evel soudarded o krapout an eil war-lerc'h egile evit arsañh ur c'has-tell-kreñv bennak. E kroec'h, pe gentoc'h war zinao en tu all, ne vez kavet e-kreiz ur gêriadennig, nemet maner ar Runbaled, savet a-us da goadier meurdeuz Kenec'hkamm oc'h en em lediñ dirak an daoulagad evel ur mor a c'hlazvez, o koeñviñ e plasoù zo

evel gwagennoù divent, kribennet kaer ha skañv, gant devalennoù glas glas-du ha don etreza. Aze n'hall ket an nen chom diseblant ouzh galv kevrinus ar forest.

Evel bep gwech ma vezan ma-unan, me am boa krapet - un drugar ar grec'henn, e-lec'h c'hoari an dro gant ma c'harr dre C'hovelloù-ar-Sal. A boan diskleriet va c'hefridi ganin, e respontas kerkent Janedig ha Viktor: "Ya, ya... Paour-kaezh kozh, nag a blijadur evitañ adwelet an ti eo bet ganet annañ. Paogwir e teuit da zegas anezhañ, n'ho po nemet chom amañ da dremen noz Nedeleg... Arabat dit erruout re ziwezhat, eme va c'henderv, hag e c'hellimp mont da zi-fourkañ ur c'harr bennak."

*
* *

Evel just, ne lavaris ket da Loeiz a Runbaol da belec'h edon e-sell d'e gas; laouenaet e oa dija e benn un disterañ.

Kuitaat a rejomp Roazhon d'an 23-vet a viz Kerzu: dous an amzer hag evurus pep hini ac'hanomp; ken luf e oa lagad ar paotr-kozh ha re ar vugale. Kavout a rejomp amzer d'ober ur valeadennig e Mur, d'ober ur weladenn d'an iliz-parrez ha da chapel gozh Santez Suzanna. Keloù un nozvezh e voe kavet plas evit an istorour e ti Roh-Vur, hag an deiz war-lerc'h, goude merenn, setu ni holl adarre er wetur, hag o skeiñ etrezek Itron-Varia an Diskuizh-Mat. Va c'henderv, se'zo sklaer, a c'houlenne diganin gwech an amzer, seulvui ma pellaemp diouzh Mur: "Pelec'h an diaoul e kasit ac'hanon, va mignon?"

- D'ul lec'h dispar hag a blijo deoc'h" emezon-me, pa deurvezen respont. Ar wech diwezhañ e rannis etra va dent: "Ubi patria, ibi bene."

Tremenet an abati ha kemeret ganimp an hent etrezek ar forest e klaskas lenn em daoulagad e-pad ma raen sin me da blediñ hepken gant va hent; met teurel a raen evezh outañ em sklasenn-diabarzh, hag ur wech tapet ganin tro-gorn kastell ar Govelloù, perc'hennet gant an tiegezh Janze, e sp urmantis div zaerouenn o perlezannañ war e zaoulagad... Un dro-gorn all ha setu ni e porzh Pennc'hoed. Ar paotr-kozh a gemeras din va dorn hag a ouelas e-leizh evarv. Ar gendirvi a oa deuet en-dro d'ar c'harr da ziskouez dimp o levenez ouzh hon degemer.

"Astroù a Runbaol, div gambr diberc'henn a zo du-hont e penn ar pondalez kroec'h, deuit, mar plij, da zibab hoc'h hini."

Ha ni d'o haul: "Homañ a gemerin, ma fell geneoc'h, eme ar c'hozbiad, rak va hini-me e oa gwechall." Hag an daeroù o lufrañ

perlezenañ adarre. Eñ da zigeriñ war e hed ar prenestr war ar c'hoadeier ha da chom evel sonnet e spered.

E deroù ar goañvezh-se e vane c'hoazh kalz-kalz delioù rous ha liesliv ouzh kribennoù diniver ar gwez. Met krog e oant da frañval, rak c'hwezhañ mat a rae an avel vervent, hag an holl goadeier a gene, a gane ur ganaouenn ledan, ec'hon, liesvouezhiek, ur c'han a levez evit o bugale adkavet. Klouar e oa an amzer. Runbaol a gemeras ur gador hag a azezas dirak e brenestr da vemo-riñ.

Ar maouezed o doa labour, komprenapl. Ar vugale a oa ret dezhe echuiñ kraoù ar Mabig-Jezuz, hag ober war-dro ar wezennig-sapr, ha dever enne 'vat ! Viktor ha me a oa merien en hon treid. Kas a reas va c'henderv ac'hanon da redek betek serr-noz dre ar gwenodennoù kuzh a anavez-efñ ken mat, ha gellout a rejomp tostaat ouzh klud ur yourc'h, kuzhet-dreist koulskoude, a-drek ur pezh roc'hell damgleuz, e-mesk strouezh ur brouskoad. Ken kreñv ha ken trouzus e oa an avel-stourm ken ne glevas ket ac'hanomp o tostaat, hag evel m'hor boa a-vel a-benn, ne santas ket ac'hanomp kennebeut. Gourvezet e oa war ur gwiskad tev a zelioù sec'h gant he c'hrennard, genet en nevez-hañv. Ar vamm a lipe hec'h hini bihan ledet morgousket dirazi. Ur misi e oa o gwelout. Ne rejomp poan ebet d'an daou loen, evel just, evite ivez e oa Nedeleg.

Gant an noz e freskaas an amzer hag e krogas ar glav. Met e Pennc'hoad e oa leun an ti gant c'hwez ar soubenn fresk; sal vras ar maner a oa un dudi sellout outi gant an tan-ifern a strake en oaled veur, gouloùioù bihan kraoù ar Mabig-Jezuz hag ur pikol sa-prenn leun a draoù kaer. Ur pred plaen, met, fidam, ne oa ket gantañ blaz ar c'hleuz nag ar re nebeut. Ar flamm a sklerijenne, war dumenn ar chiminal, ardamezioù ar Runbaoled, kizellet war ur c'haer a vaen-glas, hag ar paotr-kozh a oa ken laouen ha pa vefe efñ a vefe o reiñ degemer dimp. Dasoniñ a rae bremañ gwer ar prenestroù dindan treid munut ar glav, an avel a c'hwibane er gwez hag en-dro d'ar mogerioù kozh, ha damwelet e veze skourroù treut ur winienn-red ouzh en em zifretañ dizehan. Nag e oa klet ha klouar sal Pennc'hoad!

"Da vare ar c'histin hag ar chistr nevez e-leizh ar jave " e krogas Loeiz gant e gaozioù: e vuhez gwechall er maner. Derc'hel a reas e-tal an tan en ur sachañ war e gorn ha den ne gave hir an amzer.

Dont a reas hanternoz, hag ar profoù paket mat da gouezhañ war ar barlennoù. Neuze an istorour a dennas skouerennoù eus e levrioù eus e sac'h-ler hag a stagas da skrivañ un dedi evit



An aotrou PERROT e dismantroù Landevenneg evit milvet bloaz distro an abad Yann (935-1935)

pep hini. Setu amañ an hini a lakeas din:


" Ur wech e oa ur c'hozh paotr-kozh o c'hortoz ar marv pell diouzh e vro. Un achantour madelezhus e zegasas da dremen Nedeleg e ti e gavell....

E-kreiz va levenez e kanan klod d'ar Mabig-Jezuz, hag e lavaran dit mil drugarez, achantour"

*

Ya, laouen-bras e voe an Nedeleg-se evit ar c'helenner kozh hag evidon 'ta !

Ernest AR BARZIG.



LOQUELEC

Ganebigezh h.-f., proaz ar 'bazh-ru', lanveleg
bremañ e fustell Rozanbaou

nedelez laouen ha
bloavezh mat da ge
neiled berr-heol!..

(distrempadurioù) Pa vezez erru gant an distrempadur 9 C.H. ne chom mui netra ken pell'zo, e-barzh da vuredoù nemet alkool 50°.

Lakaet e oan diaes ganto. Kaer am boa kôcz dezho eus skouer ar wenanenn a glev frond ur vleunienn nevez-diwanet un hanter-lev pelloc'h, pe c'hoazh skouer fri ar c'hi-polis a gav c'hwaz an den goude un torfed, aner e oa! E gwirionez ne oa tu ebet, emezo, da brouiñ en un doare skiantel e chome un dra bennak en alkool.

Lennet em eus abaoe, gant eston, e oa tu da gaout korfoù skinoberius en un distrempadur 10-15. Soñjit petra a c'hell bezañ muzul an distrempadur-se. Mar ne vije ket bet skinoberius ar c'horf-se, ne vije bet tu ebet da verzout ar c'horf seun, ha koulskoude emañ aze, peogwir hen dizoloer en abeg d'ar skinoberiuted.

Gwashoc'h c'hoazh ! Ur silienn a zo bet desket d'ober an diforc'h etre an dour strilhet hag un distrempadur en dour gant 6 x 10-20 alkool B -fenil-etilik - Pegen pell emamp diouzh an distrempadurioù homeopatek ken dister e-keñver hennezh !

Gallout a reer kaout un albarz eus ar sifr-se er c'hiz-mañ. Taolit ur grammad eus an alkool-se e lenn Jeneva...ha maskit. Kemerit ur standilhon eus an dour mesket-se ha distrempit anezhañ adarre 50 gwech. Ma! ar silienn a c'hell ober an diforc'h etre an distrempadur-se ha dour boutin al lenn. Evel-se e roer ar brouenn e c'hell un distrempadur " uhel " efeniñ war ar c'hellou nervennek ha dre ar re-mañ lakaat ar c'horf da oberiata.

En diwezh, prouet he deus ar vezegiezh homeopatek, n'eo ket un dra a faltazi. Pareañsoù souezhus ha niverus a zo bet obtenet dre ar vezegiezh-se. Ha pa vez kont eus buhez un den, ne c'hell doare-pareañ ebet bezañ distaolet " a priori ", hep ur studia-denn onest ha koustiañsus war e dalvoudegezh.

" Gwelloc'h eo ganin, a lavere an Tad Huc, misioner er Reter Pellañ, bezañ paret gant louzeier un triakler bennak eget mervel gant louzañadur skiantel "

A.G.

* Glaoursae= Tunica Mucosa(Oris)
* Lenn da skouer: SULFUR pempvet teuzadur dre gant hervez stumm Hahneman.

Ar c'hoazh Breizh Emsav

E-doug ar mizioù diwezhañ ez eus bet embannet un toullad brav a bennadoù-skrid diwar-benn Breizh e kelc'hgelaouennoù bras niverus-tre o lennerien. E miz Mae, e" LE NOUVEL OBSERVATEUR " ur pennad hir gant ur pezh " Gwenn-ha-Du " ledet war ar golo. E miz Gouere e " LECTURES POUR TOUS ", e miz Gouere c'hoazh e " LE MIROIR DE L'HISTOIRE ", e miz Here " CONSTELLATION " hag " AUX ECOUTES " g gant un titl lu c'hedus : " Breizh Emsavet " (La Bretagne Insurgée)

Dre vras an hevelep danvez e pep hini : Kudenn an Emsav e Breizh. Kement a skridoù er memes amzer, setu aze ar brouenn wellañ n'eo ket bet kollet labour an T.D.B (F.L.B.) : dihunet eo bet spe-red an dud e Breizh-hag er-maez a Vreizh. Diskouez a ra ar pennadoù -se ez eo kudenn Vreizh ur gudenn diouti hec'h-unan. Pa stourme ar gouerien vreizhat e veze beuzet ar pesk e goulennoù ar goueriade-lezh a-bezh. Dav eo degas da goun o deus renerien maezidi Vreizh pleget meur a wach d'an urzhioù roet gant ar sindikadoù parizian. Neuze....

Kalz e dud hiziv e Bro-c'hall, a gred n'eo ket kudenn Vreizh ur gudenn-goueriaded hepken, pe ur gudenn a isdiorreadur. War o meno ez eo kudenn ur Bobl ouzh en em adkavout hec'h-unan, dezhi bolontez da lavarout he ger pa vez divizet tra pe dra diwar he fenn e Pariz pe e Breizh.... N'eo ket a-walc'h komz dezhi eus gwirioù Bro-Gebek wasket, sañset! E Breizh, muioc'h eget e lec'h all ez eus bet roet lañs d'an Deskadurezh. Hogen ur benveg divzremmek, ur gontell o tro-c'hañ eus an daou du ez eo: emañ Breizh e skeud-se o tivrezhonekaat. Hogen bez'ez eus paotred ha merc'hed yaouank hag an em c'houlenn bre-mañ ha mat ez eo an traoù e Breizh, evel m'emañ, dindan veli Bro-C'hall. Kentelius ez eo war ar poent-se lenn kelaouenn ar studierien " AR STUDIER - L'ETUDIANT BRETON "

C'hwec'h miz'zo he deus ar Stad C'hall lavaret e vezo rannet a-nevez ar Frañs. Pensaos? N'eus ket bet lavaret ar " penaos"-se evit Breizh. Evit respont da enklask ar stadverouriezh, eo bet rediet ar strolladoù e bep seurt da resisaat o menoz diwar-benn Breizh hag ha bevennoù. Souezhus ez eo gwelout darn eus ar respontoù. Evel-se, Kumul-Meur Il & Gwilun, en deus nac'het gwelout stagañ al Liger-Atlantel ouzh Breizh, ha goulennet ma vije staget departamant ar Vervenni E brezidant, gwir eo, n'eo ket breizhat!... Diskouez e ray hap max. ar c'houlennadeg-se ar frouezh eus pemp kantved sujedigazh. Laouen e vo ar Stad c'hall gant respontoù evel hini Kuzul-Meur an Il ha Gwilun, ken kalet evel m'he deus trivet a-viskoazh da zistagañ Al Liger-Atlantel(Bro an Nagoned) diouzh ar p'arrest eus Breizh.

Kerkent ha ma voe Bro-C'hall mestrez war Vreizh, he deus ar Stad labourer da enebañ an Naoned ouzh Roazhon: e 1554, pa voe adurzhiet Lezvarn-Veur Breizh; goude, pa voe savet ar Penngommandant (hep beli ebet gantañ war Gontelezh an Naoned).
E 1859, pa voe lakaet Roazhon da arc'heskopti, e labouras Napoleon III evit ma chomje an Naoned stag ouzh Teurgn. E 1941, pa voe anvet ar 17 Prefed rannvroat, ne voe ket lakaet an Naoned e Breizh! memes tra pa voe krouet ar " rannvroioù-stur ". Siwazh! meur a wech e vez harpet ar Stad C'hall gant ar Vretoned el labour -se. Sellit da skouer ouah ar gazetenn a zoug en-gaou an anv a v- BRETAGNE-DIMANCHE, rak enni ne gomzer nemet diwar bavar departamant.

*

Ha bremañ emañ ar c'helaouennoù embannet e Pariz o tiskleriañ ez eo an holl draoù-se danvez ar gudenn vreizhek. Eus Pariz

J.C.

Digomprenusted a. d.

Petra dit tarlammat
va c'halon re dener ?
Petak dit berviñ
Va empenn re brim da follañ ?
Gouzout mat a ouies
- Pe ne ouies ket ? -
- Daoust d'ur garantez difaezhus -
'Zo re a ziforc'h etrezomp
'Tre Kêriz ha Paizanted.

Va gloazet o deus o goap
Hag o gloazet ha deus va zeeded
- Perak an Digomprenusted-se
peurbadus etrezomp ?
- Perak hor goapeat
Ober fae warnomp
Ober fent ganimp
dre ma karomp ac'hanout
Sev bev da galon vev
da zouar noazh - o va Bro !
Va Breizh. Va C'harantez. Va Buhez.

Da garout a reont-i ivez- emezo -
- Ya da! Da sae welevus ha liesliv
Da goadoù glas. Da stêrioù.
Da lanegi aour. Da vorioù hoalus
Da laboused ha da vleuv.

Hogen doñjer o dije
O terc'hal etre o bizied gwenn
Ur vozad eus-Douar o Bro
Trempet ken lies gant c'hwezenn
- ha gwad -
Remziadoù Breizhiz.

Da garantez 'vidout
Douar sakr va Bro !
E c'houzavomp an dismegañs-se
- graet dit -

Bezañ disprizet 'vit da re garout
Breizh, va c'harantez nemedout
Dit va holl nerzh beteñ aifenn diwezhañ
Bete'n Eur ma tigor da zivrec'h
D'am c'horf digounnar ha divuhez
Tra ma treizho va Ene gredus
Trema Gwenved hor Gouenn. 13.6.68

pikepennoù Denelezh.

... " Ur Vinic'hi !
Ne veizan ket, emezi!
- Ar Blaanenn barr-leun a drevadoù
Ha meizout'ra noazhder an Alpoù
Sonnet pep buhez warno
Peurbad o goañv garo ?
- Ha meizout ' ra ar Wezeg c'hlas
Beuzet a sonerezh dous
Laz-kanañ mil ha mil labous
Sioulded fromas ar Pikern noazh ?
... Pedal! Mab-den a riskl e Vuhez
D'argadif ar Menez
Poulzet gant c'hoent tostaat d'an Nefv !
26.9.68

Notenn: Daoust ma oa skrivet MINIC'HI gant Anjela, ha ma lever ar geriadurioù ez eo gouzel ar ger, a heuliomp giz Tregar hag a ra parrez(parrouz) ar VINIC'HI eus parrez Sant Erwan. Gwregel e seblant ar ger MINIC'HI bezañ eta. KLERG.

taolennoù buhez

Ar wech-mañ n' o ket eus loened hor bro e komzin deoc'h met eus he zud. Tud evel m'am eus o anavezet ha gwelet o vevañ en-dro din. Tennañ a ra ar pezh a gontin d'hor yezh ivez hag ur wech bennak da draoù-ha n'o deus netra da welout gant hor bro. an tsekad traoù pennaouet ganin a zo dreist-holl un digarez da gomz deoc'h e brezhoneg, ur brezhoneg pemdeziek peurliesañ.(1)

O KUITAAT BRO-DREGER

Evel milieroù ha milieroù a genvroiz e rankis un deiz kuitaat va bro. Gant ar pistig em c'halon e welis o steuziañ tourioù uhel iliz-veur Landreger a-us d'ar Yeodi. Mont a raen kuit da redek bro e-pad daouzek vloaz, rak n'on ket chomet pell e pep lec'h. Evit kregiñ ez is da Bariz. Ur pennad goude ar brezel e oa. Pontoù Landreger bet distrujet da vare an " Dieubidigezh " ne oant ket adc'hraet c'hoazh. Pont an hent-houarn n'eo ket bet adsavet hag abaoe n'eus tren ebet ken e Landreger. Ret e oa d'ar c'houlz-ve d'an neb a felle dezhañ mont da Sant-Brieg, kemer ar c'harr-boutin betek Pleuveur-Gacter ha goude, an tren-patatez betek St-Brieg. N'eus tren ebet ken kennebeut, abaoe 1962 a gav din. Ur gwir dren-patatez e oa hennezh: peder eur da vont da St-Brieg oc'h ehanañ e pep lec'h, betek e-kreiz ar maeziou. Ha boudinelliñ a rae ho penn a-benn ar fin gant ar " sukr ha kafe " sukr ha kafe " a lavare en e yezh, pa veze tizh warnañ pe c'hoazh, pa veze o c'hreviañ: " boutomp hardizh, n'omp ket kapap " boutomp hardizh, n'omp ket kapap. Amzer ho poa da sellout ouzh ar vro ha degouezhet e penn ho peaj e oa arabat deoc'h bezañ estonet o welout du ho taouarn, ruziet ho taoulagad gant an uloc'h, brevet ha gourt ho tivc'har, dre forzh bezañ bet hejet war ar skabelloù-koad. Amzer ho peze ivez da sellout ouzh an dud ha zoken d'ober anaoudegezh ganto....

E Pleuveur e pignas ur vamm gant pevar bugel yaouank. Homañ a oa o vont da Bempoull da brenañ peadra dezho da vont d'ar skol. An daou vihanañ a azezas e-tal o mamm. An daou goshañ, 6-7 vloaz, em c'hichen. Ar vamm a gomze galleg outo; padal e oan souezhet un tamm rak ne oa nemet brezhoneg etre ar paotrig hag ar plac'hig a oa em c'hichen. Kablus en em savante mui pe vui ar paour-kaezh plac'h, rak goude un toullad komzoù boutin a-walc'h ec'h anzavas ouzhin pegen diaes e oa dezhi lakaat an daou goshañ da gomz galleg. Evit an daou vihanañ, emezi, ne oa kudenn ebet, rak kroget e oa abred, met an daou vrasañ, menn d'ober: adalek ma vezent onnan ne gomzent nemet brezhoneg. Klask a ris berr-ha-berr, lakaat un tamm urzh e spered ar vamm-se... Ker-tost e oa war ar poent-se

da vihanañ, d'ur vamm all e lavare d'he mab a-raok pignat er c'harr-boutin: " Dans le car il faudra parler français". Hag ar paotrig da lavarout kerkent e brezhoneg, gant aon marteze n'en dije ket gallet hen lavaret e galleg: " Mamm, me'm eus c'hoant stoptat !"

E spered ur bern tud ez eo disprizus, dismegañsus komz brezhoneg ur wech aet kuit eus ar gêr. Ar pezh a gontan a dremenet tost da 20 vloaz'zo. Ha war an deoleñ-se e kuitaen Bro-Dreger. Kudenn ar yezh evit ar vugale a zo skoemp ha bresk kaer, hen gwelout a raimp diouzhtu gant an istorig all-mañ.

MERC'HED LANGOAD

C'hoarvezet eo koment-mañ goude fin ar brezel diwezhañ. Er c'harr-boutin e tremen ivez. Bez'e oamp, va mamm ha me, o tistreiñ eus Gwengamp. Kejañ a rae va mamm gant ur vignonez-skol a oa evelti eus Langoad. Ar gaos a yae mat-kaer en-dro gant an div blac'h; pell 'oa ne oant ket en emwalet ha tamm ha tamm e savas ar gaos diwar-benn ar pezh a oa ebeg o beaj. Ni a oa o tistreiñ eus hor pirc'hirinaj da Itron-Varia Wir-Sikour, graet geneomp ouzhpenn tregont kilometrad war droad a-benn neuze. Vad a rae komz ha diskuizhañ. Ar gaos a savas ivez diwar-benn bugale an eil hag eben. Dres e oa ganti div blac'h yaouank war-dro ugent vloaz bennak dezho. O sellout outo e soñjis ouzhin va-unan pegen iskis e kaven anezho o-div. Dan ebet n'en dije kredet e oa an div-se merc'hed ar vaouez e koef a oa o komz gant va mamm. Da gentañ e oant bras ha treuf, o mamm kantoc'h bihan ha tev; un neuz ispisial dezho gant o dilhad ha ne oa ket tres dilhad bet prenet na graet dre amañ; hag ouzhpenn un doare kollet dezho. Ne lavarent netra. Iskis, souezhus zoken. Ha setu ar pezh a gontas o mamm deomp. Eus a Sant-Maloù edo o tont, bet o keroc'h he div verc'h. Kaset e oa bet an div-mañ da Vro-Saoz a-raok ar brezel p'o devoa 13-14 vloaz, ha n'o doa ket gallet distreiñ ac'han da vremañ. Kaset e oant bet gant leanezed eus amañ d'ur skol du-hont evel mitizhien. E-pad ar brezel penn-da-benn n'o doa kuitaat ar skolese, gwech ebet. D'ar sul hepken ez aant d'ober un droig war ar maeziou e-kichenig, ha setu holl. Saoznegiñ a raent an eil gant eben. Ne oant mui barrek na war ar brezhoneg, na war ar galleg (ar galleg 'oa evel just an hini o doa desket e skol vihan Langoad). O yezh pemdeziek neuze a oa saozneg, na petra'ta! Nec'hat 'oa ar vamm ganto; diaes e oa dezho an em intent. Gouezet he doa evalato ne felle d'he merc'hed evañ nemet te; hag ar vamm n'he doa morse evet tel Prederiet e voen gant an dervoudig-se am lakans da soñjal pegen bresk ez eo ur yezh. Dres evel un dra vev ez eo ret dalc'hmat ober war he zro pe e varv ha buan c'hoazh.

Er bloavezhioù terem am eus bet tu da vont dre deir gwech da Vro-Arvern (Aovergnal) Ar wech ma ris ar veaj dre an hent-houarn, ha ne oamp ket degouezhet c'hoazh e Roazhon, va merc'h ha me, ma c'houlenne ur vaouez hag a oa er c'hombod ganimp, hag ur Saozaz vihan a oa aze ganin! Bez'e oa anezhi ur Vreizhuhelia-dez aet da Bariz da chom. Ne gave ket dezhi e veze komzet ken a vrezhoneg, e Breizh, nemet e fempoull, emezi ! Ne oa ket noz-teñval anezhi c'hoazh ma oamp deuet da vezañ Daniz pe Swediz. O koaniañ edomp en un ostaleri, hag an den a zisplege kement-se d'e wreg, a gomze uhel e-walc'h evit bezañ intentat-mat ha displegañ a rae zoken e oa diaes gouzout eus petore bro e oamp, met evelato, e oamp d'e soñj, kentoc'h Swediz!

Ur sulvezh e voe ur gouel folklorel er gêr-dour e lec'h m'edomp. Kement ha tremen an amzer e oamp aet ivez da sellout ouzh an dafiserien hag ar generien... Tud a bep seurt a vez o sellout ouzh ar seurt abadennoù aozet e-ratozh evit an diavaezou-rien. En hor c'hichen e oa diouzh un tu, Potugaliz, safar ganto ken na oa, ha diouzh an tu all un aotrou hag a daole **evañ** bras ouzhimp, pe gentoc'h ouzh ar yezh a gomzemp: doare en doa da selaou ervat. Ni a ranne etrezomp hor menezioù diwar-benn ar pezh a glevamp hag a welemp er gouel. A-benn ar fin e klevis an aotrou o lavarout d'e wreg : "Kaer am eus klask, ne welan ket eus petore bro e c'hellfe an dus-se bezañ !" ..Merzet em eus bepred a vez taolet pled ouzhoc'h pe gentoc'h ouzh ar yezh a gomzit!

Ha setu c'hoazh un darvoudig all en em gavet ganimp er memes lec'h. Azezet e oamp war un dorgenn o sellout ouzh ar vro hag ouzh ar menezioù-tan en em leded dirazomp, hag e komzemp evel just diwar-benn ar pezh a wela hon daoulagad. Nepell diouzhimp e oa daou zen yaouank en o c'hozez ivez hag o sellout. Ma! pa oamp o vont kuit setu i o tigeriñ ar goz ganimp en hor yezh, diwar-benn an amzer... Eus Bro-Wened e oant ha seblantout a raent bezañ laouen o tiskouez deomp e ouient brezhoneg. Atav em eus merzet pegen laouen e vez er Breizhad da gomz e yezh pa vez pell diouzh ar gêr. Met pa vez en e vro, se'zo un afer all, evit kalz da vihanañ.

*

Ha peogwir amañ e Bro-Auvergna * gant va c'haoz, em eus c'hoant da gontañ deoc'h Istor Ki Bihan un Itron aet gant e vestrez d'an dourioù... E menezioù Bro-Auvergna ez eus kalz a lec'hioù-yac'haat dre an dourioù. Mammennoù dourioù tomm a strink * Bro-Arvern, en destenn. Met ober a reomp gant Bro-Auvergna hervez giz Barr-Heol, diouzh skouer an Okitaneg.

eus donderioù an douar hag ur bern tud a ya di da glask ar pare en ur evañ a-hed an deiz an dourioù-se a vuhez. Tud ? ya a gave din, met estreget tud ivez! Ha setu va istorig.

Pinvidik e seblante an Itron a gomzan amañ diwar he fenn, rak bez'he doa d'he haul ur plac'h a gompagnunezh, ouzhpenn ar c'hi bihan a oa ganti. Bez'e oa hemañ ur c'hi bihan, met me'gred koulskoude e oa kentoc'h ur c'horrig a gi gant a vihan hag a strizh e oa! Ne oa nemet un dornad dioutañ. Din-me da welout ne oa ket brav, met sur-mat evit e vestrez e oa kaer-tre ha priziuz: ne oa nemet gwelout gant pegement a aked e veze graet war e dro. Gwech a veze gant an Itron, gwech gant ar vatezh, aliesoc'h avat gant an Itron. Bemdeiz e welan an Itron-se, rak mont a rae da evañ dour d'ar memes oianhnn he me. Ne veze ki ebet ganti rak ar chas n'o deus ket aotre da vont betek al lec'hioù-evañ. Roet e veze da ziwall d'ar vatezh e-pad an amzer-se.

Bemdeiz eta e tegouezhe ganin gwelout an Itron, ar plac'h a gompagnunezh hag ar c'hi fistoulik, diaes da ziwall, a veze o furikal dalc'hamat e kement toull a gave ha zoken pa ne veze toull ebet ! Un deiz eta e tichañsas din bezañ oc'h evañ asamblez gant an Itron. En ur astenn he gwerenn niverennet d'ar plac'h a oa karget da servijiñ an dud, e c'houlennas un niver gwall uhel...Ret eo din lavarout marteze e tle pep ever lavarout d'ar plac'h e-karg, an niver gourc'hemennet dezhañ gant ar mezeg... "Kement-se ?" eme ar servijerez-dour "Añ ya!" eme an Itron, hag hi a gostez da evañ he banne. Ne evas ket ar werennad avat, hag hi da dostast ha da lavarout sioul d'ar plac'h e-karg : "C'hwil'oar, goulenn a ran muoc'h rak reiñ a ran ivez d'am c'hi!" Ar servijerez boas da welout a bep seurt, a reas ur mousc'hoarzh war va zu, hag a gendalc'has da reiñ dour.

Evel n'am boa mann ebet d'ober, nemet evañ va bannac'hig a-loriedennoù, ha me da vont war-lerc'h an hini gozh, c'hoant din gwelout. Tapout a reas he c'hi ha mont gantañ war ur bank. Eus he sac'h e tennas ul loa vihan arc'hant, a voe launiet a zour ha roet d'ar c'hi. Ma! ar c'hi fistoulik a eve eus an dour hanter-domm-se hep ardoù.. Div, teir peder loaiaad a voe roet dezhañ aval-se hag e cho-me furoc'h eget ur bugel... E keit-se e oa tostaet daou ganfard: "O na pegen bihan ar c'hi bihan!" eme unan. "Hag ar c'hi bihan, ober a ra ur "guradenn" ivez ?, a c'houlennas egile all eus ar vugale hir o beg, souezhet o welout ar c'hi oc'h evañ dour eus ar werenn niverennet.-" O ya, bugale, ar mezeg en deus lavaret din e-vel-hen: Itron, peogwir ez it d'an dourioù, lekait ho ki da evañ eus an dourioù yac'haus ivez, se a raio kalz a vad dezhañ...Ma! a soñjis, hennezh a oa ur mezeg fin hag a ouie tremen diouzh e gli-antez vat. Betek neuze n'am boa gwelout nemet tud oc'h ober ur "gu-

redenn ** : re zu, re velen kerkoulz hag ar re wenn. Met ma oa mat evit an dud perak ne vefe ket mat evit al loened, ha n'eus forzh pegen bihan e vent... War se an Itron a naetaas al loa gant ur mouchouer brodet-fin, a glenkas pep tra aketus hag a yeas da varvailhat gant he matezh a selaoue a-vec'h anezhi

AR PAOTRIG HAG A WERZHE BLEUNIOÙ

D'an nevez-amzer, ar bleunioù kentañ a vez kavet war ar maez gant ar bokedoù-laszh eo bleunioù Sant Jozef, anvet ivez bleunioù Santez Nonn, e Kernev, hag anavezet c'hoazh dindan an anv a foen pe jonkilhez ** Abaoe ur pennad eo deuet ar c'hiz gant bugale'zo da vont da ginnig ar bleunioù-se d'an dremenerien a-hed an hentoù bras. Un deiz amzer ganeomp e rejomp un taol-arnod - kement ha gwelout emzalc'h ar vugale - en ur ober goulennoù outo en hor yezh. Ar vugale a save o bleunioù pa welent ur c'harr o tont, ha pa welent ar c'harr o c'horrekaat e oa un tres laouen warno, sur ma oant neuze da werzhañ ur boked: " Pegement ar boked ? " Ur respont e galleg. " Ni, bugale, ne bre-nomp nemet gant ar re a gomz brezhoneg " Ar vugale a yae mezhek ha ne lavarent netra. Un tamm pelloc'h e voe heñvel. Memes tra pelloc'h. Ne gomze hini ebet ar yezh, daoust ma ouient moarvat rak bugale diwar ar maez e oant. Pelloc'hik, setu ur paotrig e-unan. Hemañ'vo an hini diwezhañ, rak krog 'oamp da goll ar spi da glevout ur bugel o komz brezhoneg. " Pegement da vleunioù ? " " Henter-kant lur ", eme ar paotrig kerkent... A-benn ar fin hor boa kavet unan. Goulenn e ris digantañ e oad ha pelec'h edo o chom. Bepred e responte e brezhoneg mat. Displegañ a ris dezhañ e oa ur bugel a-zoare, hag e pegen bleunioù digantañ dre m'en doa respontet e brezhoneg, rak gant reoù all em bije gallet prenañ ivez, hogen ne gomzent ket brezhoneg... Nebeutaoc'h-nebeutañ e komz ar vugale ar yezh, anat-kaer eo. Ha koulskoude er bloaz-mañ c'hoazh, hon eus klevet kreñnarded 10-12 vloaz o c'hoari en hor yezh. Bez'e oa e miz Mae diwezhañ, 1968, e Tre-grom, goude ar gousperoù e pardon Krist.

BUGALE-SKOL

Peogwir amaomp gant bugale, setu amañ traoù all na n'int ket re blijus. E-pad tri bloaz em eus graet skol vrezhonek da verc'hedigoù skol ar Seurezed e Berlawenez. Ne oa ket da glemm

* ar ger " cure " a oa en destenn. Brezhonekaet eo bet un tamm, amañ ??

** Klevet e vez kentoc'h e Tregar " Fleur Sant Jozef " ha " Roz-Kamm ". Jakez Riou en e levr " Gaotenn ar Werc'hez " a rae gant " kilked-broen " (gwel. Geriadur R. Hemon paj. 108 Kilked-broen)

eus an niver. Dont a raent stank da lenn, da ganañ ha da skrivañ. Ne oa rediet bugel ebet da zont koulskoude. An holl a ouie brezhoneg, kalz pe nebeut. Un deiz avat, e teuas unan vihan eizh vloaz da lavarout din : " Me am eus c'hoant da vont d'ho skol ivez, rak pa oan bet degaset amañ e pafsion, ne ouien ket a c'halleg " Sperdek-bras 'oa ar plac'hig ha bez'e voe a-barzh-nemur, er gwellañ hini a oa er skol vrezhonek.

A bep seurt e veze graet. Displegañ anvioù tiegezh ar vugale a gavent eus ar plijusañ. Kanstrivadegoù, da skouer, da welout piv a gavje ar muiañ a anvioù-avned, loened... Hag e tegaset listennoù hir dip. Adskrivañ a raent kanaouennoù diwar an dolenn du, hag o c'hanañ goude. Lennet e veze WANIG HA WENIG ha draist-holl MARVAILHOU AR VRETONED. Abred e welis pegen dizesk e oa ar vugale-se pa veze anv eus Istor pe Zouaroniezh Vreizh. Peadra 'oa da skrivañ a-wechoù. Spontus eo pa soñjer ne oar ket bugale ur skol gristen piv eo Sant Erwan, pe zoken petore anv he deus Mamm ar Werc'hez ! N'am bije ket kredet, ma n'am bije ket gwalet ha klevet. Unan a c'hublennas petra en doa graet Sant Erwan ! Hini ebet n'aneveze kastell kozh Tonkedeg, div lev ac'hano. Menez-Bre ? Mann ebet evel just. Pa lavaris e oa ur menez e voe goulennet digañ ha ski a veze graet warnañ ! Mantrus, n'eo ket 'ta ? Tremen poent eo sklerijenniñ speredoù ar vugale, rak anat eo ne gomz ket ken ar vugale gant o zud diwar-benn an traoù a zo an tostañ dezho. Met petra'oz kerent 'zo zoken ?

Daou viz'zo em eus bet digarez d'ober ur profig d'un amezegz vihan. Prenañ a ris ul levr diwar-benn Breizh d'ar plac'hig, daouzek vloaz dezhi. Evit doare e lennas al levr, rak tair sizhun bennak goude e teuas ar vamm da lavarout din hep na c'houlennjen mann ebet diganti : " Mersi dac'h'vit al levr ho poa roet d'an hini vihan, pegen interesant e oal tout an dud o deus lennet anezh. Roet he deus d'he c'hoar vihan ha goude d'he c'hoar vras. Me'm eus e lennet ivez ha bremañ emañ ma fried o lenn anezh i'e " Amañ avat 'voen souezhet rak an tad, blenier kirri-samm n'eo ket troet war al lenn. Ne bre-nont ^{zoken} ar gelouenn bemdeziok, nemet ur wech an amzer. Kalz a dud ne lennont ket ha pa reont 'vez ral a wech diwar-benn danvezioù hag a sell o bro. P'am bez ur prof d'ober e soñjan muioe'h-mui an ul levr. Zoken ul levr-kegin evel " GASTONOMIE BRETONNE " a laka maez c'hed'zo da soñjal e talvoudegezh traoù distar-spontus d'o men. An dud ne soñjont ha dreist-holl ne gredont ket alies e madoù speredel na zoken e madoù danvezel o Bro...

Anavezout a ran avat tud hag a vez ganto dalc'hmat en o c'harr levrioù Istor Breizh (hini an Tad Chardonnet hag a zo ken plijus !) evit reiñ da dud'zo pa gav dezho e talvez ar boan: reoù yeduenk da skouer kemeret e stop hag int eus ar vu.

Roz 'oa ur plac'h e-kreiz he brud par anavezis anezhi. Mentet-krenn, na lart, na tev, met kreñv avat! A-hervez, e oa he zi etre an iliz hag ar vered, met ne gav ket din e veze kavet alies er gêr. He micher a oa mont amañ hag a-hont war-dro ar re glañv; met n'eo ket n'eus forzh pere: ar re ziaesañ, ar re dagnousañ. Roz a voe un deiz un amezeged deomp, pa zeuas d'ober war-dro un itron gozh a chome dalc'hmet war he gwela. Evit cheñch he soñjom e teue Roz du-mañ: kement hag avelañ he fenn, avel ma lavare, ha da gontañ kaozioù d'am mamm. Bremañ'zo war-dro daou-ugent vloaz, ni, ar vugale, a veze souezhet-mik gant Roz. Roz a ouie " ober maged ", maged dre he fri, maged dre he genoù. Intentit dre eze: Roz a vutune: " Fumik " e rae, evel ma lavaremp, fumik sigarettenoù avel ar baotred. Kentañ plac'h e koef a welis o vutunat! 'voe Roz. N'am eus ket gwelet kalz eus he seurt. Oc'h implijañ butun-fri avat, am eus gwelet kalz, ha n'eus ket pell zoken.

Ne veze anvet Roz nemet " Roz-Sigaretenn " ganeomp, ha bis-koazh n'am eus gouezet he gwir anv zoken. Kentañ a rae a bep seurt d'am mamm. Penaos an itron gozh a lavare dezhi digerif bras prenestr he c'hamb ar balamour dezhi da glevout youc'hadennoù ha garmadennoù ar vugale...Evel ne oa nemedomp evel bugale tro-dro, ne gleva nemedomp. Kentañ a rae a bep seurt traoù diwar-benn penn-hêr an ti, a oa du-hont pell mezeg er C'hameroun e-touez ar vorianed, hag a oa dimezet d'un dañserez. Ne veze ket gwelet alies, ur wech bep daou vloaz hepken.

Un hañvez avat, hor boe ar blijadur-se, rak ni ne welemp ket kement-se a dud, en diavaez da dud ar vro. Kazi bemdeiz e welemp anezho neuze, rak goulennet o doa ur c'hardi diganeomp, peogwir n'o doa ket a-walc'h gant o hini. Rak ho pezet soñj: ar mezeg en doa ur c'harretan, e itron he doa unan ivez. Kirri hir ha moan ha dizolo. E-giz bugale e veze ur c'hi gant pep hini. Mont a raent da vale bemdez, pep hini en e garr hag ur c'hi e pep karr. Frankiz e-leizh war an hentoù d'ar c'houlz-se, e c'hellent karzhañ neuze!

Un deiz evit ober plijadur deomp-ni, bugale, e kinnigas an itron deomp mont da advennañ eno, ha da selaou " mouzik" (muzik). Mouzik a zistage, rak a orin german e oa. Karout a rae spontus ar sonerezh, ar pezh ne oa ket souezhus ma oa gwir e oa dañserez. Kredif a raen aes e oa dañserez evit gwir, rak me'gave e veze stipet, livet hag adlivet, evel n'am boe gwelet plac'h ebet betek neuze. En deiz-se e voe lakeet deomp pep a saro fresk, hag e voemp kaset da " selaou mouzik ", en ur c'hourc'hemenn deomp bezañ fur. Ne oa ket ezhomm, rak pa'z aemp an

tu bennak ne gredemp lavarout mann; hag amañ nebeutoc'h c'hoazh: a-walc'h hor befe d'ober gant selaou ha debriñ. Graet e voe deomp mont ouzh taol, hag an itron a dostaas ouzh ur voest-koad higarrezek uhel, a reas un tamm feketif d'un toullad nozelennoù, hag e klevjomp trouz, strakadennoù hag en o zouez sonerezh! Displeget e voe deomp penaos eo an arnev a oa un tu bennak a oa penn-kozh eus ar strakadennoù-se. Ar wech kentañ e oa din gwelout ha klevout an TSF ! Adverenn a voe un nevezenti ivez: me'gred e voe unan giz kêr ha giz vorian mesk-ha-mesk.


Arack mont kuit eus ar vro, an itron-dañserez a soñjas ober plijadur d'ar vugale c'hoazh. Reif a reas profoù deomp. Ur bompinell borselen a voe va lod. Din da welout e oa heñvel-mik ouzh an itron, blev, dremm, dilhad hag all! Ken disheñvel e oa diouzh ar re a rae din va mamm-gozh hag a veze graet gant danvez, brenn-heskann ha pi-trouilhez, ken ne gaven tu ebet da c'hoari ganti. Lezel a raen anezhi en he boest. Gwech an amzer, memes tra, ez san da sellout outi, betek an deiz ma kavis he fenn torret ha bruzhunet. Echu'oa ganti!

War se eo echu ganin ivez, evit ar wech-mañ.

V.D.

Park ar Poull Du, 26.VII.1968

Kaozeadenn displeget gant an Itron Kervella, e Kamp ar Vrezhonegrien e Mur, 1968. O vezeñ ma oa hirik hon eus ranket lezel meur a dra a gostez amañ, war VARR-HEOL.



KROAZ ar "Maltournée"

plouez

breuriezh Sant Erwan

(Danavell vloaziek lennet gant ar c'hadoriad e
Bodadeg-Veur Kuzul ar Brezhoneg, Karaez 20.X.68)

AR BLOAVEZH 1967-1968 / Ur c'halc'h hepken an deus labourer, hini
Lannuon, met izili all o deus poaniet da
skoazellañ an Emsav un tamm dre-holl, da skouer, Yann Talbot, ka-
doriad Kuzul ar Brezhoneg. Un enor ez eo evit ar Vreuriezh e we-
lout e penn ar C'huzul.

Kampoù: Ur c'hamp 4 dervezh hon eus graet er Vouster gant Pask
hag unan all e deroù miz Gwengolo evit peurechuiñ al la-
bour e chapel Santez Barba.

Oferannoù Brezhonek: Rost hon eus skoazell evit oferennoù brezho-
nek er Vouster gant Sul ar Bleunioù hag evit
pardon Itron-Varia ar Groaz Nevez, d'ar 15 a viz Gwengolo.
E Mousteru, gant sul ar C'hazimodo
E Lanvezeg evit ar pardon, gant sul ar Pantekost
E Bulien, hogos bep sul.

Kenskoazell: A-hed ar bloaz hon eys gweladennet an dud kozh e
kêr-Lannuon ha koset koad dezho, hag e miz Gwengolo
ez omp bet ni ar re yaouank, ha tud un tamm kosoc'h evel Rojer
Laouenan, o sikour Anjela Duval da zastum hec'h avaloù-douar e-
pad daou hanter zevezh.

Kalc'h Lannuon a zo bet 4 gwech e Berc'hed, o naetaat hag
oc'h adliveañ an iliz

Bruderezh: Embannet hon eus 2 000 follenn-vruderezh diwar-benn
mennadoù ha labourioù ar Vreuriezh. Un degemer brav
a vez graet dezho dre-holl.

AR BLOAVEZH 1968-1969

Daou galc'h da nebeutañ a labourer: unan e Lannuon, hag
unan e kêr-Anjevl e-lec'h ma'z eus 5 ezel eus B.S.E. o studiañ,
er Skol-Veur.

Oferannoù Brezhonek: Unan a zo bet lavaret dija e Treglañviz d'an
13 a viz Gwengolo. Fellout a rae dimp enorif an Ao. Lec'
Lec'hvien a oa bet person er barrez-se e-pad 5 bloaz.

Skoazell a roimp evit oferenn vrezhonek ar Radio, gant
Gouel an Hollsent, e Mantalod hag e Mousteru da Sul ar C'hazimodo
evel bep bloaz bremañ.

Devezhioù Bruderezh a vo graet e Roazhon d'an 23 ha d'ar
24 a viz Du, ha diwezhatoc'h e Brest. Prezegennoù a vo d'ar eadorn

ha d'ar sul un oferenn vrezhonek.

Kampoù: E deroù vakañsoù Pask e vo dalc'het ur c'hamp e Ploueg-Pon-
treñv (Bro-Dreger) da gempenn diabarzh an Iliz-Kaer, hag
unan all marteze, un tamm berroc'h e dibenn an hevelep vakañsoù.

KEVRENN AN OFERENNOU BREZHONEK

En emvod dalc'het e Treglañviz d'an 13.X.1968, hor boa divizet
1) Kas ul lizher da holl beroned lodenn vrezhonek eskopti St-Brieg
da ginnig hor skoazell evit un oferenn vrezhonek, gant follennoù
bruderezh diwar-benn ar Vreuriezh.

2) Savet hor boa daou strollad lec'hel evit an darempredoù gant ar
parrezioù ha prientidigezh an oferennoù :
strollad Gwengamp, ennañ an Ao. Lec'hvien, eus Flijidi
an Ao. Even, eus Gwengamp
an Ao.F. Ar Moal, eus Mousteru
strollad Lannuon, ennañ an Ao. Kalvez
Rojer Laouenan
ha Yann Talbot, o-zri eus Lannuon.

Ezhomm a vefe da grouiñ ur strollad all e korn Landreger-Pempoull.
Laouen e vefemp da ges lizhiri all da barrezioù an eskoptioù all,
met ret e vefe krouiñ da gentañ strolladoù-labour. D'an dud a volon-
tez vat da zegas dimp o anvioù. E gwirionez, ne c'haulenner ket kalz
a labour diganto.

Fellout a ra dimp ober gant pep devezh, un devezh-pedif evel
just, un devezh-bruderezh evit Breizh hag ar Vreuriezh, hag un de-
vezh-emvod evit prientif al labour da zont.

Yann-Erwan AR C'HORR

A. DUVAL

BREURIEZH SANT ERWAN E TRAON-AN-DOUR

Ur wech ouzhpenn on bet evurus o kaout skoazell digant Paotred
yaouank St Erwan. Ken tanev eo an dud war ar maez ma'z eo ur gudenn
kas da benn labourioù ha na zleont ket chom pell war ar strem, evel
an dastum patatez, da skouer. Rak an avaloù-douar n'eo ket mat o
lezel war an douar re bell goude ma vent dispaket gant an denneraz.
Glazañ a reont prim, ha pa vez fresk an amzer e deroù Here e vez
boudet an dud meur a wech gant ar rev. Ken tener ma'z eo ar patatez
: -1° pe -2° 'zo a-walc'h evit o infomif.

Servij vras o deus rentet din'te Paotred Breuriezh St Erwan hag
o aluzener. Mil bennozh Doue dezho hag ivez d'an daou gazetanner

'oa deuet d'o heul hag o deus roet ivez un taol-skoaz. Ha ret eo din anzav, ouzhpenn da nerzh o divrec'h e tlean anaoudegezh vat, met ivez d'an nerzh kevrinus-se a skin eus yaouankiz yac'h ha balc'h, seder ha kalonek, hag a laka kement a levenez hag a virvilh e kalon ar re gozh.

Emañ hor Bro o tivorediñ. Ur Beure nevez 'zo o tarzhañ. Esperañs ha Promesa ur Vreizh Nevez.

P'emeur e kompagnunezh ken plijus, 'vez kavet skañv al labour ha re verr an amzer. Despet a rae din n'hellen ket chom d'o heul er park e-pad an amzer. Ret ma oa ficher un tamm boued bennak. O ne vez ket hir-bred er menajoù; hir-c'hortoz allies avat!

D'an abardaez eo bet ret d'an Ao. Kalvez distreiñ da Lannuon evit e zeveuriou aluzener. Deut eo bet en-dro da c'houde da gerc'hat e baotred.

Un darvoudig fentus a c'hoarvezas gant koan a-berzh ur farsar kozh a oa ganeomp. Rak ma ne oa ket sall-kaer ar soubenn ganin, ar fersou'oa - penaos e larfen? -lakomp, krog mat an holen enno - hep bezañ dizabolu pichoñs!- Lakaat a rae 'ta Loeiz ar yaouankizoù da c'hoarzhin o gwalc'h gant e fentigelloù.

Devezhour va amezeg nesañ eo Loeiz, ur Breizh-Uheliad amezhañ desket gantañ Brezhoneg d'e dri bloaz war-n-ugent pa oa deuet da baotr-al-lizhiri da Louergad. Distro da di an amezeg, e konte dezho, lorc'h ennañ 'micheñs, penaos en doa lakaet pep a gofad fent d'an dud.

- Ha petra 'c'h eus kontet 'ta, eme ar wreg?" Ha Loeiz da zisplegañ an doare.
- M'velkent, emezi, lavarout seurt traoù dirak ur beleg?
- Eno'vat 'oa beleg ebet!
- Boa sur.
- Da ket 'vat. Ar re-se'oa gwisket tout memes tra.
- Ya da labourat er park 'vel just..." Darbet 'oa d'ar paour-kaezh Loeiz bezañ seplet.

'Da ket tamm ebet 'n a vutun c'hoazh an deiz war-lerc'h ar beure, pa oa deut da ziwadañ din ul lapin bihan da boazhat da leinañ va c'hanfarded, rak al lod a zeou zevezh 'oa padet ar "jeu". Ha me'garje 'vije bet padet hiroc'h, ken plijus eo kompagnunezh Breurizh St Erwan. Rak ma'z eo kreñv ha gwevn o izili, o zeod n'eo ket kennebeut stag ouzh o staof.

Mil bennozh Doue da Reher; da aluzener ha da izili oberiant Breurizh Sant Erwan.



Un darvoud hag en deus lakaet an teodoù da vont en-dro, an dud ranell da redek da welout, ar gazetennerien da zispakañ o mekanikoù da dennañ poltredoù, ar reporterien a bep liv hag o labourat evit ar Skingomz hag ar Skinwel da zeradek a-vagedoù, hag en deus lakaet nec'hamant en dud-a-iliz, èz eo bet donedigezh ha diazeidigezh MENECH'SANT KOULMAN, pe ar VENECH'SANT GWENN evel ma le- verer kentoc'h, e-tal Chapel ar Seizh-Sant, e parrez ar C'houer-c'hed. Kaout a ra dimp e rentimp servij da veur a hini o zeif amañ un toullad doareoù diwar-benn an darvoud-se hag ivez barnedigezhioù kenskrivérien da VARR-HEOL. Digant pennadurezhioù an Iliz hepken e ranker gortoz an disentez o klozañ ar rendapl, evel just, rak betek-hen n'eus bet diskleriadurioù publik war er c'he- laouennoù, evel da skouer an QUEST-FRANCE, hep diskleriadur ebet war gazetannoù ofisiel an Iliz.

Un darvoud o sellout evit gwir ouzh FEIZ ha BREIZH, stag ouzh en eil hag eben ez eo, ha dre-se arabat heuliañ, evel ma vez lavaret " politikerezh ar struskafval ", ha mouchañ e zaculagad ouzh un darvoud hag a zo arouezius-kenan, met klask ennañ ar pezh a verk ezhommoù ha c'hoantoù don ar Bobl Vreizhat.

Setu amañ da gentañ pennañ degouezhioù afer ar VENECH'SANT GWENN : aozet eo bet an danevell anezho gant un den hag en deus o heuliet a-dost ha bet digarez da gomz meur a wech diwar o fenn

1 a viz Eost. Ar Breur KOULMER, tad(priol) ar Vinic'hi a lavar an ofernenn evit ar wech kentañ e chapel ar Seizh Sant. Met un nebeut deizioù a-raok e oa bet degemeret ar venec'h en un doare hegarat-tre en Eskopti Sabt Brieg gant ar chaloni da Pontbri- end, hag en devoa roet aotre dezho da implijout ar chapel. An hevelep degemer a oa bet graet dezho gant Person ar C'hozh-Var- c'hed, an Ao. Riou.

13 a viz Eost: Ar venec'h a ya da chom en un ti bihan pre- net ganto e kêriadenn ar Seizh-Sant. En deiz-se e lavaront an ofe- renn, evit an eil gwech, er chapel.

14 a viz Eost: 9 eur diouzh ar beure: ar Venec'h 'zo o sikour person ar C'houer-c'hed da blagañ e "ganna l-parrez": Douez Itron Varia Consolation".

Keloioù fall a zeu a-berzh an Eskopti gant an Ao. Rouaux person-katon Plouared. Ar chaloni Diridollou ne seblant ket bezañ laouen o kaout menec'h er Seizh-Sant. Evit kaout diskleriadurioù ez a ar venec'h da Sant-Brieg. Komz a reont gant an Ao. Kerveadou, Eskob. Hemañ a nac'h outo an aotre da implijout ar chapel. Ma vijec'h bet protestant, ya" a huanadas an Aotrou'n Eskob.

- Met, a respont ar venec'h, prometet hon eus lavaret an oferenn warc'hoazh er Seizh-Sant. An dud a zo en-gortoz.

- Neuze klaskit ur beleg evit lavarout an oferenn" a guzul an Aotrou'n Eskob.

15 Eost: Ar Venec'h a gav ur beleg eus an Iliz Katolik Roman hag a lavar an oferenn er chapel.

18 Eost: Ar Venec'h a lavar o oferenn en o zi dirak 24 a dud ha goude, pedet gant an Ao. Riou, person ar C'hozh-Varc'had, ez sont d'an oferenn d'an Iliz-parrez e-lec'h me kemeront plas e-barzh ar c'heur.

25 Eost: Prest eo ar breur Koulmer da lavarout an oferenn ar sul en e di. 65 a dud aze, kouchet. Hag a greiz-holl ur vouezh : " Deomp d'ar chapel! Du-hont ez eus muioc'h a blas ". Ha setu ar breur Koulmer pedet gant an dud d'o heuilh betek ar chapel, gwisket gantañ e zilhad-oferenn hag ar sibor (lestr-an-ostivoù) en e zorn. Lavarout a ra eta an oferenn er chapel.

1 a viz Gwengolo: Oferenn er chapel

6 a viz Gwengolo: Ar Breur Koulmer a ya da welout an Uheldad Mar Gregorius I da Londrez. E-pad tri devezh e komz ar Breur gant an Uheldad eus kudennoù an Urzh hag an Iliz Hollvedel Abostolek.

Amañ ez eo mat mervat degas da soñj emañ Menec'h ar Seizh-Sant dindan veli Patriarkelezh Glastonbury (Avallon gozh), eus an Iliz anvet Iliz Katolik Keltiek pe c'hoazh " Katolik Abostolik". Añkoriñ anezhi a zo da glask en ur beleg gall " Jules Ferrette " abostol an Ekumeniezh met a droas a-du gant an Ortodoksiz hag a voe eskobet d'an 2 a viz Mezheven 1866 gant Par-Ignas III, eskob ortodoksat Antioch'eia, dindan an anv a v-Mar-Jul evit kador Yona, de adaevel an Iliz Keltiek. Menec'h ar Seizh-Sant avat, o deus lezet a-gostez an anv a Geltiek, he war a seblant ne lavaront mui nemet ILIZ KATOLIK ABOSTOLIK (Iliz Hollvedel Abostolek) Hag an Iliz-se a zo uñ gevrenn eus an Hengatoliked (~~Makleria~~ ^{Ma} ~~dur~~ a Feiz an Eskibien Hengatolik, 29 a viz Gwengolo 1889, en Utrec'ht)

8 a viz Gwengolo: An Ao. Diridollou, vikel-vras, a nac'h reiñ aotre d'ur beleg eus an Iliz Roman lavarout e oferenn er chapel.

9 id : Ar Breur Koulmer a zistro eus Londrez.

15 Gwengolo: An Ao.'n Eskob Gall-Erwan LAIGLE a zeu d'ar Seizh-Sant hag a lavar an oferenn e chapel ar Seizh-Sant. Krouiñ a ra ur barrez er Seizh-Sant. (1)

20 Gwengolo: An Aotrou person, droug ennañ, a sparl dor ar chapel
22-id : D'ar sul beure. Ar venec'h a zo an sell da lavarout an oferenn er-maez, kichen ar chapel pa'z eo serret homañ. Met..ur burzhud a c'hoarvez: an nor-dal a zo digor. Penaos? Gant piv? Den ne oar. Forzh penaos, an oferenn a zo lavaret ur wech ouzhpenn er chapel

28 a viz Gwengolo: An hucher kaset gant an Eskopti a zeu da brennañ dor ar chapel. Ur manec'h chomet en diabarzh a zigor an nor evit mont er-maez. Ha bremañ ne gav mui ar venec'h harp gant ar maer. Rak an Ao. Maer, an Ao. Menut, noter ar C'houerc'hed hag a en devoa gwerzhet an ti e-lec'h m'o deus graet ar venec'h o chomaj, a oa e-du ganto da gantañ. O vezañ ma oa ar chapel d'ar gomun, ne wela an Aotrou Menut, maer, netra fall abat o reiñ an alc'hwez d'ar Venec'h-Gwenn. Met a-benn ar fin 'oa deut da skuizhañ gant kement a drouz. Goulennet en devoa ali digant an Isprefed; hag ar prefeti spontet ivez emicheañ hag evit abegoù n'int ket brudet en deus klasket mougañ an afer. O welout se, ar Maer en deus goulennet digant ar venec'h chom sioul ha lavarout an oferenn en o zi.

29 id: Da 7 eur 30 e teu an Aotrou Riou, person, da serriñ an nor. Gwiskamant-oferenn ar breur Koulmer, ar c'halir, an ostivoù, al le-vriod a zo chomet er chapel. Ar breur Koulmer a lavar an oferenn en e di gant gwiskamentoù prestet dezhañ gant ur beleg.

Abaoe n'eo deus ar venec'h lavaret oferenn ebet er chapel. D'ar sul 3 a viz Du ez eus bet memes-tra un oferenn er chapel lavaret gant an Aotrou Riou e-unan (2). Ar venec'h a zo o c'hortoz ur respont d'al lizher kaset ganto d'ar Pab Paol VI. Unan anezho a zo aet da Roma evit klask komz gant ar Pab.

Urzh Sant Koulman a zo bremañ diazezet-start er Seizh-Sant. Erru-mat eo ar venec'h gant an dud; profoù a bap-seurt a resevont, hag er mare-mañ emaint oc'h adkempenn o zi. Gemdeiz e teu ur bern tud d'o gwelout..." XXXX..

(1) Ar pezh a laka an traoù da vezañ luziet eo ez eus an tu-hont d'an Iliz Hollvedel Abostolek-mañ (evit ober gant o gerioù o-unan) hag a zo enni daou eskob unan e Roazhon (Yvon Laigle: Gall-Erwan Laigle) hag egile e Dinarz, (ez eus) c'hoazh e Breizh un Iliz Ortodoksat stag ouzh an Iliz Ortodoksat Russian gant eskibien an fenn.

(2) Hervez ar c'helloc'hoù ne oa chomet ar Venec'h-Gwenn nemet e deroù an oferenn: pa ne oant ket a-du gant sarrnon an Ao. Person e oant aet er-maez goude.

Embannet o deus ar veleien diwar-dro e vefe eskumunget ar re' zarempredfe ar Venec'h-Gwenn hag a resevfe ar Sakramantoù diganto. Met derc'hel a ra ar bobl da vont d'o c'hê, ha peogwir e oa daou eus ar venec'h-se tud anavezet-mat gant an Emsav ez a tud an Emsav d'o gwelout ivez ha zoken da evañ kafe ganto evel m'emañ ar c'hiz e Breizh! A dra sur n'eo ket abegoù a deologiezh o deus krog warno, hag a-ratozh-kaer hon eus goulennet o ali digant Bretoned divroet ha setu ar respontoù hon eus bet: ar galon eo a gomzo, dre-se arabat bezañ sebezet!

ENTENTE CULTURELLE BRETONNE
3 Rue F.Garnier, Paris 17°

Pariz 18.10.1968

Da Rener Barr-Heol, 22 Bulien LANNUON

Aotrou Rener

Souezhet-bras eo bet hor c'huzul, o klevout kement a drouz en abeg d'ar Venec'h-Gwenn deuet da chom d'ar C'hozh-Varc'had.

Daoust ha n'eo ket da bep hini ac'hanomp azeuliñ Doue el lec'h (a gar)-hag ar gwellañ ma c'hall?

Menec'h ar Seizh Sant o deus ar gwir da bediñ Doue er yezh an tostañ d'o c'halon. M'o deus savet un urzh peuz-dianav e Breizh, ne die ket bezañ hep abeg, ma na zere ket outo ar manatiou a zo e Breizh, heñvel-mil ouzh ar broioù estren.

Daoust d'an doujañs hon eus evit renerien an Iliz, ne gav ket dimp o defe graet o dlead a-keñver ar vrezhonegerien, ez eus dek-miliadoù anezho, estrenien bremañ en iliz o badeziant.

Ni a garfe, hervez lezenn Doue, ma vo lezet Menec'h Gwenn ar Seizh-Sant e peoc'h, da ren ar vuhez o deus dibabet evit goniñ ar baradoz. Galv ma vo sevenet o youl.

Gant doujañs deoc'h ha kenavo, aotrou Rener.

Evit ar burev, ar Prezidant
Herve Ar Menn

Aotrou ker

Pariz (hep deiziad)

Betek Pariz, na petra'ts, ez eo deuet ar vrud eus ar Venec'h-Gwenn: kazetennoù, radio, skinwel a oa helibini etrezo ! Komz evit komz, glabousat evit glabousat, setu! Rak an darnvuiañ eus an dud n'emañ ket o spered gant meuliñ pe ziveuliñ, barn pe zivarn. Unan bennak koulskoude, ha ni en o zuevez, a zo deuet ar goulenn-mañ war o spered: Perak ez eus bet tud-hag a oa kristenien evel ar re all betek-hen, a zo set da ren ar vuhez-se? Marteze ne vefe ket fall ind-eeun klask ar perag-se kenetrezomp-ni...

Ur Breizhad kristen, dezhañ en e greiz emskiant e vroadelezh, a vez heuet o welout penaos a vez komprenet ha renet ar relijion en ilizoù Breizh. Ret eo dezhañ lezel a-gostez e yredennoù breizhek pa zeu e-barzh un iliz: da skouer, dirak e zeoulagad, gwerennoù pe zelwennoù ouzh e gouviañ da bediñ Santez Jeanne d'Arc, met netra evit Sant Herve. Kalennus-tre ez eo keñveriañ an niver eus delwennoù Sant Erwan gant an niver eus delwennoù stez Jeanne d'Arc. Hep pouezañ war vilder skeudennoù sulpisiat Jeanne D'arc hag a ziskouez pegen izel ez eo blizidigezh an dud-a-iliz, e c'heller merzout pegen estrenet ez eo pobl Vreizh dezhi hec'h-unan, pe evit komz evel ar Varkourien pegen " arallekaet " ez eo. Setu aze labour a-barzh tud-a-iliz! Ne dalvez ket ar boan komz eus ar c'hantikoù dilezet, eus ar pardonioù troet e traoù gall ha gallek: n'em eus netra da zeskiñ deoc'h war ar poent-se.

Abaoe ma'z eo aet an ofereñ e galleg penn-da-benn, ur brogarour a zo dav dezhañ gwaskañ start war e galon a-hed an ofis. Neuze penaos bezañ souezhet e taufe doujañs ar vrogarourien da yenaat ouzh Iliz-Roma? Roma ? Ket! dibabet fall em eus va ger, me'fell din lavarout: ouzh an iliz-se kouezhet a-greñn dindan vali Bro-C'hall! N'eus mui anv ebet ganti nemet eus Pariz pe eus " Sekretouriezh an Eskobelezh "; a-hervez, evit beleien Vreizh, bezañ breizhad, bevañ e breizhad a zo bezañ o vevañ en amzer dremenet pe bezañ o c'hoari gant folklorajoù!

Neuze ma vez galvet ur broadelour bennak d'ar vuhez-vanac'h -ha perak ne vefe ket galvet gant Doue da vanac'h ur broadelour breizhat koulz hag ur broadelour gall ? - e pelec'h e kavo e Breizh ur manati e-lec'h ma c'hello seveniñ e uhelvennad relijiel, en ur fram breizhek-rik ?

Sellout a ra gant melkoni ouzh Montserrat, e Bro-Gatalonia, ouzh Belloc, e Bro-Euskadi; soñj en devez eus an holl vanatioù-se bet oaledadoù buhez virvidik evit o Fobl: ne veze ket daouhanteret an den ganto, ne veze ket goulennet digantañ nac'h e ouenn evit sevel etrezek Doue. Er c'hontrol, bez'e oant ar goell o virout spered ar ouenn hag ouzh e lakant da grañvaat ha da greskiñ, hag o tiwell eneoù ar pobloù-se... E Breizh? Esper ebet! Pennoù an Iliz ne vennont ket - a-hervez- harpañ labour ur manac'h bennak troet war an tu-se. Setu perak e komprenet aesoc'h-a-se e palla diouto kristenien ha na fell ket dezho dilezel o uhelvennad: gant kalonad, gant tarz-halor e tibabont un hent all.

Ha n'eo ket souezhus, tamm ebet, e tro kalz eus tud an Emsav a-du gant Menec'h ar Seizh-Sant; rak o farrez katolik dezho o-unan, ez eus diskred warno a-barzh ar veleien: "eskumunget" a vezont, en ur

stumm bennak eus buhez ar barrez. Penaos neuze n'en em santfent ket kalon-ouzh-kalon gant ar Venec'h-Gwenn nevez ? War hon eus klevet ez eo dedennet ar bobl ganto, daoust d'an tamalloù diskiant graet dezho. Daoust ha n'eo ket dre ma sant ar bobl ez eo tostoc'h ar venec'h-se dezho eget ar veleien-se hag a soñj e gaou, emañ an amzer-da-zont evit ar galleg hag ar spered gall? C'hwi hag a zo war al lec'h, Aotrou ker, a c'hell merzout kement-se kalz gwalloc'h eget na reomp-ni, e Pariz.

Rak emañ, e Pariz, meur a hini eus ar Vretoned a zo bet cho-met sebezet ha darn a zo bet fuloret zoken, o klevout ar c'heloù e oa bet serret ouzh'fri ar Venec'h-Gwenn ur chapel hag a vez digoret gant lid hag enor d'ar...VAZULMANED IN'o deus ket kom-prenet, dreist-holl goude ma'z eus bet graet kement a drouz hag a vrud, goude ar Sened-Meur, an " Ekumeniezh " ha pa'z eo bet digoret frank abati Boken da Brotestanted Estren ?

Perak an doare-ober gwidilus-se? Hegerat evit ar Brotestan-ted, digar evit ar Vretoned hag a lavar " bezañ katoliked " ke-ment hag an Anglikaned, ha sellout anezho evel tud da ziwall diouto, tud eskumnuget he me'oar. Poan hon eus o kredif n'eus nemet abegoù a relijion d'an emzalc'h-se...

Martezé, Aotrou ker, ez oc'h bet feuket gant tra pe dra eus ar pezh emeomp o paouez diskleriañ deoc'h. Bezit ar vadelezh d'hon digereziñ. Kaout a ra dimp evelato e oa mat deoc'h ha d'ho lennerien klevout petra'soñj Bretoned Pariz diwar-benn afer ar Venec'h-Gwenn. Ganeoc'h a galon evit ar Vro.

Mikael KOIG, pennrener Ker-Vreiz
43 Ru St Placid, Pariz

Arroudataoù diwar lizheri a-berzh H.KAOUISIN 21.10.8

Kenderv ker

Ha petra'soñjit c'hwi eus Minic'hi Sant Koulman ?... Pa la-varer ne dleer ket aotren ofisoù ha n'int ket katolik roman er chapelioù pe ilizoù kement-se n'eo ket gwir! N'eus ket pell c'hoazh ez eus bet emañ hag ahont oferennoù gant beleien, eski-bien katolik roman, anglikan, ortodokeat, evel e St Yann de Luz (en Iliz-Veur) evel e Menez-Mikael daou vloaz'zo: gant mamec'h St Wandrille, Bec-Hellouin, unanet gant Menec'h Taize, eskibien roman, hag eskibien ortodoke, betek zoken Person Moske Pariz hag a gomzas (mat avet!) en iliz an Abati (1)

(1) Dre fazi hep mar e komz emañ H.K. eus "oferennoù": ofisoù ekumenek, setu ar ger reizh, ar pezh a zo disheñvel-bras.

Atav an hevelep diforc'h evidomp-ni Bretoned. Ar pezh a zo mat evit an Iliz Gall a zo fall evit hini Vreizh. Memes tra evit ar frankizioù. Lizhiri ar Babed pa gomzont eus ar Bobloù gwasket, evit eskibien Vreizh, al lizheri-se na dalvezont ket evit Breizh nag evit Bro-C'hall, met evit pobloù eus Kreiz Europa !

Difennet e oa bet ouzh an Aotrou Perrot embann war FEIZ HA BREIZ komzoù Pius XII, pa glaske an Ao.Perrot diskouez d'e lenne-rien, d'e genvroiz, e talvezo ar c'homzoù-se evit Breizh hag evit Bro-C'hall

24.10.68

... Ne vefe ket ken diaes-se sevel un Iliz disivoud er c'horn -bro-se, ma vefe skoazallet. Met daoust hag ar re a skoazallfe an Iliz-se, tud an Emsav, a vefe ganto ur spered relijiel gwirion? Rak dija e klevan hiniannoù o lavarout - ha n'int ket ken tzoat -se gant an Iliz : " Epetant! ils vont emmerder l'Eglise Catholique! " Setu! N'eo ket aze emañ ar pal, ha ne gradan ket eo ivez hini an Iliz katolik keltiek-se, a drugaroz Doue!

Ezhomm hon eus muioc'h-mui eus sikour ar Spered Glan, ha pe-diñ anezhañ. Met daoust hag ez eus kalz a vrogarourien an Emsav o c'houlenn ar sikour-se? Nann, siwazh !

Herri Caouissin

DA GLOZAN

Bez'ez eus darn hag a gred dezho ec'h ehano an drouz en-dro d'ar VENEC'H-GWENN ken buan ha ma'z eo bet savet ha ne bado ket o minic'hi pell amzer. Lakomp! Met un arouez-zouzhpenn ez eo eus an diaesterioù a zo e Breizh, war gement tachenn a zo. Bet eo ar politis o c'houlennata mamec'h Sant Koulman diwar-benn o menozioù politikel hag o derempredoù gant an F.L.B.(!!!); tremenet ez int bet da spiourien, tamallet dezho bezañ " otonomisted "; hag evel pa ne vije bet a-walc'h kement-se ez eus bet lakaet brudoù eus an dize-norusañ da radek diwar o fenn, peadra da gas ar wallvruderien-se dirak ar justis! An eskumugenn diouzh he zu a zo ur gontell hag a droc'h eus an daou du ha ma vez roet re a don dezhi ne raio nemet dirannañ ha dispartiañ ; n'eo ket emañ an emzifenn evit an Iliz Katolik e Breizh: met pareañ ar goulioù ha selaou mouezh ar Vro. Daoust penaos a vije bet kont m'o dije manatioù Breizh graet o dlead ? Daoust ha savet e vije bet kudenn ar Venec'h-Gwenn ?

Klery.



notennoù ekonomikel

* Emañ 6 bro ar C'HENVARC'HAD o paouez sinañ un emglev diwar-benn ar JUSTIS. Hervezañ e c'hello ar barnedigezhioù douget en unan anezho bezañ lakaet da dalvezout diharz e n'eus forzh pehini eus ar re all.

* Emañ ALAMAGN-ar-C'HORNOC o paouez reiñ ur bras a skoazell da ADD-AN-OLIFANT. Prestet he deus dezhi a-benn bremañ tost da 2 a viliardoù (Lur CFA). Un darn eus ar yalc'had-se a ranko bezañ implijet da sevel ur porzh-mor nevez e SAN-PERDO, er c'huzh-heol d'ar vro. Evel just, e voe fiziet an darn vrasañ eus al labour da ober eno, e div gompagnunezh alaman

Komz a reer ivez da sevel er vro-se, bepred gant skoazell an Alamanned, ur vilin-baper hag un uzin demziou

* Un EMGLEV a zo bet sinet nevez'zo e Pariz, etre ar MEKSIK hag ar FRANS diwar-benn toullañ un hent-houarn dindan douar, e Meksiko. Rodoù er bagonioù a vo heñvel ouzh ar re nevesañ a zo e Pariz, a zo, evel ma ouzer, pnevioù werno (metro Pariz)

* Ar skoazellad-arc'hant roet gant STADOÙ UNANET AMERIKA d'ar broioù isdiorret a zo bet digresket eus a 10% e-pad ar bloavezh diwezhañ da lavarout eo a-benn an 30 a viz Mezheven diwezhañ.

* 21.200 a girri-tan savet gant PEUGEOT a zo bet gwerzhet warlene en Alamagn-ar-C'hornog. Kement-se a zo pemp ha daou-ugent dre gant (45%) muioc'h e get er bloavezh a-raok.

* KENWERZH ETREVROADEL AR ZELAND NEVEZ a zo bet graet dreist-holl gant Breizh-Veur betek-hen: 44% (pevar ha daou-ugent dre gant) e 1966-1967 hag e c'heller zoken lavarout e voe diazezet ekonomiezh ar vro bell-se evit pourchas da Vro-Saoz ar marc'hadourezhioù he devoa homañ ezhomm anezho. O vezañ m'emañ Bro-Saoz o c'houlenn bep ar mare mont e-barzh ar C'henvarc'had hag oc'h en em zistagañ muioc'h-mui diouzh he zrevadennoù eo dav da Nevez-Zelandiz gwelout penaos e vo cheñchet penn d'ar vadh ganto. E miz Eost diwezhañ eo bet bodet e kêr-benn ar vro an " National Development Conference " da studiañ penaos e c'hellfe bezañ ijinerezh ar vro hag he deus bevet dreist-holl a-ziwar ar magañ-loened betek-hen, evel m'han diskouez sklaer hag anat ar ermaeziadoù : savet ez int bet da 711 milion a zollaroù e 1966-1967, hag enno e oa lod ar c'hig 28%, hini al laezh hag ar marc'hadourezhioù graet diwarneñ, evel an amann hag ar fourmaj, 26%, hini ar gloen 24%, hini al ler hag ar c'hrec'hin, 4%, pezh a re war un dro 82% evit an holl marc'hadourezhioù tennet eus ar

sevel-loened (ejened, saout ha deñved). Sed aze eta ar gudenn edo an Ao.Muldown, Ministr ar Yalc'h ar Zeland-Nevez, o klask di-rouestlañ pa'z eo deuet da Europa ar C'hornog e miz Gwengolo diwezhañ ha p'eo aet d'ober bizit da bennoù-bras an tiez-arc'hant meur evel " Bank Pariz hag an Izelvroioù ".

Tostaas a ra poblañs ar Zeland-Nevez da hini Vreizh; 2.727.000 a dud. Da 268.900 km² e sav ar gorread anezhi, da lavarout eo hogos nav gwech kement hag hini Breizh. Ar vro a zo anezhi div enezenn vras kollet e kreisteiz ar Mor-Habask, hanter-hent etre Aostralia hag Amerika ar Su. A drugarez d'o zropelloù bras ez eo Nevez-Zelandiz tud pinvidik. Anavezet ez int dreist-holl abalamour d'o c'hoarrierien rugbi an " Duarded-holl " (All Blacks) brudet dre ar bed holl.

* AR C'HENWERZH DRE NIJ - E-pad ar bloavezh 1967, 155.000 tonnellad marc'hadourezhioù a bep seurt a voe karget-diskarget en aerborzhioù Pariz, 11% anezho o vevijñ e diabarzh ar Frañs nemetken, 54% a zeue eus ar broioù estren pe a oa bet kaset dezho, hag ar peurrest (35%) ne rae nemet tremen, da lavarout eo, ne raent er Frañs nemet ur paouezig hepken.

Tost d'an hanter eus ar marc'hadourezhioù-se a zo bet kaset-digeset gant kirri-nij-kenwerzh, pe nijerezed-kenwerzh, mar kavit gwell, hag an hanter all gant nijerezed-beajourien. E-pad an hevelep bloavezh, peb unan eus an nijerezed-kenwerzh a zo deuet ganti well-wazh ar garg a 6,8 tonnellad marc'hadourezh. Er bloaz a-raok ne oa bet douget ganto well-wazh nemet 5,8 tonnellad. Diskouez a ra kement-se emañ ar c'henwerzh-dre-nij o vont war greskiñ a vloaz da vloaz.

* LA EZH - HEÑVELADUR. Emañ en Europa gozh ne ouzer ket kaer petra da ober gant al laezh hag an holl broduadurioù diwarneñ, peogwir e vez lavaret e pep lec'h ez eus re anezho. Klevet eo bet, ur mare 'zo bet, an hevelep kanaouenn en Amerika an Hanternoz. Ha pedal, e vez kavet da breneñ er Stadoù-Unanet, ur seurt laezh nevez ha n'en deus mann d'ober gant ar saout. Al " laezh-heñveladur " ez eo hennezh. Kavout a reer ennañ pezh a gaver peurliesañ al laezh-buoc'h, da lavarout eo a bep seurt druzoni tennet eus ar plant, proteinennoù tennet eus ar soja, ha traoù all c'hoazh. Diouzh e leverer e vefe al laezh-heñveladur dras evel al laezh naturel diouzh an diavaez ha diouzh ar blaz. Un diforc'h a zo memes tra etre an daou seurt laezh, hag unan bras zoken: rak priz al laezh-heñveladur a vefe teir gwech izeloc'h eget priz egile !

* PENADOS E VEZ GRAET AR C'HENWERZH ETREVROADEL: Emañ en Itali o paouez prestañ ur yalc'had a 5 milion a zollaroù (war-dro daou viliard hanter a lurioù gall gozh) d'an URUGWAY gant ma preno ar vro-mañ marc'hadourezhioù italian, en o zouez mekanikoù.

Diouzh o zu, o deus ar STADOÙ-UNANET prestet nevez'zo, 650.000 a zollaroù d'ur gompagnonezh marokan a zo he c'hefridi reif lañs d'al labour-douar. Divizet ez eus bet avat, e ranko an hanter eus ar yalc'hadig vray-se bezañ implijet da breñañ mekani-koù-labour-douar amerikan!

L. A.

Sportoù

E-touez ar sportourion hag ar sportourezed a oa deuet da Veksiko eus hogos holl vroioù ar bed e oa meur a Vreton. Unan anezho, d'am soñj, n'helle ket nac'h hec'h orin, daoust dezhi da vezañ ganet 14 pe 15 vloaz'zo bennak e Nevez-Kaledonia hag a zo evel ma oar an holl war an tu all eus ar bed nepell diouzh aod biz Aostralia. Eus Maria-Joze Kersaoudi (Marie-José Kersaudy, mar plij!) e fell din komz, evel just. Ur gampionez war an neuñ anezhi, e voe dibabet evit mont d'ar C'hoarioù Olimpek e Meksiko ha kement-se n'eo ket ur bihan a enor evit ur plac'h yaouankik c'hoazh. N'he deus ket degaset a vedalenn d'ar gêr, siwazh! nemet ez eo deuet a-benn da vont betek ar gevezadenn pe an neviadenn wezhañ ar peder gwech kant-metrad, ha kement-se c'hoazh a ra enor dezhi.

War he distro eus kêr-benn ar Meksik ez eo aet da ziskuiñ zhañ da di ur voereb dezhi: an Itron Huerou-Kerizel a zo o chom e Kemper hag a zo eus a un tiegezh anavezet-mat e Breizh. A-raok distreiñ da Galedonia e chomo ur pennad e Kemper hag ez ay d'ar skol eno: d'ar skol-stre. Lavaret he deus d'ur c'helaouenner: e oa Kemper ur gêr koantik anezhi nemet ne oa ket a boull-neuñ ennil! Kompren a raer he c'herse, rak gwall risklus e vefe mont da neuñ en Oded hag ar mor d'ar mare-mañ eus ar bloaz n'eo ket tomm-tomm an dour anezhañ.

Souezhus a-walc'h penaos Kemper, dezhi tost da 60.000 a dud, gant hec'h iliz-veur veurdeus hag he forzh-hent-houarn a zo bet kavet bihan gant hor c'hampionez yaouank, neket e-skoaz Mekeiko, pezh a vije aes da gompren, met e-skoaz Noumea kêr-benn Nevez-Kaledonia, a vije, gouez dezhi, 80.000 a dud o chom enn! M eus eon n'eo ket ken barrek Mari-Joze war an douaroniezh ha war an neu-erezh, rak klevet em eus lavaret a-bell'zo e oa ar sifr-se hini holl boblañs an enezenn a-bezh, hag ec'h ouzer a-walc'h n'eo ket poblet-stank!

L. A.

kegnerezh

***Soubenn ar c'habelleu-touseg**: Kemer un toullad kabelleu-touseg hervez an niver a dud. Troc'hañ anezho a dammoù bihan moan hag o lakaat en ur gastolodennad dour yen gant un tamm mat a vare kozh. Lakaat hollen ha poazhat e-pad un eur. Ret eo d'ar c'habelleu-touseg frikañ etre ho pizied pa gemerit anezho. Tremen dre ar malouer hag ober un hilienn gant amann hag un tamm bleud. Lakaat ar soubenn en hilienn ha lezit d'ober ur vervadenn.

***Lonezhi gant kabelleu-touseg**: Kempenn ha peliat ar c'habelleu-touseg. O zroc'hañ hag o lakaat da boazhat gant amann, helon ha sitroñs. Troc'hañ al lonezhi a dammoù, hollen pebr ha lakaat bleud en-dro. O lakaat neuze en ur billig da fritañ en amann. Goude ur pennad, lakaat 1/4 gwernnad gwin gwenn hag ar c'habelleu-touseg. Troc'hañ ogonnetez warno. ha servijañ tomm.

***Avalou er forn**: Un avel evit pep den, 100 gr. amann, ur briñsenn kanell, 60gr. sukr-poultr (evit 6 eval). Koffitur, n'eus forzh pehini. Peliat an avaloù. Tennañ ar c'hreiz gant un ardivink bihan a-ratozh. Meskañ ar sukr, an amann, ar c'hanell. Lakaat an avaloù en ur plad da vont er forn gant dour ennañ. Lakaat ar meskañ graet en avaloù. Arabat e tisec'hfe an avaloù: ret eo skuilhañ dour warno gwech en am-zer. Evit servijañ e c'heller lakaat en-dro ar seurt koffitur a garer

S.T.

roll-mezzioù

BLOTADENN LEGUMAJ
ISTR
GRILHED-MOR DOARE PARIZ
KELC'HIENNOU LEVNEG HILLEN-KREC'H
SPAGN-GLUJAR ROST
BIZIED-KOUR
GLAZIEN
KOAVEN-SKORN
TEDDENNOU KIZHIER
GWESTELL
DIBAB A FROUEZH

Digor-kalon
Gwin Bro-Nannad
Gwin " Brud kozh "
Torgenoù ar Ron
Kafe
Likorioù

T. & I.
20 a viz Gouere 1968

kelejez

* AN TESTAMANT NEVEZ EN UR YEZH BEV HA MODERN a zo war ar stern abaoe ur pennad gant katoliked o kenlabourat. Spi a zo e vo war ar marc'had a-benn Gouel Divi (1 a viz Meurzh) AVIEL ST YANN gant tri levr all o tonet war e lerc'h dambrest goude ha neuze an TESTAMANT NEVEZ a-bezh " Ret d'al labour a-bezh bezañ penn-da-benn en ur yezh voden ha hardizh " (Cymro 31.X.1968)

* MOUEZHIADEG DIWAR-BENN AR SUL KEMBRÉAT a zo bet da welout hag-efñ e oad bepred a-du da zerc'hel prenet an ostalerioù da sul. Anat eo ez eus koazh er muiañ-niver ha moarvat a-benn un nebeut bloavezhioù amañ e vo marv ar SUL KEMBRÉAT. Kinniget e oa bet arc'hant d'an arc'hdroviz kozh Cynan (anavezet-mat e Breizh) evit ma komzje a-du gant digerif an ostalerioù. Na-c'het-krenn en devoa en em werzhañ.

* EMRENEREZH DA GEMBRE HA DA VRO-SKOS. En he frezegenn diwezhañ dirak ar Parlament he deus goulennet ar Rouanez Elizabed ma vije digoret un enklask diwar-benn reiñ o emrenerzh da Gembre ha da Vro-Skos. Ur gammed vat war-raok hep mar ebet ha dleet da lamgresk ar c'hostezennoù broadelour en div vro.

* TROUZ BEPRED DIWAR-BENN TRONIDIGEZH AR PRINŌ CHARLEZ evel PRINŌ KEMBRE, er bloaz a zeu, e Kêrnarvon. Kostezenn vroadel Gembre, o vezañ ma riakl na savje trouz etre hec'h izili he deus divizet chom neptu en afer-se, da heul kinnig D.J. Williams eus Abergwaun. URDD GOBATH CYMRU avat, a zo a-du evit mont ma vez pedet. Da c'hortoz emeur o prientiñ ar c'hastell e-lec'h ma tle bezañ graet al lidoùl Ker'vo ar plasoù !


* SAUNDERS LEWIS en deus lakaet bec'h da sevel gant e skrid war BARN ,keleouenn lennegel, ha gant e ziskleriadur er Skin-gomz a-du gant an implij eus an nerzh da c'honit he frankiz da Gembre. Dislavaret groñs ez eo bet gant ar GOSTEZENN VROADEL hec'h-unan (hag efñ bet gwechall er penn anezhi) a fell dezhi ober gant doareoù demokratel hag hervez al Lezenn.

* TI DANIEL OWEN ar romantour bras a Gembre a ya da vezañ diskaret er Wyddgrug avit kreskiñ ar blasenn. Un tamm eus kontouer kozh stal ar c'hemener ma oa Daniel Owen a vo lakaet e Kador Eistezvod Vroadel ar Flint

* AN UNVANIEZH KELTIEK dre J.E.Jones eus Kêrdiz he deus kaset he gourc'hemenoù da Brezidant Tchekoslovakia, an Ao.Dubcek, da geñver hanter-kantvet deiz-ha-bloaz sevidigezh ar Republik Tchekoslovak. Y GWIR YN ERBYN Y BYD = ar Gwir a-enep ar Bed !

* WILLIAM HOUGHAM an ofiser bet tizhet gant ar vombezenn la-

Chapel ar Seizh-Sant



An tad Kalvez, JA Roberts eus Poullhedi, ha Klerg en Eistezvod y BALA, 1967.

kaet e kamp an Aerlu, e Penn-Bre en deus diskleriet en ur zonet er-maez eus an ospital n'en devoa droug ebet ouzh Pobl Kembre ha n'eo ket ganto, sur-mat, e oa bet kuzhet ar vombezenn, nemet e oa bet klas-ket teurel disfiziañ ha diskred warno gant ar bolitikerion, ar Wask hag ar Skinwel. Evitañ n'en devoa nemet istim ha karantez evit Kembreiz!

* LONDONDERRI, en hanternoz Bro-Iwerzhon a zo bet trouz etre Katoliked ha Protestanted, ar re a damaller dezho derc'hel ar Gatoliked dindan gazelgê. Bazhad a zo bet.

* KATALDUNIA E KANV da heul marv an Aotrou'n Abad Dom Aureli Escarre. Ranket en devoa an Tad-Abad kuitaat e vro, 2 vloaz'zo, en abeg d'ar Gouarnamant Frankoat, ha mont da Italia da glask repu. Unan eus taerañ difennourion Bro-Gatalounia a zo marv, met hêred en deus!

* BELEIEN EUSKADI ENEP O ESKOB : 50 beleg bennak o deus aloubet kloardi bras Bilbao, goulennet o deus digant an Eskob, an Ao. Gulpide reiñ e zilez ha ma vije anvet un eskob, hag ar bobl kristen o keme-rout perzh er choaz-se. Goulennet en deus digant an Iliz en em zis-partiañ diouzh ar Galloud politikel, ha savet o mouezh a-enep al lazhpobl war dachenn ar sevenadurezh emeur oc'h ober e Bro-Euskadi. E-pad ar c'heit-se e oa beleien all, e Roma, o c'houlenn bezañ degemeret gant Pab

* E BREIZH evel er c'hornadoù all eus " Bro-C'hall " e c'houlenner a-berzh ar Gouarnamant diskleriañ soñj ar bobl, hag ar c'horfoù micherel ha politikel diwar-bann ar rannvroeladur. Moarvat un tamm seblant ha netra ken, rak ar Gouarnamant a raio goude, ar pezh a garo, un tamm evel en amzer Vichy ha Petain gozh pa oa bet anv eus adsevel ar rannvroioù. Mat eo evelkent lavarout ar pezh a soñjer, rak diwezhatoc'h n'hell ket ar Gouarnamant en em zidamall, pa vo bet kinniget sklerijenn dezhañ. Iskis eo avat, gwelout tud evel Pleven ha Martray prest da sakrifiañ an Naoned, evit sevel ur vrizh-rannvro-ar-c'hornog.

* EMGLEO BREIZ en deus bet degemeret treut gant ministr nevez an DESKADUREZH, Edgar Faure: nebeut a spi da welout ar Yezh enoret evel m'eo dleet e Breizh. Gwir eo: ur ministr hag a gemm programmoù ar skolioù a-raok ma vije termenet zoken galloud ar Rannvroioù (ober a reomp gant ar ger ofisiel!) ha galloud Skolioù-Meur ar Rannvroioù-se, n'heller gortoz kalz a dra digantañ! Benn ar fin n'eo dileuridi eo vo kaset da Bariz, met komandoioù. Daoust hag o klask kement-se emeur?

* RADIO BREIZH. Abaoe ur pennad ez eus bet kemmet titl an abadennoù brezhonek war ar c'hazetennoù. E-lec'h AMAN RADIO BREIZH e lenner AMAN EMGLEO BREIZ. Daoust d'hon istim evit EMGLEO BREIZ hag e labour n'hellomp ket lezel kement-se da dremen; ar RADIO BREZHONEK a zo d'an holl n'eus forzh piv a ren an abadennoù. Gwell adkemer an titl kozh, un afer a justis hag a beoc'h ez eo.

Arveste poblez

1. Deredit, kristenien
 Deuit prim ha laouen
Deredit, deredit da Vetlehem
 Sellit-efñ ganet
 Roue an holl Aeled *
 Deredit hag azeulomp - **De**redit hag azeulomp (1)
 Deredit hag azeulomp hon Aotrou

2. O deñved dilezet
 E red ar Bastored
 Kerkent ha galvet d'ar c'hraoù dister
 Ni ivez, gant stad
 D'o heul redomp timat *
 Deredit hag azeulomp- Deredit hag azeulomp
Deredit hag azeulomp hon Aotrou.

3. Sked dispar peurbadus
 An Tad Hollec'halloudus
 Damguzhet a welimp 'n ur bugelig
 Doue mailhuret
 En hon touez diskennet *
 Deredit hag azeulomp - Deredit hag azeulomp.
 Deredit hag azeulomp hon Aotrou

4. 'Vidomp-ni, paour ganet
 War ar plouz gourvezet.
 Diskouezomp joa dezhañ gant karantez
 Rak piv ne garfe
 Neb hor c'har kement-se ? *
 Deredit hag azeulomp - Deredit hag azeulomp
 Deredit hag azeulomp hon Aotrou.

Mabig EFLAMM & KLERG (2)

- (1) Tu a zo da lakaat ADOROMP, mar bez c'hoant, met en deiz a hiziv gant al liesskrivadurioù hag ar mouladurioù stank e-vel ma'z eus, e vo trawalc'h lakaat ar ger-mañ evel notenn.
- (2) Pep aotre a roomp da neb a garo e-keñver ar ganem-se troet diwar al latin. Evit an advoülañ avat, heuilh penn-da-benn skritur ar yezh peurunvan.

